

# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOÙ

Eur skout ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar broton estren evit ar Broio holliek

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Getz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez nio a Vreiz.  
Furnez ar Getz.

Dalc'hit Despred d'ho prizonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz go; ma ve trec'het.  
Ompañ ar Vez, o ve Eac'hall  
Munz.

## SKRIVANIERED

Kas al labourioù pe d'an Otre VALLÉE, Rener, ru Zant-Bened, Zant-Briek.  
pe d'an Otre MOAL, Skrisanter, 27, bati Charnez, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep wroudenad-skritter.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann dienn-tu)

## BLOAVEZ MAD

Bloavez mad d'an holl! — Pep-hini o labourat eus  
o wella. — Labour vad a ve graet. — Ken-  
dalc'homp war an tu-ze. — Breiz da virviken!

A greiz kalon e kasomp d'hon Iennerien hon gwella  
metou a vloavez-mad. Bloavez mad d'ac'h oll, Iennerien  
ger; yeched d'ac'h ha d'ho tud! Madou ar bed-man a  
c'houllennomp d'ac'h, mar be bolante Doue, hep ankouaat  
madou ar bed-all hag ar baradoz — a zo dreist d'an holl  
vadou — pa vo fin ho pue.

Trugare a laromp d'ac'h evit an digemer kalonek a rei  
bep zuni d'hon C'hroaz vihan! Darn ac'hanoc'h, goude  
benn he lennet a ro anei da lenn ive d'o amezeg evit  
ober d'ar re-man kemer eun tanva diouti ha dont da bacen,  
d'o zro, o bloavez koumanant. Mil bennoz-Doue, Ienn-  
rien ger! C'hoant zo da greski ha da wellaat *Kroaz ar  
Vretoned*. C'houi eo a ro ar gwella skoazell evit se, en  
eur ledan anei dre ar vro, rag ar c'homananchou neve,  
dre ma kreskont al Iennerien, a digas doue d'ar vilin hag  
a ro dorn da bacen ar frejou.

Eun darn all, dre hivr lenn flag adlenn, e sav enne  
c'hoant skriva, int-i ive; hag e tenont e berr amzer da  
ziski ar vicher diwar e C'hroaz eiz-deziek. Nag a bennad-  
skrid eus ar skianteka, nag a werz skouerius, nag a zon  
pe a varvailh dudius savet evel-se diwar ho torn, Ienn-  
rien ger, a zo bet digouezet d'hon ti-mouleret! Trugare  
evit!... Hag enr wech moulet ar skrijou kaer-ze e veze  
graet ané dibabon d'o c'hinnig er c'hensrivadegou ha da  
c'honid ganté prijou a rae enor, war eun dro, d'an obe-  
rourien, da *Groaz ar Vretoned* ha d'ar Vro a-bez!

Evit testenia eus o gwella o anaoudegez-vad d'o  
c'henskrivagnerien, renerien *Kroaz* o deuz laket moula  
war bapereunou distag, gant an toniou ané, eun teskad  
eus ar c'hanaouenou bet kaset d'e warlene. Ar pape-  
rennou-ze a ve roet evit *netra* d'an oberourien ha gwerzet  
d'ar re-all an izella priz ma ve gallet. Pedi a reomp hon  
Iennerien da rei dorn d'o skignea, o rei dre-ze lufr d'o  
mignoned, ar skrivagnerien, hag oc'h ober, war eun dro,  
plijadur ha mad d'an holl.

Na fell ket d'imp ankouaat aman eun darn all eus hon  
Iennerien a ra gwelloc'h c'hoaz evit skriva: Ar re-ze — an  
darnvnia ané eus a Vro-Leon — a boagn eus o gwella da zevet  
strolladou pôtred yaouank kristen da ziski d'e karout hon Bro  
Breiz, hon histor, hon giziou mad, ha dreist-oll hon yez  
brezonek, hon c'hanaouenou, hon toniou hag hon pe-  
ziou-c'hoari ken kaer ha ken skouerius. C'hoariet ha  
kanet e ve gant ar strolladou pôtred-ze dre ar vro da  
gaerat hon fardonou hag hon goueliou-santel, oc'h henilh  
war-ze skoner sant Erwan, Dom Mikel Nobletz hag an  
ad Maner a rae kement-all en amzer wechall. Gant-se na  
baouezomp ket da rei menodi d'ar wir-Vretoned-man, o  
kaout spi ha fizians e tenio o skouer-vad da zougen freuz  
en Breiz-Treger hep dale pell.

Dre-ze, dre labourat evel-se a-govret evit Doue hag ar  
Vro, e teuomp holl, renerien, skrivagnerien ha Iennerien  
d'en em anaout ha d'en em garet gwoll-ouz-gwell ha da  
rean mui-ouz-mui evel en Breiz gwechall-gez:

Eur Vro, eur yez, eur feiz, eur galon.

Kendalc'homp war an tu-ze, Iennerien ger, rag eno  
man an dalc'h. Ya, mar karomp sevel hon bro — hag  
oll n'hon deuz ken keroc'h menad evit hennez — dal-  
homp da gresket war an hent-ze a zigor breman frank

dirazomp, a gevret-kaer, kuzel ouz kuzel, sôn ar brezonek  
war hon-diweuz hag, en deun hon c'halon, tân hon diou  
garante: Doue hag ar Vro!

Hon amzer goz	Hag eyello
Evel an noz,	Ni a dalc'ho!
Zo leun a stered:	Hep son nag anker
Stered a vrud,	Da rei skoazel,
Hon c'henta tud,	D'hon Breiz-Izel!
Sent, pobl ha barzed.	Breiz da virviken!!!

## MA BRO

Da Gab Lisklêr,

« Breizad ec'h on 'vel ma zado,  
Evelte 'fell d'in-me,  
Karout ma feiz, ma yez, ma bro,  
Savetei ma tne! »

« Me gar ma Breiz hag he c'hoajou  
Siont ha dudius,  
He lammoier, he feunteunioù  
A hirvoud truezus! »

« Me gar ma Breiz hag he rec'hel  
Krinet-ha touzkanet,  
Seblantout a reont mervel,  
Lazet gand ar c'hleved. »

« Lar d'in-ma Breiz 'n hano Doue,  
Lar d'in-vep kavout mez,  
Mar n'eo-tet-hennez-da-doare,  
Kouls ha hini da yez?... »

« O nan ma Breiz, ma bro garet,  
Na heller ket mervel,  
Keit ha ma chomo ar foud  
War da rec'hel uhel! »

« Keit ha ma tenio ar mor don!  
Da grignat da rec'hel,  
Honman vezo bapred ma zôn:  
Te 'vevo Breiz-Izel! »

« Nan na varvi ket, ma mam-vro.  
Pa 'teuz mibien fidel,  
A lamp o c'halon 'n o c'hreizo,  
O ma bro Breiz-Izel! »

« rec'hel, gwir eo, 'zo debret,  
Mez war c'horre hepken;  
Torret ar mean hag e welfet  
Eur galon yac'h ha kren.

Evel ar rec'hel ma bro Breiz  
Zebtant mont d'ar maro,  
Mez n'eo ket 'velse en he c'hreiz,  
Te a vevo, ma Bro!

KALON-DIN.

## « KROAZ AR VRETONED »

Da Abharve 'vid e ziron mad.

Ar gwerzioù, ar zonioù a zebtante maro,  
Na glevet trouz abed oute ken en hon bro:  
Dilezet e oant gand an holl;  
Gante hon yez brudet, enoret a viskoaz  
Enpad meur a gantved, oa ankouaet, sionuz!  
Ha war ar noant da vond da pell...

Dre lion mzezioù konsket, ar Vretoned koz, koz,  
Daoubleget gand an oad a c'houle: « Daoust ha xcr  
E vefe d'ar yez brezonek?  
Daoust ha 'raok hon maro ha ni na wellomp ket  
Hadsevel c'hoaz en Breiz ar brezonek karet,  
Yez an dud tér ha kalonek?

Darn ané, o glac'har! mantret gand an anken,  
A hirvoud noz-de er c'hoat hag en draouien,  
'N eur skuilh daeron war stad o Bro...  
Ha truezus 'larent da gern ar meneou:  
« Nan hall biken mervel Eavor hon C'hendadou:  
Barzed neve, zavet d'ho tro!!... »

Int holl gwall-c'hlec'haret war doare Breiz-Izel,  
A ouele evel-se d'he yez kaer ha zantel,  
Ar maro kri en o ine...  
Pa glevchont o sevel en-dror d'e eur vonez krenv,  
A dihune hekleo an donar hag an Nenv:  
« Beva 'rey ho yez adarre!

« Beva 'rey adarre yez karet ar C'hellet,  
Bennoz da renerien *Kroaz-ead ar Vretoned*,  
A zo zavet drant, Ingeruz,  
Da rei bus d'ho Pro ha da skuilh warnesi,  
Gand eur-bân heol-hav, ar garante, ar spi,  
Hag ar giziou koz ha yac'huz!... »

Kerkent hag ar c'helo an dudou frealzet,  
A gane evruuz: « Hon bus 'zo birraet,  
Hon yez a vevo a-nevet »  
Seval 'rent o fennou en eur dragareknaet  
An Doue-Gallouduz a deus da lakaat,  
War-lerc'h an noz du, ar beure!

Gant *Kroaz ar Vretoned*, heb Breizad kalonek,  
A wel hirio o ren amzer ar brezonek,  
Ha gantan an evruusted!  
En heb tiad kristen an dud, ar vugale,  
A lenn ar Groaz vihan gant kalz a garante:  
Rag Hi eo *Kroaz ar Vretoned*!...

Ar gelaouen dispar a vale war eun dro,  
War roudou zant koz Breiz, 'vid Doue hag ar Vro!  
— Eno 'man he zalvoudegez —  
Enni heb gwir-Vreizad a gav e blijadur,  
Evel heb den yaouank allou mad ha fur:  
Hi a had dre-holl madelez!...

Ganti ar c'hoziad paour, arru a-uz d'he ve,  
'Neur glevet he gwerzioù a d'rid c'hoaz e ine,  
Hag a sonj en e yaouankiz...  
Gand he zonioù feutuz an dud yaouank seder  
A gav ive dudi d'o c'halonou tenor,  
'Vel ar vleuen karget a c'hliiz!

O Kroazik ar gwellan! Kerz war araok bapred  
Evit mad Breiz-Izel, evit ar Vretoned,  
Pogwir out krouet evit Breiz!  
Zav da benn hep son, ma c'halli eun devez,  
Ezan eun ael a Beuc'h ebarz heb tiegez,  
Ha lakaat ennan joa a-leiz!

Setu pezh a sonjan hirio dirag ma zân,  
Hag en eur honvreal e teuan da vouzkan  
D'ar Groazik koant ha d'he Rener:  
— Bloavez mad, bloavez mad! ha kalz a Iennerien,  
Evit ma chomo Breiz eur vro fur ha kristen,  
Leun a zantelez, a gaerdiel!

AN YEOUMT-BOCKEN.

GOULENN e bureo ar *Groaz*: Gwerzioù sant Erwan, ad  
Labourer, sant Miliu, sant Keneri, hag all. Eur gwennek  
ar yez.

# BLAVEZ MAD!

Tremenet eo hanter noz. Eet eo ar bla 1904 da guz. Krog eo ar bla 1905 da darzan. Didrouz ha zionl eo an trec. Eur c'hog-abred bennag a zao e voez hag a digemen ar beure. En tie, an oll a zo kousket, diuec'h, dindan askel an El mad. N'euz nemed ar Mabig-Jezus du-hont en iliz vinniget a gement a ve war 'r bale, gand e Vamm, ar Werc'hez, sant Jozeb, e Dad-Mager, hag eun dorvadig meserien. A-uz, an Ele o kanna menlodio hag o waskedi an tieger gand o diouaskell. Daouarnig ar Bugel-Done a zo leun a c'hraso : dezro-mad, blavejo mad da rei da zeb a denio d'Hen gwelet. Eur beden dirag ar Mabig-Jezus hag emez d'eun ti bennag, da welet penoz e ve an doare an de kentan ar bla.

Oc'h arrouet er porz e klevan ar c'hugi o kaban deuz o oll moezio da respont da re an amezek, helibini da c'hout pere a drecho. Ar c'hi a ra eun harzaden.

Pemp eur anei d'eun horolej abred. Ar c'houls a zo da didoutan. An Ele mad a didap o diouaskell a-uz da beun o mignoned ha cheta an oll dihun. Dihun an tad, ar vamm, ar vugale, ar vedelien hag ar mitizien, dihun tud an ti, dihan potred ar marchosi.

Kenkent ar vamm a zo war droad. Lakat a ra an tan war veg al lamp. Dour war an tan da ozan lein ha hi war ar chipot en he c'hoaze da valan kae. Arru eo polved ar marchosi en eur redék, c'hoant d'e da vean da gentan o soueti blavez mad. Dao! Dao!

— « O, gortoz a refet avad, eme dud an ti. Ni a vo da gentan ha zur! »

— Ar vamm a lez he malour hag a ya da digeri. Kenkent he bugale, a oa en ti-traou, al lamp en he c'heven ha bep eil e leont d'ei : « Blavez mad d'ac'h, mamm, yec'hed ha prespolite hag ar baradoz en fin ho pue ». O c'halon a lamp en o c'heiz gand ar joa.

Ar vamm a stard ans bep eil, war boull he c'halon. Dero a denereidigez a ruilh gand he dioujed : « Ha d'id ive, ma bugel, blavez mad. bez fur! » emez goustadig. Stonet eo ken n'hall ket komz. Hag ankoat ar boan a halfe usan pe unan beun goret d'ei war ar bla.

Dao! Dao! — « Ya, arru e varz » — « C'hoariet a zo eun deo d'imp, eme ar boted. » N'euz forz! Hag ar boted ive, d'o zro, da lampat en ker'chen o mamm. Keit-se, o c'hoarezed a zao war ar bank-tosel, en korn an tan ha bep eil e leont ive d'o zad, en penn e wels : « Blavez mad, yec'hed, ha prespolite, hag ar baradoz en fin ho pue. »

An tad a stard e verc'hed, bep eil, war boull e galon hag a lar : « Ma, d'id ive, ma merc'h, emean, blavez mad! Derch en ez ker'chen epad ar bla loked ar furnez kristen! » Hag an tad a zant e galon o fraillhan gand al laouenedigez. Ankoat eo an tammo triadidigez, an tammo rann-galon a halfe beun goret d'ean, gwech pe gwech, hini pe hini deus ar merc'hed.

Ar boted a arru d'o zro. « Tapet oc'h bet, potred, emean. Ar merc'hed a zo fin. N'euz forz! ho c'hoant a oa beun da gentan ha bet e oc'h, ma vije bet dibrenn-an nor. » An tad a stard o dioujed en o dioujed ha d'e bep eil e lar : « Ha d'id ive, ma frañs bihan, blavez mad! Bes eur pote yaouank a feson dalc'hoat, er bla nevet! »

An tad a ra eun lamp war ar bank-tosel hag e volo en e deid prim-ha-prim. N'eo ket eet deus korn an'ouled pan arru ar zavijerien : « Blavez mad d'ac'h yec'hed ha prespolite hag ar baradoz en fin ho pue. » — « Ha d'ac'h ive blavez mad. Graz d'imp do chom ervad an cil-gand egile, e ere ar garante greden stre-omp. War beun neuze a saint bet o soneli d'ar wreg. Neuze ec'h eont da vugale an ti. Ar re-man o devoa laret blavez mad an cil d'egile, ar re yaouankan d'ar re heuan.

Hag al labour-veure en-dro! Biskoaz na oa gret ken dilui-all. Pare eo lein. Hag an oll ouz tol. Sik a oa neve-fac'het. Eon tamm chousiz (zizig) a zo pouc'het en amann. Bara gwel-hier a zo goret. Ha chousiz ha bara gwel-hier da lein gand eur bannach jistr-yar-here. Me a lar d'ac'h e zo naou! Ha ksoz ive davad! Sart e veer ken, ken ma veer! Arru eo ar c'hafe, hag ar gwaven, hag eur bannach « lez-kazek » da walchi an taso, ha da grenvat ar c'hafe. Laket eo o c'hafe d'ar boted. Hag ar mab heuan o tapout ar gwaven, didrouz, dizebiant, o kemar, o rei d'ar boted-all hag o tremen c'uean d'ar marchied.

— Megot, eme, argogezien-aman a gemer kwaven! — O sell! pseudipet eo ar gwaven gante. Sell aman kan-facted. — « Ha c'houi eme ar mab heuan a digoro an nor-veur wech-all! »

— Red e oa tapout eur bannach kwaven yen pe e vije

bet tano kafe ar merc'hed hag e vijent bet en gwenezt 'tro pad an de. Kaeroc'h a zo. 'tro pad ar bla! Rag evel ma ve an den an de kentan, e vo, herve, epad ar bla.

Ar vamm hag ar verc'h heuan na debront tamm. Deut ar c'houls, e wiskont o dilhad ha d'ar bourk d'an ofern-veure. Daoulinet en iliz dirag ar Mabig-Jezus o padout a werc'h-kalon ewid o zud, ewid an oll, e c'houlenont blavez mad ewite o unan hag ewid ar re ma leont pidi. Daoulinan a reont ouz an dol zantel. Digemer a reont ar Mabig-Jezus en o c'halon. Int a ra al lein wellan.

An de kentan ar bla an oll a ve mignoned. An cil a lar blavez mad d'egile. Pegoulez e pado ar garante-zo 'etre an dud? Er baradoz de kentan bla an eternite!

Eun MIGNON.

## EUN DEVEZ BALE EN BREIZ

Pegen brao, eo 'kreiz an hanv,  
Bale dre ar meneou huol,  
O tizaelenn an er skanv,  
Eun eur vro gaer hanvet Breiz-Izeld

Azeet e kichen an dour,  
Eun skeud branou eun halegen vraz,  
E klevet kan dous ha ken flour  
Ar lapoused-tro-war-dro d'ar waz.

Bale blij d'in war vord ar mor,  
War ar roc'helioù loued ha kaled,  
'Zo o vordan hon bro Arvor,  
Roc'helioù gaud an dour dornet.

Plijadur vraz ra d'in klevet  
An durzunel goant oc'h hirvoudi;  
D'ar goanv'n eur vro-all 've galyet,  
Red mad ve d'ei hon c'himiadi.

Eun eur draonien c'hlaz dudiuz,  
'Plij d'ar gwelet eun ti bihan plouz;  
Ennan e veer evruz,  
En peuc'h ha pell pell dimeuz en drouz.

Eur gall mar kleyje kement-se,  
Larje : « Dans cette chaumière,  
(Rak en gallek e lavare),  
Le monde vit dans la misère. »

Pa dremener dre ar parkou,  
'Lech ma ve ed-du o vleunian,  
E santer c'houez ar bokedou,  
Ha c'houez mel ar gwenan zo ennan.

Deus al lenneier melen aour  
Sav en eur gavan an al'houeder,  
Hennez ro esperanz d'ar paour  
Hag ive kalon d'ar labourer.

Pegen dous ve d'eun diroad,  
Pa ve distro da vale d'ar vro,  
O klevet ar c'hleier breizad  
Oc'h ober diston an hekleo!

Pa ver skowiz o vale d'ar Vreiz,  
Ec'h er a-hed an noz da renoz,  
Hag e rer huveou kaer, eleiz,  
Evruz zur en eur gwelo klez.

JHENNE, J.-B.

## Eur skouer vad adarre digant Leoniz

Setu aman eur strollad neve a c'hoarierien o sovel adarre war zouar Leon evit harpan ar brezonek hag ar vro. Dougen a ra an hano a Botred ar C'hab, renet gand an otro 'n abad Aljean, kare en Goulien (kanton Pont-Kroaz).

Potred ar C'hab o deuz c'hoariet ewid ar wech kentan eur pemzek de zo. Ouspenn daouzek kant a zellerien a oa divided d'ar barouz Goulien, tost da Bont-Kroaz, d'o selaou. C'hoariet o deuz ar Mab Prodig ha kaset Breiz da vir- viken gand Tadv, Matilin an dall, gand an hevelep hini; al laouenank, ar pithaouer, ha meur a z'on all ken

dudins an eil evit eben. Komant a dudi a zo ha selaou ken ez eus bet lavaret o teujont d'ober c'hoari dre ar parousiou tro-dro d'an novo amann hanv.

Trugare ha mil bennoz-Done en hano Breiz da Leon a ro d'ar re-all skouerion ken kae! Ha vezo hop dale pell ar skouerion-ze en hon Breiz-Treger!

## QUEMPEL-GWEZENNEC. - NEVE

En parouz Kemper; ar zun dremenet,  
E c'hoarveas eun dra burzudus meurbed,  
Rag evit zovetad ar Republik,  
E zo goret an interamant laik...  
Bec'h a oa war jervijerien Marianan  
Da c'hout piau a vije da gentan.  
Evel just, stoupard braz Pontev  
N'helle ket chom er penn a-dre.  
Gwelet ho pijs, an de-se, eun den,  
Eur penn d'ean evel eun ijen,  
Lorikenno en e gerc'hean,  
Hanyal ouz diskouarn eun azon.  
Neb a yelas anean an de-se.  
A sonje e oa an dra benag a neve.  
— « Hum! Hum! Hum! eme o fidem doullan,  
Ec'h a ar c'hloc'h braz da zon » —  
— « Nan hon ket deit, Kemperiz,  
(Rag nan oc'h ket dimeuz a c'hiz),  
Da drugarekad anoc'h deuz al liviten,  
Hoc'h euz roet d'in d'am c'hoac'h fonz ha bobenn,  
Mez deit on, daoust d'an avel grenv  
A deu hirie diwar zu an nevy,  
Da laret d'ac'h penaoz ar baradoz  
A vo miret da gonsorted Komb koz!! »

## Eul levr neve hag eur c'helou mad

Al levr-neve zo eul levr-a wiziegez diwar-benn  
poent a lister Breiz : Histor noblauz Breiz gwel  
Savet eo bet gand eur mignon da Groaz ar Vro  
zo ive unan eur ar gwella Bretoned eus hon am  
Aot. komt a Laigue. Evel n'he lavare gand kome  
wirione ar Yeodet war Groaz ar zun araok, eur  
dihistor a zo hevel ouz eur vag distur. Trugare, eb  
bennoz-Done d'an dud wizek a laka o foan da zid  
da skeiva hon histor Breiz, evel an Aot komt a La  
Héman a zo bet kavet ken brao e levr ken an eur  
evitan eur priz gand « Kademi Bro-C'hall ». Eur ob  
enor evit an oberour-hag evit Breiz a-bez!

Ar c'helou mad a zo diwar-benn an Aot. kom  
Laigue c'hoaz. Eman o vont da zimezi ha, mar de  
eur Breizad eus an dibab, diez a vije kavout gwel  
Breizadez eget danvez e bried : an dimezel a V  
Dre garante-Vro he deuz disket hon brezonek, he  
genidik a Vreiz-Uhel; ha breman, pa ve fastou  
e ti he c'herant, d'ar yez santel ar Varzed eo e  
roet al lec'h a anor, evel e-lez ar fone Arzur gwechall,  
dimezell a Vonestrol o kanna, hi hec'h-uman, hon zoug  
a Vreiz-Izel! Henvel eo, e gwirione, ouz an I  
Iverzon o deuz gaet kement evit adavele : bro dre m  
deuz en em roet, eus a greiz o c'halon, da zisti ha  
harp yez, batoniez ha toniou ar vro. Gwell a ze  
teufe ar skouer-ze da vean heulhet dre-holl e Breiz!

Ra ziskenna bennoz hon zent koz war an d  
Kinnig a reomp d'oze, en hano hon c'hoaz, he re  
hag he lenneien, hon gwella goure-komennou hag  
mennos ar c'halonoka.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIG

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc - Imprimerie Saint-Guillaume



# Kroaz ar Vretoned

BOUMANACHOU

Eur skodet ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodet, evit ar broiou e-tre evit ar broioù keltiek.

SKRIVANTEROURIN

Kas aj labourioù pe d'an Goro VALLEE, Honer, ru Zant-Benezel, Zant-Eriek.  
pe d'an Goro MOAL, Skrivagner, 27, 28, 29, 30, Zant-Eriek.

EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennak pep arweonad-kritur.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann-kontur.)

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furmes ar Gwir.  
Gant brezonek eo dind an feiz,  
Zañd ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furmes ar Gwir.

Dalc'hil bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ousped ar Vez, e vo Paehell  
Mitan.

## BLAVEZ MAD!

« Blavez mad! blavez mad! » a hep tu na oa ken zôn'vid an deion... An holl, kerent, mignoned, amezeien, tud a bell, a dost, a gase an eil d'egile o gwellan mennoziou a blavez mad! Holl e c'houllet digand Doue ma vezo evite ar blavez 1905 eur blavez a beuc'h, a levenez, a evurusted!

D'an de kenta bla eman 'ta ar c'hiz da 'n em welet ; en peb tiegez a zo plijadur. An de-ze an holl a 'n em gar. An dud diavez a deu da weled o mignoned ha, tra ma kemerer pe eur hannach' gwin-ardant milliget pe eur hannach' kafe, an dudiusan mennoziou, ar flouran komzou a deu war muzelloù peb den. En gwirione, red eo hen anzav, nan euz ket da zistaga komzou brao 'vel eur hannach' mikamo evet gant plijadur en kornik an oaled pe an treid astennet dindan eun dól vad bannag. Neuze al laten a ve skanv ; ken skanv zoken ma na oar ket eur rummad tud a zo petra laront an de-ze, rag an darn-vihan, deuz an de kenta bla a ra, 'vel ve-laret, gouel hudur zant Kofad!

Gwell e vije d'e eva neubetoc'h a vannach'ou, laret neubetoc'h a gojou divalo ha poueza muioc'h eun toul-ladik komzou mad dent diwar o c'halon ha nan diwar o zeot! Neuze an trec'het a'je welloc'h. Ar mennoziou furoc'h ha kalonekoc'h a lakche ar blavez da vezan en gwirione eur blavez mad.

Elec'h eur blavez mad ha fur petra welomp peurvuian? An dud, enpad ar bla, o 'n em waska ; ar bugel o 'n em zével eneb d'e dud, ar mevel eneb d'ar mestr, bues fall en tiegezoù hag, elec'h peuc'h, levenez hag evurusted, nan euz en peb lec'h nemed brezel, kasoni ha displijadur... En eur gir, dizurz lia pech'ed dre-holl!

Blavez mad eur rummad tud a zo gwall-veur! A boan e pad eun devez... ha c'hoaz, ha c'hoaz!... Ma karfe an holl e lec'h kenta, e lec'h eva kement, sonjal muioc'h en peb a laront ha lakaat goude o holl oberou henvel ouz o c'homzou ; ma karfent sellet eun tammik war o lerc'h, war ar blavez tremenet ha kouezet en Aukous, o! neuze, a dra zur, ar blavez neva a zebiantfe d'e talvoudusoc'h hag ec'h implifent anean gwelloc'h evit gloar Doue, evit mad o Bro hag o hini o-unan!

Petra talv kement a vennoziou sklabeot bep bla a villierion dre ar vro, keit ma tale'ho an dud da gerzet fall ha da rei dorn d'al lezennou ken heuzuz? Petra 'n euz talveet d'ar blavez 1904 an holl heou a blavez mad a gase an dud an eil d'egile warlene d'ar c'houlz-man? — Netra pe kasi netra...

Daoust d'ar mennoziou petra hon deuz gwelet? Ar Fall, ar fall hudur, ar fall breia ha louz o trec'hi war ar Vad!

En hon Bro, kristen dreist ar broioù-all, en Breiz-Izel, nan euz bet nemed fallente. Ar brezel groet d'ar fe, d'ar skolioù kristen a zo bet et war wasaat. An tadou, ar mammou n'o deuz ken aotre da zével o bugale herve o c'hreden... Ar Breudeur, al Leanezed zo bet lakaet er maez o c'houchou, o skollou, ha hargaset 'vel ar fallan torfetourien gant lezennou disteal ha dindan an hano kaer a Frankia! Ar veleien, laeret digante o fae war zigere o komzent brezonek pe gentoc'h abalamour o tisplijont d'eur c'hrak-aotro bennag hag a zo en o farrouz Flatouilh ar Gouarnamant... El lez-varnioù, ar Groaz talet e-maez, ma c'halle an den fall ha dizous ober hep aon falz-testenioù, mouga gwelloc'h a ze ar Wirtone hag ober

kondaoni an den fur a laka c'hoaz e fizianz en Kroaz e Zalver! Ma n'eo ket spontuz!! Ha dreist an holl dorfejoù-ze — 'vel evit kuruni ané! — Gouarnamant ar Franz, deuz pehini e tigousoimp, er blavez 1904 bepred, o c'hoagant hon Tad zantel ar Pab dirag dor e Balez en kear a Rom hag ec'h esa goude lemmet digantan ar garg an euz bet digand Doue da henvel eskibien ; hag an holl dreo-ze groet gant ar Franmanned villiget o deuz touet koll ha digristeni ar Vro!

En kement se, kredan, a zo peadra d'an dud da zigori o daoulagad ha da boueza gant poell o mennoziou blavez mad...

Blavez mad! Blavez mad! Petra a vir d'imp an amzer da zont, ar bla neve? Den na oar! Marteze Doue a gemero true ouzimp hag a dorro diwar hon Bro, diwar Breiz-Izel, ar walen a gasti a zo kouezet warni eur pennad 'zo. Marteze... (rag ma hon deuz bet da glem euz ar bla koz hon deuz bet ive da 'n em veul), marteze eta en envor deuz gouelioù kaer kalvar Landreger ha deuz ar garante wirion diskouezet d'e Vab ha d'e Groaz vinniget gant an holl Vretoned, Doue a zilaozo peden e vugale hag a roio d'o herve o mennoziou eur blavez mad, fur, zantel, leun a evurusted, a vadelez!

Mes nan eo ket awalc'h d'an aotro Doue hon zikour, red mad o 'imp ive, d'hon zro ha deuz hon zu, lakaat eun tam bolante 'vad. Groeomp 'ta ma teuy hon mennoziou deuz kreiz hon c'halonou hag evit m'o devo nerz ha talvoudgezh, bezomp dalc'hmad a du gant Doue hag hon Bro. Lezomp a goste an dizurvaniez, ar gasoni!

'N em garomp ; kerzomp dorn ouz dorn ha hepdale Breiz-Izel a welo c'hoaz, a drugare Doue, blavezioù kaer ha paduz!

AR YBODET.

Trugare d'hon mignon mad, ar Yeodet, evit e alioù ken fur! Heta ar bloavez mad a zo mad, labourat ha lakaat e oll boan evit ma eo mad, e gwirione, ar bloavez emomp o vould'ha, a vije gwelloc'h c'hoaz!

Ar c'homzou a zo m'erc'hed,  
An oberou 'val zo gouezet.

Pe, mar deo gwel ganac'h :

Gwell eo eun oberer,  
Evit kant lavarer.

Gant-se, lennerien ger, goude bean laret an eil d'egile « Bloavez mad », stagomp, a greiz hon c'halon, da labourat evit ma vo talvoudus ha gonnidus da vad ar bloavez-ze evit kaoz Doue hag ar Vro!

An hent, evel m'hen lavaren ar zün dremenet, a zo breman distank. N'euz ken nemet kerzet d'ober. Setu aman war ze daou bennad mad : Unan anean a zo bet moulet war Groaz ar Morbitan ; egile a zo bet kemeret ganimp diwar eul lizer digouezet d'imp a-bara eur mignon mad a Vro-Leon.

## EUN ADZELL OUZ AR BLOAVEZ TREMENET

Taolomp eun adzell ouz ar peb a zo tremenet en hon Bro garet, Breiz-Izel.

Aboue ec'h omp dimset da Vro ar Challaoued, ar re-man, dre ma 'maint ar re greva, a ra eun tammik evel ma karont en hon bro Breiz, hep goulen e asant digant ar Vretoned. Evel ar fablennar Lafontaine gwechall, int-i a lar :

rezeon ar re greva  
Eo bepred ar gwefia.

An drouk a zo bet graet enep da Gristenien Franz, a zo bet graet ive enep da Gristenien Breiz. Ni a zo ket

## DEROU-MAD • KROAZ AR VRETONED •

An Aotrou a Gerviler, skrivagner brudet a Vreiz.....	20 lur.
Beleien yaouank eskopti Kemper.....	20 real.
Aot. person Laniscat.....	20 real.

Trugare a greiz kalon d'hon mignoned evit o derou-mad ken kaer da Groaz ar Vretoned. War eun dro gant aluzen, kloer yaouank Kemper o deuz bet ar vadelez da skriva d'eomp ar c'homzou-man ken kalonek :

Aotrou Ker,

Gant ar vrasa levenez e tenan em hano hag e hano mignoned ar brezonek da ginnig d'ec'h hor gwella mennoziou. Morse no c'hellimp ankounach'at pegen aketuz ec'h bet da zigas d'eomp ho paperennou distag, varno toniou ha komzou meurbed c'houek, goest da domma ar enna kalonou.

Bennoz Doue d'ec'h ha mil gwech trugarez! Ni a garfe beza gallet rei an dorn d'ec'h. Da vihans, ma n'eo ket deuet c'hoaz evidomp ar mare da c'houren war an dachen, ni bedo kalonek evit difennourien hon tra, da lavaret eo hor yez ha, dre-ze ive, hor feiz.

A galoun vad, e kasomp d'ec'h ugent real, aluzen disterik, mez diskouez a rey d'ec'h hor c'hoant da zavetei for brezonek. Plijet gant Doue ho kennerza en ho labourion tenn, rei d'ec'h yec'hed hed ar 'bloaz, benniga ho skridon ha lakât da zarevi an haden a daolloc'h e kalonou hag e spered ar Vretoned.

Eur weach c'hoaz, bloavez mad! bloavez euruz, bloavez puilh!

Digemerit ar mennoziou-ze ez oun pedet da ginnig d'ec'h gant izili ar Genvrenierz.

Renec Kenoreuriez ar brezonek. — Kloerdi-Kemper.

## Trugare da bôtred Paeroniez Lanhuon ha d'hon skrivagner Dir-Na-Dor!

En diveza kendalc'h eus Paeroniez Sant Yan Vadezour ez euz bet lennet *Pipi ar Bourdou*, ar marvailh ken kaer ha ken sentus skrivet gant Dir-Na-Dor. Kaeroc'h evit marvailhou Dir-Na-Dor a vije diez da gavout hag eun dra vad e vije heuilh dre-oll skouder potred Lanhuon war lenn ané. Levr *Pipi Gonto* a gaver da brena aman, e bureo ar Groaz, warnan eun dibab marvailhou pe gontadennou eus ar c'haera. Eul levr kenkouls-all hag a dilefe bean etre daouarn an holl eo *Ma beaj Jerusalem* gant an abad Clerc. Eur c'helou mad : Moulet e vo hepdale e ti Prud'homme eul levr gwerzioù gant hon mignon Klaoda. Ar zun gentan ive e vo komzet aman eus al Levr kantikou moulet nevo-ze o ti Prud'homme.

GOULENN e bureo ar Groaz : Gwerzioù sant Eriek, al Labourer, sant Millo, sant Koneri, hag all. Eur gwennak ar pes.

EUR MIGNON.

gwail-gaset evl ar re-all ha soken eun tammik-matoc'h,  
rag ne fell-ket d'imp plega d'ar Franmasoned; chom  
gwir-Vreizis beisk ar maro an hini a c'houlomp!

Eun tammik levaner a zo diskennet-avelato e kalon ar  
Vreizis wition. Ar brezel a reer ouzimp an deuz digousket  
meur a hial.

Ar C'hallaoned o deuz kredet e vougfont hon yez ha,  
dre-ze ive, hon spered hag hon feiz; hag ar brezonek,  
evel eur rozen gaer, an deuz blannet, bravoc'h evit bis-  
koaz, e-kreiz an drein o devoz hadet ar C'hallaoned tro ha  
tro d'ezan.

Enoretoc'h evit biskoaz, ar brezonek a stag da adkemer  
al lec'h diest d'ezan. Hen gwelet a reer breman er c'halla-  
sonennou, war al leorion, war an tier.

*Kroaz ar Vretoned a dalc'h da gerzet war-rog.*

Eun dastumaden gaer, ar Vro, a zo bet savet gant  
Taldiz (Jaffrennou) o Karez, a-unan gant eur gelaouen eus  
ar gwella, ar Bobl.

Kendalc'h Gourin an deuz graet ive kalz a vad d'ar  
brezonek ha d'ar Vro. Kement hini a zo bet eno a zo dis-  
trijet d'ar ger krevat hag entanet e galon gant karante  
ar Vro hag ar brezonek.

Pezion-c'hoari a zo bet c'hoariet e meur a gorn-bro,  
dreist-holl e Leon hag er Morbihan.

Leorion, gwerzion, soniou a zo bet skignet dre oll er  
Vro.

Er Morbihan emeur o sevel eur *Kroaz ar Vretoned*  
neve, skrivet e yez Gwened evit ar Wenedourien.

Eur roll ragbrenerien a zo bet savet evit se (skriba, ar  
ye o deus c'hoant da rei dorn, d'an Aot. Herrien Gore-ker-  
Penhoret dre Gaudan, Morbihan).

Daoust d'hon poanion e tleomp, eta, trugarekaat Doue  
hag hon sent Breiz-Izel evit ar zikour o deuz roet d'hon  
Bro garet. Dalc'homp er bloaz-man, gwelloc'h c'hoaz eget  
warlene, da gerzet gant an hent mad evit Doue hag ar  
Vro.

BOUËL GUTHRIERN,  
(*Kroaz ar Morbihan*).

- 0 -

## EUL LIZER KALONEK WAR STAD BRO-LEON

Aotrou Ker,

Divezadik mad emañ o tont da ginnig d'eo'h va  
gouic'hemenon kaloneka evit al labour-vad a rit gant  
*Kroaz ar Vretoned* bemdez evit « Doue ha Breiz » ha va  
gwella mennosion evit ar bloaz nevez 'zo o vont da  
tgeri.

Ar pezh an deuz great d'in dale kement-all eo edon  
(e oan) en deision-man o plenstri gwella ma c'hellen,  
gant daou vignon, war an doare d'en em gemeret evit  
ober eun teatr henvel ouz eun dra bennak da zevl e porz  
*Keryan* evit va fôtrez yaouank a ya dre c'hras Doue an  
traou mad ganto war arak bepred.

Ar blijadur am euz da c'hellout lavaret d'eo'h em euz  
gwelloc'h dilun diveza Paured Gwimiliau o c'hoari ar *Mab*  
*Prodig* hag, o feac'h, bras eo eat an traou ganto.

War wellast ha war arakmat ez a bemdez, evel a welit  
an traou evit Doue ha Breiz. E Bro-Leon hebken ez euz  
eiz strollad Paured yaouank. Ma ve gallet kroni kement  
er bloaz a zed evel ma'z euz great er bloaz-man, e vezo  
bras dudius an traou.

Kenavere, Aotrou ker, ha d'eo'h ha d'ho *Kroaz*  
bloavezh mad a greiz kalon!

EUR MIGNON A VRO-LEON.

## STIGN DA DELENI

D'em mignen hag amezek Kalon-Dir evit e zonik  
kentan e Ma Bro » kinniget d'in.

Eur steredennik a welan  
Paour sevel,  
Ha stom ganti c'hoantat lintran  
War Breiz-Izel.

Eun stom tinoc'h a sklerijen,  
Dre ar moro,  
Da vevit an devalijen  
Ewar ar Vro!

Eur mab a gresk evit difenn  
Enor e Vamm;  
War dal Arvor eur beizezen  
A neve-flamm!...

Da dolik-esa, Kalon-Dir,  
A zo mad-tre;  
Lusk warni hag e ri, ep gwir,  
Treo a zoare.

Pe voutkan ken bras an evnik  
C'hoaz en e nez,  
Na dudius vo e zonik  
Pe nijo 'mez!

Mar zo banno en heol-veuro  
O tispakan,  
Tarzan, broudan rei 'n o greisto,  
Lein an oabl splan...

Gand an dir a zo 'n es kalon  
Gra eur c'hlenve,  
Da vrezellata, ma mignon,  
'Vit ar Gwir-Fe!

Eur c'hlenve a dolo luc'hed  
'Vel eun taran,  
Hag a skarzo an bailhonad  
'Glask hon flastran.

Pe zo ijia ha nerz-spered  
Eur barz 'n es kreiz,  
Kas prim da *Kroaz ar Vretoned*  
Zonio etreiz.

Zonio hag a reio tridal,  
'N o beio kloz,  
O sonjal en amzer gwechal,  
Hon zado koz.

Zonio hag a yelo dre-holl  
War an avel,  
Hag a skedo evel eun heol  
Dre Vreiz-Izel...

Stign da delen evit kanañ,  
A beb eil tro,  
Ewar an tonio ar c'haeran,  
Doue... Ar Vro!!...

Gab LISKILDREY.

## GLAC' HAR EUR VAMM

Pa 'feus c'hoant kwitad da Vreiz-Izel,  
Evel monet d'ar c'haerio braz,  
Na dalc'hin ken anout, ma bugel;  
Red eo d'in da lezel, siouaz!  
Pa 'feus ket gouveet, ma bugel,  
Petra eo karante eur vam,  
Nij pell, eta, paour kez turzunel,  
Koulskoude c'hoaz yaouantik flam!

DISKAN

*Ganid ma graso mad,  
Te pehini 'meuz ganed!  
Abou maro da dad,  
Gand poan eo' out saved;  
Kers, 'ta, leac'h ma hari,  
O rozen gaer Breiz-Izel,  
Mes diwall da c'haerij!  
Du-hont en-kreiz an avel!*

Ma sonj a vos, pa vijes saved,  
E pije harpet ma c'hozn!  
Alhas! ma ven staget gant levaned,  
Den da rei euz bannoc'h dour d'in!  
Na 'meur den nemedout da-unan,  
Ha na vi ket war ma zro!  
Neuze eta, 'n em gavia ma-unan,  
'Met dizroi a rafes d'as pro.

Daoust ha petra gisake da galon  
Ha ne geves ebars da vro?  
Red eo ma ve gwail-direzon,  
Rak kerc'oc'h biken na gavo!  
Na houllin ket ganid-te biken!  
Ar garante a deus d'in,  
Nao, a des zur; mes chom em c'hichen,  
Da vheuan euz tostoc'h d'in!

N'oun penos eo'h hallfes dilezel  
Ar yaouankizo deus da noad!  
C'hoazet 'peuz bet war ar roc'hel,  
'Barz ar prajo kouls hag er c'hoat;  
Ha da lenneier bleannet ken 'ker!  
Ha da wajo deuz sikler ha fresk,  
Er saonien kew g'itrous, ken zeder!  
Evo vijo c'hoari 'n mesk.

Petra a dalve d'in, ma Doue,  
Digas-sonj d'id deuz ar diadur,  
Pan-oud-te troet ken didur!  
Da eun oabl-all, ma c'hrouadur,  
Kerz, 'ta, da waled ha te gavo,  
Nemed dienez ha miser,  
Rak lovenez, plijadurio,  
'Ve c'houero pell demez ar gaer!

Kerz evid mad, Doue d'as miro!  
Soken ma teufe d'id eun de  
Kaved keun d'as lenneier,  
O, dizro d'ar gaer hebdale!  
Mes ma teufe ebars da speret!  
'N em blijout pell demez da vro,  
Gand an drubuilh ('vi ket zouzezel),  
Da vammik paour a vo maro!

EOSTIK AR PONT-KOZ.

## NOUEL KOZ

Ho pedi a ran da dostat aman, holl gwitibunan,  
Ha da zelaou gant evez mat ha laouen; braz ha bihan;  
Oll dorejout ar Baradoz a zo breman digoret  
Gantar Prins braz Emmanuel, eil berson sakr an Dreinded.

Da heul pec'hed hon tad Adam o terri lezen Doue  
Zerret eo dor ar Baradoz outan hag e vugale,  
Mez Jezus gant true ouzimp zo diskennet eus an Ne,  
A zo 'n em gret den evidomp: meulomp oll e garante.

Pa deus Jozeb ha Mari da Vellém 'vit repui,  
Hag en esper bean lojet gant eur re bennag enni,  
Eo'h int bet, allaz, hargaset gant kement den oa en ker;  
Sonjet 'barz an dristidigez he deuz bet mam hon Salver.

Distroct int bet ac'hane; meurbet e oant divezad;  
Ar Werc'hez a oa skwiz maro ha prest da c'heneh lie mab,  
Ma antrejoit 'n eur marchosi 'lec'h, sionaz! na chome den;  
Ed int ebars 'vit repui, rag an avel a oa yen.

Avelion, glo hag amzer rust, m'ho ped, kwitetal lec'h-man,  
Et en tu-all d'en em diwall ha respetet ar plac-man;  
Pe otramant chenet feson ha klasket hoc'h oll douster,  
Ha gant hoc'h oll freskadurez deut da doman hon Salver.

Kri 've'r galon na ouelje neb a welje hon Itron,  
War eun dornad foen azeel, he mab ouz poull he c'halon,  
Goude kinnig da Jezus eus he laez sakr binniget,  
Deut e bet da boikat d'ean ha d'hen lakat er gwasked.

Ar bastored oll-zonezet gant kanaouen an Ele,  
A zo diredet el lec'h-man da adori o Doue;  
Eur stereden deus da skeudi dreist an oll steredenno,  
Honnez 'deuz graet d'ar Rouane, d'ar Mezel kwitad o bro.

Ma hint deut eus an Oriant tri demez ar Rouane,  
Hag a zo deut a rator-k'vit adori o Doue;  
Deut zo gant peb a brezant da rei d'ar Mahik bihan,  
Na esperont ket o mado gant ar jao o deuz outan.

Poent o d'imp-ni, 'ta, pec'herien, kwitad oll hon pec'heje,  
Ma hon deuz sonj da ariout eun de en ghoar an Nevo;  
Deomp breman, braz ha bihan, da c'houl pardou digantun,  
Ha pa n'hon deuz ket a vado roump hon c'halon d'Eta.

*Kanet gant eur plac'h koz ha lakat  
dre skrid gant an dimezell L. Charvaz.*

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAGLENN

Saint-Brieuc — Imprimerie Saint-Guillaume



# Kroaz ar Vretoned

BOUMANACHOU

Er skoet ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar broioù estren evit ar Broioù heñvel.

Ar brezonek hag ar feiz,  
A ro breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
(land ar gallek ez alio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vaz, e ve Paç'hall.  
Muz.

SERVANIERIEN

Kas al labourioù-gê d'an Otro VALLEE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivaniar, 27, ball Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwonek pep spondennad-ekitur.  
(Diskenn a breiz evit mesur a embann diouez-fo).

## NEWENTI GAER EN PEURIT

D'an Otro Rener.

Dec'h diwean, de zul ar Romane, e oa newenti gaer ganimp en Peurit : an tôlenno. N'eo ket avad tôlenno ar c'hiz koz, ewite da vean koant ; tôlenno ar c'hiz neve o oaint, koant-koant ; n'hallin ket laret d'ac'h pegen koant, red e vije d'ac'h bean gwelet !

Kenkent ha 'ma fin d'ar gouspero, e savas eun tamm bech' « Dont a res, emé, etrezeg ar Groaz-Ru ? »

— « D'ober pera, emé eun-all ! »

— « Da welet an tôlenno. » — « Me 'meuz gwelet tôlenno a-walc'h, evel-se. Well eo d'in mont d'ar ger-zan. Brevezom e vo noz anei. » — « Keun 'po, well eo d'ac'h dont. » — « Mat ken disul. » — « Ken disul eta. »

Ha setu eun darn d'ar ger : ar vugale a dlec' dont dirio ha tud vraz, ar re e oa poent d'e mont d'ozan koan... hag eun darn-all etrezeg ar Groaz-Ru.

Arru e oa e-leiz ar porz a dud. — « Chouistim, emé, e ve pardon Peurit heiz. » — Digoret eo ar c'hrañ, hag e-leiz a dud ebarz. Zerret eo an nor, losket ar bach, an ninsel lien vraz da skei tenvalijen, ar prenecho a zo stouvet. Laket eo an tan war veg al letern, n'on ket patate hano rei d'ean, « lanterne magique » e ve laret en gallek groz, lakomp al « letern zouezus » mar keret.

— « Sapr buzuk ! N'eo ket tenval awal'h an treo. Na weler sort a-bed war an ninsel-galiko. Koulskoude al letern na ra ket penn-mouz. Gortoz a renker en eur geavignat penn. »

— « Ma, emé, lakomp pep a dognat eta, da c'hortoz. » — « Groemp pep a gornedad emé an darn-all. » — « Ma vije bet ar « phonographe » aze, emé, da jousât anomp. » — Est e ver dawit-an. Kanan ha muzikal a ra eur pennadik. »

Kenkent e teu an denvalijen da zavel he fri ha da chihou. Zerret eo an nor war-lerc'h ar re a zo eet emez, poent d'e hastan mont d'ar ger pe nebeudig a basianted d'ê.

Stouvet eo ouz an denvalijen. N'ey ket da redek ken ma vo losket. Tapet eo ar ganfardez o tont d'ober he bek kuvuz. — « Mad eo ! » — « Sell, sell, eur pôtr koz oc'h esa lach'an ar golo gand eur goken-houarn-gwenn n'ogedet ! Koste hep tol, ma yontr ! » — Hag eun all en e blas : Daou bried ouz tol, eur fri hira d'an hini goz. A-wecho e teu eun dakaden du war bek he fri ha na ve gwelet fri a-bed d'ei. Fentusât plac'h ! — Sell arru a zo eur paun, o tispakan e lost marellet fero-faro. Da gaerat loen ! — C'ho, c'ho !... Eur pôtr bilhan ar c'hiz koz, berr-herr e ziouar ha don-don ha ledan-jedan e gof ! Eur honed-ru war e benn, eur pez chiminal a-uz d'e c'heno ken braz ha forn-ra Montroulez ! —

Demp breman d'an treo hag a dal ar boan. « Per an Ermit » eur groaz en e zorn o c'houlon tud a galon da vont gantan d'an Douar-Zantel da dennan. Be hon Zalver deuz etre daouarn an dud dife. — An dud kalonek o trec'h war o enebourien hag o kemer kaer Jeruzalem-ha kaer « Constantinople. »

Demp eun tammig pelloc'h, donoc'h gand istoar ar Franz. Ar Fransijen hag ar Saozon penn ouz penn war an dachenn gred-hant vloa. — Ar Saozon o trec'h en « Grécy »

elec'h ma skloas ar c'hanol ewid ar wech kentan.

Bourc'hijen « Calais » eur gorden en o goue o vont da c'houlon pardon ewit o c'haer digand Rons ar Zoizon, Edouard an trefo.

Gwall-gaset eo ar Franz ; eman o vont da Zaoz pa welomp « Janed Ark » o tont d'he zovetât. Buhan ha buhan gand zikour an Otro Doue e teu a benn deuz ar Zaozon. Gwelet a reomp anei dirak kaer « Orléans. » Ziouaz, ar zantez, goude he labour vad, a zo gwerzet d'ar Zaozon ha deuet en beo gand an dud kri-war leuren gaer « Orléans ». Biken ar Fransijen na zellfont eun da ghd ar Zaozon aboue. — « Eue da Janed Ark emé. Janed Ark war an oterio ! »

Gwelet a reer Henri pevare o tont war e varc'h gwenn e kaer Pariz, o kosi dindan gontel « Ravillac. »

Neuze e weler hon Zalver o prezeg d'ar bôbl, o wellât ar re glañh ha tôlenno-all c'hoaz, fentuz a bep sort, tud koant en o mesk, pa laran.

Arru eo « Lourdes » : kaer, al leuren vraz, an 'flizo, ar C'halvar, (Neuze e saluder : « Me ho salud... » Kaoz a zo diwar benn an Aotrou Hernot Lanuon, ar c'hizeller brudet), ar mene e-lec'h ma plijas d'ar Werc'hez vinniget diskenn, hag he fatrom, he skeuden, braz-braz, kaer-kaer, lugernuz evel al lear. « Iron-Varia-Lourdes pedet ewidomp ! » a larer neuze a boez penn.

Hag achu an treo, pan eo bet klevet ar « phonographe » oc'h ober eur gozaeden. An oll a ya d'ar ger zioul, zart. — « Pegouiz e vo arre, emé ? »

Bep miz e vo, ar zul, goude ar gouspero da zerr-noz. Na vo ket stigaet an treo re abred. Na vo ket gortozet ive re diwead.

O pakan ma c'hegel e laran mil bennoz, trugare, mil gwech e lec'h unan, d'an Otro deuz ar barouz an neuz bet ar vadelez da breman an tôlenno-ze ewit Peurit ! Trugare mil gwech elec'h unan, deuz ma feurz, deuz peurz an oll zellerien ! Diweatoch, zur mad, pa vefomp eet pell a vo dirag hon Barner, bugale an tadio-goz a gomzo c'hoaz en Peurit deuz « tôlenno lugernuz ar Groaz-Ru. »

Ken ewid an deio. Deut adarre deut oll. Na vo ket gwelet diou vec'h ar memez tôlenno !

An Otro Bescont, hure Peurit.

Trugare d' « ar Mignon » evit an neventi ken kaer eman o paouez displegan war Groaz ar Vretoned. Setu eun neventi all hag a rey ive plijadur d'ho lennerien ! — « Nag a blijadur, emé, hon euz bet ive o selaou ar mekanik neve-ze a hanver ar fonograf. Heman a gomze skler, freaz hag uhel, kenkoulz ha pa vije eun den beo e-barz ar west o kana. Gwaz a ze, na deue gantan nemet gallek ! Gallek hepred, gallek atao, evel p'an nije bet c'hoant d'ober goap ac'hanomp-ni, Bretoned ! Daoust ha n'hallfo ket ar mekanik diski eun tammik brezonek, ive ta ? » — « Ac'hanta, lennerien ger, bean zo breman ganimp-ni aman, e bureo Kroaz ar Vretoned, eur « vonezskriveraz » (Heman eo hano hon mekanik e brezonek mad) hag a zo mad dispar evit diski kana ar brezonek. N'euz ket nemet kana eun t'ôn d'ei e plig he skouarn eur wech hepken hag e talc'h houman-ken stard ar sonj euz ar pez he devo klevet, ken ec'h hall kana, goude-ze, ouспен kant gwech ar memez t'ôn hep fazia, hep ober mank ebet ! Ha n'eo ket souezus ? Disket e vo d'ho mouezskriveraz eur bern toniou ha kanaouennou ens ar gwella gant hon mignon Dir-Na-Dor hag hon mekanik sentes a skrivio ané war rollo koas, ha p'o devo c'hoant hon mignoned da zelaou ar « fonograf » e Peurit pe e lec'h all, e vo kaset d'ê hon rollo ha, gant lakaat ane war o fonograf gall, e vo graet d'hemana kana brezonek e lec'h gallek. Eun taol kaer, n'e ket 'ta !

Ouspenn zo. Digonezout a ra gwech ha gwech all d'ho mignoned vad tremen dre Zant-Briek. Padi ané a reomp, ar re ané a ar toniou kaer, da gaout ar vadelez da zont aman da ziski an toniou-ze d'ho mekanik ! Ouspenn skrivio an toniou war rollou-koar evit ar fonograf, e vo moulet ané war baperennou distag ive da ledan dre ar Vre. ha gant-se e vo roet d'orn, eus ar c'henta, da viret ha da z'el spered, yez ha toniou hon Breiz karet.

## Kantik d'ar Werc'hez dinam krouet !

WAR DON : *Bals Arzuer.*

DISKAN

Pegen kaer eo Mam Jezuz !  
Pegen dinam ha lugernuz !  
Pegen didach ha truezuz !

Salud, Mari, splander ar bed,  
Salud, Mam Jezuz, glan-krouet,  
Silvidigez an dud kollet !

Salud, Mam vad a c'bras karget,  
D'an ele rouanez meulet,  
Palez alaouret an Drindet !

Salud, o Gwerc'hez glorius,  
Harp an dud vad oll-c'hallouduz,  
Mam ar bec'herien truezuz !

Salud, Mam leun a vadelez,  
A c'han Mab ar Bourbadelez,  
Gwerc'hes dinam leun a furnez !

Salud, o Mam a drugare,  
A ro pardon d'ho p'ugale,  
Fenteun klozet dour a vue !

Salud, Mam leun a sklerijen,  
A lugern 'vel eur stereden,  
C'houi digor dor an nenv d'an den !

Salud, hilen ar gwennan,  
Mari, balzam deus ar gwellan,  
Skeduz a splander ar c'haeran.

Salud, dor an nenv digoret,  
Mari, gwalen ar brofeted,  
Bod spenn lintruz hag entanet !

Salud, perlezen an nenvo,  
Demeurans Jezuz hon Otro,  
Mam ar glanan deus ar mammo !

Salud, grouien neve Jesse,  
O skoul huel a zav d'an Ne,  
O merc'h dinam ar gwir Doue.

Salud, merc'h a wrien evruz,  
Mam didach ar mabik Jezuz,  
Leun a levezuz peurbaduz !

Salud, Gwerc'hez dispar meurbet,  
Mammen ar gwir evurusted,  
Dle gant an oll bean meulet !

Salud, torznel a drue,  
'Vit an oll leun a garante,  
O koull dinam en peb mare !

Salud, rouanez vad ar bed,  
A glev peden an nep ho ped,  
Difennerez an dud hepred !

Salud, Mari didach krouet,  
'Pad ho pue dinam chomet,  
Gant an ele d'an nen douget !

PERSON TREDEZ

## KANTIKOU BREZONEK AN ESKOPTI

Al levr-man a zo digonazel ganimp e-kenver an de kenta 'e bloa, evel da galana (pa da zeron-mad mar deo gwel ganach); ha dudiouoc'h derou-mad a vije bet diez da gavont e gwirione. Trugare d'ar belek santel ha gwiziek, an Aotrou Chalon Guitterel, an eur teurvezet rei an d'ar Vretoned!

Kavet e vo al levr neve ar pep gwella eus danvez levr an Aotrou Guillaouik reizet ha pinvidikaet a veur a gannoneus ar c'hiera, evel « Tremen a ra pep tra » pe « Na hira eo an noz » dibabet diwar leonion Leon ha Gwened.

Toniou zo ive — toniou brezonek an darnvia an d' — Trugare d'ar reizet! N'euz netra en tu-all d'hon toniou brezonek, didarzet diouz denn ene kristen ha breton hon tadou koz, en hevelep doare ma tidare an douar ar glana diouz kreiz ar rechie e menziou Kerne. Tra hon Bro eo hon toniou Breiz hag, ouспен-ze, eur gwir densor a breiz dispar a dleomp miret ha lakeat da dalvont eus hon gwella!

Ouspen eun dibab a gantikou, an Aotrou Chalon Guitterel an eur roet d'imp eur gentel eus ar pouzussa, a welan moulet war genskriz e levrik hag adoulet war ar Zizun pe *Semaine Religieuse* gant beleien an Eskopti.

— A-nnan gant ar garante ouz Doue, eme ar C'hent-skriz hag ar *Semaine Religieuse*, ar pez a dleer da zila e spered ar Vretoned dre ar chantikou eo ar garante ouz hon Bro Breiz-Izel.

Eur gentel honnez hag a vije mad da lakeat don en hon spered, barzed ha skrivagnerien kristen a Vreiz! Koutadon hon euz bet war-ze c'hoaz gwec'h-all gant hon eskibion garet, an Aotrou David ha Boucher, en eskopti-man, hag, en eskopti all a Vreiz, an Aotrou Graverend ha Joubiou, lieman o rei zoken ar skouer: savet en euz, e-ennan, eul levr brezonek, dindan an hano a *Deux hag ar Vro*.

« Hon sent koz goude Doue o deuz savet Breiz-Izel. » Kaerat danvez na vije ket d'hon skrijou, bucon, oberou, burzudou ar zent-ze o sevel evel-ze, neket eur Vro estren bannag, hon bro-ni an hini eo hag o furmi hon spered-ni er chiz ma ve furmet spered eur bugel war varlen e vamm!

Piou ac'hanomp a zavo war hon toniou Breiz-Izel kaera meulodi ar zent-ze, en o fenn ar seiz sant o deuz krouet hon eskoption Breiz? Ha sant Gweltaz, paeron Kerne, gant histor ken kaer santaz Trifina! Ha sant Milio, skouer ar rouane, gant e vab, sant Melar, ken henvel gwallleurion e vus gant an treizour Rived ouz re santaz Trifina gant le fried, ar fallak Komor! Ha sant Kemo paeron an dud a vort! Hag ar zent Pol, Ildud, Devi, Briak, Gwenoel, Maudez, ar santezed Nona, Ellibouhana, Yana ha ken aliez a zant hag a zantez all o deuz dastumet menech ha leanezed dre vilhier, ha savet d'e dre-oll tier zantel henvel ouz toniou-an o skedi a-dreuz d'an devalijen.

Ha sant Kado, ha sant Herve gant e vam Rivanona hag e dad Hivarnion hag e vus ken dudiou, pe c'hoaz hon sant Efflam, gant e bried santel Enori hag ar roue Arzur o rei dora d'eun da tregan an dragon, pebez danvez dispar evit ar varzed da zovel skrijou!

En amzeriou tostoc'h d'imp e lavomp ar visionerien a gerzas war roudou hon zent koz da heuilh, Dom Mikel Nobletz hag an tad Maner. Divezatoc'h c'hoaz e mare trubuilhus an Dispac'h (pe ar Revolution) hon beleien santel a o lakeat an hu warne evel war vlei di ha merzeriet darn ane, evel an Aotrou Lajat e Lannion. Ma vije lakeat o bucon dre skrid ha lennet dre-oll, nag a bonez en nije ze evit rei nerz d'imp-ni da herzel ouz ar gwall-varrad-amzer-man a zo ken henvel ouz hini an Dispac'h pe ar Revolution vraz, evit pez a zell ar brezel graet gant an dud fall ouz ar fe hag ar velen.

Beaz zo c'hoaz *Sent ar micherion*, da laret eo ar zent-ze a oa bet kemeret gant hon tadou koz da haeroned o « chenvreuzioa-labour », a oa kalz en tu-all d'hon « sindikajou » breman, dre ma oant diudan o saeroniez santel. *Breuzier sant Izidor*, dreist-oll, nag a vad he deuz graet d'al labourerien-douar! Nag a vad a rafe breman

c'hoaz ma vije adreizet, adoulet ha addisket dre-oll levr ha kantikou Sant Izidor!

Adskoulma hon Breiz-breman da Vreiz gwec'hall dro ar chaden-ze a vus, a spered breton ha kristen war eun dro, hag a zantelez, hennez eo hon labour hag hon galvedigez. Meur a dra am mije c'hoaz da lavaret diwar-benn al labour santel-ze! Stagomp gantan eus a greiz hon c'halon er bloaz a zigor ha gras d'imp oll, skrivagnerien gristen, da hallout skriva aman war *Groaz ar Vretoned* meur a bennad-skriz pe a vom-m-barzoniez da dalvont eur boan d'an Aotrou Chalon Guitterel d'o reiz a eul levr neve ken kaer pe gaeroc'h c'hoaz evit an hini kenta!

*Evel-ze bezet graet!*

## MARO EUR MIGNON

An Aotrou abad Normant eo hano ar mignon-ze. Eur belek santel ha gwiziek a Vro-Leon e oa lier. Poaniet an euz eus e wella da zifen ar brezonek. En respont da lezennou Komb a-enep d'ar c'hatekiz brezonek, an abad Normant an nevoa savet eul levrik da ziskleria geriou ar c'hatekiz ha da rei dora d'an dud da lenn ha da diski anean. Ar *Feiz ha Breiz*, eur gelaouen viziek e brezonek, an nevoa renet ive. — « Eur wall-diouer evidomp e vo e varo. » Evel-se e skriv d'imp unan eus skrivagnerien vrudeta eskopti Leon. Pedomp oll evit ine ar belek santel-ze a zo bet en e vus ar gwella harp d'hon brezonek ha d'hon feiz, dre ma ofie errad pegon gwir eo lavar hon re goz:

Ar brezonek hag ar Feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz!

## AR C'HLANVOUR

War o wela a hoan staget gand ar c'hlenved,  
Ar c'hlanvour reuzendik kollet gantan ar spi,  
O welet dirakan peb den lenn a yec'hed,  
Glac'haret e galon, a den da hirvoudi...

Choant an euz da zovel, da stourm eneb d'e zroug,  
Mes e zoulagad don hag e zionchod koac'het  
A ra d'ean klevet en e greiz eur vouez moug:  
« O paour kez dent! neuden da vus 'zo torret! »

— Red vo eta mervel! emean, 'n eur ouela,  
Koulskoude me a glev an evned o kana  
Hag an neve-amzer war ar maeziou o ren!

Hag ar c'hlanvour mantret, hadkonezet 'n e c'hourve,  
A choullet ouz e Grouer yec'hed 'vid e ine,  
Hag 'n e gorf dinerzet-bus na denio-ken.

AR YEODET.

## BUE YAN BADEZOUR VIANNEY

Eur zant o klask e vara, Zant Beneat-Josaf Labre, a oa bet lojet, eun nozvez, ar bla 1772, e parouz Dardilly, 'n eun tiegez pzour, hano an dud-se Vianney. Bennoz an O. Doue a gouez war an ti goude-ze, rag, en eizved a viz mae 1786, an dud-se a lakaz war an douar eur bugel hag a vije zervijer braz d'an O. Doue.

E dud a oa labourerien-douar. Adaleg an oad e div bla, ar bugel a blije d'ean kuz e korn an ti, 'n eur c'hraoc'h bennag pe el Ioriz evid laret ar pedenno disket d'ean gand e vam. Homan, hec'h hano Marie Beluze, he devoa kalz a zoursi euz ar boked kaer-ze roet d'ezhi gand Doue. Ar zant a vez, hed e vus, leun a anaoudegez-vad evid kentelio e vam. Aliez e lare: « Ar furnez a dremen euz kalon ar mammo ebarz hini ar vugale, pere a ra gand plijadur ar pez a welont ober dirze. »

An dispac'h vraz a deuz prestig. An oll Iizzo, an oll kloerdier a oe zoret. Ar bugel, eta, n'hellaz ket studian, hag e oe laket da labourat douar. Ha da gentan, evel ar vugale-all, e oe messaer: eun azen ha taer danvad a gasse bemde da beuri. 'N e gerd'hen e touge eur skeudennik vihan eus ar Werc'hez, hag, arru er park, e lake war eur gredion bennag pe e tout eur wezen, hag a c'halve ar vugale-all evit laret an *Ave Maria*. Distro d'ar ger d'an noz, ac'h e war an hent evid gortoz ar bevien da bere e roe o gwelo 'barz ar c'hardi; e roe bara d'e, ha, ma ve lugale vihan, e tiske d'e pedenno ber.

Da drizek vla, e oe roet d'ean ar bal hag ar bigel, ha bemde ac'h e da labourat d'ar winion. Hini na oa muioc'h nerzuz, muioc'h zentuz, muioc'h laouen evitan gand al labour. Eur skouer e oa d'e vreurder ha d'oll tud an ti. O vont hag o tout, e chapelet a veze dalc'himad 'n e zorn, heb aon ebet e vije gret goap dioutan.

Eur youankiz tremenet er giz-se ha dindan legad eur vam a doujans Doue, n'helle bean nemet zantel « Barz ar govizion, emean, e tiskiz an droug da gentan. »

Atrog an evoa gret e Bask kentan, e reaz gwestl da chom bepred gwerc'h. Beleien deut e kuz da Frans a gempenjont e ine evid digomer an O. Doue ar wech kentan. E vigaoned vihan a lare penoz « E pede evel eun el. »

Goude ma oe deut ar penoc'h d'Iliz Frans ha ma oe gret an emgleo hanvet Concordat, an O. Ballez a oe karget da ren evel pastor parouz Ecullez, e pehini, epad an dispac'h, e re ar zervij, kuzet aman ha du-ont. Sklerijennet gand gras an O. Doue, ar beleg zantel a welaz buhan penoz Yan Vianney na oa ket galvet da lakat freuz da zovel 'barz an douaro, mez, er c'hontrol, da labourat an ineo ha d'ober d'e dic'hodan vertuio skrivet 'barz an env. Komar a reaz ar bugel 'n e di, hag, epad c'houec'h vla, e roaz d'ean kentelio war al latin. Ziouaz! ar bugel a oa heb skiant hag envoret fall. Ugent kwej bepred e oe war dare da difezel al levrio, ha ken liez-gwej e vestr mad, kuzetiel gand an Env, a harzaz anean da gemer an tec'h ha da gouean en dizesper.

(Da heuilh).

## LESNEVEN

Paotred Leon a gerz atao war-raok. Disul ez euz bet displeget dioc'h ar gwella e Lesneven an diou c'hoariel feutis great dioc'h ar galling gant Aotrou aluzener an Hospital: *Trubuilhou Yan Hirrouz* ha *Jerom Trullie*. Kana 'zo bet great ivez: *Ar Spillen*; *ar Chi en Dien*; *Intanv at Lochen*; *Koush, Breiz-Izel*; *Sav, Breiz-Izel*.

Eun nozveziad koant eo bet honnez, me 'lar d'eoec'h. Trugare d'an Aotrou Gall, rener Strollad Paotred Lesneven. Eur vetaen an deuz bet e Gourin: mad a zo bet great!

YAN.

GOUDE-SKRID. — E *Kroaz ar Vretoned* ar c'honta ar bloaz ez euz bet great Leoniz eus *Paotred ar C'hab*. Kerneviz int: he zra da hep bro!

GOULENN e bureo ar *Groaz*: *Gwerziou sant Erwan*, at *Labourer*, *sant Milto*, *sant Konevi*, hag all. Eur gwennek ar pez.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skout ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skout, evit ar brolou estren evit ar Broio Relliek.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labouriou pe d'an Oiro VALLEE, Rener, vu Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Oiro MOAL, Ebrivantez, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweznec pep brodeunak-ekritur.  
(Diskenn a huz evit meur a embanno diost-ra).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez nio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hil begred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspen ar Vez, e ve Pechet!  
MILW.

## Eul lizer mad. Enor d'Ar Mignon

Mignon Ker,

Kavout e refet aman eur mandat a 16 real evit ma c'hommanant da *Groaz ar Vretoned* beteg direz ar bla 1905. War wellât bopred ec'h a ho kelaouennik vihan. Diez e ve kavout breman eun all gret kenkouz ha hi. Bean e ve enni, en komz-plen dreist-holl, peziou labour deuz ar c'honoka. Pennado skrid Ar Mignon a blij tre. O lennet am euz dirag meur a rum deuz a Lannou hag a Welo hag holl o deuz o frizet ker. Ra gondalc'ho « Ar Mignon » da rei, en e yez ya'h ha frez, kuzulio mad ha plijaduruz d'ar Vretoned ! Digemeret mad a vefoint, gallout a ra am c'hredi.

EUN TREGERLAD.

## D'AL LABOUR !

Doze arog ha me warlerc'h

Paonezet eo ar c'higi da ganan. Deut int diwar o c'hud da voelan. Arru int dirag an ti, ar yer war o lerc'h : « Biti, biti, biti ! » Tol a ra ar plac'h-tiegez eun tamm ed-du d'e da dibab.

Deut e an tarz-do. Gwasan ma 'z eo dieg an de da zvel d'ar c'houlz-man, an didalve a zo anean ! Eet eo an dud d'o labour. Er c'hranj e klevan al lerim o tont en dro hag ar fosillon (fals-kontel) neve flamm-flimmin o tronzal warni. Ar charreter hag ar pôl-karr a zo o lemman. Eun tamm tremen a zo groet d'ar falz vad. Honnez a zo gwag hag ezet da lemman.

Arru eo ar goz taviez ourlet he fas ha pejo dent d'el. Ar charreter, eun den dorniet mad, mar zo, a lar : « Neuz forz, koz frekin ! me a danavo da fas ! » Poezan a ra warni kement ha ken bihan ken ma eo bec'h-ha-bec'h d'egile gallont digas al lerim en-dro, ha ma 'renk laret : « Tro eta ! » Hag al lerim en-dro. — « Ziou, ziou ! » Erne an dour a bep tu d'al laonen hag o koei ebarz al louer.

Rampan a ra ar falz a-wecho digand al lemmer. — « Tol ple da en em dapont begred, eme egile. » — « Rin ket mar gallan. N'eo ket faro bean gand eun dornad enkerz ar goanv. »

Diourlet eo fas an hini goz ha tennet an dent deuz he zroc'h. Lemmet mad eo, bron a-bed en he zremm. Honnez a droc'ho bremezou kenkouz, ha well ewid hini neve a-bed. Stad a zo ebarz an hini goz o sonjal o hallo mont da heul ar faroden a zo neve deut deuz ar stal. Hag an daou vevl etrezeg ar parko, eur falz en gaol eur fichel war goupil brech'p hini.

An daou bark a zo ouz-ouz, daon vreur ar re-ze, kement ha kement, o c'hleunio d'e o daou tro-war-zro. War an huel emaint, troet d'an avel skarin. Korc'h a zo enne o daou ; unan laket abred, egile diwead, rez gouelio an Nedelek, ewid ober eun spro da wlet pehini o vo ar mestr, pe an hini abred pe an hini diwead. En jouchen vad emaint o daou. N'int ket didemz.

An daou vevl a ra kôz davad. — « Sallet e vo ar wiz warno, emé ar charreter » eur c'hi-labour, pa laran, — « Ya, mar kores, eme ar pot-karr », eur pot-rik ive. Daou vevl mad eo ar re-ze, tud zur, tud a feson, labourerien vat ha dorniet mad.

Sentuz int d'o mestr hag a-du gantan. Arru mat int gantan ive, groet e ve brao d'e ha paet braz. Evaruz int an eil gand egile. Gwaz a ze pa na oa kont evel-se dre-oll !

An daou barkad kerc'h a glev ane o tont gand o betolo koat braz, tacho-marc'h en o zeulio o rigi an hent,

ha tacho plad en o bego. Ar betolo-ze a faka o roud el lec'h ma tremenont. — « Zavel oud, eme ar park henan, dre doull ar gleud. » — « O paonez da didoutan, eme o vreur bihan. Arabad eo d'in zavel re abred beteg gout e tapfen war ma fri. » — Herie eo douz an amzer. Eur hannach glao a zo groet. — « Done da yezo meulet ! Me a grene gand ar rion dec'h ha disadorn. An avel skarin-ze a groge ennon. Glac'haret e vije bet mar vije derc'het ar yenion, ha marvel, zur awalch, gand ar baourante. » — « Paour kez bihan o tiwan, c'hoaz en ez lez, c'hoaz krog-ha-krog gand ar polotennou donar ! Me am euz paket ma douar, ma a zo arru kaled da stourm ouz ar goanv. Re gaer on ; zoken ezom am euz da vean kastet. Ezom an neuz ma gwad da vean netast. Prensved a glevan ive o labourat diudannon o troc'h an arog d'am gwrio. Me a garfe e vije dent eun tamm erc'h dec'h e-lec'h glao. Ha skorn war an erc'h. Neuze, pari, e vije bet paket ar prenev. » — « Eun tamm erc'h a yafe ganin awalch ive da domman ma c'halon ha ma zreid. Well e ve ganin avad e c'hortozie ar skoulad eur pemzek de bennag c'hoaz. War-benn neuze a vin arru pôr awalch da difenn. Reo avad na houlan blaz a-bed dioutan. Na skorn ive ! Eur hannach'ig avel fresk c'hoaz-c'hoaz a ya, ganin. »

Me a jouche dec'h, me a huruse, me a heuze pa glevan ar mestr o tremen gand ar charreter, o laret e vije troc'het al lann herie diwar ma c'hleunio. Al lann mad-man a waskede anon. Keun 'mo d'ean. Goulan a rin pa welin anean o koean dindan ar falz. O lann binniget, me garfe o chomfes aze, pemzek de c'hoaz da vihanan, keit ha ma vin me aman, mar kerez ! Kaeran kurunen melen-aour a raffes en dro d'am fenn glaz, en kerz an neve amzer hag an hanv ! — « Paour bihan, petra a fell d'id, da vestr a osr petra 'neuz d'ober. Red eo d'al labour mont war rog. Ar c'houlz a zo da droc'h an al lann. Roomp peuc'h, arru eo ar hotred gand filsier. Ken emberr. » — « Ken emberr eta, breurik karantezus. »

Tolet eo o forpancho gand ar bôtred ha d'ei gand herr en eur laret : « Doue arog ha me warlerc'h » hag « en hano an Tad hag ar Mab hag ar Spered-Zantel » en eur lakat zin ar groaz en o c'herc'hien.

EUN MIGNON.

## ZON AR BUTUNER

Gwellan louzou d'an amblari  
Eo ar butun war hon zamm pri,  
La direi, tra la ;

Doue hen hadaz, a gredan,  
La direi, la direi,  
Goude pec'hed hon tad kentan,  
La direi, tra la.

'Vel bod belan sklapat er forn,  
Da heuñh bouilhaded maged ma c'horn,  
La direi, tra la ;

Trubuilh, dienez ha preder,  
La direi, la direi,  
Ya da neira en bere amzer. ....  
La direi, tra la.

Poslech ha loark eo ma gwreg,  
'Vel kroc'hien touñh eo rust he beg  
La direi, tra la ;

He diouc'hroazel a zo rampet,  
La direi, la direi,  
N'oufec'h kaout falloc'h struzet  
La direi, tra la.

'Chanta ! 'dal ve lanet ma c'horn,  
'Gavan ken 'sell Janed a gorn,  
La direi, tra la ;

'Vel eur rozen 'teu flour ha koant,  
La direi, la direi,  
Ha penn-da-benn 've deus ma c'hoant,  
La direi, tra la.

Pe c'hlarm, pe viñj ma bugale,  
Ken ve eun drouz ifern gante,  
La direi, tra la,  
Prim, eun-tamm butun 'n em c'horn pri,  
La direi, la direi,  
Hag e tremen ma bar-zodi,  
La direi, tra la.

Da beb pred paltez ha yod,  
Kaeran keustouren perpaillhet !  
La direi, tra la ;

Bat eur c'hornadad goude-ze,  
La direi, la direi,  
Cheta me groet eur pred roue,  
La direi, tra la.

War ma chouk zo dilhad lakiz,  
Evel eur bas war gein eur wiz,  
La direi, tra la ;

Gand ma c'horn butun 'n em gods  
La direi, la direi,  
'N eun tol 'meus mado a-grugel,  
La direi, tra la.

Mez sadorni ra ma butun... ?  
O neuze 'vad, tan ha kurun !  
La direi, tra la ;

Foeltr ha kounnar ve war ma zro,  
La direi, la direi,  
Daoust da Janed ha d'he daero,  
La direi, tra la. ....

'Vit gout ma venn maro da-vad,  
'Po 'met tanan d'in eur c'hornad,  
La direi, tra la ;

Mar n'am gwelet ket o tridal,  
La direi, la direi,  
D'ar vered ma c'haset raktal,  
La direi, tra la.

Mez 'rok ma loark er poull don,  
Laket ma c'horn war ma c'halon  
La direi, tra la ;

Gantan ma zammik relago,  
La direi, la direi,  
Distrafiboc'h a boultrenno,  
La direi, tra la.

Da c'hortoz monet en nenvo,  
Gand butunerien koz ma bro,  
La direi, tra la.

'Lec'h karo Doue hon lezel,  
La direi, la direi,  
Da danan 'wecho hon c'herniel,  
La direi, tra la

GAB LISKLOZ.

(An tón ar zun kenta).

## KANTIK AN TIEGEZ ZANTEL

DISKAN WAR-DON : *In coelis est habitatio.*

Gloar, Nouel d'am Tiad zantel,  
Egad ar vue eternal !  
Da Jezuz, Joseb ha Mari,  
Nouel, enor ha meulodi !

O ti zantel, ti Nazareth,  
Tiad Doue ennoc'h kuzet,  
Nag evruz oc'h bet da vean  
Dre ar bed an iliz kenta !

D'an ti-ze dalc'h-mad e nife  
Gant levezon an oli ele,  
'Vit gwelet ar Mabik Jezuz,  
E dad mazer, e vam evruz.

Gant aked hag a galon vad  
 'neus a ra labour e Dad,  
 'neus 'neus o pleal gent fou  
 labourio ar vam wella.

'neus garante hag en sked  
 'neus 'neus lod gant e brid;  
 'neus a slag gant mil liam  
 kalon e dad, kalon e vam.

O dion galon zo unanet  
 Gant karante o Mab karet,  
 D'ez e daou o Mab Jezus  
 A ro dellid o vertus.

Sklerijen gaer an dud evruz,  
 Flanz vras an dud gwalleuruz,  
 Jezus, groot den, 'neus c'hoanteet  
 Gant tad ha mam bean zavet.

Mari, mammen an oll c'hraso,  
 Binoiget dreist an oll vammo,  
 C'houi 'neus stardet war ho kalon  
 Ha maget an Doue gwirion.

Jobez dreist d'ar Batriarked,  
 Pried d'ar Werc'hez zo choazet;  
 C'houi 'zo galvet Tad gant Jezus;  
 D'ho kalon hano dudius!

C'houi ganet eus a ouen Jesso  
 'Vid zilvidigez hon ine,  
 Selaonet euz hon fedenno,  
 Ha reit d'imp oll hon menozio!

Karante Doue 'n ineo  
 Ra vo liam hon c'halono,  
 Ma reno 'r peuch'en tiegez,  
 Evit zouplât poan ar vuez.

Gloar d'an tri ferson en Doue,  
 Breman hag en eternito!  
 Gloar da Jezus ha da Vari!  
 Da zant Jobez mil meulodi!

PERSON TREDREZ.

## LID-EUREUD AN OTRO KERREK

Person Keraudy.

Lidet zo bet eur gouel en enor da eured personiach  
 an Otro Kerrek gant e barroz Keraudy. Oll veleien ar  
 chaouton hag ar re war dro a oa diredet evit lida an eured  
 kaer ze. Setu aman eur zonik bet zavet gant hon mignon,  
 person Tredrez war ar gouel-ze. Kanet eo bet drant ha  
 lizrin gant ar veleien youank a oa en dro d'ar person  
 neve d'ober d'ean 'vel eur gurunen a enor.

DISKAN WAR-DON : *Bale Arzur.*

'Neus ket er vro gwelloc'h person,  
 'Vit Erwan Kerrek, hon Mignon. (Bis).

Salud, Dom Erwan, hon Mignon,  
 Te 'zo pastor 'vel da baeon. (Bis).

Kers 'ta zeder war e roujo,  
 Gantan en Nenv te arzio. (Bis).

'Vit 'n holl oa loun a garante,  
 'Vel breudeur o digemere : (Bis).

Chom breur d'as kenvredeur karet,  
 Ha Pastor mad d'as holl denved. (Bis).

'N ti Erwan 'vije aluzen,  
 Ha lojeiz 'vit ar bevien : (Bis).

Bez harp 'n intanvez hag ar piour,  
 An aluzen 'zo well 'vit aour. (Bis).

Eno kavent, tu-hont da zo,  
 Meur ali mad 'vit o tne : (Bis).

Ro te repu d'ar bac'herien,  
 Ha frealz vad d'ar gianvourien. (Bis).

Zant Erwan oa mad en peb gis,  
 'Vit e vam Aeo ar Gontiz : (Bis).

Te vo bepred leun a galon,  
 'Vit da vam vad, hon zintin Mën. (Bis).

Ra vo ganid meur a vloavez,  
 Hi rey da jos, da levenez ! (Bis).

Gwell 'vit Erwan oa ket en Bréiz,  
 Da difen hon yez hag hon feiz : (Bis).

Ra vi nerzuz ha katonek  
 Da harpa feiz ha brezonek ! (Bis).

'N eil zant Erwan, Dom Vianné,  
 Zo diskleriet evruz-hirio. (Bis).

Ra vi te enn eil Vianné,  
 Dom Erwan, 'n hon kantved neve. (Bis).

Bennoz d'hon Eskop, Per Mari,  
 Reit 'neus eun tad da Geraudy ! (Bis).

Trugare da berson Plistin,  
 Doktor disket tud zant Justin ! (Bis).

Hen 'neus lidet gouel da eured,  
 Gant komjo helavar meurbet ! (Bis).

Bennoz c'hoaz d'ar guzulerien,  
 Zo bet es kerc'hat a vanden ! (Bis).

Trugare d'an oll veleien  
 Zo diredet aman laouen ! (Bis).

Gras d'imb oll d'ober, ma mignon,  
 'Med eur spered, hag eur galon ! (Bis).

Hir vue d'hon mignon fidel,  
 Erwan Kerrek, roue ar gouel ! (Bis).

PERSON TREDREZ.

## BUE VAN BADEZOUR VIANNEY

(KENDALC'H).

Neuze Vianney a lakaz 'n e ben kaout digand Doue  
 ar graso an evoa ezom : beteg e voto-ler a roe d'ar bevien  
 hag ec'h arse dierc'hen er ger ; o c'houlon bara ha lojeiz,  
 evel eur paour, e kerzaz perc'hirin, beteg be zant Fransez-  
 Regis e parouz Lalouerec ; heb hollen ha divlaz eta e  
 tebre e oll voad. Doue a 'n em lezas da vean goneet gant  
 kemend a binijen ha gant pedenno ken c'houek, hag a  
 digoras tam ha tam spered ar lugel.

A vec'h e oa tremenet ar groaz-se, ma teuas eun all  
 pouner meurbet d'ean de dougen. Ar bla 1809, tri bla  
 goude m'an evoa tennet d'ar sort, ha pa grede tremen  
 prestig toull-dor ar c'hoerdi, e o lakeet war roll ar zou-  
 darded youank ha galvet d'ober e zervij e ker Bayonne.  
 Ar beleg koz a dougaz klem d'an ofiserien o laret d'e  
 tlee ar pôtr youank bean 'bet lakeet war roll ar c'hoer ;  
 na oe ket chilaouet, ha Vianney a renkaz en em lakat en  
 hent. Hogen, konean reaz kilany, hag e kemeraz gwede,  
 da gentan e Lyon, ha goude e Ronanne. War-bennparzek  
 miz, epad pere en neves kalz da c'houzauv gant ar c'hlen-  
 ved hag an drubuilh, Vianney a distroaz da di e Difenner  
 hag a oe kaset gantan, da gentan, da Verrières da studian  
 ar filozofi, goude, da gloerdi Sant-Iréné euid diski an  
 teoloji. En daou lec'h-se e vevaz evel eun el hag e c'honeaz  
 kalono an holl dre e izelder-galon, e domder, e furnez.  
 Daoust ma sente erfad ouz reolen ar c'hoerdi, daoust ma  
 oa eur skouer euid an holl ha m'an evoa eur skiant eun,  
 koulskoude e vestro na gredent ket loskel anean da gemer  
 an urzo zakr, rag re neubet disket o kavent anean. Keit  
 ha ma oant nec'het o klask gouzout petra d'ober, e  
 komzjont, eun deiz, gant Vikel-Vraz ar c'hardinal Fesch,  
 an O. Courbon, hag a oa mignon, d'an O. Balley. Heman  
 a roaz an otrestur a c'houlenned, hag an O. Vianney a  
 gemeraz an urzo zakr an naved a viz est 1815, oajet a nao  
 bla war-ugent.

An O. Balley a c'houlennaz anean euid kure pa vije  
 beleget. E c'houlon a oe roet d'ean. Vianney, eus Gre-  
 noble, en em rentaz, eta, dinu da Ecully. Epad daou  
 vla, ar person koz a diskaz d'ean heuilh an holl vertuio

pere a zere ouz eur beleg zantel. N'hed ket klevet ar  
 person o laret 'n e bedenno : « Me o l'ar, o ma Doue »  
 heb zantout ar galon intanet dre ar stum a lake d'o laret,  
 Digantan e tiskaz an O. Vianney djouret euz an oll  
 ezomo : rag kik tomet hag adtomet, oant du dre ar gouzi,  
 a veze digaset hobken war an dol e mesk eun torkadik,  
 avalou-donar. D'ar paour e roe ar muiun ma helle,  
 E skourje-binijen hag e c'houreiz a destamantaz d'e Gore  
 youank, hag e varvaz o rei d'an O. Doue « ar c'hadran  
 eus an ineo » a lavare divateoc'h an O. Vianney.

Sturiet mad 'oa bet ar beleg youank ; breman e kerze  
 ezet war hent an oll obero-mad ec'h eo galvet gant an  
 O. Doue d'ober war ar bed-man. An O. Courbon a lakaz  
 anean person e parouz Ars, ar bla 1818.

Ar park roet da Vianney gant an Otro Doue a oa leun  
 a drez hag a sperr ; ze na oa ket bet kuzet outan gant  
 ar Vikel-Vraz. Na oe ket pell 'n e barouz heb gouzout a  
 oa bet kelennet mad. Deu na lake troid ebarz an iliz  
 epad an deiz. Ar zakramancho a oa dilezet a gren. Labou-  
 rat a red d'ar zul, hag eus al labour e liskwized dre an  
 dans hag an hostaliri. Yen ouz ar Relijion, tom he  
 galon ouz plijadur ar bed, setu penoz e kavaz Vianney  
 ar hobl-se. Spontet e oe ar person youank. « Petra 'meuz-  
 me d'ober aman, a lavare ? E mesk tud ken klouar, ken  
 goneet gant an Droug-Speret, an euz aon d'eu em goll  
 ive. » Hogen ar garante euid Doue a zo trech d'an oll  
 disfiarz. Dout 'ra c'hoant d'ean da c'hionid kalon e hobl  
 d'an O. Doue. N'esperno poan ebet euid ze, ha dont 'rey  
 a-ben : Henez 'vo e vuzud kentou. Ar beden eo kleva ar  
 beleg euid brezeli eneb d'an diaoul. Aboue ar beure  
 beteg Anjelus an noz, e chomaj a zo ebarz an iliz dilezet,  
 war e daoulin dirag ar Zakramant. Da greiste e kwita eur  
 pennadig euid monet da gemer eun tam boed hag a aoz  
 e-unan, ha, goude, ac'h a da velet eun tiad bennag eus e  
 barousianiz. Epad mern e tigoue. Diwar an treuzo e lar  
 « deiz mad » da berc'hen an ti. Deut en diabariz, e pok  
 d'ar vugale vilian, ha, keit eman an hell e tibri, an O.  
 Vianney harpet e gein ouz eur press a gomz d'e eus Doue  
 hag eus e zent. Den na wel eo bilan ar person hag e  
 toug eur zoutanen dismantrret beteg ar stenen ; hogen,  
 heman a zell ouz e drem intanet gant ar garante euid  
 Doue hag ar glanded pinted warni ; egile a deul pled ouz  
 ar binijen stard a dlee ober ; oll e kav d'e o denz eur zant  
 dirag o daoulagad hag e lezont gant dudi tenrel en o  
 c'halono haden an distro ouz an O. Doue. Pa distro al  
 labourerien d'o farko, ar person zantel a adkemer hent  
 an iliz da adkregi war e beden. D'an noz, e pren warnan  
 dor ar peniti, hag ennan e chom pell-pell difun euid  
 skrivan e armonio, diski ane, hag o laret d'e el mad hag  
 a zo ouz hen chilaou, arog o laret d'ar hobl.

E guzulio mad, e skouerio dreist-oll, a gavas hent ar  
 c'halono. Eun neubet tud an em dastumas en-dro d'ean  
 hag e zelljont prestig evel eun deve donet d'an oferen bep  
 peure, distrei d'an iliz d'an noz euid larst o fedenno hag  
 o chapeled, en em lodenni euid donet a heb eil d'adori ar  
 Zakramant war an deiz. Eus ar re partan e oe eun ivron  
 binvidik, an dimezel d'Arz hag eul labourer paour-mad.

An dimezel a blije d'ei en em rei c'hoer chero-mad ;  
 herrus ha didorr ec'h heuilh ar person zantel. Ar meziad  
 a gave ar brassan dudi o sonjal an O. Doue. « Ma den  
 mad, eme an O. Vianney, goude bean zellet eun deiz piz  
 outan, petra laret d'an O. Doue epad keit-se amzer, pan  
 eo gwir o muzello a ve kloz ha diflach ? — « Na laran  
 man : Hen a zell d'am c'he ; me zell d'en ke. — Komz  
 dizolo pehini diskoue eur spered lem, hag a reaz d'an  
 den zantel arvesti gant ar zouez ha trugarekat an Otro  
 Doue da rei d'an dud, ezen herve ar bed, an diskamant an  
 huellan war treo an ine.

(Da heuilh).

GOULENN e bureo ar Groaz : Goueziou st. Erwan, al  
 Labourer, sant Milio, sant Koveri, hag all. Eur gwennet  
 ar pez.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIJOU HA MEIN-BESIOU  
 En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieux — Imprimerie Saint-Guillaume.



# Kroaz ar Vretoned

BOUMANANCHOÜ

Eur skoc'h ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoc'h, evit ar broiou estren evit ar Broio kellet.

SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Oüro VALLEE, Renor, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Oüro GOAL, Skrivantier, 27, ball Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweonek pep ardeunnad-skritar.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann douez).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Gelo.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furnez ar Gelo.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kelonek.  
Yez ar feiz eo ; ma vo trec'hoc'h,  
Ouspenn ar Ver, o vo Pech'hoc'h!  
MILIN.

## E WINKADEN DIWEAN

Hounnez eo gwinkaden diwean an otro a ve gret Combez anean ; an otrone person ha kure Plouagor o deuz tapet anei.

Arög kwitad e garg, Combez an euz hastet buan zellet endro d'ean, ma na gavje ket c'hoaz eun dro fall bennag da ober.

Zerret en euz 466 skol, ha goude an euz lemmet o fae gant an otro Bonner hag e gure, abalamour e komzent brezonek.

Ar Vretoned hag ar Brezonek o deuz bet evelse an tol diwean. Eun enor eo evite, hag evit an otro Bonner hag an otro Thiépaül.

Hon goure hemennou d'ei ! — Fians hon deuz penoz ar ministr neve avo eun tammik furoc'h hag a deuo hep dale da dizober gwall labour Combez.

## BUGALE DIOU SKOL

Arru on c'hoaz war ar skolioù ; morse na vo sklerijennet awal'h an dud diwar o funn. Red eo hen laret, evid hon mez aliez, kristenien ha Bretoned, n'hon deuz biskoaz kemeret en kenver ar skolioù mad ar zoursi o deuz an dud fall lakat evit ar skolioù dife ; n'hon deuz biskoaz gwelet, na kaeroc'h zo, sonjet en dalvoudegez dreist o deuz ar skolioù war ar Vad ha war ar fall. Oute e tigoue amzer da zond hon bro Breiz, rag enne eo e stummet hirie an dud a dle ren ar vro arc'hoaz. Ze zo kiriek d'ar Framasoned, d'an dud dife, d'ober kemend a drouz endro d'o skolioù hag a reont. Herve o c'hlevet, nan euz skol abed kenkouz hag o re, ha neb o silaouo na welo en skol ar Gouarnamant netra a fall... Perag ze ? En toue, ar poëson milliget hadet en kalon ar vugale barz ar skolioù dife a zo 'vel ar poësoniou braz ha marvel, na doug ket a freuz ac'han da bell goude ma ve bet kemeret. Mez freuz ar poëson na c'hortoz pell da gad e nerz nemed evit bean gwasoc'h ! A benn eta anveo an dud freuz fall ar skolioù dizoue, e voint re diwead da bara an drouk : krog mad a vo ha na ziskrogo ket !...

Gwellan zo d'ober eo plead da ziarbenn an drouk, da vonga ar fall, hag evit se e tle peb den barn an diou skol dre ar vugale a darempred ane. Neuze e welo reiz pehini eo ar skol vad ha da behini e tle kas e vugale Ma na wel ket sklaer awal'h c'hoaz, me hen pedo neuze da vond eur zulvez bennag d'an ofern pe d'ar goupero en eun 'liz-parrouz 'lec'h o dastumet bugale diou skol dishenvel, da laret eo, bugale Leanezed ha bugale skolaerien ar Gouarnamant.

An daolen vo eno dirag e zaoulagad hen sklerijenno war dalvoudegez ar skolioù pell welloc'h eget ar gwellan vennaou-skrid hag ar c'halonekan komzou. Nan euz ket vel eun taol lagad da gomz d'ar spered.

War dro hanter miz kerz diwean, en em gaven er goupero en parrouz K... (Kerne-Uhel). Nebeud a dud oa er goupero... re nebeud, siouaz !

Dirag-on, daoulinet war eun toullad spankou koat, e oa potred vihan ar c'hatekiz a heuilhe ar skol laik. En tu klei d'in, daoulinet ive war bankou-all e oa merc'hed al Leanezed. Ar merc'hed bihan a oa eun dudi klevet ane o kâne ha gwelet pegen fur, pegen mad en em dalc'hent barz an Iliz. Nag eun taol-lagad, nag eur finaden na vijent gwelet oc'h ober ; holl e oant 'vel aele. Eur blijadur oa sonjal enne hag er mestrezed kristen o doa o c'haleanet...

Ma oa kaer tu ar merc'hed, ken hudur all oa ive tu ar boired. Eur vez oa o gweled. Holl o troent, e tistroent o fannou evit c'hoarzin pe evid ober, fent gand unan bennag.

Darn ane — an amprevaned ! — an em die'hourde 'vel pa vijent o zeval euz o gwele, hag o apered na oa ket muioc'h gand an ofis evid ar gedon a zo bemde o redek ar c'hoazjou...

Pa deuz en Iliz — eun tammik oan diwead, mar plich ! — ar ganfarded a zistroaz holl da zellet ouzin. Ken frank oa digor gaute hag o daoulagad hag o geno, ma c'hoantsen lakaat zin ar Groaz gand aon da vezan lonket !

— Daoust deuz pelec'h, e sonjen, e teu an eubeulien gwe-man?... Marvad n'o deuz gwelet biskoaz den ! Fent a rent d'in. True 'm oa oute hag e memez amzer droug ouz o zud hag ouz ar mestrou o doa o c'helennet ken fall.

Ma fent a greskaz p'achnaz ar goupero. A hoan 'n evoa ar beleg fin d'ar pedennou, e weliz ma c'hrennarded o tec'hel euz an Iliz ken buan ha ma zav diwar eur parkad ed eur vanden vrini spontet. Na oa kemm abed e tre ar brini hag int, sepet elec'h koagal, botou koat ar re-man a re kemend a drouz ma skloke an Iliz gante o redek. Hep kemer dour biniget e tec'hfont er vered, hag eno 'n em lakchont da lampat, da zailhat evel loened pennfollet...

En keit-se, ar merc'hed bihan a achue o fedennou dindan zellou maddeuz al Leanezed ; na rejont van abed euz ar boired. Sevel e rejont diou ha diou ; tremen a rejont diou ha diou a dal d'an aoter vraz ha, diou ha diou hepred, e taoulinchont dirag ar Zakramant. Goude e tec'hfont 'maez an iliz ken fur, ken zentuz ma oa eur yec'hed zellet oute.

Daoust ma ouien pell a oa ha ma anveon mad talvoudegez ar skol gristen war ar skoll-all, kement-man a estonaz ac'hanou mui-ouz-mui. Dirag ma daoulagad e welen ken reiz ha daou ha daou ra pevar an dishenveldigez a zo etre eur bugel zavet fur ha kristen hag unan all zavet, nan, ma karet, gant tud dizoue ha dife, mez gant tud yen ha dizebant. Pebez kentel, e sonjen, vid an dud zod a gendalc'h da gas o bugale d'ar skolioù dife !... Sonjal c'hoaz e ve kad en hon bro gristen tadou diskiant awal'h da harpa gand o mouez al lezennou fall a sko war ar ra Leanezed hag a zav ar vugale ken mad ? Ha pez eo c'hoaz an heuzusan eo gwelet marteze ar memez tadou, pere, ma 'denz plijadur ha bue vad en o ziegez, eo dre m'eo zavet o gwirag hag o merc'hed gant Leanezed... eo eta gweled ane o rey dorn d'al lamponed, d'ar boired ru 'vel ve laret. An dud-ze n'ouveont ket petra 'reont ; ober reont brezel d'e o-unan, d'o gwad ; lac'ha reont en o ziegez kaeran tra a zo ebarz : ar peuc'h kristen !

Ma, kaer 'n euz an dra-ze bezan heuzuz, c'hoarveout e ra bemde er vro-man. Er barrouz ma kontan d'ac'h eo zoken c'hoarvezet 'vid ar bla. Pennou tiegez ar barrouz-man, vit trugarekaat al Leanezed euz ar hoan e lakont gand o bugale, a ra treuel ane e maez o zi ha zerri o skol. Evid an deion tremeseot eo bet an archerien o laret d'e tec'hel...

Tec'hel refont holl, a dra zur, ha Bredeur ha Leanezed... ha beleien memez marteze, mes da vihana arak ma kemerfont an tec'h e larfomp d'e : — Ho labour, potred ha merc'hed zantel, a dougo e freuz, ha goude ma vefet tec'hel, pa vezo gwelet o tremen kenver-ouz-kenver gand eun all, ar bugel ho po zavet, kelennet ha disket, peb den a laro c'hoaz : ar bugel-ze zo zavet 'n eur skol gristen ! Laket ho po war e dal eur ziel ha na dec'h o biken ; ziel ar Groaz !

Goude vo konezet an dud fall, goude he devo hon Breiz-Izel rentet plega penn he herminik wen evit harz da vean labeet gant fank hudur an Dispac'h neve a gouezo warni hepdale — ma na garomp diwall, — pion a hadsavo c'hoaz hon Bro ? Ar vugale vo bet kelennet barz ar skolioù kristen. Ar re-ze a gavo 'n o c'hreiz eun nerz baranduz dirag pehini o deuz a viskoaz krenet an droug-apered, an dud fall : nerz an avieli... ha dre an nerz-ze e trec'hfont !

AR YEODET.

## MA VE BOLONTEZ DOUE

VAR DOR : Bosen Eliant.

Klevet em euz, pa oan bihan,  
E toull an oaled, goude koan.  
Klevet em euz eur gouladen  
'zo abouas chomet en fenn.

Hervez a gonted, Hon Zalvar,  
Gant e ebestel Yann ha Per,  
A ziskennas euz an nenvou  
D'ober eun dro var hon maeziou.

Eun deiz bennag, 'n e varadoz,  
Hen doa laret d'e horsier koz :  
— « Ma karit, e raimp eun droiad  
E Breiz-Izel, bro an dud vad. »

— « Di, eme Ber, gant joa ez in,  
Rak Breiziz a ra henor d'in.  
Kalz filhored em euz eno,  
Ha kalz ilizou dre ar vro. »

Sant Yann a zo pedet ivez.  
Hag asanti a ra gant prez ;  
Ha setu ar vechourien  
Euz lein an nenvou o tisken

O zri, ken prim hag an avel,  
E tiskennont e Breiz-Izel ;  
Staga reont da vont var droad  
Dre an Arvor hag an Argoad.

Eun deiz benag m'o doa kerzet  
Pell amzer, heb diskwiz ebet,  
E teuas naonn d'ezo o-zri,  
Ha n'o doa begad da zibri.

Kenderc'hel reant evlket  
Da vont kalonek gant o hent,  
Pa weljont marteze eun ti braz  
E toull an nor o veska toaz.

Sant Per a lavar : « Deomp ama ;  
Krampez a vo da vihana ;  
Krampez vo kavet heb dale,  
Gant ma vo bolontez Doue. »

Ebarz an ti ez eont dioc'h tu.  
— « Ni, eme Ber, hon euz naou du ;  
Daoust hag aman ne c'helfemp ket  
Kaout da brems eun tammik boed ? »

— « Eo zur, a respont ar vatez ;  
Aman bremaik e vo krampez... »  
Chom 'ra heb lavaret goude :  
« Gant ma vo bolontez Doue. »

Ar vestrez a lavar d'he zro :  
« Gant eo an toaz ; krampez a vo ! »  
Chom 'ra heb lavaret ive :  
« Gant ma vo bolontez Doue. »

Jeuz hag e zaou abostol  
A dosta neuze euz an daol.  
Hag ar vatez, varni kalz prez,  
A stag da aoz ha c'hrampez.

Daou drebez e laka buhan,  
Ha diou billik, ha tan dindan...  
Ha dioc'h tu e krog er varaz  
Oa bet enni mesket an toaz.

'N eur he zostiñ euz an oaled,  
Setu ar varaz didalet !  
Hag an holl doaz a oa enni  
A zo ledet var al leuz-zi !

Pa wel an toaz war an douar,  
Ar vatez kez 'ya en egar ;  
He mestrez paour zo pennfollet  
Gant an darvoud zo c'hoarvezet.

— « Breman, amez, Aotrouez,  
It da leac'h all da glask krampoz;  
Kouls eo raktal mont en ho rout;  
Evit aman eo ac'hu tout! » —

— « Achu n'eo ket, eme Jezuz.  
Aman e vo krampoz furuz;  
Ya, ma ve bolantez Doue,  
Aman 'vo krampoz heb dale. » —

Jezuz raktal, gant penn e var,  
Ra eur stokad ouz ar varaz,  
Ha, daoust ma oa dizac'het holl,  
Setu hi dreset en eun taol.

An toaz ive a zo enni!  
Sabatuet eo tud an ti...  
Heb dale pelloc'h, ar vatez  
A stag da vad d'ober krampoz.

Pa 'z eo o naoun torret gant,  
An tri beachour 'ya' n' o zro;  
Mes Hon Zalver, arak kwitât,  
A ro d'ar plac'h eur gentel vad.

« Vs marc'h kez, eme Hor Zalver,  
P'ho peuz eun dra benag d'ober,  
Lavarit : « Ma ray an dra-ze,  
Gant ma eo bolantez Doue! »

EUR MISSIONER BREIZAD.

## DEC'H HA HERIE

Fanch hag Erwan 'zo het en oferen veure, hag emaint drama o tonn d'ar ger. Fanch 'zo eun den diwar ar meaz, pelhini n'eo bet biskoaz nemet en skol ar barrez, ha c'hoaz, en gwirione, n'eo ket bet pell. Erwan 'n euz baloc't bro, gwelset meur a c'hizion; studiet en euz ive ebars al levrio koz koulz evel 'bars al levrio neve, ha deus a gement se 'zo deud d'ean kals a dislians dimeus an neventizion, ha kals a garante evit an treo koz, da vihanha evit kals a dreo koz. Tud ar barrez, o welet pegement a stad 'ra deus ar re-ma, e sonj gante penoz Erwan 'zo eun enebour marvel da bez a hauver herie ar « progrès. »

Fanch 'ta a gred ec'h hallo bouc'ha Erwan.

Fanch. — Mat Erwan, sonezet ec'h oun o klevout ac'hanout o veuli dalc'had an amzer goz, hag o trouk-komz deuz an amzer neve. Velkent ha goude, eo bravoc'h beva herie eget brema 'zo nao c'han't lâ.

Erwan. — Da c'houzoud eo, Fanch. Red mad vefe d'id, da genta, laret d'in petra eo beva mad.

Fanch. — Ma feiz! beva mad eo beva evruz, herve gredan.

Erwan. — Koulskoude, ma mignon, meur a hini, meur a den pinvidik a vev mad hep bea evruz evit-se. 'Meuz soun ar bevans mad n'eo ket penn-abeak an evrusted. Mammen an evrusted 'zo keitoc'h en peoc'h ar spered hag ar galon, eget en bevans ar c'hof.

Fanch. — Ze hall bezan! Koulskoude 'velkent eo bravoc'h beva herie eget brema 'zo nao c'han't lâ evel ma hen laren bremaozoun. Herie e tebrer bara gwenn; eva rer kafe, butunat a rer; ar gwiskamanchou 'zo brao. Em yaouankiz, am euz sonj, vije debret bara heiz, hag e oet gwisket en berlinj hag en lien kanab; an ninselion 'oa rust d'ar c'hroc'hon; na vije debret nemet gant loation koad. Na vije ket efet a gafe. Oh! fat, Erwan, lar 'vel ma kari, bravoc'h eo beva herie.

Erwan. — Ma Doue! Fanch, red eo d'in laret d'id penoz daoulagat da spered na walont ket pelloc'h eget bek da fri. N'eo ket evit larout dronk deus an amzer a herie. Mez me 'ya da diskonez d'id penoz neuz forz d'an den en petore amzer beva. Kouls eo an eil amzer sget egile, war pez a zell ezomou ar c'hof, hag ar stom da harza oute.

Digouezet 'zo bet d'id arrount deus an aod, pa deuz ar park, digouezet gant ar pred : neuz forz petra vije neuze lakel dirakoud war an daol, te hen kave eur meuz dimeuz ar gwella ha lonka hen raez gant eur blijadur dispar. N'ez netra, evel an naoun, evit rei blaz mad d'an treo. Eun tam bara heiz 'zo welloc'h, pa ve naoun, eget gwelset sukret pa ve leun ar c'hof.

N'eo ket gwir?

Fanch. — Na larun ket. Mez mar vefe lakel dirakoud bara heiz ha bara gwenn, war behini e krogfez.

Erwan. — War an hini gwenn, hep mar. Mez taol pe Fanch : setu 'oud o trei diwar ar gaoz. Gwechall, brema 'zo kals nebeutoc'h evit nao c'han't lâ, na oa ket a

gafe nag a vutun, ha deo-ze, den na c'hoanta eva kafe, na butunet. An ezom dimeus eun dea na zeu d'imp nemet gant an dra-se. Me n'am euz biskoaz butunet, ha nepred n'am be c'hoant da vutunet.

Mar n'am bije biskoaz evet kafe, n'am bije ket a c'hoant d'hen eva. Mar n'az bije biskoaz debret bara gwenn e kavjez mad bara du. C'hoaz eur vech, an ezom dimeus an dra na zeu nemet diwar ar gustumans deus an dra-ze. Ar c'hrennard, pa vutun evit ar wech kenta, a ve klav da vervel : kaout 'ra ar butun fall daonet; koulskoude dre forz aesa butunet, e teu da gant mad ar moged butun. Evel-se man kont gant pep tra.

An ezom dimeus an dra a zeu c'hoaz dre ar c'hoant d'ober evel ar re-all pe dre ar c'hoant da vea evelte.

An den a zebr bara du e kichen eun all pelhini a zebr bara gwenn, a zo malleuruz; red mad eo d'ean ive dibri bara gwenn. Evelse man kont ive gant ar gwiskamanchou, gant ar blijadurezo. Ezom an euz an den d'ober evel e bar. Meur a ezomou a zeu d'imp dre ar warizi.

Marteze arag nebeut amzer na vo ken debret a vara nag a gik. Marteze 'vo bavet an den gant eur boultren bennag, eur vaskennad poult burzuduz, en pelhini 'vo kement a nerz-bevans eget 'n eul livr vara hag en eul livr gik. Neuze, emichans, 'vo graet goap dimeus an hini a zebr bara ha kik. D'ar c'houlz-se, marteze, na vo ken evet na kafe na gwin, meuz eun dra bannag welloc'h; d'ar c'houlz-se, marteze, vo kavet deillou welloc'h eget deillou butun. Koulskoude, Fanch, an devez a herie n'ac'h euz c'hoaz na c'hoant nag ezom dimeus ar boultren vurzuduz-ma, na dimeus an evach neva, na dimeus ar butun neve.

Laka eta 'n az penn penoz peb amzer 'neuz he gizioù, ha penoz na deer ket laret eo welloc'h herie eget dec'h, evit pez a zell ar beva-mad.

Meur a Vreizad, aet da veva e meaz e vro gant e diegez, 'zo treutoc'h gant e vara-gwenn, hag e gafe, hag e win-kampech, eget ma oa gwechall gant e vara zegal-winniz hag e jistr hep dour.

Pa oa gwisket an holl en lien hag en berlinj, den na c'hoanta bea gwisket en mezer, en voulos hag en sei.

Pa oa toet an holl dier en zoul, dein na c'hoanta toi e hini en meinglaz.

Na laka ket eta, c'hoaz eur vech, an amzer goz en kem gant an amzer neve. Red eo d'imp kemer ar bed evel ma 'man, evel ma kemere ive ar bed hon tadou koz. Mez bez assur penoz ar re-ma oa ken evruz en o c'hof eget ma oud en da hini. Petra lareze-te a gement-se?

Fanch. — Ia! gwelet 'ran, dram-dost, ar pezh c'heuz laret. Mez n'oun ket goneet c'hoaz.

Erwan. — Nan, rag n'oud ket kab c'hoaz da welet pep amzer distag mad deus an amzer warleroc'h. Paour kez! mar 'z pige ar galloud da welet ebars an amzer da zond, te gavche ive da stad a herie gwall fall, e kever stad ar re a vevo neuze.

Ar re a vevo divzealoc'h a glemmo ive ac'hanoud, hag a laro na eo ket brao beva en naontekved kantved.

Fanch. — Mad! Mez herie n'hon deuz ken noblans drouk da waska c'hanomp. Muic'h lipr omp. Nebeutoc'h a boan hon deuz.

Erwan. — Ac'hanta! me diskonezo d'id penoz, mar n'oud ken dindan noblans drouk, te zo c'hoaz dindan mestrou gwasoc'h. Ro d'ean hano c'heuz c'hoant, neuz forz! Neuz chauchamant nemet ebars hanoioù an dud hag an treo. An den a boan 'zo stag bepred ouz e bez-labour. Pa 'z po gwelset mad kement-se, marteze na vo ket trawalc'h d'ar mestrou rei d'id avel ha komzou kleuz da lonka.

ERWAN BERTHOU.

## EUR PARDON KAER ER RUSI

Pardon kaer, allaz! pardon trist an hini eo, deuz an tristan, denz an ezuzans hallder klevet na gwelet. Etre 6 ha 10.000 Rus lazet pe gwall-diet gant zoudarded rus, grage, bugale vitan, tud koz ha tud en o oad diskaret gant ar boulliji plom war dachennou hag en ruioù Zant-Petersbourg, disul diwean!

Perag?

An afer-man 'oa o c'hori boue pell 'zo. Micherourien rus ar c'haerion, kenkoulz heg ar bobl rus en e bez, nan euz ket gwirion evel o deuz breman ar bobloun-all. N'hallont ket votan. Ar gouarnamant gant ar « Tzar » en penn, a zo mestr da gelen ha da c'hourc'hemon en pep tra hep goullet ali den abed. Ar Rusi a zo eta, c'hoaz hirie, pe stad ma oa Bro-C'hall en koulz ar rouane : ar roue, pe ar « Tzar » hag an noblans a c'houarn ar bobl herve o bolonte.

Ar seurt gouarnamant n'hallor ket laret eo fall, meuz mont a ra da fall, rag ar re o deuz ar c'holloud etie o daouarn, abred pe divezad, a deu da ober gwall-impli anean.

Kement-ze, hervez kont, a zo c'hoarvezet er Rusi. N'a ket ar roue, meuz an noblans he deuz gret impli fall deuz he nerz; 'boute pell 'zo ar bobl gwasket hag ar vicherourion dreist-holl a glemme, a yudo warzu o « zad » (evelse e hanvont o roue).

Mez an noblans hag an dud e karg o devoa dallet ha bouzaret ar roue, e giz n'halle na gwelet na klevet reuz o dud.

Hogen, disul diwean, 150.000 micherour deuz Zant-Petersbourg an em glevaz da vont, eur belek deuz o relijion o reu ane, da gavout ar roue war ar blasen a zo ez-eun d'e balez, evit goullet digantan o mennad, p'e gwir, den ebet a ziwar e dro n'houlle komz evite.

Ar roue na oa ket er ger, ha na deuz ket. Disul eta, pa fellaz d'ar vicherourion tremen ponchou ar ster a zo 'kreiz kêr da dapout ar palez, e kavjont zoudarded ouz o gortoz. Eur vanden ane a stouaz d'an daoulin da c'houllet gant an ofiser lezel ane da dremen; heman a respontaz : Adre! ha kenkent all, ar c'hozaked, gant o skourjeou plom hag o sabrinier da dornan war an dud-man, grage ha buga'e, evel ma oant.

Neuze o savaz kri-forz hed a hed d'ar ster hag er ruioù : war ar valeerion ive e vije tennet : an erc'h hag ar skorn a oe ruziet gant ar gwad : 2.000 lazet a oe hag eun niver a re gwall-diet.

Marfad, ar roue a zo skoet eun taol 'n e galon pan euz klevet nag a wad a oa bet skulhet. Eur bec'h ouспен o vont da gouean war e ziouskoa, asambles gant brezel ar Japon.

Laret a rer ar vicherourien rus o deuz c'hoariet eun tol traitour o tont da digeri ar revolution en o bro da vare ar brezel gant ar Japon.

Mez ar vicherourien a lavar ive : D'ar c'houlz ma oamp ni en poan, ar roue hag an noblans na chilaouent ket ac'hanomp. Darn a lavar ouспен, ken doue eo ar gouli en o c'halon :

Pa na vemp ket chilaouet ha pa skoer warnomp ar Japoniz a denno venjaus evidomp.

Petra zo eta pen-kiriek d'ar revolution-man? Ar mistri 'n o deuz ket gouarnet mad herve ar justis hag al lealded.

Ma vije an Aviel on pep kalon, na vije ket a revolution.

## BUE YAN BADEZOUR VIANNEY

(KENDALC'H).

Levenez ar person mad a vije bet heb koumoul mar 'n ije tostaet aliesoc'h ar Gristenien vad-ze, hag a gresko bep sun an niver dioute 'barz ar iliz, da digemer o Doue 'n o c'halon. « Poanionp, emean, da delzi kommunian bemdet! Nar n'hellomp ket daoullian bemde ouz an dol bask, greomp da vianan dre c'hoant aliesoc'h evid bemde rag zakramant an Oter a zo d'an ine kristen evel m'eo ar c'honezere d'an tan dare da vervel ». Hogen, an ineo mad-se a bellae bepred war digare na oant ket kempenet trawalc'h gand vertuioù hag a zo re a labour d'ober 'barz an tier. « Kommuniet bepred, eme ar person gand e galon intanet, en em vaget eus Jezuz abalamour na vefiet evid-Han; na laret ket ho peuz re d'ober, rag Jezuz a gelen anoc'h eyelen : « Deut davedon, c'houi oll hag a zo difi gand al labour. » Na laret ket penoz n'oc'h ket dibec'h awaloc'h; gwir eo ze, hogen, ezom peuz dioud-Han. Mar 'n ije zellet Jezuz nemet dellid ar paour-kez den, biken zakramant an Oter na vije bat zavet gand-Han. Na laret ket mui penoz oc'h re garget a decho fall : koulz eo d'ac'h digarean da c'hervel aa mendeusin war boez laret m'oc'h re glanv. An oll grouadurien hag o deuz bue a renk dibri evid chom bev : bevans an ine zavet d'ar vne dreist reiz ar bed-man eo an O. Doue; eur c'hristen n'hell bean magot nemet gand e Doue, ar boed-all na lenniont ket e ine. Ebarz peb iliz a zo eul lec'h-diskarg, hag eno o ve lakeat an oll pourvazio-dibri; al lec'h-se, 'barz an iliz, eo, evid ar c'hristen, an Armet zantel. Mar lakjan na dorn war tout an or ha mar goullan diganac'h : « Petra 'zo aman? » C'houi a larfe d'in : « Boed an ineo ». Ouz komzo ken intanet n'helllet ket stourm; prestig e oa gwelet an dud-se o kommunian, aliez. Evid lakat ar wrien-ze da gregi evrad ha d'ober toladur, evid harz an dud da vean dizroet gand an sen eus ar bed, rot e oa ober breuriezou. Zevl 'veaz eta Breuriez ar Rozera, evid ar merched, hini ar zakramant zantel evid ar bôtre, rag ar re-man, d'e greden, a deo bea da gentan da rei gwazoniez da Jezuz e zakramant ha da zerviji Doue.

(Da heuilh).



# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

Eur skot ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skot, evit ar broioù estren evit ar Broioù heñvel.

SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Olro VALLEE, tener, ru Zant-Bened, Zant-Brick.  
pe d'an Olro MOAL, Skrivaniere, 27, ball Charner, Zant-Brick.

EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweonek pep ardeusad-ekriver.  
(Diskenn a briz evit meur e embann diouz-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo d'end ar feiz,  
Gand ar gallek ez alo a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, e vo Pe'hall!  
MILIV.

## DOUE DA GENTA. HA NI WAR-LERCH

Evel ma roe Kroaz ar Vretoned da c'houzont dizul d'ho lennerien dre he fennad-skrid « Ar winkaden di-wean », Komb a zo kouezet!

An den a zo bet tremen daou vloù o ren ar vinistred hag al lamponed o deuz groet d'imp lezennou ken fall, an euz renket tec'hel d'e dro ive. Na oa ket re obred ! — Heñ pelhini a rone e dud (e ganfarded !) evel ma rener gant eur skourje eur vanden elias marnonet, an euz bet gvolet ar re-man, re danet o lér gand e daoliou, o tizei outan fudoret hag o laret d'ean 'n eur skignol o dent : Awalc'h, awalc'h ! Spontet ha zouezet war an dro, an *Difrohet* koz a zo kouezet war an teñh ha larz ar fank ! E ren en tu-hont d'an torfejoù heuzuz an euz groet a zo bet eur vez evit Bro-C'hall...

Daoust ma wela fin e ren, e gasoni eneb d'ar skolioù gristen na zislane tam. Araok tec'hel en euz fellet d'ean c'hoaz — en e winkaden di-wean ! — diskar en Franz war dro pomb kant skol. En touez ar skolioù-man o 'n em gav ouñ toullad mad euz Breiz-Izel.

Kalz a dud o klevet lamp Komb a laro gant plijadur : — Pebez dizam ha d'hon c'halonou ha d'ar vro ! Marvad breman e kerzo an treo wellec'h gand ar relijion... Breman velket e vo achu da deurel leanezed war ar pave ; achu da lemmel o fae digand ar veleien... achu reñ al lamponed diwar ar maez a lake kemend a drubuilh en hon parrouzioù, en eur gir achu ar brezel zod dishano groet dre holl d'an dud vad !... Kement-se a zo komzou brao, mes ne dint nemed komzou ! Gortozomp aberon an do-nad framasoned — rag framasoned int hepred — o deuz kemeret renadur ar vro warlerc'h Komb hag e gon-sorted, araok laret netra. Abred awalc'h e vefomp da gozeal ha da gána *Alléluia* ! ma kerz an treo ervad gand hon mistri nove. Petra a vad a c'hall an dud gortoz euz ar vinistred neve ? Nebeud a dra ! Marteze ditag ar vez hag an dev-kalon lezet gand Komb war e lerc'h, na gred-font ket mont re vulhan. Araok skei ha kendere' hel labour fall ar ve gentan, e c'hoantafont lakant ar holl da gousket 'vit ma c'hallio ankouat an droug groet ; mes bezet sur, kenvroiz ker, ar ganfarded-mian a dalveo ar re-all... Marteze zoken elec'h eur born hon deuz bet eun dall ! piou car... ?

Ar gwellan hon deuz d'ober, ni Bretoned, ez eo ehom hepred war evez, rag bro ebad n'ho deuz ket kemend da c'houzant dindan Komb evel Breiz-Izel. Hep mar, pegwir Komb a gaze ac'hanomp, ar re a den war e lec'h n'o devo ket evidomp muioe'h a garante. Digoromp eta hon daou] lagad ha na 'n em lezomp ket da vezan toulllet gand komzou flour.

Forz petra a c'hoarveo, n'hon deuz ket a lec'h da g'avout kalz a esperanz. Re don 'c'h omp kouezet barz ar fankigell 'vit sonjal e c'hallomp 'n em denna dionti hep poan. Kement-se a ve eur burzud ha na veritomp ket a vuzudou. Kent ma zavo diwar hon Bro ar walen a gastu zo kouezet warni hon devo laket euz hon zo muioe'h a boan evid a lakomp penruvian. Araok, hon devo disket bezan fur, voti ervad ha miret en hon daouarn ar vaz a roomp d'ar C'honnamant Bro-C'hall d'hon bac'hata !... Disket hon devo ponnial hag evidomp hag evid Doue hag evid ar Vro ! Ac'hann di, kenvroiz ker, na c'hortozomp netra digant Bro-C'hall. Lakomp en hon fennou penoz ar frankiz na ve kammed goulnnet, ar frankiz a ve kemeret !

Hag e kouefe kant Komb bemde elec'h uvan, hep dorn Doue hag hon zikour hon-unan, n'en em zavfomp biken !

Daoust petra 'vo ar C'homb nove, chomomp hepred Bretoned. Ma hon deuz — en despet d'hon falladennou — diskwellet da Gomb en Landreger, breman zo triwac'h miz, penoz e karomp Breiz, he gizioù mad ha fur, hon beleien, hon c'hoazioù zantel hag hon fe, diskwelomp moi-onz-mui da re a deuy war e lec'h na fell ket d'imp bezan nakabestr, na luslet. Pa chomfomp stard en hon c'hreden, pa virfomp hon fennou-kaled, eun de 'n em gavo hag a renko holl gouzoumanchoù Bro-C'hall kerzet ganimp !  
AR YEDEK.

## Ar Misioner hag e Vignon

— « Lar d'in, misioner, zo war-vez hon c'hwilat,  
Perag hon dilezel ?

Perag 'vit broioù pell leusket breman davad  
Da gerent... Breiz-Izel ?

N'ho deus ket re hon bro deus hec'h holl bugalo,  
Evit difenn dalc'himad

Ho Doue hag he yez, hec'h enor hag he fe,  
Eneb an ernezad.

Ar C'hallsoued a wash, ha bemde gwasoc'h-gwas,  
War bann da vamm garet ;

Er stourmad deuz ezomm muioe'h evit biskoaz  
Deus hec'h holl zoudarded.

Perag he dilezel breman pan eo arri  
An heur, (heur ar brezel) !

Da c'houzant 'vit da vro ha da skuilh eriti  
Da vad... beteg mervel?... » —

— « Ma mignon, te a lak da Vro 'n eur stad euzuz  
Ha n'eo ket hec'h hini ;

Breiz a zo breman krenn, mar ge bet gwall-eurus  
N'eo ken 'n hon amzer-ni.

Gwech-all e oa gwasket : hirie e zav neruz,  
Gwad tomm 'n he goazie ;

War he fenn e welan eur gurunen skeduz,  
Kurunen he barzed.

Ha petra c'hellen-me evit ma mamm Arvor,  
P'ho deus tud d'ho difen ?

N'o deus red deus ma harp ; me ya a dreist d'ar mor,  
Tresag broioù estren.

Met heb dilezel Breiz, rak etouez an dud gwa  
Noz-de me a boanio

Da lakat anveud d'ar poblou divada  
Jezus-Krist... Ha ma Bro !

Mar kwitaan ma Breiz en devez a hirie,  
Me rey d'ez digoll,

Rak heb ehan spourmin 'vit ma vezo Doue  
Da Vreiz... Ha Breiz... dre oll !!!

KALON-DIR,  
ar c'hloer.  
en Klerdi Landreger.

## STAD TRUEZUS AR VRO

Na mantrus eo deut stad ar Vro gant ar bolitikerien villiget ! — « Ma 'pije klevet ar griadek oa aman de ar votadek, a skriv d'imp unan eus hon lenneresed mad. Tud nan eo ket dent al laez eus beg o fri, tud ha n'o deuz ket an od da voti, setu aze ar ganfarded a ve breman oc'h ober trous hag o youc'h al *à bas la cabotte* en de ar votadeier. Ouspenn youc'hadennoù komzon a den ganto ive enep da Zoue, da veleien, d'ar Vro ha d'an dud honest ken louz ken n'hallfen ken o lera war ma isper. »

Poaniomp oll, lennerien ar Kroaz, evit na chemo ket an trec'h gant an dud fall-ze Doue ha zent Breiz da vo ganimp !

## AL LABOURIO

« An den a zo ganet evit ponnial,  
Hag an ev euz n'jal. »  
(Leur an den zantel Job V, 7.)

Ha me em zav, en eul lannek war eun dosen, goude bean groet eur pennad roud da douman d'am zred ha d'ober eur zell war ar c'huz heol. Netra garoc'h ewil ar c'huz-heol em bro Breiz. « O bro garet, bro garet, bro zantel, biken n'oz tizein. Ha pa n'houlfes ken am magan, bro vinniget ! war da douar e chomin da vervel gand an naon ! » Du-hont, a-deo, eur vogeden o sevel war ar c'hre-c'hio, izeloc'h eur vogeden o sevel diwar ar ster, diwar ar rivier. Dirakon, du-hont pell, eur vrunen etouez bego ar gwe. N'eo ket eur vrunen domder, pa laran. Ar vrunen-ze a laka beg ar fri da c'hoazan. Frou ! you eo ! Labour an nevo ar peun-kaz da c'hoazan en e ivino, ewid an noz, ha da laret en zionlder an noz : « Hout hou, hou, hou ! » Mar na skota ket e ivino ar paotrik kez ! An oabl etrezeg ar c'huz-heol ruan evid eur forn c'hoaret. En boka an ev, steredenno o parao o lagad zeder, hini aman, hini aze. Ha da-hant a-uz, bro binniget ar baradoz, hiez binniget an Olro Doue, ar zent hag an Ele, dispak ennan bleunio an oll vertioù, c'hoez vad ar zantelaz o strinkan dre-oll dreiz-an. Du-hont war an osted, en palez an Drinded, tantad ar garante. Eno na vo ket a rion, an de armo ! Diskennomp a denn-askel. A-glei eun euz diwar verc'hed Gwelo o nean moan, eun euz yen o trouzal ez bego glaz ar pin. Endro d'in an evned o tikal, en eur fraonal da vont da glask o nez. Dre ar mezio, ar chas o harzal, o laret d'an « aillhoned » mont d'ar ger ha diwall da ehom da skoajal dre an hencho.

Arro 'zo daou boir, hep a benn-haz gante. « O vont d'ar ger e veer potred ? » — Ya ! « Arro eo an daou-all arre. » — « Pion, pesore daou ? » — « Noz ha kouiz koan, zur. » — « Chan ! Chan ! en eur c'hoarzin. Fe ya avad ! Bonsour potred ! » — « Bonsour » — Ha me d'ar ger. Trouzal a ra ma zred war ar fank skornet. Skornan met a ra. Pikouz, gregnouzek eo an hent. War eun tu anean, an eer enep, eo manet ar reo gwena a oa ledet war ar bed ewid ar heurt ! Trouz a-bed ken endro d'in. Achu eo klemmo an Anaon binniget o c'houlen pedenno dre moez ar c'hilaz. Est eo ar c'hleier da gousket, goude bean laret « nozvez vad e d'o Rounez o son an » Anje-luz ». En-kreiz zionlder ar zerr-noz e klevan an daou barkad kerc'h gaud o c'haoz, zioulik-zioulik. (An daou barkad kerc'h e oa bet kaoz anez er zun-all). — Breurik, eme an hini heñan. — Petra 'zo ? — N'oud ket eet da gousket ? — Oc'h ampleit, o tanzei mont d'en em jouchan, kleo. Ma Doue ! Ma Doue mad ! Meuz aon e zo fin d'ho. Skorn ha reo a vo adarre. Ha deut eo ar skould. N'aman ken al lann o waskedi anon. — Ma fe, ewid-ze ! Wardeoz, pan eo bolante Doue ! — Ya kleo, trec'het eo al lann ha gwaec'h ledet, laket a gantcho. An daou 'bot-ze a labourer stard. Eur c'han bemde, foeskenno me a deuz gand pep hini anez. Ar charreter a reo unan beonag ouzpen. Gant-an eo eet ar maout. — Bah ! te a ra gwad fall ! Pera, n'ou-zoud ket penoz an Olro Doue, kement a zoursi d'ean deuz pep tra, a oar ervad pera 'neuz d'ober ? Ar skould, zoken ar skould dizolo a zo mad da lac'han ar prevred en douar. Ar skorn a neta ar gwad d'an dud ha d'an treo, a loska an douar, a zav an douer er riviero hag en sifonio ! — Ya, breurik ! Nebon, krige a ra en breajo gwag ha tener eveldon ive. Trec'han a ra ma gwio. Hag ar reo eta ? An heol oc'h arrount warnon pa ve ar vantel reo-ze war ma chout, an tomder oc'h argout war ar yenion, a barad, a zeiz anon. N'hallin ket pad, kleo. Te a zo kalet hag e zo brao d'id laret ! — Eñ ! kleo, na res ket a vad fall ! Gallowd ha maleder an Olro Doue a zo braz. Ha neuze, kelo bevan betek mervel a teuz d'ober ha mervel pa vo red. Mar na varvez ket breman, e ri koulz goude pan arreo ar filzier, pa an droc'heuz warnoud. Ha varvez breman, da viz meur o 'teñ an hadere hag e vo-laket keroc'h-all war da lerc'h. Heñez a deuz davad hag a zist-

groun bec'h an douar. Laret a ran d'id, an Oiro Doue, a  
eur pers a ra. Na vez ket nac'hel. — Ken arc'hon. — Ken  
arc'hoaz eta breuc'h, mar he bolante Doue ! —

Deut eo an de, breman e welan ec'h a al labourio war  
rog. Ar c'hleunio a zo touzet an darn vuian vrez ane. Al  
lann a zo gwac'hellet warno da zec'hian. Al lann a ve  
lezet da diblailan war ar c'hleunio.

El lanneier peurennian, e veint lezet-pelloc'h da gozan,  
d'ober lann c'hoec'h vla, pe ouzpen. Henez avad a ve  
lann liir, ha transe teo d'eann. « Hir-liir, keit ha Doue  
Alan Zallo » evel ma ve laret. Krog e veer da diwiskan ar  
gwe ive. An divaradur dre aman a ve lezet da nao-vlaian.  
En bro ar c'hoat na ve divarret ar gwe nemet hep daou-  
zek-vla.

Gwelet a ran eur pùr yaouank o sevel war vek eur  
wenn, eun vouch'al war c'houk o gil, he zroad kreistre doubl  
er jilien hag ar roched. Lezet a ve eur brank, eur skourr,  
Ober bek d'an derven ha koat d'ar re-all avad. — Tol  
ple, pot, na dichenkfe eur brank bennag ganid ha na  
Roefes war lein da gein diwar ar ween, laonen da vouch'al  
war erel pe ezel d'id ! diwall na zouffe da vouch'al drouk  
diwar brank pe vrak ha na lampfe gand da c'harr ! — En  
traon e welan eur pot-all muioc'h oajet o filab keyreo.  
Eur c'ha, eur gwe a ro d'ar c'hevre, diskarvenni a ra ar  
branko, ar c'hrennenno a dro a-goste, d'ober treid binvio  
o skilho-krampeez, hag ar fagodenno a zav en eur rigen  
ouz skea ar c'hleun da c'hortoz bean charreel. Laret a zo  
d'eann gand e vestr, lezel blinch aman, blinch a-hont gand  
ar beorien, ma na rankoint ket prenna keuneud d'ozan o  
sammo boed, ha da diskornan o izili paouranted !

Er zea all ec'h efomp da deilhaon. Ken ar zun-all eta !

EUR MIGNON.

DOUE HA BREIZ !

## KIMIAD AR MISIONER

Klanget d'ar Vreizaded misionerien er brolo goue.

WAR DON : Breudeur ni glec ho klemmo.

Kenavo evit biken, c'han d'ho kwitad breman :  
Ar Mest 'neus d'in lavaret : « Beleien 'zo aman,  
Kwita douar Breiz-Izel, ke prim d'ar brolo goue,  
Da brezek d'ar baganed hano ar gwir Doue. »

Na oan nemet eur bugel, eur vouez karantezus  
A lavare d'in bemde : « Galvet out gant Jezus.  
Da veuli e hano sakr en tu-all d'ar mor glaz,  
Red mad breman, krouadur, rag da loan a vo braz. »

Ha goude pa vrasais ar menez mouez tenor  
Er c'hloardi lavare d'in : « Te vezo misioner,  
Te vezo enn de Tad Gwen ; duze pell dimeuz Breiz,  
'zo c'hoaz tud divade, dibater ha difeiz.

Ha breman ebars ma c'hoaz me glev ar c'homzo-man :  
« Belek yaouank, hast buhan, da lec'h man ket aman ;  
Choazet 'meuz did eur park all 'tevo da laboura,  
Na zo ennau nemet sperra 'tevo da ziframma. »

— « Ma mab ker, eise ar vamm, ma c'halon baour a gren,  
Er brolo-ze 'neuz rouinet gwad kalz a verzerien,  
Ha marteze te ive c'houzanvi ar maro :  
Chom aman d'hon c'heleni ha zell ouz hon daero ! —

— « Tad ha mimm a garan kalz, uheloc'h evidoc'h  
A zo el lein an enno eur Mestr galloudeoc'h :  
E urz an euz d'in roet, outaa zentin bepred,  
Ma bliiget 'ta, mar plich, rak mont en-dro 'zo red. » —

Daero en e zaulagad an Tad Gwen bok d'e dad,  
D'e vamm, a hirvoud kement hag he deuz kalonad,  
D'e vreur ha d'e c'hoarezed oil mantret gand glac'har,  
Rag o breur na zeulo ken 'no zouez war an douar.

— « Kenavo, 'barz an Euzo 'n em welfomp oll eun de :  
Unanet evit biken e kichen tron Doue,  
Ni gano menodi kaer da Grouer ar bod-man,  
Allô, kenavo eta ! » Hag hon 'r maez 'n eur ouelan.

'Neur vonet gant an hent braz e c'brosmole komizo  
Da gwall-dier da glevot e-kreiz e hirvoudo,  
(Kwita a zo eun dra griz pa na retomar ken,  
Mez red eo gouzanv poanio 'rok kavout karantid ;

« Kenavo, a lavare, Breiz, bro ma c'hendado,  
'Lec'h ma lezan ma c'herent ebarz kreiz o daero,  
Na glevin Euzo en evned en dervou o richan,  
Nag an ezzen o trouz ar lanneier belan... »

Arta pell deuz an ti zoul en gwelaz o c'henel,  
An ti 'lec'h ma ruskellas e vramm ger e gavel.  
E welaz en harz an hent eur voden bruk blannet,  
A ziframma gand o zorn, da lakat 'n o vruched.

« O bruk, emezan, bleun kaer, te vezo ma envor,  
Eus an douar a garan, eus ma Mamm-Vro Arvor,  
Kousk aze war ma c'halon. Pell dimeuz Breiz-Izel,  
Evel don me te ive a wenvo arog pell. »

BARZ ZANT-BRIAR.

## ENOR DA BOTRED LEON !

C'hoaz eur strollad neve a botred yaouank savet e  
Bro-Leon da c'hoari peziou brezonek ! Pôted Pleiber eo  
hano ar strollad-man. C'hoaniet o deuz, evit ar wech  
kenta, *Bue Ponthalek* o Pleiber, ha goude-ze, int bet e  
Plonneou da adc'hoari an hevelep pe. Koment a dud oa  
o selaon ken o deuz ranket c'hoari diou wech diou-tu en  
eun abardaez, evit ma hellfe ar re n'o doa ket gallet tos-  
taat ar wech kenta, kaout, int-ive, o loden eus ar gouel,  
an eil wech. Kanet zo bet ive kanaouennon brezonek eus  
ar gwella ha graet eur brezegon ver gant Taldir, ar skri-  
vagnier brudet, da drugarekaat an holl, zellerien, c'hoarie-  
rien ha perc'henn ar c'hardi, 'lec'h e oa bet savet an treo.  
Pegouls eta, e vo gwelet kement-all e Breiz-Treger ?

## KANTIK ZANTEZ KOUPAIA LANGOAT

DISKAN

*Zantez Koupaia viniget,  
Bezot d'imp oll mamm bepred,  
Gant Langoat, patronnez haret,  
C'houi vezo delc'hmad meulet.*

Hon zeod evit gwir 'zo dister  
Da gomz deuz mamm zant Tual ;  
Mez hon c'halon a zo tener,  
Hon mamm eo mamm zant Tual.

Hanvet Aspazi da gentan,  
Na delc'has ket d'hec'h hano ;  
Groek Hoël, prinsez ar gwellan,  
Koup eo hanvet en distro.

Hoël, he Fried, pa gollaz  
Kurunen Breiz ken karet,  
Koupaia chomet intanvez,  
Gant Tual a oe galvet.

En Bro Breiz-Veur 'n em rentaz,  
Gant he mab 'n eur manati,  
He Breiz Izel d'ar rouanez,  
Breiz hepken a blije dei.

Gant Tual da Vro an Arvor,  
Koup a diskennaz 'n hon zouez,  
'Vidomp-ni 'deuz treujet ar mor,  
Dreiz momp kavet furnez.

En Langoat 'viti oe zavet  
Gant Tual eun iliz kaer,  
Enni Langoadiz 'deuz disket  
Da Zoue renti dever.

Koupaia pell he deuz hevot  
En Langoat dirak Doue,  
Hon zado gant nerz 'deuz galvet  
Da heuilh ar menez bue.

Pa oe digoneet an amzer  
Da gwita ar vue-man,  
En iliz, dirak an oter,  
Hi c'horf aez da ziskwizan.

Hi c'horf gant Langoat 'zo chomet,  
Hi c'halon a zo ive ;  
Langoadiz 'deuz ket ankoact,  
Bepred int he bugale.

Tagdual, Léonor, Séva,  
C'houi, bugale Koupaia,  
Hon zikouret oll da vewan  
Kristenien vad er bed-jaan.

Pa denyo Doue d'hon gervel,  
Gant he mamm deut d'hon harpan,  
Evruz evidoc'h da vervel  
Bugale da Goupaia.

J. M. G.

Parouz Ars na oa ken an hevelep hini. Goud a reomp  
para oa pa digouez enni : setu aman, herve lavar eun  
den hag an euz gwelet gand o zaulagad e-unan, pelec'h  
dleet laret ha zoulf diouti nebeutoc'h evid c'hoec'h vla  
goude : « Allez am euz baleet dre ar parko, n'am euz  
klevet hini o laret leou-douet, hini o loskel eur gomz  
louz. O tigor ma c'halon d'unan ané evid diskoulet d'eann  
he filjadur, heman a laraz d'in gand didroidellerez : « A  
dra zur, na dalveomp ket mui evid an dud-all, kouls-  
koude mez hon dije o'n em rey da dizurzo evel-se ken tost  
d'eur zant. » Kerent ha ma klevet kloc'h ar C'hreizle, ar  
botred a baouez gand o labour evid laret an Anjeluz.  
Gwech ebet na vo gwelet kanno, pere 'zo freuz ar veventi.  
Ar zakramancho a zo kalz darempreded, ha heb sadorn  
d'inderv a deu hanval ouz an hini arog ar gouelio braz.  
Beh noz, da diou pe daer hour ar beure, merc'hed ha  
potred zoken a deu d'an iliz da bedi. »

D'ar zul na baouez ket an iliz da vean leun. Epad an  
oferen, ar c'hatekiz, ar Gouspero, pedenno an inderv,  
kemet a dud a ve ken e ver dare da voutan : « N'hane  
teuz e zonz ar person kreski Ti-Doue o tigor Chapelio :  
da gentan, unan da zant Yan Badezour, goude hini  
zantez Philomèna, goude hini an *Eccc Homo*, ha goude  
c'hoaz hini an Ele.

Ya, e gwirione, Ars a oa eilpennet, hag eur belg  
zantel, en e-unan, an evoa gret an tol-ze hag a zelled evel  
eur burzud. Pegen braz dienez eta na vije ket deut er  
barouz mar vije et an O. Vianney kwit ! Koulskoude, da  
viz ebrel 1820, o oe lakeet da berson e parouz Salles a  
bro ar Beaujolai ; hogen, e baroussianiz a direzaz oll  
da Lyon, hag an O. Gourbon, test eus o glac'har, a lezaz  
gant-e o Pastor. Koulskoude a dra zur an ije gret er giz-  
all mar 'n ije gallet diougani ar burzudo a raje daouarn  
ar belek santel, ha mar 'n ije zonzet penoz an O. Devie a  
vije gret prestig eskob, rag heman adzarve prestig eskopff  
Belley, a gemerje Dombes dindan e c'houard o tistagan  
Ars diouz Lyon hag e berson ive dre eno.

Ars na roaz ket prestig labour awalc'h da galon intanet  
he berson hag an evoa c'hoant da dman ouz Doue ha da  
lakat kaer an oll ineo. Kuruz e veze eta pa ve galvet gand  
e genvreder da brezeg eur mission bennag. Trevous,  
Sant Trivier, Savigneux, Montmerle, e po lec'h e welaz  
vid ar voj kentan e genoberour an O. Toccanier,  
Chaneins, Sant Bernard, a glevjont tro ha tro e vouez,  
hag an oll, paour ha pinvidik a gredas penoz henez oa  
an hini a dlee o distrey d'an O. Doue. D'eann hebken o  
larent o fec'hejo, ha deiz ha noz, ma ve ret, e chomant o  
tal he govizion.

O redek er giz-se dro ar parouzio diwar er mez, a  
kavaz an O. Vianney an darvoud d'anaout pegen truezuz  
oa stad ar merc'hed bian dilezet, pere, arog goufouet pegen  
euzuz eo ar pec'hel, a gemere ar pleg d'hen ober. Ac'hane  
na oa ket pell da gaout c'hoant da zeval ovide eur mi-  
nic'h galvet « Providence ». Herve ma oa kustum, pell  
lezaz an O. Vianney e zonz da darei dindan heol tom ar  
beden. Goude e kemeraz diou eus e baroussianezed,  
euned gantan arog d'an oll vertuio, evid rey diskamant  
d'an emzivadezed hag evessant warno. Goude e pronaz,  
evid ugent mil liver, da lavet eo e oll beadra, eun ti  
zavet en tu all da leuveen-ger. Red oe kreski an ti-ze,  
hag e oe gwelet, war an dro gand ar vicherourien, ar  
person zantel hoc'h ober pri, o kizellan hag o tougen  
mein. Na gave mic'her ebet re izel pa re anean evid an  
dud paour. Adaleg ar bla 1825, an ti-ze a oe braz  
awalc'h evid digemer, nan hebken bugale dilezet Ars,  
hogen ive c'hoaz all ar re a rede ivel galomperezed dre  
bro Dombes, a gavas digemer ha skol vad eno. Lagad  
ar person mad a dapo dre-oll : nan hebken eta war ar pe  
a zelle ineo ar vugale, hogen ive beteg war ar boed.  
Bemde, goude mern, e re katekiz d'ar vugale-se. Goude  
an nebeut mizezio, e tenent da vean kristenezed mad. Mar  
klevet komz euz eur gwall-skouer bennag, mar oa ezom  
euz eur c'hras dispar bennag, evel distro eur pec'her braz  
ouz Doue, oll war an dro e rent eun naved, e tremenent  
an nozvez a bez dirag ar zakramant, e rent penijenn  
kaled, hag o goulan a veze otreret d'o gand an Euz. An oll  
merc'hed bian-ze, koulsko lavare, a oe goude zutizien  
mad ha mammo-tiegez euz an dibal.

(Da heuilh).



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoot ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
 Skoed, evit ar broiou estren evit ar Broio Keltiek.

## SERVANIEREIN

Eas al labouriou pe d'an Odro VALLÉE, Remer, vu Zant-Bened, Zant-Briek.  
 pe d'an Odro MOAL, Skrivantez, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU KONVERZ

Tri gwennek pep ardoanad-akhtar.  
 (Diskenn a breiz evit meur a embann diouste).

seronek hag ar feiz,  
 breur ha c'hoar en Breiz.  
*Furnez ar Geiz.*  
 Brezonek eo deud ar feiz,  
 ar gallek ez nio a Vreiz.  
*Furnez ar Geiz.*

Dalc'hit heged d'ho brezonek,  
 Yez ar dud vad ha kalonek.  
 Yez ar feiz so ; ma vo tref'het,  
 Ouspan ar Yez, e vo Pech'het.  
 M'inn.

Diwallet ! N'eo ket groet e daloro, e frinkaden diwean  
 gaud ar goanv. N'eo ket bet « skoulad ar goukou. »

Krog eo ar mevel da skuban, ar mestr da vernian ha  
 da rastellat hep eil. Braz eo ar c'hoat. Eun tamm mat a  
 labour eo en deilha. Mont a ra o micher hag o stad d'e.  
 Plijadur a ra d'e klevet an eved. « En Pariz, emeint,  
 na vijemp ket ken evarz-all. Komzet d'imp hepred deuz  
 hon bro Breiz, eur vro vad, eur vro zantel ! Gwech ha  
 gwech-all e savont o lagad war an heol o liguerni en bolz  
 glaz an env, o c'halon a zav neuze da gûd o C'hrouer hag  
 e leront zioulik, d'o El mad ha da Zous hepken da glevet  
 « ma Doue ma C'hrouer... » « Ma Doue me 'ro d'ac'h  
 ma labour, ma foanio... Ma-Doue, c'hoat a wel anon  
 gant ma labour hag a verk ma obero war roll ma bue... »

Tud vad, kenvroiz karet, groet evel an daou den-ze.  
 Epad ho labour, en kreiz ar boan, eur zell da gûd Doue  
 ho Tud karantezuz !

Awalc'h eo evel-se evit herio. Kenavo !

EUN MIKON.

## AR BARIZIANEZ

WAR DON : Ar Pillaouer.

Ar ganaouen ken koant-man a vo moulet war bae-  
 rennou distag ha kavet da brenan e bureo ar Groas.

En hon Bro Breiz eman ar c'hiz  
 Gand eur rumm m'ed yaouank  
 Da voned hirie da Bariz,  
 Da glask madou, bue frank ;  
 C'hoant o deuz da vezan m'ed  
 Dindan an holl er c'heario.

DISKAN

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro !*

Gonid bara en Breiz-Izel  
 Ar plac'h yaouank ma c'houlle ken ;  
 En he fenn a zo deud avel :  
 — « Tfo, emei, d'ar skubelen ! »  
 Setu hi o tef'het hep mez  
 Pell diouz he zud en daero... »

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Ma c'houlle an dud diganti  
 Pelec'h eo'n a ken diskviz,  
 Hi a larfe, hep he fedl :  
 — « Me ac'h a da Ba-ariz ! » —  
 « neuze d'ar c'henaouegez  
 hep den, dre fent, a laro : »

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Pa vo pellaet diouz he Breiz,  
 Hgg en Pariz dizanye,  
 Al labouriou kaled, direiz,  
 Eviti a vo mad tee ;  
 Evel eul loen t'ed he devez,  
 Hep paouez hi a boanio... »

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Koll a ray ebarz ar ger vraz  
 He zammik nerz, he yeched.  
 Ha pez eo ar gwasan, sionaz !  
 He furnez hag he gouez ;  
 Ne viro deuz ar Vretonez  
 N'etra nemed an hano !

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Ma tigoue d'ezl dond en dro,  
 Goude vo bet en Pariz,  
 Neuze e vo eur plac'h fars,  
 Eun dimezel deuz ar c'hiz ;  
 Gwisket 'vo vel eur rouanez,  
 'Vo ken anveet 'n he bro !

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

War he fenn, evel eur spartel,  
 'Vo gwintet eul tok re vraz,  
 Ma laro outan an avel :  
 — « Heman zo prest da vont e'hoar... »  
 Leun 'vo ar plac'h a lored, a c'hoaz,  
 Deuz lein he fenn d'he loto !

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Dilezet vo ar brezonek,  
 Ankouet e vo ganti,  
 Distaga a rey en gallek :  
 — « Ohi ! le, le, j' viens d' Paris ! » —  
 Eur vez 'vo gweled ar plac'h kez,  
 Gand he stumm hag he'h ardo... »

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Da bep tra ebarz Breiz-Izel  
 Hi a gavo e dam zi,  
 N'he devo ouz heo ha c'havel  
 Nemed droug ha kasoni ;  
 Er ger hi a vezo diez,  
 Red vo d'ei mont c'hoaz en dret !

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

Ar plac'h nan eo ket Bretonez,  
 Rag he bro he deuz nac'het,  
 Bezan eo eur Barizianez !!  
 Ha piou an ije sonjet ?...  
 — Huchomp holl eta en eur vouez  
 Warni a bouez hon fenn !

*Foel, foel, foel, d'ar Barizianez*  
*A ra mez da dud he Bro.*

AN YCORDER.

## KOMB DISKRET D'AN TRAOU

Kanaouen reur eun ton nece.

Na varnan ket Komb evit-ze ; lezel a ran Doue d'e  
 varn herve e volonte ; laret a ran darn deus an treo an  
 eus gret-ha deus an treo an nefoa c'hoant da ober, mes  
 bep kouplat e laran penoz kement-man a zo eur walen  
 ha gwall-eur : Gwalen a oa, gwall-eur a oa !

Ma c'hreden a zo ive penoz kement-man a zo aruet dre  
 ma eo ar pen kentfin deus an ugentved-kantved, ha Doue  
 an nefoa c'hoant da c'hrouzout piou a oa starc en e lizen  
 ha da gwerat e varadoz, dre an dud zantel o defo gouzanvet  
 evit e hano war an douar ; rak Doue a zo just hag a reio  
 da bep den herve e obero.

Ton an diskan a die bean kanet a bep gwech ma vi  
 kanet eur c'houplat all, evit ma fante ar ganaouen :

Komb an euz het hon gwasket Gwalen a oa,  
 D'an traou breman eo ed. Allaluz, Alletuz,  
 Deuz Komb ni zo dizammet. Allaluz, Alletuz, Alletuz  
 Alletuz

Ouz peh eskob ha belek Gwalen a oa,  
 Eo het en em zavet ; Gwalen a oa, Gwall-eur a oa,  
 Peh sori drouk d'ez neuze gret Gwalen a oa, Gwall-eur  
 a oa, Gwall-eur a oa, Gwall-eur a oa.

## O TELHOA EBARZ AR CHOAT

« Beg ar zouch ha beg ar vromn,  
 Gante o daou e vevomp : »

Dastumet, rozellat eo ar mailh a galjo er porz hag en  
 cho, endro d'ar ger, e lec'h ma zo kalz a dremenezez.  
 Eno an hanv du-hont, e vo groet eur wrac'hell dioute  
 gozen, an harnez a yel d'an od dawit marl da veskan  
 o mask. Diwar ar re-ze avad e savo ed-du kaer hag a  
 o plouz ha greun. Ar marl a ra vad d'an douar, lac'han  
 an trichon. An tiel (menajer) mad a die prenan marl  
 bla ma tapo e barko eun tamm eur wech an amzer.  
 Eskoet eo ar c'hleunio ha berniet ar gvesko war ar c'hri-  
 mo. Ac'hane e voint charreet da veskan gand an deilha  
 teil tomm d'ober eun eil temzi d'ar potaj. Krog eo an  
 egerien d'ober mare'had da gleuniat. Koantat ma ve  
 et ar c'hleunio aman en bro Dreger, glazen ha gwen-  
 et. War ar c'hleunio-ze e vo vadet lann pa deuz an  
 er vad. Eun darn a zo a bad kol mesk al lann hag a  
 neuze plant-kol ewid ar ger hag ewid ar mare'had.

Dastumet eo ar plouz ed-du diwar an douar lin. Tre-  
 net e voint dea ar c'hevier, pe-groet a zo eur c'hou-  
 naden gante er porz don, leun a dour have. Eno e  
 voint primoc'h. Diaoulet eo an douar-lin hag e-lec'h  
 oa ket tapet lakat plouz ed-du e zo charreet gomom-  
 er. Breman e vo aret tano war ar gomom-ze ha lec'h ma  
 plouz ed-du kenkouz-all. An douar a dap'o breinan ha  
 nvi. An douar-hei ive, diaoulet ha charreet gomom d'ean,  
 zo troet.

Arruout a ran en eun ti hag e veer manet en di-  
 e'h gand al labour ennan. Tud bihan a zo. Evel-se  
 an konte kalz a blaso, zionaz. An dud n'en em dommont  
 an ouz o bro hag a ya da fouctan hent, da rozellat ar-  
 ant a joun d'e ha da vevan dizoursi. Ha pan arruout  
 welet, e fritont mizer ha paourante goude labourat  
 rd hag ober bep sort micherio, vil ha brao. Mar kred-  
 ent distrei d'ar ger ! Ziouaz, koilher ar vez a derc'h ane  
 g ouz ar vro estren. Pelec'h 'hoan arru ? En eur menaj  
 ere'het al labour ennan.

Ar mestr a welan war an oaled eur c'hrenn en o zorn.  
 rouzan ar c'hrenn-ze eman, d'ober eun troad skubelen.  
 En eo rouzet, diblusket fia fasket, e taper eun tamm  
 ern deuz ar c'haz, eun penad korden-prenn da der-  
 en ar spern ha chetu eur skubelen neve, unan vau'had  
 ad. Rust eo avad. Na vo ket mad da skuban al leuz en  
 z an est, na leuren an li deuz ar heure, na da di-  
 nae'hi an arebeuri (meubl) ar zadorn d'abarde. Mad eo  
 ad da garza ar chiminal ha da dromen war vijaj an lini  
 z, n'eo ket bet gwalc'het tri-ugent vla 'zo ha ken kram-  
 net an duoni warnan evel war bout-houarn ma mamm  
 n, Doue d'he fardono !

Ar mestr a ro ar skubelen d'e vevel. Hen a gemer eur  
 c'h bevar-bizek hag eur rastel ha d'ar c'hoat !

Krog eo an evnigo da dikal, du gamah, da c'houtellat,  
 vuzikal war vego ar gwo, en lagad heol al luo ar  
 vuro. Na veint ket diwead o tidourtan ha kenkent o  
 gont da dibuni o c'hanaouen d'o C'hrouer (Kristen,  
 pes evellet) Joa a diskoont o vean deo.

Evnigo bihan, evnigo deun, koant ha karantezuz, joa  
 a d'in klevet anoc'h, dizammman a ret ma spered ha  
 c'halon ! Zeblantout a ret digemen an amzer vad, an  
 ve amzer. Diwallet ! Heman, gôt a ret, eo Mîz C'houe-  
 ha

« C'houevrik c'hoez-c'hoez

A lac'h ar voualc'hik war he noz. »

C'houevrik a halfe rei d'ac'h war ho fri, evnigo paour !

Hag ar gwir gristenien  
Gant an 'zo gwasket gwall-sten ;  
Jezus-Krist hag o lezon.

Ar gresif viniget  
D'an traou ganian zo tolet  
Deus lec'h ma oa enoret

Ar c'hongregationno,  
Gwall-gaset 'neus anezo,  
O c'haset er maes o bro.

Tolet er maes ar skolioù  
Kals deus ar vngaligou,  
Ha gwall-gaset o mestrou.

G'hoant 'nefos kas anezo  
D'ar skolioù dizoue,  
'Vit ma koljent ar gwir fo.

Feit ma vijent deuet  
Oll da wir framasoned,  
Sklavourien d'an drouk spereh.

Difennet koms brezonek  
'N ilizou ar Vretoned,  
Ma vije 'r gwir fe mouget.

Ar Vretoned, kalonek,  
'Deus dalc'het d'o brezonek Alleluia, alleluia,  
Gant kouraj ha kalon c'hoek. Alleluia.

Komans an ngent kantved Gwalen a oa.  
Ar gristenien oa gwasket; Gwall-eur a oa, gwa-  
[len a oa,

Kristenien mad int chomet. Alleluia.

Done zo dent da wentat Alleluia,  
Ar greun fall deus ar greun mad, Alleluia,  
[alleluia,

Hag an 'Ne gante kaerit. Alleluia.

Ar gristenien 'deus pedet, Alleluia.  
Done 'neus o zilzonet Alleluia, alleluia,  
Hag an eus o frealzet. Alleluia.

Done an eus diskocet Alleluia.  
E oll-c'hallondek bepred Alleluia, alleluia,  
Ha Komb d'an traou a zo ed. Alleluia.

D'an Drinded he da Vari Alleluia.  
Gloar enor ha melodi Alleluia, alleluia,  
En Nê hag en hon bed-ni. Alleluia.  
Alleluia, alleluia, alleluia!

JULUAN GODEST.

## EUL LIZER MAD

Otro Ker,

Arabad o din lezel an devez-man o tremen hep kas da  
Groaz ar Vretoned ma gwellan gourc'hemennou rag  
hinie eman an devez en-kenver pehini em oa he c'hemeret  
da gentan, seiz vloa a so aboue.

Yaonankik e oan c'hoas d'ar c'houl-se, pan-ego-gwir o  
son o tont deus ar skol ar zadorn d'abarde pa oa bet roet  
d'in gant eur belek, en eur lavaret d'in he c'hemer da  
leun bep-zal.

Sentet em oa ha nan ou ket bet manket morse d'ho  
c'hemer bep-zan.

Nag a gentelion mad ha fur da heuilh a ve roet warni,  
nag a vezion, a zontou-kaer a ve leuset warni, gret gant  
ar varzed ar muio gouiek!

Nag a ali fur a gavis eno an dud a garte he c'hemer  
bep-zan: ive, kouls youank evel koz. Aliou mad, alion  
kristen goest da dousat kalonno an dud ar muian kaleled  
hag ar re 'deus ar muian a gzeoni erit o bro Breiz. Nag  
a wez kaer a lunnar warni, gwezion hag a so bet kanet  
ive gwechall gant hon tado koz ha disket zoken gant ar re  
yaouank nemet ankouast gant an darnvrien anez, o veza,  
us dalc'hont ket, evel o zado, kasete Breiz en o c'halon.

Nag a zôn neve neuze, gret gant ar varzed hag ar  
skrivagnerien evit dizrei c'hoas-kalonno an dud varzu  
o bro ha lizat azeze da garout ho yer.

Nag a bennad-akrid dudius a gaver c'hoas enni da  
lenn, dreist-oll re ar Miguon! Antron-seññ a gaver war  
Groaz ar Vretoned, hag a deu bep zadorn da laouenast  
ma c'halon ha da ober d'in-ankouast ar possion am-ino  
bet en-pad ar zun. Hi a lake em-c'halon-freastidiger,  
hag a doug ac'hanon da garout ma bro-mui-ous-mui, da  
kriver he yer ha d'en lenn.


Kloer 'neus kals o larit : « Me 'nije prenet eur gaze-  
ten duman da lenn ive, panoverit e ve ro a dreo fall varno  
d'ar yugale da lenn. »

Tadon ha mammon kristen, ma 'pous disfazians deus  
ar gazeleñnou, kemeret Kroaz ar Vretoned ha na 'po  
ket diouti disfazians, rag ho pugale a gavo enni alioù ha  
skonerion mad ha kristen da lenn ha da heuilh. Laket e  
vezont d'ho karat ha da garet mui ous mui o bro hag o  
yez ha da vean kristenien vad. Setu aze an alioù am eus  
heuilhet betek breman ha koulskoude e oan bugel ive  
pa 'moa he c'hemeret da gentan. Gret ar memous tra evit  
ho pugale !


L. G.

## TON SON AR BUTUN

a oa bet moulet pemzek de zo.




Gwel-lan lou-zou d'an amblari ho




ar bu-tun war hon zamm pri La di-




rei tra - - la. Dou-e-hea ha-daz



a gre dan La di - rei la - di-rei Gou-



de pe-c'hed hon tad ken-tan La di-



rei tra - - la.

## Jezus en Templ en-kreiz an Doktored

WAR-NON : Ma c'halon a zo frailhet pe Ton Keien.

Pen oa Jezus daouzek vla, Jozeb hag e bried  
A yez da Jeruzalem 'vel ma oant kustumet,  
Evit berzan gant joa ar Pask hag ar gouelio  
Ha trugarekât Doua deus e vadobero.

Ar gouelio-ze a bade seiz devez pen-da-ben.  
Rag ar Pask a oa zantel evit ar Judevien :  
N'oant ket zelluz 'veldomp-ni en andret o C'hrouer,  
Ar beden n'oa ket neuze hanvet eur c'holl-amzer.

Gonde seiz de lidet kaer, zant Jozeb ha Mari  
Wardu kerik Nazaret a zontas distrei :  
Heb evesât ouz Jezus en em lakont en hent,  
Dre ma kredent mad e oa o tont gant o c'herent.

Pa denaz an abarde, pebez poan hag anken,  
Kelou ebet deuz Jezus, n'oa ket gwelet gant den ;  
Raktal da Jeruzalem, en despet d'o skwisder,  
E tistrojont a-neve 'vit klask o Mab penher.

— Merc'hed kez Jeruzalem, eme 'r Vam glac'haret,  
e Ha gwelet ho peuz Jezus, ma Mab muian karat ? —  
— « Penoz eo groet, emeze, ha pepoz hen anvout,  
« Mar beomp 'evraz awalc'h gant an digoneout ? —

— « Ma Mab, o merc'hed Sion, a zo ha gwen ha ruz,  
« Evel an heol o sevel e dal a zo skeduz,  
« E daoulagad daouzek-vla 'zo hirvidik ha flour,  
« Evel re en duzunel a chom war ribl an doug. »

« Ma Mab, o merc'hed Sion, zo koant evelan hanv,  
« Ma kavet eta Jezus, c'honi a laro d'ean :  
« Ech'on, defot e wélet, pell-ze o tizec'hi,  
« Ha n'euz main war an doug ken ne'het ha Mari. »

Gonde tri devez anken, na brasan levone !  
En templ zantel e karjont o Mab lenn a vue ;  
En kreiz kals a doktored azeit oa eno,  
O respont d'ho goulenno, hag o tiviz d'o dro.

Piou a gredfe, kristenien, ha krouskoude, siouas,  
Nag a dizurs a weler d'ar zul, d'ar gouelio bras ;  
Devez zantel ar beden a ya gant ar pec'hed,  
Arok an ebradao Jezus a ve kollet.

Dalc'het Jezus 'n ho kalon ha tolet evez mad,  
Jezus eo ar sklerijen, hent, ar vue da bad ;  
Mar kollet biken Jezus, distroet war ho kiz,  
Hen kât refet adarre e di, en iliz.

PERSON TRADUZ.

## MAMM HA PRIED

D'ou amzerioù g...

Triwac'h kwech 'neus gwelet ar pôtr ewar al lenn  
Ar blaivio o tieri ;

Triwac'h kwech 'neus klevet sonio ar melegann  
D'e barez o wiri.

Siouaz d'an den yaouank, biken mui na glevo

Evngou er gizez ;

Dirag e zaoulagad biken ken na zavo  
Bleunio el lunnec.

War eur gwele a boan astonet o gant spont,  
Gouflet e skevent ;

Etrezan hag ar marv d'an daou lamm eo o tont  
Bemde verra an hent.

Hevel ouz eur wezen — ar vravan er venje —

See'h he zrunchoù ha kleuz,  
Hag a goue d'an douar, daoust ma 'man he maro  
Dougen deilho ha freuz.

'Pad daou viz ar vamm baour ouz gwele ar c'hloer

Zo chomet en he zav,  
'Vit hon lemmel, mar gall, gant an anken traouez,  
'Man 'ust d'ean e bav.

En despet d'al louzoù ha nerz-kalon e vamm,

Trec'hi ac'h e anken ;

Gand e falc'h didrne 'neus troc'het al fiamm  
Dalche stroll e deion.

Ebarz eur be toulet 'tal kroaz goz ar vered,

E gorf 'meur o tisken ;

Dirag arched he mab ar vamm a zo stouet,

Liou ar marv 'n he c'herc'hien.

Zav alese, mamm baour, stanka war da c'hlac'har,

Evel ar mor divent ;

Rak nan out arri c'hoaz war mene da galvar

Nemet en hanter-hent.

War ar memez gwele 'varvaz ar mab enno,

An tad zo et d'e dro.

Hag ar memez kleunved zo a chare 'nean

'Treseg bro ar maro.

'Kichen ar be kentan eur be all zo kleuzet,

Ken yen ha ken islouk ;

Korf maro he fried ennan zo diskennet,

An intanvez difronk !!

Eur zamm a velkoni a zo evel berniet,

War dismantr he ino,

Ha mervel 'dije groet mar na vije ket bet

Harpet gand dorn Doue.

Bezot meulet, Jezus, a wel diwar ho Kroaz

Glac'har ho pugale,

Hag a'ro skoazel d'e 'vit derc'hel da vont c'hoaz

Dounoc'h gand hent an Ne.

Bemde an intanvez war an daou ve a stou.

D'an noz, pa zan ar c'hiaz,

Ha kas ra deus eno padenno ha klommon

D'an daou varv a garaz.

'Dreuz douar hag arched he c'harante o gwel,

'Vel ma oant er vue ;

Vad a ra d'ei sonjal ebarz an diduel

A danvaaz gante.

Ar greden frealzet o c'havo en nenvo

A neubeta die nac'h ;

Konfort ro d'ei da ena he floueden garo

Ha da dougen he foch.

Mamm ha pried bepret, deist ar marv 'neus skaret

He c'halon hag he zi,

'Vel Mari ouz ar groaz heb faitat eo chomet,

'Vit rei skouer ha pedi !

O Breiz-Izol, ennaut 'kavet ar gwir gwraze,

Mad war-avero ha freuz,

Dindan toenno soul hag a ro endro d'e

Eun tanva deus an Nenv !!

Gab LASKEDV.



# Kroaz ar Vretoned

## EOUMANANCHOU

Eur skoad ar bla evit Breiz ha Bro C'hall.  
2 skoad, evit ar broio estren evit ar broio keltiek.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Oizo VALLEE, Rener, vu Zant-Bened, Zant-Briek.  
Pe d'an Oizo MOAL, Skrivaniere, 27, tañt Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweznak pap rondouad-ekrite.  
(Diskenn a briz evit meur a embann d'evit.)

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furvez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez alio a Vreiz.  
Furvez ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho prezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo : ma ve trec'hel,  
Ouspenn ar Vez, e vo Pec'helt  
MILIN.

## ALUZENNOU DIGANT HOM LENNERIEN

An Aot. Even..... 4 real.  
An Aot. Josse, Naoned..... 8 real.

## TI SANT ERWAN

Ti sant Erwan eo hano eur strollad kristen a dud yaouank, bet savet neve-vo e Pariz gant eur balek breton, an abad Camenen. Eur sort ti-helc'hia eo an ti neve, da laret eo e vo evel kolc'hiet eno Bretoned yaouank kristen eus Paris, en-dro d'ar Vro, d'ar yez brezonek, d'hon c'ha-naouennou ha d'hon peziou-c'hoari. Eno e vo d'an oll

Eur yez, eur feiz, eur galon,

ec'h ober dre an unvaniez (unvaniez a ra nerz) eun nerz tus ar vrasa hag a dalvo da wellaat ha da adsevel tam-la-tam stad hon c'henvreiz divroet hag a ve ken treuz e Patiz. Kalz a labour, hag a labour vad o deuz graet a-ber vremen. Int-i o deuz savet ha c'hoariet e Pariz ar c'henta pezh brezonek bet klevet e Pariz biskoaz. Ouspenn peziou, kanaouennou ha prezegennoù brezonek a ve graet eno pep zun, oll Vretoned a zivar-dro o tont a ganchoù d'o selaou. Ha n'eo ket honnez eur vad a zkouer da neuilh en hon Bro-Treger ive?

## O WRAC'HELLI

« Laerez e amzer, e voad,  
Eo brasen pec'hed a zo er bed. »

— Allo, demp are. Bec'h d'ei da domman d'am izili. Arzu int skornet keit ha ma oan oc'h ober eur c'hornedad ; koulskoude e oa ma forpen war ma chouk. — Ya, med e vancho a oa en pign diouac'h. Eyal eur « Frer (breuc) a beder brec'h » e oac'h hag ec'h ee an ezen da furchal hoc'h izili dre dindan doubl ho porpen ha dre dindan ho tiougazel. Me a wisk ma hini dalc'hmad pa baouezan, hag evel-se e lamp an ezen diwarnon hag e ye tomm d'in, evel d'eur c'ho dindan he c'hroc'hen. — Trouzal a ra an deilho dindan skubelen ar pot. (Hon c'horfo maro a drouzo ive dindan dent ar preuvad). Arzu eo uzet ar bego er spenn, na van ken nemet an truoso. Eur zunvejad skuban o deuz groet, tost awalc'h. Ar rastell n'eo ket uzet ha dent houarn. Honnez avad a griffe e benn da « Belletan » hag e varvichen ive. Ar forc'h dirr kennebeud n'eo ket uzet he bizied, na togned. Mar beint skoad en kov an diaoul-kamm, e hallfe kamman ha gweau e c'heno ha dansal war an tu gin. Aehu a zo da deilha, just da dol mern. Eman ar c'horna e zon, d'ar c'houlz. N'eo ket foulet ar plac'h-tiegez.

— Breman goude mern, eme ar mestr, e stagfomp ar Vailh war an dumporell hag e sinifomp ar gwrac'hello. Uhan a ve groet a hep tu da doull ar porz. Mont a ra o binvio gante ha d'ar ger. Yod kerc'h ha jistr! N'eo ket eur meuz fall. C'hoarzin a ra ar botred outan pa veint tanaillet aboe an de diarog endeven. « Reg, rog, eme al listrier o tiskan. Aman n'eo ket risklet an dud vraz da skei o fenn en kased al loaio. Ar pot yaouank a ronk zevel war vego e dreid evit tapout dorn ar c'hased. Arzu eo fall, hanter-difonz, al loaio a zo en pign diwar boez o dioukouarn, harp a-bed d'an treid, ar pot a ra eun tel jech, feulz, hag al loaio en-traon. Fachan a ra ha d'ar valez : « Pera eo d'ac'h zevel al listrier ken uhel-ze ive. Na garfe den tapout e lda aman. Dastomet ane breman ive mar koret. Pari, me 'mo eul loa veuz hag he lako ouz eul fercu direk stalav ar prenestr. »

Na fach ket evelkent onz an Otro Doue. Zin ar groaz a laka en e gerc'hen ha warlerc'h e lar : « Ma Doue binniget ar boed-man... » Mad eo ar yod, kavzet eo ar gotier. Ar plac'h-tiegez a dap he c'honiel ha d'ar c'hign. Ar pot a zo gant-se lia, hep ma ve distaget ar c'hign melen, e lip anean prim-ha-prim. — Allo, plac'h-tiegez, amann pe avalo ! — Arru eo an avalo war an dol. An amann a zo kalet. Na garfe den lardan ar bara gantan, kaer a ve metat anean aliez ha tomm anean gand an helan pe onz an tan arok lardan. Ar pot a c'hoarz ouz ar pladad avalo, ardenk, poac'hiet en dour keit ha ma oa ar yod war an tan ha yenot war ar prenestr.

Tapout a ra an dorz vara hag e gontel « Lalez », eur groaz a ra war an dorz. « An hini a ra ar groaz war ar bara, emean n'ey ket d'an env. » Troc'han a ra eur pezh boulec'h ewitan. Hen eo yaouank ha mad e zent. Koach a ra anean ewit na vo ket skubet keit ha ma vo o troc'han bara. Nebon, ober a reer zello c'hoantastik d'ar boulec'h-ze ! Troc'han a ra pejo tammo, tro an dorz, evel ma ve troc'hiet da vont d'an ed. Stad, n'eo ket c'houi a lar, a zo er pot o vean « troc'h-bara ». Ze a lar d'ean eman o vont da charreter. Paket eo mern. Kaer a zo ar laret, « Eun tamm hag eul lomm a derc'h an den en e blomm ». Marniet, boelât ba dourât eo ar c'hezek. Kaset a zo gwelion mad, bleud he ha palatez poaz ebarz, d'an ebeulez vla. (Honnez e vo groet poupeik d'ei. Lard eo ive avad evel an toaz.) Rost a zo amzer d'ar c'hezek da vernian. Tapet eo ar greaj limon war ar Vailh. — Allo, eme ar mestr, stag ar gazek ma'e effomp arre. — Eet eo el limon gand ar pot en e-unan. Arru ar c'harr er porz, diou forc'h hag eur rastell ebarz. Ha d'an deilho, ar pot o c'harreat. C'hoest eo, pa laran. C'hoaz e vo muioc'h pa vo fiet eun harnez ennan da vont dawit gomom da Gamarl. Neuze avad e vo tapet ar troad kordet d'ar skourje, eun troad a bevar real. Digas a ra ar c'harr endro ha deilho ebarz herdan ma hall. Hen a zo en penn arog evel just hag ar mestr en penn a-dren a dremen ar rastell pa ve pimboellet eur bern ebarz an dumporell.

'Chan da lezel ma c'huden aze ewit herie. Dilan e kavin anei da beurdibun. Ken disul, eta, ma zud vad !

EUR MIGNON.

## ARABAD LAVARET GAOU

WAN DON : Eur plac'h a zavaz deure-mad, deuz Soniou Marc'harit Fulup.

Lan ar merour zo eur pot fin,  
A c'hoariat dec'h da vintin

DISKAN.

Tra la la la ra ra ra lamp,  
Tra la la la ra ra la.

A c'hoariat eun talik brao  
D'e otrou koz Lipperebao.

De ar marc'had eo a oa dec'h :  
Hogen war Lan o save bec'h.

Red oa d'ezan mont da baea  
E c'hoel-Mikel evit ar bloa.

— « Otrou, 'mezan, deut on d'ho kwel,  
Da zigas d'ec'h ma goel-Mikell ! »

— « Mad eo t'eme an Otrou koz,  
Labourer mad bemde, bennoz ! »

An neb na jomm da goll amzer  
Da c'hoel-Mikel morse ve berr.

P'eo gwir oc'h euz labourer mad,  
Deut da gemer eun dra bennag ! » —

Hag ar merour hag an Otrou,  
O vont d'ar zal dusta o daou,

Greg an Otrou 'deuz ive,  
Lan a zebre, Lan a ere.

Lan a zailho war ar c'hik rost :  
Drouk en Itron beteg 'n he lost !

Lan a lamme da eta gwinn :  
An Itron goz a reaz sin ;

A reaz sin da gas er mez,  
Ar buana, ar merour kez.

Drouk en Otrou, me lavar d'ec'h ;  
Drouk en Itron, ha kalz muioc'h.

Lan ar merour na reaz van :  
Bec'h d'ar c'hik rost, founuz, buant

Lipperebao a lavaraz,  
Hep kuzet tamm e gonnar vraz :

— « Assa, merour ! poent dibanz,  
Va c'hik danvad a vihanz ;

E gwirione, va c'hik zo mad ;  
Mez kleuvel 'rer gant re gofad !

C'hoarvez a ra gant kalz a dud,  
A zebri outan... hag a jomm mad ! »

— « Otrou, Itron, ha gwir e ve  
Gret seurt burzud gant ar c'hik-ze ? »

— « Penn-da-benn zur, 'me an Itron,  
Kement-ze fioll a zo gwirion. »

— « Trugare d'ec'h, kant trugare t  
Ma flac'h Katell a vo pare :

Ne ra nemed fleppat dalc'hmad :  
Pare e vo gant rost danvad.

Katellik mad ne c'hello mai  
Fleppat kement gant tud va zi ! »

Lan ar merour an deuz tennet  
E vouchouer bez marellet ;

E vouchouer, evit lakat  
Ar restad kik, ar rost danvad !

— « Kenaro d'ec'h, Otrou, Itron,  
Laouen, laouen eo va c'halont ! »

O vont er mez e lavare :  
« Pion zo paket, pe c'houi pe me ? »

Choumet er zal aze ho taou,  
Paket oc'h bet o laret gaou ! »

SPENN-GWEN

## TRUGARE D'HON MIGNON CORFEC

Eur skouer eus ar gwella evit ar botred yaouank.

Graet an euz hon mignon mad, an Aot. Corfec, rener an *Indépendance*, prezegennoù e brezonek e Lannou diwar-benn ar Fransasoned ha bet eo digemeret ha sel-laouet eus ar gwella gant an oll. Kement a blijader hag a frouez ive m'arvad, a zo bet o selaou an Aot. Corfec ken emeur e sell da zevel dre-oll prezegennoù brezonek sort gant ar re an euz gant hon mignon, da skeitjeun ar sperjoù diwar-benn stad ar Vro, a zo gwall-fall, 'vel ouzoc'h. Eville o vije red kaout tud yaouank a volanta vad ha barreik ive d'al labour. Parag, eta, er strolladou potred yaouank a zo kement ane breman en Breiz, e Gwengamp, e Lannou, e Landreger, e Boulvriak, hag oll o c'houzout mad ar brezonek eus, perag, eta, na ve ket prioret er strolladou-ze ar brezegeien vrezonek a zo bement a ezom ane. Gwelit ho peuz war-ze skouer-vad Ti Sant Erwan. Euz a Pariz eo e leu ar skouer-vad ar wech-man.

# AR BEDEN DIWEAN...

An de-se ar person na zavaz ket d'e eur pemdiek. E vadez, nec'het, a bignaz d'e gambur hag hen galvaz... Moudet abed na respontaz d'he galvaden. Ar spont en he c'halon hi a zigoraz an nor... O ma Jezuz! An outro person astennet war e wela ha ken gwen hag eul lian a zeblande maro! Ober reaz 'velkent eur finvadennik bennag ha gand eur vouez klemmuz e laraz : O ma Doue! ma Doue... Eur pennad e chomaz c'hoaz en poan ha goude e tremenez. Eun taol gwad an evoa hen diskaret en-kreiz e nerz...

Kerkent hag ar c'helo e holl harrouzianiz a ziredaz d'ar presbitor, glac'haret o c'halon. Nan hallent ket kredi e oa maro o ferson... hen ken mad, ken karanteuz evit pep hini!

A boan e oa arru en penn o farrouz, a boan e anvecent e vadelez, e furnez, o oa lemmet digante, e oa maro!... An dra-ze, o Doue! na oa ket gwit!

Eo, sionaz! ha gwit mad. E gorf zo war ar marc'h-kanv ha hepdale e vo douaret... — Koulskoude, hen a'n em blije en e barrouz nave! Dre e vadelez o oa dent — en daou vlea hepken — a-benn da c'honid karante hag anaoudegez vad e harrouzianiz. Holl e karent anean, holl e vijent evuraz o silaou hep zul, deuz ar gador a Wironne, e alioù kristen ha fur... Bemde e tremene e amzer en o zoner o zikour : aman eur paour dre e yalc'h bepred digor, aze eun den nec'het pe poaniet dre gomzou mad e galon aour ; du-hont e lake ar peuc'h, du-man e hade levenez ha d'an holl, bras, bihan, koz, yaouank, eroe hep damant hag e boan hag e amzer. Evel-se an holl hen kare ha breman an holl d'ean a ouele...

Da ze an interament o daerou a greskaz, dreist-holl pa glevehont penoz ar beleg a garent kement na vije ket douaret en o hered-parrouz, en-harz an iliz koant an evoa kempennet a neve... rag, ma hen karant, e dud ive hen kare ha c'hoant ar re-man e oa gwelet anean o tiskwiza euz troad iliz e vadeziant hag en he e dadou koz!

D'e iliz-parrouz e ftee eta mont. Gonde an ofern interament, da c'hortoz mond d'e vro, e gorf a chomaz en iliz, hag eno e pelet e harrouzianiz da zond a bep eil rumm ha bedi evid e ine... Eno e teuent holl gant fe da laret o fedennou dirag korf paour o ferson maro...

Nag e oa kaer o gweled, nag eo truezuz klevet o mouezioù mouget gand an daerou hag ar boan-galon! Dre ma kement, hekleo o fedennou da gentan krenv ha kanvuz a zistone ebarz an iliz vihan ; ha, goude bean he c'harget evel eur vouboune a c'hlaohar, e teue da vervel ken truezuz en he fevar c'horn ma zeblande d'an den klevet ar zent koz o ouela war o jijennoù...

Tro-ha-tro ar gristenien an em eile en-dro da gorf o ferson. Dre ma teuent, war o dremmion vije an hevelep tristidigez, en o daoulagad an hevelep daerou kri hag en o c'halonon an hevelep glac'haz... rag holl e felle d'e renta d'o ferson koz gand o diwean kenavo nerz o fedan diwean...

Arru eo ar c'harr a die hen kas d'e vro. Goude ar zav-korf pevar pôtr a grog en arched... Pa dreman dindan an nor-dal, ar c'hloc'hik bihan, a ganaz ken drant an de m'arruz er barrouz evel person, a'n em lak da zon ar c'hilaz gand eur vouez klemmuz hag ankeniuz war eun dro. Ouz e glevet an dud a zistank da ouela gwasoc'h evit liskoz... Sed-han breman 'barz ar c'harr. Goude an *De Profundis* e tec'h diouz ar bouk dindan kimad truezuz ar c'hilaz o lenva. Dre ma pella, eun toullad evned bihan, kuzet en eur ween ivin ac'h a'n eur hirvoudi war e lerc'h, 'vel evit kas ive d'ar beleg, gant peden pehini e unanet bep betre o c'halon, o c'flemmou diwean...

An holl, pôted ha merc'hed, mantret gand ar glac'haz e zo chomet en o zav war an hent, daerou puilh en o daoulagad. Pa 'z eo an displeg ar c'hroaz-hent, kollet gante ar vel-euz korf o ferson karat, e laront 'n eur huandi : Hennez oa eur pastor mad!

AR YEDET.

## KANNADIK SANT-SEGAL

Hennez eo hano eur gazetenn nevez brezonek. Savet eo bet gant an O. abad Corro, kure Sant-Segal, e kopli Leon evit e barouz. Meur a « Kannad » pe a gazetenn-baroaz a zo bet savet c'hoaz en Breiz-Izel, darn ane zoken hanter-vrezonek, 'vel gazetenn-baroaz ar Roc'h, bet savet gant hon mignon mad, an abad Bescond. Ar sort paperennou-ze, savad, a oa moulet... ha skrivet ive, evit an darnvuia, gant diavezidi, na ouient ket a vrezonek ; ha gant-se,

daoust d'an oll boan a gemere o renerien, na zereent fam ouz ar vro. « Kannad » nevez Sant-Segal, er c'hontrol, a ve skrivet e brezonek pen-da-hen ha moulet e Sant-Segal gant kure mad ar barouz ha gant-se gwelloc'h ha de-reatoc'h evitan n'ouflet ket da gavout. Penoz 'ta e ve gaoz ze? Rag eur wash-voula e zo koustus hag, en tu-hont da ze, lizeonna eur pennad-skrid e skritur-moul a zo eun diez a vicher hag a dleer tremen meur a vloavez d'he diski. — Setu aman : Bean e weler breman e ti kouversourien-a-ze, e Pariz dreist-oll, mekanikou da skiva hag ec'h hall nep piou bennag a oar lenn, skriva gante e skritur-moull. Ouspenn-ze, meur a feilha e heller, da skriva war eun dro gant ar sort mekanikou. « Perag, a sonjas an otro abad Corro, ar skrivozead-ze, hag a zo ken talvoudus da varc'hadourien Breiz da c'honid ar c'hant, na vijent ket kenkouz d'im-p-ol, beleien Breiz da c'honid eneoù? » — Hag hen ha, pema eur skrivozead ha sevel gant eur « c'hannad » evit e barrouz Sant-Segal. Gwelot am euz « Kannadik Sant-Segal » moulet euz ar bravan-ha skoudeennet, zo kaeroc'h. Hiviziken e vo kaset aman pep sun, en eskem da *Grouz ar Vretoned*, d'im-p-ol da c'ballout o ziskouez da veleien a deuij d'ho bureo, eur skouer eo honnez hag a dlefe beleien Treger da hec'h ive. Bistagot e vo ive diouz ar « c'hannad » eun liiz bennag da rei eun tanva anean.

## An Tiad zantel o vont d'an Ejipt

WAR DON : In Coelis est letitia pe eun all

DISKAN

Gloar, Nouel d'ar Mabih Jezuz,  
Douget pell d'an Ejipt da guz!  
Da Jezuz ha d'e Vam zantel,  
D'ant Jozeb, Nouel, Nouel!

En-juste an noz, en eun hunvre  
Jozeb, an Doue :  
« Zav, e gorf eo techet,  
« Rag he gorf eo konnaret. »

« Klask he gorf he Mab Jezuz,  
« Poant eo he gorf en kuz ;  
« Komar he mep, he mer Mari,  
« Ha d'an Ejipt tec'h he ho tri. »

Jozeb a zo war-zav raktal,  
Evit mont kwit heredan ma c'hall ;  
Mad gant spont war he askre  
A stand kant gwech he Mab Doue.

An de na oa ket c'hoaz tarzet  
Pa gimniadent diouz Nazaret,  
En eur bedi ar Pandouez  
Dindan e askel dont d'o c'hilaz.

Hir eo an hent, tenu eo ive :  
Dre ar goulec'h eo ret hale ;  
Emaint dindan an heol, tom-tre,  
Ha n'euz nemet trez diraze.

Neuz na faulenn, na veoten c'hilaz ;  
A dost, a hell, trez ha trez c'hoaz!  
Ha koulskoude tra ar goulec'h  
Mari, Jozeb a gerz dimec'h.

Rag pa zentont euz urz an No,  
I-o devo digant Doue  
Dour ha diskeol en-kreiz an trez,  
Ha Jezuz e dakennit lez.

O beah ken tenn, ken dfez,  
A badaz daou-ugent devez,  
Hag en Ejipt pell diouz o bro,  
O bue c'hoaz a oe c'hoero.

Diskomp gant Jozeb ha Mari  
Bean bepred prest da zantel ;  
Tec'homp gant Jezuz ha bep dou  
Diouz an dud fall ha diouz Zelan.

PERSON TREDREZ.

## EUR JENERAL DIVREZONEK

Pellouz eo hano ar c'hoz jeneral-ze. Mad e vije da veun lakel hanter-ha-kanvur gant Komb a zifen ouz ar veleien komz brezonek. Heman, ar Pellouz milliget-ze zo o paouez difeun ouz ar zoudarded paour komz brezonek. Gwa, omean, d'an hini a deuij gantan an distera gir en yez ar ger ; laket e vo d'ober an aour (pe ar corvée) o keit ma vo ar re-all o vale.

— « Pegouls, eme an Aot. Barthon war ar *Resistance*, pegouls, eta, e vo laset ar Vretoned d'ober o servich o

Breiz-Izel ha roet d'eze ofiserien euz ar vro, oc'h anaout hag o kaset ar brezonek, o lac'h bremen o vont kaset du-man ha du-hont hag ar re ane zoken a chom ar vro a ve gwasket gant diavezidi evel Pellouz? (E Kempar eo an euz savet Pellouz o lezen nevez enep d'ar brezonek). »

## 1. n eur Mignon, pe : Me a vo barz!

Ar c'hilavour paour a lavare,  
Pa oan azet, en devez-se,  
En e gichen :  
« Mignonik koz, meulomp Doue ;  
Setu euz eo ma bue,  
Ma flandent!

'Pad ma huc ha penn-da-henn,  
Am euz bet trubuilhou, anken,  
Poanion garo!  
Breman arabad e skrifen :  
Mignon, gortoz a ran laouer  
Tol ar maro!

Deuz ma foanion tra na jommo,  
Tremen a rint, pa vin maro,  
Arôg an noz!  
Endro d'am be c'hoit a ouelo ;  
Neuze, en Nenv, me a gano,  
Bemde, hemnoz!

Er josted, ha de ha noz,  
Me a gano gant holl zent koz,  
A Vreiz-Izel!  
Hag epad ma vin o repoz,  
War ma bro deuz ar baradoz  
E rin eur zell!

Kenz am euz hepken, o vervel,  
Da gwilat broc'h ma c'havol,  
Da gwilat Breiz...  
C'hoant am oa arôg ditezet,  
Ma broc'h, da c'houren pell-pell  
Evid he Feiz!

Barz vijen bet, kalon em c'hreiz  
Neuz eo euz an dud difeiz ;  
Mignon kare,  
Pa vin maro, a zeou, a gleiz,  
Tol war ma c'horf heunon aleiz,  
Leun ma arched.

Mignon, tol heunon alaouret,  
Brug ar mene, sperr-gwen bleantet,  
Gant o c'houez-vad!  
'Hed ma bue 'mije kaout...  
Em lec'h, difenn hon bro garet,  
Ma mignon mad! » —

— Pa 'z out maro, mignon ken mad,  
D'am c'halon pebez kalonad,  
Da virviken!...  
« Gant sonj ouzil, 'vit e vroad,  
Ha 'vit Doue 'kano dalc'hmad,  
Ar Barz.

SPERR-GWEN.

## Leoniz o telc'hel da vont war-rôg!

Bar pez-c'hoari nevez.

Dre-all o Bro-Leon e ve savet stroladennoù potted yaouank da c'hoari ha da gana e brezonek. Emañ unan euz beleien gwiziek ar vro, mignon da *Grouz ar Vretoned*, o paouez skriva evit ar stroladou-ze eur pez-c'hoari nevez, o hano *Dre ar bugel*. Euz ar brava eo ar pez nevez hag eaz bras da c'hoari. Ouspenn-ze skonerius ha kristen eo euz ar c'henta. Kavet e ve da brene e ti Kaigre, Brest. Koment hini a hle aman gant ar botred yaouank a dlefe goulen ar pezz-e a rafu kement a bijadur o Treger hag e Leon. Eun droidigez c'hallek a gaver kenver-ha-kenver gant ar brezonek. Rimet eo ive. Daoust d'an droidigez-ze da vean skrivet mad; ar brezonek avad, a chom pell en tu-all d'ezel hag, en eur lenn anezan, e weler skor pegon freaz, krenv ha poblur ec'h e hon yez koz, ar brezonek, e-skouz d'ar gallek.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuron

GOULEN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc — Imprimerie Saint-Guilhaume.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

For skoet ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar broio estren evit ar Broio kelteek.

## SKRIVANIGRIEN

Kas al labourioù pe d'an otro VALLEE, lezer, va Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an otro MOAL, skrivaniere, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBAHOÙ-KONVERZ

Tri gweinek pep ardeunad-ehierez.  
(Diskont a breiz evit meur e embad dion-to).

Ar brezonek hag ar felz,  
A zo breiz ha c'hloar en Breiz.  
Fennes ar Gals.  
Gant brezonek eo d'ar felz,  
Gant ar gallek ez alio a Vreiz.  
Fennes ar Gals.

Dalc'hil bepred d'ho prezonek,  
Yez an dud vad ha kalonak.  
Yez ar felz eo ; ma va tres'hel,  
Ouspenn ar Var, o ve Pec'hel!  
Mitne.

## DIWAR-BENN KALVAR GWENGAMP

Kredonno ha kriou mad an den a  
zo 'vel ar goden. A wech loskad gant  
an diaoul eur penn anez, ar penn  
dihig a chom en hec'h dorn, hag a yel  
da beuilh ive.

Ar vrud a zo et dre ar Vro gant ar c'hazellenno penoz  
ar zun-all eo het an diaoul en-dro d'eur groaz a zo en  
Montbareil 'kichen ti ar freerien. Bremañ eo brao d'an  
diaoul bale ha d'e gonsorted ; brao eo d'e skei war ar  
groaz p'eo gwir ar gouarnamant an euz skoet an taol  
kentan ; brao eo d'ar falgant diskiant, drouk evel chas  
klany ha zod evel pennou-jo, mont d'ober o louz war ar  
c'hrusiou, p'eo gwir an dud o deuz bet deskadurez hag  
a ron bep seurt kargou uhel, a lavar foeli d'ar relijion ha  
da Zoue.

En eur gir kreñn, hirio eo brao bontan war róg gant  
ar fall, gant ar vad na laran ket.

Kroaz Montbareil, en Gwengamp, eun druc hag eur  
spont e oa he gwelet, ar C'hris, Kroner ha Zalver ar bed,  
lahoat e zremm gant. . . heuz an euz an nen o lavaret  
gant petra. A ! ma galljent stlapa o fank betek an Ne ; ma  
galljent zavel, evel ma sav ar vel'honeden vabouzek betek  
ar rozen, da gád trón Doue ; mez o brech'n na dap ket  
uheloc'h evit ar C'hris war e groaz ven ; skignal a reont  
o dent, dro n'hallont ober dismegans nemet ouz e skrud.

Beañ zo breman, mui eget biskoaz, tud war an douar  
hag a zo barrek da hadober labour ar Judevien, ma teufe  
Jezus-Krist en e furn den, da gouean dindan o daonarn.  
Beañ zo ive, an dra-ze haller kredi hardi, maioch c'hoaz  
a re-all barrek da dere'hel plas Pons-Pilad, traitour dre  
non.

Me gontfe d'ac'h awale'h eun diviz am euz klevet, gant  
ma dioukouarn ma-unan, etre eun otro hag eun itron,  
an devez war-lerc'h ma c'hoarvezaz ar gwall-daol en  
Gwengamp.

An otro, eur potr yaouank torrek, a bevar pe bemp  
bla warn-ugent, na oa ket 'vit gouzanv, emean, vije gret  
dismegans d'ar groaz, mez, war e veno, ar gatoiked a oa  
penn-kaoz e c'hoarveze darvoudou seurt gant hini Gwengamp.

« Chilaonet, itron, emean, ma n'e ket gwir ze ! Pe-  
rag e laker war an henchou, an tachennou, ken liez a  
groaz evel ma rer ? Tefial an dud eo ober seurt treo-ze !  
Ma tremen eun divade bennag, petra rer nemet stepel  
mein, pe dreo-all gant ar groaz ? Tennet ar c'hroaziou  
deuz an henchou, ar leuriou, an tachennou, ha na c'hoar-  
vezo drouk ebed gante. Me 'zo souezet ganac'h o klevet  
nag a glemmon a loskaet war-lerc'h ar ganfarded dizoue,  
rag c'houi zo kaoz d'an drouk. » —

An itron, eur gristeniz hag eur Vretonez vad, a zigore  
braz he daoulagad o klevet seurt temziou. Lavaret a reaz  
d'an otro torrek :

— « Divadin ive e lavaret treo evel-se ? »

— « Na zislarin ket, emean, rag ar wirione 'meuz.  
Fentuz eo gwelet, en terouerou zo, 'vel du-ze en koste  
Pempoul, nag a galvariou war an henchou ; bep kant  
kammed e kaver unan, ha c'hoaz n'eo ket awale'h ar  
groaz ; bean 've warni, ouспен, eur c'hok, eur goaf, ta-  
chou, eur gurunen, ha me ar pesort astrakou. Re bell  
hoc'h et gant ho tevosiou ; breman ho krouzo vo diska-  
ret holl, ha gwaz evidoc'h. Petra ! lezet an otro Doue en e  
iliz ; eno 'man e blas, ha nan war an henchou. »

— « Awale'h, otro, emean an itron, lezet ac'honan ive  
da lavaret eur pöz bennag. Mad e kavjech eta ma vije an  
otro Doue en e iliz, kwit da vean hano ebed anean ermeaz  
an iliz ? »

— « Zur avad ! »

— « Mat me n'on tam ebed en ide ganac'h. Me lavar  
diskar an ilizou ha kas an Otro Doue d'ar baradoz, kwit  
da vean hano ebed anean ken war an douar. »

An otro, d'e dro, a zigoraz braz e zaoulagad.

— « Na vet ket ken souezet-ze, emean an itron, ha res-  
pontet d'in eur gir, mar plij. Peotramant eo Doue Doue,  
peotramant nag eo ket. Gwir eo ar peiz a laran ? »

— « 'Vel just avad. Red eo d'ean bean an oil pe agile. »

— « Ma eo Doue Doue, eo eta koulz mestr ermeaz an iliz  
evel ebarz an iliz. An douar a-bez a zo d'ean, meaziou ha  
kearion, henchou braz ha henchou treuz, ha dre holl,  
'lec'h ma kar, e hall plantañ pe ober plantañ e groaz.

Ma n'eo ket avad mestr ermeaz an iliz, Doue n'eo ket  
eur gwir Doue ; ha perag neuze serviji hag adori en iliz  
an hini 'neuz ket a c'halloud ermeaz. Well eo diskar an  
ilizou, rag hon c'hreden n'eo nemet eur falz-kreden hag  
hon devosiou eur falz devosiou. Gwir eo, otro ? »

Diez e oa d'an otro touman e spilhenn ; tapet e oa d'ean  
ar raz en Pariz, 'vel ma ve laret ; koulskoude n'houle ket  
plegan.

An itron a zelle outan ha dre na lare grik :

— « Arsa, emean, otro, me ya da ziskoue d'ac'h sklêr  
evel an de eo red miret ar c'hroaziou war an henchou ha  
dre-holl, n'euz forz pegement a ve ane. na pa ve zoken  
tachou, goafou, kurunennou warno holl, peotramant  
loskad ar relijion pen-da-benn, laket an ilizou a blad,  
harz ober ken helcien ha kristenien, ha mongau kement  
hini a zo o vevan an eur-man. »

— « Hum ! hum ! emean an otro ; gwell hier ec'h et  
gant ! 'Vidon-me na 'meuz biakoz soujet ober drouk  
ebed da zen, na helc, na saurez, nemet e kavan. . . »

— « Ya, gout a ran, kaout a ra d'ac'h n'eo ket mad  
ar groaz ermeaz an iliz. War ze ho peuz kalz a c'haou ;  
rag ma souezet eur gammad hepken, hoc'h kollet. Goro-  
zet, ma tiskouein d'ac'h !

Na blij ket d'ac'h e ve laket benviou ar Basion war ar  
c'hroaziou. Ar c'hris tenet boulboaz a lavaro : 'Vit afer ze,  
avad, p'eo gwir e chom bepred ar groaz 'n he zav. Ten-  
nomp ane, kement ha kaout pench. — Setu tennet ar  
gurunen, ar c'hok, ar goaf hag all. . . »

Eur pennad goude, e vo laret d'ar c'hris klonar :  
N'eo red ebed kaout ar C'hris war ar groaz. Tennet ar  
C'hris ! — Setu tennet ar C'hris, betek ma chomo ar  
groaz en he zav.

Eiz de goude, e tener da gaout ar c'hris anek : Ta !  
ta ! n'euz ezom ebed a groaziou war an henchou ; kalz a  
zo hag a zisplij ze d'e ; laket ane en iliz. — An den-man,  
evit kaout pench a lavaro evlhen : gwir eo, betek ma vo  
ar groaz en iliz ; ar zul bepred e welin ane. — Setu dis-  
karet ar c'hroaziou dre-holl. Ar c'hris tenet boulboaz a zo  
laouen ; Breman bepred, emean, e vo pench gant an  
diaoulou-ze.

Eun toullad mizion goude n'eo diskaret ar c'hroaziou  
war an henchou hag an tachennou, an enebour a den  
adarre da gád ar paour kez :

— Arsa, emean, c'houi ya bep sul d'an oferen ; libr  
hoc'h da vont ; mez ar re n'eont ket a zisplij d'e klevet  
ar c'hleier o c'hervel ac'hanoch ; kement-ze a ra drouk  
d'o diouksouarn ; ar c'hleier a vo red e'z tavel.

— Ma eo red gwerzan ar c'hleier evit miret an oferen,  
eme ar c'hris divalo ; an oferen a dalv maioch evit ar  
c'hleier. — Gwerzet eo ar c'hleier ; breman, marfad, e vo  
pench.

Ya da ! Da beun pemzek de, o klev ar paour kez  
kristen lavaret eo re uhel tour e iliz ; an dra-ze a voug an  
tier-all ; gwelet a ve deuz a bell ha darn an eye drouk-  
kalon gant ze ; hogen, na dleo ket hiziviken bean uhe-  
loc'h an tour nag an iliz evit chiminaliou an tier-tro-war-  
dro.

— Mad eo, emean ar c'hris skotet ; well eo miret an  
oferen evit miret an tour. — Diskaret an tour hag izelaet  
an iliz. — Pench a vo ? Nan ! — Klev 'ta, kristen, emean  
an enebour divergant ; marfad n'eo ket red d'id kaout eun  
ti gspial da glevet da oferen ha da laret da laret. An  
ti-ze, nan eo breman henvel ouz ar re-all, a vije mad sur

da lojan tud ha tres, kentoc'h vit chom aze goulou ha  
dididivoudek. Lar da oferen er gér.

— Gwell eo an oferen eget an iliz, emean ar paourik ;  
plegomp eta da c'hout ma n'hon devo ket a heuc'h eun  
dro beunag.

Eun toullad zavezioù warlerc'h, e teu adarre ar  
enebour d'e di.

— Kristen, ar peiz a dalc'hez d'ober aze, laret da bator,  
klevet an oferen, a zo et ermeaz ar gir ; ze oa mad gwe-  
choll pa oa kroaziou dre-holl, ilizou haer, warno tourioù  
uhel leun a gleier ; mez breman ze na gont ken, et ar  
c'hroaziou e-traou hag an ilizou dizakret ; lez da oferen  
ha gra 'vel ar re-all.

Breman, ar c'hris tenet gwag a rey 'vel ar re-all, da laret  
eo, nac'h o relijion, nac'h e hano a den, pe bean bailhoset  
en pep fison ha maruze gwall-dizet ; red eo ar wech-man  
loskad an oferen ha-unan, dilezet Doue, red eo plegan  
pe torri.

Petra rey ? Plegan adarre, marfad, 'vel ma 'n euz  
desket ober 'bone pell 'zo. Da vibanen, pench an nevo.  
Ar pench, setu eno petra 'n euz klasket bepred, e ez a oo  
nesoc'h da an evit e greden.

Koulskoude, nevo ket c'hoaz a beuch'h, rag mouez  
Doue a den breman da bitad anean en-kreiz e galon. —  
Ar paour kez !

Setu eno, otro, emean an itron, penoz e tener, dre fora  
souzan, da gouean en toull, penoz e loskaer ar guden  
pen-da-benn goude an neuden gentan. Gwelet a ret-luz  
kement-ze ? »

An otro a lavaraz, rag na oa ket eun den abarret fall :  
— « Gwir eo, itron, na 'm oa ket roujet en kement-ze  
a droet »

— « Neuze, emean, eo red mad miret an holl galvariou,  
ha zoken ar c'hok hag ar goaf warno ? Red eo difen ha  
miret hep flach tam hon holl gredennoù, hon holl gisou  
mad ? »

— « Ya, emean. » —

— « Na souzan tam ebed gwech ebed ? »

— « Red eo, emean. » —

— « 'Wélet ket eta ! C'houi oa fesonaploc'h den evit  
na soujech ! Mez daou dra zo red : gout petra d'ober ha  
gout hen ober. »

Dim-Na-Don.

## AR CHARRE-DEILHO

At labour na lac'h den,  
At labour na zimour den.

Labour, urz hag akel,  
Tri vod a rag ar yoc'had. »

Ha me war ar gadoar goad vihan 'kichen ar c'harr  
dibunet kroupet war e variocho, war e diouer berr ha kam, ar re tu  
diabarz ane da zifenn ouz bec'h ar rod o font en-dro. Ar c'harr  
dibunet a zo berr-berr. Azet an agaver d'ar gaul, kreis-tre ar rod  
hag an estell. Manet eo ar guden war an estell hag ar pennad  
dibunet war ar gaul. Ma dorn kle a dapan war an neuden ha  
ma dorn deo was dorn ar rod. Ar rod en-dro ha me o tibuni.  
Petore kuden ewit-se ? An. . . ! n'eo ket eur guden neud.  
Kuden labourioù ar mez eo.

Krog e oad gaud ar charre deilho. Arza on en em  
blend avad. Mar onic'hec'h, kenvezit vad, pegement a vad  
a ra d'am c'halon komz ganac'h diwar-benn ho labourioù  
pemdeiek ! Fentuz e kontan ane awecho da digas bound  
hafent d'ac'h, ma 'po eun tol-plijader olem ane du-ze en  
korn an tan, pe ouz an dol ar zadorn da noz, pe ar zul,  
pa vech difoul gaud ho labour a hór pa a blac'h ar ger,  
goude mern, da c'hortoz mont d'ar gouspero, pe d'abard  
mar goch' pór pe blac'h a vale. O kontan ane ken featus  
avad me def eun « dision » den da laret e ven o klask  
gospat an dud diwar ar maz, re e karan ane da ze, rag en  
o souez eo manet ma c'halon. Ha mar goufen ober postu  
d'unan bennag, e torfen kentoc'h ma fluen hag e paouzafe

krean ha kreac da skrivan.

Kaer a zo laret, e ra ma fonnaso skrid kalz a blijadur d'on oll. Me defn den ive da gad herr-veled awal'h ha da vean spered a-drouz awal'h da gaout dindan ma fluen m'ar-ho garzach nemet c'hoant an neve da laret e ve garzach bue an dud war ar mez. Me lare d'ac'h neuze, kenderzois, redek war-lerc'h an den kez-ze, tapet eur gorden warnan ha kas anean n'houlan ket laret d'ac'h pelec'h.

Hag, e-tonez ma c'homjo, e plij d'in hadan, zilan eun ali mad henag ha, gwech hag amzer, eur gomz vad.

Ha mar gallen tomman anoc'h, konvrois vad, muiouz-mui ouz ho pro, ouz ho labourio, ouz ho stad ken enoruz, e laren mil bennoz d'an Otro Doue! Nag amzer, na pean, na hou, na paper, na plu n'am me kollet!

Breman, c'hoaz eur wech, mar zo da glemm diwar ma fenn, na zo d'ober nemet laret d'an Otro « Vallée, boulevard Charner, Saint-Brieuc », ha me a vo maout mar ga eur gir ken digand ma fluen da Groaz ar Vretoned na d'eun all!

Ma Doue, koulskoude, pelec'h oan arvu? Pera foll d'ac'h? Ze a oa o samman ma spered, breman eo skanvaet mat. Damp d'ei adarre!

Arvu eo ar garg kentan en toull ar porz, en plas ar vrac'hell. — « Gho! eme ar charreter, ar potr-karr a fenn an talben deuz e blas, ar charreter a denn ibilh an alc'hoz, a ra eur jech war benn an alc'hoz ha pimboellet ar paour kez kouff. Ar sparl zo laket dindan e greiz a drens gand al limono da harz anean da zont war e fri arog ma vo peuret an deilho emez. Ar potr-karr a sko e grog en penn arog d'ar garg. »

— « Bailh, aze, diup! » — eme ar charreter, ha chetu ar garg andellet war an douar. Ar potr-karr a chom da leded anei. Ar charreter a jech ar c'houff d'e blas, a alc'hoz anean ha war-rog adarre.

Posial a reant o daou. Groet eo ar gwisk deilho keolan. Breman ec'h a ar c'harr d'ar porz da dal ar marchosi dawit eur garg teil pe diou da c'houlou an deilho. Ar « Gadines », a zo staget da zikour ar « Vaih ». Bop-oll gwisk ec'h er gand ar vrac'hell. Pan eo achu houuez, ec'h eer d'eben. Chetu int groet.

Breman, pa vo amzer, e voint zavet ha mesket. Neuze ec'h ey an harnaz d'an od ha diou vagad varl a deuz ebarz kouff don ar c'hastel-estik gand pevar vat a gezak en pemp pe c'hoec'h tronsat. Ar marl a vo andellet a goste gand ar groac'helio ha tolet warno d'o goulo. Pa voint advesket e vo mesket deilho, teilh ha marl hag eno e vreisbint buhan ha buhan.

— « Rou, r, r, r...! — Chetu peudibunet ma c'huden. Ah... Arvu oa skwiz ma gwalen-gein. Zevl a ran diwar ma c'hador. — Rou, r, r, r! — An estell hag ar c'harr a derc'h da zont endro. Herr a oa warno. — Rou! — Chomet int. Me ive eo poent d'in chom. Chomet on. Ben d'isul, mar be bolante Doue!

EUN MIGNON.

## AN TAD KOZ

Marteze n'anvezit ouz Adam nag Eva  
An tad koz a hanvomp Per-an-ti-all ama?  
Pevar-ugent vloaz zo eme dre Gerzadiou  
O labourat bemdez parkeier e dadou.

N'eo ket red d'in laret ez eo gwenn-erc'h e vloz,  
Ar re da vihana zo chomet en o zao;  
Kroumet diudna an oad, eur penn-baz en e zorn,  
Per-an-ti-all zo c'hoaz enean yac'h an askorn.

An tad koz a zo bet a-zong ar wech eur skouer,  
Er gear hag en arme, sketuz d'e zever,  
Kalonek gand an oll, gand e Zoue feal,  
Eur gwir benn-tiegezh, setu Per-an-ti-all!

Doue an deuz skuilhet bennoz gand largentez  
War e vugaligou, var e oll diegezh;  
Diou verc'h leanezed, hag eur mab beleget!  
Ah! evit an tad-koz pegement 'vo pedet!...

Tri all zo dimezet hag o deuz kemeret  
Eo o c'harr an douar gand an tad koz lezet.  
Pebenz urz-vad ama! Pebenz unvaniez!  
Setu 'r pezh a dlefo beza peb tiegezh!

Er gozav, 'kichen an tan, da c'hortoz ar c'housket,  
Syad ar veilhadek, en eur c'hoagn azozet,  
Ez eo plijadurus e glevet o konia  
Vez mervailhon gir koz, diwar-benn ar vro-ma.

Me goed mad e chomfet, hep tamm keuz d'ar gwelaou-  
Beteg an hanter-noz, hammet oll d'o selaou.  
Hogen, mar deo koz, ne vank ket d'ean furnez,  
Ha d'an taol a nav heur e ro siu an divez.

Pa'z a bep sul d'ar vourc'h, an tad-koz a gomer  
Pevar gwennek louet e goueled ar yalc'h ler;  
Na mui, na nebeutoch, defot n'han deveuz ket.  
Setu e pe zoare vezont gantan tenzet!

Ar gwennegig kenta vo roet d'ar paour kaez dall,  
A zo war an hent braz duze ouz e c'hedral;  
Por heu anavez mad, tost d'ugent vloaz a zo,  
Eun taun-min hen lezaz dall-pud evit atao!

Per-an-ti-all en deuz eur gametez wilion  
Evit ar re varo, evit an oll amon;  
Pa gesto ar fablig opad an oferon,  
An eil gwennek 'vito a ro en aluzon.

Marteze c'hoaz gred d'ac'h ez ay... daou all,  
Da eva gwinnadant d'ean laret...  
Abarz distret d'ar gear, bremaik...  
E preno madigou d'eun toullad...

Gwechall n'anvezet ket, elouez ar...  
An dispignou diboull, didaloub...  
It d'al leac'h ma kaeoc'h, d'ar...  
Ha n'ema ket founnez an arhaat...

Gwechall hon tadou koz a espero o zra,  
Na denzet o madou neb leac'h evit...  
Ha d'eo ket eun netra ar gwinnadant...  
A ra kement a zrouk d'eomp-ni oll.

KLAODA.

## SALAUN AR FOLL

Tennet diouz « Kannadik Sant-Segal » ar c'hannad-parouz-ze hen dispar ez euz bet menek anezan war  
« Groaz ar Vretoned ar zib dremenet hag e tefe oll  
velien Breiz hemer skouer diouz e Renner mad, an abad  
Corre, da zevl sort « kannadou » en o farouz.

En eur geraden distar, tostik da Lesneven, eo e  
c'hannaz, war dro fin an trizekved kaaved, d'ar mare ma  
eo gwelet kement a zent, ha ma eo savet kement a ilizon  
kaer.

E vamm a westlaz anezan dioc'h-tu d'an Itron Varia,  
a oa he skenden er lec'h ar muia a wel en tiik paour,  
e-kenver kroaz Hor Zalver.

Salaun n'oa ket eur bugel evel ar re-all. E zaoulagad,  
glaz evel an oabl, ne joment morse da bara var neira,  
evel pa vije bet atao oc'h ober eun huve kaer henag, hag  
ar vamm, ruonet he c'halon o welet, ne deus ket a skiant  
d'ezan, a ouele dourek en eur startat var he asere ar  
paourkeaz « innosant bilhan », hag a c'houlenna skoazel  
evitan digant Rouanez an Envou.

E zaoulagad ne joment da zellet nemed oc'h eun dra,  
war an douar, oc'h skouden ar Werc'hez a oa en ti e-ki-  
chen ar groaz; e spered a zablante beza b'epred ar-sonjal  
en eur vro-all henag, kaer moerbed, dia ne anavezet hag  
e vamm nag ar re-all anezi; ne rea van oc'h netra en do  
d'ezan, mez pa en em gave dirak skouden an Itron Varia,  
e teus dioc'h-tu da veza laouen evel eur c'hrouadurik en  
e gavel, o vouse'hoarzin d'e vamm, pa zihua.

Beac'h an deyeo o teuna e zaoulagad diwarni, evel pa  
vije dirazan eun dra dudioz henag, evel pa vije...  
c'hoarzet outan euz bar an Envou.

Ar c'hrouadur a greske, hag he skiant ne deus ket  
d'ezan, evel d'ar vugale all, hag e zaoulagad a genlale'ho  
da zevl var-zu holz an Envou, evel pa vije atao oc'h  
ober ar memez huve kaer.

Start en he feiz, evel ma 'z eo dreist-oll ar mainnou e  
Breiz, ar vamm ne gollte ket fiziais. Pell e chome daou-  
linet e-c'harz an Aoler, ha dirak skouden ar Vamm ven-  
niget; ha dre ma pede, e kreske he feiz, hag e lavare  
enni-hec'h-unan e vez peden birvidik eur vamm selaouet  
stao gand an Itron Varia.

Ar c'hrouadur, koulskoude, ne lavare ger, ha ne ze-  
blante tenrel evez oc'h nikun euz trou an douar; atao e  
veze gand e huve kaer: ne deus emañ e-unan nemed  
a bennadon bilhan, evit ober eur mousc'hoarz laouen da  
skouden ar Werc'hez, lakaet er lec'h muia a wel, en o zik  
paour.

— « Koeze, 'ha, mabik, lavar gane-ma hano an Itron

Varia ». Bop tro ma klave ar ger-se, Salaun a dride gand  
al levonez, hag e zram a deus da laouennat. Eun deiz, e  
lavarez war-lerc'h e vamm « O Maria, Ave Maria! »

Mez setu maro ar vamm. Ar c'hrouadur kaez ne ket  
goest da c'honid e vuoz, ha red eo d'ezan, evit miret da  
vervel gand an naon, mont da glask e dammik bara. Mez  
n'en douz ket ezom da gaout enkroz. E Breiz, e vez atao  
truez oc'h ar paour, ha forz da beleac'h ez a da c'houlou  
repu pe lojeiz, en hano Doue, e kav dor, zigor, ha digemer  
mad.

Kea, Salaun, en eur lavaret da beden, atao an hevelep  
hini, mez atao lere. Kea, en eur goudele'hel da zonzal or  
bawdoz, ha gand da vouez flour, heb skwiza morse, kan  
da Rouanez an Envou da gantik ken koant: « O Maria,  
Ave Maria! »

Mont a ra, ar c'haez « innosant », dre an hentehou  
don, hag e teld ar c'hleuziou huil, golbet a lann pe a wez  
dero braz; mont a ra, dre ar gwannodannou striz, a  
drouz ar meziou, ar goumou hag er c'hoajou; mez ne  
daol evez ebod oc'h ar pezh a wel gand e zaoulagad: e zonz  
a vez atao er Werc'hez Vari.

« O Maria, Ave Maria! » Dillhad truilhek en-dro  
d'ezan, diskabel peurliesha, hag eur penn-baz en e zorn,  
ez a beute mad, eur an eil li d'egile, euz eur geraden  
d'eben, en eur zaludi kement-hini a en em gav gantan  
gant ar gant a blij kement d'ezan. P'ien deveze naon, e  
lavare ouepen: « Salaun a zebze bara. » Re lent oa, ar  
c'haez, evit goulen; ne rea nemed diskwez d'an dud vad  
en doa ezom eun draik henag.

« O Maria, Ave Maria! » Dre bep amzer ez a en  
hent, an « innosant paour. » Evitan an erc'h astennet  
war an douar evel eur pallen, a zo eur skenden euz a  
vantel won a zo gand ar Werc'hez Dinam, na pa wel a  
para an heol ken kaer ha ken lugernuz, e sonj e tle beza  
kaeroch ha lugernuzoc'h c'hoaz arsklerijen a zo en-dro d'  
Rouanez e bar an Envou. Pa vez skwiz zoken, ne elian ket  
da gana, dre ma zo, ha dioc'h an noz altee en traouiennoz  
tenval hag er goumou sioul, an hakele a vez klevet o  
lavaret war e lere'h hano ar Werc'hez venniget.

« O Maria, Ave Maria! » Charles Bleiz ha Yan  
Montfort a oa breze! etrezo evit gwelet da biou e vije  
douar Breiz. Eun deiz, ar paourkaez Salaun a en em  
gavaz gand eur vandou sordardet, hag ar re-ma lammar  
dioc'h-tu da gregi ennan, hag a c'houlennaz digantan:  
« A-du gand piou emañ, gand Bleiz pe gand Montfort? »  
An « innosant », evel p'ien dije gwelet neuze dirazan e  
Rouanez, skedusoc'h aged biskoaz, a respontaz en eur  
vouse'hoarzin: « N'emañ nag e tu Bleiz nag e tu Mont-  
fort; me 'zo e tu ar Werc'hez Vari. »

« O Maria, Ave Maria! » Ne lavare nemed ar beden-  
ze, pa veze great e dro gantan, ha pa zistroe, heb par-  
daez, da rei eun tamm diskwiz d'e izili. E-keuz eur  
c'hoat braz, e-kichenan eur feunteun, hag e-kenver eur  
wezen huil, en doa savet eun tamin lochen. El lochen-se,  
n'en doa evit gwele nemed eun nebeud skourrou, astennet  
war an douar, ha lakaet warno eur gwiskad deliou seac'h,  
mez awal'h oa evit Salaun, rak e gousk ne veze ket hirr.  
Bremaez eo oc'h en em blije, e zaoulagad atao savet varzu  
holz an Envou; tridal a rea e galon o sellet oc'h ar  
stard o lugernuz. Pa veze deuet oll draon an douar da  
beza peul, e seblante kaout muioc'h c'hoaz a levonez o  
deuz. Pa ziwiza morse, e beden virvidik, ha marteze  
ive...  
oll...  
oc'h...

(Da heuilh).

GOULENN e bureo ar Groaz; Gwerztoz sant Eriann, at  
Labourer, sant Millo, sant Keneri, hag all. Fur gwennek  
ar pezh.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc - Imprimerie Saint-Gustave.



# Kroaz ar Vretoned

## ROUMANANCHOU

Eur skodt ar hia evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodt, evit ar broioù estren evit ar broioù keltiek.

Ar brezhonek hag ar feiz,  
A zo brezhon ha c'houlz en Breiz.  
Puernez ar Gelois.  
Gant brezhonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek eo m'eo a Vreiz.  
Puernez ar Gelois.

Dalc'hit hepred d'ho brezhonek,  
Yez ar dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve t'rechet,  
Oupen ar Vez, o va Pechet !  
MITH.

## SKRIVANIERIEZH

Eus ar labourioù pe d'an Odro VALLEE, Rener, en Zant-Enead, Zant-Briek.  
pe d'an Odro MOAL, Skrivanter, 27, ball Chavner, Zant-Briek.

## EMBANNOD-KONVERZ

Tri gweznek (ep brezhonek-skizh).  
(Diskenn a hie evit meur a arbadoù diouar)

DOUE HA BREIZ.

## LIZER KENTAN AL MIGNON

(Aendalc'h da gimad ar Mignonez).

Kenniget d'ar Vretoned vrasañ.

WAR DON : Breudeur ni glaz.

Treuzet eo 'ta ar mor braz, ha ma pek deuz hro Breiz,  
Pell diouz ar vam a hadaz ar fe chouz no a breiz.  
Pell diouz an tad mad ha ker war d'ober pelini  
Gwech all en em ziduz d'arjoulh e c'houlz.

Ma zi-me a zo breman eun delik her c'houlz,  
Daou blaken ha plous mais n'eo ez kre 'vit gwele,  
Eun dolik hag eur gaoler, eur vad, eur c'houlz rih  
Chetu aze, ma zud paour, ma oll arreberri.

Eur c'henvreur am euz amian, eur beleg yaouank c'houlz  
Maz aru gwall-dinaret, ken pouner eo a groaz ?  
An tad-ze em dic'hac'h ar, a ro d'in nerez-halon.  
Ar c'henvreur mad-ze a zo eur skozsel evidan.

Allaz ! na welin mui ken diem koant ar Vretoned,  
Dre-oll an-dro d'in breman ma 'wel moriaed.  
Mez mar eo du o dremmo, o ineo siwaz !  
Zo en eur stad mezuzoc'h ha kals-kals lousoc'h chouz.

Hon deved zo hanter noaz ; o stad din a dree !  
Mez o ino zo ziwaz ! kals muloch divade.  
An ino-ze koulskoude zo da c'houlz d'ar fe,  
Al labour 'vezo diez, mez ar goz eo an Ne.

Red eo d'in anav d'ech-hu : stad ma deved divad  
A lak daero da gouezun puih eus ma daoulagad,  
Mez zenti eo bet deprez lod ar servijer mad :  
Doue lavar labourer, poanik eo ma diead.

Na vet ket en han Doue, ma ho ped, ma zud vad,  
Trubuilhet ewar boanio, doaniet ewar stad  
Ho mabik ker divroet, mez pedit evitan ;  
Kenavo ! tad ha mam ger, kenavo ar c'houlz !

BARZ ZANT-BRIEK.

## EUR C'HELOU MAD

POTRED PEURIT. — Al Inn Jask poude kreist  
pôtrez Peurit a zisklerio bue « Job al Leoker ». Bean  
vo da heul kanoenno koant : « Ma Bolo Leat », « Zerr  
Noz », « Mam ar Martolod », « Son an Amann », « Ar  
Neuden torret », « Mathiaz Koz ». Eno a vo ive « Ar  
Bugel hag an Doktor », « Ar Sparfel hag an Estik », « A  
louarn Besk » ha d'ac'hni « Hirvoudo eur mevier ».

El Listiwen-Vraz e vo an treo.  
Trugare ha mil bennoz-Doue da Bôtrez Peurit lu  
d'o rener mad, ar Mignon !

## EUL LIZER

OTRO RENER,

..... er psonezioù e kaner zonio galiek a rok  
eme eur rener psonez, na zo dastum gwerzioù brezonek  
ehed mad evit ar strolladoù tad yaouank.

Ali d'ar Varzed !  
Kemañ-ze n'eo ket gwir : Bean 'zo bet savet amañ  
Bureo Kroaz ar Vretoned eun dibab gwerzioù ha sonioù  
brezonek evit ar psonezioù ha mad-tre e'ch int. N'euz  
nemet goulen aze.

GOULENN e bureo ar Groaz : Gwerzioù sant Erywan, ni  
Labourer, sant Milio, sant Roueri, hag all. Eur gweznek  
sal pez.

AR YEODER.

he daouarn harpet ouz ar jijen. Breman e wel e-leiz, e-leiz  
a vugaligo dilezet. Den da levial o spered war skiant  
Doue.

Anez skiant Doue, da gent,  
Gwigez-all na dal netra.

Den da stumman o c'halon da garout Doue. Pell  
ac'hano, tud fall, tud brein o c'halon o sklabez skrijo,  
komjo, obero, hudur ewit koll ane, peche, lano ewit tapout  
ane hag o diswaan diwar hent ar baradoz. An dud, he bu-  
gale troet fall-ze, oc'h ober brezel ouz hep mad, o lispenn  
labour vad mil a vlain, oc'h ober brezel ouz yaouank, ouz  
koz, ouz paour, ouz pinvik, ouz kement a zo reizet mad  
hag honest.

— Ma bugale, emet, ouz en em dibri ! ha koulskoude.

Bugale Doue a die hepred  
Evel breudeur en em garet.

O ! O ! O ! Jezuz ! Jezuz ! Jezuz ! eme ar vamm o sevel  
he daoulagad benet a daero war ar groaz hag oc'h astenn  
he daouarn juntet war-ze Jezuz. — Jezuz ! True ouz ar  
vugale ger ! Harpet a re vad war hent ar baradoz. Skri-  
rijen d'ar re dallet, tomder da deuzi, da fontan skorn o  
c'halon ma kerzoint ive etrezek porz ar zilvidigez.

Ewid an derved gwech e taoubleg war ar jijen, pizen-  
net ar c'hoezen yen warni gant ar hoan. Hag e wel ineo  
paour e-kreiz ar flamm o fisteri deus ar varn, o kouez en  
prizon spontuz ar Purgator, eur binijen liñr d'è d'ober.

Ineo klanvourien marvet en hospitalio, marvet hep  
na beleg na zakramant, kaer o devoz goulen a gri forz.  
Leanez a-bede na oa ken da c'hervel eur beleg. Doue an  
neuz bet true oute, an neuz pardonet d'è. O pinijen avad  
a zo kalz hiroc'h ewid na vije bet goude dour ar Bin-  
jen, dour a vuz Zakramant an oter, youl zakr an Nouen.

— « Ma Jezuz, dre ho karante,  
Ouz an Anaoz bet true ;  
Roet d'eo en ho paradiz  
An eternite da renoz. »

Eme ar Vamm glacharet. Hag e vanas evel sorennet.  
Ar hoan, an anken a dorras eun tamm. Chom a reas war  
he daoulin, troad ar Groaz stard etre he divrech'h.

Meuz ket eom da laret d'ac'h, kristenien. Anveet a  
ret, gwelot a ret aze ho Mamm, an Iliz, en kaon epad ar  
C'hoareiz, o pidi noz-de ewidoc'h oll, oc'h ober pinijen-  
Daoust hag-en na diverfe ket eun daken daero deuz ho  
taoulagad o welet he foan ? daoust hag-en na ve ket  
neraet ho kalon ? — Eo zur mad, pa n'eo ket man-beneraz  
a zo en ho kreiz. Ac'hanta, pinijen ive epad ar c'hoareiz,  
oc'h henilh penn-da-benn, hep klask digarre, lezen an Diz-  
Vijel an deio merket, Yun herve ho kalloud, kalz pe neu-  
baud. Diskoe bolant vad.

Pedenno o rei ho labour, ho poanio da Zoue, pedenno  
noz-vintin, pedenno da zul en ofiso. N'euz ket da laret,  
an amzer a zo trist. An Nenv a zo tenval du koumoullet.  
Pedenno, pinijen ! Hag

An neuz koumoullet  
Na bado ket.

Welloch amzer a deuz warnomp, amzer a beuc'h, a  
evrusted, eun dremskend deuz evrusted ar baradoz.

EUR MIGNON.

## DOUE.....

— Nan euz Doue abed ! a lavar an dud fall,  
Doue a oa mad-tre d'ar gwac'hed koz gwechall...  
Mes da dud a skiant, da dud ewidomp-ni,  
Doue nan eo netrat na dalv ket hon pedi...

Penoz en eun amzer ken-kaer hag hon c'hantved  
Kreiz d'imp deuz doueou ? ... Ar gwir evrusted  
Ez eo bepred breva en-kreiz ar blijadur,  
Herve ar vuz frank hag ar vuz disturt

Hag ewelc an hull a dremen a bue :  
Bugale, tud yaouank ha tudon koz ive,  
Pell, pell deus o Doue, sturz an diuzuz.

An hunvre a achu : heb tra 's euz o amzer,  
Dirag falc'h an Anken eo kouezet ar gevier ;  
Dobc a va klasket pa dosta ar Maro !

## KEVREDIGEZH BREIZ Ali d'ar Varzed.

Euz er bloazioù a-rôg, prizioù a vo roet gant Kevre-  
digezh Breiz :

1° D'ar gwella gwerzioù (Pep frankiz lezet gant ar  
varzed da zibab danvez o labourioù) 80 lur a brizioù.

2° D'ar gwella sonioù (e danvez e frankiz ar varzed)  
100 lur a brizioù.

3° D'ar gwella peziou-c'hoari. Danvez tennet dionz  
histor Breiz pe dionz darvoudoù a-bouez hag o sellet ouz  
hon Bro-ni, Bretoned, 60<sup>e</sup>, 40<sup>e</sup>, 20 lur.

4° D'ar gwella lizer skrivet e brezhonek gant eur pôr  
pe eur plac'h yaouank (eus 10 da 21 bloaz oad) d'eur  
mignon pe d'eur vignonez, oc'h ober meulidigezh Breiz-Izel  
hag o tiskouez ez eo eun dlead d'ec'hel da spered, da yez,  
da wiskananchoù ha da c'hizioù mad hon Bro, daoust da  
allou fall ar re a glask dismantra Breiz-Izel war digare  
« ar mont war wellaat » pe *Progrès* (25, 15, 10, 10 lur).

5° D'ar gwella dibab a dri dôn brezhonek chomet divoul  
beza vrasañ. (Eur priz a hanter-kant lur).

6° D'ar gwella peziou-barzoniaez oll-geltiek (da rei  
dorn d'eu euta unani etre poblu keltiek (Iverzion pe  
Iriaed, Keumri, Breiz-Izel, Skos.) (2 briz a 50 lur).

7° D'ar gwella dibab a Vretoned sent Breiz. Kemer  
peder buaz hepen ; skriva ane en eun doare freaz hag  
eaz d'hoan, o lisplega o histor, ar c'hredennoù poblu  
diwar o fenn, o gouel, hag all.... Kemer sent Breiz-Izel  
señt anavezet pe krenn dianav. (3 pe 4 pajen evit pep  
sant. (Peder medalen).

Ar prizioù-ze, nemet re ar gwerzioù, ar zonioù hag ar  
peziou-c'hoari, a zo bet kinniget gant ar Vretoned vad-  
man : An aotrone KERVILER, kont a ESTOURBELLON,  
Esor, kont a LANGEU.

Bean a ive prizioù evit ar gallek hag eur priz a 25 lur  
kinniget gant hon mignon Erwan Berthou d'an daou  
zavel gwella eus ar c'hanton e lec'h vo groet dalc'h ar  
Gevredigezh.

Kas al labourioù d'an Aot. kont a Estourbelilon, Gwe-  
ned, ac'han d'ar 15 a viz genere 1905.

## DAERO EUR VAMM

Ha me 'welet a-dreuz d'eun argeon, gouiz eur Groaz  
venez kaer, zavet war eur c'hroaz-hent diwe, dre greistria  
ar gwezh oc'h ober eur gurunen d'ei, ha me o welet o  
dent, eun Itron, eur Ronanez. Na oa ken ganti he dilhad  
aoud. Na korunen war he fenn, na perlez, nag ac'hant  
hag aour en he c'herc'henn, na roben a liou dindanni, na  
mantel warn ruc'het war he chouk. Eet e oa en kaon.  
Dintan ar voutou du eur zac reun, liou ar binijen war  
he zremm. Hou ar gouelvan war he daoulagad, ludu e-  
mask he Meo. Stonet e oa ar vamm baour, frailhet he  
c'hanton. Eun druc e oa sellet outi. Dond a re da glask  
kouferti ha dremm digond Jezuz, ha zikour da zougenn  
bech' pener he c'hroaz. Ha hi da daoulinan war jijen ar  
C'halvar, hec'h dino war ar bazou huolan, he fenn eto  
he daouarn, hag o broliou da ouelan, da glemm, da di-  
frontal euz weid he feid. Ho spered, he c'halon a oz  
gand he bugale. — « Du-ont, emei, eteiz, laeret digante o  
made, gwerc'h, teulet, difennet d'e chom en o bro, red  
mont daved an eston da vervel gand ar gornez, an d'ri-  
bidigez goude bean groet ar vad amañ, bean dilezet pep  
tra ewit mont da bidi da d'ober pinijen ewit ar re na  
reont ket, ewit mont da boanid da zavel kristenien vad.

— « O ! O ! emei, en eur zavel ho daoulagad war Jezuz  
hag en eur digot he divrech'h. — Jezuz ! Jezuz ! Jezuz !  
True oute, ouz ar verzerien hag ar mornerezed-ze. —

Penn ar vamm a goue adarte diwar he diouebou etre

## GWERZ SANT JULUAN

En da all o tremen a-bien chapel sant Juluan, e wella e oa dismanteret oll ha kouseet en he foull. Ar sant zo digaset d'an iliz parous. Var an hent braz ac'h a eus Iannadon da Landreger en em gav ar chapel-ze ; brudet e oa bet a-hed an amzer, ha sant Juluan vije pedet ouz an derzien. Breman n'euz ken a fianz on migroned an Otro Doue, hag evel-se, e-lec'h euzi o fatronion, o lezer a goste, e-lec'h kaerit o chapelion dre ar profou, o lezer da gordan en o foull, hag evelse tam ha tam ar fe a vihana hag a ya kwit 'ben ar fin gaud ar gistenien o vean deat da vean re glouar en o relijion. Setu aman eur pen-tad eus bue sant Juluan :

Reit d'in ho kras, Spered Santel,  
Ha c'hwil, patronoz Breiz-Izel ;  
Roet sklerijen d'am spered,  
Da disklerian d'ar Vretoned

Buez eun den ar santelan,  
'Neus tremenet 'bars ar vro-man,  
Bue Juluan, den vertuos,  
'Zo en Neuvo breman evrus.

A Vro-C'hall e oa ginidik,  
A ligne nobl ha pinvidik ;  
E dad, e vam, kristenien vad,  
Hen kelennas herve o stad.

Juluan, o vezan dent en oad,  
'Dougas an amour 'vel e dad,  
Ebars er brasan brezellion,  
'Oa leun a vrud, a enoriou.

Eun devez-hanv, dreist a re all,  
Ec'h aes d'ar c'hoat da chussout ;  
Bale 're drant ha dibreder,  
Evit kaout beroc'h an amzer.

'Bars er c'hoat pan e arrust,  
Eur c'haro rous an eus gwelot,  
Pehini outan a gomzas,  
D'ezan en berr-gomz e laras :

— « Ma tenes d'am lac'han er c'hoat,  
Te lac'ho da vam ha da dad,  
Te rey daou vuntr er memes de,  
Pa vezont kousket 'n es kwele. » —

— « Kentoc'h 'vit rafan an dra-ze,  
Me a gwitafe ma ligne ! » —  
Ouz ar c'haro 'neus ket sentet,  
Eun tean d'ez an neus roet.

Kwitat 'neus e dad hag e vro,  
Lest ar vrud hag an enorio,  
Da veval 'ti eur prins 'c'h e et,  
Merc'h ar prins an eus eurenjet.

En keit-se e dad hag e vamm,  
Dre-oll a glaske Juluan,  
Digouset 'hint eur beurevez,  
Da c'houl lojan ti o map kez.

— « Ha c'honi rofe d'imp, prinsez vad,  
C'hwil rofe kelon deus hon map,  
Eur prins kaer e ha yaouank-flam ;  
E hano mad eo Juluan. » —

— « Herve ar c'honzon a larel,  
Ec'h e ma fried a glasket ;  
Antrét, m'ho ped, da diskwizan,  
Da c'hortoz gwelot anean. » —

Po devez debret o leino,  
A gwalc'het d'ez o zreido,  
Ar prinsez o lak da gousket,  
Ebars en gwele he fried.

Pa digoue er ger Juluan,  
Skwis-bras ec'h a war-eun d'e gant,  
Pa wel daou all en e wele,  
Ec'h a kouannar en e ioe.

Ha gant eun tol kouannar, sionaz,  
O zrenzas gant e gleze noaz,  
Dre eun droug-sonj ouz e bried,  
En euz e dad, e vam lac'het.

Neuse 'tiskan d'an traon buhan,  
'Vel eun den kollét e skiant,  
Pegen sonnezet ne oa ket,  
Pa wel 'tont d'e god e bried.

Juluan a ehom 'vel mantret,  
Eur sonj all a deu 'n e spered ;  
Goulen a ra prim digant,  
Piou an daou-ze lojet 'n he zi ?

— « Ho tad hag ho mam Juluan,  
Karget a anken hag a boan,  
I ken trist ha ken glac'harét ;  
O map Juluan 'doa kollet.

(Da heuil). Dastumet gant L. CHABRAN.

Eur c'helou mad : War hon deuz klavet, eur Vreuzioz  
a zo bet neve-zavet atre ironnezet pinvik Breiz da adzevel  
ha da gempen hon chapelion koz. Trugare ha bennoz  
Doue d'ar Bretonezed mad ze !

## BRANKOU SEC'HET

An derwen goz, 'kreiz ar c'hoat braz,  
Eo astennet he brankou glaz,  
Evel divrec'h en-dro d'ez ;  
Koz eo meurbed, mez soun he fenn,  
E pado c'hoaz ar c'hoz derwen,  
Epad mil bloa, zoken ouspenn ;  
Rag he c'halon zo meurbad gwev,  
Nerzuz eo c'hoaz, daoust d'he c'hoznit

Hor c'hendadon a rum da rum  
O deuz bet kavet da zastum.  
Er c'hoajou don, keuneud, skourrou,  
Blenchen, treujen, brankou sec'het.  
Mez dindan an derwen gallet,  
Beteg-hen, ne zo bet kavet,  
Nemed dellion da rastellet,  
Dellion medet gant avelou !

Allez gwech, ar c'hurunou,  
O kroaz, o strakal tarzou,  
War an derwen zo bet kousezet,  
Hogen Rouanez ar c'hoajou,  
A zindan hevelep toliou,  
Ne ra van ebed : he brankou,  
A zo krenvoc'h 'vit ar harriou...  
War-lerc'h ar glao, heol benniget !

Hogen setu aman traon all,  
Tremenet eo an amzer fall,  
Tremenet eo, koulz lavaret ;  
Sed o tout an neve-amzer,  
Setu an heol gant e domder,  
Ne weler, beteg er pelder,  
Nemed glazen, bokedou kaer ;  
Er gwe, an dellion zo tarzet.

Al laboused 'kreiz ar meziou,  
A labour stard war o neziou,  
Tolomp eur zell war hon derwen...  
Nerzuz ha krenv eo da welet ;  
Goad ru a red 'n he groaziet,  
Ha beva a rey c'hoaz, me gred,  
Onspenn epad meur a gantved,  
Dispont bepred, bepred laouen !

Sionaz ! petra zo c'hoarvezet ?  
Setu aze brankou sec'het,  
Hanter-vreinet, ha dibluskenn !  
Sionaz ! Kalz a zo anezo ;  
Kalz a vrankou a zo maro,  
Petra a vezo gret ganto ?  
— Ar vouchal buhan dindanno,  
Hag e vo pare an derwen !

Brankou sec'het ned int mui mad  
Nemed da ober eun tantad ;  
Hogen ma varv re a vrankou,  
An derwen goz an do kalz poan,  
A varvo a dammou bihan !  
— Me lavar d'ec'h, bezomp dizoan ;  
Derwen ne varv ket ken buhan,  
Ebarz hor bro, 'kreiz hor c'hoajou !

Eun derwen goz eo Breiz-Izel,  
Eun derwen a vevo c'hoaz pell,  
Daoust ma sec'h kalz deuz he brankou !  
Kalz Bretoned, (us kalonad !)  
A dec'h deuz Breiz da c'haloupat,  
Petra d'ober gant sent Breizad ?  
— Ar brank sec'h a ra eun tantad !  
« Breiz a vo trec'h d'he gwallentout !

SPERN-GWEN.

## SALAUN AR FOLL

(PENNAZ DIVEZA).

Maro eo, ar paour-kaez « innoçant ». E ene, goude beza  
Iannadot kement warzu ar Baradoz, an deuz, abars-ar-  
fin, torret o liammou, hag a zo nijet, evel eun al'houeder,  
da welet a-dost ar Werc'hez venniget.

An dud diwar-dro a gavaz anezan eur beurevez  
astennet e-kichen e wezen dero. E vram a oa laouen evel  
hini eun El. E zaoulagad, chomet degor-braz, a zeblante  
beza c'hoaz o para war eun dra gae' benag hag a dlle  
beza en em ziskousezet d'ezan, war e dremenvan. E va-  
zellou, gwen evel paper, a oa dem-zigor ive, evel pa vije  
aet kwit an ene dre greiz ma lavarent goustadik o diveza  
« Ave Maria ». E asgre a oa en em c'hoezet, ken braz ha  
ken hirvidik ez oa ar garantez en e galon. E zaouarn a  
oa kroaziet ha savet eun tammik, evel pa vije unan  
benag dirazan o tont d'e ziambrouk.

Eun toull a oe graet, e-kichen ar wezen, el leac'h m'en  
doar ar c'heaz « innoçant » kanet ken aliez meuleudiou ar  
Werc'hez Vari, hag e gorf a oe diskennet ennan.

Salaun a vije bet ankounac'het buhan gant an dud.  
Mez an Itron Varia a felle d'ez rei enor, d'he vro, d'he  
zervicher kalonek.

Moueziou dudiz hag a dlle dont euz ar baradoz, sur  
awalac'h, a oe klevet e-touez skourrou ar wezen dero, hag  
e-touez ar gwez all tro-war-dro, e lavarent : « O Maria,  
Ave Maria ! »

Epad meur a zervez dioc'h'tu, an hevelep moueziou a  
lavaraz an hevelep hano benniget, hag a embannaz dirak  
an oll santelez ar paour-kaez « innoçant », lakaet en  
douar e-kenver ar wezen.

Ha pa jomaz sioul ar mouezion, Doue a reaz e-uan  
eur burzud-all. War ar bez paour, e savaz eur boked kaer,  
eul lilienn hag a zeblante he deliou, gwen evel an erc'h,  
ar gomz-ma a oa skrivet e lizerennou aour : « O Maria,  
Ave Maria ! »

Euz a zaoulagad an dud e redaz neuze an daelou, hag  
euz o c'halonou e savaz eur beden a anaoudegez vad  
war-zu an Envou. Meuleudi da Zoue ! Meuleudi d'an Itron  
Varia !

An douar a oe toulet, en dro d'al lilienn vuzuduz,  
gant ar muia a oe gallet a evez, ha raktal e savaz dioc'h  
ar bez eur c'houez-vad dudiz, evit diskouez n'en doa  
ket ar maro, en dro-ma, graet o labour evel kustum,  
Toulet e oe donnoc'h c'hoaz. O burzud ! Al lili a deue  
euz a diweuz Salaun, (diweuz ha n'o doa morse lavaret  
nemed hano beniget ar Werc'hez), hag en e galon, eur  
galon ha n'he doa karet netra, hed e vuez, nemed an  
Itron Varia, eo ez oa diwanet.

Ar c'hoat braz a oe trouc'het, eun nebeud bloaveziou  
goude-ze, hag eun iliz euz ar re gaera a oe savet var bez  
Salaun. Tud fidel Breiz en em lakeaz dioc'h'tu da zont di  
da bardon, hag abaeue e kendalc'hoñt da bedi, niveruz  
meurbed, e kichen feunteun ar paour-kaez, ha da c'houlen  
digant ar Werc'hez sikour ha skoazel. Piou a lavaro gant  
pegement a anaoudegez vad hag a garantez e savont o  
daoulagad hag o c'halon, en he iliz klzellet ken kaer,  
war-zu

Patronez douar ar Folgoad,  
O Mamm hag o Itron !

Tennet diouz « Kannadik Sant-Segal. »

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuac

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc — Imprimerie Saint-Guilhaume.





Sisol eo sa-dro ar vugaligo, digor frank o daoulagad :
na vo kollet gir ebet. Gwech ha gwech all e sellont, din-

Ya, evruz ar re 'deuz c'hoaz eun tad koz hag a oar
kontadennou!

Ma o deve ar vugale levezeg, an dud vraz ive, yost o
c'hoaz gant labourioz poanuz an de, a ve stad enn d o

Arre vo aliez pell an amzer pac'h eet da gonsket, mez
arek na ve ket ankouet lenn Bue ar Zent, ha trugarekad

O graz d'it, ma Bro garet, da vivot pell c'hoaz gizioz
ken koz ha ken dudu evit kalon ar re eus da vugale a

MERIADEK,
eus a Skol-Vrezekek Kojal Gienamp.

BUGELIK MAD

D'an Otro F. Caoulal, person Zant-Pik.

Ar pez a fell d'in kontan
C'hoarvez an digor-han.
Ma amezeien a oa
O koll o fôr a dek vloa,
Hag aliez c'hen d'o zi
Evit klask o frealzi.

Gab LISILDON.

MARVAILH NEVE

RUFIA, AL LAER BRAS

Eur wech e oa eur otro braz ha pinvidik; enoret e oa
eant an oll, hag an oll o devoa evitan ar vrasan karante

abalamour d'a binvidigez.
Koulskoude, o zave a gonaz gant an amzer, rag
bennoz ec'h eo d'ar festoù noz ha neuze e c'hoario eur

Bala a re dre an henchon, ar sonj-ze en e spered,
tenval e hen; necl'het o veze; efin ouñ devez e laraz :

— « Ma, emean, m'am mije bet an daube am oa gwej-
all, em mije gret n'eus forz petra... » Mont a re beleg

Ar pôr koz-se (da laret eo an diaoul) a glor skler a-
wejoz; dont a reas da goz gantian.

An otro a chomas eur penad d'en em zonzal; paour
e oa ha na c'hoarfe ket beañ, rag mez an nevoa o liskouel

Gonde beañ chomet eur penad da sonjal o laraz ya,
asanti a reas.

Neuze ar « pôr koz » a lavaras d'ean mont d'ar ger
ha beañ d'necl'ha na vankje nétra d'ean.

Setu an otro pinvidik adare. Bemde pa zave deus o
wele ec'h e da zellet-en e diréten hag e kavo en lie loiz a

Setu hen adare evel gwej-all ar festoù noz o c'hoari
« lillard ». Den na oute deus a belecl'ha en nevoa e dreou.

Toslât a re d'an temen ma renkje mont gant e gana-
rad koz; rad e oa d'ean rei d'ean o goif evit paeamant

D'er c'houlz-se e vavo er vro-ze eur laer bras hanvet
Rufia. Heman, a lerer, a oa eun-dou fall ha mad : laerez

An otro ac'h eas ive beleg Rufia hag a c'hoarfeas di-
gantian petra d'ober. Rufia a lavaras d'ean :

— « Pa deuz, emean, ar « pôr koz » da gerc'hat
ac'hanoel'h, kaset ganecl'ha eun diou pe daer buredad dour

Deut e oa, eta, au devez macl'ha arruns an diaoul d'a
gercl'hat anean.

— « Allot eme ar « pôr koz », deus ganin bre-
man. » —

— « Ya, eme an otro, ma tougez ac'hanoel ! Evit me,
na valeien ket. » —

— « Ke war ma c'heñ, 'ta, » eme an diaoul. —

Pa oa et an otro var e gein, e oa pouner, pouner, ken
o felle d'ean koueñ bep kammid. »

— « Treou biniget so ganez, emean, tât aneze aze! pe
me c'ha da d'ol ac'hanoel en treou. » —

— « Ma fe, eme an otro, graz evit ma kari. 'Vit ganin-
me, n'am eus ket a dreou biniget. » —

Gwech an amzer, e c'hoarfeas dour biniget e zious-
kouarn gant ar skloer, hag an diaoul a lare d'ean :

« Treou biniget so ganez, eta, devi a reont d'in ma
fen. Tol ar re-ze 'pa larin d'it, pe daonet vo! me c'ha da

— « Ma, eme an otro, graz ta, mar karez; mes me no
din ket ganez ive neuze. » —

E oant pen-da-ben eyelse o c'hrognal pa digouejout
ebars ar fin en ifern; eno e oa het jolori avad.

Pa oant digoueat en ifern, an otro a stagaz da skei
dour biniget en-dro d'ean, hag an diaoulfen da huchal :

— « O, rin ket avad, eme heman, ma 'meus bet
awalc'h deuzoutan pa oant o tout, n'am mo ken ! » —

— « Daonet a vije tout eun all; skoet anean en koter
Rufia 'ho tregout vla zo o virvi aze war an tan. » —

— « O, rin ket 'vat, eme ar re-all. » —

— « Ma, eme an otro, ma karet, me c'huy ma-nnan
ac'hanoel ma kari sinan d'in gant ho koad n'ho pe ket a

— « O, ya, emé, hag e refomp ive ! » — Ha setu int
d'ober rak-tal.

Setu distro an otro sklerijouet gant Rufia. Monet a
ra war-eun d'e drugarekad.

Rufia a deuas var ben hent d'ean : « C'hanta, emean,
mad, eo bet da dro, n'a teus ket klovet komz diouz ? »

— « Geo, eme an otro, pa oant necl'het ganin, unan
aneze a laraz 'ben ar fin, en eur doni Doue, tât ac'hanoel

(Da heuilh).
Dastumet gant L. CHARRAN.

Na oa ket awalc'h d'an O. Vianney naden
krenv ha karanteuz e kalon ar vugale-ze p'ar-
gantian, c'hoaz e c'hoarfeas o mago. C'hoarfe

Eun de e tenjont da laret d'ean peno: na chome
man ebet da sibir, na oa ken nemet eun dorvadig
« Mathean, gret touz gantian. » — « Diou bladen a refomp

Ol barousianiz Ars a zo het tost eus ar boed hag
gwin krosket dre eur burzud ken braz hag ar re am eun
komzet diouté, e ti an emzivadeg. Nag a wej ive ar

Monet re ofrad an treg gant ar « Providence », hennez
oa liquo an ti ar farnez a die'hade eno, galloud an O. Doue

Ken hucl e savaz mouz ar c'hlemmadenno ken e
renkaz ar person mad plegan, 'n em distagan diouz e
skozellerezed keñtan, ha gerdol en o c'ho skouezed

Eur beleg 'n e-unan, dianavect, heb diskamant
heve ar bed, an euz gret an oll deo burzuduz komzet
ané beleg heu. Oll tud bro an Dombes n'hellont ken eta

Au hostolaj a dle beañ eur verzerenti, ha kement belek
a zo galvet gant Doue da c'hoarfe ar bobl an euz da
c'hoarvez war ar Graoz koulz hag hon Zalver biniget. An

Evel ma lavare e re ive ar person mad. Oan-loak e
tenaz 'vid e barousianiz.

E graz kentan a oa ar binijen. Eur gwir baour e oa.
N'oc'h ket evid hazer yenien da donet 'n ho kalon
mar zellet ar skiber e p'hini e vezaz daoungant vloa, noz,

(Da heuilh).

ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIQU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuon
GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc — Imprimerie Saint-Guilhaume.



# KROAZ ar VRETONED

## KOUMANANCHOU

Eur skoot ar bla evit Breiz ha Bro'Chall.  
Alkoed, evit ar hollou estren evit ar Bro' Kottich.

Brezonek hag ar feiz,  
Breur ha c'hoar en Breiz.  
Furves ar Geiz.  
Brezonek eo doud ar feiz,  
Ar gallek ez ato a Vreiz.  
Furves ar Geiz.

Dalc'hli bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek,  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'hel,  
Ouspenn ar Vez, e ve Pe'hell.  
Munt.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otre VALLEE, Rener, 70 Zant-Bened, Zant-Briek.  
pe d'an Otre MOAL, Skrivaniere, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pop ardeonad-akruter.  
(Diskenn a briz evit meur a embann diou-ta).

## PRIZ KROAZ AR VRETONED

KINMOET

c'hentan strollad pôtréd yaouank kristen eus  
Freges a c'hoarije eur pezh-c'hoari brezonek  
ha ra Leoniz ha Gwenediz

a zo et

### Da bôtred PLEUZAL

deuz dishet ha c'hoariet eus ar gwella  
**JOB AL LONKER**  
hor d'ezo ha d'o rener mad, an abad Deniel t

## RUNAN

Eur pezh c'hoari e brezonek

g a wech nan eus ket bet lennet ewar Kroaz ar  
med girianno evel ar re-man : « Pôtréd Leon, Gwe-  
n Kerne a zo helebeni etreze da c'hônt piou a c'hoar-  
bravan pejo e brezonek. Enor d'e! Pegoulz e teuo  
eger da gemer skouer warnne ha da zevl ar vez  
he chonk? » Ac'hanta! Sevenet eo c'hoant Kroaz  
retoned hag he rener! Skampet eo ar vez diwar  
tiz, hag evit o zol-esa ac'h e eet deus ar c'hentan an  
ante!

ollad c'hoarierien Ploezal (18 a oa ané dindan rena-  
otro Deniel) an evoa embannet, eun neubed deio  
e vije eur pezh-c'hoari en grench Jean-Marie Ar  
en bourk Runan. Deus peder farouz e tiredaz bo-  
tud d'o chelaou : tremen tri c'hant a oa ane, ha  
ouch e oa ar c'hrench gante, daoust da houman da  
rank, mar zo unan er vro.

leuren-c'hoari (pe « théâtre ») a zo brao, ken ac'h  
at eo bet gand an aotrone Daniel ha Gallondek deus  
treo, ha gwelet e ver warni eur chiminal a c'hiz  
eur c'hlaouienn dan gand eur gaoter o tivogedi :  
avei nêren e var, marvad ; eur skabel e korn an  
eun horolach war beur ar blijadur bepred ; eur  
gand e stalafou dam-digor ; hag eur bank-tosell,  
mantel ar chiminal a zo eur c'hrusif, eur fusul,  
mken hag... eur vilin-gafe! Pe 'mo laret a zo 'vit  
al skabel ha kadoriou deus an eil penn d'ar c'hrench  
e vo anavezet na oa ket hanter-c'hoar en treo.

z chetu ar ridos o sevel : an triwach pôtr yaouank  
razomp hag e kanont : « Dion garante a zo 'n hon  
a hini Doue ha hini Breiz! Tud diwar ar mez ha  
erien ec'h omp evelloc'h ; na stoufet ket ho tis-  
ouzimp, ho mignoned hag ho kenvroiz, rak na  
penn nemet rei d'ec'h eun tamm dudi ha sevel ho  
treseg an otro Doue dre ar c'hentelio nerzuz. E  
on hon fezio-c'hoari ; Doue a-rôk ha ni war-lerc'h !  
ha Breizad bepred !! »

deus ar botred yaouank, goude ar ganouen-man, a  
zisplega, en gallek, eur c'hoariaden hano d'ei :  
ur Le Progrès. Chetu an daube anei aman : Eur  
mekaniker, keisten penn kil ha troad, an eus en  
radek, o ren an oberourien, eur pôtr yaouank hag  
ean, dre ma 'man lezen Doue kizellet doun en e  
kas dro hent al lealder ar re a zo dindanan. Lod  
re-man, tonellet gand eun « anarchiste » (pe eun  
er) ha nan anvez nemet eul lezen hepken : ar Pro-  
foar gand mado hag evach ar mestr, hag a glask  
o laeronsi war ar pôtr yaouank, mez ar wirionez  
dale dizoleot hag ar c'huzulier digalon tapet ar  
ntan eleiz e c'heno. Ar gentel a deu goude : ijin,  
ok, frankiz da vevan a zo mad awecho hag eur  
k ac'h eur gante ; mez eun dra a zo hag ec'h eor  
loc'h gantan : sentidigez eus lezenno santel an

Otro Doue ; honnez a zav an den betek ar baradoz !  
Eur ganouen pe diou a glevet goude da c'hortos reizan  
al leuren-c'hoari hag ar gwiskamancho ha chetu e kroger  
gand ar pezh brezonek : **Job al Lonker.**

Job al Lonker a zo bet eur gwas anean ; eun toupart  
eo, frammet mad a izili, ha na oa ket brao c'hoarzin goap  
outan dindan e fri! Mez sionaz! « La Goutte » a lij d'ean,  
ha tamm ha tamm ac'h e deut da dibezel, evit pauko an  
hosteléri, e elar, e falz hag e holl binviou ; melget int  
mac'h eo eun draz-sellet oute ! E wreg haour, Mari  
Annan, dindan zaum an drubuilh hag an dienez, a zo  
klauv mado er gwel kloc' ha Job « La Goutte », eur min  
kalot en e greiz lec'h oa gwechall e galon, a ev ar gwin  
kinkinn roet d'e wreg klauv evit he fazei.

Keit ma ve ar fosse-houallo o kargan e gorf porc'hel,  
ar vugale haour a glem gand an naou hag an tad koz,  
brevet gand ar gosni hag al labour, a'n em sklej dre an  
ti, harpet ewar diou vranel, o klask eun tamm bara kraz  
d'e vithion.

Pôtr hennan Job al Lonker, en servij war vôr, an eus  
kasel en eur lizer tregont skood d'e dad. « Mari Annan, eme  
Job, c'han da Wengamp da glask louzo d'id. Ar mévier  
digalon a van 'hed an de-en hosteléri ar Marc'h green  
hag a zistro d'ar ger, leun evel eun tenn, gand eur van-  
den mastokined divergont. An tad koz a ouel hag a hir-  
voud ; tolet eo ha flastret d'an donar dindan dreid e vah.  
E keit ma skarzer boutailhad war vontailhad, ar c'homjo  
louz ha goloet, ar c'hoarzedanno diaoulek a ya endro evel  
eur bar grizil pe eul laz-dornan ewar al leur. Mari Anna  
a zifronk en he gwele.

Chetu embannet ar werz ewar di ha parko Job al  
Lonker hag ar martolod a zigone er ger, liou ar marv en  
e gere'hien o klevet eman e vamin er vered, hag o kaont e  
dad meo-dall ouz stern an dol. Fountet gand ar vez,  
goude bean roet d'ar meourer krenvan kentel a roas bis-  
koaz eur mah d'e dad, e kinnid deus e dad koz, evel  
bevet en e c'hla'char, en eur laret d'ean : « Na vin mui  
gwelet er vro-man ; ken a vezo en baradoz an otro  
Doue !... »

Ar pezh diwean-man a zo bet c'hoariet deus ar gwellan  
gand ar botred yaouank : lakel o deus ennau o holl galen  
hag o holl ijin. Ar strakadek daonam a save evel heb  
paouez hed ha hed gand ar parko, hen deus diskweet d'e  
ar blijadur a zo bet ouz o c'hlevet.

Eur zôl ha diou pe deir ganouen, ha chetu achu an  
didud al vo komzet pell diouti en Runan ha war dro.

An otro Vezn, mer Runan, en hano an holl dud a oa  
o chelaou, an neus tregareket an dud yaouank....

Potred Ploezal, diskweet ho peus hirie e oa karante  
Doue hag euz Breiz-Izel beo-huek en ho kreiz! Dalc'hiet  
da vent war-rôk! War an hent mad ac'h oc'h ! Ma vije e  
peb' parour eur strollad tud yaouank evelloc'h bepred  
en par da c'houren evit difenn ar Vro, ar Brezonek, al  
Lealder hag ar Feuzec'h, heffe ar skipailh daonet a zo o  
verzerientan hon bro haour, lipat o loaz ha plegan o  
stal!

Bebet ar fe! Eur da Vreiz!

X...

## AR YAOUANKIZ HAG AR C'HOARIZ

Ar Yaouankiz.

Ha da belec'h e kerrez, Korreiz da?  
Na lij ket d'in gwelet da zac'h ludu ;  
Re denval out ; deomp pep-hini 'n e dut!

Ludu, ludu? gwelec'h eo meurlarjez ;  
Eur c'holl braz eo ne c'hell padout bemdez !  
Mez da ludu, da betra eo mad hennez ?

Hon enoui, netra ken na glaskez,  
Rag pinijen n'eo nemed digarez.  
Kemeromp 'ta pep-hini e gostez !

Ar C'hoariz.

Ar Yaouankiz, a hed ar c'hantvejou,  
N'en deuz klasket nemed c'hoantegeziou,  
Bep seurt c'hoariou, bep seurt plijadurioù.

Ar Yaouankiz a zo penn avelet,  
Ho daoulagad a zo ken her-welet ;  
War greiz an de o deuz poan o welet.

Deomp d'an iliz 'vit an ofern vintin,  
Deuz war ma lerc'h ha deuz buhan ganin,  
Izel da benn ha pleget da zaoulin !

Ar Yaouankiz.

Mez da betra mont d'ober pinijen?  
Me a zo stard ma zreiz war ma jijen ;  
Me zo hirio em c'haez sklerijen !

Ar C'hoariz.

Kalz a re all a lavar evelse,  
Diouz e vue ne zistag den morse ;  
Arok mervel e larer : « Marizez !... »

Peurlag ez oud ouz gwezen ar vad,  
Peur e savo, lavar buhan d'in-me.  
Falc'h an Aukou da dol da benn er be ?

Eur harr avelet, pa zonzjer neubeta,  
A c'hell terri ar skour ar c'holeta.  
War da jijen ha stard ez out eta ?

Ar Yaouankiz.

An Aukou koz n'eo ket deut e marz ;  
An eost em fark, me gred, n'eo ket dare !  
Me c'hell eta ehati adarre!

Ar C'hoariz.

An amzer fall a zo buhan digouet ;  
Ganti an ed, hep beza darevel,  
'Zo dastumet, tolet d'an traon, flastret !

Ar Yaouankiz.

Gwir a hiraz ; red beza prest eta.  
Greomp pinijen : piou a rey ar muia ?...  
Ni a gano goude : « Alleluia ! »

SPERN-GWEN.

## TRISTIDIGEZ..... POAN-GALON

Goude loin an daou veleg ha ma a yeaz d'ober eur  
bale « Mac'h alamp d'ar Gouent, eme unan, da waled  
al Leanez? — Mad eo d'imp! eme ar re-all... Ha  
setu-ni d'ar Gouent. Dre ma tostomp hon c'haoz, beteg  
neuz sefer ha draut, a goueze ; dirag hon zellou na oa  
nemed tristidigez....

Ar Gouent, gwechall ken kaer, ken laonen gand c'hoar-  
rion ar merc'hed bilhan a daremprede enni ar skol gristen  
ha kû al lapoused a richane bemde en gwe-braz he far-  
keier a oa breman ziou ha didronz. Laret e vije warni  
eur c'hanv pe eur walen bennag. Zebiantout a re mare ;  
anken an amzer gri-man a skuille warni peuc'h yen ha  
glac'haruz ar be...

Pa dostajomp outi, na welchomp den, kouz laret. Eul  
leanez a zigoras d'imp ha, goude bean hon c'haset d'eul  
lec'hik dizro, e tec'haz hep laret gir. Eno e ehomchomp  
da c'hortoz al leanez koz, penn-reneres an ti. Houman a  
'n em gavaz hepdale. Hon digemer a rezz gand plijadur  
hag e kontaz d'imp doare ankeniz he C'houent. Hon zri  
e silaouchomp anei gand kalz a zoursi... Oh! nag e oa  
traezuz sonjal en he foanieu! — « Da gentan, emel, al  
leanezed all ha me n'hallemp bikan sonjal o vijemp taolet  
e-maez hon zi. Kement-se, herve hon c'hreden, oa bef  
laret evit sponta ac'hanomp. Memez tra dirag al lezen-  
nou henruz gret gand Komb eneb d'ar c'houenchoù, an  
anken a grogaz ennoomp... Bemde e kleven komz deuz  
c'hoarezed d'imp bet taolet war ar ru ha lemet digante  
o bugale skol... Bemde an eil torfed a deue war-lerc'h  
egile ha hepdale, marvad, hon zro a'n em gavche... Oh!  
pa sonjeomp dilezel hon C'houent, dilezel hon bugale,  
kwitaat hon chapelik koant ha nevez-zavet, hon c'halo-  
nou a ranne! Nan hall den kompren ar boan-za nemed  
neb a zo tremenet drezi!

Beva' remp evelse deuz an eil anken, deuz an eil poan-  
spered d'eben. Eun devez e ligouez ganin eul lizer, en  
lizer a-bourz ar Gouarnamant : Hon Urz, an tu-hont n'ag

Heuilhet 'm euz penn da benn ma flaneden grevaz,  
Dibuhet ma c'huden; sola ma evruz,  
Bremen 'c'h in adarre d'am Bro Gerne-Uhel  
Da selaou an estik en kaouj Kanuhel.

PENHOARN.

**Kan en eor da Dom Per ar Bourdonnec**

Bet merzeriet e bro an Tibet.

Kloerdi Treger, bezet joaz,  
Rantel deat gloar d'an Otrou;  
Ho tifenner dirag Jozuz  
Eo Per, merzer Jouillo;  
Diadan e lore lugeranz  
Kerzet war-zu an Neuve.

Per Bourdonnec, belek evruz,  
Enor ha gloar Plouillo,  
Dre eur verzerenti poanias,  
C'heus goneat ar joaz;  
Ni laouen er bed trubuilhuz,  
Beta mervel hoc'h heuilho.

'Vel sant Millo, tad ho parroz,  
C'heuz kerzet war-lerc'h Jezuz;  
N'ho torn e lufr, er baradoz,  
Lore ar merzer skeduz:  
Gant eur vouez liziz, de ha noz,  
C'heul veal an Oan gloriuz.

C'houi ar c'hentan hoc'h euz skuilhet  
Ho koad denz kloerdi Treger,  
Ha groll gant tud gwo an Tibet,  
Kristenien vad ha zefet,  
War ho lerc'h ni groll hepret  
War rouje zekr hon Zalver.

En Landreger, en Plouillo,  
Tud vad ho pro sikouret;  
Kerzet prim nep ho pella  
Gant eur fe krenn ha kaled:  
Ar veleien, o farrojo,  
Rag an dud fall diwallet.

Groet ma vo goad er verzerien  
A neve ham talvouduz,  
D'ober had fonnuz kristenien  
Da wir iliz ghan Jezuz,  
Miret ouz e anebourien  
Pi deked, Pab gloriuz.

War ho mam gez, Per Bourdonnec,  
Ho pennuz puih skuilhet,  
Diwallet ho tud kalonek,  
Ha Per Derrien, tad karet,  
Nerzet Per, eskop Zant-Briek;  
Kloerdi Treger biniget.

Deuz lein an neuv taolet evez  
War Vreiz, en amzer gri-man:  
Diseg galloud ho canteler,  
Peb draeg a gerzo buaz;  
C'houi hon sturio d'al levenez,  
Merzer ar Vro Breiz-Vihan.

O Plouillo, parroz evruz,  
Pegen bras eo da evrad,  
Kavout eur merzer gallouduz,  
D'az tiwall en peb gwall-stad,  
Enor eun den ken talvouduz  
A digas d'ad bep sort mad.

Krog, Laouenan, deuz lein an Ne,  
Buteou, deuz ar baradoz,  
Kanet gantimb 'r merzer neva,  
Ha roet d'imb ho pennoz,  
Kanomp oll drant gloar da Doue,  
Evel gwechall hon zent koz.

Reit d'imb ar c'hras, mar be ze red,  
Beal evlodo'c'h merzer;  
Rantet d'hon ine mastaret,  
He gened hag he c'haerder,  
Kerzet 'h mervel, ni Bretoned,  
Wit bout treitour d'hon Zalver!

Merzer evruz, ni ho supli,  
Roet d'imb gras er bed-man,  
Da garout Jezuz ha Mari,  
Beteg hon eur diwean:  
Groet an fomp eo bro an dud,  
Lagouz gant 'h da gano.

PENON Tachon.

**PARDON SANT ERWAN TREGER**

Prezegeñ an aotro abad Bescond.

Kaer ec'h e bet pardon sant Erwan. Ar brezegeñ vre-  
zonek hag a oa bet lemet diganimp ar bloaveziou arôg,  
a zo bet distroet a drugare Doue...!, hag ive a drugare  
d'an aotro abad Bescond, person Peurit an hini an euz  
prezeget. Brudet eo an Aotro Bescond da bevar c'horn ar  
Vro ha n'eus ket eorum da laret pegen mad en deuz hon  
c'henteliet diwar-benn sant Erwan. Bennoz-Doue d'ezan!  
Evel hon deuz a laret ar zun divezan sant Erwan eo  
paeon hon Bro Breiz-Izel; hen an euz difennet dalc'humad  
en e vuc hag a dalc'h da zifenn er baradoz hon gwiriou  
evel Bretoned. Neket eur pardon ordinal eo goul sant  
Erwan; gomet ar Vro an hini eo. Daoust n'hellomp ket  
bremen lida deread ar gouez, n'hon ankouamp ket ha  
padomp oll en deun hon c'halon hon faeron karet evit hon  
Mam-Vro Breiz-Izel.

**KERMARIA-SULARD  
PARDON SANT ERWAN**

Na kaerat pardon! Kanet an ofern bred ha graet ar  
brezegeñ gant an aotrou Hamon, rener kolaj Landreger.  
Diskouezet an euz d'an oll e tlefen bean tud a galon evel  
ma oa sant Erwan en e vuc, gouest da difenn o gwiriou, o  
fe hag o beleien evel ma re gwechall hon zud koz. Tra-  
gare d'hon person mad an euz savet ar gouel ha mil ben-  
noz-Doue d'ar prezeget dispar a chomo don ar zonz eus e  
gomzou en kabon parousianiz Kermaria.

L. C.

**ARZUR A VREIZ**

Trajedien e pomp Arvest, tennet euz histor Breiz  
GAND KLAODA.

(KENDALC'HE)

TREDE DIVIZ

Rohan ha Loheak.

Rohan. — Komzit, Laou, me ho ped, perak oc'h-hu  
enkrezet?

Loheak. — Gouzout a rit penaoz eo deuet an duk  
Yann, dre e gomzou flour hag e droiou kuz da veza  
mestr war Vro-Zaoz, daoust ma tlie ar grunen, goude  
maro Richard-Kalon-Leon, digouezout d'e genderv Arzur.

Rohan. — Gouzout a ran an dra-ze; hogen, kredi a  
ran n'eo an duk Yann en em garget nemed euz kulato-  
riez ar prins yaouank; ouspenn-ze, pennou braz Bro-  
Zaoz n'o deuz ket c'hoaz lavaret e kavent mad bolontez  
diveza ar rote Richard.

Loheak. — Gwir eo. Hogen, Yann an deuz gouezet  
gounid mignouniach Filip-Aogust, roue Bro C'hall, o  
kinnig d'ezan an Normandi, gand ma vezo sikouret pe  
lezet gantan da lakat e graban war heritaj e vreur Ri-  
chard.

Rohan. — Hag ec'h hellit kredi e rofe Filip-Aogust e  
aotre d'eun emgleo ken mezuz?

Loheak. — Kaoziou klevet gand dudjentil gall am  
doug kalz da gvedi.

Rohan. — At gouzoud a ran ez eo an duk Yann  
enoget o klevet ober Yann-Dileve anezan; e dad an doa  
e vallozet ha roet e dra d'eun all.

Loheak. — Ar pez a ro d'in ar muia sonez eo en defe  
ar roue Richard great eun testamant e-kenver eun den hag  
a zikouraz an duk a Aotich d'e deuler er prizoun!

Rohan. — Hag ouspenn-ze, ha bez' ez euz e gwirionez  
eun testamant?

Loheak. — Led a lavar, re-all a zislavar.

Rohan. — Mez neuze...

Loheak. Ar Zaozon na c'hoanta tamm ebet kaout da  
vestr eur prins evit pehini n'o deuz nemed kasoni; ha  
doareou Yann e-kenver e vreur a lez ac'hanon diskredik  
war eünded e oherou. Da c'hortoz Yann-Dileve a zo fal-  
vezet gantan beza kurunet e Londrez, ha den n'en deuz  
savet e vouez da lavaret n'oa ket leal kement-se.

Rohan. Ar wirionez a vezo anavezet ahred pe zivezad.  
Gwal-euruz eo e've re yaouank an duk evit difenn e wir  
dre an armon.

Loheak. — Pion oar ha n'en devezo ket tro d'en  
ober dizale? An aotrou Arzur a anavez mad talvoudegez  
e varcheien a Vreiz-izel. Ra lavaro eur goms hebken, ha  
war an eur an oll dudjentil, e wazien, a gemero o  
c'hlezeier hag a yelo da Vro-Zaoz!

(Br-meaz e klevet an drompilh).

Rohan. — Petra eo kement-ma?

An hevelep re, Arzur, Keroman, Olier, Laou a Reier,  
Gwiomar, Horve a Leon, Lan a Zinam, Malestroa,  
Dijentiled, Floc'hed, Mevelien, Soudarded.

**Eur Floc'h.** — Hon aotrou Arzur, duk a Vreiz-Izel!  
(Ar broseion: Dijentiled, Dougerien banietou, Tud  
a vrezel, Floc'hed, Mevelien, a gemero flasou er zâl, —  
Eur Floc'h a zoug eur c'hleze noaz war eur pluek,  
Arzur a zoug e gurunen war e benn).

**An dud a Vrezel.** — Noël! Noël! d'hon aotrou ben-  
niget Arzur!

**An Dijentiled.** — Bevet Arzur, duk ar Vretoned!  
Arzur. — (A ya da azeza var e gador.) Bennoz  
d'eo'c'h oll, Marc'heien kalonek! Bennoz d'eo'c'h ive, Tud  
a vrezel! Euruz oun hirio euz oc'h euruzded!

**Lan a Zinam.** — Prins, gwelet a rit en-dro d'eo'c'h ho  
kwazien feal ha karadek. Gand plijader e reketont d'eo'c'h  
eun donedigez hag eur ren euruz!

**Arzur.** — Ra c'hellin, lakat da bara adarre var va  
zujidi muia karet deveziou Hoel-ar-Meur, pere a oe ker  
skeduz! Dirak aoter an Doue holl-C'halloudek oc'h euz  
klevet ac'hanon bremaik o toni e virin atao gwiriou an  
Iliz hag ar veleien! Red eo d'in brema, e kastel va zud  
koz, ober eul le-all. Digasit d'in va c'hleze. (Ar floc'h a  
dosta hag a ya d'an daoulin dirak an duk.)

**Lan.** — (A gemer ar c'hleze hag e ro da Arzur.) Va  
aotrou, setu ama kleze Jafre, ho tad. Touit eta var ar  
groaz a zo oc'h ober dorn d'ezan, e virfot hag e tifennot  
bepred gwiriou an noblans, hag e klasfot bepred mad ho  
sujidi.

**Arzur.** — (Oc'h astenn e zorn var ar c'hleze.) Dirak  
Doue ha dirazoc'h oll, baroned feal, soudarded kalonek,  
marc'heien, hag all, e touan var ar c'hleze-ma e virin  
bepred hag e tifennin euz va oll nerz epad va buez ho  
kwiriou ha kement gead vad a zo bet roet d'eo'c'h beteg-  
hen gand ar re zo bet em raog. Ra vo va le klevet gand  
Doue!

**Oll.** — Bevet Arzur a Vreiz-Izel! Noël! Noël!

**KANAOUEN**

Musical notation for the song "Arzur a Vreiz". It consists of three staves of music with lyrics underneath. The lyrics are: "Be-zomp holl la-ouen, Bre-to - ned, En-deiz-ma kaer ha ben-ni - get; Se-tu ku - ru - net hon-Duk ker, Be-zomp holl la-ouen ha se - der!"

Bezomp holl laouen, Bretoned,  
En deiz-ma ker ha benniget,  
Setu kurunet hon duk ker!  
Bezomp holl laouen ha seder!

Var e dal diroufen ni wel  
Sked ha gened hor Breiz-izel  
Hag en despet d'e yaouankiz,  
Arzur zo leun a vailhantiz.

Honor, gloar ha mil meuleudi  
Da vestr nevez ar Vreizidi!  
Noël! Noël! Bevet Arzur!  
Bevet hon Duk yaouank ha fur!

Beteg-hen sae an herminik  
A oe distlabez ha gwennik;  
Outi 'z euz-staget eur goabren,  
Hag a rey kalz a sklerijen.

Doue, a c'horre an envou,  
A skuilh hirio puih e c'hrason,  
Var vab enoruz an Duked  
A gemer stur ar Vretoned.

Pell diouzomp an dristidigez,  
Ra vo an oll el levenez,  
En deiz-ma kaer ha benniget,  
M'eo hon Duk Arzur kurunet!

Honor, gloar ha mil meuleudi,  
Da vestr nevez ar Vreizidi!  
Noël! Noël! Bevet Arzur!  
Bevet an Duk yaouank ha fur!

(Da heuilh).

KLAODA.

**GOULENN** e bureo ar Groaz: Gwerstou sant Erwan, al  
Labourer, sant Millo, sant Konevi, hag all. Eur gwennak  
ar pez.

Saint-Nicolas, — Imprimerie Saint-Guilhem.



# KROAZ ar VRETONED

## KOUMANANCHOV

Eur skoot ar bit evit Breiz ha Bro' c'hall.  
3 skood, evit ar laouen estren evit ar Breiz bettelh.

## SEKIV AN ARZOURIEN

Res ar lezoniou pa'z an Ouz VALLÉE, Rener, ru Zant-Benoit, Zant-Briek,  
pa'z an Ouz MOAL, Arzour, 27, balk Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Eur gwennek pep erredennad skritur.  
(Diseaso a breiz evit meur a embanno diou-lev).

Ar brezonek hag ar Iela.  
A se breiz ha c'hoar so Breiz.  
Pivrez ar Gela.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek eo alioa-Vreiz.  
Pivrez ar Gela.

Dalc'hit tapred d'ho brezonek,  
Yez an dud vid ha kalonak,  
Yez an Iela eo ; ma vo brezel,  
Ouzpen ar Vro, a vo Defez!  
Mazp.

## ALUZENNOU DIGANT NON LENNERIEN

An Aotro abad Deniel, Ploezal. . . . . A real.

## LAEON BELEIEN

Kredi a re d'an holl en Breiz-pendaz gant lamp Komb  
o ea ive acha ar brezel hep hano grous out ar brezonek. An  
darnvulen a sonje a vije ket welllec'h ar vro dindan zenn-  
dor ar C'hombe neve eget na eo dindan an hini koz ; ha,  
ma chome c'hoar unan bang d'avar pe ne'het war stad  
an amzer da zont, da vrasus na grede laret netra gand  
son da vezan gompact pe kemeret 'vid eun den diekiant ! ..  
Ma, daoust da sonjon, an holl, an-tro na gerzont ket well-  
lec'h hirie gant Rouvier evit ma'zont de'h gant Komb ha  
n'eo ket hep abek e laren da lennerien Kroaz ar Vretoned,  
bremen 'zo daou pe dri miz, e talveche ar Gouarnaman-  
nave an hini koz ; marize zoken en eur goll eur  
born o kavemp, eun dall ! Deut oa ganin ma gir da wir :  
kasoni potred Bro-C'hall nan eo tam distant eneb da  
Vreiz. Evit kemer muioch a vezz ha skei marize gant  
muioch a gounar o deus paonezet eur pennad. Setu perag  
e welomp bremen, goude eun tam diskiz, lemmet e bae  
digand an aotro Huonik, kure en Pred. Petra an euz groot  
ar belek-man a c'hrouez evit tenna warnan milloz ar  
Gouarnamant ? Nebeud a dra ! .. Hag en gwirione, pa  
bomez an den digare eun taol ken divale, e kose e ziou-  
vrec'h digantan . . . pa glev laret e vo laeret eur belek ka-  
lonik abalamour ma kontz ha ma kelen an dud en bre-  
zonek deuz lein hader ar wirione, e ten da laret duetu :  
« Ma, 'velkent, red eo bezan fall ! » Yo, beavoiz ha mi-  
gnoned ker, red eo bezan fall ha kad eur apeted diou-  
lek ! ..

Na fell ket d'in hirie barn ar Gouarnamant. Gourveont  
a reomp holl petra a solve, pegwir ez eo fall, e oberon  
kennebed n'hallont ket bezan mad, rag eus eur zach  
glaon na denio biken a v'end ! Mes evit marize e bae di-  
gand an aotro Huonik hag ar veleien all a Vreiz, daoust  
hag ar Gouarnamant n'an euz ket laket estrenan hag ar  
veleien, eun zli fell bennag, eur statonih evel ma vo  
laret ? Eo, a dra zuz, rag pennoz braz ar Gouarnamant  
na denont ket da chilaon ar belek o komz 'harz ar gadar  
d'ar zul. Dre-ze, eta, o deuz renkret evid ober o zorfed kad  
unan bennag d'o skozelli ha da rei d'o alion pe gentelion  
diwar-benn ar veleien. Hirie e vo kad obeulien awalch  
evel se en pe parrouz, hag an dud-ze eus o mieler a zo  
hanvet : *laeron beleien* !

Petra eo al laer beleien ? Ech an d'hen laret d'ac'h en  
nebeud a gomzo. Al laer beleien a zo eun den divale-tre,  
hep anaoudegez na skiant. E holl c'hallond a zo implet  
d'ober ar fall ! Achane e tap e dammik brud . . . E vus  
penidik na daly ket peurvuian daou liard toull ! Evel  
n'an euz ket eur gwennegad anaoudegez ha nan hall 'n  
em gad netra nag en e barrouz, nag e lec'h all ; evel ma  
'z eo ankouet gand e amezien, pere a gemer anean  
evid eur zod, ha ma zo ennan kalz a lot'h hag a c'hoant  
da 'n em gavout eun dra bennag, da vezan eun aotro po-  
bluz ! en eur gir da lakaat kaozeal outan . . . evelse en em  
wera d'ar Gouarnamant . . .

War heman ar Gouarnamant a c'hall konta. Evid eur  
zeblant a enor hag a vrad, a vo groot gantan kement mi-  
cher louz a vo. Ma na gerz ket baban awalch gand e  
hent, evid hen kennaerza, e vo staget euz e borpan (e chu-  
pen) eur pennad lietez ru pe glaz-moug. Neuze avad e  
koffo ar pôtr e benn ! Sonjel 'ha, hazan ofisour an dra-man  
pe an dra-zel Allez zoken goude, na vo ket gouest da  
skreiva daou c'hir gallek dueta, a vo hanvet : *Officier  
d'Academie* ! mar plich !

Setu aze, mignoned ker, pollred al laer beleien. An  
den-man an euz breudeur, kender, pe gerent tost en peb  
parrouz. Kad a refet anean en peb lec'h nemed lec'h vo  
dleet d'ezan bean. Moad a roy d'an ofern bep zul, nan  
evel kristen, mes evit gadal ar belek 'harz ar gadar. Ar  
belek a zispijo d'ean ! Kerkent e vo kaset eur gir da  
Zant-Briek pe d'ar gêr-veur euz a behini e tigoueo e har-  
rouz. Eun touhad devesion goude, ha hep barnediged  
s'bed, ar belek a vo laeret. Evid digare pe evit kuz e dorfed  
an aotro ru a gano d'an holl : « Ma zud kez, ma e zo  
vouezet braz gand ar veleien . . . » Petra 'ra d'e kenderel  
da gomz brezonek en ilioz pegwir e fell d'ar Gouarna-  
mant gwelod ar e komz gallek ! .. O-unan, ma zud vad,  
ez int kiriek d'ar ger en em gav-gant ! Ar Gouarnaj  
moad a zo reis hag a ra eun dra-gant-gallied . . . Ma Doue,  
ma harpent ive 'vad senti ! » Has an aotro, preslik awalch,

a onelo muioch — hep skeith d'eron ! — war stad ar  
veleien baour eget na vez ar veleien o-unan . . . Ma kar-  
font zenti ! Ouz pion die ar belek zenti ? Ouz Doue pe euz  
pôtr e lietezen ru ? Me grede e lieto muioch da. Zeus evid  
d'al lamponed-ze ha pa zenifont ouz Doue e kelenfont ar  
Breizad en yez ar vro da laret eo : EN BREZONER !

Gwir eo, lemmet o fae digand ar veleien abalamour  
d'ar brezonek, nan eo nemed eun digare. An dud dife, al  
laeron beleien a garie a greiz o c'hallon vrein hag o drem hudur ar  
belek a zo eur-mezellour ! Eur pen-vil na zell kammed  
euz ar mezellour !

Ar hôtred-man, al laeron-veleien, an em gavo o vro.  
Eun de a zo o tont hag e welomp ane pe o bugale viban  
o vervel gand an naon hag int paour evel Job. Pa voint  
gwelod o tremen an dud a laro : « Dorn Doue a zo warné !  
Ted pe dud koz an dud-ze a lakaz laerez o fae digand be-  
leien o farroz en amzer goz ! Neuze an holl a be'ho  
diourte evel diouz chas klaveet.

Da c'hortez, ni gwir Vretoned tud a fe hag a-galon,  
kasomp hon gwelan mennoziou d'ho beleien laereh,  
dreist-holl d'an aotro Huonik ha laromp da lamponed ar  
Gouarnamant :

Hon beleien gomzo dalch'mad  
En yez kaer o mam hag o zad ;  
Lacret ane 'tal Forz a zo,  
Bevans d'o biken na vanko !

AR YEODEZ.

## PARDON ITRON VARIA SANT-KARE

Ouspenn an Itron-Varia-Wir-Zikour-Gwengamp, an  
Itron-Varia-Rünnegol, an Itron-Varia-Folgoat, an Itron-  
Varia-ar-Portjou, an Itron-Varia-Rostrea, kunnat an eil  
hag eben ; ouspenn Itron-Varia-Roek, ouspenn Itron-Varia-  
Ar-Yeudet-Ploentieh, Steredan ar mor glaz, ouspenn Itron-  
Varia a Wir-Vaue, eur guranen fao en dro d'he zal, ou-  
spenn Itron-Varia-Vulat gand he iliz kaer, he zour hir  
dantelezez, he c'hlonh' braz hag he feuntension bolzet, a zo  
en hon bro laec'hion zantel darempredet a-bell-ze en enor  
d'ar Werc'hez Vari.

Chapel nevez Itron-Varia zant Kare a zo unan and. Oñ  
lennenien vad Kroaz ar Vretoned a zo pedet da zont en  
kers' gouestou Pask-Blhan ar Pentekost da bardona da  
Zant-Kave, pedet gand o mam garet ar Werc'hez he unan  
a ra kement a vad d'he c'hallon dinam klevet lavaret ar  
chapel en brezonek ha kanan gwerzion koz ha burzudou  
in yez zantel Breiz-Izel :

Eus holl yezou ar bed, nen euz ket a garan  
'Vel hini Breiz-Izel, heñnes eo ar c'haeran ;  
Nen euz hini er bed a vo ive koad koz  
A-dalek ar sav-heob, betek an hanter noz ;  
Eus holl werzion ar bed, re Vreiz zo da gantan,  
Ha vel-se pa venn-triet, 'n em likan da ganarj  
Eur werz koz eus ar vro, eur werz pe eur zonik,  
Ha kerkent da droidal laouenn ma c'halonik.

Deomb 'ha da hed ar Werc'hez  
Leun a c'hallond, a vadelez.  
Meulodi d'ar Werc'hez Vari,  
A yac'ha peb poan ha gouli !  
Gloar ha meulodi d'ar Werc'hez  
Leun a druez, a vadelez !  
Kanoñb holl d'ar Werc'hez Vari ;  
Gloar, karantez ho meulodi !

Ebars an touz 'vrall ar c'haier :  
Nag a groaz aour, nag a vanier !  
A linc' en heol, 'nij en avel  
Nag a bob, d'irodet-a-bell !  
Jezuz, ksera prosession  
En-dro da iliz hon itron !  
Hag a beb korn a Vreiz-Izel,  
Ha deus a dost ha deus a bell,  
Ar re glanz, ar re vac'hagnet,  
'N deiz he fardon, 'don d'he gwel.

Hag e pedont hag e kanont,  
Hag a greiz-kalon e laront  
— « Mari, karget a vadelez,  
Bezest tinez ouzimb, Gwerch'hez ! »  
Kals deus eno gand flanon,  
'Weler bremen er gourennou.

DÉPRÉD BREIZAD.

Ar pardon a zigoue an dek, an eunek, an daouzek hag  
an drizek a viz Even, miz ar Galon Zakr a Jezus. An oio  
Huerou-Keriael, person Plistin, a vo o'ch ober ar pardon.  
Eun tad missioner a vo o kovez ar beleiered ha musik  
skol Gwengamp a zeulo d'ar zul.

Bennid Doue 'ha banno ar Werc'hez da gouez war  
goment kristen a zont d'ar pardon !

## KAERDER AN NOZ

En divez ho tevez, arack mound da gousket,  
'N eur c'hoat pe 'n eul lannek n'ho h'ig biskoz cromet,  
En eul lec'h distro pell diouz troyz ha safar,  
Da hunvreal en noz ouz sklerijen al loar ?  
Evidon, meur a wech, 'm euz bet 'n em ankouet,  
Da zellet ouz haerder an noz steredennet,  
Da zellet ouz al loar, Rounez an nozion,  
O neuzial dudiz ebarz boz ar Nevou . . .

Pa sko war an douar he sklerijen Hou-kouar,  
He bannou hir noze a lak peb tra dispar !  
Didanne peb traouien, kuzet gand eur voren,  
A zeblant eur ster vraz pe eur gaer a bleens,  
Ma kriben peb mene dreist d'an holl blesseoz,  
Zo 'vel eun ennez kollet kreiz ar morion !  
A bep tu d'in neuz nan euz nemed dadi,  
Kement tra a welan a zo d'in neventi . . .  
Ar gwe brax ha sioul a zistag o skeuden,  
Reiz, reiz war an douar dindan ar sklerijen,  
Hag eo o daifrou glaz 'vel en-toue o brankou,  
Al loar wen, 'n eur c'hoari, a strik n'erz he bathou ;  
Ar re-man d'an douar a guse ken drem ive,  
Ma kred d'an den besan e-baz bro an Hunvre !

Mes ma tec'h ac'hano 'vit gwelod uhaloc'h,  
'Uz d'e zellou a zo eun daolen kalz kaeroc'h !  
Ar stered lugernuz, hadet, a villierou,  
A zo evel pelez en splander an eabou ;  
Trei, diare a reont, dalch'mad 'maint o linri,  
Eun nerz a zo ennet hag a ra d'e birvi,  
Ma 'z int evid an dud mignoned foalsuz  
Pere a lavar d'e dra o zellou skeduz :  
— « En-treuz an Nevouz zavet ho kalanou,  
Ha war-zu ho Toue kaset ho pedannou ! »

Evurusoc'h pell, pell 'vid an evurus,  
En e hunvrediger an den an em ankoua . . .  
Nan eufe ket biken laset ar bijadur  
A zo en e galon, — hen paour kez kronadur ! —  
Pa glev en dro d'ean eur vonez kreiz ha tener :  
Mouez vraz ar bed divent o veuh o Grouer !  
Eur pennad d'he silaon heu a chom zebezet . . .  
Ar vonez a zo ken kaer . . . ganti eo gonc'et !  
Ha stouet d'an daoulin, e unan gaid Doue,  
'N eur zellid d'an Nevouz, ganti e lar ive :  
— « O Doue Galloudur ! dirag ho labour gaer,  
Ma c'halon, ma feden a zo o drou mister . . .  
Mes 'n'an eur nemed ! » Silaonet ma menad !  
Grot 'n'ho karan n'ez, heu ardouz ha dalch'mad !

AR YEODEZ.





# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoot ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar luioù estren evit ar Broia Hellioù.

## SKRIVANIERIEN

Eus al Jaleupou pe d'an OIRO VALLÉE, Rense, Yu Zant-Bedeat, Zant-Brick.  
pe d'an OIRO MOAL, SKRIVANIER, 27, balt Charner, Zant-Brick.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwonek pap emskontek-skiter.  
(Diskenn e breiz evit anez a embann d'ezho.)

... krouezek hag ar feiz,  
zo breiz ha c'hoar en breiz.  
Furnez ar Geiz.  
... kant breizonek eo deud ar feiz,  
sant ar gallek er sio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hil hepred d'ho breizonek,  
Yez an dud vad ha kalonek,  
Yez ar feiz eo ; ma ve t'rochet,  
Goupen ar Ver, o vo Pezhall  
MILIN.

## YAN-E-ZAC'H

Yan a oa bet soudard pemp ploa warn-ugent. Deuet da  
vea dinerz gant an oad hag an taolion kleze an doa bet  
er breizelioù, no oe kavet mad da netra ken. Lavaret e oa  
d'ezan mont da foueta e diantel 'leac'h ma karehe hep  
ei man ebéd d'ezan nemet eun dorz vara tri lur hag eur  
vozadik mounei.

— « Seirl! eme Yan, goude bea bet soudard pemp  
ploa warn-ugent! Benn an dro genta ma teuin war an  
kouar n'eo ket me a vo soudard!... pemp ploa warn-ugent  
ha vilham! Mes petra d'ev d'in klem? Doue a bour-  
eo. » —

Hag hen en hent.

Hogen, d'ar beurevez-se, Jezuz ha sant Per a oa o  
koinata. Evel daou zen paour e oant gwisket. Dizale e  
figouehont gant Yan, ha Per da c'houlen an aluzen  
gant.

— « Rei a-walc'h, eme hema, Koulskoude, me 'zo  
bet soudard pemp ploa warn-ugent ha n'am euz ket bet  
eun tam nemet eun dorz vara tri lur hag eun dornadik  
mounei. Met ranna 'rin ganeoc'h a galoun vad. Dalc'h,  
setu ama bep a lur bara d'eooc'h ho-tou ha bep a doullad  
gwennein. » —

— « Bennoz Doue! » eme Ber.  
— « Ha d'eooc'h ive » eme Yan.  
Hag hen ha skei adare war-zu ne oar dare pelec'h.  
Per avad a lavare da Jezuz :  
— « Mestr, c'houi a dilefe ober eun dra benag evit ar  
zoudard kaez-se. Mad eo bet en hor c'henver. » —  
— « Memez tra, eme Jezuz. Kea d'a gaout ha ro d'ezan  
ar pez a garo. » —  
Ha sant Per da vont.  
— « Kleo, te hag a zo bet soudard pemp ploa warn-  
ugent, va Mestr a zo bet laouen gant ar pez ar peuz roet  
d'omp, ha c'hoant en deuz da buea ac'hanout. Petra  
'ho!... Goulten da zilvidigez. » —  
— « Diwezatoe'h. Me a c'houlen e tenio d'in em zac'h  
ama kement a garin. Goullo eo : ra zanto d'in ennau ar  
pez a fello d'in. » —  
— « Mad. Pa fell d'it e vo e giz-se an traou. » —  
— « Ho tungaekaad. » —  
Hag int pep-hini ons e du.  
Eur pennadik goude, Yan a dremen dirag ti eur mar-  
c'hadour bara ha silzik, Yan a ya d'e gaout.  
— « Eun dorz vara, emezan. » —  
— « Eun dorz vara! eme ar balañjer. Gant eun tam  
az po a-walc'h, michians. » —  
— « Na fell ket d'eooc'h rei d'in? » —  
— « Nau! N'az po ket eun tam zoken! » —  
— « Gret ho sonj, mar keret. Rei a ret? » —  
— « Tam! » —  
— « Bara ha silzik em zac'h! eme Yan. » —  
Ha setu ar bara ruih-disuih da gaout sac'h Yan, hag  
ar silzik kam-digam ivez.  
Hag hen a ra eur c'hofad egiz n'hen doa ket graet  
diskoaz.  
E-kichen eun hostaleri e sav seoc'hed gant Yan. Hag  
neu mont da c'houlen eur baune.  
— « Sort! » eme an hostiz.  
— « Pebez tud 'zo er vro-ma! eme Yan. Na fell ket  
d'e rei sort d'eur den bet soudard pemp ploa warn-  
ugent... Llou voutailhad sistr em zac'h! » —  
Hag e c'hall terri e zac'hed.  
Deuet an noz, e c'houlen lojeiz en eun ti.  
— « A roin d'eooc'h a galon vad, eme ar mestr. N'eo  
ket ama avad ; en ti braz a zo aze e-kichen. Ar perc'hen  
a zo maro hep beleg, ha hanoz eo teu en-dro d'ober  
reuz. Ma n'ho peuz ket aon o vont di, e c'hallet mont. » —  
— « Me 'zo bet soudard pemp ploa warn-ugent, hag  
son n'am euz ket gwech ebet. Mont a ran. » —  
Kout a ra eur gwele bouk hag hen da gousket. Wac-

do hanter-noz setu trouz en ti.  
— « Urz a zo da vont tro? » eme eur vouez loz. —  
— « Ya, ya, eme Yan. C'houi eo ar perc'hen a zo maro  
hep beleg marteze? Deuet. Me 'zo bet soudard pemp ploa  
warn-ugent, hag aoun n'am euz ket. » —  
— « Mad avad, eme egile. Setu an den a glaskan da  
denna ac'hanoun eus a dro skiffou Satan. Gret ar pez a  
livrin hag e vefac'h pinvidik evel ar mor. » —  
— « Memez tra! eme Yan. » —  
— « Deuet ganin neza. » —  
Hag ez eont d'ar liorz.  
— « Kemeret eur hal, eme ar mestr, ha toulllet ama. » —  
Yan a donll hag a gav teir fodez. En unan 'zo aour,  
en eil arc'hant, en dreds mouei.  
— « Sell, eme Yan. Petra 'rin gant ar c'hifinadou-  
ma. » —  
— « Setu ama. Ar mouei a rofet d'ar re baour, an  
arc'hant d'ar vellein ha d'ar c'houchou da bedi evidoun,  
an aour a vezo d'eooc'h ma ret kement-se, ha me a vo  
salvet ma ene. » —  
— « Mad, ober a rin! » —  
— « Ho tregarekaat! Bet war evez ouz an diaoul  
avad, rag drouk a vo ennau pa welo ac'hanoun o vont  
kwit digantan. » —  
— « Lez-han, eme Yan. Me dommo d'e ler ma ten! » —  
Yan a oe pinvidik hag a reaz vad dre holl d'an holl.  
Mes evel ma lavare mestr an ti braz, Satan a oe drouk  
ennau.

— « Tas ha kroun! den evit den!  
Pe n'eo ket me eo Satan ken! » —

e c'hope. Yan a renkin da gaout brema, ha d'in e vo  
kousto pe gousto!  
Hag hen da gaout Yan.  
— « Kren! paotr! » —  
— « Soudard oun bet pemp ploa warn-ugent, ha  
gwech ebet n'am euz krenet, ha n'eo ket rag eur c'höz  
tam diaoul evelout eo e kremen. » —  
— « Tankerru! Mil mallozi te zanzo! » —  
— « Oh! la la, paotr koant! na te a gomz brao! Te a  
zo o vont d'ober eun abaden ha ne oaz ket o sonjal enni.  
Eim zac'h! » —  
Ha Satan, kaer en denz yudal-diyudal, mallozi di-  
vallozi, a renk mont er zac'h.  
— « Ac'hanta 'tat eme Yan. N'am boa ket lavaret  
d'id? Gortoz! n'eo ket echu c'hoaz! Te a zesko lézel  
ac'hanoun e peuc'h! » —  
Hag e tap morzol eun torrer meiz, ha dare'haot war  
gein Paol Gornek ken euz graet yod gantan.  
Neuze e lez anezan da vale en eur lavarout :  
— « Deuez adare pa gari! » —  
Paöl ne jom bet da vare'hata. Digouezet en lfern e  
c'halv e varic'haled da voraiha an nor e gant aoun, emez-  
zan d'ezo, ne taufe Yan d'hou brazun ama!...  
Eur pennad brao da c'houde, Yan a oa deuet kiz-kiz,  
hag hen :  
— « Ma, marteze eo mall d'in mont da welet petra  
'zo en tu all d'ar bed-ma! » —  
Hag e sko warzu an neuv. Eno e kav sant Per.  
— « Mont tre a c'heller? eme Yan. » —  
— « M'ho peuz gret eur vad benag, marteze. » —  
— « Soudard oun bet pemp ploa warn-ugent. » —  
— « An dra-ze ne ra ket. » —  
— « N'eo ket awalc'h? » —  
— « Nan! » —  
— « Memez tra e lezoc'h ac'hanoun da vont ebaz? » —  
— « Ne rin ket! » —  
— « Ne refec'h ket? » —  
— « Nan! » —  
— « Eur wech, ober a ret? » —  
— « Nan! » —  
— « Diou wech? » —  
— « Nan! Nan! » —  
— « Teir gwech? » —  
— « Nan! Nan! Nan! » —  
— « Em zac'h! eme Yan. » —  
Ha sant Per a zo e sac'h Yan. Hen-ma a zamm anezan  
war e skoa hag a ya e giz-se er Baradoz.  
C'hoarzet a zo war zant Per, mes ne gounnaras ket.  
Ha Yan a zo eno abaque, ... nemet deuet e ve er meaz.  
Yan An Floc'h.

## EUR PRIZ C'HOAZ

### Pemp lur warn-ugent

d'ar c'henta strollad kristen a bôred yaouank eus Tre-  
ger a zavo eur gouel en quor d'ar Vro hag a c'hoarie  
eur pez e breizonek!

## PEDEN AR MOUSIK

### DISEAN

O Gwerc'hez ma mam zante!,  
Itron ar Gou-Yeudet,  
Chilaout mouez ar bugel,  
Zo dirazoc'h stouet!

Digouezet eo an smez,  
Red mad eo d'in birie,  
En despet d'am oad toner,  
Gouid ma zam bué.

An daerou em daoulagad,  
E kwitean ma Bro ;  
'Vel ma zad kor ha ma zad,  
'Vin martolod d'am zro.

Ar vicher a zo kaled,  
Hag ive ankeniz ;  
Gwerc'hez evidon meurbel  
Bezet madeleuz!

Roet dalc'hmad d'ar mousik,  
Roet d'ezan zikour ;  
Rag dister eo e lestrik,  
Hag ar mór 'zo treitour.

Pa yudo an avel fo!,  
Pa zailho ar mór braz,  
Gret n'ajo biken da golf  
Ar bugel ho karaz.

Neuze-pell diouz aoushou Breiz,  
Gand ar mór inskellek,  
Ma c'halon ebaz ma c'hreiz  
Sonjo er Gou-Yeudet!

Sonjal a rin em mammik,  
Hec'h-unan intanvez,  
Ha 'viti eur bedennik  
E kasin d'ac'h, Gwerc'hez!

Oh! pa deuzio d'ho chapel  
Bennoz da hirvoudi,  
Roet d'am mam baour skoazel ;  
Frealzet anez!...

Distanet d'ez he foan !  
Ma zad zo bet bouzet ;  
Ma varfo ar mous bihan,  
He c'halon 'no rannet.

O Gwerc'hez dans ha dinam,  
Rounez Breiz-Izel,  
Miret ar bugel d'e vam,  
Hag e vam d'ar bugel!

Mari, stereden ar mór,  
Klevet ouz ma goulen ;  
Difennit mousik Arvor,  
Bremen ha da viken!

An Yzouert.

## PLISTIN

Al lun an ugentved a viz Meurz e oa beleien ar Vro  
an em vodet evit lidañ gouel an otro 'n abad Huerou,  
person dean Plistin. Ar gouel a oa meurbel kaer. Ar  
zun a deu e vo moulet darn eus ar c'hanouennou brae  
a zo bet savet d'ar pastor mad gant e vignoned.

# AR GOULM HAG AR MARMOUZ

(Troet dez Villedfrancho)

Eur goulmik wenn a oa nijet  
War eun derwan ; ha kludet soun,  
E ehomme war eur brank sec'het,  
A oa a-uz d'eun islonk doun.

Eur mell marmouz gant eur vouc'hal,  
A bignaz ken huel ma oa tost d'ar goulmik ;  
Ha setu hen da skei raktal  
Gant e vouc'hal war ar brankik.  
— « Petra rit aze ? emei ;  
C'hoi sko war ar brank sec'h emoc'h azet warnan ;  
Ma c'hoarvez gant ar brank terri,  
Kerkent, paour kez marmouz, c'hoi a gouezo gantant ! » —  
— « Nan ! emean, kollet e benn ;  
Onaid hepken, koulmik, ouzid eo am euz drouk.  
Da c'blender a ra mez d'ar marmouzed ; ouспен,  
Dalc'hmad oc'h asten da c'houzouk,  
E klemnoz 'hed an de : N'hellan kousket taken,  
D'an islonk ar brankou hag a guz ac'haoud ! » —  
Skei a ra gwasoc'h-gwas, ha maoc'h drouk ennan.  
Ar brank a strak, ama torret !  
Hag al loen fall kerkent a ruilh en traou gantan  
En islonk beteg ar goueled  
Ar goulm a zigor he askell ;  
Baban e pign hep poan 'tre beteg an Nenvou.  
Hag ar marmouz a dro da zell,  
Euz he zu, eul lagad preunet gant an ankou :  
— « Setu hi o nijal en oabl huel, pell pell ! » —

Wag a wech, kristenien, a hed naontek kanved,  
Sant kalz torfetourien n'o deuz kalon ebed,  
Do bet gwasket Iliz Hor Zalver ! Gwalloch-gwall  
Argaset emei, enebourien ar peoc'h !  
Skeit, skeit dalc'hmad ; ar vouc'had zo ganeoc'h ;  
Hag e weloc'h en deuz an Iliz diouaskell !

SPERN-GWEN.

## AN EMZAV.

Ar brezel ouz ar brezonek  
A zo bepred gwall-ziaoulek :  
Strisoc'h-strisa ez a bemdez  
Var hor yez paour ar waskerez !

Ha petra gaver da rebech,  
— M'her goulea outo c'hoaz eur wech —  
Petra rebecher d'hor yez ker ?  
Siouaz ! war-ze na larer-ge...

Pe mar komzer, e lavarer :  
• Ar yez n'eo let euz hon amzer,  
• Re goz ez eo evit hirio,  
• E gallek an oll a gomzo ! •

Anzav a reer eo koz hor yez,  
(Pebeuz torfed, e gwirionez !)  
Ha na diled ket evit-se  
He miret evel eul leve ?

Me gar meurbed ar relegou  
Eus ar c'houantchon, manerion,  
Pere e Breiz a es' brudet,  
Ha, siouaz ! pell zo diskaret !

Sous e kavan na ve ket  
Eveldon an oll dud troet,  
Yez ar Vreiziz zo eur releg  
Ken doujus ha m'eo ar gallek !

Pa vezer yac'h na zanter ket  
Gwir dalvoudegez ar yec'hed ;  
Hogen, siouaz ! pa gouezzer klany,  
Hen desker, me lar, o c'houzanv !

Evit hor yez hevelep tra  
A c'hoarvez oc' amzeriou-ma :  
P'edomp didrouz den na zonja  
E talvoudegez ar yez-se.

Setu ma weler an-oll dud,  
(Nemed ar re ane zo mud !)  
O serel, o stourm kalonek  
Evit difen o brezonek.

Pe-hini a ra 'giz maoc'h hell,  
Evit sevel hor Breiz-Izel,  
Krenv ha skeduz evel biskoaz,  
E harz skeuden Jezuz er groaz !

En hon amzer nag a varzod  
E Breiz-Izel zo diwanet !  
O c'haout a reer e pob parrez  
O prezeg kantez hor yez !

E pob karter, hirio ive,  
Teatr Breiz-Izel gand foug  
A zispieg pozioz brezonek,  
A blij d'ar c'houeriad kalonek.

Morse, ma gred, na oc'haout  
Maoc'h e brezonek rimet !  
Evit na reer en hon amzer,  
E-keuz ar vouc'h, er parker.

D'an nevez-amzer e weler,  
Buez o kont er prajeier ;  
Me gred ama hor Breiz-Izel  
Eus eur c'houk gwall-hir o sevel.

Dihneet out brema, va Breiz !  
Varmoud e par skideren an deiz !  
Sav huel da benn hep aon ebed,  
Te eo kaera bro 'zo er bed !

E pe garter eus a Vro-C'hall  
E ve'gallet kaout kement-sil  
Da vent var vor martoloded,  
Da vont d'an emgann soudarded ?

Pe leac'h 've gwelot o c'heal  
Evel en hor bro Breiz-Izel  
Kement a vugale hep bloaz ?  
E pe leac'h, ma her goulen c'hoaz ?

O Breiz ! va Breiz, va bro garet !  
Tostik e vije diskaret...  
Hogen, hirio, sounn en da zav,  
E larez : « Me na vin ket sklav !

Gervel a rez dont var da lerc'h,  
Kement e Breiz a zo c'hoaz gwerc'h,  
O tiskouez d'ezo euruzded  
Hon tud en amzer dremenet.

O Breiz-Izel, o bro dispar,  
Ra 'z ay d'as heul kement da gar !  
O komz dreist-oll ar brezonek !  
Yez an dud krenv ha kalonek !

KLAODA.

## BUE VAN BADEZOUR VIANNEY

(RENDALC'H).

Gonde c'hoaz an diaoul ac'h e diabarz an ti o lakat e fri  
dre-oll ; sinval re an arebeuri ha skei war an treo ar muian  
skilte. Boulon tacho ebarz ar c'hoaz, kompeza ar plenken,  
heskennat ha lakat a dammo an treustou ; ober trouz tud  
a vrezel o tremen, hini kiri o vale buhan dre an hent,  
hini bandenno loened, pe bandenno tud war varc'h ha  
kass warni, rei da gridi e oa ano eur marc'h oc'h ober  
pevar-lamm, kanan evel eun estik, doc'ha 'vel eun onz,  
lammout banval ouz eul loen-gwe daved gwede ar zant ;  
setu aze c'hoario divez an diaoul. Gwejo-all en em dis-  
kouez dindan diavez eur c'hi lugerouz e zaoulagad, reud  
e vle. Lakat skeudenno spoutuz dirag daoulagad ar  
paour kez person, hale ar gwede dre ar gamb, kargan  
anei a logodenno-dall, setu aze c'hoariello-all c'hoaz gret  
gant an diaoul. Beteg krigi 'barz ar person kez, beteg esa  
teuret anean e-mez e wele, beteg esa lakat an tan ebarz, e  
kroaz an droug-spered monet.

Pell da dinerzan an O. Vianney, an oll ijin fall-ze a  
roe d'ean lec'h da c'hoiid emganno. Dre ziu ar Groaz e  
re d'an diaoul kemer an tech hag e flastre anean diudan  
e dreid gant ar c'hoaz-man laret da vilhanan a galon :  
« Ma Doue, me ro d'ac'h ar c'houk-man kollet ganin evid  
diou ar bec'herien. » Seul-vui e tinerze ar c'hoif ha seul-  
vui e krevas an ine ; seul-vui e oa an amzer gant an diaoul,  
seul-vui e lreste ar zantele ennan. Ken zantel e touaz,  
ken e kwitas an diaoul diustu ouz e uez korf an dud  
pisouet gantan, o laret a vouez huel : « Nag a rez droug  
d'in ! Ma vije tri evelidout war an douar, e vije distrujet  
ma zantele. »

Breman ec'h halle ar person zantel ober brezel ouz  
decho fall ar batouz : ozet mad oa an douar evid digempr

glizen an Nenv. War an hostaliri e skoaz da gontan,  
evel e ken liez a barouz, ar re-man a wall-dio'had. Gant  
kalz a hoell en em gemeraz evid-se : N'am euz biskoaz  
bulanekaet ouz ma fatousianiz, emean, n'am euz  
tamall ebet d'o. Hogen, seul vui o lennet ar garante  
gomzo, seul vui e rent gwirienno stard er c'halona.  
Hostaliri a breunaz o dor hini ha hini.

Chom a re an danso. Gand er re-man avad e oa eun  
tam mad a labour da gaout, rag kalz e plijent ebarz  
Vro, ha koutz d'an dud vraz ha dimeet evel d'an dud  
yaouank. Er govizion, 'barz ar gador a wirione e re  
e skoec stard e zaouarn, goapat 're zoken : « Ma breunaz  
ker, emean, an dud a ya d'an dans a loz o el-mad  
d'o, an diaoul hebken a heuilh o c'hamejo, en hevelid  
stum prestig nan euz nemet diaoulo gant an danserien.  
Setu dael en tiegezo : darn o devoa c'hoant e vije  
evit n'ober ket poan d'ar person mad, darn-all a empanez  
Setu 'ta en deiz pardon zant Sixte, patron ar barouz,  
bodad tud yaouank, daoust d'ar geleennadurez vad  
d'o, da digori an dans herve ar c'hiz : hogen, al loden  
vrasan euz ar merc'hed yaouank a nac'haz o heuilh hag  
renkjont paouez.

Pegen laouen e teuz kalon ar person mad ! Al  
laouenidigez a strinkaz emez anei da bedenno an noz  
gomzo ken intanet gand ar garante hag an anaoudeger-  
vad ken e skuilhaz an oll daero puilh.

Hargaset eus ken liez a lec'h e pere a re droug d'an  
ineb, an diaoul an em vodaz war labourio ar zul ; hogen,  
ar zant a skoaz ken stard warnan ken ac'hane ive e renkaz  
kemere an tech. Aliez e komze diwar-ben an tech fall-ze,  
dalc'h-mad e tenne e zarmonio war an du-ze : « Labourat  
a ret, ma zud kez, emean, mez ho labour a goll ho korf  
hag hoc'h ine. Ma vije goulennet digand an tud-se hag o  
deuz labourt d'ar zul : Petra ho peuz gret ? Setu aman  
penoz e tlefant lavaret : « Ac'h on o paouez da werzan  
ma ine d'an droug-speret, da hadkrusifian J.-C. ha da  
dimac'h ma Badetaut... » Pa welan tud o chareat d'ar  
zul, e kredan emeit o chareet o ineb d'an ifern.  
Pegen don e lak e viz 'a e lagad an hini a gred penoz  
labour ar zul a dalveo d'ean mui a ac'hant. N'eo ket al  
labour hebken a ro ar linvidigez : c'hoaz a zo da gontan  
gant ar c'hleved, gand ar gwall-er, gand ar c'huruz  
hag ar glao puilh, ar grizilh, ar reo... An oll droe-ze a zo  
'tre daonnan an Otro Doue. Pa gavo e teuo ar gastiz ive,  
Daou hent a anevan evid kas an dud da haour : La-  
bourt d'ar zul ha kemere heb lealdet tra an nesan. »

Eun deiz ar grizilh a droug-haz an est a-bez ebarz ar  
parkeier. Ar person mad a skuilhaz daero, ha tennan  
'reaz ac'hane eur gentel evid e barousianiz. Heb aon o  
larz d'e a bourz an O. Doue : « Ober a rec'h hoc'h est  
heb kas ho spered beteg d'in ha me an hini an nevoa o  
roef d'ac'h. Kalz ac'hanoc'h a flemme warnan. Me ya da  
diskouel d'ac'h penoz ar mado-ze oll a zo d'in. Er mez  
ho parko ! Redet herdan m'hallfet ! Ac'h an da hadkemere  
ho mado, d'o distruj ! » Kement ha kea aliez e reaz ar  
person diwar pob digone mad ha fall, ken e paouezaz  
labour ar zul, hag an deiz zantel a oe miret gand kement  
a sked d'an divez ken an em gave an oll edo ha foun war  
an dro a blad dre beb seurt amzer, ha den na veze nec'het  
gant.

Parouz Ars na oa ken an hevelep hini. An oll gwirienno  
fall a oa emez ar c'halona. Red 'oa o c'harz da hadkrigi.  
Evid-ze, an O. Vianney a roaz e stum misionno kement  
Jubile a digouez d'ar mare-ze, ha kalz a oe diout. Ket  
ha ma oa ar veleien-all o sarmon hag o kovesat a dud,  
hen a bede. Kement e labouras gras an O. Doue an ineb  
neuze ken e c'hoantiaz an oll donet kristenieu vad. Dou-  
jans ar bed a oe froet war an tu gis : mez e vije bet 'barz  
ar barouz d'ean em diskouel ket kristen tom a galon.

F. G.

## HENT AR GROAZ

Ar gwollan levr da lenn epad ar c'hoaz. S gwennek  
ar pe. (E ti Kroaz ar Vretoned).

GOULENN e bureo ar Groaz : Groerziou sant Eriwan, al  
Labouyer, sant Millio, sant Konevi, hag all. Eur gwennek  
ar pe.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc — Imprimerie Saint-Guilhaume.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

## SKRIVANIERIEN

## EMBANNOU-KONVERZ

Eur skoet ar bla evit Breiz ha Bro C'hall.  
2 skood, evit ar bretoned evit ar Breiz Keltiek.

Kas al labourer pe d'an Oiro VALLÉE, Renar, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Oiro MOAL, Skrivanier, 27, ball Charner, Zant-Briek.

Tri gwaneek pep sroudenad-skrifer.  
(Diskenn a briz evit meur a embann digouez)

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
*Furves ar Geiz.*  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek ez alio a Vreiz.  
*Furves ar Geiz.*

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Ver, e vo Pec'hett  
Mullu.

poent se.  
E wir da bep hini ! Renar Kroaz ar Vretoned, an  
Ao. Vallée, en doa great plijadur d'an holl o tont da  
gemeret perz er gouel ha da gennerzi ar varzed yaouank.  
Bennoz Doue d'ezan ! An Ao. Estourbeillon n'en deuz  
great nemed diskleria ar wirionez o lavaret eo d'an  
Ao. Vallée e teomp, evel d'hor c'henta ha d'hor gwella  
mestr, anaoudegez vad ha paduz ; an adsavidigez e Breiz  
a zo e labour ha d'al labour-ze en deuz roet hag e ro bem-  
dez e nerz, e yec'hed, e galon ha kement an deuz. Hag,  
evel pa lavaren, evit sialla ar meudiou-ze, n'euz bet  
gant an holl a oa er zal nemed eur you'haden « Bevet,  
bevet an Ao. Vallée ! » Ra blijjo gant an Ao. Vallée lezel  
a'hanon da ginnig d'ezan dreist ar re all va zrugarez va  
unan.

Wardro unneg heur en em lakomp en hent evit Pen-  
pont ; eno e leinomp kent mont da ober eur bale betek  
kastel Treseson, eur c'hastel koz dilezet lenn a velkoni  
hag a dristidigez ken dilezet eo hag hen ken kaer kouls-  
koude, ma karfet... Ouz e wetlet n'am euz gallet mirout  
do zonzal er ger : « Surt lacrymae rerum ! » hag ivez er  
stad a vije hini hor yez hag hor Broadelez ma 'n em  
gavfe ket mibien doujuz da gempen evel mean ha mean  
ha da vront ne gouesse, abenn nebut amzer, en e boull  
ar yez dispar savet a dreuz ar c'hantvejoù gant ijin ha  
karantez hon zadon koz...

War-lerc'h barez an abardaez, ar varzed a ganaz  
sonion lizhin ha gwerzion dudiu ha peb hini euz e wella  
a reaz tridal a-unan kalonou ar Vretoned a Vreiz-Huel  
hag ar Vretoned a Vreiz-Izel.

N'ankouaeomp ket e oa ganeomp eur C'helt a Vro-  
Gymru, an Ao. Johnson. Ha drezan mennoziou hor  
c'harantez a vredeur a yelo betek e genvroiz.

D'al lun vintin, goude eur pennad all a labour diwar-  
ben stad ar brezonek hirio an deiz er skolioù, ha diwar-  
benn skeudennou da zeyel en enor da Nominoe ha d'an  
Ao. Kermarker, peb unan a zo eat en e du, ar c'halonou  
kennerzet ha leun a fizians.

Marzin a lavare an Ao. Even a zo kousket : tonellet  
eo bet gant Viviana ; diouallomp ni ivez rag komzou flour  
an enebourien a zo gwasoc'h evidomp eget o gourdrouzou.  
Lakomp evez brema dreist-holl ; emaoomp ec'h adsevel  
hag evel ma lavarez an Ao. Vallée eur gwall enebour hon  
euz kenetrezoomp hon unan hag hennez, ar gwassa evit  
demp, eo an dizunvaniez.

Bezomp unanet dourn oc'h dourn hag e vezimp  
treach !

GLANMOR.

## DOUE HA BREIZ

### An nevez-amzer

Kinniget d'an oiro 'n abad Labouan...

Azet en ewar ar man,  
Lez eur c'hoaz-med,  
Eveziek me chillaou breman  
Kân an evned !

— « Petra syned zo a nevez ?  
Lavaret d'ig. » —  
— « Ni gân meubid da Zoue,  
'Me ar pinsin.

« Ken mad eo, ken karantezuz  
En hon ebever !  
Chetu deut heol madeleuz,  
'Lech' gwall-amzer. » —

Eur paour ac'h aru da dremca  
En eur ganau ;  
An oll eta a zo laouen  
En dervez man !

— « O ma Doue kant trugaro,  
'Gân ar c'hasker,  
Rag me wel addeut adro  
'N nevez-amzer.

« Ken a yen ! an heol birvidik  
En env a skeb,  
A vremen, klasker rividik,  
Na grenin ket. »

## KEVREDIGEZ BRO-VREIZ E PLELAN

Trugare d'hon mignon Glanmor an deuz bet ar vadelez  
da gas d'imp al linennou-man diwar-benn dat'h ar wir-  
Vreiziz a zo en em vodet e Plelan e penn kenta ar zün-  
man. Hon Hener an Aot. Vallée a zo et di ha graet d'ean  
eun digemer mad, evel ma welfet. Eun enor evit Kroaz  
hag he lennerien ! Pa vo addent d'ar ger e tispiego aman  
evidomp ar c'hentelioù an devo kemeret diwar ar gouel  
Zaer-ze.

Setu an eil gwech ma ten Kevredigez Bro-Vreiz da  
hla gouelioù e Breiz-Huel ; hevlene he doa dibabet Plelan  
ha ne c'halle ket ober eun dibab gwelloc'h : Plelan a zo  
eur gearik demost d'ar c'hoat ken koz, ha ken brudet, e  
harc Bresilien pe Broseliand ; an holl a oar eo er c'hoat-  
se, hervez ar greden hobluz, en em lezaz Marzin, ar barz  
hag an diouganer dispar, da veza tonellet gant Viviana :  
lakaet da gousket gant ardon jar plac'h-ma, Marzin n'en  
deuz ket c'hoaz bete-vrema torret e hun. Ouspenn, donar  
Plelan a zo evel pa lavaren kavel rouantelez ar Vre-  
toned en amzer goz : eno e rene, wardro ar bloaz 650,  
Salomon hag, en e gichen, Judikael, e vreur, a zavaz eur  
manati a zouge en trizekved kantved an hano a vanati  
Sant Salomon Penpont. En naved hag en deked kantved,  
ar Vretoned, o techel dirag an Normaned, a denaz di a  
strolladou hag a zifraostaz an douaron. Sant Konvoien a  
zo denet ivez da veza eur c'hoar all en histor ar vro-ze.  
En eur ger, e touez breudeur d'omp war eun donar  
sautelaet gant hon c'hentelioù ha brudet gant o oberon,  
eo hon euz bet ar blijadur da vont da dremen daou  
zervez.

Disadorn, 24 a viz meur, e tigoraz ar gouel. Plelaniz  
a oa deuet d'hon diambroug e ti an hent-houarn, en eur  
gana gant kalon : Sav, Breiz-Izel, d'an neac'h da van-  
nielou ! Mad a zigemer a oe great d'omp, breudeur a  
Vreiz-Izel, daoust d'ar glao a goueze ha d'ar barr a c'houe-  
ze ; ar gedez a veurz a oa, 'm euz zoun, abek da  
ze. Pa oe an holl bodet diudan skeud banniel Breiz en  
eur zal aozet euz ar c'haera, an Ao. an Estourbeillon,  
rener K. B. V., a gomzaz c'houek evel ma oar hen ober  
hag a zispegas penaoz eo mennoz ar Kevredigez adsevel  
hor bro, he yez, he gizioù, klask pe seurt ezommu he  
deuz, skigna e tonez ar Vretoned ar garantez broaduz hag  
enaoui en o c'halon elvenn an dihun goude sklerijenna  
o speted gant sklerijen hon Istor. Goude an Ao. Renar, an  
Ao. a Galan, n'en euz ken preder nemet Istor Breiz, a  
ziskleriaz, 'en eur brezegezh gaer, eo dever peb Breizad  
chom eur gwir Vreizad ha stourm ma chomo bepred e  
Vann-Vro gant he madou hag he doareoù he-unan : en  
eur ger, eme an Ao. a Galan, chomomp hon unan, ha  
n'eoimp ket d'en em vastari gant traou an estren. Gant  
an Ao. Ar Berr (Abalor) hon euz klevet istor feunte  
Barenton ha gant ar Varzed Loeiz Herrien (Barh Labor-  
rer) ha Lajat (Mab an Argoad) kanaouennou dudiuoach  
an eil eget eben.

Diouz an abardaez, e oe c'hoariet « Ar Sovetaer breton »  
hag an dervez kenta a oe klozet gant sonion.

An eil dervez a zeroaz gant eur pennad labour. An  
Ao. Estourbeillon a lenn eul lizer a vro Tramor hag a  
lavar e saver e Kaernarvon eur Genveurez a zigroizadur,  
ez euz unan all savet e Dublin hag houman a zigemerfe  
daou studier o dije c'hoant da beurober o studi keltiek.  
En hano an holl ar Renar a drugareka an Ao. 'n abad  
Couturier, persoun Sizon, evit e aked da skigna ar ga-  
rautez evit Breiz, hag Ao. person Gouarec evit e zastum  
kantikou brezonek. Eun itroun, en eul lizer all, a zis-  
kouez petra zo abek da zilez ar gwiskamanchoù breton  
hag ar pez a vije mad da ober evit enebi ouz eur c'holl  
ken noazus. Mab an Argoad a zispieg kement a zo bet  
great abaoe miz Gwengoto diveza : krouidigez strollad-  
dou tud yaouank evit peziou c'hoari brezonek, embannou  
e brezonek war ar c'helaouennou hag all... Roet en euz da  
saut skourer vad Loeiz Herrien ha Mellag war ar

Ar paour a dav, an evnigo,  
Mud eur pennad,  
A hadlavar o c'hantiko,  
'Barz ar brousk-koal.

Me wel dre-oll glaz ar parko,  
En o c'haerder,  
Ha diwanet war ar brancko,  
Delion tener.

Ar vriallen zo diwanet  
Ewar ar c'hleun ;  
Hag ar c'houervizon alzonret  
A zo en bleun.

Ma c'halon, lavar trugaro  
D'ar mestr karuz,  
Rag brav eo bevan hirio,  
Ha dudiu !

BARZ ZANT-BRIEAL

## DOUE

Ar menozion leun a skiant a lennet pelloc'hik diwar-  
benn an Aotro Doue a zo bet lakaet dre skrid a ratoz-  
kaer evidoc'h, lennerien ger, gant eur pôt yaouank kris-  
ten, ha breton ive eus an dibab, trididigez d'ezan 'leiz e  
galon, o wetlet pegen troet e ver, en deiz a hirio war ar  
gallek e paronizien pe strolladou kristen a botred yaouank.  
C'hoariou, prezegennoù, lennadegoù, studadegoù... e  
gallek eo e tenont holl gante ! ha, gant-se, e c'hoarvez re  
aliez e tenn da fall ar sort strolladou e lec'h beañ eur  
vad evid ar vro dre ma rount dorn da riskar yez ha  
spered ar vro. Mui bennoz-Doue eta d'hon mignon yaouank  
evit beañ roet d'imp-ni ar skouer vad diwar-benn skriva  
e brezonek war an uhela treo. Gras d'imp-ni oll da heuilh  
ar skouer-ze o lezel o gallek d'ar C'hallaoued evit ma  
vefomp, ar c'henta ar gwella, e Breiz-Izel evel gwech-oll  
e mare hon zadon koz :

Eur yez, eur feiz, eur galon !

## Da gentan : Ha beza 'zo eun Doue

Ya, emezoc'h oll ; mes mar hen kredet, meur a bini,  
siwaz diskiant pe lor'hek, a lavar na gredont ket. Mad,  
klevet 'ta ma frezegezh hag e welfet anat emma 'r gaon gant  
an dud dizoue-ze. Perag ?

Da gentan : sellet ganin ouz ar bed, ouz lein an oablo  
beteg ar mor braz zerret etre ar menio uhel. Gwelet an  
heol o lugerini e-barz an uhelder divent, gwelet ar mor o  
krozal, hag o lammout 'hed an de, laret d'in piou an euz  
krouet an heol-ze, piou an euz graet ar mor-ze. Mes ken-  
toc'h zellet ganin ouz ar bed-oll ha laret d'in piou an euz  
krouet pep tra. Doue laka ? Koulskoude, ma mignoned  
karet, ez euz tud hag a lavar : An treo-ze o deuz en em  
grouet o-unan. Konnet 'ta : eur wech bennag, ma vije  
bet eun den, an ije gwelet ar bed o sevel, o vouta evel  
eun tek tourek. Pebez diotiz ! Fellout a rafe d'ar re-ze  
tremen a Zoue ; mes allaz ! n'hellont diskouel 'met o  
soloni.

Evit diskouel dach' m'hoac'h anat pegen diot eo an  
dud a lavar an euz en em groet ar bed e-unan, klevet eur  
marvailh : Eur wech, eun den bet o vale a laraz d'o  
vignon : « Me zo tremenet en eur vro didud hag em euz  
gwelet eno eur Groaz kaer dispar hag ac'h en bet gwall  
zouezet ; en divez em euz zonzet he devoa 'n em groet a  
groaz-ze hec'h-unan. Petra lavarez eus-ze ? »

— « A gred d'in e teuz kollet da skiant, eme agile ! » —  
hag ar wirione o ganlan. N'ez euz netra hep e goz.  
Pe goz a vije d'ar bed da vezan mar na ve ket krouet ? —  
Nikan ! Rak-ze pa eo diot o lavar bezomp ar re-ze ha gwe-  
lomp hag-en eo furoc'h ar re a lavar oc'h eo bet graet ar  
bed gant an e-velennou. »

A oll viskoaz, eme ar re-man, ez eus bet evelennou, da  
laret eo sort greunennou bihan-bihan. Ar re-man, dre forz  
meska ha diveskan epad ar c'hantvejoù, zo en em staga  
an eil ouz egile ha graet ar bed gant.

Ha ne gav ket d'ac'h, lennerien ger, ec'h eo kement-se  
ken diskiant ha lavaret : sed ar bern mein a-hont. Ma  
vijenti lakaet e-barz eur zac'h braz-braz ha hejet ha  
dijejet epad hirt amzer, dre forz meska ha diveska, ar  
mein a deufe d'en em staga ha d'ober eun ti !

EUR POTR YAOUANK.

**Komzoù kentan sant Efflam da Eustin**

*Kinniget d'an Aotrou Euzou-Kerizel, person Plistin.  
Ton : Breudeur ni gles ho klemmo.*

Krog 'oa ar bloazien kentan eus ar c'houe'hvad kantved,  
Pa oa gant e gevredour eus ar c'houe'hvad kantved  
Ewar douaro Plistin, el lec'h hanvel Leo-Droz ;  
Ene e sankas eur groaz a weler c'hoaz en trez.

Daoulinan a rejont oll da bedi o Doue,  
Hag e pignont war eur dro beleg lein eur mena,  
Ewar mene Roc'h-Allan, lec'h divoude eur vam,  
Bet diframmet diganti he bugalik dinan.

Ar gwad ru a rede puilh ewar beg ar Roc'h vraz,  
Pa arnez sant Efflam hag en e zorn ar groaz :  
Petra, amezan d'ar re oa eno dastumet,  
Petra a rit-hu azo ?... tud kreizoc'h 'vit loened !

Gwelet pegen digar eo ho toueo ken tec,  
Ma renket laza d'ez e bugaligou tener !  
Mor kari ho pugsale, mar n'oc'h ket digalon,  
Dijezet ho toueo ha klevet ac'hanon :

An Doue brezegant dec'h zo galloudek meurbed ?  
Hen a grouaz ac'hanomp, Hen a grouaz ar bed,  
'Vit e oll vadobereioù e chonll beza karat,  
Hen karek hieuziken ! Hen karat, me ho ped ! !

Mabik EFFLAM.

**EUN EURED AOUB**

**GOUEL HANTER-KANT VLA BELEGIACH**  
AN OTRO GHALONI BAUDOUB

Person kanton Pontev

Lidet ar 4-hag ar 5-a viz Eoeh 1905.

Ewar gerik Pontev en noz-du o tremen  
'Neus ledet war he lec'h peuc'h ha tovaltjen.  
'N eur c'horn kuz, en iliz, dirag oter Mari,  
Goude labour an-de eur wrek zo o pedi.  
Trubuilh oa deut ganti, mec' bat ac'h e lemmet,  
Ha dizamm deus he bec'h zo'f e manet koueket.  
Difunet a greiz-holl, seblantont a ra d'ei  
'Zo kanze en iliz, lesik-tost, en tu klei.  
Pebez burkad ! dindan lamp ar Werc'hez daou eal  
Goustaig a deviz, klonet o diwesket.

Skraev ha flour evel an ezen  
O' lizadani en draouien,  
Ewar bleunio aour al lannou,  
Ma liden glan ar prajou,  
Mouezik uvan deus an aole  
Zav da vont da gad egile :  
• Kenveur, aman teuan bemnoz,  
Evel lavaret ma bennoz,  
Ma levaner, ma zrogare,  
Da beuvadeker ma Doue,

An eus bej teurest ma lakat da diwall  
Eun den ken amgouz, ken euen, ken didamall !  
'Boue tost da bevar-ugent via  
Ac'h on me ouz hen skozella,  
Kement evurusted a zo gund ma ine,  
Ken n'am eus c'hoant bet ken monet da glask an-ne.

Deus e obero mad,  
Bemde 'kreak an teskad :  
Skouerio nerzuz,  
Komjo pouezuz,  
Alazenno,  
Ha pedennno,  
Diwar o dro,  
'Ya war ar vro,

Evel ma sav, a vozado,  
Ewar ar bruk ar bokedo.  
A-dreuz d'e damm korf leud-ekern  
E iue kement a lugora  
Ken, awecho, mui na ouzon  
Pe set pe den ve dirazon...

An hanter kantved bla ma eo beleg zakret,  
A vo, 'vit an deio, en iliz-man lidet,  
Kaeran gouel vo hennaz ! a beb korn deus ar vro,  
Belien a beb nrad a deuz, a vandenno,  
Levenez eleiz o c'halon,  
Ha mouledi 'vit ar mignon,  
A roaz d'e, heb faziau,  
Skouer ar vortio ar c'haeran !

A-hed ar ster,  
Skitro ar get,  
Gand tud 'n eur stroll,  
O yoc'hel heil :

• Bevet, bevet-pell-c'hoaz d'haon c'haleo, d'haon sikour,  
Mor Person ken kaset, ar c'holoni Baudour ! !

Chetu aze pe'z 'deus klevet,  
Ha... 'd'aleg ar beuze brudet  
An intanveas o pedi  
Da noz dirag oter Mari.  
Mec, otro Person, hoc'h ael mad,  
Na gavan ket 'rije, avad,  
Et penn-da-benn,  
Gand ar gudenn.  
Anez, an ijo diskleriet  
Ec'h oc'h bet en Bear zavet

Ewar galon eur vam a distas d'he bugel  
Lakit ust da heb tra DOUE ha BREIZ-IZEL ! !

Ho pea eur beuz-gavel ken kuz, ken logarad :  
Ho taonik 'n em garsc'h evel mab ho legad !

Skwir gand an hanter-all 'nean,  
'R'et met hen gervel ha gonelan,  
'E tiskennaz deus an nozvo  
Evit dise'e'han ho taolo,

Ha toui d'ec'h vefe'he eun deus  
'N e gichea dirag tron Doue,  
Skolio Gwengamp, Plongerena  
Vo dalc'het sonj-pell c'hoaz onna

Deus eur potrik, dister,  
Ken santuz, ken seder  
Disklirian ha mestro,  
Hen meule heb distro

Stivel Bartulet, ma gomsfe,  
Da dud Sant-Servez a larfe  
Bech gwelot aher, kent,  
Fanchik Baudour, skwir gand an hent,

Oc'h azei,  
Hag o tibri,  
'N eur euan dour skier ar fantan,  
E dammik baru hag amann

Hanval-neuze, ma oa nikun,  
Demens ar paourkez Salann,  
Nemet, eveltan, nac'h ket fol :  
Rag, 'vit gwir, ar skiancho' holl

'N em lede 'n ho spered digor,  
Evel ar sterio 'barz ar mortel,  
E keit-moc'h bet en Zant-Briek  
Ewar ar studi a vele,

Ghoni zo bet skour d'ar  
Ha skod ar gloer.

Kaset da Blounez 'vel kiro,  
Kement rejoc'h labour Doue,  
Ma zo c'hoaz brud,  
Etoner an tud,

'No devoa gwelot foeltr-biskoz  
Eun den ken bihan-ha ken braz  
'Pad donkez via a-bez ho peus bevet onn,  
Gand eur person santel, an otro Hilion,

Heman galvet  
Da Goat-Pikel,  
Sachas d'en kadd,  
E vugel mad :

'Pell deus ma c'haer, emean,  
Re inouuz ac'h e beran,  
Chetu c'honi laket, a dol-barr,  
Da berson en parrouz Magour,

Eiz kwoc'h enon ho peus gwelot  
An neve-amzer o tonet,  
Hag ar verbio ar c'haeran,  
O ter'het da hatviennian.

'Tonez kristenien ken eann, ken mad,  
C'hoantaet 'pije chom dalc'himad,  
Mez Doue zo o ren  
E vus da heb den

Parrouz Plourio, d'ar c'houz-sq,  
E oa enn tamm yenet he fe.  
Kaset 'oc'h di,  
— Ouz ho pedi —

Heb dalc'haer,  
'Oa c'hoari gaer,  
Da weler pion,  
'Nije ken rion.

Betek tud a hanfenn,  
A santas eun elvenn  
Deus an tan a deve,  
Ho kalon 'vit Doue !

Heb mar ebed ar barrouz-mag  
A vije bej war-bonn breman  
Kaeran perlezen ar c'houe'h,  
Mar na vije'ch deut da Bontre,

Aman 'vad torran ar gudenn,  
Rak kaer 'mo ober, biverken  
N'hellin, hag e venn ken arc'hoaz,  
Disklirian an hanter c'hoaz

Deus ar vad ha deus al labour  
'Peus grot aman, otro Baudour,  
Awalc'h e veso d'in larot,  
Ac'h e hoc'h hano meur-gavot

Kwellet don,  
E peb katon.

Da heuilh,

KLAODA.

Otro Person 'baue dec'h a ver krog gand ar goud  
Ha skedusec'h a c'hoaz 'vit ma sonjo d'an ael.

Kerik Pontre biskoaz  
Koment-all tu weler !

Hon gont a ran, d'ho izolded  
Mouedi zo kuzus bepred,  
Mez, koulskoude, pion a hellfe  
Laret 'c'omp dreist ar wiriona,  
Biken vo fall, bepred 'o mad  
D'ar vugale meuli o zad !

Pa ve o oul — beleg aboue hanter kant via —  
Disklirian an hini a glaskfe koumoula.

A-gevred en em gav ha diaoufou hag aole  
Evit embann d'ar vro ac'h oc'h eun den Doue ;  
Nimp aman, ha nan omp hag aole na diaoufou,  
Petra d'ober nemet... straket hon daouarnioù !

Ha laret a greiz hon c'halon :  
Dalc'het bevan, otro Person,  
Pell-pell, 'n hon zouez, katz blavezio !  
Evit gloar... DOUE hag HON BRO ! !

Gab LISKLOUV.

**ARZUR A VREIZ**

Trajedien e pomp Arvest, tennet euz histor Breiz  
GAND KLAODA.

(KENDALC'H)

Arzur. — O kemeret ar c'hoaz, Gwall bouner eo  
c'hoaz ar c'hleze-ma evit va dorn ; hogen, o sonjal pe  
naoz he douguz va mamm leun a vadhanter, hag oc'h  
heulia hoc'h alioù, kont enoruz a Zinam, me a engezo ober  
implij vad anezan, beteg an deiz ma vezin digemeret mar-  
c'heg.

Herve a Leon. — Pa welimp ho kleze savet da c'hou-  
len sikour, ni a deuno hor re evit ho tifen, va frins.  
Evidon-me a lavar huel hirio e vezin d'oc'h hag er vuez  
hag er maro.

Arzur a zo azezet. Herve a dosta outan hag a laha  
e zaouarn en e re.

Arzur. — Aotrou a Leon, digemeret a rau ho senti-  
digez hag ho promesaou. Azalc'h hirio c'honi a voze va  
marc'hek feal.

An oll Dijentiled. — Ni ive a zo oll d'oc'h, hag evit  
atao ! !

Arzur. — Baroned kalonek a Vreiz-izel, eus ar  
Poatou, eus ar Men hag eus an Anjou, tout, c'honi ive  
'ta, ho pezo atao fizians ennon hag e sentot atao ouz ho  
mestr gwirion.

Herve a Leon. — En hano an oll varc'heion a zo ama  
bezaot, e touan dirak Doue, e kredin hag e sentin atao  
ouz an Aotrou Arzur a Vreiz, hag-ouz ar re a deuo eus  
he Bgeez.

An oll Dijentiled. — (Eur c'hlin harp oc'h an douar)  
Hen toni a reomp !

(Hag e savont kerket evit kana).

**KANAOUEN**



Dre e - nor ha feiz hon ta - dou, fin  
ha - no Dou - o an Ne - vou... Ni a dou



oll a - man hi - rio  
leg hor ma - ro !

Dre an Doue 'n deuz kasoni  
Ouz an nep a ra falloni

Dre sked hano kaer Arvorik,  
Dre vanniell gwenn an herminik,

Dre an Doue varno kalat  
An dud trubard d'ar goums root,

Ra vo hor c'houmouz stellet,  
Hag hon le gand an Nenv klevet !

DISKAN

Ni a dou oll, aman hirio,  
Chom feal beteg ar maro !

Arzur. — Ra zoay Doue da zelaou ho ! Ra blif  
gantian ive skultha he vennoz var va c'hurunen ! Ha bre  
ra vo laouen an oll ! Ra vo plijadur e heb leach ! Ho pe  
a ran oll da lein ar garundigez. Va marc'heion vad a re-  
sevo euz va daouarn ar gwinn a enor.

Herve a Leon. — Chom a ra ganeomp an dever  
trugareket evit kement a vadelez. Bannoze d'oc'h, sou  
duk !

Da heuilh, KLAODA.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skout ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoud, evit ar broioù estren evit ar Broioù Keltiek.

## SERVANTERIEZ

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLEE, Rener, ru Zant-Denez, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOATE, Servanter, 27, bali Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwanek pep ardeonnad-skriver.  
(Diskenn a bric evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar an Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
(and ar gallek ar zio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'ht hepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek,  
Yez ar feiz eo; ma ve lezhet,  
Goupen ar Yez, e vo Pezh-oll.  
M.M.M.

Goulennot, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
mignon Klaoda :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'hemenn digant hon eskop brezad, an  
Aot. 'n eskop Dubourg; unan eus ar gwella hag an du-  
diusa leoriou bet skrivet e brezonek betekhen.

## AR BREZEL

Enr pennad mad a zo n'eus ket bet kelou eus ar brezel  
war Groaz ar Vretoned; dre ma oa deut an treo da  
zioulaat da heul emgan Moukden. En emgan Moukden,  
evel e oa het displeget aman, e oa chomet an tu krenv  
gant Japaniz, war donar.

Setu ar Rusianed o pousez koll adarre... war vor, ar  
wech-man. Eur skouadren histri brezel hag a oa bet kaset  
gant eus meur ar Rusi betek mor ar Japan, da gâd porz-  
môr Vladivostok, a zo bet distrujet e-kichen eun enezen  
hanvet Sou-China, pa oant o vont da dizont termen ar  
veej, goude bean graet hanter-tro ar bed, rag Vladivostok  
en em gav tostik-tost e tu-all d'hon pelec'h, koulz  
laret. Hon amireled ar Rusianed a zo bet tapet da brizo-  
nierien, miliero a varloled lazet pe venzet hag an oll  
histri kaset d'ar strad pe tapet. Mantrusit koll evit ar  
Rusianed! Gant ma vo graet breman ar pench hep dale  
pell, rag spontus eo gwelet eur sort lazadek-tud!

## BARADOZ DUDIUZ! HON GWIR VRO!

Me d'azei en eur c'hoat fao, d'ober eun diskviz.  
Fomm eo an amzer. N'eo ket c'hoaz eiz eur anei, kouls-  
koude. Me da glevat eur voubou dre an er. Boubou kleier  
ar parronioj a zen da hekleoi er c'hoat. Lun ar Rogasiono  
a zo hevie!

Prosesiono ar Rogasiono a zo deut koz. Gand otro 'n  
Eskop « Vienne », an otro Mamert, e oaint bet zavet er  
bla 469 da derri ar gwalenno a gastu a dere'he da vac'hata,  
en amzer-ze, an « Dauphiné », eur c'hom-douar eus ar  
Franz. Ac'hane e teuas ar c'hiz vad d'ober piujen, pe-  
denno ha prosesion an tri de arôg gouel an Arouson. Yui  
a zo lemet dre-oll, hag ar vijel ive en darn vuian  
deuz an Eskoptio. Na zo chomet nemed ar prosesiono.

Gwechall en hon bro Breiz ec'h e e-leiz a dud d'ar  
prosesiono-ze, unan bennag, hemde, eus a bep ti, en pep  
paronz. Kalz a ye war yun d'ar bourk da govesat.

Koumanian a vije goret peuvraien er chapel ma vije  
kael an ofern euni, war hent ar prosesion. An dud a  
heuilhe diskabel, eur chapelled en o dorn, o tiskanan lita-  
nio ar Zent hag o kanan kantiko, ewit ge'vel ar Zent, hon  
gwellan mignoned, da rei d'imp skoalet ha da bedi  
Doue ewidomp. Ar c'hoajo war ar c'hoaz-hencho a vije  
kempennet koant. Glazar ha bokedo a vije hadet war an  
hencho.

Pegen braz tro a zo deut ebarz koulher ar bed aboe!  
Nebeud a dud a ya da prosesion ar Rogasiono. Bec'h-ha-  
bec'h a ve, awecho, kaont eur petr pe daou da vont gand  
ar groaz. Nebeud a dud a ya da goumanian, mar ga c'hoaz  
unanig bennag en eur barrouz, pe en eun all. Kalz eus ar  
re ve kaset d'ar prosesion n'eont ket davetan d'ar bourk,  
na heuilhont ket an dro penn-da-benn, n'eont ket gantan  
d'ar ger, betek an iliz. Gant pôt ebet, koulz eo laret, na  
ve e chapelled. Na ve ket respontet d'al litanio, na laret  
Pater a-bed nemed warlerc'h ar beleg, er chapello ha  
disk kroajo ar c'hroaz-hencho. Kaer eo pa na ve ket  
klevet an darn o komz, o c'hoarzin, o skingnal!

Ha koulskoude na zo ket da laret nan, dre hent ar  
beden e renker mont da Zoue mar zo c'hoant da vean  
skouret gantan. Na zo ket da laret nan, ar-beden hag, ar

binijen na dle ket ar c'hiz vad ane mont e-kwit pan-  
gwir hon ezomo ha siouaz ar c'hiz fall da bechi a chom  
gantimp. Hent ar baradoz n'eo ket, ha na vo ket chanc'het.  
Leun eo a dreino, a dreuz hag ar sperm. Hennez a zo,  
koulskoude, da gemer.

Troet omp eun tammik bihan diwar hon steud. N'euz  
ket a droug, enoc'h ec'h comp ganti breman, marteze.

Dindan deitho glaz eur c'hoat fao omp, eta, en dis-  
heol: eun argen sperm, bokedo c'hoaz vad onz hon  
zreid, evnigo o kanan o c'hanouen d'o C'hrouer a-uz  
d'hon fenn. Diragomp eun draouien brajo, o roben c'hiz  
maretlet a vokedo gwenn ha melen, eun eien dour, eur  
ruzel en o troiala dre ar c'hreiz, o ruilh al dour skler  
dre greiz-tre an clestr, dre dindan gwrio eun aled halek  
hag ar peuph uhel aman ha du-hont, o bago o hinjan  
gand eun ezen domm. Ma spered a van d'evori. Na pegen  
kaer n'eo ket ar mejo d'ar c'houk-man! Ma pegen kaer n'eo  
ket grot ar bed gand an otro Doue ewit ma teny an den,  
zouezet gand ar burzudo, d'adori, da garet ha da serviji  
e Grouer. Hag an den, aliez ziousz, na ra van a-bed eus  
an treo kaer-ze. En e greiz aliez na lamp ket an anou-  
degez vad... Eur pennad a van ma spered da zousjal. Ma  
c'halon a droid em c'hreiz. Ma daoulagad a zao d'an nenv,  
eur beden a gasan d'an Otro Doue, war diouesket ma el  
mad da loskel eur vogeden c'hoaz vad war gasouen an  
evnigo. Demp adarre, emea! Daoust pegen kaer eo an  
draouien-man, n'eo ket homan eo ma bro. Ma hec eo ar  
baradoz dudiz, ennann, ken stank hag ar yeod er prajo,  
lili gwenn ha kaer-dispar ar Zent hag an Ele vinniget.

Me da vont, ma feun-baz en eun dorn, ma chapelled en  
dorn-all, evel eur percharin (pelerin). Daoust hag-en an  
den war an douar-man n'eo ket eur percharin? Poultrenni  
a ra ma boto-ler. Betek na boultrenno ket ma c'halon  
gant ar pec'hed! Tomm eo ken eo temm! Eur c'hoazen  
a bizen war ma zal hag a ruilh taken ha taken gand ma  
dionjod. Eun diskvizaden! N'eo ket re abred! Koantoc'h  
eo ar bed aman adarre. Eur ster, eur rivier o vont dre  
greiz-tre treid daon grech.

En kwab unan ane, parkajo treo fesonet mad ha kaer,  
Doue d'o bianigo! Parkad ker'h aman, parkad gwiniz  
du-hont, parkad lin aze, parkad hei a-hont; parkad mel-  
chon ar vro a-glei, parkad melchon ru a-deo; glaz-skler  
kichen glaz tenval, tro-war-dro da vokedo ru ar melchon,  
eur goviz gwe dero o c'hadrani, eun ti bennag: chi-  
minal gwenn toen c'hiz o skoulman lagadennou ar  
chaden.

O tremen gand al lano, gobiri, dispak o gouelio. War  
grech an tu-all: eur c'hoat pin war rec'hel gwisket gand  
bleun bruk ru ha roz. A-glei hag a-deo, evel daou voked,  
eul lannek hag eur valanek gand o bleunio melen aour.

Pegen mad, emea-on, n'eo ket an Otro Doue o kroui  
treo ken koant ewid evarustet an den! Hag an den, aliez  
ziousz, na briz paran e lagad war labour Doue, a roffe  
koulskoude gwir joasted d'ean, gwalc'h e galon! Hag  
an den a ya da redek war lere'h ar plijadurezo difennet!  
Sellomp da gâl treo livet, kempennet, urzet ken kaer.  
Na stagomp ket hon c'halon oute. « Lagad an den a dle  
paran hueloc'h ewit mado ar bed-man. » N'omp ket aman  
en hon gwir vro. Krec'hio ar baradoz a zo kalz kaeroc'h  
ewid ar re omp o paouez gwel. Savomp. Demp helloc'h!  
Arvu omp dirag ar mor braz. Ha me en em c'hoaze war  
eur vijien en disheol dindan gazel eur garrek lion louet.  
Gourlano eo. Ar mor glaz, zioul ha didrouz, gwagen a-  
bed o ruilh nag o kroaz, a zo ec'h ober e hun kreiste  
dindan mantel glaz-glazin bolz an nenv. Hag an heol o  
paran eus lein ar vantel-ze, a lugern er mor den, a ra  
evel eun galonen arc'hant en e greiz. An heol, eur gwir  
lagad en bolz an nenv, o lugerni a-uz d'ar mor a luc'h  
ennan evel eur dolen en eur mezellour hag a zo ive d'ean  
evel eul lagad. Na welan nemet mor... mor!... Ar  
wech-man avad e vanan da evori... Na bro eo galloud  
an Otro Doue! Pegen eruzuz na vije ket an den er bed,  
mar karfo! Ma Doue, me ho kar hag ho karfo! Etre ma  
vo ennou en huanedenn, e vo ewidoc'h, ma C'hrouer, ma  
Mad-oberour!

Me da dizorenni. Poent eo mont adarre. N'hallan ken!  
Mor diragomp. Netra nemet mor. Na welan ket an tu-all.  
Koulskoude n'on ket arvu em gwir vro.

Mor evaruzet ar baradoz, a zo kaeroc'h ha welloc'h  
blazet ewit ar mor glaz a zo ec'h ober eur zeien d'ar bed-

oll. N'eo ket dre aze, eme ma El mad, ec'h i-te d'as kwir  
vro. Sell-hi du-hont 'nz d'az penn. Pignat a zo d'ober  
evel ma piguas Jezuz diwar lein mene Olived. Eman  
du-hont breman er baradoz, digor d'imp, oc'h ober d'imp  
pep a drou, o kempenn d'in pep a gurunen. Eno na poan,  
na trubuilh, na maro, na klenned: yec'hed, bus, evarus-  
ted dalc'h-mad! « Baradoz dudiz bro ar Zent eo ma  
bro! En oll boanjo kalet a gorf pe a spered, me sonjo da  
ha noz en gloar ar baradoz! »

EUR MIGNON.

## AR MIGNON

Pebet tra frealzus, kavet eur gwir vignon!  
Unan all hag a zo eun eil c'honi hoc'h-unan;  
Unan an euz ganac'h eun hevelep kalon,  
En pehini dioc'h e tizammet ho poan...

Ar mignon 'vid an den a zo evel eun tad,  
Pe c'hoaz evel eur vam, dalc'h-mad lenn a zouster;  
Bean an euz hepred abou fur ha mad  
A goue evel ar gliz eus e galon denar...

Poan ho peuz pe enkrez? ho mignon 'n euz glac'har,  
Bezan hoc'h evaruz? e joa a zo dispar...  
Karout a ra trubuilh ar pinvik hag ar paour!

Sionaz! ar gwir vignon a zo hirio tano;  
Ma hon deuz unan mad, oh! meulomp e hano;  
E garante zo d'imp talvoudusoc'h 'vid aour!

AR YEODET.

## FISTOULIK

I

Pegen eurus e oa Fistoulik gant Job ar pilhaouer.

Eur wech e oa eur c'hi hag a oa e hano Fistoulik... Eur  
c'hi bihan, fandonitiek, kouz, ha hudur, stummet fall  
gant e zioar ver troet en diavez, ha digor!... ken e  
vije tremenet eur c'hilhorio etrede, tost da vad.

Fistoulik a oa eur c'hi, med eur c'hi a spered e oa...  
En e zaoulagad, hanter guzet gant ar bleo hir a oa en dro  
d'e, e oa marteze mui a spered 'vit n'ez euz en daoulagad  
meur a babar a vale dre an hencho.

Ki e oa Fistoulik, ha dre-ze an neyca eur mestr...  
Pe sort ki n'an eus ket eur mestr?... Ar re n'eo deus ket  
a zo dizener breuzer ar chas... Ha pe laran ze, ec'h e  
kenkoulz evit ar re o deus hirio eur mestr ha, warc'hoaz  
eun all, evel evit ar re n'eo deus bet biskoar hini.

Fistoulik an evoa eur mestr eta; eur mestr hag an nije  
bet meur a gi mez dioutan: pilhaouer e oa! Hanter kanj  
vla bennag an neyca, eur fas du a vije gwale'het pa re  
glao warnan, hag eur varo hir a spoute ar vugale. Evit  
oll vado n'an evoa memet eun azen hag eur c'harr bihan  
da gas e bilhaou en ker, pe d'ober e dro pac'h e a-bell,  
bag e gi Fistoulik. Bemde ec'h e en-dro, Fistoulik ouz e  
heuilh. D'ar zadorn ec'h e en ker da gas pilhaou d'ar  
marchadour, ha, gant an arc'hant a douche e prene boed  
'benn ar zun warlerc'h, goude bean laket eun tammik a  
goste evit kaont foen d'e azen ha pean e di, a gouste ugent  
lur ar bla d'ean, hag a vijent o-zrii o repun ennann.

Fistoulik a oa e vignon gwellan... Eun devez ma oa  
oc'h ober e dro e lemas anean eus etre daouarn kan-  
farded a oa o vont da veul ar c'hi paour, yaouank c'hoaz  
ha dinerz evit 'n em difenn.

N'on ket hag-en an evoa sonj Fistoulik a gement-ze,  
med biskoaz na gviltaas anean abone. Dindan glao hag  
amzer fall, evel gant devezio heol tom, dalc'had e  
vije oc'h heuilh seuilho Job koz. Keit ha ma vije en eun  
ti bennag, Fistoulik a chome da vesa ar zac'h pe ar c'harr  
ouz toull an nor; ha gwaz d'ar c'haufard a c'hianto  
ober eur bourd bennag, pe wall-gas an azen! Fistoulik  
na vije ket pell evit kas anean en-dro, d'ar er en e zaou-  
lagad hag e vrago roget war e rerc... Me lar d'ac'h na oa  
ket aneit ar c'hi-man, pa vije eom da zifenna tra o restr!

**Kan 'vit lidan gouel sant Jozeb,  
paeron person Plistin.**

WAR DON ; Zant Jozeb binniget.

DISKAN.

- Zant Jozeb, hon Patrou, dean ar baradoz,  
War ho Pihor-Dean, shuilhet puilh ho penoz. (bis)
- Zant Jozeb zo meulet gant an dud, an ele,  
'Vel pried d'ar Werc'hez, ha tad da Val Doue. (bis)
- Te, Jozeb, zo meulet gant moez da gurest,  
Gant tud vad da barroz, gant da vrendeur karet. (bis)
- Sant Jozeb 'neus miret 'vel daon voked lili,  
Gant ar brassan glanded ha Jezuz ha Mari. (bis)
- Te, person mad Plistin, mir bepred d'as paronz,  
Jezuz hag ar Werc'hez, daon denoz bras ken douz. (bis)
- Zant Jozeb a zo bet pan an tiad zantel,  
Gantun Jezuz, Mari, a gemere kantel. (bis)
- Te ive, Dom Jozeb, hon fidelan mignon,  
'Zo gant da gurest tad tiad da ganton. (bis)
- Hir vne d'hon Dean, Dom Jozeb ar C'honeron,  
Ha d'e gurest vad da Dom Jozeb Gouezou ! (bis)
- Zant Jozeb gant Mari 'reve er baourante,  
Noz ha de e veulent hag e karent Doue. (bis)
- N'oud ket o klask dastum mado bras er bed-man,  
Gant eur vouez drant, lizhin, gloar Doue te a gan. (bis)
- Zant Jozeb d'an Ejipt a gas Mabik Doue,  
Deus fouer Heroder soveta e vne. (bis)
- Gant da skolio kristen, deus an dud fall-dife,  
Soveta kalonek fe bew da vugale. (bis)
- Zant Jozeb en harlu, 'brezege ar gwir fe,  
Re d'an dud auveout Jezuz ar gwir Doue. (bis)
- Kerne, Goelo, Treger an neus oll tregarnet  
Gant hekleo da vouez zakr, en yez ar Vretoned. (bis)
- Da barroz, ar gouent, parrojo ar vro oll,  
Ac'h eus misionet gant fe eun Abostol. (bis)
- Jezuz a zo kollet en-kreiz an Doktorad,  
Pebez joa d'ac'h, Jozeb, en Temp' pa hen karat. (bis)
- Gant ar pe'her 'lies Jezuz a ve kollet,  
Dre neuz da absolven gra d'an Hen adkavet. (bis)
- Zant Jozeb ouz Zatan 'neus kuzet Mab Doue,  
An eus Han difennet epad e oll vne. (bis)
- Ken berr da Gornik koz 'tous krennet ar skillo,  
Ken e karfe gant herr rei d'id gant b' gernio. (bis)
- Laouen 'vel da baeron ra varvi evuruz,  
En daou da d'as kwele ar Werc'hez ha Jezuz. (bis)
- Mac'h imp oll da veuli Drinded zakr an donar,  
Jezuz, Mari, Jozeb, da viken 'zakr ar gloar. (bis)
- En Nervo te vo c'hoaz, hon mignon, hon dean,  
'Vit mesuli zant Jozeb ni heuilho drant da gan. (bis)

PERSON TREDREZ.

**EUN TAM A BEP SEURT**

Mouez ar c'hleier. — Penoz e vever er Chin hag er Japan.

Ar c'hazelenner a zo henvel ouz an hekleo o tiston an holl vouezion, an holl vouruz, 'vel ma veint.

Pa zón ar c'hloc'h kanaouen ar vadiant, an hekleo a respont drant, moez pa zón gliz, an hekleo a respont truezus hag a gas evelso, belek doun an traoniennon pell, kanro an Anson paour.

Moz pa sko ar c'hloc'h stank ha ter da lavaret d'an holl e zo tan-gwall en ti pe di, an hekleo d'e dro a c'haly gant prez an holl dud da zikour.

Gant se, mouez ar c'hazelennou, o tiston brudou an de lirie, a zo trist meurbe. A bep ta bennag ma chilaouer na gleder nemet treo da lakat ar galon da vantran.

N'e ket dech e lenner war ar paperoz penoz e zo tud o c'houlou ma vije harzet zón ar c'hleier da c'hervel d'an ilizou? Breman zo pevar pe bempbla, pion an nije kredet goulen seurt treo-ze? Ma zo c'hoant da vongan mouez ar c'hleier, eo marfad dre ma zo c'hoant ive da vongan mouez ar relijion, mouez Doue, mouez ar pab, mouez pep eskop, pep belek ha zoken pap kristen.

Nag a vouez den hag a oa lakat evit kelen war ar vad ha zevel spered an dud war-zu Doue, nag a vouez den hag a zo bet mouget!

Ar skolier, c'honi vel anean pignet war e gador, dirag ar vugale a zo bodet endro d'ean; eman eno, henvel ouz ar c'hloc'h war an tour evit komz a Zous; liogen, hano Doue na deu ket eus e c'heno; mouget eo e vouez.

Gwasoc'h c'hoaz : divadeet eo ar c'hloc'h ; zón a ra evel eur c'hloc'h faout. Mouget eo bet d'ean e vouez zantel ha laket ennan eur vouez loarret, raoulet ha direiz.

Beaz zo tud hag a c'houlou ma vo mouget mouez ar c'hleier en beg an ilizou, meaz beaz zo re-all hag eo well gante lakat ar c'hleier-ze da c'hervel da ebatou an Drouk Speread, goude beaz bet o mouez o c'hervel da « ebatou » an ine, en ti Doue.

Mastari, dizeneri, zaotran, labean, setu hieie labour ar gwall-dud, gwasoc'h labour evit nan eo laz an tanan.

Daoust ha n'eo ket direbehoc'h flem an eur bugel evit nan eo ober gant e spered hag e ina eur boucheon-listri mad da vean lakat en renk fank an heuchou?

N'eo ket well d'eur bugel na ve ket beo, evit beaz da nao bla divergent ha divoz evel eur c'hi, diroll wasoc'h 'vit eur pagan, hag aheurtet awechou da siourm ouz ar vad ha da gerzet war an drouk evel plan nijetregont via ouспен? Nag a hini koulskoude a waler liitie hag a zo, da nao bla, « gret o c'hlason gant » evel ma ve laret?

'Pouz ket klevet komz eus bugale skol Landerno, a zo et en « geve » abalamour ma oant re dalc'het er skól? Eman al lez ouz pen o fri, hag an techou fall a zo dija gwriennet don en o c'halon.

Perag kement-ze? Mouget eo, pe damdost, mouez ar c'hleier, ar mouezion a deu-deuz an ne. Eno eman an dalc'h, ha nep lec'h-all. Ar vugale na glevont ket mouezion ar c'hleier, mouezion an ne, er skol, pe, da vianan, er ger, ar re-ze a zo kollet.

Na lezomp ket eta mougant mouez ar c'hleier!

An drouk a zo du-hont an koste Bro-Sina pe Chin a ra d'an holl taol eur zell war ar poblou-ze hag o deuz gret ken net o briko d'ar Rusianed. Dont a reomp da zonzal penoz potred ar Zav-Heol a zo ken kaled, ha marteze muic'h, evit potred ar C'huz-Heol.

Pesort tud eta eo ar re-man? Eur medisin, hag a zo bet pell amzer o chom er Chin, an euz studiet dreist-holl o doare bevan, hag an euz rentet kont anei en eur levr hag a zo evidomp leun a gentelioù pen-da-ben.

Da gentan, evit an evaj, Sinaiz (pe ar Chinoaed) na evont nemet douz, douz bet berved. Beaz 'zo 'n o bro mar-c'hiadourien douz tom evel e zo er vro-man hostizien da werzan gwin-ardant hag hostalirion.

Eur Sinad n'ev taken leaz ebet adalek an de ma eo bet didonet; na leaz, na gwin, na gwin-ardant, nag evaj ebet nemet douz bet berved na dremen dre vuzellou eur Sinad den a fison. Dre ze, liez a glenved hag a grog warnomp hag a gas niver a C'hallaoued hag a Vretoned d'ar be, n'int ket anaveet etouez Sinaiz.

Komzomp deuz an debraj. Sinaiz a zebr nebeut a gik, tam ebet, koulz laret; meaz an tammou a blij d'e ar gwellan eo, herve, tez gwiz ha tez zaoud, kroc'hien azen ha kroc'hien ijen.

Daoulagad pesked a blij d'e dreist-pep tra : an no nan eont gante nemet pa veint brein mad.

Ar bara n'eo ket anaveet en o zouez; ha koulskoude, beaz o deuz gwiziz, segal, kerch hag all; meaz na zebront netra a gement a ve bet lakat gouell ennan, ha gant o blend e reont bep seurt meuzion poac'het gant douz, henvel awal'e'h ouz krampouez.

Gant eur bevans evelen, n'euz ket eur bobl er bed holl hag a ve ken divago ha ken yac'h ha Sinaiz pe o c'hendirvi gompez, Japaniz. Diskouel mad a reont en deio-man (gwaz a ze evit ar Rusianed), penoz ec'h int potred plom en o zav ha gwenv en o izill. Pion oar hag hen na voint ket i hon mistri divizatoc'h? A-ben hanter-kant vla aman, ma chom an treo da vont hag ar gwina-ardant da redek, ma na ve ket stanket maougen ar vezenti, ni, Bretoned, ni Europiz, a vo deut da vean koruandoned, tud glac'harat gant pep seurt goulion ha klevejou. Taget omp gant si fall al lontegz.

Er c'hontrol, potred Zav-Heol a oar miret o naou hag o se'had, bevan gant nebeut a dra ha bevan treut; d'ar seurt tud-ze eo bet a viskoaz rouantez ar douar. Ni, ha na c'houlomp ken ober na gwener na kostreiz na daouzel-deio, ni, debereien kik hag everien gwin-ardant, na vo ket red hep dale skei warnomp evit hon diskar; menel a refomp en hent, hag ar re-all a dremenno warnomp hag o daolo ac'hanomp en doule da achi krewi.

**KOZNI. — YAOUANKIZ!**

An avel a c'houe gand konnar,  
Ha, distaget diouz ar gwe braz,  
'N deilho melen war an donar  
A ruilh. Arru ar goanv, allaz!

Krommet an den gant al labour,  
E vleo ive deu da gouzan,  
Mez eled'h bevan melen aour,  
Pac'h eont kwit e vont gwenn-kan.

Hag ar c'hoziad e-zonj neuz,  
Pa vel ar gwe digempennet,  
Gwechall ma bleo-mo oa ive  
Melen aour 'vel deilho koueet.

Gwechall ive ma jod oa ru,  
'Vel hini ar vugale-man;  
Ma zrem oa kaout, ma lagad do,  
Pion ma anavezfe breman? . 3

O ya, arru 'vidon ar goanv,  
Hag aróg pell falon ar maro  
'N o dienkrezet ma c'horf hianv;  
'Meus nob non, 'deuy ra pa garc!

Me n'on ken mad 'barz ar bed-man,  
Nemet d'ober tregas d'an oll,  
Bendeiz ar bara a debran  
A ya, kenkouls laret, da goll!

Mes petra laran, ma Doue,  
A eneb da hano zantel?  
An den zo fallaker, O true!  
True, Doue, Tad eternel!

Ma a zo eur paour dilezet,  
Kollet gantan kerent, mado;  
Hag an der a zo ken techet;  
O Doue na vez ket garo!

Gwall-ankeniek e ma darvoud,  
Ha den ebet 'vit ma harpou,  
Den ebet neblec'h 'vit gallout  
Ma frealzi em tremenvan!

'Paour kez truant, ni 'zo aman,  
Ni, barzed yaouank Breiz-Izel,  
Na vi ket lezet 'n es-hunan,  
Ni a rei d'id diduel.

Te a oa gwechall marteze  
Barz kalonek, evel-domp-ri,  
Hag ar ween se'het breme,  
A oa eleiz a freuz enni.

Donjans d'ar gozni, stonomp penn,  
Ha roump bepred 'vel gwechall  
Ar renk-kentan d'ar bleo gwen,  
Merk a enor 'zo-war o zal!

Binig ac'hanomp, koziad mad,  
Te a zo deuz Breiz tremenet,  
Binig re 'zo vont d'an argad,  
Ro da dorn da Vreiz da zonet!

KALON-DIR.

**MARVAILHOU**

Eur wech e oa eur C'hernevad koz o vervel hag a c'hialvaz e vugale da zont da gomz gantan :

« Seitek ijen, emean, holl ken lard ha ken pounner a lezan war ma lerc'h gana'h ho tri. Lodennet ane etre-zoc'h, egziz man nevo Job, p'eo gwir eo ar ma bevan, ad hanter ane; Fanch, an dederen, ha Pipi an naoved. »

Job a fellaz d'ean klevet gant e dad penoz hanter seitek ijen, meaz ar potr koz a varvaz. Nec'het ar botred. Pipi a lare : « kement ha kement da bep hini, p'eo gwir n'haller ket ranna ane evel an neuz gourc'hemennet ma zad. »

Mez petra eo kaout c'hoant da dreo Job, laka, n'houlle ket.

Hag hen da gaout e amezek, eur c'hoz pinsin koz, a vije gret an Tas koz anean, abalamour ma oa liper. An Tas koz a evaz meur a dasad 'bóg ma lavaraz gir ebet. Eun dro bennag e sayaz 'n e za : Deuz ganin, emean.

Mout a rejout da di eun amezek-all, hag an Tas koz a c'houluz gantou prestan d'ean eun ijen. Mout a reaz ar ijen gante. Pan arrijont en ti fugale ar C'hernevad, e oa eleiz a dud eno deut da welet ober eur lodennaden ken diez.

An Tas koz a reaz digas ar 17 ijen hag a lakeaz e hini gante.

— « Job, emean, a glekaout an hanter Roet an hanter da Job, da laret eo nao.

Fanch, an dederen; roet c'houec'h da Fanch; nao ha c'houec'h zo pemzek.

An naoved da Bipi; roet d'ean an daou-all. Pemzek ha daou zo seitek.

Gret eo al lodennou; ha breman kaset an drio'houec'h ved ijen d'ar ger d'e vestr. »

**HENT AR GROAZ**

Ar gwellan levr da lenn epad ar c'horaz. 3 gwennet ar pez, (E ti Kroaz ar Vretoned).



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOÙ

Eur skoet ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar breizou estren evit ar breizou keltiek.

## SKRIVANIERIEN

Kaz at labourioù pe d'an Oiro VALLEE, Esner, ru Zant-Beneal, Zant-Brick.  
pe d'an Oiro MOAL, Skrivaniar, 17, bati Charner, Zant-Brick.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep ardeunnad-skritur.  
(Diaken a leiz evit meur a embann diou-tes).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Fuzer ar Geiz.  
Sant brezonek eo dud ar feiz,  
Gand ar gallek ez alio a Vreiz.  
Fuzer ar Geiz.

Dalc'hit lepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonik.  
Yez ar feiz eo ; ma ve teac'hit,  
Ouspenn ar Vez, e vo Pec'het!  
Mitur.

## AL LEZEN DAOU VLOA

An deion-man, pa'man o voad da dremen, e zo kalz a drouz gant lezen neve ar servich, al lezen daou vloa.

An darnvian 'n em gav evnuz o sonjal enni : eur blaavez nebeutoc'h o devo d'ober. Eur rum-all a gemer anezhi a-treuz, rag hia nebeutoc'h ar re gentan a vo evite eur bla ouz-penn. Bre-ze kalz a dud hag an holl, kouz lavet, (nemet eta potred ar blavezion, an dizpanseed) a gav honnez eul lezen fur, just, eul lezen reiz.

An dra da gentan a zebant gwir... mes pa ve studiet ervad, goude bezan klevet kaoz pep-hini, e wel eun penoz al lezen neve a wasko kement war ar vro, ha lavet a ran, marteze muioc'h eget an hini goz.

Laret e va, herve an Egalite e tle an holl gouzanv ar memez trubuilhon. An dra-ze a zo eur gnou braz, eur gnou spontuz. Gwaz eo ze da neb a vo tapet gantan ! Da bep-hini, er chontrol, e tle bezan grot e vezh herve e reiz, herve e c'halloud... Penoz eun den bihan a dougo war e ziouskoan an hevelep bec'h gant unan braz ? A belec'h eun den dister an evo kement a neuz hag unan kreuz ? Penoz ar paour a c'hallo biken ober evit ar pinvik ? Ze nan hall ket en em gûd ha dre eno eo e pech al lezen neve !

Gwir eo, dre ar frankiz hep muzul a leze al lezen goz gant potred ar skolioù braz, ar re-man 'n em lake holl studioien en reiz, da vezan avokaded, medesined hag all, ha ze, petra nemed evit tec'hel eus a zindan al lezen tri bla. Gant ma chomchont er skolioù beteg pomb, c'houec'h vloa warn-ugent hep ober netra, ar botred-man a re forz kaer : madou a-walc'h o devo ; ar pezh a glaskent o oa pellat eus ar servich. D'eun toullad ane, a dra zur, al lezen daou vloa evid an holl, a rey kalz a vad : laket a veit war an hevelep troad gant an dud all !

Mes en-kenver ar studioien divalo e zo ive reon all, potred a galon hag a labour 'vit bean 'n o Bro eun dra beunag a vad. D'ar re-ze al lezen daou vloa a raio kalz a zroug. Distaget a voint en-pad daou vloa diouz o studi hag o levrioù. Kalz ane a heugo goude euz huc ar c'hollajoù pe, ma na reont ket, 'n em gavfont da vihana diwead, diwead en penn o mic'her. Setu int eta diter'het ha marteze skwizel... ha ze a zo eun dra fall-tre, rag kement a ezom he deus eur vro deuz talvoudegez ha skiant ar vicherourien vraz, an dud a blen, evel eus nerz ha galloud he soudarded.

Gwelat hon deuz an tu pinvik pe tu an otrone ; gwelomp breman an tu paour, tu al labourerien, ar vicherourien vihano, en eur gir ta an holl dud izel, tu ar Bobl.

Da gentan, e welomp e-touez potred ar blavezion ar mab-henan intanvez, an hini an euz eur breur er servich hag an hini a zo gwelout eul zikour tiegez.

Aman e teuan dius-tu da weted talvoudegez ar pezh a laren uheloc'h : penoz hini abed eus ar re-man a c'hall tec'hel kement ha keit diouz ar gir a lar : Na dle bezan arme abed !

Eo, eun arme a dle bean, rag eun arme eo nerz hag esperanz ar vro. Penoz, labourerien douar, e hadfet ho park hag e troc'het en peuc'h an eost ennan ma na ve war ar park-se eur gedour hag a difenna ac'hanoc'h ouz enebourien ar vro ! A belec'h c'halle ar vam baour sevel hep nec'hamant he c'hrouder bihan ma wel o tont beunde bandennadoù tud gwa da devi d'ei he zi ha da walla he bugel ? An arme, eta, a zo euz dra zakr ha neb a bella outi kalonou hon zud yaouank an euz pec'het braz. Heneuz nan eo ket dellezek eun an hano kaer a Vreizad !

Herve a glevan, 'vid an deion e vo sklabeet dre ar vro paperennou war boro vo pedet an dud da zina ha da c'houlen ma tremeno nan al lezen daou vloa, mes an hini bloa.

Pouezet eta, kenvroiz ker, ar pezh ho peuz lennet ha pa 'n em gavo ar paperennou-ze na damantet ket d'o zina.

Gand al lezen bla ho tud a chomo ar gar da labourat ; an arme dro he soudarded a vicher a vo ive kreuz hag ar vro 'n em gavo well : dizammet he vo deuz ar bec'h pouner a waske he diouaskoa hag a re aliez deuz he gwellan bugale tud diwriannet, pere, goude bean bet tri bloa o henit ar c'hasavioù na glasket nemed bue Pariz hag ar c'herioù brein e-lec'h ma kollent gand o yec'hed, o nerz hag o farnez...  
An YEONER.

## Eur vodadek eus ar Yaouankiz kristen a Vreiz

Bean zo bet o Sant-Briek disul divezan eur vodadek eus ar Yaouankiz kristen a Vreiz, dindan reasdar an Aot. chaloni Morelle. Bean zo bet prezegennou eus ar gwella, dreist-oll gant an Aot. Rener, eur breton kalonek hag an euz c'hoant, oll renerien ar Vreiz-ze vad-ze a da gantan war-ze, da drei an treo mui-ouz-mui ouz ar vro. Hon zent da rey skoazell d'ê da seveni o mennad, rag n'ê ket a-walc'h, en hon Bro gaer a Vreiz-Izel, sevel breuzioù kristen diouz skoer re Bro-C'hall, pleal ouz ar vro, ouz he spered, ouz he yez, ouz ar c'halvedigez ispisial fiziet enomp gant Doue a-unan gant ar spered hag ar yez-ze a ranker da ober ive. Trugare da renerien ar Yaouankiz kristen d'hen bean intentet ervad, ha ni, roomp dorn eus hon gwella da dere'het war an hent mad-ze, rag eno, hag eno hepken eman ar zilvidigez, vel en deuz e lavaret gant gwirione an Aot. chaloni Morelle.

## Ar Vroc'h-Ruik (pe Alamik e javed-ru)

(Kannouen eul labousik).

Marvet eo oa Hor Zalver war e groaz ;  
Redek a re ar goad war e gorf noez,  
Deuz e holl c'houliou.

Ar vouevien buhan a ziskennaz  
Deuz ar C'halvar, spontet, trubuilhet braz  
Gant eur bec'h ankenion.

Den all ebet nemed e vignoned,  
E ziskibien enkrezet o spered,  
Chommet war ar mene !  
War greiz an de, drem an heol oa kuzet  
'Vit ober kany da varo Mestr ar bed,  
'Oa nec'het pep eno.

An evned paour a gane hirvouduz,  
A glemgane 'vit o Roue Jezuz,  
Marvet 'kreiz ar poanion,  
Richan a re gant o mouez truezuz,  
Lod anezo e gwel, ha kalz e kuz,  
An holl labousigou.

Kuzet e oan ive, paour kez evnik,  
Gant ar benfik hag al laouenauk,  
En eun toullik moger.  
Skoazet eno, heuzet va c'halonik.  
'Kreiz ma glac'har ; ha me ma-unauk,  
Ha me da nijal ter !

Me da nijal daved Kroaz ma Zalver,  
'Na truezus eo ho stad » ma C'houer  
Pegen kri eo an dud !  
Etre daou laer da vervel ho stager,  
Gwasket oc'h bet gant meur a gant pec'her,  
Gwasoc'h 'vit loened mud !

O kristenien, war e gorf peun da benn,  
War e goste, war e zivrec'h, e benn,  
Ar goad a boullade.  
Goad a rede en traon gant e gerc'henn ;  
Eun guranen sanket en e empen...  
Me a huanade !

« O ma C'houer, an drein-spern ken garo,  
Toullat ho penn, a ro d'eoec'h ar maro :  
Mantret ez oun rakial !  
Hiviziken hirvouduz me gano...  
Me ya dusin, laro nep a garo,  
Da zizreina ho tal ! »

Tennet am euz eur mell drenen spern goue,  
Gant kalz a bean, deuz empen va Roue :  
Na me zo laouennik !  
Roziet oun bet gant eul lomm goad-Doue,  
Ha ma bruched a zo ru abaoe ;  
Me eo ar Vroc'h-Ruik !

SPERN-GWEN.

## GORRE LEON

Strollad Pôted Sant Nonga.

D'ar seizved ha d'ar bempred warn-ugent eus ar miz-man « Pôted Sant Nonga » o deuz gouezet eur plijadur vad ha marc'had mad d'o c'henvroiz en eur zisplega dirazo daou bez-c'hoari e brezonek, na petra 'ta ! Ar mañ prodig, pezh-teatr kentelous savet gant an Aot. Brignou hag anavezet breman dre oil e Breiz-Izel kouz lavaret, hag Alamik al Louarn, pezh-teatr plijadur savet tra nemed evit didui spered ha laouennaat kalon ar wir-Vretoned.

Ober a reont o c'hoariadek war eun teatr eus ar vrasa ha kaera o ouffed da wetet, savet e porz heñor kastell Keryan, roet d'ezo en deizioù-ze dre vadelez an Aot. kont de Coatgourened mear ar harrez, dirak eur pobl tud diredet eus pevar c'horn ar vro : eur pepar mil bennak anezan da nebenta tout er wech kenta, hag eur milier hag ouspenn d'ar bempred-warn-ugent, daoust ma rea eur glao duir-bill en deiz-ze beteg eun heur goude kreisteiz.

N'euz nemed peb meulodi da rei d'ar hôted-ze 'vit an doare m'o deuz kaset o c'hoari en-dro ha mar o deuz poaniet — hag ober o deuz ranket da ober ar pezh o deuz great — n'o deuz ket poaniet en aner rak deuet eo bet mad ha mad dreist an traon ganto, evit ar c'han kouz hag evit an traou all.

Hag heb mar ebet, o wetet pegen kaer eo kanaouennou ar vro, ar yaouankizou a deuo hag a lakaio o zonion da dius da dregant war venezioù hag a traoniennou Breiz-Izel da kemer lec'h ar sonioù gallek, m'ez peurliesha pa ne vez ket donjer ouz o c'hevlet.

Beuzet en hanv « Doue ha Breiz » d'ar hôted kalonek-ze evit ar vad dispar a reont en o c'horn-douar. Pa vezer var an hent mad n'euz nemed eun dra da ober : kendalc'her atao. Hen ober a raint daoust da bep tra.

N'her graut ket heb poan gwir eo, rak n'euz netra vras ha talvoudus evel ar pezh a reont hag a velle gallet ober heb poan. Mez pa garer Breiz-Izel ha vad ar genvroiz evel ma reont, ne zeller ket ouz ar boan pe, ma seller outi, e karer anezi.

Menoz ha nerez-kalon da Bôted Sant Nonga. Ar pevare strollad warn-ugent a c'hoarierien vrezonek int ; abar daou vloaz amañ e vazo kement a strolladoù savet var o lerc'h evel en o rak. Neuz 'vad e teuo da wir komz ar barz brudet Taldir : « Dihunet out breman va Breiz ! »

Unan euz ar re o deuz bet ar plijadur d'o seloni.

Trugare d'ar mignou an euz bet ar vadelez da gas d'imp al linegou-man uheloc'h, ken bras skrivet, di-





# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

SKRIVANDEGION

EMBANNOU-KONVERZ

Eur skoul ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.

Kas al labourioù pe d'an Odro VALLÉE, emeur, ou Zant-Beneat, Zant-Briek, pe d'an Odro MOAL, Skrivaniere, 21, 20<sup>th</sup> Charner, Zant-Briek.

Tri gwennak pop sroedennad-skriber.

(Diskenn a breiz evit meur e embann dienn-ti).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo doud ar feiz,  
Gand ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hil hepred d'ho prezoned,  
Yez an dud vad ha kaloned.  
Yez ar feiz eo ; ma vo trechet,  
Goupañ ar Vez, e vo Pechell  
Muzik.

Pa oa zad ha diskiant an holl. Doue ar velleien hag ar  
religion a oa mad tre ! Breman an treo na gurzont ken  
menez tra. Aboue eo deut war an douar an heuchou-  
houarn, ar gweturioù dre dan hag an holl dres gaez a  
welomp bennde ; aboue a zo zavet en hon zontez sperejou  
braz hag a nac'h o Chroner. Doue a zo trechet hag an  
den n'an euz ine abed ! Dre-ze, eme ar Framasoned,  
pae abed ken d'ar velleien ! Pell e oa e oamp o klask an  
tu da gas da vale eur religion hag he deuz bet zudet hon  
Chendadou epad triwac'h kant via... Arru eo an amzer  
da zigristeni ar vro ; na fell ket d'imp sonza ardeny...  
Evit na vo spontet den abed, evit kuz sonjou fell hon  
c'halonon, e refomp eul lezan-hag a zebhlant mad. Laerz  
a refomp d'ar Bobl nan eo ket dleet paea beleien... Ar  
Bobl, peurlvian hep diskadurez, a grede ac'hanomp ha  
rey ket a drouz. Evelse e refomp hon zorfed zioul, zioul  
hag e kezfomp dizeblant...

he madou laeret, mes en distro ar Gouarnamant an em  
garge da baez d'ar velleien, en hano an Iliz, eur mad  
bla impliet d'ho beva ha da honrei da holl ezommeg  
religion. Biskoaz n'ez eur bet gret na lezen, na maez  
gant kement all a furnez ! Ac'hanta, ar marc'had ze eo  
fell hirio d'ar Gouarnamant terri an eur nac'h euz ar  
velleien nan o fac, c'hoaz eur wech, mes ar die zakr an evad  
n'em garget da baez d'e diwar ar madou laeret gant  
digant an Iliz epad an Dispac'h vraz. Ar dre-ze a zo d'ar  
Gouarnamant eun dra ken steiz ha ken red paea evel  
mad a ro d'an dud diwar an arc'hant laket gante  
C'hef-Espere.

Goullennet, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
mignon Klada :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-goue'h emenn digant hon eskop breizad, an  
Aot. W. eskop Dabourg ; unan eus ar gwella hag an du-  
diusa lezarioù bet skrivet e brezonek betekhen.

## ALUZENNOU DIGANT HON LENNERIEN

Postad Sant-Nouga hag ho Renor. 20 real.

## AL LEZEN NEVE

I

Al lezen neve n'eo ket ar peiz a gred meur a hini.

An holl, marvad, a oar eus petra e komzan pa lavar  
e al lezen neve. An holl a oar e fell d'in kouez eus al  
lezen spontuz dre behini e c'hoanta ar Framasoned lem-  
mel digantimp hon frankiz a greden ha huan, war an  
heyelep tro ar velleien hag an Iliz zantel. Al lezen  
hanvet gante evit tonelli an dud, « Lezen a Gouarnamant  
Iliz hag ar Gouarnamant » a zo evid ar gristenien eul  
lezen displeal, eul lezen a gasoni hag, evit laeret an traober  
ha her, eul lezen a drubuilh evid an Iliz, galvet da hada  
er yso glac'har hag anken ha da lakaat anei — marleze  
hepdale — en tan hag en gwad !

Kalz a dud, an darnvuian zoken war ar maezioù, a  
gemper al lezen evel eun dra reiz ha dleet. En o spered eun  
e kred d'e e vo lezet gand ar velleien hag ar religion heb  
frankiz d'ober ar vad, heb aotre da ren an gristeniezh evel  
diagent ; nemet, pegwir ar Gouarnamant a zo fall ha  
lize, ar velleien n'o devo pae abed ken. Lezet e voint  
da'n em dibab gwellan ma c'hallfont, mad d'e ma kavont  
en o farrouzioù ineou madeleuz... Eus an tu-all, ar  
Gouarnamant dife o lezo digabestr ha dishual evel pa  
n'annyezhe ket muio'h ane evit Tarked !

Ar sonj divalo-man, mad hepen d'eur spered bet  
bennag ha diannaoudek, en tu-hont ma 'z eo fall daonet  
drezan eunan, a vije c'hoaz madik awal'h en o stum. Ar  
Gouarnamant na c'houllet ket a velleien ; mad d'ezan ! mes,  
da vifana, e oar-ervad penoz an holl n'o deuz ket eveltan  
skiant krenv awal'h, da dremen hep religion ; dre-ze e  
lezo evelkent ar velleien ebarz ar vro en servich ar gris-  
tenien : d'ar re-man d'o faea ma karont... Ma vije gret  
al lezen en eur spered ken frank, daoust ma vije direiz,  
ar gristenian a vija bet avuruz braz o harpa hag o zikour  
o beleien ; ketoc'h evit beva evel al loened gwe, o dije  
rauet gand ar velleien o dijian tam bara : gouzanvet o  
dije poad, mes o beleien a chomche gant !

II

Al lezen neve a zo eul lezen a gasoni hag a  
displeald.

Mes, mignoned ker, al lezen neve nan eo tam abed  
evit eul lezel gand an Iliz, gand ar velleien, gand  
ar gristenien o gwizion, e lema digante o holl frankizioù.  
Ken hehez zoken ez eo ma na oar den petra a spontuz a  
vur honnez d'imp. Pa Jean an den pannadou (artikloù) al  
lezen-ze e sonj d'an huanvreal... Nan hall ket ar c'hristen  
lakaat en e beñ e vo gret eur spered lezan gand eur den  
a skiant, pe otramant ma 'z eo gret, an den-ze eo peno,  
evit mad an holl, lakaat aneun en d'heul !

Da gentañ, ar Gouarnamant na c'hall ket pae ar  
velleien. Ar velleien evit na zo tud hep abouder, tud  
eus a here nan euz euz abed ken hini. Gwechall goz

III  
Paeamant ar velleien n'eo ket eur paeamant ordinal,  
eur die eo ha n'heker ket e nac'h hep laerez.

Ya, banden lamponed, mes ar Bobl nan eo ket zod. Ar  
Bobl a oar awal'h penoz an arc'hant a va roet hep bis  
d'ar velleien a zo evid ar Gouarnamant eur die zakr eus  
ar madou an evoa laeret breman zo tremen kant via (eun  
amzer an Dispac'h vraz) digant beleien, digant ilizoù ha  
digant holl c'houenhou Breiz ha Bro-C'hall. An arc'hant-  
ze nan eo ket eur pae, hennez a zo eur die. Tremen hep  
rey o fac d'ar velleien a zo evid ar Gouarnamant eul  
laeronsi !

Goude amzerioù spontuz an Dispac'h vraz, goude ma  
eo lazet an darnvuian eus ar velleien, zerret, laeret an  
ilizoù ha laket kalz auz d'ober marchosioù, Napoleon  
kentan a zigasaz ar pench d'hon Broen eur had-digeri an  
Ilizoù hag en eur rei adarre d'ar religion gristen o frankiz  
kollet. Evel ma oa laeret madou an Iliz ha ma n'halle  
beleg abed beva, Napoleon an em glevaz gand an Tad  
zantel ar Pab Pi VII diwar-benn stad ar religion en  
Franz. Etreuze o daou e rejont eul lezen pe gentoc'h eur  
marc'had dre behini an Iliz a c'halle c'hoaz ren ar vro.  
Ar marc'had-ze, hanvet ar Choncordat, gret en eur spe-  
red frank ha leal a zigolle dre e artikl 14, ar velleien, an  
ilizoù deuz o madou laeret en eur rei d'e eun tam pae ar  
bia. An tammik pae-man, eul lodennik vifan hepten  
deuz ar madou laeret digant an Iliz gwechall, nan eo ket  
eta eun tam bara roet a galon vad d'hon beleien gand ar  
Gouarnamant, mes eun dra red, eun dra c'heet !

IV

Madou an Iliz laeret digant : ar Choncordat savet  
gant Napoleon da reuta o gwizion d'ar velleien.

Petra oa gwechall-goz madou an Iliz ? Madou an Iliz  
a oa donezonnoù roet gant kristenien vad pe d'an Iliz pe  
d'ar velleien gand an urz d'ober oute ha da heuilh gante  
a benn-da-benn sonj an dud a roe ane. Madou evel-se a  
zo zakr ha laerez ane, trei ane diwar o hent a zo eun tor-  
fed spontuz ! Setu aze, koulskoude, ar peiz ar Gouarna-  
mant diaoulek an Dispac'h vraz. War zigare ren ar vro  
war-za an dizion elez, war zigare lakat ane an holl da  
laerz eul lamponed, ar Gouarnamant-ze a laerez hag a  
roaz aotre d'an holl da laerez kement tra a oa d'ar gris-  
teniezh ha d'an dud na sonjent ket eveltan. Ac'hane ar  
vur heuruz a lakaz hon bro en tan hag en gwad epad  
dek pe daouzek via. Setu perag, goude kement a drubuilh,  
ar vro n'halle kad pench abed. An holl a oa pe  
laeron pe dud laeret ! A benn lakaat ane da'n em glevet  
e felle eul lezen, eul lezen da urza heb tre, eur lezen da  
rei da gentañ troad d'ar religion ; pegwir, o paouez gwelet  
an tesien tris e oa an dud ; nan hall ket ar gouardurioù  
beva war an douar hep karout ha hep azeeli o Doue !  
Dre-ze eun em glevaz an Tad zantel ar Pab gant Napoleou.  
O daou e rejont ar Choncordat pelini — nan hall den  
heñ nac'h ! — an euz roet d'hon Bro tremen kent via a  
beñ gristen hag a urz vad. Gant an Iliz a hadkemere  
he gwizion, harpet evit mad an holl gant lezarioù ar  
Gouarnamant. Drezan an Iliz a leze gand ar Gouarnamant

Gwelat e red eta, kenvroiz ker, penoz al lezen neve a  
zo displeal ha trubard. Pa lavar tud ar Gouarnamant ez  
eo eun dra vad ha reiz, laromp d'ezze hep aon ez-imp  
gaouiad ! Diganimp-ni kristenien, e oa laeret gwechall hon  
ilizoù hag o madou ; warnomp-ni eo e koue beñ al  
lezen fall, rag evel ma lavar d'ac'h, c'hoant ar Framasoned  
— hon mestrou hirio — ez eo digristeni ar vro ha  
lakaat ac'hanomp da vera evel chas en eul lemmel digan-  
imp hag hon beleien hag hon religion.

Herye heb lealded nan hall ket ar Gouarnamant tern  
ar Choncordat ha laerez ar velleien. Gwir eo hen d'ez  
mestr ; ha, pegwir an despet d'ar Gwir eman gantan an  
Nerz, marvad e vo d'imp plega hon chonk eur penad.  
Goude e hallfont diinn ma na vemp ket re d'evad...  
Da c'hortoz, lennerien ger, gand aotreder an aotro  
Vallée, hepred zoursiz da sklerijeun ac'hanoc'h, e lea-  
dalc'hin da gont d'ac'h eus fallentezioù al lezen neve.  
N'an euz gret nemed krigi ganti. Ar peiz a zeny warlerc'h  
a zo wasoc'h c'hoaz ha ma na den an aotre Doue da drei  
diwarnomp ar waleh grevuz-man, ma rud kez, hepdale  
e skuilfomp daero kri...

An YBONET.

Tragare d'hon mignon mad, ar Yeodel, da vean dis-  
kriet ken freaz histor al lezen neve. Gwir eo, siouaz ! ar  
peiz a lavar, Nebout a dud a wel skler hirio doue an  
treo, gant ma ve livet kement a c'hevier a bep tu war ar  
paperou fall. Ra gendalc'ho hon mignon da skira d'o  
diarben ha da sklerijeuna d'imp hon sperejou war treo  
ken penezus evit ar vro hag ar Feiz !

## DISTRO AR BARZ KOZ

(KENDALC'H)

Pegen doue o vo d'in d'an hanv er pardonioù,  
Adgwelad adarre plac'had yaouank ma Bro.  
Gand o bronzo zer gweun, o c'hoef dantelez,  
O tougeu gand enor, skeden gaez ar Werc'hez !

Pan in da vezeven da redadek Kerd, ar  
Ar c'haera dez goullo ma Bro-Uhel-Berne,  
E welfin gand dud hon holl yaouankizoù  
O tansal ar gavad euz zôn ar binioù.

Pan in da viz gouere da hardon Kanuher,  
Breman en em c'hozi, evel pa oan bugel,  
E trido gand ar joa ma Chalon a Vreizad,  
Pa glevin distaga kân ar Magnificat.

Pa vo ma nizien penn ar prozision,  
Goude ar gouzpeno da deziz hon pardon,  
Gand Kroaz hon Bedempter, Baniel hon parous,  
Refo war ma diou jod daero teuer ha doue.

PENNOUAG.

## Pardon sant Matilin Monkoutour

A zo bet eus ar brava evit ar bla e drugare dreist-holl  
da Zoue, hag ive d'ar bere herneez a oa direct-stant ha  
niverus da bedi ar zant koz. La d'han beleien vad o doue  
lakaez o fonn da gaout an Iezou. Bennor-Doue, d'imp-holl,  
d'an Aot. Hamon, reuzer Kistadil, laeront, an eur gwelet  
ar breiz evit brezonek hag a zo d'ac'h er sperejou an heñ  
an d'evit eus e gentelioù mad !

war henn pôted Sant Noug. Barzudo eo a reer e Bro-Leon, e gwirione!! Da zenio ar skouerio-ze ken mad da zibui hon Bro-Tréger ive! Stag eo d'hen ober gant pôted Pleuzal, hag ar re a zo o vont bremañ da heuilh o roudou: Kelz zo ané war a glevan hag an taol a deuo da vad gante, sur mad, gant oc'h int lenn a volante vad ha renet eus ar gwella gant beleien evel an abaded Daniel, Bescond hag all; rag, diwallomp d'hen ankouat, hon beleien Breiz eo a gaver e renk kenta oc'h ambrog hag oc'h eenna ar yaouankiz war an hent mad. Pôted sant Noug, int-l ive, o deuz bet an ervad da vean henched evel-ze gant eur belek santel ha kalonek evit e Vro, an abad Perrot. Trégare ha mil bennoz-Doue d'ezan evit ar skouer dispar an euz roet hag al labour vad-dreist an euz graet evid Done hag ar Vrot

## TONIOU AR VRO

Daou levr neve war toniou ar Vro.

Dalc'homp stard d'hon toniou a Vreiz-Izel, rag enne e ve Sperec ar Vro; enne ez euz bet lakat gant hon tadon koz, hag hon zeit Breiz (rag hon zeit o deuz savet dan eus hon toniou) ar pep gwella, ar pep doua ar pep santella eus o euz. Eun teuzor, e gwirione, eo hon toniou Breiz-Izel hag e lemp e viret hag o difenn eus hon gwella. Kement-se hon deuz lavaret aman meur a wech. Gwelloc'h zoken evit lavaret a reomp, pa reomp dora d'ar varzed da voula an toniou dibabet gante evit o oberou, ken war Groaz ar Vretoned, ken war bapereunou distag.

N'eo ket e ti Kroaz ar Vretoned hepken e ve pleet gant an toniou brezonek, dre-oll e ve tennet sellou an dud out. Komzet hon euz warlene eus an Aot. Bourgault-Ducoudray, eun den gwiziek-braz war gement a zell ouz an toniou-kana. Leorion ha prezegennou an euz savet war hon toniou Breiz-Izel « ar braban re a oufed da gant er bed-oll, emezan. »

Da hent an Aot. Bourgault-Ducoudray ar vuzikerien gristen a den breman da vean tost mui-ouz-mui ouz hon toniou Breiz-Izel, dre ma welont skler hag anat e vije diez kavout gwelloc'h evite da zistaga ar galon dionz ar c'hoantegerion diroll ha d'he sevel war-uz Doue. « Netra na dalv ar c'hantikou brezonek d'ober diwana ar bedenn en euz » eme-int gant gwirione. Senti ouz hon tad santel ar Pabnareont ken oc'h ober, p'an euz heman goure'hennet stiz d'ar vuzikerien gristen tehel dionz an toniou skarz gis neve hag adrei, ar buhana ar gwella, ouz an toniou koz ha pedennus. Kul liker-kemennadurez a zo bet neve-skrivet war ze gant hon Tad santel ar Pab Pi Degved.

N'e ket souez, goude-ze, e ve stadiet hon c'hantikou brezonek gant skol-veur ar vuzikerien hag ar gaverien gristen e Paris. *Schola cantorum Saint Gervais* eo hano ar skol-ze ha brudet eo dre ar bed-oll. Eman o paouez moula en eul levrik kaer, e hano « kanaouennou santel », eun dibab kantikou brezonek eus ar gwella. Reizet eo bet ar c'hoantegerion a-vel hon toniou santel, an abad Biler, person Iviz. Ouz pep ton ez euz bet staget gant an Aot. Ropartz eun ton-silla eus ar c'haera, a c'heller da c'hoari war an ograon pe an harmonium en ilizon-ker. An holl veleien ha kement hini a ble gant kan an ilizon e Breiz a dije goulenn al levr neve e ti ar Schola cantorum, 15, rue Stanislas, Paris.

Ouspenn hon toniou kantikou, hon toniou soniou ha kanaouennou ive a dilemp da viret, da zevel ha da zifenn ouz an toniou gallek sod pe zotoc'h a glasker da zila en hon touez, 'vel t'n *Viens Pouppule*, ha kant ha kant all a douina ken zod-all pe zotoc'h c'hoaz.

Evit lakaat a-vel hon toniou soniou ha kanaouennou an Aot. Bourgault-Ducoudray an euz skrivet eul levr dispar, hag a zo anavezet breman er bed-oll.

Ya, breman er broioz pellan eus ar bed, er Beljik, e Bro-Ziz, eus Amerik zoken, e ve kanet ha mettet hon toniou a drugar d'an Aot. Ducoudray ha d'e levr. Da vo bennoz Doue warni!

Setu breman eul levr neve kenkouz-all o tont er-maez eus ar wesk. An oberou eo an Aot. abad Guillaume, eus Ergu Armel, ar belek kalonek ha gwiziek an euz poaniet kement da zastum ha, da gempen toniou, ar Vro. Lennet an nevoa doro eus e labour e bodadek Kevredigez Breiz e Lesnoyenn warlene ha bet evitan eur priz gant *schola cantorum Paris*.

Moulet eo bet al levr eus ar gwella e ti Simon, mouler e Rouzon, diwar goust eur goureuzeriez a Vretoned wiziek hec'h hano *Société des Bibliophiles bretons*. Kavout a reer warnan eun dibab toniou Kerne ha da hent an toniou ar c'hanaouennou, ar brezonek hag ar gallek kenver-ouz-kenver. E kenskrivad e levrik, eur pez-akrid lenn a wizigez hag a furnez kristen, an Aotrou abad Guillaume a ro d'imp ar

gwella kuzulion : « Bretoned, na c'henvrot, emezan, ar vrideta etouez ar vuzikerien a zav o mouez gwel pe well da veul kaerder dispar hon c'hanaouennou brezonek. E lec'h plega ho peun ouz gwaperz ar C'hallaoued, savit anean. Bezet stad enno'h eus spered, yez ha sonioz ar Vro ha poaniomp oll dora-ouz-dorn liviziken da zifenn, da viret ha da zevel hon yez, hon barzoniezh hag hon toniou Breiz-Izel ! »

Evel-se bezet gret.

## BECH DA ZATAN !

Lennet ouz taol, ar meurz 21 deus a viz-meurs, d'an otro chaloni Baudouin, evit meuli al labour an em eus : groët en Pontre about pemp bla warn-ugent eman eno.

An de-all Lucifer, 'vel dastumet 'n eur bern, War e gem milliget holl gouinar an ifern, 'Chelvé e benn-rener gant eur vouez ken euzuz, Ma rede an diaoulou en o zoullo da guz. — « Mestr-stur, kemenn ran d'id kas aman heb dalo, Ar c'habiten 'neus urz ewar diaoulou Pontre. » — Heman oa o vale, mez, ouz ar goure'hennet, E tired, gant ar spont reud e gred en e benn. — « Ewar da wall-aele te a zo kabiten, Evit kas d'an ifern tud daonet a-vanden ; Hogen, petra glévan ? About n'oun ken pegeit, Hini depeus Pontre 'neus lakat aman treid ? 'Pad eun neubed deio gondo ma tremenz, Dre duze unan deus ma c'hamarado braz, C'houez al leou-douet, ar blasfem, ar gourdrouz, Ar gasti, ar venjans hag an oberou louz, 'N em belek a deus, gante kement a fler, Ewar ma c'hador-dau e freskas d'am... ler ! Mez chetu adarre, n'ouzoun evit petra, Kelo mad abed ken : kaer 'neus gortoz... netra ! » — « Mest-gwif, daoust ma poaniomp ha me ha ma banden, Mar n'hon deus gallet c'hoaz digas d'ec'h eur c'hristen, Eun den hepken a zo kiriek da gement-uz, Zatan, ha hennez é... Person kanton Pontre ! » — « Hennez, m'arvad a zo ha braz ha gallouduz, Evit trec'h labour diaoulou ken ijizuz ! Hen berrit a vo red ha krennan e gipen ! » — « Mestr, hen anzav renkan, eme ar c'habiten, 'N eur grafiat e benn ma savaz c'houez ar rost : Person kanton Pontre n'e ket keit hag ho lost ! » — « Diboanitusoc'h vo d'id krapat ewar e chonk. Ha silan en e greiz ar pech'ed hag an drouk ! » — « Lucifer, hec'h awalc'h am eus o ren ma stroll, Mar tenfenn da vourdan, raktal vefent diroll, Ha c'hoazzin goap rafent pe e wellent e-ber, Eur pezh diaoul eveloun war eur chonk ken dister. » — « Lak e vouez da dermal, ro d'ean ar paz-yud, 'Vit en harz da brezek'ha da c'hoarid an dud ! » — « E vouez zo eveltan, na neuzuz na huel : N'e ket krenvoc'h evit krougous an durzuul ; Mez gant an tamm mouez-se, pe brezek, sav da vad Glac'har er c'hazono, daelo en daoulagad. » — « 'N eun ti bennag, en ker, a-guz, e korn pe gorn, Stign eur pech fall d'ean e kavo dindan dora » — « Daou dora heman, ma mestr, na diskhent biviken 'Met ober zin ar groaz, ha rei an aluzen » — « Kers war e lerc'h neuz, seulo ewar seulo, Gwech pe wech, emichars, mont a-deuz a reio ! » — « N'e ket fero en heuilh : ar veltioz kaeran, Ar fe, ar garante war e lerc'h a ziwian, Evel ma ve gwelet, ebarz ar prajeier, Bleunio o tispakan gant an neve-amzer. » — Zatan aman chomaz eur pennad da sonjal, Eur sell spontuz 'n e benn hag e dent o skirignal, Pe loskaz soudon eur vlejaden garo, Ma kreas an ifern betek 'n e donderio ; [dister. ?] « Keit ha ma lost... heb mouez... gant eun tamm chonk Zin ar groaz... burzudon... Yennet out, Lucifer!!! En Arz e felle d'id oa maro Vianne. Chetu en Breiz-Izel ac'h e hev adarre !!! »

Otro Person, n'e ket hepken 'boue an de all, 'Tens lakat an diaoulou en ifern da yudal ; Nao mil gwech Jezuz-Krist, sontuz demous ho mouez, Ewar an oter zakr a zo dent en hon zouez ! Kaeran huet epad pemp bla warn-ugent kloz, War ar bec'herien baour disken ar barodoz ! Skuilh glizen ar graso war ar c'hazono sech ; Sikour ar reuzidik da c'houzanyi e rec'h ; Frealzi 'n intanvez ; harpan an emzivad ; Lemmel ar fall-yeolen, hadan an hadan vad ; E daou di neve-hamm dastum ar vugale, Evit diski d'ezo lezen santel Done !... Koment-all a herlez, a vokedou dispar, A rey d'ec'h, en nevo, eur gurnnen a c'hoari. D'ho ael mad na lezet amzer da ziskwivan ; War lever ho p'ne koment 'neus da skrivant ! Ha mar chelaou Doue lirie ouz hon fedan, Nan e ket arri c'hoaz en diwan pajen !

Epad meur a viavez chomfoet d'hon c'helen : Kaeran enor 'vidomp ho kavout en hon fenn ! Evel an heol a domm hec'h sav d'e greiste, Hon c'harante 'vidoc'h 'ya war greski hemda ! Chomet pell 'ta ganimp d'ober skrijal Pol-goz, Ha da gas ar c'hanton, a-bez, d'ar... Baradoz!!!!

Gab LISKLOW.

## BUE VAN BADEZOUR VIANNEY

(RENDALECH).

Ar bed, evel m'arv pervedu, a denaz da rei skoazel d'an ifern : an oll dismeigans a reaz d'an O. Vianney, da behini n'espernaz nag e vrasan donjer, nag an oll dispriz, nag an droug-komz ar muian disteal. Kement-se a oa c'hoant kuzet hag eslamuz an O. Doue, hag an nevoa 'n e zonz diskouel dre eno penoz n'eo ket oberio ha lavario an dud eo a digase pihirined ha vouc'h Ars.

Zervijer an Aotrou Doue na oe ket lieb gouffont an oll fallagriez a laret diwar e ben, rag 'n e veg e oe teulet d'ean, pe skrivet, pe liket gant ar brasan divergontiz ouz mogerio ar presbitoar. Pebez tra feutuz, mar na vije bet ken auzet ! Ar bed na gave ket dellid da berson Ars ! Hen zellat a re evel skabadur an douar, evel eun den e behini en nevoa da gaout mez ! Me c'houl diganech, ha gallout red 'rei ponneroc'h kroaz d'ean da dougen ? « Au amzer-ze, emean, hag an amprou a badaz pemp'pila. Euz eun deiz d'ean deiz all e oan e gortoz da vean teulet er mez a dolio baz, torret eus ma c'harg, ha d'ac'hui ma bue er va'h. » E-kriz an aon hag ar c'huonjennou-ze, ar person mad na oe na dineret na doaniet. Maro mad d'oll blijadur ar bed-man ha d'ar garante evitan e-unan, na glaskaz ket en em weman. E enebourien a ye beteg skrivant d'an O. 'n eskop Devie, hag eun deiz e lakaz e zin war unan euz o lizerio evid rei mui a nerz d'an tamalladur, ar pez n'otreas ket d'unan euz e vignoned hag a skrive evid ober eun didamallidigez. Dispriz hag evel herez an nevoa eun e-unan ken ma re poan d'ean bean moulet, hag aliez e skuilh daero puilh war « louztonio e ino, war e vuc heb talvoudegez, war e bec'hejo, ha beteg war e loutegez. » Pan eo gwir e krede kement-se dioutan e-unan, ha zouezus eo e anaoudegez-vad ouz an droug-komzerien, a zelle evel e wellan mignoned ?

Distro ar bed war an tu-all a oe burzuduz. Koment hag an devoa bet aked d'hen izelaat, kement-all e lakaz an dud ive, p' navjont o fazi, da rei d'ean enorio. An O. Devie a diskleriaz d'irag an oll penoz ar person mad a oa sklerjennet eus an Env hag a oa eur gwir zant. Ar veleien hag ar bobl katolik a lavaraz a vouez huel e furnez dreist par hag e renjont d'ean enor gant kendamouez. Nag a dud ! nag a brez gante evid gwelet person Arz evid lakat o dora war o dilhad, evid klevet eur gomz hebken kouezet euz e vuzello ! Arog m'an nevoa paouzet ar bed da vetezkaat an den zantel, an O. Doue a waskaz gwasonc'h c'hoaz warnan gant kroaz e Vab, dre boanio a iuc dilavavuz. A heb amzer e oa bet spontet gant ar zonz euz ar Varnidigez ha tentet gant an dizesper dirag e « baour kez pec'hejou, » evel ma lavare. Hogen penoz ar gwel euz e bec'hejo a c'helle bean nerzuz awalc'h evid skoman gant ar spont zervijer an O. Doue ? Penoz e c'hollent lakat anean d'ankeoat e zellid dirag e Varner ? Dre ma kave d'ean n'an nevoa na trawalc'h peest ané, na zavet huel awalc'h ebarz ar zantelez. Gant ar greden stard-se, n'ouille ket mervel heb henn gret pinijen. Da viz mab 1843 e oe skoet gant pistigo ha droug-skavent ken gwaz ken e kave d'ean e oa kaset beteg tal ar he ; al louzoueriec'h o devoa kollet fianz, hag ar person a c'houlennaz ma vije roet d'ean e zakramancho diwenn. Leun a spont dirag an darvoud-ze, e pedaz zantez Filomena d'hen parean, Homan a reaz d'ean e c'houlenn hag a deurevez zoken en em diskouel diragan. C'hoant an O. Vianney e oa tec'hel hag en em guz e ti menez'ch an O. de Ranec pe zant Bruno « evid gouelan d'e vuc heb dellid ha klask lakat an O. Done da gaout trae outan. Dre dion vej e kwitaaz Ars, ha pedenno intanet e vignoned na vijent ket deut a ben d'ober d'ean dizrei ha kwitaat e zonz paneved ma temveaz Done lakat anean da walet splez o tlee chom en Ars ha penoz « lemel eun ina euz fankigal ar pech'ed » eo ar c'hénran euz an oberou mad dirag an Env.

(Da heulth.)

F. O.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER-KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon  
GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc — Imprimerie Saint-Guillem.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

For skoot ar bla evit Breiz ha Bro C'hall.  
2 skood, evit ar broioù estren evit ar broioù Helliek.

## SKRIVANIDIRIEN

Kas al labourioù pe d'an Ofro VALLE, Rener, 10 Zant-Donat, Zant-Briek.  
pe d'an Ofro MOAL, Skrivaniere, 27, bali Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweonak pep arundenad-akritur.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann diou-tu).

Ar brezonek hag ar feiz.  
A zo brour ha c'hoar ha Bled.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz.  
Gand ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek,  
Yez ar dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'hat,  
Ouspas ar Yez, e vo Pec'hell  
Mann.

## GOUEL BRAZ EN PEURIT

Al lun-Pask da zion eur goude kreiste, el Listiweu  
Vraz, eul c'hart leo bennag deuz ar bouk war hent Ru-  
nan

## GOUEL BRAZ EN ENOR DA VREIZ-IZEL

ravet gant potred Peurit.

Hag e vo c'hoariet : 1<sup>o</sup> Noz ar Gwadegenno pe Noz  
Maulaje en ti Fanch an Amezek ; kanouenno, konta-  
denno, c'hoario. 2<sup>o</sup> Job al Lonker.

## BREIZ DA VIRVIKEN !!

## AVIEL AR PASION

Neuze Jezus a zeuz ganto en eul lec'h a hanved Jet-  
semanha hag e lavaraz d'e ziskibled : « Azezit aman endra  
(keit ha) ma 'z in da bedi a-hont. Hag e kemeraz Per ha  
daou vab Zebede hag e teronaz (e stagaz da) tristaat hag  
en em c'hilac'hari. Neuze e lavaraz d'ezo : « Trist eo ma  
ene beleg ar maro : chomet aman ha beilhit ganin » hag  
o vont eun tammik pelloc'h, en em strinkaz war e c'he-  
nou d'an douar hag e pedaz o lavaret : « Ma Zad, mar  
deo gallus (posibl), ma 'z ay ar c'hali-ze e-biou d'in ;  
hogen, koulskoude, na yezet ket graet herve ma youl  
hogen herve hoc'h hini. Hag e teuz da gavout e ziskibled  
pere a gavaz kousket hag e lavaraz da Ber : « Petra ! ha  
n'oc'h euz ket gallet beilha eun heur ganin ? Beilhit ha pe-  
dit evit na vefet ket temptet ; rag tear (birvidik) eo ar spe-  
red ; ar c'hlig, avad, a zo gwan (semp), dinerz). Mont a reaz  
adarre eun eil gwech hag e pedaz o lavaret : « Ma Zad,  
ma na hell ket ar c'hali-ze mont e-biou d'in hep ma evan  
anezan, ra vezo graet ho youl (polante) ». Hag e teuz  
adarre hag o c'hiazaz kousket : rag o daonlagz a oa  
becl'liet gant ar morgousik. Hag o veza o c'hwitac'h ec'h  
eaz adarre hag e pedaz evit an trede gwech, o lavaret  
an hevelep gerioù.

Neuze e teuz da gavout e ziskibled hag e lavaraz  
d'ezo : « Kouskit breman hag arzañt (kemerit repoz).  
Setu ma tosta an heur ma vezo lakaet Mab an den etre  
daouarn ar bec'herien. Savit hag omp : setu ma tosta an  
hini a dle ma gwerza. » Komz a re c'hoaz ha setu Judaz,  
unan eus an douezek, a zeuz, gantan eul lod braz a dud  
gant klezeier ha bizier, pere a oa digaset gant pennou ar  
veleien hag enaouret ar bobl. Hogen an hini a werzaz  
anezan an doa roet d'ezo eun arouez o lavaret : « An hini  
a bokin d'ezan hennez eo, dalc'hit-han. Ha rak-tal e tosta-  
taaz ouz Jezus hag e lavaraz : « Salud d'ec'h, Mestr, ha  
hoñt yac'h. » Hag e pokaz d'ezan. Ha Jezus a lavaraz  
d'ezan : « Ma mignon, da betra hoc'h-hu deut ? » Neuze  
e tostajont, e lekejont o daouarn war Jezus hag e talc'h-  
jont anezan. Ha setu unan eus ar re a oa gant Jezus a  
astennaz e zorn, a dennaz e gleze, a skoaz gant mevel  
prinz ar veleien hag a droc'haz e skouarn d'ezan. Ha Jezus  
a lavaraz d'ezan : « Lakeit ho kleze en e c'houin ; rag neb  
pion bennag a gemero ar c'hleze a varvo gant ar c'hleze  
Ha mennout (sonjal) a rez ne hellfen ket pedi ma Zad, hag  
e kasef'heman d'in rak-tal oupen daouzek vanden a Elez ?  
Penoz e vezo sevenet (kaset da wir) ar Skriturioù, pere a  
lavar eo red e vo evel-se ? » Neuze Jezus a lavaraz d'ar  
vanden-ze : « Deuet oc'h gant klezeier ha gant bizier evit  
krigi ennou evel en oal laer. Bemdez e oan azezet en ho  
tousez o prezeg en templ ha n'oc'h euz ket ma c'hemeret.  
Hogen kement-se a zo c'hoarvezet evit ma vije sevenet  
ar pez a zo bet skrivet gant ar Brofeted. »

Neuze an diskibled oll, o veza e lezet, a dec'haz kwit.  
Hag ar re o doa kemeret Jezus a gasaz anezan da di  
Kaifaz, prinz ar veleien, e pelec'h e oa strollet (bodet) ar  
skribed hag an enaouret. Hogen Per a beuliaz anezan a

hell, bete lez prinz ar veleien ; hag o veza net ebraz, ec'h  
azezas etouez ar vevelien, evit gwelot an divéz (ar fin).  
Koulskoude prinzed ar veleien hag an oll alieren, (kuzuilhe-  
rien) a glaske etre fals-testeni a-enep Jezus evit ma, e rojont  
d'ar maro. Ha ne gavjont ket daoust ma teuz kalz a fals-  
testou. Hogen, en divéz, e teuz daou fals-test, pere a  
lavaraz : « Heman an deuz lavaret : Me fell d'in disman-  
tra templ Doue hag e zevel a-neve a-benn tri deiz. » Ha  
prinz ar veleien o sevel en e zao, a lavaraz d'ezan : « Ha  
ne respontit netra d'ar pez a destenijont en hoc'h enep ? »  
Hogen Jezus a davé. Ha prinz ar veleien a lavaraz d'ezan :  
« Ho pedi a ran en an hanô Doue beo da lavaret d'omp  
hag-en ez oc'h ar C'hris, Mab Doue ». Jezus a lavaraz  
d'ezan : « E lavaret oc'h euz ! hogen lavaret a ran d'ec'h  
e welfet gant an amzer Mab an den azezet a-zeon da  
c'halloud Doue hag o tout war gouabrou an nenv. »  
Neuze prinz ar veleien a rogaz e zilhaz hag a lavaraz :  
« Tout Doue an deuz graet. Da betra hon deuz ni mui  
ezom a deston ? Setu breman hoc'h euz e glevet o toui ;  
petra a gav d'ec'h ? » Hag i a respontaz hag a lavaraz :  
« Ar maro a zo dleet d'ezan ! Neuze e skopjont ouz e  
zrem (bizaj) hag e rojont tiliou dorn d'ezan ha re-all a  
grabantaaz anezan o lavarout : « Diougan d'omp, Krist,  
piou eo an hini an deuz skout ganit ? » Hogen Per a oa  
azezet er-mez eus al lez hag e tostaaz outan eur vatez, hag  
a lavaraz d'ezan : « C'houi a oa ive gant Jezus a C'hali-  
leia. » Hag hen e zinac'haz dirag an oll, o lavaret :  
« N'ouzont ket petra a lavaret » Ha pa dremene dre an  
nor, eur vatez all hen gwelaz hag a lavaraz : « Hemana oa  
ive gant Jezus a Nazaret. » Hag e nac'haz adarre en eur  
dout-hag o lavaret : « Na anavezant ket an den-ze. » Ha  
nebeut goude ar re a oa eno a dostaz hag a lavaraz da  
Ber : « Evit gwir, te a zo eus ar re-ze : rag diouz da  
gomz hen anavezet. » Neuze e teronaz (e stagaz da)  
drouk-pedi ha toui penoz ne anavezet ket an den-ze. Ha  
rak-tal ar c'hok a ganaz. Ha Per e teuz kon (sonj) d'ezan :  
« Kent ma kano ar c'hok, e pezo ma dinac'h ter gwech.  
Hag o veza net er-maez e ouelaz ez c'houero.

Hogen pa oe deut ar beure holl brinsed ar veleien hag  
holl enaouret ar bobl en em guzilhaz a enep Jezus evit  
e lakaat d'ar maro hag o veza e erret e kasjont anezan  
gant hag e lakjont etre daouarn Pons-Pilat, mirer ar vro.  
Neuze Judaz, pelhini an doa e werzet o wetel penoz e oa  
barnet, a deuzaz keuz d'ezan hag a gasaz an tregont pez  
arc'hant da brinsed ar veleien ha d'an enaouret o lava-  
ret : « Pec'h'et am euz o werza ar gwad dinam. » Hag i  
a lavaraz d'ezan : « Petra vern ze d'imp-ni ? Ouzit-te e  
sell kement-se. » Ha goude bean tolet an arc'hant en  
templ ec'h eaz kwit hag en em gromgaz. Hogen prinzed  
ar veleien, o veza kemeret an arc'hant, a lavaraz : « N'hel-  
lomp ket o lakaat an tenzor dre ma 'z eo gwerz ar gwad.  
Hag o veza en em guzilhaz, e prenjont park eur poder  
evit bezin an diavezidi. Dre-ze ec'h hanver c'hoaz hirio  
ar park-ze Hakeldama, da lavareto park ar gwad. Neuze e  
oe sevenet gerioù ar Profed Jeremiaz p'an deuz lavaret :  
Hag e kemerjont tregont pez arc'hant da werz an hini a  
zo bet gwerzet, eus a behini o doa graet/marc'had gant  
bugale Israel, hag o rojont evit park eur poder, evel m'en  
deuz merket an Aotrou d'in. » Hogen Jezus a oa en e zao  
dirag mirer ar vro hag ar mirer a reaz ar goulenn-man  
outan, o lavaret : « Ha c'houi eo roue ar Judevien ? »  
Jezus a lavaraz d'ezan : « E lavaret a rit. » Hag o veza  
tamallet gant prinzed ar veleien ha gant an enaouret,  
na respontaz netra. Neuze Pilat a lavaraz d'ezan : « Ha  
ne glevit-hu ket pegement a destenion a lavar an dud-man  
en hoc'h enep ? Ha Jezus na respontaz ket eur ger d'ezan,  
en hevelep doare ma oe souezet meurbe ar mirer. Hogen  
ar mirer an doa ar boaz (kustam) da leuskel (oskat) d'ar  
bobl, en eun deiz gouel braz, an hini eus ar bronzierien  
e c'houlenne. Ha neuze e oa eur prizonier brudet braz a  
hanved Barabaz. Hogen Pilat, o veza o strollet (bodet), a  
lavaraz d'ezo : « Pelhini a vennit-hu a laoskint d'ec'h, Ba-  
rabas pe Jezus a c'h'alver Krist ? » Rag gouzout a re penoz  
o doa e werzet dre herez (avi). Hogen epad m'edo (e keit  
ma oa) war e gador-varn, o wreg a gasaz unan da lavaret  
d'ezan : « Na vezet netra etre an den dinam-ze ha c'houi,  
rag gwall-heskignet on bet hirio gant eun havre en abes  
d'ezan. Hogen prinzed ar veleien hag an enaouret a  
gliaz ar bobl da c'houlen Barabaz ha da goll Jezus. Mirer  
ar vro a lavaraz eta d'ezo : « Pelhini anavez o daou a ven-  
nit-hu a loskint d'ec'h ? » Hag i a lavaraz : « Barabaz. »

Pilat a lavaraz d'ezo : « Petra a rin eta eus Jezus a zo  
hanvet Krist ? » Holl e lavarjont : « Ra vezo staget ouz  
ar groaz. » Ar mirer a lavaraz d'ezo : « Pe drouk, eta,  
an deuz-han gant ? » Hag i a c'harme krevec'h, o lavaret :  
« Ra vezo staget ouz ar groaz ! » Pilat o wetel ne c'honeza  
netra hag e kreske an dispac'h, a gemeraz dour hag e  
walc'haz e zouarn a-wez d'ar bobl o lavaret : « Didamal  
oun eus a vad an den dinam-ze : warnoc'h e konezo. »  
Hag ar bobl holl a respontaz o lavaret : « Ra gouezo e  
wad warnomp-ni ha war hon bugale. » Neuze Pilat a  
laoskaz d'ezo Barabaz ha, goude bean graet skourjeza  
Jezus, e lakeaz anezan etre o daouarn evit beza staget ouz  
ar groaz. Neuze eoudarded ar mirer o veza kaset Jezus e  
lez ar varn e strolljont war e dro an oll vagad (rejimant) ;  
liag i o veza e ziwisket, a c'holoaz anezan gant eur vantel  
tanc (mezer liou ru a oa douget gant ar rouane), hag o  
veza gwelet eur gurunen gant speru e lakjont anezi war e  
benn, gant eur gorlen, pe eur benduen, en e zorn deo.  
Hag o plegan ar gliz dirazan e reant goab anezan o lava-  
ret : « Deiz mad d'id, roue ar Judevien. » Hag o veza  
skopet outan, e kemerjont ar benduen hag e skopjont  
gant war e benn. Ha goude bean graet goab anezan, e  
tennjont ar vantel diwarnan hag o vezan e wisket gant  
e zilhaz e-unan, e kasjont anezan evit e staga ouz ar  
groaz. Hogen pa 'z aent er-maez e lavjont un den eus a  
Cirenea hanvet Simon hag e redijont anezan da zougen e  
groaz. Hag e tenjont en eul lec'h hanvet Golgota, da lava-  
ret eo Kalvar hag e rojont d'ezan da eva gwir ha best  
kemmesket : ha p'en doe tanvaet na c'houllaz ket eva.  
Hogen, goude m'o doe e staget ouz ar groaz, e ranjont  
e zilhaz etrezo, oc'h o zenrel (zôl) d'ar zort ; evit ma vije  
sevenet ar pez a zo bet lavaret gant ar Profed evelen :  
Rannet o denz ma dilhad etrezo hag o denz tolet ma zao  
d'ar sort. Hag o veza azezet e tiwallent anezan. Hag a  
lakjont a-uz d'e benn eur skritel, skrivet warnan an abeg  
eus ar varnedigez anezan : Heman eo Jezus, roue ar Ju-  
devien. Neuze e oe lakel ouz ar groaz gantan daou laer,  
unan en tu deo hag eun all en tu kleiz. Hogen ar re a  
dremene a zrouk-pede gantan en eur heja o fenn hag o  
lavaret : Te hag a zismant templ Doue hag her sav a-  
nevez a-benn tri deiz, en em zavete (zoveta) da unan. Mar  
doud Mab Doue disken eus ar groaz. Prinzed ar veleien,  
ar skribed hag an enaouret a re ive goab anezan o lava-  
ret : « Ar re-all an deuz savetez ha n'hell ket en em za-  
vete e-unan. Mar deo roue Israel, ma tiskenno breman  
eus ar groaz ha ni a gredo ennann. » Al laeron a oa staget  
ouz ar groaz gantan a rea d'ezan an hevelep rebec'hout.  
Hogen adalag ar c'houe'hved heur beteg an naved e oe  
goloet an douar oll a devalijen. Ha war dro an naved  
heur, e c'harmaz Jezus gant eur vouez krenv, o lavaret :  
Eli, Eli, lamma sabaktani ? » Da lavaret eo : Ma Doue, ma  
Doue, perag hoc'h euz-hu ma dilezet ? Hogen triniennou  
pere a oa chomet eno, hag a glevae anezan, a lavaraz :  
« Elias a c'hali heman. » Ha rak-tal unan anezan a redaz,  
hag o veza kemeret eur sponse, e leuniaz a winegr, e lakeaz  
e penn eur gorzen hag e roaz d'ezan da eva. Ar re-all a  
lavare : « List-han da ober, gwelomp ma tebio Elias d'e  
zieubi (diliver). » Neuze Jezus, o c'harmi adarre gant eur  
vouez krenv, a roaz e spered....

## EUL LIZER MAD

Kavantez ouz ar Vro hag ar brezonek o titeana hag  
o hreshi e kalon an dud yaouank. — Breiz-izel a ve  
souveat gant ar Varzed !

## OTRO RENER

Evel ma laren d'ec'h war ma lizer diwean, klasket am  
euz lakat ober eur skol brezonek aman. Ziouez, n'am  
euz ket gallet hen ober ha 'vit breman e red lezel ze e  
goste. Mez ze na ra ket d'imp koll kalon, hag ar Brezonek  
a zo sellet aman breman evel eun dra benag ! Gwechall e  
vije disprizet gant an oll, hag ar re a gomze Brezonek e  
vije zellet evel ezent ! Mez breman n'eo ken evelse. Ni  
gozeer ket brezonek, nan ; rag evit diski gallek e tigas ar  
dud o bugale aman, mez hen lenn a rer. A-wecho an en  
gavomp eur strollad Bretoned ebars ar pors ha neuze e v  
kozeet Brezonek avad ; neuze 'vo digaset an teodo en-dro

# KAS ANE DA SKOL

## Kenvez vad.

« Ewid an deio e zo bet duze daou pe dri den a feson gant eur paper da zivn. War ar paper-ze e oa ar c'homjo just ha just nemet e oant en galleg :

## Otro Depute (kanvad).

War digare dispenn an Iliz digand ar vro, ar Genarantant a c'houlenn diganach laeres hon ilizo, argas hon belez diouz o presbiter, lemmet digante an digoll bet ar marc'had anean ha dleet d'e digand ar vro.

N'oc'h ket bet hanvet ganimp da votan, dre laeres, hep goul hon-eh, ar sort lezanno-ze hag a groug gwir ar paer-hen hag al libere.

N'hellet ober ze, hag evit-ma hallo ar vro laeret ar pez a sonj diwar eun dra hag a dal kement a boan, e pedomp ac'hanoc'h da c'hontrol ar votadek 1906 (ar bla 'deu).

O leun pe o klevet ar c'homjo-ze, kenvez vad, ho peuz zinet hep chom da vare'hata hag ho piye zinet hag e vije gant ho taou dorn. Ho sin a zo roet ganach a greiz-kalon, o c'houi rex petra re'h. Ewid diskoe d'ar c'hannaded (deputez) penoz c'houi, kristenien ha Breiziz bepred, a fell d'ac'h ma vo lezet an treo evel m'emaint (« An tico a oa mad evel-eh da laeres-oc'h »); ewid diskoe penoz a fell d'ac'h e ve lezet digor an ilizo binniget-ze, charret ar vein ane gand ho harnezo pe harnezo ho tud koz ; an ilizo ze, zavet diwar ho pite pe brofo ho tud koz ; an ilizo binniget-ze lec'h ma 'z oc'h bet badeet, goret gema'li ho pask keant enne, lec'h ma 'z oc'h bet konfirmet, lec'h ma touet hep sul d'an ofiso hag oc'h en zell da zont da hoc'h interament da c'houi pedenno evit hoc'h ins digant ho mignoned, arog mont da ziskviza da donar santel ar vered. Fell a ra d'ac'h, kenvez vad, ma ve lezet gant an ilizo binniget-ze o arrebeuri (mobiler), roet, kinniget d'e gant kalon vad an duk piskik. Fell a ra d'ac'h ma vo lezet gant hoc'h otrone beleien, ar presbiter, o zamm lojeiz, ma na vo ket diifapet digante, da vitanan, an tamm leze fall a roer d'e bep bla diwar ar mado bet c'houipet digant an ilizo, beana a zo-war-dro eur chant-ela hag a oa ewit bevan ar veleien.

C'houi ho c'hoant. Sinet ho peuz a greiz-kalon, war baper, ar pez a oa en ho sonj hag en hoc'hreiz. Na zo ket dent eun silven gant d'ac'h aboe. Mil joz ma 'z oc'h zoken. Ze zo sun dra, hag a zell anoc'h. Den n'an euz an disteran sort da laeret, nemet eo mad, hag e oa ho fead.

Ha mar n'ho pije ket goulet rei ho sin me 'mije laeret d'ac'h, en brezonek mad, na oa dleet nag absolvon na Pask d'ac'h, na oac'h ken kristenien ha, war-lerc'h falc'h ar maro, ho korfo a dleje, resped d'ac'h, bean plantet evel ar chas en eur c'houign bennag.

Den n'hall kavout da laeret war ar pez 'peuz goret? Nan, a zonz d'ac'h, hag a zonz gant kement den a skiant a vale dre arvech... Daut Gorteit eta da welet Na laran ket d'ac'h avad e ve ar reman tud a skiant, nag e ve poell en o kenn. Nan, nan! Gorteit bepred da welet petra a leront!

Atozan en pep parouz a zo eun ibili bennag (oh! n'eo ket eun ibilb rez; falla hini zo er c'harr eo!) eun ibilb bennag, eur fri harr, eur flatui bara ru da lares ar vugale, eur flatul bennag hag a oa karget da c'houi piou a zinjje. Papet an euz gwelet hoc'h hano, Sell, emean, ma gwellan mignoned! Hag eur c'horfad drouk o vont eunan. Hen o tapout e dog kaeterd, e lost-pik, e ganel hag en hent. Zon a ra e vondaen. Youal a ra evel eur zardonen, en eur wean ar morble ze dindan e fri. En oc'h arrouet en ti eur paour foulet-foulet, hep laeret « bonjour » na « bonsoar »... Penoz, ho sin 'peuz roet, ive, c'houi... Chilaonet! Mar na ve'h ket het o pean anon war-benn disul me digaso paper d'ac'h. Men ho tisko, parit! — « Otro kez, eme ar vamm o ouelan. Bet true ouzio. Gorteit eur pennad. Ma mab 'oa oc'h ober e bask kentan. Eun habit nevet... — « Me na ran forz da ze. Benn disul! Klevet a rei! — Hag en 'mez, ha da di eur morer, e bansion t'ean. Na « bonjour », na « bonsoar ». — « Pera 'meuz klevet. Fan'h? C'houi a zo diaviz a-walc'h da vont enep d'ho para? Wid an deio me rey lemmet ho pansion diganach! — Ar paour kez den a van bahomet. Na gav gir da rannan. Glect a raje, bean faret dustu : « Chilaonet eta, otro. Ma fansion a zo d'in, goned ganin euz c'honzen ma zal. Na c'houi na den n'hall he lemmet diganin. Kristen on. Ma zin a dleat da rei. Ze zell anon ha den nemedon. Est gant ho roud mar plij. »

Hag an Otro oc'h arrouet en ti unan hag a zonzjo d'ean eo eun danvanjer Franmason war e valen. Na zo nemet ar vreg er ger. Deuz gwelet stum an Otro o teu disti d'ei. — « Bonjour, Mademo. Comment vous portez-vous? — « Mad awalc'h. Mad awalc'h! — An otro a d'erc'h da c'hallegat, a zo eur beca tieko, eur bern ardo ken m'en em lakas ar c'has da laeret o Bator. — « N'ou-oc'h ken a vrezeket? eme ar vreg. — « Me gav d'in oc'h fadet, eme an Otro. Pera-ze-eh? Ni-ou mignoned gwelet... » Fin eo, e respont ar vreg, fin eo i Me

oar awalc'h da bera oc'h dent. Zevij ket d'ac'h. Koll hoc'h amzer hag ho poua hag uzan ho teod hep ezom a rei! — Hag an Otro o tere'hel da satouhat. Just an oac'h oc'h arrouet. An Otro stad eunan ara eur frolden d'e zaougan, a denn e dog hag a bleg betek an douar da laeret. — « Bonjour, Monsieur! — « Bonjour, » 'ze'eh, — « J'vais... — « Allo emez dustu. Welet ket touil an nor-eh? — « O, maist... — « Perrine digor ar prene-estr aze ma tolin an ardoer-man emez heli fonz e vrago pan-oc'gwir n'hou ket mont dre an nor. — An otro emez ar wech-man herdan m'hall 'vel pa vije krog al laeres eunan, mezok evel eur c'har-gele, na grad ket ober eur zell war o lerc'h betek gont tapout eur flipat. —

« Poent awalc'h eo kas ar sort-se da skol, o kav d'in, eme ar Mestr oc'h arrouet en korn an oaled. Poent eo didon ar gantarded-ze, c'hoant d'ober al lezan dre-ell. Marteze 'vo difennet euz an den prestig bean kristen. Marteze e renko an den mont da houli otre, permission, digand an dud-ze da laeret o Bator ha da vont d'an otre. Ya, kristen on ha kristen e vin (o sevel o dorn etrezeg ar c'har-koz en pign euz mantel ar chiminal), hag an de- ma vo zorc'hennet zeri an iliz, Doue da viro, an de-se o ruilho ar gwad pa laran!

Ya, kenvez vad, poent ha poent braz, poentoc'h ewit poent, eo didon ar standilhoen pe daou, pe dri herve ment ar barouz, a zo o lakat an drouz euni o c'hoantat kas an holl heli o fri, boutan o fri en afer kement den a zo er barouz, lakat an oll dindan dreid, oc'h esa harz ar gristenien da bleustri ar relijion zantel a dilezont ewit plijout da vevelien an drouk-spered. An dud-ze n'int prizet na karet gant den, ezom a-bed ken da dostat en eun ti afeson, da c'hoantat fortanan. Mouchenneien int. Dre dindan e c'hoaront. Treitourien int. Disfiat dioute; didonet ane deuz da-ze!

EUR MIGNON.

## Fin Mis Mari er Pervenanc

Unan eus hon lennerien vad an euz bet ar vadelez da- gas d'imp ar zunt dremenet eur pennad euz ar gwella war ar gouliou kaer a zo bet er Pervenanc, gant ar brosesion, an oll dier sklerijennet, an tan-artist, ar vugale ken brao gwisket en gwen hag an oll kana en eur vouez hon c'hanitkou brezonek d'ar Werc'haz! Hon gwella trugare d'hon mignon « ar Beajour » ewit e lizer mad a zo digou- zet ganimp, siouaz, eun tammik re zivezed da c'hallout e voula ar zunt dremenet. Eveltan e trugarekaomp ive Aof. person Pervenanc, an abad Camus, ewit ar goul kaer a chomo pell ar zonz anezan er barous.

## AL LEZEN NEVE

Da heul Ar Mignon hag Ar Yeudet, hon lennerz vad L. C. a Ger-Varia-Sulard a gas d'imp eul lizer euz ar gwella war al lezen neve. Gwaz a ze, re verr ec'h eo al leac'h ganimp d'e voula war e hed. Setu aman, da vithana, eur berradur anezan :

Al lezen neve a zo eul lezen fall ha digristen!

C'hoant an dud fallak o deuz savet anei e vije :

Da genta, hon pennaska gwaz euz gwaz. Evel al loueou a ve kaset d'ar foar hag e ve lakaet an nask d'e evit ar wech kenta, d'an hini o c'has d'ar foar d'o Sileja war-bouez eur gorden. Kaer 'neuz ar paour kez ioue mont ha dont, n'eman ken ewit herzel, gant an nask a zo en-dro d'e benn. Ewel-se ez euz c'hoant d'ober d'imp-ni gant potred al lezen neve hag o mignoned, an dud fall-ze, briz-otrone koezet diwar lost ar c'harr, a gaver dre-oll breman, hag e schiant bea o micher trubuilha an dud vad ha koll ha dizenori ar parouzon.

Ouspenn hon pennaska hag hon dizenori, potred al lezen neve, tud dizaker ha digristen ane, o dije c'hoant da ziskarr ha da blada ar veleien hag ar fe kristen. Eur wech lemet o feadra digant ar veleien, lemel ive an ilizon digant ar gristenien, laeres presbiterioan ha gwaska ar fe e pep sort stum o deuz divizet ober, hag ewit-se eo o deuz savet al lezen neve.

Nep an neuz c'hoant da gaout sklerijen war ze (hag eun dra dleet eo klask sklerijen war treo ken pouezus) n'en deuz ken d'ober nemet prena al levrik « Al lezen neve » a gaver e ti Prud'homme. En Kermaria goulenn anezan digant an Dimezell L. Charan, mar piich.

Goulnenn e ti an Aotro Bernard, leorier e Kemper al Levri oferen latin ha brezonek gant an Aotrou abad Gall ; er gwella hini d'ar Vretoned da heul an ofisoc.

GOULENN e bureo ar Grouz : Gwerzio sant Erwan, al Labouler, sant Millo, sant Koneri, hag all. Eur gwennet ar ruz.

# FISTOULIK

(KENDALC'H)

II

## Maro kaer Fistoulik.

Eun neuberdik deio oa, Fistoulik a wele e vestr tristad bemde mui euz mui. Na gane ken evel gwechall pa vije brao an amzer, en eur ober e dro. D'an noz, e-lec'h tana e gornedad butun goude konnen eur ober euz gaozeaden gant Fistoulik, e chome pleget e benn e souj-eunan. An azen na-ee ken gant, en evel arok hag a berans a oa falloch!

Fistoulik a glasse, en e spejed a gi, gouzont petra 'oa kaoz da gement-se oll, med na oa ket lemm awalc'h mi-chans, ha na oa ket evit kavout... D'an noz pa vije gourveet otre diouer e vestr, e troe e zaoulagad lugernus euz e re hag e c'houlenne outan en e giz petra 'oa kaoz d'e dristidigez ; med ar pillaouer na ra van ebet... Sonjal a re 'michans penaus n'eo ket Fistoulik a chalche habaskaat e boan.

Eun devez bennag, Fistoulik a oe laket souezet c'hoaz... Arok, ma vije karget e got d'an azen skrifellet na vije ket aliez... Ha breman setu hep bour, diou, ter gwech bemde 'weeho, e vije ar pillaouer o frotan anezan gant eur broust hag eur skrifel!

Eun de bennag, Fistoulik a c'houlennas gant an azen petra a sonje a gement-se, hag an azen a hijas e benn... na sonje man ebet a vad!

Ar zadorh-ze, Job koz a zavas kalz abretoc'h ; rei a raes boed d'an azen, torchan anean ervad, ha neuze e raes lein prim ha prim... Pa oe debret lein, en em lakas da gargan pilho er zair, gant prez ha da lakad ane wat e gar bihan.

Fistoulik, a oa o heuilh, e zeulio 'boue ar beure, a wele e labour gant joa... Pell amzer a oa aboue na oant ket bet en ker, ha Fistoulik a blijie d'ean mond en ker. Mond a raes da gas kelo-d'an azen, hag an azen a oa konstant ive, rak dalc'hmad pa vije o tend d'ag get, en nije en ti Mari Loiz, an Hostizes, diou pe der vojad a brenn distrempet ewit e boan.

Paour kez loened... mar o dije ententet ar pez a lare Job koz en eur gargan e garg, na vijent ket bet ken laouen-ze!

« — Ma loened paour, a lare ar potr koz, hirio eta eman an devez diwean d'emp da vean assemblez hon-zri. Emberr, Fistoulik, e tefoump hon daou hon unan d'ar get, ha Marzin ac'h ey gant eun estren bennag e wal-gaso marteze. Paour kez Marzin! penavet d'ar c'hallomperien-ze a den da laeres ma bara d'in gant o gwelur hag o c'hoz dauve, liken na vijen bet dispattiet d'ouzid! »

Hag ar pillaouer a dremenere zorn war e zaoulagad, Fistoulik ha Marzin na ententent ket ar pez a lare Job koz...

Fistoulik ha Marzin na ententent ket kaoz o mestr, ha zard e oant o daou o vond en ker.

Gwerzet ar pilho en ti ar marc'hadour, Fistoulik a sonje : Breman zouden oc'h an d'ober eun abaden en eur vond d'ar ger mar kavomp re-all war an hent.

Pegen zouezet e chomas eta, pa welas e vestr o leze e gar en toul eur portz, o tistagan an azen, o lemel ar sternach diwarnean hag o vond gantan 'trezek eul lec'h, tost eno, e oa eunan e-leiz a gezek... Nan-eez ket da heuilh ; lampad a raes war ar zeier da vesa an treo, ha gwelet a raes ane o pallad, sonjo trist en e ben a gi.

Na oa ket pell goude e tizrochont... Fistoulik dine- c'het oc'h aes 'trezek d'eb en eur lampad, med chom a raes souezet o welet eun den feo ha bihan, eur « saro » hir gantan hag eur pikol baz en e zorn, o tond a-gevred gant e vestr. C'houesad a raes eun enbour en den-ze, ha gant plijadur an ije kroget en kof e c'har.

Souezetoc'h e chomas c'hoaz pa welas ane, e-lec'h dont d'ar c'har, o vond 'n eun ti goude bean staget an azen euz toull an nor. Mond a raes adare da c'houven war ar zeier ken nec'het ha biskoaz.

(Da heuilh).

LAOUR.

# ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU

En Laphon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.





med ha d'ar da siwan hanv goevn en kement prad ha flouren zo douret gantian entre Zant-Kare hag ar mor braz.

**Ar stalion.**

Treuzez eo doure ar stalion mouchet o fan gante dindan ar vougen denval hag o zreid ebars ar fank.

**Ar vared.**

Treuzez eo ar bed gant ar beorien gez goulset, mac haguet, seint ha nodet o izili oute, o krenan ovel an delion 'bars ar gwe, o druilhon pillhouek gleb dour teit dindane.

Nan enz ket eun nenden zeeh warne. \* Mar na zen tel an amzer da sklerad, aman o vont da c'hilac'hari 'Zhanomp', ems Fauch Gae-goad da Luskellik. \* Roilh ac'hunan war ar c'hilazen 'n eur c'horn goasket 'n eur c'hoinn kled benag; aman e koue an avel zil war ma choek a-ziwar douc c'hilaz ar chapel, a lavar eur paour kez dall entre dion glemmaden: \* eun drak benag d'ar paour kez dall... \* Lavaret 'ma rei eur gwennek da gement paour 'mije kad pa vijen oc'h ober ma zer dro d'ar chapel ha bet on den d'am gir. Breman war-eun d'ar chapel.

**An nor.**

An nor geste dre lec'h ma tremanan zo gret gant danve kont dero. Gwelet he deuz, na oar den nemet Doue, pegement a dud o vont dreist he zrejou men grez kleuzel dre fors bean d'armpredet, gwelet he deuz kalz deuz hon zadou koz o tont da c'houlen digor diganti, abred eus ar beure ha da bell an noz aboue, aboue daou c'hant eiz vla ec'h e dor herve ar merk 1697 a doug tro-war-zou d'he zal. Mont a ra bepred en dro 'n eur wigourat war he mudu-venn lér: \* Deut ebars, aman, c'houi gavo dor ar la-radon! \*

**Ar chapel.**

Neket et mad ho troad dreist an trejoun pa zen eun dra benag da biket ho kalon, da grigi 'n ho spered, da ren da zougou ho korf skanv ha diskwiz 'n eun taol da boket d'ar skouden zakr. Koustan, kempenan, sioulan chapel eo homant Dre ma ten an de e kresk ar birc'hin-ined da zont e-bars ha bepred na glevet eun nemet trouz sech greun askorn gweun ar chapeladon dibunet entre ariet bugale Mari, o pedi o mam:

\* Chapel Zant-Kare, ennotet  
Me garfe bean noz ha de... \*

**An oferen nao heur.**

Konec't mad on: 'man an oferen nao heur o'ren. Bep Ma, ouспен tri-agent vla zo, eur ouen gristenien vad deuz ar vro a zen a rum da rum da lakat laret an oferen dirag an Itron Varia Drueda nao heur da zadou he fardon. Na zo netra kaeroch na pinvidiko'h war an doug hag en nenv evit an oferen, sakrifis korf ha good Jezus-Krist. Kaeran digemer vo gret d'an dud-man eun de da zont gant zant Per paeren iliz o badeant. Eur vanden Elez, ken alies a lina hag a oferen o devo lakeat en enor da Ronanez an Elez a zeuio war ben hent d'è, da gerc'hat ane da vont d'ar pen da kroec'h da balez an Dreinded zautel, hag eno, bodet en-dro d'oter ar Werc'hez o devo karet, pedet hag enoret aman, o devo eur loden binvix deuz an oferen-bred, deus oferen ar barados a bado da viken, kanet gant Mab ar Werc'hez, Jezus-Krist, ar beleg Doue, ar belek huellan...

**Kreizto.**

D'an taol a greiste an tri gloc'h divridet ha brallet a zont drant 'n eur eur drital gant ar levnez peden an An-jelus:

\* Leromp oll hon anjelos,  
Eo enor da Vari,  
A zo gwir vamm da Jezus,  
Hag ive hon Mamm-ni. \*

**Ar gousper.**

Kaer zo pedi, kaer ho deuz an awel bean da kroec'h, na sav ket an amzer, e talc'h ar c'hilizen wenn d'ober. Pinijon o deuz an dud o tont gant o bugaligon dre amzer-ken strouilhuz, pinijon o deuz gante 'pad ar gousperou ebars ar chapelik enk, leun kouch da gonch ha tom evel eur forn c'horet. Pinijon o deuz: aezetoc'h a ze o devo o menad da vont d'ar ger: Kanet ha kanet kaer eo ar gousperou. Bep cil zil, n'ens ket da laret nan, arok mont d'ober eur valeaden pe da c'hoari ar c'hilhou, vo red mad d'in mont d'ar gousperou herve lezen ar vae gristen:

\* Heulhet d'ar zil an ofrou,  
Ofere-bred ha gousperou.  
Santel eo ar zil war e bed,  
N'eo ket de an disoul nag ar bed. \*

**Ar brosegon.**

War-lerc'h ar Magnificat kanet war an ton braz gant eur c'hure yaouank, kaned deuz an dibab, ar pentigezon o deuz klevet eur gentel dudius, eur brezegeon brinvik, leun a gomzou talvoudoc'h evit an arc'hant hag an aour, leun a gomzou Doue, mad da sklerijenn o spored, da dremen, da biket o c'halon a skiant, a fuzez diwar ten o c'harg en konver ar vogale roet d'è gant an otro Doue. Ar gentel gaer-man, an hadon barados-man konec't

en doug mad, en doug kalonou hag a gar ar Werc'hez, a ziwan, a gresko, a zoug, a dolo frouez he bec'h, hag ar vogale 'bars ar vro vo stumet mad, 'vo bugale a zoare, bugale a vo pleg doujans Doue hag o zud gwirienet doq 'n o c'hreiz:

\* Itron Varia a Drué,  
Miret o le d'ho bugale;  
Eo Breiz-Izel, o ma Itron,  
Dalc'het ar gwir relijion.

**Ar prosession.**

Digonec't eo koulz ar prosession ha gir abel a brosegon. Daoust hag-en vo tremenet lieb ober prosession ar bur-zou? Neuze, fad, Salver Doue, vo paour ar pardon. A greiz 'man chiflet ma spered gant an dra-man ac'h e dis-tennet ar parapluie, an disgleanno stennet 'us da gofo gweun ar mammon ha da dokou plouz neve ar vugaligon a dougout war goul o brech: hag ar c'hroajou c'hilant da lintri, ar bannielou zakr da darnijal flour 'us da benn an dud. 'N eun tol ec'h e savet ar prosession war e c'har, war e droad hag en-dro... Man ar Werc'hez o tont deist treujou an nor-dal a-dreiz d'eun engroez-tud a lak zin ar groaz 'n o c'hreiz.

Mont a ra, treuziet he c'halon gant seiz kleze, korf maro he mab Jezus war he barlen ganti: Mont a ra dre Zant-Kare, douget plen ha brao war diouksoa peder eus ar gesterezed miz Mari, douget o feder gant ar stad, al levnez zo enne o tongen Ronanez ha Mestrez ar Vro. Seiler ha skler he daoulagad evel diou stereden: digor frank he c'halon dener hag he daou-zou o daou da skuilh he grassou en-dro d'ei, ar Werc'hez neket evit miret da vousec'hoarzin dindan pen kap he mantel alaouret pa wel ar vugaligon, glaz ho daoulagad evel bleun'lin, skler o zal badeet evel ar spern gweun, o klask nijal a ziwar diouvec'h ar vam dener eus en Nenv. Nan e ket an Itron Varia evit hars da c'hoarzin eus a greiz he c'halon pa wel pegen niverus, pegen braz eo ar bobl kristenien an em stard en dro d'ei, 'n eur veskan o fedennou brezonek gant pedenou latin ar veleien, gant mouez ar c'hleier bin-niget, zoi skilt ar taboulinou stardet mad dindan o c'harden steu-sten hag an trompilhon koeur melen.

\* Jezus, haera prosession,  
Endro da skouden hon Itron...  
Ar Werc'hez zakr Zant-Kare,  
Hirie 'vad, 'deuz d'ober are!  
Gwisket zo d'èz res rei gweun,  
Eur gursen 'to war he feun.

Hag a beb korn a Vreiz-Izel,  
Hag eus a doet hag eus a bell,  
Ar re glanv ar va vachagnet,  
Deiz he fardon, 'deu d'he gwelet \*

Ya, Gwerc'hez Zant-Kare he deuz anoudegez pell eus ar ger ha, mar zo diredet pobl hirie eus a bevar c'horn ar vro da c'houlou o mennad diganti, muoc'h c'hoas, stan-koec'h c'hoas eo ar re zo deut da baeon o die.

**Tantad ar Werc'hez.**

Lodan ledan, kalz a dro gantian deus traon evel gant berno-tro Kerne war ar leur, an tantad a zoug war e veg kreo-z Jezus uhel da kroec'h.

\* Zav en er sae, Krouz ma Zalver,  
Ma vi gwelet gant ar pecher... \*

Difanet ped karg lann, ped karg gor a zo oc'h ober dan-vez an tantad?... Ouspen diou-warnugent karg digasset deuz Plouaret, parrouz Itron Varia Gelou mad, deuz Plounevez-Moedec, parrouz Itron Varia Kervenec'h, deuz Plounerin, Lanvellec ha Zant-Kare (parrouz Itron Varia Drué.

An tan ve lavaret a gez buhanoc'h gant eur c'hileuiad lana evit gant an hent braz. Hirie e ra da gentan neu fall da grigi, ar lann zo gleb; eur wech krog, e sec'h arokan, e teu da flammijenni tro war dro; da zisplegan eur pikol pezh mantel ru skeduz, eur vantel ru tan dreist diouksoa ar beru lann roas. Ar groaz koat a zo breman eur groaz tan koronet gant eur vogeden c'hilaz a ninj war eun da vro ar stered war diouksoel skanv an amzer sioul a ra. Kaeran tantad tan! biskoaz ken kaer all na weliz! Da heul ar vogeden dom e sav ive pedennou ton eus kalonou ar gristenien a zo 'n o sae en-dro d'an tantad. Grouez, gor, ezen an tan a zo ken kalet, ken neruz ken e renk an den souzan pell a dreuz. Klevet ran hiniennou o laret: \* penoz pad en-kreiz tan an ifern pan eo gwir elen tantad ar Werc'hez epen a ra d'imp zouzan a dreuz! Siwas an tantad-man n'eo nemet eur vogeden fresk ha distan en-kichen tan loskuz an ifern. Braoc'h vo birvi 'n e greiz ac'hian d'an de diwean deuz ar bed

\* Eged baeon en ifern eun eur epen losket,

Itron Varia Sant-Kare, plijet gant ho madelez sikour ma spered penskenn da sonjal aliez on puis don an ifern, puis an tan na vougo biten. Kroget em doru ha renet, ho pugel pell diouz hent ar pech'et, brassan drouk zo er bed.

**Zalud ar zakramant.**

'N eur zistrei eus an tantad, duhont war an oter moin-benevez savet 'us d'an nor-dal dindan Kamb ar c'hleier, e welan, en kreiz an Ostansour aour, an hosti wen o ste-

redenni, o skedi dindan sklerijen ar goloie lann... elum, beleien gwisket en gwenn tro war dro... kanan. Daoulin! daoulin! daoulin! a lavar mouez... c'hantuz ar c'hloc'h bilhan ha si da blegan hon... distabel dindan bennoz hon Salver Jezus a zistrei... nomp a ziwar oter ar Werc'hez e vam:

\* Me hoc'h ador, o ma Jezus!  
O korf sakr, o gwad prelus,  
Keat genec'h betek an Nenv,  
Homaj ma c'horf ha ma lann. \*

Breman eur pok d'ar Werc'hez ha d'ar gear... leun eo ar chapel gant ar vogale d'awielan; pell... eo tostaet aman da skouden vuzrudus ar Werc'hez... na ve tostaet d'ar biz on Zant-Yan-ar-biz. Martez... c'hoaz ar beure e kvin braoc'h renk; hirie a zo... dud... An tantad a dalc'h da flammijenni; arok... 'n e ludu 'vo debret ma c'noau ha laret ma fater... vo. Goude beau gret e vouzaden 'pad an de an... ket bet 'vit miret da zigeri e lagad lugernus da zell... ar gristenien o tistrei eus pardon Zant-Kare.

Dindan eur c'huz-heol skedus, kuz-heol... hanv e tigoue ganin mont d'ar gear. Zehlan vad... archoaz. Ar zadou eo zul ar Werc'hez: Zadou... Zant-Kare a zo unan eus e zulio kaer. Kenavo... ha novez vad d'ac'h, Doue hag ar Werc'hez d'ho...  
Eun Pre'hirin.

**FISTOULIK**

(PENNAD DIVEZAN)

IF

**Maro kaer Fistoulik.**

Marzin a oa trist ive ouz toul an nor... Michan... ouie 'henn neuze, petra a oa ouz henn goroz.

Dond a rejont er-maez deus an ti; potr e \* sar... krenv e vouez a skoe e vaz en hent, hag ar pillhaou... frote e vruc'het d'an azou en eur rei eun tam bara d'... hag a lare eun dra benag ive. Efin paotr e \* sar... zistagas an azen, a roas ar ranjen d'eur c'halfard a oa... gonec't toul an nor ha Job koz a denas en dro, ten... zrem.

Potr e \* saro \* a laras d'ar c'halfard mond war... Med brao e oa laret: Marzin na c'houlle ket kerzet pe... oa ket ar pillhaouer a oa krog er ranjen... kaer an net... ar potik jachan, heman na finve ket muoc'h evit... peul-men.

O welet ze, potr e \* saro \* a roas daou pe dri pill... taol baz d'ean war e gein. Fall a reas; Marzin, konnan... o vean gwall-gaset en eur giz na oa ket kustum, a laosk... eur winkaden ganlan, ken a yudus eun houarn deuz... droad gant moger an ti. Na dapas ket-anean, 'med ar va... a nijas da gouean ouспен ugent kammed achane.

Allaz! Marzin, manket a teus!... Marzin! Rakt... potr e saro a lamp gant e henn da hijal anean ha da... pe dri-all gant saroter a oa ouz toul an nor en em lak... donnan warnean gant o bizier en eur vallozi evel... zodet.

**Paeen 'ri ker da winkaden, Marzin!**

Job koz o welet ze ec'h aec kwit priman m'hell... eur c'hervel Fistoulik... Med Fistoulik na sonje... mond kwit... Et o er gouner vrasan o welet gwall-ga... vignon... Lampad a ra deus ar c'har, e greo a-bik en... Zailhad a ra gant unan deus ar re a skoe gant Marz... hag e zent ec'h a don en e fesken; heman a laosk... giaden hag a lez e vaz da gouean... Med Fistoulik... chom ket da sonjal! Raktal e lamp gant gar eun all... a vog e vago d'ean eus krech'het gant traou. Med neuz... taolio a goue eus a hep tu war Fistoulik, evel grizilh... Ankonnet e an azen. Taolio baz, taolio treid, taolio... a zo oll evit ar c'hi... kement hini a dremen a c'hoas... kemer lod en abaden:

\* Bec'h dean, bec'h dean, a youc'hent oll, eur... klanv'et \*

**Hag an taolio a goue droc'h bepred.**

Fistoulik na zant taol ebet, kement a gouner evel... emnan: kregi en heman, kregi 'ra en hennont, med all... nan e ken evit ober nemeur a drouk d'è. Re-oll emaint... Dinerzan 'ra a dam da dam... Hag an dud a sko... pred... Hag an dud a c'hoarzi... \*

**Eur pennadik goude, ar re a dremene dre eno a...**

eur c'hi paour astennet en bouilhien ar ruzelon, good... laba oll, hag ar vogale en eur dremen ec'h eo da rot... taol troad d'ean.

**Paour koz Fistoulik I... \***

LAOUIE



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eor skoot ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
skood, evit ar broioù estren evit ar broioù heñvel.

brezonek hag ar feiz,  
breur ha c'hoar en Breiz.  
*Furmes ar Geiz.*  
brezonek eo deud ar feiz,  
d'ar gallek ar nio a Vreiz.  
*Furmes ar Geiz.*

Dalc'hil bepred d'ho brezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz eo ; ma vo trec'het,  
Goupen ar Vas, e vo Pae'hall  
MILAN.

Goulenet, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
genon Klaoda :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

... eul lizer-gourc'hemenn digant hon eskop breizad, an  
... eskop Dubourg ; unan eus ar gwella hag an du-  
... leoriou bet skrivet e brezonek betekhen.

## ALUZENNOU DIGANT HON LENNERIEN

An aot. Rouz, eus Paris..... 8 real.

## lezen neve hag ar Breuriezou karget da c'houarn an ilizou

### I

Ilizou, laeret digant ar gristenien, a vo roet da  
Vreuzierou, dindan beli ar Gouarnamant.

Pa ve klevet potred ar Gouarnamant o laret ez eo ar  
neve-leat ha madeleuz hag e skedo war an Iliz evel  
han-heol hanv, e c'hoantaer dustu skei an dorn war o  
pe goulenn digante ha kollet o deuz o skiant vad  
na an euz ar Gouarnamant, hen pehini na c'houlz na  
na na diaonl, da weled e-barz an iliz? Petra 'ra d'ean,  
gred da netra, dond da vout e fri en kalon ar gristen-  
ien ha da laret d'ê : « Breman e vo gouarnet ho fe, ho  
lennou hag ho relijion nan gant beleien mes gant tud  
skoteet ganin da ren ha da gemer an ilizou evel o  
... » En gwitione, nan euz ebarz al lezen — kaled  
koulskoude — netra a zioteoc'h ! Ar belek eus a  
ni e tigone an iliz en hano hon Zalver na vo ket mestr  
... Nan hallo ober netra hep aotredur ar vreuzier a  
en e barrouz karget eus ar relijion. Kaeroc'h zo, gaud  
vreuzier-man ar belek a vo evel eur mevel ! Hi a gaso  
da zigaso anean evel m'he devo c'hoant... Ha lavet  
ez ez eo houman lezen an dispartit groet en eur spered  
hag eon ! Neuze, ma Doue, ar giriou n'o deuz ken o  
... dalvoudegez ! ...

Petra a vo ar breuriezou laket entre ar belek hag  
relijion ? Herve al lezen ar breuriezou o devo d'an  
... euta seiz ezel pere a renko bezan, ar muian 'vo  
... tud eus ar barrouz pe eus ar c'hanton. Int o  
... etre o daouarn kement tra ha kement mad he devo  
... iliz. Int a vo karget eus holl dreo ar relijion nemed  
... daou dra pere a zello ouz ar maer hepken — an inte-  
... aneou ha zonzere ar c'hleier. A-hend-all ar breurie-  
... reno peb tra dindan lagad an aotro maer pe unan  
... euz eus pennoù ar Gouarnamant, a c'hallo pa garo  
... ket penoz e kerzo an treo ebarz an iliz.

Ar breuriezou a zigemero freuz ar c'heston hag an  
... tant roet evel ezommu an iliz ; a zastimo ar pez a  
... flet euid an ofereñnou, ar servijou, euid ar c'hadorion  
... ar plasou. Delc'hel a refont hep bloa eur gont striz  
... au are'hant a vo digoneet gante hag an hini o devo  
... gnet. Ar Gouarnamant a zeuy pa garo da weled kon-  
... ar breuriezou. Ma na vent ket reiz pe ma ve kâd  
... en o c'hief muioch'a are'hant evit n'o devo anzavet  
... o c'honchou, ar pez a vo en tu-all a vo d'ar Gouar-  
... nant. Neuze ar vreuzier a dapo c'houezek pe gant lur  
... c'houec'h pe dri miz prison ha c'hoaz marteze e  
... dispennet.

### II

Pe sort tud vo laket ar breuriezou-se.

Setu ive ar breuriezou huslet mad ma tizfont  
ar Gouarnamant ! Kêz anê, marvad, a gerzo

## SKRIVANIERIEN

Eus al labourion pe d'an Ofro VALLÉE, Rener, vs Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Ofro MOAL, Skrivanteur, 27, ball Charnier, Zant-Briek.

troad ouz troad gante, rag al lezen na lar ket petra  
vo ar breuriezou na petre tud a vo ennê... Ar pez a lar  
ez eo ma vo roet ha feurmet an ilizou laeret gant ar  
Gouarnamant digant kristenien, da vreuzierou a d'halle 'n  
em groui evel kenderc'hel 'barz ar vro gizioù ar relijion  
gristen. Al lezen na lar ket e renko izall ar breuriezou-man  
bezan kristenien vad pe, da vihana, tud doujus da lezen-  
nou an Iliz. Eno eman he c'hoste fall ; rag ken buhan  
all, fallan lamponed ar vro a vo eus ar breuriezou ha  
galoud a reomp kredi, gant tud ar seurt-se an treo a  
gerize war arak ! ...

Ma vije en peb parrouz krouet ar breuriezou gant enn  
toulad tud kalonek, euid dastum d'ar veleien laeret ar  
gwensien a rofe d'ê ar gristenien vad, e c'hallfe c'hoaz  
kavout fizianz ennê... Mes marteze etec'h bezan evelse,  
izili ar breuriezou a vo tud dizous ha dife pere a c'hoan-  
tao bepred trei ha dizrei spered ar relijion, spered an  
Aveli. herve o c'hoant, o ezom pe o c'hasoni direiz, ha  
doud dre eno d'ober eus gwir relijion hon Zalver eur ze-  
blant hepken a relijion henvel pe falloch'e euid hini ar  
Drotestanted. Penoz e c'hallfe biken ar belek 'n em gle-  
vont gant eur seurt breuriezou ? Petra teufe ar parrouzioù  
da vezan, renet gant tud evelse ? Larin d'in eta, kenvroiz  
ker, na vefe ket spontus sonjal penoz euebourien hon fe,  
hon bro hag hon Doue, a gemerfe hon ilizou hag o madou  
euid ober gante evel m'o dese c'hoant hep n'hallfe na be-  
lek, na den all laret netra ? Er stum-ze dion barrouz, kris-  
ten en amzer goz, a daufe da vezan, unan ane protestant  
hag eben hanter-gatolik. Hini abed ane na chilaoufe na  
eskop, na Pab, hag enne o-dion e reufe an dizunvaniez,  
an dizurz, ar gasoni ! Daoust ha na vefe ket kri ha hudur  
lezel gant an dud-se aoteriou ha besellou zakr hon ili-  
zou ?

Setu ar pez o deuz sonjet ha gwelet sklaer hon Depu-  
teed vad ha, goude kemend a galonad, o deuz gallet —  
trugare kalz d'ar zinadurion o deuz roet an holl eneb d'al  
lezen fall ! — lakat ar Gouarnamant da zistan kriñder an  
artikl pevar. Herve an artikl 4, ar breuriezou a c'halle 'n  
em groui en diavrez ar belek. Breman an artikl, dizroet  
hag astennet, a c'houzav eur belek kristen en penn peb  
breuriez.

### III

Al lezen neve a zifeam pep frankiz digant an Iliz.

Gand eur belek er penn, an treo a gerzo eun tam-  
mik welloc'h... Siouaz ! petra dalveo d'ê mont mad,  
pegwir pa garo ar Gouarnamant e vo miret an iliz ha  
diouz ar belek ha diouz ar vreuzier. An disteran tra a-  
dreuz a 'n em gavo da vezan grevus, grevus dirag daoula-  
gad ar Framasoned, hag ar re-man krenv, nan deuz o  
nez mes deuz hon zempladurez-ni, a gavo eno dustu  
digare da zeri an iliz ha da deurel er prison ha belek,  
ha penn-rener ar vreuzier. Goude, ma karout, e hallfont  
feurmi an iliz zerret ouz ar gatoliked pe d'eur protestant  
pe d'unu all kenag pe c'hoaz miret anezi d'ober eun  
nez kaouen !

Gwelet a ret breman, kenvroiz ker, penoz al lezen neve  
a zo frank en-kenver an Iliz ? Bezan he deuz, a dra zur,  
frankizou, mes ar frankizou-man a zo d'ar Gouarnamant  
e-unan d'hon gwaska ha d'hon zrubuilha. Me gred, ma  
anvefe an holl, koz ha yaouank, bihan ha braz, potred ha  
merc'hed, plegou ha displegou heuzus al lezen neve ; ma  
wellfont an diazrouz hag ar poanioù a deny d'ha heuilb,  
na vijent ket breman ken seder ha m'emaint ha na vije  
ket klevet eur rummad tud o laret evel-heu : « Mad  
awalc'h e vo groet d'ar veleien... ar botred-ze eo ro  
vrao d'ê ive... poent braz eo o c'hastiat... Kastiel e  
voint, mignoned ker, ha ni ive d'o heuilh ; rag kredet  
ervad, pa vo tom d'eur belek ni n'hon devo ket a  
riou ! Ha hepdale, arak marteze tri bloa, hon devo  
testenioù a-walc'h eus ar pez a laran. Ar breuriezou a  
feurmo an ilizou digant ar Gouarnamant a gerzo mad  
gant heman eur penoad ; mes, abred pe diwead, e  
ronkfont zével o fennou da zifenn gwirion an Iliz, pere a  
zeu abeurz Doue ha nan abeurz an dud ! Pe zavfont o  
mouez o kouezo warne dustu grevusted al lezen ha hou-

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwannek pep sroudenad-skritur.  
(Diskenn a briz evit meur a embann dion-to).

man a vo didrue. Neuze e vo gwasoc'h d'imp euid d'ar va-  
leien, rag ar belek, adalek an devez 'oe digemeret en Urzout  
zakr, a larz kenavo d'ar bed evit 'n em rei da Zoue.

Petra rey d'ezan mond dirag lez-varnion ar vro na be-  
zan tolet er prison, hon pehini a zo da Zoue ?

Glac'har en devo, zur awalc'h, o kwitad hag o lezel e  
barouzanien kreiz an dienez ar vrasan, rag goueoul mad  
a ra : pa ve kollet ar messer, ar blei a 'n em lak ouz an  
deved... Ha chilaouet ar c'houzou-man laret diwar-  
benn an Dispac'h vraz, breman zo eun toulad mad a  
vloavezion gant eur prezeger brudet : « Pa na skuit  
hen eun Doue e vad war an aoteriou, goud an dud a  
ruilh er plesannou ! »

An darnvuian ac'hanomp, kenvroiz ker, n'hon devo  
ket klasket an treo-man, pell ac'hano. Da vihana, ma ve  
red d'imp gonzanv anê, e ouifomp trei hon daoulagad  
war-zu Doue pehini a vo bepred hon zouten, hon spi hag  
hon fresalidigez...

Na fall-galonomp ket eta ! war-lerc'h an amzer fall e  
ten an hini vad ; ha, pegwir biskoaz ar gaoù nan euz  
trec'het ar Wiroas, ar gir diwean a vo d'imp !

AR YEOST.

## Me n'am euz ket amzer

War don : Theophilus.

Mi - gwelet, n'ouzon ket ha c'honi zo e - vel -  
don. Ne ga - van mui dre - holl ne - med tud di - re -  
zon ; o c'hlevout a c'heller o lava - ret bep ger :  
« Me n'am euz ket am - zer, ma n'am euz ket am - zer ! »

Mignoned, n'ouzon ket ha c'honi zo evel don :  
Ne gavan mui dre-holl nemed tud direzon ;  
O c'hlevout a c'heller o lavaret bep ger :  
« Me n'am euz ket amzer ! » (Diou wech).

Petra zo c'hoarvezet ? An amzer marteze  
Zo kollet, pe lonket, pa glemmer kement-se ? ...  
Rag an holl a ziskan, war ar meaz hag e ker :  
« Me n'am euz ket amzer ! » (Diou wech).

War ar meaz, ar mevel, pe ar vatez zoken,  
Chommet da ebata, ne respontont hepken ?  
Nemed ar c'houzou-man : « Ato e vezan ber, ber,  
Rak n'am euz ket amzer ! » (Diou wech).

E ker, pa c'houlennet digant ar micherour,  
Perak morse d'al lun ne stago d'ê labour :  
— « Ha perag ? emezan, an dra-ze a zo skler,  
D'al lun n'euz ket amzer ! » — (Diou wech).

Kreñnardou bugale, lec'h darempred ar skol,  
O deuz desket breman ober evel an holl,  
— « Ehanomp f emezo, ha pa gouste d'hon ler :  
Ni n'hon deuz ket amzer ! » — (Diou wech).

Sellit betek pegit c'ha an dud direzon !  
N'o deuz ket tamin amzer 'vit o relijion...  
Ha da Zeue zoken hirio e lavarer :  
« Che ! n'am euz ket amzer ! » (Diou wech).

Breiziz, unan bennag, arabad d'eoec'h souez,  
A zigouezo war-lerc'h, 'vit ar varn diveza ! ...  
Mez eun digarez mad dizale a gaver :  
« N'am euz ket bet amzer ! » (Diou wech).

Marteze, mignoned, ma zon ne blij ket d'eoec'h ? ...  
N'am euz ket bet amzer evit ober gwelloc'h !  
Gremp evel ar re-all : ma 'z eo ma zon dister.  
— « N'am euz ket bet amzer ! » — (Diou wech).  
YOUSM.

Gwech ha gwech all en em gav eur Gallaou ganimp ha neuze e ch'hoñ digant unan eus e vignoned : « Petra eo gi-ma-gir ? » Hag egite a lavar d'ean. Hogen, setu aman kaeroc'h. Gwelet am euz Gallaoued, eun « dictionner » gante 'n o d'ou o chom pell amzer da esa lenn ho Kroazik koant. Pelhez diduel o welet ar seurt troe-ze !

Gwelet ken aliez « Skol vrezeked kolaj Gwen-gamp » war ho kelaouen, a ra d'imp lampat, c'houi oar awalc'h, hag e fellfe d'imp ober ive eun tam enor d'hon c'hloerdi.

Mar vije en peb paronz eur barz, unan hepken, war-ben daou vlamman 'vije lennet ho Kroazik dre-oll en Breiz-Izel. An troio kentan an dud na rafent ket kalz van, mez pa ve anavezet hano ar barz neuze e vo sellet hep zùn hag hen na vo man dioutan. Da gentan marteze na vo ket lennet ar Kroazik, mez war-benn neubet amzer e teufe an dud da 'n em demma. Ha pa vo lennet ar Groaz dre oll, pegen aezed e vo neuze labourat evit Breiz ! Neuze a welet 'n'eo ket maro c'hoaz dro ar penno kaled, potred o bleo hir. Me gréd ec'h arrou ze arog pell, rag breman e waler o sevel eur bagad barzed yaouank a oll gerito Breiz. — Ha ma ve bet braz ar hoan, pegen Braz vo ive an de-ze evarused an dud o devo roet da Vreiz, o foan, o bue, o yec'hed, o mado.

D'ac'h a galon ha da Vreiz.

KALON-DIG,  
Kloerdi Treger.

## AL LEZEN DAOU VLOA

Ar zùn dremenet hon mignon mad, Ar Yeodet, an nevez bet ar vadelez da gas d'in war « Al lezen daou vloa » — a gonzer kement anez breman — eun « artikl » eus ar gweilla. Gwaz a ze, e bennad-skrid o zigouas gant eur micherour na oar ket ar brezonek hag heman, dre eur wall-chanz, a yezhas an treo, oc'h ankouaat d'ara eus an artikl hag o staga evel-se pen-our-pen, en eun doare iskit, pennadou ha na oant ket bet graet eot kloa, na oant ket evit dereout an vil ouz egile.

Pedi a reomp hon mignon d'hon pardon hag, erit die'haoui hon lennerien vad eus ar doan o dezo keneret oc'h esa dilua an diwvaden giz nevez, setu aman pelloc'h an « artikl » adoulet a-nee dre bennadougou berz gant peb a aplik-disheria a-us d'eo evit rei d'ou d'ar micherour da cont war-eeun hep holl e hent, da lavaret eo hep mesha pe anhouaat e vromm-lizerennadur, ezel ar wech kenta.

Petra a glevomp en-dro d'imp diwar-benn al lezen nevez. — Daoust hag-en e vije herve an Egalite ? — N'eo ket ; ar c'hontrol eo. — Gwir lezen an Egalite eo : Da bep-hini e zam herve e nerz.

An deion-man, pa 'man o vond da dremen, e zo kalz a drouz gant lezen nevez ar servich, al lezen daou vloa.

An darnvuian 'n em gav evaruz o sonjal enni : eur bloavez nebeutoc'h o devo d'ober. Eur rum-all a gemer anez a-dreuz, rag bla nebeutoc'h ar re gentan a vo evite-er bla ouspenn. Dre-ze kalz a dud hag an holl, koude laret, (nemet eta potred ar blavezion, an dizpan-seed) a gav honnez eul lezen fur, just, eul lezen reiz.

An dra da gentan a zebant gwir... mes pa ve studiet ervad, goude bezan klevet kaoz pep-hini, e weler eun penoz al lezen nevez a wasko kemend war ar vro, ha laret 'n an, marteze muioc'h eget an hini goz.

Laret e ve, herve an Egalite e tie an holl gouzant ar memeur trubuilhon. An dra-ze a zo eur gaou braz, eur gaou spontuz. Gwaz eo ze da neb a vo t'apet gantan ! Da bep-hini, er c'hontrol, e tie bezan groet e yec'h herve e nerz, herve e c'halloud... Penoz eun den bihan a dougo war e ziouskoa an hevelep bec'h gant unan braz ? A belec'h eun den dister an nevo komend a nerz ha... a krenv ? Penoz ar paour a c'hallio biken ober evel ar pinvik ? Ze nan hall ket en em gad ha dre eno eo e pech al lezen nevez.

Da genta : Al lezen daou vloa ha potred ar skoltou braz. — Daou sort a zo eus ar re-man : ar studierien divalo na glaskont nemet tec'hel diouz al lezen ; hag ar b'otred kalonek, c'hoant d'ober vad d'o bro. — Ar gaou braz graet gant al lezen daou vloa d'ar re-man ha d'ar Vro a-bez.

Gwir eo, dre ar frankiz hep muzul a leze al lezen goz gant potred ar skoltou braz, ar re-man 'n em lake holl studierien en reiz, da vezan avokaded, medesined hag all, ha ze, netra nemet evit tec'hel eus a zindan al lezen tri bla. Gant ma chomchont er skoltou beteg pomb, c'houc'h vloa warn-ugent hep ober netre, ar b'otred-man a re forz kaer : madou a-walc'h o devoa ; ar peb a glaskont

eo pellaat diouz ar servich. D'eun toullad ane, a dra zur, al lezen daou vloa euid an holl, a rey kalz a vad : laket e voint war an hevelep troad gant an dud all !

Mes en-kenver ar studierien divalo e zo ive reou all, potred a galon, hag a labour 'vit bean 'n o Bro eun dra bennag a vad. D'ar re-ze al lezen daou vloa a raio kalz a zroug. Distaget e voint en-pad naou vloa diouz o studi hag o levriou. Kalz ane a heugo goude ouz bue ar c'hola-jou pe, ma na reont ket, 'n em gavfont da vihana diwead, diwead en pen o micher. Setu int eta dilerec'h ha mar-teze skwizet... ha ze a zo eun dra fall-tre, rag kemend a ezom he deus eur vro eus talvoudegez ha skiant ar viche-rourien vraz, an dud a bluen, evel eus ners ha galloud he soudarded.

D'an eil : Al lezen daou vloas hag al labourerien. Gaou a ra ouz ive.

Gwelet hon deuz an tu pinvik pe tu an otrone ; gwe-lomp breman an tu paour, tu al labourerien, ar viche-rourien vihan, en eur gir tu an holl dud izel, tu ar Bobl.

Da gentan, e welomp, e-touez potred ar blavezion, ar mab heman intanvez, an hini an euz eur breur er servich hag an hini a zo gwelet evel zikour tiegez.

Aman e teuan diouz-tu da welet talvoudegez ar peb a laren uheloc'h : penoz hini abed eus ar re-man a c'hall tec'hel kemend ha keit diouz ar ger evel bugale an dud pinvik, da laret eo, bugale an tiegezou aezet ha krenv ? Nan hallgant biken, pe otromant, an intanvez hag he bugale a renko mervel gant an maon da c'hortoz dizro ar mab heman, ar gaoitour bara. Memez tra en em gavo gant an tiegez e-lec'h ma vo seiz bugel ha gant an hini an nevo kollet e wellan skoazel. Ac'hane 'ta e welomp nan hall ket an dud dougen holl an hevelep bec'h pegwir diousoñ an eil a zo divaloc'h eget ve egile. N'haller ket lara eur rum evit plijout d'eur rum all !

Daoust hag-en e voint digollet ? — Na voint ket. — Daoust hag-en eo mad ar Vro a glask ar Gouarnamant ? — N'eo ket.

Nan ! a laret d'in, mes ive an dud wizek o deuz groet al lezen daou vloa no dint ket zod, ha, ma c'hallont ar mab heman ha digand an intanvez, ius digand an tiegez paour pe karget a vugale, kredet ervad eus an tu-all e tigolfont an tiegezou-ze en em rei d'eo eun tam ac'hant ar bla euid o bugale...

Neuze, a larin d'ac'h, eo kenkoude tremen ane gant eur bloa : digoustoc'h e vo d'ar Vro ha gwelloc'h evite, rag kaer ho po rei d'eur vam, d'eun tiegez, ac'hant e-lec'h o mab, sikour na rofet jamez peadra da dalveout ar vugale kollet enpad daou vloa. An ac'hant (ha c'hoaz euid hen kad e vo rei plijout da botred ru ar Gouarnamant), na ra ket al labour, an ac'hant na c'hone ket a vara ! Ma 'n'an kredet ket, goulenit an dra digand eun intanvez hag a zo en penn eur vereri vraz, pe digand an tiegez hag an euz ezom e wellan zouten. Dre eno c'houi velo penoz an neb a vev en-touez ar bobl a anve welloc'h e zoere eget na ra kalz deuz potred al lezenou, kaer o deuz kad diskadurez. C'hoaz eur wech euid peb a zell ouz an dispansou e oa kalz a vad 'barz al lezen goz !

Ha neuze, kenvroiz ker, na glaskomp ket kemend a droioñ ; kad a ra d'ac'h penoz ar Gouarnamant an euz groet en Franz hag en Breiz-Izel kemend a fallagriezon, an tie poaniet kement gant al lezen daou vloa ma vije bet houman en lezen galvet, en gwitene, d'ober vad, 'barz ar Vro ? N'an nije ket ! Sonj ar Gouarnamant, en dra-man, ez eo c'hoaz digristen'ar Vro en eur lakant ar veleien d'ober daou vloa, hag a-chane, distaga ane ha diouz ar c'hloerdi ha diouz an Urzou zake. Mes evo 'vel en peb lec'h a hent-all an euz laket c'hoaz e viz 'n e lagad ; rag, keit ma pado ar Bed, e vo beleien : Doue na varv ket !

Petra, 'ta, a vije ar gweilla da shanvaat lezen ar servich ? Al lezen bla. — Pep-hini a die sina ar papereunou da c'houlten al lezen bla.

Ma fell shanvaat lezen ar servich — hag an dra a zo dleet — rag neuze na ve ket groet evel m'o deuz laret an darnvuian eus kannaded (deputeed) ha senatourien Breiz, perag na ve ket groet al lezen bla hepken ?

Gant houman an holl a base o die d'ar bro enpad eur bla hep bezan gwasket. Hag evit ar vro na vo tam abed a waz, e vo paet mad-mad tud a galon, tud a vrezel (rag evel en peb stad bezan zo war an donar tud galvet 'vid ar brezel), da chom 'hed o bue e-barz an arme evel en amzer goz. Ar re-man a vo ar gwir soudarded, pere a sento muioc'h a zikour d'o Bro eget na rey tud ha ne dint tam

galvet da veza er servich. Evol-se an troe a gerzo mad hag an holl a vo evaruz : pep-hini a vo neuze e-lec'h en eun blijo ar gwellant !

Arabad eo d'imp lakaat en hon fannou sonjou zoz eur rummad tud a zo hag a lar : Na die lezen arme ebet.

EO, eun arme a die bean, rag eun arme eo nerz hag esperanz ar vro. Penoz, labourerien douar, e hadfet ho park hag e troc'hfet an peuc'h an eost ennan ma na va war ar park-se eur gedour hag a difenno ac'hanoch ouz enebourien ar Vro ! A belec'h c'hallio ar vam baour sevel hep nec'hant ha c'houadour bihan ma wel o tont homde bandennadou tud gwe da devi d'ei he zi ha da walla he bugel ? An arme, eta, a zo eun dra zake ha neh a bella outi kalonou hon zud yaouank an euz pec'hed braz. Hennez nan eo ket dellezek eus an hano kaer a Vreizad !

Herve a glevan, 'vid an delou e vo sklabeet dre ar vro papereunou war bere vo pedet an dud da zina ha da c'houlten ma tremeno nan al lezen daou vloa, mes an hini bloa.

Pouezet eta, kenvroiz ker, ar peb ho peuz lennet ha pa 'n em gavo ar papereunou-ze na damantet ket d'o zina.

Gant al lezen bla ho tud a chomo er ger da labourat ; an arme dre he soudarded a vicher a vo ive krenv hag ar vro 'n em gavo well : dizammet e vo deuz ar bec'h pouner a wasko he diousoa hag a re aliez deuz he gwellant bugale tud diwriennet, pere, goude bean bet tri bloa o heuilh ar c'hasarniou na glaskent nemed bue Pariz hag ar c'heriou brein e-lec'h ma kollent gant o yec'hed, o nerz hag o furnez...

AR YEODET.

## DIRAG AR MOR

Hirvoudou.

O mor braz ha divent, mor kaer, mor duduz,  
Diragout adarre 'n em gavan evaruz.

Dont ez on c'hoaz eur wech d'az kwelet eur pennad,  
Keront vad a mfen chom 'n euz kichen dalc'hmad.

Da alan yac'huz, flour, war ma drem a dremen,  
Ha da vouez o kroual a zebant eur beden !

Eur beden ar gacrao, eur beden heurhaduz,  
Ac'h a diwar ar bed da Zoue Gallouduz !

D'an aod gant al lano tostaz 'n eur drouzal,  
Ha da wagennou koant a frez en eur strinkal...

'N eur strinkal war an trez o dour gwen, glaz ha gwet,  
C'hoant d'eo da laret d'in : — Sell 'ta, na pegen kaer !

Ouz da welet ken koant na skwiz ket ma zellou ;  
— Bravat ma 'z eo ar mor dindan bolz an Nenvou !

Diragout ma c'halon a zo ive laouen,  
Aukouat eo ganti he zrubiell, hec'h anken.

Kollet he deuz ar sonj dimeuz bro ar c'hoajou ;  
Tridal a ra gant jon o welet da aochou !

He fljadur gentan, hec'h amzer dremenet,  
Diragout, o mor braz, zo breman dihunet !

Dihunet int ken beo, ken buhan war eun dro,  
Ma kred d'ei he deuz groet eun hunvre gwall-c'houero.

Nan hall biken sonjal e ve bet pellaat,  
Eus da aochou trez flour, eus da riblou karet !

Koulskonde hon anzav ez eo red mad d'ei :  
Dirag ar wirione e teu da hirvoudi...

Hirvoudou a c'hlas'haer, a geun, leun a zaero !  
Daouste d'he c'harante vo red d'ei mond en dro !

Na petra zo kirek k'haer bed-man,  
Chom e-lec'h a gater dreist peb tra ar muian ? ..

Da ze e lavar d'in da vouez krenv, mor divent :  
— « Kar Doue da gentan, kerz goude gant da hent ! »

Oh ! pa vin pellaat, arri 'barz ar c'hoajou,  
Klevet a rin da vouez a-dreuz d'ar meneou ?

Ha ma n'he c'hlevan ket a-dreuz d'ar meneou,  
Me a yelo d'he c'hask dindan pin ar c'hoajou...

'N o beg o c'houibanat e klevin an avel,  
Dimeuz da vouez, o mor, hen a vezo hienvet !

D'hen chileo ma c'halon a vo ive digor,  
Ha seder e laro : klevet 'ran trouz ar mor !

Berrat 'ra an amzer, tosiat 'ra an termen,  
O mor, me a garfe n'az kwitafen biken...

Hogen pa 'z eo red d'in laret d'id : kenavo !  
Evit 'n em frealzi bemde ma a gano :

O mor braz ha divent, mor kaer, mor duduz,  
Pegoulz c'hoaz diragout 'n em gavin evaruz ?

AR YEODET



# Kroaz ar Vretoned

## ROUMANANCHOU

Eur skoet ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar breioù estren evit ar Breiz heñvel.

Ar brezonek hag ar fairs,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
*Furnez ar Gais.*  
Gant brezonek eo deud ar fairs,  
Gant ar gallek ez alo a Vreiz.  
*Furnez ar Gais.*

Dalc'hit bepred d'ho prezonak,  
Yes an dud vad ha kalonak,  
Yes ar fairs eo ; ma ve trec'het,  
Ouspen ar Vez, e vo Pec'hell  
Mizur.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Obro VALLEE, Rener, ru Zant-Bened, Zant-Briek,  
pe d'an Obro MOAL, Skrivaniere, 27, bali Gharjet, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwasnek pep arondennad-ekriter.  
(Diskenn a briz evit usuz a embann diouas-taj.)

## GOUEL BRAZ EN PEURIT

Al lun-Pask da zlou eur goude kreiste, el Llistiwen  
Vraz, eul c'hart leo bennag deuz ar bourk war hent Ru-  
nan

## GOUEL BRAZ EN ENOR DA VREIZ-IZEL

zavet gant potred Peurit.

Hag e vo c'hoariet : 1<sup>o</sup> Noz ar Gwadegenno pe Noz  
Mavlarje en ti Fanch an Amezek : kanouenno, konta-  
denno, c'hoario. 2<sup>o</sup> Job al Lonker.

## BREIZ DA VIRVIKEN

## Ali da oll lennerien « Kroaz ar Vretoned »

Eul levr neve da breiz ?

Eur c'helou mad : Eman hon c'henskrivagner ha mi-  
gnon ker, Klaoda, o paouez lakaat dindan ar wask, e ti  
Prudhomme, eul levr neve eus ar c'haera : **Mouez reier**  
**Plougastel** e hano. Evel an tad Bourdoulous ez eus ke-  
ment a blijadur o lenn e foblenno gant skler ha freaz  
e'ch int skrivet, hon mignon Klaoda a zo gimidik eus a  
Gerne-Izel, bro ar brezonek mad hag eaz da intent dre-  
oll. Eur souez eo gwelet pegen reiz ha pegen splan war  
eun dro e teu ar brezonek gantan. Ouspen eur mestr-  
skrivagner Klaoda a zo ive eur **bars!** eur gwir **Varz** hen-  
vel-tre ouz skouden ar Wir-Varzed a gavfet displeget  
pelloc'h gant eur gwir-varz-all **Ar Yeodet**. C'hoant am  
mije bet da zisplega aman eun nebent skouerion kutuilhet  
el levr neve aman hag a-hont. Evit divezatoch e vo rag  
berrik eo al lec'h e **Kroaz ar Vretoned** hirio. En gortoz,  
an ali a roomp stard da gement hini an euz c'hoant da  
lenn eul levr eus ar gwella : Prenet **Mouez reier Plou-**  
**gastel** e ti Prudhomme (7 real, e koust gant ar frejou-  
kas.)

## AVIEL AR ZUL FASK

En amzer-ze Mari-Madalen ha Mari, mam Jakez ha  
Salome, a brenas louzou c'honez-vad evit ma teujent d'e  
lakaat ouz korf Jezus. Hag ar c'henta dez eus ar zizun  
(zün) e tenjent d'ar bez, beure mad ha d'ar zav-heol. Hag  
e lavareit an eil d'eben : « Piu a ruillio d'imp ar maen  
a zo e toull ar bez ? » Ha pa zelljont e weljont penaoz e  
oa fennet ar maen ; rag gwell-vraz e oa. Hag o veza aat  
er bez e weljont eun den, gyaouank a oa azezet en tu deou,  
gwisket e gwenn ; hag o doe aon. Hogen hegan a lavaraz  
d'ezo : N'ho pet ket a aon : c'houi a glask Jezus a Nazaret,  
pehini a oa bet lakaet ouz ar groaz ; savet eo a varo da  
veo, n'eman ket aman. Setu al lec'h e pehini ho poa e  
lakaet. It, eta, ha lavaret d'e ziskibled ha da Ber ho  
tiarog e Galilea ; ano hen gwelfet, evel m'en deuz la-  
varet d'ec'h.

## AR BASION

Spered Sakr, me deu d'ho pedi,  
Reit d'in ar c'hras da saludi,  
Gant eur gwir geun en em ine,  
Pasion Jezus, Map Doue.

Jezus, kent Pask war-dro daou da,  
D'e ziskibien a lavare :  
« Map an Den a vezo gwerzet,  
Evit bean er groaz staget. »

Jezus, o vean en eun ti  
Oc'h ober Pask hag o tibi,  
A lavaraz : « Unan 'n ho tonez,  
Ma zreitro en gwirionez. »

An oll neuze, p'o deus klevet,  
En eur vouez o deus gouennet :  
« Mestr me eo ? Mestr me eo ? »  
Jezus a lavaraz d'ezo :

« Er plad ganin neb a laka  
E zorn a gie ma zreitro,  
Gwell d'ean 've, hep mar ebet,  
Na vije bet biskous ganet. »

Judas pini hen treitouras,  
Outan ive a c'houlennas :  
« Mestr, eta, Mestr na me e ve ? »  
« Lavaret 'veus ar wirionez ! »

Judas neuze c'heas zoudan  
Da gad prised ar velen,  
Pere gurzho euz  
Da lakat Jezus d'ar maro.

« Pegement 'rofet d'in, 'mean ?  
Ha me werzo d'ec'h 'mean. »  
'Vit eur priz a dregont diner  
E warz e vestr hag hon Salver.

Jezus er jardin Olives  
A gas ganitan Per, Yan, Jakez,  
— « Pedet, diwallet, emean,  
Ma enebour zo tost aman. »

N'an nevoa ket e c'hir laret,  
Judas kenkent so armet.  
'Bars er jardin da hanter-noz,  
Gant eur vanden harnezet glose.

An treitour d'ostaas outan  
Evit ober eur pok d'ean,  
En eur laret : « Ave, Rabbi ;  
Dont ran, ma Mestr, d'ho saludi. »

« Perag, 'me hon Salver neuze,  
Evel-se em c'hemerez-me ? »  
Neuze 'vel bleidi war eun oan,  
A-gevred e lamjont warnan.

Kaset oa da di Kafas,  
Kondaonet gant ar belek bras,  
Droug braz emnan dre ma laro  
Oa Mab Doue e gwirione.

Sant Per evit gwelet ar fin,  
Heuilhas neuze e Vestr divin ;  
Antreet en lez Kafas,  
En-kichen an tñ 'azeas.

Ar vatez neuze o vean  
Eun tamm sellet piz dioutan,  
— « C'houi, emezi, a zo ive,  
Oc'h heuilh Jezus a C'hallife.

Dirag an holl Per a nac'has ;  
Beteg teir gwech e respontas  
'N eur laret, zoken war e le,  
N'anavec ket an den-se.

Jezus da Bilat oa kaset,  
'Vit bean adarre barnet ;  
Setu e oa kaset neuze  
Da di Herodes ar roue.

Setu neuze 'la Herodes,  
A-gevred gant tud e balez,  
O kas Jezus gant goaperez,  
Ha gant kals a vonfonerez.

Gwiskan rejont d'ean ouспен,  
Evel d'eur sot eur zañ wen,  
'N eur gas Anean war e giz  
Da Bilat 'n eur feson iskis.

Neuze Pilat a lavaraz :  
D'ar Judevien p'an arnas,  
« An den-man n'an eus gret netra  
D'ar pez damallit aneza. »

Pilat neuze o tilazal  
Jezus gant soudarded krnel,  
Pere lakjont eur guranen  
Gret gant speru kaled var e han.

Hag oc'h ober goap anzan,  
'Ch eijont d'an daoulin dirazan,  
En eur lavaret evelen :  
« Salud roue ar Judevien ! »

Pilat evit touch kalonou  
Ar Judevien ouz hon Otrou,  
A laraz : « Sed an den aman ;  
Tros gleet da gid outan.

Rak se, pa eo dent an amzer  
Da rei e c'hras d'eur prizonnier,  
Daoust, 'mean, pe Jezus ho po,  
Pe Barabas 'n hini vo ? »

An dud fallakr a gommansas  
Da grial : « Reit d'imp Barabas ! »  
Ha da lavaret etrezo :  
« Jezus d'ar maro, d'ar maro ! »

Neuze 'ta e krogjont ennan,  
'N eur rei eur groaz pouner d'ean,  
Gant krisder hag eur joa barbar,  
Da dongen da Vene Kalvar.

Eno neuze eo hon Salver  
Er groaz staget etre daou laer.  
En eur vervel, diwar ar groas  
E c'houlou pardon d'ezo c'hoas.

Kenkent an heol a denvelas,  
Hag ar vouel en tempel a rannas ;  
An douar a-bez a grene,  
Hag ar vein be oll a fralhe.

Neuze 'n eur ober eur c'hris bras,  
Jezus er groaz a dremenas ;  
Dre e varo, dre e boaninou,  
N tiger d'imp dor an Nevouz.

L. CHARRAN.

## Ar Votadek e Kermaria-Sulard

Gwasat ma 'z eo bet ar botadeier divezant Euz freal-  
zidigez eo d'imp, koulskoude, gwelet aman hag a-hont  
Bretoned kalonek o ter'chel stard hag uhel banniel ar  
Vad hag ar Fe a-eneb d'ar re fall a fell d'e koll ha digris-  
teni ar vro. Setu aman eur skouer eus ar gwella etouez  
meur a hini all. Diwar lizer unan eus hon lennerzed  
eus Kermaria-Sulard eo hon deuz distaget al liennou-  
man war-ter'h. Trugare d'azi, a greis kalon ha mil  
bennoz-Doue da dud vad Kermaria-Sulard !

## Otro Ker.

Gouzout a ret, hep mar, e oa eur votadek aman disul ;  
botadek evit choas eur c'huzulier, pac'h e bet torret ar  
vot dre eun tol traitourach : Gwaz a-za evidomp oll.  
Bretoned ha Kristenien, pan eo gwir e oa ar c'huzulier  
torret evel eun tad evidomp !

Ebars ar barrouz-man, e ve joloti gant ar re ru pa ve  
eun dra bennag er boug, kenkouls gant ar mard'hed evel  
gant ar boudred : eur jabadao spoutus a reont. En dro-  
man e omp en em glevet ive, n'entrezomp, da ober d'eze  
zerri o genou ma vijemp evit ober. Deut omp a ben deus  
hon zol, rag maioch oa diouzimp evit dioute, hag oll e  
omp a-gevred.

Pogement a vad na re ket d'in gwelet an dud vad o  
kerzet evel se var roudou e zud koz, hag o stonrin a-eneb  
ar sort tud-se na reont nemet ober droug dre oll, zoken  
beteg laret lakat an Ilis d'ober eur sall dans ! Pegen trist  
ne ket se. Pa eo achu da gonta ar bilhejou-vota diouas an  
abarde e oa et ar lere gant an O. de Champagny ; an  
holl a gerze dre ar boug en eur gauan :

An otro Champagny,  
A ver tregont paour en e di,  
Ha c'hoas e lar e kemerje,  
Ken lezel den en paourante.

Ha c'hoas :

Nan eus parrouz het bars er vro,  
Sort da barrouz Pleumeur-Boude ;  
Eno man bevien en tfe,  
Ha roet o bara d'ezo.

L. G.

med ha d'ar da siwan hañv goñv. en kement prad ha  
fiooren zo douret gant an Zant-Kare hag ar mor  
braz.

#### Ar stalioù.

Treuz eo doare ar stalioù mouc'h o fan gante  
dindan ar vougen denval hag o zreid ebars ar fank.

#### Ar vored.

Treuz eo ar bed gant ar beorien gez goulet,  
mac'hagnet, seiñt ha noded o izili oute, o krenan ovel an  
delion 'bars ar gwe, o druilhoù pilhaouek gleb dour teñt  
dindane.

Nan euz ket eun nendon sech warna: « Mar na zeñ  
ket an amzer da sklerad, aman o vont da c'hlae'hari  
«Phanomp», eme Paueh Gargoad da Luskollik. « Ruilh  
schannon war ar c'hlae'n 'n eur c'horn goasket 'n eur  
c'hoign kled benug; aman e kone an avel zil war ma  
chouk e-ziwar doer c'hlae ar chapel », a lavar eur paour  
kez dall entre dion glemmaden: « eun dreik benag d'ar  
paour kez dall... » Lavaret 'moa rei eur gwennek da  
gement paour 'mije kad pa vijen oc'h ober ma zer dro  
d'ar chapel ha bet en don d'am gij. Breman war-eun d'ar  
chapel.

#### An nor.

An nor goste dre lec'h ma tremenan zo gret gant danve  
koat dero. Gwelet he deuz, na oar den nemet Doue, pe-  
gement a dud o vont dreist he zrenjou mon greiz kleuzet  
dra fors bean darempredet, gwelet he deuz kalz deuz hon  
zadon koz o tont da c'houlou digor diganti, abred eus ar  
beure ha da beli an noz aboue, aboue daon c'hiant eiz via  
ac'h e dor herve ar merk 1697 a doug tro-war-zro d'he zal.  
Mont a ra bepred en dro 'n eur wigourat war he mud-  
venn ler: « Deut ebars, aman, c'honi gavo dor ar ba-  
radoz! »

#### Ar chapel.

Neket et mad ho troad dreist an zrenjou pa zeñ eun  
dra benag da bikat ho kalon, da grigi 'n ho spered, da  
ten da zongen ho korf skanv ha diskwiz 'n eun taol da  
boket d'ar skeuden zakr. Koantan, kempenan, sioulan  
chapel eo homant! Dre ma ten an de e kresk ar birch-  
foued da zont e-bars ha bepred na glever euni nemet trouz  
sech' greun askora gwenn ar chapelodou dibonet entre  
diziet bugale Mari, o pedi o mam:

« Chapel Zant-Kare, anout te  
Me garfe bean noz ha da... »

#### An oferen nao heur.

Konec't mad on: 'man an oferen nao heur o ren. Bep  
bla, oспен tri-gent via zo, eur ouem gristenien vad  
deuz ar vro a zeñ a rum da rum da lakat laret an oferen  
deuz an Itron Varia Druedla nao heur da zadorn he fardon.  
Na zo netra kaeroch na pinvidiko'h war an douar hag  
an nenv evit an oferen, sakrifis korf ha goad Jezus-Krist.  
Kaeran digemer vo gret d'an dud-man eun de da zont gant  
zant Per paeron iliz o badeiant. Eur vanden Elez, ken  
alios a hini hag a oferen o devo lakeet en enor da Ronanzez  
an Elez a zeñ yar ben hent d'e, da gerc'hat ane da  
vont d'ar pen da kroec'h da balez an Dreinded zautel, hag  
eno, bodet en-dro d'oter ar Werc'hez o devo karet, pedet  
hag enoret aman, o devo eur loden biavik deuz an oferen-  
bred, deus oferen ar barados a bado da viken, kanet  
gant Mab ar Werc'hez, Jezus-Krist, ar beleg Doue, ar  
belek huellan...

#### Kreizte.

D'an taol a greizte an tri gloc'h divridet ha brallet a  
zon drant 'n eur eur drital gant ar levenez peden an An-  
jelus:

« Leromp oll hon anjetas,  
Ec enor da Vari,  
A zo gwir vamm da Jezus,  
Hag ive bon Mamm-ni. »

#### Ar gousper.

Keer zo pedi, kaer ho deuz an awel bean da kroec'h,  
na sav ket an amzer, e talc'h ar c'hilizen wenn d'ober.  
Piniñ o deuz an dud o tont gant o bugaligon dre  
amzer ken strouilhuz, piniñ o deuz gante 'pad ar gous-  
peron ebars ar chapelik enk, leun kouch da gouch in  
tom evel eur forn c'horet. Piniñ o deuz: aezetoc'h a ze  
o devo o menad da vont d'ar ger: Kanet ha kanet ker  
eo ar gousperon. Bep oil zil, n'eus ket da laret nan, arok  
mont d'ober eur valeaden pe da c'hori ar c'hilhoù, vo red  
mad d'in mont d'ar gousperon herve lezen ar vae gristen:

« Houlhet d'ar zil an ofisou,  
Ofereñ-bred ha gousperou.  
Santel eo ar zil war e bed,  
N'eo ket de an disoul cag ar bed. »

#### Ar brezegen.

War-lerc'h ar Magnificat kanet war an ton braz gant  
eur c'hure yaouank, kaned deuz an dibab, ar pentiegezon  
o deuz klevet eur gentel dindan, eur brezegen-biavik,  
Ienn a gomzou talvoudoc'h evit an archant hag an  
aour, Ienn a gomzou Doue, mad da sklerijenna o spered,  
da doman, da bikat o c'halon a skiant, a farnez diwar  
ten o c'harg en kenver ar vugale roet d'e gant an otro  
Doue. Ar gentel geer-man, an hadon barados-man konec't

en douar mad, en donar kalonou hag a gar ar Werc'hez,  
a ziwano, a gresko, a zoug, a dolo frouez he bec'h, hag ar  
vugale 'bars ar vro vo stumot mad, vo bugale a zoare,  
bugale a vo pleg doujans Doue hag o zud gwriennet doq  
'n o c'hreiz:

« Itron Varia a Drué,  
Miret o le d'hoñ bugale;  
Ec Breiz-Izel, o ma Itron,  
Dalc'het ar gwir relijion. »

#### Ar prosession.

Digouet eo koulz ar prosession ha gir abet a brosession.  
Daoust hag-en vo tremenet heb ober prosession ar bur-  
zudon? Neuz, fad, Salver Doue, vo paour ar pardon. A  
greiz 'man chiflet ma spered gant an dra-man ac'h e dis-  
tennet ar parapluia, an disgleanno stennet 'us da gofo  
gwenn ar mammon ha da dokou plouz neve ar vugaligon  
a dougont war goubl o bec'h: hag ar c'hroajoù arc'hañt  
da lintri, ar bannieloù zakr da darnijal flour 'us da benn  
an dud. 'N eun tol ac'h e savet ar prosession war e c'har,  
war e droad hag en-dro... Man ar Werc'hez o tont dreist  
zrenjou an nor-dal a-dreuz d'eun engroez-tud a lak zin ar  
groaz 'n o c'herc'hen.

Mont a ra, treuziet he c'halon gant seiz kleze, korf  
maro he mab Jezus war he barlen ganti: Mont a ra dre  
Zant-Kare, douget plen ha brao war diou skoa peder eus  
ar gestered miz Mari, douget o feder gant ar stad, al  
levenez zo enne o tongen Ronanzez ha Mestrez ar Vro.  
Seder ha skler he daoulagad evel diou stereden; digor  
frank he c'halon dener hag he daou zorn o daou da skuilh  
ho grasson en-dro d'ei, ar Werc'hez neket evit miret da  
vous'hoarzin dindan pen kap he mantel alaouret pa wel  
ar vugaligon, glaz ho daoulagad evel bleun'lin, skler o  
zal badeet evel ar spenn gwenn, o klask nijal a ziwat  
diouvec'h ar vam dener eus en Nenv. Nan e ket an Itron  
Varia evit hars da c'hoarzin eus a greiz he c'halon pa wel  
pegen niverus, pegen braz eo ar bobl kristenien an em  
stard en dro d'ei, 'n eur veskan o fedennou brezonnek  
gant pedenou latin ar veleien, gant mouez ar c'hloier bin-  
nigel, zon skilt an taboullou stardet mad dindan o  
c'herden sten-stren hag an trompillou koneg melen.

« Jezus, isera prosession,  
Endro da skeuden hon Itron...  
Ar Werc'hez zakr Zant-Kare,  
Hirio vad, 'deuz d'ober are!  
Gwisket eo d'ei rae rei gwenn,  
Eur garanen 'zo war he fenn. »

Hag a bob korn a Vreiz-Izel,  
Hag eus a dost hag eus a bell,  
Ar re glanv ar re vachagnet,  
Deiz he fardon, 'deuz d'he gwelet. »

Ya, Gwerc'hez Zant-Kare he deuz anoudegez pell eus ar  
ger ha, mar zo diredet pobl hirie eus a bevar c'horn ar  
vro da c'houlou o mennad diganti, muoc'h c'hoas, stan-  
koc'h c'hoas eo ar re zo deut da baeen o die.

#### Tantad ar Werc'hez.

Ledan ledan, kalz a dro gantan deus traou evel gant  
bernio-tou Kerne war ar leuz, an tantad a zoug war e veg  
Kroaz Jezus uhel da kroec'h.

« Zav en ez sae, Kroaz ma Zalver,  
Ma vi gwelet gant ar pecher... »

Difunet ped karg lann, ped karg gor a zo oc'h ober dan-  
vez an tantad?... Oспен diou-warnugent karg digasset  
deuz Plouaret, parrouz Itron Varia Gelou mad, deuz Plou-  
nevez-Moëdec, parrouz Itron Varia Kervenac'h, deuz Plou-  
neris, Lanvellec ha Zant-Kare (parrouz Itron Varia Drué.

An tan ve lavaret a gerz bulanoc'h gant eur c'hleuiad  
lana evit gant an hent braz. Hirie e ra da gentan neu fall  
da grigi, ar lann zo gleb; eur wech krog, e sec'h arokan,  
e teu da flamiñenni tro war dro; da zisplegan eur pikol  
pez mantel ru skeduz, eur vantel ru tan dreist diou skoa  
ar bern lann roas. Ar groaz koat a zo breman eur groaz  
tan kurant gant eur vogeden c'hlae a ninj wer eun da  
vro ar stered war dioneskel skanv an amzer sioul a ra.  
Kaeran tantad tan! biskoaz hen kaer all na weliz! Da  
hent ar vogeden dom e sav ive pedennou ton eus kalon-  
nou ar gristenien a zo 'n o sae en-dro d'an tantad.  
Grouez, gor, ezen an tan a zo ken kalet, ken neruz ken  
e renk an den souzan pell a dreuv. Klevet ran hiniñno o  
laret: « penoz pad en-kreiz tan an ifern pan eo gwir elen  
tantad ar Werc'hez epen a ra d'imp zouzan a dreuv!  
Siwas an tantad-man n'eo nemet eur vogeden fresk ha  
distan en-kichen tan loskuz an ifern. Braoc'h ve birvi 'n  
e greiz ac'hian d'an de diwean deuz ar bed

« Eged heñv en ifern eun eur epen losket,

Itron Varia Sant-Kare, plijet gant ho madelez sikour  
ma spered pensken da sonjal aliez en puns don an ifern,  
puns an tan na vougo biken. Kroget em dora ha renel, ho  
pugel plet diouz hent ar pech'et, brassan drouk zo er bed.

#### Zalud ar zakramant.

'N eur zistrei eus an tantad, duhont war an oter meñ-  
benerez savet 'us d'an nor-dal dindan Kamb ar c'hloier, o  
welan, eu kroiz an Ostansour aour, an hosti wen o sto-

redenni, o skedi dindan sklerijen ar goloio binniget war  
elam, beleien gwisket en gwenn tro war dro d'ean o  
kanan. Daoulin! daoulin! daoulin! a lavar mouez ar-  
c'hantuz ar c'hloer bihan ha ei Ja Megan hon feneuz  
diskabel dindan bennoz hon Salver Jezus a ziskon war-  
nomp a ziwat oter ar Werc'hez e vam:

« Ma hoc'h ador, o ma Jezus!  
O korf sakr, o gwad presius,  
Keseñt ganech' beteg an Nenv,  
Homaj ma c'herf ha ma tus. »

Breman eur pok d'ar Werc'hez ha d'ar gear Allaz!  
Ieun eo ar chapel gant ar vugale d'awielan; pell startoc'h  
eo tostaet aman da skeuden vuzudus ar Werc'hez evit  
na ve tostaet d'ar biz en Zant-Yan-ar-biz. Martezet war  
a c'hoaz ar beure e kavin braoc'h renk; hirie a zo pell re a  
dud... An tantad da lec'h da flamiñenni; arok ma koue  
'n e Indu 'vo debrèt ma c'noan ha laret ma fater pell a  
vo. Goude beuz gret e vouzden 'pad an de an heol he  
kel bet 'vit miret da zigerri o lagad lugernus da zellet ouz  
ar gristenien o zistrei eus pardon Zant-Kare.

Dindan eur c'huz-heol skedus, kuz-heol eun devez  
hanv e tigue ganin mont d'ar gear. Zebiant vad evit  
arc'hoaz. Ar zadorn eo zul ar Werc'hez: Zadorn pardon  
Zant-Kare a zo unan eus e zulio kaer. Kenavo varc'hoaz  
ha nozvez vad d'ac'h, Doue hag ar Werc'hez d'ho pinigo!

EUR PIRCHININ.

## FISTOULIK

(PENNAÑ DIVEZAN)

IF

Maro kaer Fistoulik.

Marzin a oa trist ive ouz toul an nor... Michans  
eñve 'henn neuze, petra a oa ouz hen gortoz.

Dond a rejont er-maez deus an ti; potr e « saro »,  
krenv e vouez a skoe e vaz en hent, hag ar pilhaouer a  
frote e vruched d'an azen en eur rei eun tam bara d'ean,  
hag a lare eun dra bennag ive. Erfin paotr e « saro » a  
zistagas an azen, a roas ar radin d'eur c'hanfard o di-  
gouet toull an nor ha Job koz a denas en dro, tenval a  
zrem.

Potr e « saro » a laras d'ar c'hanfard mond war-rög...  
Med brao e oa lavet: Marzin na c'houlou ket kerzet pe na  
oa ket ar pilhaouer a oa krog er ranjen... kaer an nevoa  
ar potrik jachan, heman na fiave ket muoc'h evit eur  
peul-men.

O welet ze, potr e « saro » a roas daon pe dri pikol  
taol baz d'ean war e gein. Fall a veas; Marzin, konnaret  
o vean gwall-gaset en eur giz na oa ket kustum, a laoskas  
eur winkaden ganlan, ken a yudus eun houarn deus e  
droad gant moger an ti. Na dapas ket anean, 'med ar vaz  
a nijas da gouean oспен ugent kammed achane.

Allaz! Marzin, manket a teus!... Marzin! Raktal  
potr e saro a lamp gant e benn da hijal anean ha daon  
pe dri-all gant sareier a oa ouz toull an nor en em lak da  
dornaa warnean gant o bizer en eur vallozi evel tud  
zodet.

Paean 'ri ker da winkaden, Marzin!

Job koz o welet zo e ch'as kwit priman m'hellas en  
eur c'hervel Fistoulik... Med Fistoulik na sonje ket  
mond kwit... Et e er gouar vrasan o welet gwall-gas o  
vigou... Lampad a ra deus ar c'har, e greo a-bik ennan.  
Zailhad a ra gant unan deus ar re a skoe gant Marzin  
hag e zent ec'h a dön en e feskon; heman a laosk euz  
gruden hag a lez e vaz da gouean... Med Fistoulik na  
chom ket da sonjal! Raktal e lamp gant gar eun all hag  
a rög e vrägo d'ean eus krech' beteg traou: Med neuze,  
taolio a goue eus a bep tu war Fistoulik, evel grizilh...  
Arkonnet e an azen. Taolio baz, taolio treid, taolio mein  
a zo oll evit ar c'hli... kement hini a dremen a c'hoanta  
kemer lod en abaden:

« Bec'h dean, bec'h dean, a youc'hent oll, eur c'hli  
klauv e! »

Hag an taolio a goue droc'h bepred.

Fistoulik na zant taol ebet, kement a gouar evel a zo  
ennan: kregi en heman, kregi 'ra en hennont, med allaz!  
nan e ken evit ober nemeur a drouk d'e. Re-oll emaint!...  
Dinerzan 'ra a dam da dam... Hag an dud a sko be-  
pred... Hag an dud a c'hoarzin!...

Eur ponnadik goude, ar re a dremene dre eno a wele  
eur c'hli paour astennet en bouillen ar ruzelen, goad ha  
labo oll, hag ar vugale en eur dremen ec'h ee da rei eun  
taol troad d'ean.

Peour kez Fistoulik!...

LAOUIE.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eor skoet ar bla evit Breiz ha Bro'Chall.  
2 skoed, evit ar broio estren evit ar Broio hellit-h.

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
*Furnez ar Geiz.*  
Gant brezonek no deud ar feiz,  
Gant ar gallek ez nio a Vreiz.  
*Furnez ar Geiz.*

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma vo trec'het,  
Oupen ar Ver, e vo Poc'hell.  
MILIN.

## SKRIVANIERIEN

Est al labourioù pe d'an OIRO VALLÉE, Rener, ru Zant-Beneal, Zant-Briek.  
pe d'an OIRO MOAL, Skrivaniar, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwannek pep aroudennad-ekritur.  
(Diskenn a briz evit meur a embann diou-t).

Goulnnet, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
mignon Klaoda :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'hemenn digant hon eskop breizad, an  
Aot. 'n eskop Dubourg ; unan eus ar gwella hag an du-  
diusa leorioù bet skrivet e brezonek betekhen.

## ALUZENNOU DIGANT HON LENNERIEN

An aot. Rouz, eus Paris..... 8 real.

## Al lezen neve hag ar Breuriezou karget da c'houarn an ilizou

### I

An ilizou, laeret digant ar gristenien, a vo roet da  
Vreuriezou, dindan beli ar Gouarnamant.

Pa ve klevet potred ar Gouarnamant o laret ez eo a  
lezen neve leal ha madeleuzus hag e skedo war an Iliz evel  
eur ban-heol hanv, e c'hoant'er dustu skei an dorn war o  
geno pe goulen digante ha kollet o deuz o skiant vad.  
Petra an euz ar Gouarnamant, hep pehini na c'houi na  
Doue na diaoul, da weled e-barz an iliz? Petra 'ra d'ean,  
pa na gred da netra, dond da vouta e foi en kalon ar gristen-  
tenien ha da laret d'eo : « Breman e vo gouarnet ho fe, ho  
kredennoù hag ho relijion nan gant beleien mes gant tud  
all aotreet ganin da ren ha da gemer an ilizou evel o  
zra... » Eu gwirione, nan euz ebarz al lezen — kaled  
mad konkskoude — netra a zioteh't! Ar belek eus a  
belini e tigoue an iliz en hano hon Zalver na vo ket mestr  
enni... Nan hallo ober netra hep aotreadur ar vreurieze a  
vo en e barrouz karget eus ar relijion. Kaero'h zo, gant  
ar vrentiez-man ar belek a vo evel eur mevel! Hi a gase  
hag a zigase anean evel m'he devo c'hoant... Ha laret  
c'hoaz ez eo houman lezen an disparti groet en eur spered  
mad hag eont! Neuze, ma loue, ar giñou n'o deuz ken o  
gwir dalvoudegezh!...

Petra a vo ar breuriezou laket entre ar belek hag  
ar relijion? Herve al lezen ar breuriezou o devo d'an  
n'ebenta seiz ezel pere a renko bezan, ar muian 'vo  
gallet, tud eus ar barouz pe eus ar c'hanton. Int o  
devo etre o daouarn kement tra ha kement mad he devo  
an iliz. Int a vo karget eus holl d'eo ar relijion nemed  
eus daou dra pere a zello ouz ar maer hepken an inte-  
ramanchou ha zonzere ar c'hleier. A-hend-all ar breurie-  
zou a reno peb tra dindan lagad an aotro maer pe unan  
bennag eus pennoù ar Gouarnamant, a c'halla pa garo  
gwelad penoz e kerzo an treo ebarz an iliz.

Ar breuriezou a zigemero freuz ar c'haston hag an  
arc'hant roet evel ezommou an iliz ; a zastumo ar pezh a  
vo dleet evel an ezommou, ar servijou, evel ar c'hadorioù  
hag ar plasou. Delc'hel a refont bep bloa eur gont striz  
eus an arc'hant a vo digoneet gante hag an hini o devo  
dispignet. Ar Gouarnamant a zeuy pa garo da weled ken-  
c'hout ar breuriezou. Ma na vent ket reiz pe ma ve kad  
gante en o c'hief muio'h a arc'hant evit n'o devo anzavet  
war o c'honchoù, ar pezh a vo en tu-all a vo d'ar Gouar-  
namant. Neuze ar vreurieze a dapo c'houezek pe gant lur  
frejou, c'houezek pe dri miz pison ha c'hoaz marteze e  
vo dispennet.

### II

Pe sort tud vo laket ar breuriezou-zo.

Setu ive ar breuriezou huilet mad ma tizonfont  
euz ar Gouarnamant! Kalz ané, marvod, a gerzo

troad ouz troad gantan, rag al lezen na lar ket petra  
vo ar breuriezou na petre tud a vo enné... Ar pezh a lar  
ez eo ma vo roet ha feurmet an ilizou laeret gant ar  
Gouarnamant digant kristenien, da vreuriezoù a c'halla 'n  
em groui evit kenderc'hel 'barz ar vro gizioù ar relijion  
gristen. Al lezen na lar ket e renko izall ar breuriezou-man  
bezan kristenien vad pe, da vihana, tud doujus da lezen-  
nou an Iliz. Eno eman he c'hoate fall ; rag ken buhan  
all, fallan lamponed ar vro a vo eus ar breuriezou ha  
galloud a reomp kredi, gant tud ar seurt-se an treo a  
gerze war arsak!...

Ma vije en peb parrouz krouet ar breuriezou gant eun  
toulad tud kalonek, eved dastum d'ar veleien laeret ar  
gwensien a rofe d'eo ar gristenien vad, e c'hallfe c'hoaz  
kavout fiziañz enné... Mes marteze elc'h bezan evelse,  
izili ar breuriezou a vo tud dizoue ha dife pere a c'hoan-  
tao bepred leui ha dizrei spered ar relijion, spered an  
Aviel, herve o c'hoant, o ezom pe o c'hasoni direiz, ha  
dond dre eno d'ober eus gwir relijion hon Zalver eur ze-  
blant hepken a relijion henvel pe fallo'h eved hini ar  
Protestanted. Penoz e c'hallfe biken ar belek 'n em gle-  
vout gant eur seurt breuriezou? Petra teufe ar parrouzioù  
da vezan, renet gant tud evelse? Larin d'in eta, kenvroiz  
ker, na vefe ket spontus sonjal penoz enebourien hon fe,  
hon bro hag hon Doue, a gemerfe hon ilizou hag o madou  
evid ober gante evel m'o defe c'hoant hep n'hallfe na be-  
lek, na den all laret netra? Er stum-ze dion barrouz, kris-  
ten en amzer goz, a deufe da vezan, unan ane protestant  
hag eben hanter-gatolik. Hini eved ane na chiloufe na  
eskop, na Pab, hag enne o-diou e renfe an dizunvaniez,  
an dizarz, ar gasoni! Daoust ha na vefe ket kri ha hudur  
lezel gant an dud-se aoterioù ha besellou zakr hon ili-  
zou?

Setu ar pezh o deuz sonjet ha gwelad sklaer hon Depu-  
teed vad ha, gonde kemend a galonad, o deuz gallet —  
trugare kalz d'ar zinadurioù o deuz roet an holl eneb d'al  
lezen fall! — lakat ar Gouarnamant da zistan kriker  
artikl pevar. Herve an artikl 4, ar breuriezou a c'halle 'n  
em groui en diavez ar belek. Breman an artikl, dizroet  
hag astennet, a c'houzav eur belek kristen en penn peb  
breuriez.

### III

Al lezen neve a zifram pep frankiz digant an Iliz.

Gant eur belek er penn, an treo a gerzo eun tam-  
mik welloc'h... Siouaz! petra dalveo d'eo mont mad,  
pegwir pa garo ar Gouarnamant e vo miret an iliz ha  
diouz ar belek ha diouz ar vreurieze. An disteran tra a-  
dreuz a 'n em gavo da vezan grevus, grevus dirag daoula-  
gad ar Framasoned, hag ar re-man krenv, nan deuz o  
nez mes deuz hon zeimpladurez-ni, a gavo eno dustu  
digare da zeri an iliz ha da deurel er prison ha belek,  
ha penn-rener ar vreurieze. Goude, ma karout, e hallfont  
feurmi an iliz zretet ouz ar gatoliked pe d'eur protestant  
pe d'unan all kennag pe c'hoaz miret anezi d'ober eun  
nez kaouent!

Gwelad a ret breman, kenvroiz ker, penoz al lezen neve  
a zo frank en-kenver an Iliz? Bezan ha deuz, a dra zur,  
frankizon, mes ar frankizou-man a zo d'ar Gouarnamant  
e-unan d'hon gwaska ha d'hon zrubuilha. Me gred, ma  
anvefe an holl, koz ha yaouank, bihan ha braz, potred ha  
merc'hed, plegou ha displegou heuzus al lezen neve ; ma  
wellfont an dizarzoù hag ar poanioù a deuz d'he heuilh,  
na vijent ket breman ken seder ha n'emaint ha na vije  
ket klevet eur rummad tud o laret evel-hen : « Mad  
awalc'h e vo goret d'ar veleien... ar botred-ze eo re  
vrao d'eo ive... poent braz eo o c'hastiel... Kastiel e  
voint, mignoned ker, ha ni ive d'eo heuilh ; rag, kredet  
ervad, pa vo tom d'eur belek ni n'hon devo ket a  
riou! Ha hepdale, arsak marteze tri bloa, hon devo  
testenioù a-walc'h eus ar pezh a laran. Ar breuriezou a  
feurmo an ilizou digant ar Gouarnamant a gerzo mad  
gant heman eur pennad ; mes, abred pe diwead, e  
renkfont zevet o fennou da zifenn gwirioù an Iliz, pere a  
zeu abeuz Doue ha nan abeuz an dud! Pa zavfont o  
mouez e kouezo warne dustu grevusted al lezen ha hou-

man a vo didrue. Neuze e vo gwasoc'h d'imp evid d'ar ve-  
leien, rag ar belek, adalek an devez 'oe digemeret en Urzou  
zakr, a laraz kenavo d'ar bed evit 'n em rei da Zoue.

Petra rey d'ean mond dirag lez-varnioù ar vro na be-  
zan tolet er prison, hep pehini a zo da Zoue?

Glac'har en devo, zurawalc'h, o kwitad hag o lezel a  
barouziatien kreiz an dienez ar vrassan, rag goueout mad  
a ra : pa ve kollet ar messer, ar blei a 'n em lak onz an  
denved... Ha chilounet ar c'houzou-man laret diwar-  
benn an Dispac'h vraz, breman zo eun toulad mad a  
vloavezioù gant eur prezeger brudet : « Pa na skuit'h  
ken eun Doue e vad war an aoterioù, goud an dud a  
ruilh er plouennou!! »

An darnvuian ac'hanomp, kenvroiz ker, n'hon devo  
ket klasket an treo-man, pell ac'hans. Da vihana, ma ve  
red d'imp gouzav ané, e onifomp trei hon daoulagad  
war-zu Doue pehini a vo bepred hon zouten, hon spi hag  
hon frealzigedez...

Na fall-galonomp ket eta! war-lerc'h an amzer fall e  
ten an hini vad ; ha, pegwir biskoaz ar gaoù nan euz  
trec'het ar Wirione, ar gir diwean a vo d'imp!

AR YEODET.

## Me n'am euz ket amzer

War don : Theophilus.

Me - gao-ved, n'ouzon ket ha c'houi zo e - vel -  
don. Ne ga-van mui dre - holl ne - mad tud di - re -  
zou ; o c'hlevout a c'heller o lava - ret bep ger :  
« Me n'am euz ket am - zer, me n'am euz ket am - zer! »

Mignoned, n'ouzon ket ha c'houi zo evel don :  
Ne gavan mui dre-holl nemed tud direzon ;  
O c'hlevout a c'heller o lavaret bep ger :  
« Me n'am euz ket amzer! » (Diou wech).

Petra zo c'hoarvezet? An amzer marteze  
Zo kollet, pe lonket, pa glemmer kement-se?...  
Rag an holl a ziskan, war ar meaz hag e ker :  
« Me n'am euz ket amzer! » (Diou wech).

War ar meaz, ar mevel, pe ar vatez zoken,  
Chommet da ebata, ne respontont hepken !  
Nemed ar c'houzou-man : « Ato e vezan berr,  
Rak n'am euz ket amzer! » (Diou wech).

E ker, pa c'houenner digant ar micherour,  
Perak morse d'al lun ne stago d'eo labour :  
— « Ha perag? emezan, an dra-za a zo skler,  
D'al lun n'euz ket amzer! » — (Diou wech).

Kreannardou bugale, lec'h darempred ar skol,  
O deuz desket breman ober evel an holl.  
— « Ehanomp f'emezo, ha pa goustfe d'hon ler :  
Ni n'hon deuz ket amzer! » — (Diou wech).

Sellit betek pegeit c'ha an dud direzon !  
N'o deuz ket tamin amzer 'vit o relijion...  
Ha da Zoue zoken biero e lavarez :  
« Che! n'am euz ket amzer! » (Diou wech).

Breiziz, unan bennag, arabad d'eo c'h soueza,  
A zigouero war-lerc'h, 'vit ar varn diviza?...  
Mez eun digarez mad dizale a gaver :  
« N'am euz ket bet amzer! » (Diou wech).

Marteze, mignoned, ma zou ne blij ket d'eo c'h?...  
N'am euz ket bet amzer evit ober gwelloc'h!  
Groump evel ar re-all : ma 'z eo ma zou dister.  
— « N'am euz ket bet amzer! » — (Diou wech).

YOUNG.

## Kanaouen da lidan gouel Dom Per Derrien

WAR DON : *Nan euz ket en Breiz.*

Nan euz ket er bed eur zant 'vel sant Per,  
Vikel da Jezus, eus an Nenv porjer.

N'euz ket 'bara ar Vro, nan euz ket unan,  
N'euz ket eur person 'vel Dom Per Derrien.

Pa c'hoazaz Jezus d'abostol sant Per,  
Gant e vreur Andriev a oa pesketer.

'Rog bean belek hon mignon, Dom Per,  
Eu parouz Kerfot a oa labourer.

Gant eur fe nerzus, eur garante vraz,  
Sant Per e vestr mad laouen a-heuilthaz.

Person Plouilhio gant fe, karante,  
'Neus seder sentet euz mouez e Zoue.

Sant Per dre e skoud rente ar yec'hed  
D'an oll glanvourien, d'an dud vac'hugot.

Hon eil dean far, dre nerz e beden,  
A rent gras Doue d'an oll bec'herien.

N'euz ket en Argout na mui en Arvor,  
Kenkouz ha sant Per 'vit an dud a vor.

N'oa ket en Briat, enezen war vor,  
Koulez ha Per Derrien 'vit an dud a vor.

Ha d'ar bevien gez ha d'an dud a boan,  
Gwelloc'h 'vit sant Per nan euz ket unan.

Eu dro Boulvaik 'vit an oll basien,  
N'oa ket eur c'hure 'vel Dom Per Derrien.

N'euz ket 'barz en Nenv dre-oll a lerer,  
Ken mad d'ar pechie, 'vel 'n otro sant Per.

En Senven-Lehart n'oa ket eur person  
D'an oll bec'herien koulez hag eur mignon.

'Neus ket gwelloc'h skouer 'vit ar veteien,  
En bro Gouanao'h 'vit Dom Per Derrien.

'N abostol sant Per, p'uns an Ebestel,  
'Oa laket da Bab d'an Iliz santel.

Hon mignon Dom Per, ar gwir Bastor mad,  
'Zo d'ar c'hanton-man, eil dean ha tad.

An oll ebestel evel gwir denved,  
Hag ar geistenien gant Per oa karet.

Holl dud e baronz hag e veltien  
Zo karet meurbet gant Dom Per Derrien.

Santez Petronilh 'zervijs sant Per,  
Hen heuilhe dre-oll 'vel e varc'h tener.

Dom Per 'zo heuilhet gant e c'hoaz Agnes,  
Gant Katerin goz, ar gwellant maez.

Bet e bet skrivet hno gaer sant Per  
Gant e vignon Mark, e Avielier.

Bes hon mignon chomo don skrivet  
En katon e dud, hag e gureet.

Hon eil dean mad, n'e ket abone d'ec'h  
D'an diaoulo koz oc'h euz roet bec'h.

'Pad daou ugent vla Jezus euz ho mouez,  
War an oter zake disken en hon zouez.

Skuilh 'red ar gaso war 'r c'halono zec'h,  
Ha zikour ar paour da dengen e vec'h.

Frealz 'n intanvez, harp an emzivad,  
Da dud ho parroz c'houi zo eur gwir dad.

Er gonent c'houi zay kalz a vngale,  
Evit diski d'e karet o Doue.

Kement a berlez, a vlenno dispaz  
A rey d'ec'h en nenv, eur vantel a c'hoaz.

Na lezet zant Per tam da diskwizan,  
War ho vertigo gant 'neus da verkan.

Mar chelaou Doue breman hon peden,  
N'eo ket arri c'hoaz hoc'h hiran termen.

Epad meur a vla chomet d'hon c'helen,  
Talvoudus eo d'imb ho kat d'hon difen.

Hon c'halon 'vidoc'h 'verv gant karante,  
'Vel an heol a dom pe zav d'e greiste.

Ghomet pell ganimb d'argaz Kornik koz,  
Da ren ho preudeur oll d'ar haradoz.

Sant Per, e haeron, porjer an neuvo,  
Digeret ho tor da Dad Plouilhio.

Ha gras d'imb-ni oll, da vont bodennet  
En dro da Dom Per, en temp' an Drindet.

En Nenv 'venfomp c'hoaz 'n otro Per Derrien,  
'Vel hon mignon mad, vel hon eil dean.

PERSON TARDREZ.

## DISTRO AR BARZ KOZ

(KENDALC'H HA DIVEZ)

Ma lojennik neve a zo 'n eur geraden  
Savet war an uhel, war c'horre eun dosen,  
'Tre ker ar C'hozwar'had ha bouk koz Plouneve,  
Ene c'h in da ziskwiz gant madalez Doue.

Pa baro, lugernuz, an heol deuz ar beure  
War draonien al Leger ha tosen Mene-Bre  
E welin gant dudi, deuz parko Kerrouel,  
An ti 'lec'h ma c'henaz ar Barz Fanch an Uhel.

Ene en er ma Bro, er kreñv hon Breiz-Izel,  
Me 'c'houlenno sikour spered lemm an Uhel,  
Da labourat, d'am vro, hag en da hag en noz,  
Evit gloar an Arvor, daoust d'in da vean koz.

Ha pan in da vraz east, en-keuz an domder vraz,  
Da Lok-Mihael-an-Trez, da neuzaer er mor glaz,  
Gant pelhez plijadur e welin ar wagenn,  
Dornet gant an avel, oc'h ober kezek gwenn.

En deiz pemdiek ec'h in da beskeja,  
En daou du d'al Leger, eur stêr deuz ar c'haera,  
Beteg kerik Bena'h hag he Mith' baper,  
El lec'h ma oa savet *Aberc'h*, hon Reuer.

Kouz an euz da Gerne, da draonien ar Blavaz,  
Da Vene-Kergoublaou ha da Sant-Nikolaz,  
Da goajou Kanuhal, d'am C'heranna garet,  
Da Plounevez-Kintin, al lec'h ma oan gant.

Rag pa oan me bugal ma zud o doa ive,  
Trevajou kaer meurbet en parouz Plouneve,  
An ti tost en plouz, 'stok da ster ar Blavaz,  
Al lec'h ma oan ganet n'eo ken d'in allaz!

Pa deno d'in envor lemm a dristidigez  
Deuz Plounevez-Kintin, lec'h ma ganidigez,  
Evel Fanch an Uhel, ar breizad kalonek,  
Ec'h in gant ma zelen da Plounevez-Moedek.

Pa nan hellan ken chom en Plounevez-Kintin,  
En bro gaer an Uhel ma c'han a vo lizin,  
Bered ar C'houer'had, kichen an hent-houarn,  
Goude 'vo ma gwele, da c'hortoz de ar Varn.

PENHOARN.

## SKEUDEN AN UHEL

Eur mignon d'ar Barz brudet, a gas d'imp ar ganaouen  
man a vouldomp gant plijadur, oc'h en em unani gant ar  
gwir mignoned d'ar Barz, a rento enor d'ezan evel Barz  
ha Breizad; ha hep meska politik ebet d'eur gouel a  
deo bean gvestlet d'ar Vro ha d'ar Yez hepken.

Hirie en eur sevel em euz eur c'helo mad,  
Pini a lak seder ma c'halon a Vreizad,  
Me wel gant plijadur ebarz ar gelaouen,  
Vo savet er bloa-man d'an Uhel eur skouden.

Bretoned, ma c'henvroiz, d'an traon ar politik,  
Deuz pevar c'horn an Arvor, kouz paour ha plavidik,  
Deud holl, deud holl, o Breiziz : deud da rei ho tiner,  
Evit ma vo, d'hon Barz koz savet eur skouden gaer.

Daoust d'am stad meurbet dister, daoust d'am holl  
[baourante,

Me a rey gant plijadur ha gant gwir garante,  
Ma gwennek evit sikour da zevel e skouden  
D'an hini na oa biskoaz, na re ro, na re wonn.

Mar 'mije me bet spered ar Barz koz Ancurin,  
Talenhou kaer Prosper Proux ha pluen ar Vilin,  
Oh ! gant pebez levonez em ije bet skrivet  
Bulhe gaer Fanch an Uhel a oa Breizad bepred.

En parouz ar C'houer'had, kanton kaer Plouaret,  
E oa ganet an Uhel, Melezour ar Varzed,  
'Barz ar blavez mil-siz kant un warnugont ouepen,  
Ra vo moulet e lano, en Breiz da vivikent!

Savet gant eur vamm gristen hag eun tad kalonek,  
Luskallet en e gavel dre sonio brezonek,  
Me hen gwel, c'hoaz bugelik, dindan ar gwe aere,  
En lali gaer Keramborgu o liski Yez hon Bro.

Me hen gwel da daouzek vloa ken hoant evel eun  
O tostaat gant eur fe vraz diouz an daol zantel,  
En Iliz koz Plouaret d'ober e bask kenta,  
E galon bugel breizad en e greiz o trida.

Me hen gwel, potrik yaouank, er skol en Roazon,  
Dindan renadurez vad ar C'houerou, o Danton,  
O tiski yezo neve : Gallek, Latin ha Grek,  
Mez Biskoaz no dilezaz e Yez koz Brezonek.

Me hen gwel er C'houer'had en ti Jobik ar C'hoz,  
Gant e vignon Jan-Baptist o veuli hon Arvor,  
Gant hon Matia Phulup ha Guilhaou Garandel,  
O tigor hent an A-rok da Varzed Breiz-Izel.

Bretoned, ma C'henvroiz, ma c'harg azo pouez,  
N'em enz minuten da goll ; ma diskamant dister,  
N'outreot ket d'in, birie, diplega penn-da-bonn,  
Bulhe gaer ar Barz *Luzel* azo marved kristen.

Mez dindan bevar blavez, pa vezo dibunet  
Penn-da-behn ma c'hademik ha bet d'in ma velt,  
Me a dey da ziskwiza da vro gaer an Uhel,  
Da barouz ar C'houer'had, da gerik Kerrouel.

Ha pa baro lugernuz an heol deuz ar beure,  
War zaouen gaer al Leger ha tosen Mene-Bre,  
Me a welo gant dudi dirag ma doulagad  
An ti, al lec'h ma c'henaz ar Barz bepred Breizad.

Ene en er deus hon Bro, er kreñv hon Breiz-Izel,  
Me skrivio, en brezonek, Histor gaer an Uhel,  
Deuz maner koz Keramborgu beleg ker-Veur-Kera,  
Me a heuilho e neuden penn-da-bonn d'e vule.

Da c'hortoz, kenveiz ker, deut holl gant karante,  
Deut da rei ho kwennekig da dud ar *Chomite*,  
Evit ma vezo savet, war leur gaer e ganton,  
Eur skouden gaer d'an hini a garaz ar Breton.

Ha c'houi, Barzed yaouank Breiz, c'houi holl  
Deut holl, deut gant levonez beteg bouk Plouaret,  
Da wela dizoloi skouden gaer an Uhel,  
A roez e holl c'halloud d'adsevel Breiz-Izel.

Amen, ma mignoned ker, ho po digemer mad,  
Plouaret en eur c'hoste, 'n eun all ar C'houer'had,  
Eun ti-gar deuz ar c'haera 'zo etre an daou lec'h,  
Deut eta, Breiziz Yaouank, ha bezit holl dinec'h.

En eur gwitaat, mignoned, ho proio ginidik,  
Lezit, en lano Dane, er ger ar politik,  
Demp holl, evel kenvroiz da veuli, an Uhel,  
A dibunaz e guden evit hon Breiz-Izel.

PENHOARN.

Goulnnet e ti an Aotro Bernard, leterier e Kergoat,  
**Levr oferen latin ha brezonek**  
gant an Aotrou abad Gall ; ar gwella hini d'ar Vro  
da heuilh an ofisou.

GOULENN e bureo ar Gwaaz : Gwerziou sant Erwan  
Labourer, sant Milla, sant Konevi, hag all. Eur gw  
ar pe.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIU HA MEIN-BESK  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO



# Kroaz ar Vretoned

## ROUMANANCHOÙ

Eur skoet ar bla evit Breiz ha Bro-Chall.  
2 skoed, evit ar broioù enten evit ar broioù helliek.

## SERVANIBRIEN

Kuz at labourioù pe d'an Oiro VALLEE, Renner, vu Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Oiro MOAL, Shrivantier, 27, balz Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweznec pep sroulennad-skritur.  
(Disheñn a breiz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar eo Breiz.  
Furnez ar Gelo.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furnez ar Gelo.

Dalc'hil bapred d'ho presonek,  
Yes an dud vad ha kalonek,  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspen ar Vez, o vo Poc'het!  
M.L.M.

## PARDON GWENGAMP

« Mont da bardon Gwengamp » setu c'hoant an holl, koz ha yaouank, braz ha bihan. Ar re yaouank, o klevet ar re goz, o deuz mall da danya ar blijadur o deuz bet ar re-man, hag ar re goz o deve bepred c'hoant d'ha badtauya adarre.

Setu persag e ve kavet tiegezoù a-bez deut da bardonan da Wengamp, an tad koz gant e vad bihan, ar vammgoz gant he merc'h-vihan, ouz en em ren dorn ouz dorn 'tresek oter ha skenden an Itron-Varia-Wir-Zikour.

Rag pardon Gwengamp a ve gret bepred abalamour d'an Itron-Varia-Wir-Zikour.

N'e ket abalamour d'ar c'hristosileou, na d'ar gazek vezoven, na d'ar foar, na d'an ebalou, na 'balamour d'ar bobl e ve eno, a ve gret pardon Gwengamp. Kement a dou da Wengamp 'kerz ar pardon a deu dre e zo en porched Gwengamp eur skenden-vinniget hag a ra burzudou, a ro skoazel ha zikour d'an holl Vretoned.

Ma vije tennet ar Werc'hez deuz ar porched, pesort pardon a vije ken? Ma torret ar prozision, petra a bele-rined a vije ken?

Ar Werc'hez hepken eo a ro lusk ha brud d'ar pardon, ha mar zo hinienno hag ankoua kement-man, gwaz evite!

Ma 'peuz c'hoant eta da welet eun dra bennag a gaer, deut da Wengamp da zadorn pe da zul ar pardon. Marteze oc'h bet ar bla-man ! Ha petra ho peuz gwelet!

Eun iliz, unan deuz ar pouneran hag ar c'halloud-sañ a halled kaout, zonn ha kaled evel eur mene, ma eo an holl dier en he c'hichen evel lochennoù, eun iliz evelse gret ha kempennet deuz kern uhelan an tour betek an douar, gant bannielou, gant kudennadoù goleier dibunet endro d'ei var o hed, ha, dreist-holl, gant rummadoù kristenien o kanan hag o pedi de ha noz, an eil warlerc'h egile douget gant eur fe hag eur garante dreist muzul.

Petra 'peuz gwelet c'hoaz ! Eskibien a fell-brô deut da vinnigan ar belezined ha da gaerid d'e o bardon. Daou int bet ar bla-man. Misionerien o-daou hag o daou Bretoned.

Petra 'peuz gwelet c'hoaz ? Eur prozision, 'vel nan euz ket d'ar, ar Werc'hez o treuzi e kreiz an noz kear Wengamp skler evel an de gant ar goleier o lintern dre holl dre lec'h ma tremen ; an iliz kaer en noz evel porz ar bardoù.

Nag a dra ho peuz gwelet hag an euz skoet war ho kolon, ha dre-ze, 'henn'ar bla, c'houi laro c'hoaz d'ho tud : Deomp adarre da bardon Gwengamp !

DIR-NA-DOR.

## PENNAD DIWEAN AL LEZEN NEVE

I

Al lezen neve, daoust d'oezi da vean bet gwellaet da heul ar sinadurioù, a chom bepred eul lezen a drubarderez.

Hirie, kenvroiz ker, oc'h an 'velket d'achui gand al lezen-neve, Gallout a ret ma c'hredi, heuet he deuz ac'hanon ha, ma Doue, ma vije bet muioù da laret diwar he fenn, marteze e vijen skwizet a-raok bezan peur-dibunet ma c'huden... Klevet ho peuz aliez, dreist-holl en amzer drubuilhuz-man, eur rummad tud klouar o laret : « Nan euz ken netra d'ober... Re bell eo arri an treo... Gwellan a zo d'ober eo lezal ane da strakal... » Ac'hanta, eur wech c'hoaz lavarioù an dud spontik a zo kouszet er dour ! Daoust pegit e ve arri an treo na fell kamet fullgaloni ; aliez zoken pa ve an den o c'hoantaf kwitad tachen ar brezel e ve an trec'h o tond eus o da.

O welet ze o kerz a neve war arak muioù kounaret evit biskoaz ha, goude eun nebeud bec'h, setu al lora goneet gantan. Petra larfec'h eus eun den hag a gwitache ar brezel en eur c'houz ken talvouduz ? Laret a rafec'h e vefe eun den divalo, diskiant ha didalve ! Ni, mignoud ker, a zo henvel heo ouz an den-ze. A greiz-holl, pa ze-blante kollet ganimp peb tra, pa na ouimp ken da betore zant en em wesla, e welomp ar Gouarnamant spontet gand hon zammit tol-skoa, deut aon rag ar millionou a zinadurioù kaset ganimp d'hou Deputeed (mad ha fall), o krenna 'barz al lezen neve daou artiki, hag o rei d'imp dre eno eun nebeudik frankiz. Oh ! na laran ket penoz al lezen a zo, war zigare 'da ze, deut da vezan mad ; pell diouin ar sonj-ze ! Al lezen neve he deuz bepred an he-velep spred evel diagent hag, evel diagent ive, e kouezo warnomp gand kemend all a griser. Ar pez a c'hoantaen laret ez eo kement-man : Ma karimp-ni, Bretoned ha kristenien, tud a galon hag a lealded, sevel hon fenn aliesoc'h eget na reomp peuvnia ha diskwel hon deut eur wechik an amzer, na vije ket groet aneb d'imp ken aliez a lezen fall hag a ve. Nan eus dihenvelidigez ebet etre netra hag ar bean hon deuz lakat da zina piperou eneb da lezen an disparti ha, koulskoude, hon deuz groet aon d'ar Gouarnamant ! Petra a vije c'hoarvezet, 'ta, ma hon dije goet muioù a drouz ha lakat oberou stard da harpa hon c'homzou ? Neuze hon dije klevet ar Framasoned, henvel ouz yer dour, o laret diousta : « Hola ! potred, ni zo hanvet gand ar Bobl ha pegwir ar Bobl eo hon meslr, e fell d'imp plega d'ean !... » War-lerc'h komzou evel-se al lezen neve a vije trec'het 'vel eun huivre hag en hon Bro e renje c'hoaz hirie eur frankiz digabestr. Siouaz d'imp ! goude eun tammit bihan a boan na gendalc'homp ket gand hon labour ! Petra eo an daou artiki krennet gand ar Gouarnamant ? An hini kentan eo an artiki 4 a gomz eus ar Breuriezou a die ren an Iliz hag ober gand he madou evel m'he devo c'hoant al lezen. Da gentan — evel ma laren disul — an holl, mad ha fall, kristen ha pagan, a c'halle bezan ezel eus ar Breuriezou. Ar Vreuziez krouet gand tud dizoue a droche hag a zistroche ar relijion gristen herve he c'hreden. Dirag treo ken heuzuz displeget reiz gand an Deputeed vad ha dreist-holl dirag zinadurioù ar Bobl, ar Gouarnamant an euz miret ouz ar Breuriezou d'an em groui en-diavez eur belek.

D'an eil, herve an artiki 11, an ilizou laeret gand ar Gouarnamant ha roet goude d'ar Breuriezou a vije feurmet d'ar veleien ha d'ar gristenien. Breman na vefont ket feurmet ; lezet e voint gand ar gristenien evit netra. Ze na lar ket penoz an ilizou a vo d'ar gristenien. An ilizou a chomo peadra ar Gouarnamant an devo o laeret. Ma vent lezet ganimp evit netra, kement-se tapet eo da c'hortoz marteze kavout muioù ! Mes aman c'hoaz, evel en peb tra, ar Gouarnamant a zo treitour ; na c'houll ket feurmi an ilizou d'ar Gristenien, mementuz tra e viro evitan an aotre da zeri ane pa garo, da laret eo pa na blijo ket d'ean pe ar belek, pe ar vreuriez ; ha, ma komz eus an ilizou en artiki 11, na gomz tam eus ar presbitourien, an eskoptioù, ar c'hoerdiou. Ar re-man a vo bapred da feurmi pe da hadsevel diwar yalc'h ar gatoliked. An treo ne dint c'hoaz eta re reiz, ha war ar poent-man al lezen a vir d'imp meur a bleg fall !

II

Ar gwasan trubarderez a zo er lezen neve. Lakomp hon fizians e Doue.

N'hallan ket achui hep kaoteal eus diwean trubarderez al lezen. An dra-man a lako ar gwad da lampat en kement kalon breizad ha kristen a zo. Adalek ma reno ar lezen neve, ar gristenien n'hallont ken ober o fardoniou en-dro d'o chapelloù, rag ar Framasoned ne dint ket evit gouzanv treo evelse. Kement-man a zo spontuz ! Penoz ma c'henvroiz ker, c'houi Bretoned zavet en bro ar Fe hag ar gizioù fur, penoz rafec'h ma welfec'h zari chapel ho mam goz santez Anna, difen he skoasion hag he fardon kaer a garet kement en ho kalonou a gristenien ?

Petra rafec'h ma ve difennet pardon ho mam garet Itron-Varia-Wir-Zikour ? Ha kenlezez ha kenlezez a bardon hag a belezinaj kaer pe gaeroc'h an eil evid egile, o deuz kemeret en hon Bro gwriou ken don ma c'haller laret hep fazi, penoz hep he fardoniou, hep he chapelion hag he lach'ion zantel Breiz-izel man eo ken nemed eur vro bennag kollet en-touez broioù-all ar bed...

Gwasoc'h a zo c'hoaz ! Ar Groaz, ar Groaz zantel, diwean frealidigez ar c'hlanvour war e wele a varo, ar Groaz vinniget, gwellan gedour a onfemp kavout da zifen hon Bro Breiz. Ken stank ma 'zo zavet dre hon c'hroaz-henchou, n'halle ken ive astenn warnomp he diouvroc'h madeleuz na laret d'imp dre zellou karanteuz hon Zalver : « Ma bugale, me ho kart » Ar groaz a fell c'hoaz d'ar Framasoned diskar pe, da vihana, ma na c'houllont ket he diskar dusta, e fell d'e harz ac'hanomp da zevel reou neve. Den, nemed neb a brezo 'barz ar vered e vo da viken, n'halle lakaat eur groaz war e dud vro. Perag an dra-man ? En toue, an neb a bren eun tam douar a c'hall ober gantan evel m'an deuz c'hoant. Al lezen aman a zo kri d'ar bewien. Ar pinvik a lako war ve e dud kemend-a-blijo d'ean, mes ar paour netra ! netra ! nan zoken eur groazik koat !... Kalvarioù kaer hon berejou a digoueo d'e trec'het, hag an Anaon reuzeudik, elec'h diskwiza ouz harz ar Groaz karet war behini e teuz a wechou da hirvoudi ha da c'houlen peleunou e geriet, aliez didrue, a renko diwar-vreman redek ha tarrijal a-dreuz d'ar vro hep kavout neblec'h na zikour, na frealz, na distan d'e loanion kaled !... Ma Doue ! pebez amzer glac'harus eta a vir al lezen neve d'hou bro gristen !

Hag en keit ma vezo dastumet klek ar prozisionou en hon ilizou zerret ; en keit ma renko ar gristenien pedi en kuz ; en keit ma vo diskaret ha labeet hon c'hvalerioù ha skeudennou hon zent binniget, ar bed louz a c'hall he pech displega dre hon henchou, gwechall ken zioul, gouelion hudur zant malarje, ha lakaat dirag daoulagad dinam hon bugale kemend hudurnez, kement loustoni a vo. An dud fall ha dizoue, Framasoned, anarchisted, mevelien hudur an dizurz hag ar poc'had, a c'hall he aon prezeg ar fall dre gomz ha dre skouer hep na desio den d'o dislaret ! Frankiz, emé, d'ar fall ha hual d'ar Vad !

Dirag kemend a drubuilh hag a boan-spered nerz dister an den nan eo netra ma na ve skoazellet gand galloud an aotre Doue. En Doue eta eo e fell d'imp lakat hon holl fizians, rag Hen eo an Heut, ar Wirione hag ar Voe ! Gantan na vefont biken trec'het ha, pa dop an den paour e zellou entezek e Groer hag e Zalver goude bezan gwelet kasani ar bediz ; pa wal izelder ha didalvoudegez an dud fall dirag madeleir ha galloud an aotre Doue, e teu d'an em ganerza hag, elec'h kavout kiz ouz an dud-man e kemer true oute... Paourkez preved douar oc'h easa skignoul o dent dirag-an Hini a zalc'h nenden divalo o bue brein !...

Ma kemer an den true ouz tud evel-se, an drue a c'hall trei, na ma karet an eur gasoni direiz, mes en unan zantel behini a deu euz ar fallente groet gand an dud dife en eur vro gristen dre o c'homzou, o skridon hag o oberou. Ze a zo kiriek hirie da skoi war an dud fall evel ma reer, rag ma zud kez, an amzer heuzuz-man a daono kalz, kalz a ineou. Ar re na voint ket kaled awalc'h en o c'hreden a gouezo. Ar re all — henvel ouz gwe luskellet mad gand an avel — a loskao hag a had-neweo o gwriou evit mont goude donoc'h ha startoc'h ebarz douar ar fe gristen. Eun amzer vad-dreist a ra evit ar gatoliked ; holl ez omp breman lodennet etre daou vestr : Doue ha Zatan ! O Bretoned, bezomp dalc'henad kristenien, bugale d'an aotre Doue ! Ar Wirione a zo ganimp ha trec'hi a reformt... — An Iliz, emé ar Framasoned, he deuz goet bec'h amzer ! « N'he deuz ket ! Triwalc'h kant vloa zo e ver o laret kement-se ha triwalc'h kant vloa zo eman an iliz o ren ar bed, krouv, skeduz ha dishual ! Bet e zo goet d'ei kalz a vrezelloù ; lazet a zo bet kalz eus he bugale. Ar brezel ha maro he bugale n'o deuz goet nemed he c'hrenvat, rag gwad he bugale, gwad ar verzerien a zo bet, a zo, hag a vo da viken eun had

## EUL LIZER MAD

P'tred Trager e vont da zihuel! Enor ha kalen vad d'ez  
da labourat!

OTRO RUMEN.

Skouer-vad p'tred Pleuzal n'eo ket chomet hep freuz.  
En Boulériak e zav ive eur strollad p'tred-yaouank. An  
ngentred a viz meurs o deuz displeget dirag daou c'hant  
a dud *Panser Vuruzud ar Mevel Fanch*, ha meur a  
zon all c'hoaz. Trugare d'ar c'hoarierien neve ha kalon  
d'ez da labourat ha da wellat c'hoaz daoust m'o devoa  
gwel-c'hoariet. — Goude Pleuzal, Ar C'houar'hed,  
Peurlit ha Boulériak da hion vo an dro gentan? War zav,  
beleien ha p'tred yaouank Breiz!!!

Eun Potr Yaouank.

## MOUEZ EUN DELEN

pe SKRUENNADUR EUR GWIR-VARZ

D'am migeon yaouank Roc'hmann.

Eun noz war ma c'harrek e oan o tiskwizan,  
Dinec'h hag evurus 'vel ma ven porvulan...  
Soajal a ren en Breiz hag en amzeriou gaer,  
Ma sa enni an holl digabestr, dibroder;  
Ma rene en peh lec'h ar peuch, al levenez,  
Ar gizioù mad ha fur hag ar gwir zantelez;  
Ha soaj an amzer-ze, tec'het 'vel eun hunvre,  
A re d'in hirvondi war stad ma Bro hirie...  
Gwechall goz, emeon, e zav ar Varzed  
Evid difenn dalc'hmad Hermin ar Vretoned.  
Pa felle d'ar Gall brein pe d'ar Zaouen treitour  
Gwaska douar Arvor... kerenti 'vel eur gedour,  
'Vije gwelet peb Barz o krigi'n e delen  
Hag o turel dre-holl garm skilt ar Stourmaden.  
D'e vonez brein ha nerz ar Breizad a zav,  
Hag ar Gall, hag ar Zaou deuz ar vro a dechie.  
Perag ive hirie na glavar ken 'n hon Bro,  
Pa 'z omp ken gwall-gaset, korn-bond ar brezello?  
Pegen, o ma Doue, e vo c'hoaz Breiz-Izel  
Gwasket ha malarat gand an estren dibod?  
Daoust hag en hon amzer n'eur ken ar memez gwad  
O vevri bihvidik en kalon ar Breizad?  
Daoust hag ahou fur hon Barzed koz, karet,  
'Vefe gantrip hirie dilezet, aukonaet?  
Ha ma 'man c'hoaz enomp tin zakr o c'harante,  
Perag na zav dre-holl Barzed t'er evel?  
Ma hadkemero Breiz, gand'he frankiz gwechall,  
Hu nerz hag tie brader en-touez ar poblon all...

Setu ar sonjou-kri deue war ma spered,  
Pa 'm eiz klevet zouden eur vonez kaer, kaer menched,  
O liston dudiuz war lein ar menoun.  
Hag o tihun dre-holl hekleo braz ar c'hoajou...  
Die ma tride ganti ha laouek ha traouin,  
Em eus le anveet evit monez eun delen.  
Gwech e zons dispar, tener, karanteuz,  
Gwech he c'hileven ive evel eur galy skiltroz!  
Ha ganti tro-ha-tro ma c'halon, 'barz ma c'hreiz,  
A zav d'an Nenrou pe a zailhe 'vit Breiz!  
— 'Mel da bion c'hall bezan an delen drant ha t'er,  
A zeh ken freskuz war doner Kalanher?  
Pion gand e vizid a denn eus he c'herden,  
Ar haden galonek a glevan o tremen?...  
Pion?... Mes te, o Roc'hmann! Te ez eo ar Barz-ze,  
Ha mouez kasda delen eo a glevan du-ze...  
Entanet on ganti rag he c'hah 'zo kristen,  
Evel m'eo ar bugel a chlach war he c'herden...  
Oh! bez kristen eta, rag eur Barz nan eo krenv  
Nomed dre an ere 'zalc'h anezan d'an Neuv!  
War ar vein-hir pell zo ez eo zavet ar Groaz,  
Ha dre ar Fe hepken ar Barz a vezo braz!!!  
Gwenkian, ar barz-pagan, a zo eur skouer vad-tre,  
Mes pell welloc'h ez eo sant Weltaz, sant Herve!  
Heuilh bepred o roudon, mir ive an envor  
Dimeuz ar garante o doa holl 'vid Arvor!...

An hano-barz, mignon, a teuz bet dibabet,  
A zo talvouduz dreist: eveltan nan euz ket! —  
Roc'hmann! Roc'hmann! 'vel eur roc'h te a chomo dalc'hmad  
Stad, stard en ez kreden, en kreden ar Breizad!  
O Barz! evid da Vreiz te a vezo garet,  
Sono ha nerz 'n ez zav evid ar Brezonek!  
Ha gand son na tefe trubarded d'az kwalla,  
'Teuz lakel d'az tiwall eur gouzic ar gwellan:  
Lann: En dro d'id al lann gand piskou benn ha lir  
A rey eur gward enor, evel Klaziou dir!  
Ereb d'eur seurt difenn netra na dalveo,  
Hag en despet d'an holl da delen a gant!  
Klevet e vo he mouez a dra zur, o mignon,  
Tra ma kani warni gand fe vraz da galon  
Karante ar Werchez, da ram doue ha tener,  
Hag hini da Zoue, da Grouer, da Zalver!  
Kleret e vo he mouez gand ar wir Vretoned,

A hirvoud c'hoaz hirie dindan ar C'hallaoued.  
Laret a refont holl, gonaet evid mad:  
'Nan eo bet ar Breizad biskoaz trubard d'e vad.  
Da vouez an telennon, war zao! evid hon Bro.  
Keit m'he devo Barzed, Breiz-Izel na varvo!  
An YEODET.

## D'AR PARDAEZ

Setu an noz o tiskan var-gorn ar monezioù;  
Eur zioulded dudiuz mearbed a bouez var ar maezioù.  
An evned o deuz tavet e glazez an draonien,  
A veach 'klever er pellder skrijadek ar gaouen!

Houma eo va heur dispar da vonet d'an Iiz,  
Da iliz goz ar barzge da hodi gand gwir feiz.  
E-harz noter ar Werchez, hor mamm muia karet,  
Ha d'ober eur bedennik var bez va zud marvet!

O! chommomp er hor c'harter, e kichen hon tud koz,  
A zo du-ze, er vered, tostik d'omp o repoz!  
Ha karomp hor parkaier, an douar hor magaz!

Kement a draou kalonuz a larout d'hor spered  
Eus ar re o labouraz en amzer dremenet!  
E-skooz, nag heu ep sklasuz buez ar c'heariou braz!

KLAOD,  
Barz Plougastell.

## TONTON THOMAS

Klenniget d'am faeroh Louis Etienne.

Ar re 'zo c'hoaz breman en-dro da Zant-Tudi,  
'Peuz anaveet, ma hen goar,  
Tonton Thomas P... hermit koz an ti pri,  
Eur c'hoziad 'nevoa ket e bar.

Dalc'h-mad 'vije gwelet o vale ar mezio,  
E benn-baz dero en e zorn,  
Dindan ar gwe kistin 'lezeane ar parko,  
E lake tin zvar e gorn.

'N e gorn pri gwechall ru, berr hore e duellen,  
E kouche ludu ha butan,  
Rag ker al louzonek, ken berr all an dailhen,  
Da skoulma daou benn ar zizun.

Mez en despet da ze e fri gwall-vogeded,  
A diskouele d'an oll froz-mad  
'Vije kad mad e gorn, e goz korn loueded,  
'Zervijas gwechall-goz d'e dad....

Hogen, e vrasan c'hoant atrog mont d'ar bed all,  
Tro ha tro an oll hen gouie,  
E oa gwelet eun dra... nan eur c'hemener dall,  
Rag na vant ket gwelet bamde.

Nan, youl Tonton Thomas a oa gwelet eur wech,  
War grapen noaz lan Blourio,  
Hent-houarn o rithal, 'n eur strainen war e Ierc'h,  
Eur chadenad karrosio.

An oll lare d'ean oa galluz an dra-ze.  
Mez Tonton Thomas d'o c'homzo  
Na grede ket. Goustadik neuze e lavare:  
'« Choui a lavar d'in-me koju,

« Nan, an aerouant gand Marzin diouganet,  
Na 'man ket c'hoaz war an douar,  
Hag hon Bro Breiz-Izel na hall ket c'hoaz gwelet  
Ar walen gouinet gand glac'hart! »

Tremenet e Thomas, diskennet e er he,  
Evurus vraz, ec'h o marved,  
Leun a fe, leun a beuch, en karante Doue....  
Biskoaz e youl n'e bet hetad.

N'euz ket gwelet 'redek an aerouant euzuz,  
Dre vruk blenniet lannier Breiz,  
O tont da gerc'het gand youc'hadanno skrijus  
Breizaded da gas da Bariz!

Hogen, mar n'oc'h bet trist, biken 'vefet laouen,  
Hag ar re wel breman zlopaz  
Fazi er vugale a zo bet traourian,  
A wei ive Bretoned c'hoaz...!!

Tud kalonek, pere 'n eur zeyel o lenne,  
Lar d'ar C'hallaoued gwaskorien:  
Gwasket breman, gwasket, pep-hini 'no e dro,  
Ha Breiz 'vevo da veviken!!

KALON-DIG,  
en Algeria Landreyer.

## Toniou Breiz-Izel

Frest eo darn ens ar rollou-kouar Brezonek evit  
vouez-skriverez pe fonograf. Kavet e vo da brene en  
bureo rollou-kouar, warno *Bro goz ma zadou*, ar c'hoaz  
cilet gant ar piano. Ar Priz and eo pevar real pep rollou  
kouar, gant ar c'homzou hag an ton moulet war eur  
peren, a vo roet war ar marc'had. 5 kvonnek onep  
evit ar frejou-kas, ma tleer kas ar rollou dre ar post.

## BUE VAN BADEZOUR VIANNEY

(KENDALC'H).

Ar person mad a garaz bepred Doue kement hag  
re zantelan, hag ar garante virvidik-ze a re d'e d'ean  
ruilhan dalc'hmad, koule eol lavaret: e re ive d'e spered  
bean bepred gand an O. Doue dre ar beden, en hevel  
stum m'an nevoa sklerijen vraz war ar brasan mister  
Ar zoursi d'ober ha da c'houzav pep tra evid e Grouer  
re d'ean kristel bepred er zantelez. Pegen tom e oa e galon  
dirag an Armet zantel! — Souezus e oa hen gwelet o pidi  
epo. O komz ouz ar Zakramant, e galon a veze intanel,  
e gomz oa re an Env gand ma oant karanteuz ha spered  
redek: toman 're d'ar c'halono-all ouz hen klevet. Ar re  
o deuz han gwelet ouz an oter a gred stard penoz  
vouse'hoatze ouz Doue, pelhini a wele gand e zaoulagad,  
ha penoz eo dioutan e-unan e komze pa lavare d'an dud:  
'« Bean zo beleien hag a wel bemde Jezuz war an oler...  
Ha n'an euz ket touet e-nnan e lammez aliez ar Bara-Zakr  
eus e zaouarn evid mouet war muzello kristenion o kom-  
munian? Dreist-oll e kare, eta, mignoned brasan an  
O. Doue: Santez Filomena, sant Yan-Badezour, sant  
Jozeh, inco ar Purgator, ha mui, kalz mui c'hoaz, ar  
Werchez dinam. Setu perag ive na skwize kamet o klask  
zavetei ar becherien. Ken braz e oa o garante evit  
m'an nevoa gweslet e vraz d'e. Dirag vertuio ken splan,  
pegen disliv eo an doare-braz menlet gand an dud o  
deuz anaveet mad ar person zantel! Komz a reont eus e  
habasked ken c'houek, eus o eunder kaer-meurbed, eus  
e gunvelez ken braz ha bepred digam, eus e gomz ken  
flour, ken spereded ha ken zeder ha na skwized ket o  
klevet anei; hogen petra oa ze e-kichen kaerda ha zan-  
telez e ine? 'Barz mab plouiziad Dardilly, 'barz mesaer  
Lihan Chante-Merle, 'barz person dister Ars, Dome an  
nevoa c'hoant da diskouel d'an dud, evel 'n en' mellezour,  
skouer an oll veleien ha galloud dreist par eur gwir veleik.

An O. Vianney na oe ket helken person evid tud e  
barouz, hogen gallout a rer lavaret e oe hini an oll 'n e  
amzer. An inco a oe digoret d'ean; ar holl, gonaet gand  
brud e vertuio hag ar burzudo a re, a diredaz ken niverus,  
epad tregont via, ken e tleer laret eo dorn Doue o di-  
gase. — Adaleg ar bla 1826 ar birc'hirined a greskaz kement  
eus an eil bla d'egile ken, abone 1835, na oe ket niveret  
nebeutoch evid pewar-ugent mil a dud 'tre ribl ar stou  
lag Ars. An dud-ze a oa eus a heb Bro, a heb stad, a  
heb oad. Bob eil e oe gwelet: ar barz Jasmin, ar  
rener-lestr, Marceaz; an tad Menard hag an tad Peter  
tot, zavet gant urzo neve; tud hag o devoa gret brad e  
distro ouz Doue, evel an tad Herman; re-all anat braz  
evid ober zarmonio, evel an otrone Lacordaire, Combalot,  
Deschamps; iskibien, evel ar c'hardinal de Bonald hag  
an O. Dupamloup. Hag ar birc'hirined eus ar re muian  
huel herve ar bed eo ive en em estlame ar muian war ma  
person Ars hag a denne ar muian a skouerio-mad diout.  
'« An den-mañ, a lavarent, a zo c'hoaz muioch zantel evid  
na lavar e vrud-vad! Biskoaz n'hon devoa gwelet Doue  
ken tost d'imp! »

Adaleg ma tigoraz ar birc'hirinez, ar person zantel  
reaz ar memez tis bemde d'ar memez koule.

(Da heuilh.)

F. G.

## HENT AR GROAZ

Ar gwollan levr da lenn epad ar c'horoaz. 3 gwennet  
ar pe. (E ti Kroaz ar Vretoned).

GOULENN e bureo ar Groaz: Gwerzioù sant Erwan,  
Labourer, sant Milto, sant Konert, hag all. Eur gwennet  
ar pe.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIGU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhaume.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoet ar bla evit Breiz ha Bro-Chall.  
2 skoed, evit ar broioù estren evit ar Broioù hellek.

## SKUVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLEE, Renner, ru Zant-Beneat, Zant-Briek  
pe d'an Otro MOAL, S'Arvanier, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep zrouennad-ekritter.  
(Diskenn a heiz evit meur a embannoù diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek so d'ed ar feiz,  
Gant ar gallek ez eio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hiti bepred d'ho prezonek,  
Yes so dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, e vo Paebell  
MILAN.

vailh al Louarn besh, ha Zân an Aman, treo da lakat  
da dridal kalono Bretoned, mennoziou skler ha stummet  
mad 'n eur giz brezonek, ya'h ha pinvidik.

Kalz a c'hoarierien a oa ; daou ane, ar Bourdonnec ha  
Marcel Rannou, pôtr an Aman, am euz gallet tapout o  
hano arôg kwitad. Bean oa ive tri ganer yaouank, mone-  
ziou birvidik ha skler ; gouc'hemennoù d'ê holl, ha kalon  
da zere'hel gant al labour dindan renadur an otro Bes-  
kond, an euz lakat ane war gwellan hent a hallfent da  
bleustran.

Setu breman en bro Treger daou strollad c'hoarierien,  
hag ouspenn marteze : en Pleuzal hag en Penrit.

Prest omp aman da rei zikour gwellan m'hallfomp da  
gement parrouz a c'hoantao ober evelte.

Dm-Na-Don.

Malakoff en e sporet  
Don ha stard a zo chomet ;  
Klevet 'ra c'hoaz a-wejo  
Ar c'hleron, ar boulejo,  
Ha war rôk !

Bretoned, evel gwechall,  
Er brezel nan ec'h ket fall ;  
Ni ive, gant ar c'hleron,  
A gerzo hon fenno zon,  
Ha war rôk !

Demp arôk 'vit Breiz-Izel,  
'N eur ganan, demp d'ar brezel,  
'Vit difenn eur vro ken kaer,  
Bezomp holl zoudarded lêr.  
Ha war rôk !

Breman eta, Bretoned,  
Lezomp ket ar C'hallaoued,  
Da waskan hon Breiz-Izel !  
Souz, Gallo, rôk hon banniel,  
Ha war rôk !

A. AR BOURDONNEC,  
Berr Plouillé.

## EUR PRIZ A ENOR

a hanter-hant tur

• so het roet gant « Kroaz ar Vretoned » da

## BOTRED PEURIT AR ROC'H

..

Eior, trugare ha mil bennoz-Doue d'ê ha d'o Renner mad  
an abad Bescond  
en hano Breiz-Izel a-bez !

## PEURIT-AR-ROC'H

## GOUEL EN ENOR DA VREIZ-IZEL

## GANT POTRED PEURIT

Setu eno petra 'oa skrivet war ar paper a breniz en  
eur digouevout dilun en bourc'h Peurit gant hent-houarn  
neve Landreger.

En eur c'hranj vraz en eun ti diwar ar maez eo aozet  
pep tra evit ar gouel, hag an dud, eur pevar pe bemp  
kant dioute, a zo dastumet bern war vern, darn a ziabaz  
ha darn-all, al loden vrasan, a ziavez. Ha koulskoude ar  
plason a zo ker mat : 10 kwennek eur re ha 5 kwennek  
ar re-all ; mez an holl a oar penoz e zo red mat arc'hant  
arôg ober netra, c'hoarion kouz ha treo-all, ha penoz an  
arc'hant-man a vo gret gantan impli vad evit broadê ha  
kuerad c'hoaz an treo 'benn ar gentan gwech, hag ober  
en Peurit eun teatr breton gouest da rei enor d'ar barouz  
ha da vro Dreger tro-war-dro.

Ya, n'ouffet ket lavaret pegen talvouduz eo kroui  
evelse er parrouzou teatrou breton muian m'haller : eno  
eman ar wrien deuz meur a freuzen vad. Goude zewel  
eur strollad c'hoarierien e chom c'hoaz kalz d'ober, mez  
ar pep diesan a ve gret : ar gammad kentan a gouest  
bepred ar muian.

Eur eta da veleien Peurit, evel ma lavaremp ive n'  
euz ket pell da veleien Pleuzal ; enor d'ar botred yaouank  
e deuz chilaouet ouz o mouez ha lakat o foan hag o  
amzer evit Doue ha Breiz-Izel !

Kredent mad penoz o devo harp ha skoazel-deuz  
abeurz Doue ha deuz abeurz o c'henvroiz !

C'hoarierion evel ma zo bet dilun en Penrit a zo mad  
sur da diduan an amzer ; mez ar re o c'hoari, kouz hag ar  
re o sellet, a ile sonjal penoz n'ê ket ebatou a zo aman  
seurt gant ebatou Malarje ; eur mennoz kaer a zo o rei  
lusk ha bue d'an diduamanchou-man, hag ar mennoz a  
yey war skleraat ha war gaerant bep ma teny an amzer, ar  
mennoz a zo eun Doue en Nê hag a gar Breiz, hag eur  
Vro war an douar, Breiz, hag a gar Doue !

Ar c'hoarion-man a jach gante d'o heul kelenna-  
derez eus ar c'hentan ; kement-man na gle'hiken bean  
anikonnet. Setu perag ive an otro Beskond, kure Peurit,  
an hini an euz zavet ar gouel-man gant kalz a labour, an  
euz gret skrivan war ar hillejoù an gir :

## DOUE HA BREIZ DA VIKEN !

..

Na 'm euz ket bet amzer da chom da glevet ha da  
welat ar gouel pen-da-bon ; gant se n'hallan nemet lavaret  
eur gir hepken deuz ar ponnad kentan.

An otro Beskond an euz bet eur zonj mad o tastum  
eun teskad zonion ha marvailhoù dindan ar memez hano :  
Nosvez ar gwadegennoù. Bet hon deuz klevet eno mar-

## KLERON MALAKOF

War eun ton nece.

Eun de, ouz Sebastopol,  
Ar zouaved a youc'he oll ;  
« Ha war rôk ! bevet ar Frans ! »  
Ar c'hleron 'zone al lans,  
Ha war rôk !

Ha da-hont war an dosen,  
Ar Rused, gant Tolleben,  
A lac'he meur a zoudard,  
Ar c'hleron a zone stard ;  
Ha war rôk !

Eur Breizad, er ha m'halle,  
Gant e holl nerz a zone,  
« Gwelat 'vo ; me vo daonet  
Ma na lac'han-me Rused »,  
Ha war rôk !

Ha war-rôk ! Ar boulejo  
'Dremene 'uz d'o fenno,  
« Eur momet, hag e vefomp  
War ar run, lec'h tiskwisfomp ! »  
Ha war rôk !

Ha war rôk ! c'hwel hon Breizad,  
Pôtr yaouank, pôtr skanv a droad  
O koueun war ar Rused,  
Ar re-man oa spontonet.  
Ha war rôk !

O kropat war an dosen,  
Eu e vrec'h 'n eur bet eun tenn,  
E fuzuilh 'losk da gouean :  
« Ha war rôk ! pad ma vevan ! »  
Ha war rôk !

Da gentan krapet d'an nec'h,  
D'o gleron e roe bec'h.  
Ar c'hleron deuz a c'heno  
A c'halve-an armeio,  
Ha war rôk !

Eur vouled a-dreuz d'ê c'har !  
Koueun 'ra war an douar :  
Er fank ru en e goaze,  
Ar Breizad a glerone,  
Ha war rôk !

Mac-Mahon gant ar banniel  
Dispaket 'barz an avel,  
A zeblant d'ê dud laret :  
« Ar Rused a zo laret »,  
Ha war rôk !

Eur groaz gaer goneet mad  
A zong breman hon Breizad,  
Ha gantan eo enoret  
Plouillé, e vro garet,  
Ha war rôk !

## MARTOLODED VREDET A VREIZ

Herve a Bortzmogor Ieshanvet Primoguet.

Me gred, Iannerien ger, e zo neubent diouzoc'h hag a  
anav hano ar martolod kalonek-man. Koulskoude, pell  
arog ma oa ganet Troin. Sarcouf hag all, en evoa dis-  
kouest heman a betra e oa gouest ar Vretoned. N'an evoa  
ket redet ar morio eus an eil penn d'egile d'ar bed, na  
kemeret e-leiz a listri d'an enebourien evel an daou em  
eus hanvet aze, mad, dre an taol kaer a reas, hag e kavaz  
ennan eur maro glorius, en eus dellidet e vije miret hag  
enoret e hano da viken, e-touez martoloded Breiz ha Bro-  
C'hall.

Er blavez 1513, Loelz XII a oa roue en Franz, ha  
Charlez VII en Bro-Zaoz. Brezel a oa etre an diou rouan-  
telez.

D'an degved a viz Eost eus ar blavez-ze, skonadren  
ar Zaozon a gawe dirak Sant-Malo hini Bro-C'hall a oa  
enni dreist-oll listri Breton he Norman.

Ar Zaozon e oa ar c'hrenvan a-bell ; mad ar Fransijen  
na sonjchont ket souzan evit se : o nerz-kalon a zigolche  
ar pez a vauke d'ê eus an ta-all. En desped da droadenn  
ar Zaozon, e chomchont dalc'had en tu gant an avel ;  
ha ze a dalvee kalz 'vel ma sonjet arvad, dreist-oll d'ê  
mare-ze nan ee ket al listri war-rôg nemet dre lieh ha  
renno.

Derc'hel a rejont, eta, tu ar avel, hag en eun taq  
krenn e teuchont war ar Zaozon, hag e tismantrechont pe  
kas da oueled ar mer eun hanter eus o listri.

Mes ar stourmad a oa stard, ha gwelet e oe neuze  
taolio kaer meurbed. E-kreiz eun douarn heuzus, e-kreiz  
an tenno, ar youc'hadenno, an tîn hag ar moged, e vije  
gwelet gwech an amzer listri o tarza, o sailhad 'n eur  
daol pejo tan war bep tu, pe, hantse digor, o teun en  
goueled ar mor.

En tu ar C'hallaoued e vije taolet ple dreist d'ar re-all,  
abalamour d'ê zolio kaer, d'eul lestr bmo, ar c'hoadach  
tro-war-dro d'ezan kizellet kaer meurbed. Ar « Gardo-  
lière » e oa hano al lestr-ze. An dukez Anna, henn neuze  
rouanez Bro-C'hall, he devoa gret ober anezan en Montrou-  
lez, ha kalz a arc'hant an devoa kouslet. Primoguet, den a  
vôr brudet 'ben ar c'houls-ze, he devoa lakat da gabiteu  
warnan... Etre daouarn-mad e oa.

Na oa ket pell e oa krog an emgann, ha kaset en devoa  
tri pe bevar lestr anebour d'ar goueled, pa deuas daouzek  
lestr zaoz en-dro d'an fessad doud a-benn anezan. Med  
heman en em zifenn hep kol kalon. War an daouzek, e  
lak hep dale eun toullad en eur stad ma n'hallent ken  
noazout... Ober a ra da daou pe dri all kemer an tec'h  
ken glazet evel ma'e'h int... Eul lestr braz, ar gwasan  
deus bec'h enebourien, ar mat'nek Charlez Brandon,

Kabitan warnean, a zo e paones bean diwriet ganti...  
 Eñh ee d'an em strobeg dioute oll pa oo taolet eus gwernen  
 eul lestr, eñheour eñ barn tau arifis warni.  
 An tan a grogas raktal hag en em ledas en berr-amzer.  
 Na dala ket sonjal a enebh outan : ar vatolodet hag ar  
 eoudarded dirahagn en em zovelaas eta 'bars ar bago.  
 Ar c'habitan Primoguet a lezas an oll da gwilad, pen  
 eo gwir e wela e oa kollet pep tra. Med kaer e oa pedi  
 hag aspedi anean, kaer e oa laret d'ean e c'helle c'hoaz  
 zovelaad e vae goude 'oa diskennet an oll er bago, na oe  
 ket gallet ober d'ean kwitad pont e lestr.  
 En eur zigemer anean eus etre daouarn an dukez vad  
 e reounez, eb evoa staget e vae outan, ha na c'houlde ket e  
 zizez.

Med na vae ket e-unan ! Zaozon a ziskenno c'hoaz  
 da lousar mor-a-gerred gantan l...  
 'N em taol e oa gwelet e vond 'trekek ar Rejent pe ar  
 Reuer, lestr a vil tonel, e oa warnan Tomas Kuevet, floch  
 Heur VII hag sintral bras Bro-Zaoz. Al lestr-man a  
 c'hoasanas pellad, med kaer an evoa n'hallas ket 'n em  
 denn. Henevel ouz eun tantad euzas ha divent ar « Gor-  
 deliere » a goue warnean, en em stag outan, a bak anean  
 gant he reben entanel.  
 Poalltroes ar Reuer a darz, ha ganti al lestr, amiral  
 bras hag all, hag ar « Gordeliere » a darz ive d'he zro  
 gant Primoguet, ne c'habitan dispar, hag a deuz a dam da  
 nam en skloz ar mor.  
 Re vevde viken n'eo Primoguet e-touez an oll Tre-  
 toned !

LAOUIK.

## AR VILIN GOUEZET

Pell dimeuz trouz ar bed, en eñh drasoñen goant, goant,  
 E lec'h veve he zud didrouz, sader ha drant,  
 M eur gwelet rebagou eur vilin bed gwechall  
 Brudet ebret ar vro... Pell 'zo ez eo konezet !  
 Hag an tremenor dall  
 Van outi na ra ket...

Nag a dra, koulskoude, d'an den 've o furchal  
 Larfe he mogerion na c'hallent kaozaad ;  
 Nag a everusted n'o deuz ket bet kuzet !  
 In liegezoz pious kollet 'n hon zraouennou  
 Ar pouc'h a zo kaset,  
 D'rist d'an holl draouilhou.

Prañiet bras ma c'halon en tostaet outi,  
 'Gag daonst d'hec'h ankoua en-dro d'ei 'zo dudi ;  
 A bep an lanneier, bec'hiet a vleun melen,  
 A skeva d'al lec'hik bec'h pouñner e zitez,  
 Hag eur waz o tremen  
 A vouban hep paonez...

Holl veñ ar vilin baour en he c'hreiz bern war ven  
 A zo breman kuzet gant an driz hag ar spenn ;  
 Na weler er o fez nemed eur men-mala  
 Chomet en e c'hourve 'kichen toull ar rod vraz,  
 Ha moger an toull-ma  
 Golbet a filh glas.

Pan tantu pelloc'h se stans, sec'h evel eul lannek,  
 A ro eur peuri treud d'ar zaot ha d'ar c'hezak ;  
 Kollet he deuz peli 'zo ha pal, ha ruzelen...  
 Nan euz en deo d'ez nemed eur woen fo,  
 'Lec'h klaver an eñh  
 O c'hoas a daolio...

Kement tra a welan a ra d'in huanvreal :  
 'Hag ar wazik deant, drant a glevan o ruzial,  
 Ha monez skrap an avel o kana er foen ;  
 O diou en em spered a digason sonjou,  
 Sonjesonno taonen,  
 Hag ive hirvoudou...

Hag e oa douz beva 'n eul lec'h ken dudiz,  
 Deuz eur vae guzet, eur vae eruzuz !  
 Siouaz ! kirie an de hon milinoz dister  
 'O barnet us vervel lazet gant ar rod vraz ;  
 Hag ar Barz-miliner  
 Gant-se a zo a waz !

Rag b-o milinatioz ea gwechall peurlunan  
 Burzet pe kanerien eus ar re vadetan !  
 Per'hen ar vilin-man oa ive marteze  
 Brudet bras evel Barz pe zoken 'vei kaner  
 Dre e zonioz bemde,  
 Lake ar vro sader.

Marteze eo o vouez a glevan er foen,  
 E vouez pe, pion a orz ? Monez klaminnez e delen ;  
 A deo c'hoaz da gans en-dro d'ar vilin goz,  
 'Vil klask al lec'hioz he deuz kaset gwechall,  
 Ha dont enpad an noz,  
 'Hod an de d'o diwall !

Pa gwitean al lec'h an eoz zo krouec'h  
 Hag ar wazik vihan a gan ive kaeroc'h ;  
 Zebiantout a reont laret d'in en eur vouez :  
 « Trugare, trugare ! » — Ma c'halon frouzet  
 A lar d'o aliez :  
 — M'ho kar, t'eo dilezet !

An YEODET.

## AR MAGNIFICAT

WAR DON : *Neb a gar bewan fur hag evruz.*

Ra vefet, Otro, glorifiet,  
 En amzer, en eternite !  
 Ma ine ha kement zo krouet,  
 Kanomp meulodi da Doue ;

Pa dolan evez ouz ken bras mister,  
 Ouz e vadelez em andred,  
 Ma joa da vean Mam d'am Zalver,  
 A laouena oll ma spered.

Deuz an nenvo an Holt-galloudus,  
 A zellas ouz ma faourente,  
 Gant an oll 'vin galvet evruz,  
 Eus an eil rummad d'agile.

Holl nerz Done hag e vadelez,  
 Na kaeroc'h tra rejont biskoaz ?  
 Ma rentan mam, ma miret gwerc'hez,  
 E Hano zantel meulet c'hoaz.

Ar vadelez zo eur mor ledan,  
 En peb amzer, en holl vroio,  
 War nep hen douj, e skuilh hep ehan,  
 Gliz ken pinvidik e c'hraso.

Ouz neyz e vrec'h netra n'hall harpan,  
 Er boultren en neuz diskaret  
 Ar penno bras, an dud huellan,  
 Evel delio sec'h 'neus o skubet.

Diwar o skabel aour, rouaned,  
 D'eur vro a-bez a re greva,  
 Diwar o zron 'n eus o diskaret,  
 'N o flas e sav tud a netra.

D'ar bevien gez a oa dizonten,  
 'Neus roet eur mor a danve ;  
 An dud pinvidik, ar vour'hijen,  
 'Neus hargasat gant paourente.

'Vit Israel hag e vugale,  
 En neus mui a vadelezo,  
 Abalamour m'eo choszet dre drugaro,  
 E vit rei bue d'hon Otro.

Gwellaet gouli natur-an den  
 En evoa laret d'hon tado kez,  
 Ober gant Abraham da viken,  
 Ha gant e ouenn, kevredigez.

Gloar d'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered-Glan,  
 Gloar d'an Doue en tri ferson,  
 Meulomp, kristenien, a-unan,  
 Meulomp Doue a wir galon.

DISKAN.

*Neb a gar bewan fur hag evruz,  
 Ha mervel hep spont nag anken,  
 D'ar Werc'hez dinam, mam da Jezus,  
 A de gant has e beden.*

REIZET GANT PERSON TREDREZ.

## BUE YAN BADEZOUR VIANNEY

(DIVEZ).

D'an tol a hanter-noz, e teus er mez eus e gambre evid  
 azei diustu er govizion. Raktal eo leun an iliz ken a zo  
 poan o finval. Pep-hini a gemer e rank hag a dalc'h d'ei  
 erfad, rag beteg daou dervez e renker gortoz awejo arog  
 daoulinan ouz treid ar c'hozeour. Pennad amzer ebet  
 d'ehant Dege seiz heur, an O. Vianney a baonez e labour  
 evid zevl ouz an oter ha lavaret an oferen, ha raktal e  
 tistro adare d'eo govizion. D'an tol a tnek heur, ehan  
 adare ; ar person zantel a dreuz gand poan vraz ar bobl  
 evid zevl er gador a wiriono ha rei eur zarmen galvet :  
 displeg ar c'hatekiz. An oll daoulagad a zo troet outan.  
 Ar zantelez a zo pintet vad e stum a bez : e gorf a zo  
 dister bras ha pleget, laret 'rafec'h eur skunden ; e drom  
 o zo treud spontuz ; 'n e zaoulagad man c'hoaz an daero  
 skuilh gantan o klevet t'eo ken mezuz. Pa gomz, e zo  
 hec'h o klevet e vouez gwad, studi obet na zo 'n e gomz,

ha, koulskoude, gant m'int didanna ha kendrec'hoaz  
 Da greiste 'veze ahuat ar zarmen, hag o tiskenno eus ar  
 gador evid monet d'eo di, o pelec'h e tebre eur pred diater,  
 trawalc'h hebken da rei d'ean noz da getdolel-hel. Hogen,  
 ar bobl a zo 'n em deulet dre belec'h o tremeno, hag a  
 vech'e eman ar person ermez an iliz, ma 'n em strinkont  
 dirakan ! Pep-hini an euz c'hoant d'hou gwelet, da gomz  
 gantan, da gaut eur mennoz, eur guzilh, eur bennoz.  
 Setu an O. Vianney 'n e-unan. Epad ma tebr, e leun  
 unan bennag eus al lizerio niveruz digaset d'ean bep  
 peure. N'hall ket zoken o digori oll : Ar zoursi-ze a lez  
 gant, roet d'ean aboue ar bla 1843, e hano an  
 O. Raymond, ha goude an O. Tbecanier, pe gand mission-  
 nerien eus an eskopti pere a deuz allez da rei zikour d'ean.  
 Evel eul luc'haden o tremen an O. Vianney ouz tol, ha  
 d'ean heur ha kart, e tistro d'eo govizion beteg an noz.  
 D'ar zerr-noz ve sonet ar c'hloc'h 'vid an Anjelus ha pe  
 denno an inderv, e pere kemer lod an diavezourien koulz  
 ha tud ar barouz. An O. Vianney a lavar an gant eur  
 vouez diñ, bec'h d'ac'h o klevet anei. Dre eno achi an  
 dervez, da eiz heur noz 'barz ar gouauv, da nav heur en  
 hanv.

Zervijer an O. Doue distro nenze d'eo di 'kreiz tre daou  
 renkad tud daoulinet.

An dervez-se leun a obere a garante 'n euz deraouet  
 da hanter noz. Aboue tregont via eo hevelep hini bemde,  
 heb n'an euz den gwelet biskoaz eun disteran toarded,  
 pe herez pe skwidar a spered 'barz ar person zantel.

Pion 'ta eo an dud-se hag a laka eur bec'h ken ponner  
 war diskoe person Ars ? Tud klav o klask ar yec'had,  
 tud kam, tud peluzet (seizet), tud dall, tud t'eo'had gand  
 ar diaoul... Kant ha kant burzud, gret gantan beteg  
 aman, ro d'an dud-ze eur liqaz ken bras, ken oll 'man 'a  
 o zonz ar gomz-man leun a fe laret gand unan ane :  
 « Otro person, laret hebken : « C'hoant am euz », hag  
 e vefomp pare. » E lec'h rei d'eo o goulen, ar person,  
 goude bean o c'hoesaet, a gas ane da bidi dirag oter  
 zantez Filomena, hag eno ve gret ar burzud. Beb gwech  
 ma teu unan bennag da vean gwellaet, ar bobl, strafilhet,  
 n'hell ket harz da diskoual o var-levenez, hag ar zant,  
 izel e galon ha leun a vez, a lavar d'ar zantez : « Pareet  
 eta an dud-man er ger, Mar roet graso ken bras da be-  
 demmo ho servijer, roet ane da vihanan e kuz. » Mad pep-  
 hini, mad an oll, t'eo ar bed-man, re an ine hag ar bed-  
 all : war ze oll e c'houlennor kuzilh digantan, hag an  
 den-santel, o tiougana pe o lenn 'barz kuziadelle an O.  
 Doue, a ro diustu an diskoulm a glasker, peb gwech  
 gand ar vrasan furnez. An dud-all a renk zonzal, heu a  
 gav dioustu ar respont heb argilevez ebet. Splan eo penoz  
 Doue a gomz 'n e spered.

Pion c'hoaz eo an dud-ze hag a weler daoulinet dirag  
 person Ars ? Pec'herien vraz. Den n'hell lavaret an niver  
 eus an dud distroet eno ouz Doue. 'Neuz loustoni ebet a  
 ine ha na vije skubet gantan. N'heller ket stourm ouz ar  
 pinjennou pere ra 'vid an dud na reont ket. Pegen bur-  
 zud eo darn eus an distroioz-ze ! Bean ra dioute dent  
 da Ars heb tam fe ebet, stag mad ouz o buegez fall, evid  
 esa hebken furnez ha galloud da diougani ar person, hag,  
 arog tec'hel, o deuz daoulinet dirakan. An debren da  
 c'houzout hebken a blege o gin. Hogen, pa glevant an  
 O. Vianney o laret d'eo o foch'ho ar muian kuzet, e toue  
 spont d'eo : Gouezet oant gand gras an O. Doue. Unan eus  
 brasen delido ar zant eo bet diskoual ar govizion evel  
 gwir louzoù an ine, rei d'ei talvoudegez dirag an dud ar  
 muian klour, dispen an holl lavario-fail a eneb d'ei, he  
 zevl war an tron dileet d'ei.

Eun den ken zantel hag a ra kement a vad d'an ineo  
 na dije ket mervel. Koulskoude ar blavezic a den. Ar  
 bevere a viz est 1859 e rentaz e ine mad d'eo Grouer.  
 Hogen, mar paouezas da vevan ganimp dre e gorf, na  
 haqueaz ket da rei d'an dud zikourio. Dirag e ve, an dud  
 kam a gav ar c'herzed, an dud mud a gomz, an dud dall  
 a wél, ar bec'herien ar muian aheurtet a distro d'an  
 hent mad, pere'hirined a den bepred a vandenno, daonst  
 'n an euz ket marteze dioute kement ha gwech-all. Goude  
 an dud, setu ar Spered-Glan o renti enor da relege e  
 zervijer hag o tiskoual d'ar bed pegen bras eo, beteg  
 'barz ar maro, galloud eur beleg.

Kement-man a zo tennet eus eul levrik gallek bet  
 dindan ar wask e ti an otro Paillart.

Prestig, emichans, e vo lakcet an O. Vianney e tonaz  
 ar zent. Dars eo al labour da dizou'han gand hon tad  
 zantel an Pab. Koulskoude, n'oullan ket monet 'n e rog.  
 Evel ar skrivagner gall an euz na renet, me lavar ive  
 penoz na gavan man mad nemet ar pez zo mad evid ar  
 Pab, man gwir nemet ar pez a zo gwir dirag e spered.  
 kelennet ha sklorijennet gand ar Spered-Santel. Ar vuc-  
 man zo bet troet e brezonek gand ar c'hoant hebken da  
 zikour ober anvadont ar person zantel ha d'ober ionn e  
 vae 'barz yez ken kaer hon zado koz. Ra deuto c'hoant  
 d'eun all d'ober gweli !

F. G. person.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoat ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar breizou estren evit ar breiz heñvel.

## SERVANBIBLIN

Kas al labourou pa d'an Otro VALLÉE, Rouer, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pa d'an Otro MOAL, Sbriganjer, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweinek pep ardouennad-akriter.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furves ar Geiz.  
Ar brezonek eo deud ar feiz,  
and ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furves ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez ar dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve tres'het,  
Ouspenn ar Yez, o ve Pec'hall!  
MUAJ.

## GOUELIOU KERAEZ

Ar gouel kaer savet e Keraez en enor d'ar Vro ha d'ar brezonek gant hon mignon mad Taldir a zo deud da vad eus ar gwella. C'hoariet zo bet Pontkallek, eur pez-choari dius savet diwar histor Breiz gant Taldir, ha kanet eur kanaouennou d'udius pe dudiusoc'h an eil evit eben. En engroes a dud a oa o silaou, hag o deuz kemeret reiz a blijadur er gouel kaer-ze. Ouspenn ar pez c'hoari, an zo bet ive eur brezegen dispar graet gant an Otro Mon, kannad Kemper, hag a oa bet pedet da rener a or. An O. Hémon eo an hini an nevoa difennet ar brezonek ouz Komb e Kamb vraz Pariz. Diskouezet an euz Keraez e oa bopred eur galon vretien o finval en e greiz. Goude d'ezant trugare ha mil bennoz-Doue da Daldir ha e hōtred yaouank kalonek o deuz roet dorn d'ezant ! Pōtred Sant Noug a dalc'h ive da vont war rog e Bro-Leon. C'hoariet o deuz e Plouescat ar 25 eus ar miz maza. Eur strollad neve emeur ive o sevel e Pleiherest. Dalc'homp gant, pōtred, ha war-rōg evit ar Vro ar brezonek !!

## KASONI OUZ AR BREZONEK

Ar viskoaz ar C'hallaoued o deuz bet droug ouz ar bretoned. N'ouveau ket petra a zo kiriek d'è, en amzer-ze, da gazon ac'hanomp. En amzer goz pa oa c'h ha brezellou etreze, den na gave divalo gwelad an ou vohl, adalek o c'havel zoken, o viront an eil ouz eile eur gasoni varvel. An dra na oa ket zoneuz pegwir C'hallaoued, en amzer-ze, a glaske dalc'hmad gwaska reiz-Izel ha hual ar Vretoned. Evel ma 'z eo a-viskoaz ar Vretoned pōtred ter, kalonek ha neruz ; evel ma konnent o Bro, o Yez hag o Gouenn gand eur gouner dispar ; evel ma tanailhent aliez o l'èr d'ar C'hallaoued ha da lakent a villierou korfou ar re-man da demzi o gouarou, kement-se, a dra zur, a zalc'he bepred beo ar soni a ouenn o deuz bet a viskoaz potred Bro-C'hall it potred Breiz-Izel...

Mes hirie, pa hon deuz en em roet a galon vad da Vro-hall, pe gentoc'h, pa he deuz em duke diskiant (An tkeze Anna) staget ac'hanomp ouz ar C'hallaoued vreind e he dimezi gand eur roue gall ; hirie pa blegomp da zennou zod ar C'hallaoued, pa roomp d'ar Franz hag an madou hag hon gwad, pa lezomp anezhi da zond en don hon Bro da ren 'vel eur rouanez, petra 'ra da houman, gonde komend a hoar galon groet d'imp, dont da hoapat hon gizio hag hon fa ha da zifenn ouzimp zoken ouz ar brezonek, yez, hon Zadou koz, ar Brezonek pe-uni a veve arak na oa biskoaz ganet gir gallek ? Petra d'ei lakat diindan he zried ar garante wirion hon deuz id hon yez hag evid hon Bro ?

Petra ra da Vro-C'hall ober an dra-ze, kenvroiz ker ? Goude, ni Bretoned, hon deuz gizio re fur, ni a zo re hag ouz an amzer goz, an amzer vuzuzud a sked bepred arnomp evel sklerijen eun tour tan lintruz hag a ra ac'hanomp ar bobl ar muian kristen a zo bet biskoaz ar an douar. Ar C'hallaoued ne dint ket evit gouzany an dra-ze !

« Penoz, emò, e c'hall ar Vretoned ren eur voberoch ha furc'h evid hon hini ? A belec'h e teu an amzer a ra d'è bevan ken evaruz dre o maezio ha karont komend o meneou, o zraoniennou, o lanneier, o c'hoajou, o vilizou koant hag o zourion dantelezet ? Penoz e c'hallont ana ken seder zoniou ha gwerzio kaer o Bro, pa 'z omp ni, Gallaoued, ken ankeniet ha ken troet war an treo all, war al Ioustoniou ? »

Penoz ? deuz forz klask o deuz kavet. Gwelet o deuz teue d'imp hon nerz, hon fe, hon c'harante-bro eus eup e hepkon, eus ar Brezonek ! Evel ma lare gwechall

Millin :

Ar Brezonek hag ar Feiz ?  
A zo breur ha c'hoar en Breiz !

Ar C'hallaoued o deuz eta sonjet lemmel diganimp, diwirioni eus hon c'halaoued ar brezonek, yez hon Zadou hag enor hon Bro.

« Pa vo kouezet, emò, ar brezonek, pa vo maro en Breiz ar yez zod-ze, neuze e toufomp abenn eus ar Vretoned ; neuze e chonfomp ane d'hon c'halaouennou divalo, d'hon gizio hudur ; neuze e lakfomp o c'halaoued ken brein, ken touz hag hon re... rag en eur goll ar brezonek e kollfomp war an hevelep tro o fe, pegwir an eil nan hall ket kerzet hep egile... »

Hag, en gwirione, o gwelet a reomp o klask moug anomp ar brezonek dre gement stum a zo. Hirie e teu Komb da zifenn ouz hon beleien komz brezonek er gador ; ar re a gendalc'h da brezek ar Bobl en e yez eo lemmet o fac digante ; ar c'hoaz e teu eur lakipod all da zifenn ar brezonek en tigezou ha bemde ar Gouarnamant a glask hon gwella dre al lezen-man pe al lezen-ze.

Et eo zoken keit en brezel eneb d'ar Vretoned ha d'ar brezonek ma weler breman e vestrou-skol — pere a zo hirie, ouz o c'hlevet, ar c'haeran skianchou... mar plichit — oc'h implia o holl narz, o holl diskadurez da laza en kalonik ar c'hrouadur fiziet eneb, ha karante e dud ha karante e vro. Aliez n'eo ket awalc'h d'è dirrei ar bugel diwar an hent mad, red vo d'è onspenn astenn ive o c'husionion dizoue ha dife war an dud vraz ha lakat ar re-man, ma c'hallfent, da vezan evelse, enebourion touet d'ar brezonek. Pa ne ve ket zentet oule e tolont neuze ha tan ha moged hag e yudont evel bleizi eneb d'ar Vretoned ha d'o gizio zodi !

Nan int ket evit gouzany an disteran gir brezonek. Ze a zo krenvoc'h evite !

Evit testenia ar pez a laran, klavet, kenvroiz ker, eun histor divalo ha dister da welet, mes spontus hag heuzus pa ve sonjet avad ennan. Kement-man rey anaoudegez d'ac'h eus ar hoar a ra d'ar C'hallaoued ha da vestrou-skol ar Gouarnamant yez karet hon Bro Breiz.

Ar 26 a viz Ebril eun toullad pōtred yaouank a Goummana (Finister) a gemere an hent-houarn e Lok-Maria da zond da vro Gallak da labourat er c'hoajou braz. Evit berrat an amzer ha lakat o zro da vezan dudiusoc'h, en em lakchont da gana brezonek. Evurus ha seder e oant o c'hallout kana en hent-houarn ar zoniou dispar a glevont o tiston bemnoz en traoniennou o bro. An treo a gerze mad ; an dud divroad a oa en o c'hichen a gemere kalz a blijadur gand o c'haniri, hag holl e zebulant bezan evurus ouz o c'hlevet. Pa laran holl, na laran ket ar wirione, rag bezan 'oa en hevelep gwetur gand ar hōtred yaouank eur c'hrak-aotro livet fall. Diouz e stum e oa eur mestr-skol. Mond ha dont a re, sevel hag azea a bep eil tro ha gwech ha gwech-all e ristage eus e chene kazus girion, hanter chaket : « Oh ! Ié, Ié !... Sales... bretons !... C'est dégoûtant ! Ils ne sont guère civilisés dans ce pays !... Oh ! Ié, Ié !... » Ar hōtred yaouank hep ober van eus komzou hudur an den zavet fall a gendalc'h da gana brezonek ; aotre o devoa d'hen ober evel komend den a vale bro en hent-houarn.

Ar ru an tren en Keraez, ar c'hrak-aotro a ziskennas ha, dizeblant, a yez da gid mestr ar gar. Heman a denaz hepdale war-zu ar hōtred yaouank. Gand eun aer konnaret e laraz da unan ane : « Choui a zo re zavet fall da chom ebarz an tren-ze ; diskennet hufan ma vo gwelet evid petra e c'hoapat an dud all gand ho zoniou brezonek... » Ar pōtr yaouank a chomaz zouezet braz ; na intentaz netra da gomzou mestr ar gar. Diskenn a reaz eta glac'haret braz, ha neuze e welaz ar c'hrak-aotro livet fall o tond da laret d'ean penoz e oa bet goapaet gand ar Vretoned ha fuket da vad dre ma oant holl o kana brezonek hag o hacha « de la pa-a-ville » dirakan.

Mignoned ar pōtr yaouank, e genvroiz, mantret o c'halaoued, a chilaouaz gant spont komzou heuzus an aotro. Holl e zavchont o mouez eneb da c'hevier ken skrijus. Na oant ket o-unan, rag an dud all a reaz ive evelte. O welet o felle d'ar c'hrak-aotro ha da vestr ar gar kas gante o c'henvroiz, e lamchont e-maez ar veur da doui penz ar pez a lare an otro a oa gaout ! Evel n'halle an tren dale, eun taol o'houit a reaz d'è mont war o gir. Int a yez gand an tren war-zu Gwengamp

hag o mignon reuzidik a digouez d'ean chom en Keraez da c'hortoz eun tren all, an tren noz.

Goude eo tec'het an tren, ar c'hrak-aotro n'hallaz ket laret petore poan an nevoa groet ar pōtr yaouank d'ean. Krosmoli a re eneb d'ar zoniou, d'ar c'halaouennou ha d'ar brezonek, hep gouzout petra an nevoa c'hoant da laret. Evel n'an evoa testeni reiz abed evitan, e tec'haz, ha mestr ar gar a laraz d'ar pōtr yaouank mond da bourmen t Mord da bourmen t... Gwelloc'h vije bet hen lezel da bourmen war hent Gwengamp assamblez gand e genvroiz... !

Setu aze beleg pelec'h eo ar ru ar brezel zod groet ouz ar Vretoned hag o yez. Pegoulz, eta, e teu pōtred Breiz d'aveout ar gasoni direiz o deuz evite pōtred Bro-C'hall ? Pegeit en em lezfomp d'hoaz da vezan gwasket, mastaret ha goapaet gand haillioned divalo, gand gwidaled a zaou wennek ?

Me gred, kenvroiz ker, eo ar ru tremen poant d'imp sevel hon fennou ha laret d'an dud gweze : — « Ho despet d'ac'h, en despet d'ho kaliek brein, en despet d'ho livitennou hir, en despet d'ho c'holl vestrou-skol, ni a chomo Bretoned, ni a gomzo brezonek ! Hon gwad, gwit eo, hon madou hon deuz roet d'ac'h, mes dreist da ze e viromp hon spered, hon enor, hon brezonek karet, ha biken, biken war an treo-ze na grokfit, nan biken ! kentoc'h marvel ! Na spontomp ket, kenvroiz ; biskoaz Breizad na blegaz d'ar Gall ! hag evel ma lare d'ru ar hōtred yaouank : « Ma hon dije gallet chom en Keraez, ni hon dije disket d'ar pōtr-se intent brezonek a daolion dorn hag a daolion treid ! Seul-vui e kazfont ar brezonek, zeul muic'h hen karfomp ha zeul muic'h hen komz-fomp !

Entre ar Gall hag ar Breizad,  
E zo hirie kalz, kalz a vec'h ;  
Mes ni hen tou a galon vad,  
Ar Breizad d'ar Gall a vo trec'h !

AN YZODER.

## AN HAD MAD

(Gouelioù Kemper)

O pignat, an deiz all, e karr marc'h-houarn Kemper, am oa douar-spered pa ranken kwitaat eur mignon leal ha kalounek, ar barz Ab Alor an hini eo ; ha, koulskoude, levezne am oa ivez 'leiz va c'hallou, al levezne, n'euz santeloc'h egeti, da veza great labour-vad evit ar Vro, evit he yez hag he feiz, ha da veza gwelet gant va daoulagad va-unan eo goou penn-de-benn prezegennou dispi an dud a lavar ema hor brezonek o koueza en e boull evel eur c'hastel koz dilezet ha n'ema ket ar bobl ouz hon heuilh, e zell ouz hen c'hennerzi hag e zounn krog en hon dourin.

Eus a bep korn a Vreiz-Izel, tud yaouank kristen a oa diredet ar zizun dremenet da Gemper hag a oa en em vodet en eur c'hendalc'h braz. Re hir e vije displega kement a zo bet lavaret, great pe c'hoarvezet epad an tri dervez kendalc'h hag, ouspenn, ar c'halaouennou gallek o deuz komzet war ze deiz dre reiz. Va mennoz-me eo komz eus ar gouel brezonek a zo bet lida ha lida kar. Ab Alor eo an deuz bet ar zoni vad da ober d'hor yez he c'hevren hag he loden a enor. Deut eo a-benn eus e youf. Hogen n'ouzomp pe lapouz-arne, henvel ouz ar re a gomzap anezo uhelloc'h, an devoa lavaret d'ezan : « Penaoz ! Emoc'h o vont da lida eur gouel brezonek aman ! Choui a zo yaouank hag a gav d'eo c'h gallont sevel ar bed evel netra. Lakit evez ! Aoun braz am euz ne vezo goullio al leur-c'hoati pe ar zal dirzooc'h. » Mad ! va c'hredid, evit selaou ar brezegen war ar brezonek ar zal a oa leun a dud yaouank, ha dirag ar Yezad a ganaz d'abardaez na oad ket evit finval ha, bourc'hizien kouz ha tud a-ziv ar meaz, a rankaz meur a hlui anezo, chom en o zav. An holl dud-se ne vijent ket deut di, ni oarvad, a dreuz goudrouzou eur vanden lamponed, ma n'o divije great beleg neuze nemet heja o fenn digreduz evel al labour-arne ; n'o divije ket great strak-daouarn gand kement a galoun ma n'o divije bet en o c'hevren eun alveu karantez evit o bro.

mad a gristenien ! Hi a zo eul lestr war behini e teu dal-  
c'hamad da vervel fulor gwagenoun ar mor dirollet.  
Koueza ra, a dra zur, war al lestr mour a dol amzer fall.  
forz a zo ! E Lewier, renet gant Stereden ar mor, a gas  
anean hepred, hep aon, da Borz ar gwir ue... Hi a zo  
eur garrek war behini e teu dalc'hamad ar fall da derri o  
benn ? Kaer an euz an Diaoul skrinjal, yudal, tol tan ha  
maged, an Iliz a chom hepred en he zav herve lavar gwi-  
rion He fried hag hon Zalver d'e Ebestel : « Me a vezo  
ganach betek fin ar c'hanvejout » Ha herve o c'hour-  
c'hemen da zant Per : « Te eo Per, da laret men : war ar  
men-ze e savin ma Iliz ha biken ardou an Ifern na drech-  
font ac'hanoud ! » Fiziann, eta, kenvrois ker, 'n em zikou-  
romp ! Doue a zo ganimp ! War-lerc'h an drubuilh hon  
aveo levezeg !

AN YEODET.

Er pevar pennad am euz breman skrivet en *Kroaz ar  
Vretoned*, am euz, zur awal'h, ankouet ha dilezet meur  
a dra : na c'houllan ket skwiza al lennerien gand holl  
artikloù zod al lezen neve. Ar pez am euz klasket dreist-  
holl e oa displega hepken spered ha grevusted al lezen.  
An dud a fellfe d'e anveout anezi penna-da-benn a c'hall  
evit se prena en ti Prud'homme, Sant-Briek, eul levr bre-  
zonek marc'hat mad ha mad-tre hanvet : *al lezen neve*,  
groot gand eur filhor da zant Erwan. Bean a zo c'hoaz  
daou all en gallek hanvet unan « Petra 'vo ar c'hoaz... ? »  
hag egile — ar gwella hag ar reizan herve ma sonj —  
groot gand eur Breizad kalonek, an otro 'n Eskop Du-  
bourg. Dre ar re-man an holl a anveo al lezen ha zeulvui  
e vo sklerijannet ar Bobl, gwelloc'h a ze e anveo e zoare  
ha gwelloc'h a ze en em dibabo en amzer da zond...

A. Y.

## Trugare d'hon mignoned a Zant-Nikolas

Evit an digemer mad o deuz roet da Renner *Kroaz ar  
Vretoned* de Goulet ar Galon Zakr, a oa ive *Goulet ar Skol  
gristen*. Kaeret goulet a zo bet en de-se er skol, gristen a  
Trugare d'an holl ha, dreist-oll, a drugere d'an Otro-Caurel,  
ar Renner mad : Goude kreisteiz e oa ar vugale hag o c'he-  
rent en em vodet da glevet kanaouennou : « Potr ar bonbo-  
nigon » a oa displeget en gallek gant unan euz ar vugale  
lag ar skolaer bihan » a deus mad-tre gant eun all en  
brezonek. Se a zo skolaerien hag a zo deut reiz war  
er gallek hep bean ankouet brezonek ar vro, gant mad  
oc'h int kenteliet gant o mestron kristen !! Bean oa ive  
fotograf *Kroaz ar Vretoned*. Esper zo en deuz graet  
glijadur d'an oll, braz ha bihan.

D'an nez, goude koan, e oa eun dudi gwelet ar gou-  
teier — er ru Santez-Trifina dreist-oll — hag an tan-  
artifis e porz ar skol. Etouez ar zellerien hon deuz bet ar  
blijadur da gavout an Otro Marion, kenderv d'an abad  
Marion (Herbot) a oa ken karet gant lennerien *Kroaz ar  
Vretoned* hag a zo maro, eun nebeut bloaveziou zo, re  
abred, siouaz ! evit ar vro. Eman e skouer-vad o tougen  
trouez e-touez potred yaouank Sant-Nikolas, a zo renet  
euz ar gwella gant an Otro kure. En zell e vijent, war  
son deuz klevet, da heuilh roudoun potred Peurit ha re  
Bloozal ha da zavel, evel ar re-man, eur pez c'hoari en  
brezonek. Netra welloc'h !

Kent mont da gouket e oa kanet — ha kanet dispar  
— « Kouek Breiz-Izel ». N'eus ket da laret ! E-touez oll  
sonion ar bed, ar re vraya eo c'hoaz re Vreiz-Izel ! Ouz o  
c'hlevet e ve diduet ar spered, ha tenerast ar galon hag e  
sant an nen ar garante ouz ar vad o virvi en e greiz, a-  
unan gant ar garante ouz ar vro ! Trugare eur wech  
c'hoaz d'hon holl vignoned a Zant-Nikolas, en em zanter  
kalon-ouez-kalon en o zouez ! Trugare dreist-oll d'an otro  
Caurel na ankouafomp biken an digemer kalonek an deuz  
roet d'imp !

## EURED ILIZ LANVEUR

lidet gant an Aotro Dubillard, eskop Kemper ha Leon  
(11 a viz goueren 1905).

War don : *Kentoc'h mervel o ma Doue, pe Roue Salomon.*

Me a glev, a-us d'an draonien,  
Kleier Lanveur o son laouen :  
« Hirie, emé, 'vo binniget  
« Bevan iliz 'zo bet savet ; »

« Kaeran iliz a zo er vro,  
« En bro Tregere, ha tro-war-zro,  
« A vezo hirie eurenjet  
« Gant hon Eskop mad ha karet. »

Sonet, kleier, skellruz zonet ;  
Me wel a bep tu o toned,  
Me wel a beb bro, Lanveuriz,  
Tud o tond daved hoc'h iliz.

Me wel gante c'hoaz war an dro,  
Hon Eskop, beleien hon bro.  
Nan, nan, biken n'o ankousimp,  
'Vit an oll vad a reont d'imb !

De mad ha jos, ni a lavar,  
D'hon zad an Aotro Dubillard :  
Laouen bras eo dent da lidan.  
Eured-zantel an iliz-man.

O ma Jezus, pegen bras o  
Hirie levezeg hon ine !  
'N eus gwelet den, biskoaz gwelet,  
Kaeroc'h goulet er vro-man lidet.

An den, 'neuz poan gant an here,  
'Gan oc'h ober e leuz neve ;  
Ra vo hon Eskop fur meulet !  
Da vout hon iliz d'imb sakret !

Da zavel ken kaer hoc'h iliz,  
'Zo bet labour stard, Lanveuriz ;  
Poan zo bet, poan zo tremenet  
Gwast elomp, Doue vo meulet !

War don : *Kelven.*

Chillaouet mad, Lanveuriz, pez 'neus gwelet fenez,  
Pa 'neuz zonet ar c'hloc'h braz nao daol da hanter noz,  
Pa 'neuz zonet kloc'h Melar nao dol 'vel da greiste,  
Chillaouet pez a gleviz 'us d'hoc'h iliz neve.

Eur vouez skeltr-am eur klevet hag eun el 'neuz laret :  
« Sonet, kleier binniget, en de kaer-man, sonet ;  
« Hag e tevio ar zent koz, 'rög ma vo goulen de,  
« Da lidan gant ar re veo, eured iliz Doue. »

Ar c'hleier 'deuz tregernet, 'vel na reont nemeur,  
Ha gant zent ar baradoz, oa leun iliz Lanveur,  
Deuz lein an nenv 'tiskennent gant Gwerchez Kernitron,  
Da ganan 'barz an iliz, 'lec'h enoret 'vefont.

Gwelet a ren da gentan aleiz a Profeted,  
Gant 'n otro zant Yan ar Biz e oant oll diredet ;  
Ar Batriarked 'deuz gant zant Jozeb goude,  
Ha laouen bras e kanent : « Meulet ra vo Doue ! »

Warlerc'h 'tiskenne zeder, alaoueret, Iugernus,  
Zant Jakes, sant Mathias, oll Ebestel Jezus ;  
Da genta 'kerze zant Per, patron karet Guimaek,  
« Meulet drant ra vo Doue ! » a ganent kalonek.

'N o dorn ar lore skeduz, 'welent ar verzerien,  
En goad zakr an Oan divin ruet kaer o zaeen,  
Zant Stefan, Lauranz, Visant, roue Breiz, zant Millo,  
Dreist d'ar re all a gane : « Doue meulet ra vo ! »

Zant Tual, zant Korantin, zant Pol Aurelian,  
Hag oll Eskibien zantel hon broik Breiz-Vihan,  
En iliz kaer zant Melar, 'greiz kalon a gane,  
Gant eur vouez flour ha lirin : « Meulet ra vo Doue ! »

Goude e welen arok d'an oll gouezourien,  
Zent Girek, Primel, Egat, hag o gwiskamant gwén,  
Liez gwechall, er vro-man o deus bet zarmonet ;  
War eun ton laouen 'kanent : « Doue ra vo meulet. »

Zantez Barba, ha Rosa, ha zantez Mac'haret,  
War o fenn glan kurunen skeduz ar gwerchezed,  
'Vel priefo da Jezus, skelltruzoc'h a gane,  
Gant eur vouez kaer ha zeder : « Meulet ra vo Doue ! »

Zantez Mari-Madalen, zantez Anna Wened,  
An intanvezed zantel, ar hentiantezed,  
Gant ele ar baradoz war o zelan' gane,  
War eun ton flour ha meluz : « Meulet ra vo Doue ! »

Deus e ve dindan 'n iliz e save zant Melar,  
Patron merzer ar barroz, tad an iliz dispar,  
Zant Erwan deuz gantan, ha Gwerchez Kernitron,  
« Meulet tre ra vo Doue ! » ganent a greiz kalon.

Ya, meulet ra vo Doue, Lanveuriz, c'houi gano  
Gloar d'an den mad 'neus paet iliz kaeran ar vro.  
Bezomp zent vel hon zent koz, chomomp stard barz ar fo,  
Kanomp 'n hon yez koz ken c'hounek : « Meulet ra vo Doue ! »

War don : *T'railhet eo ma c'halon, pe Ele deus ar baradoz.*

Gwelet 'ren c'hoaz o sevel deus donder ar vored  
An oll gristenien zantel a oa ano kousket,  
Dont 'rent d'eured an iliz, 'lec'h oant bet badesel,  
Kanan 'rent 'vel ar re all : « Doue ra vo meulet ! »

Ineo ar purgator a leske 'kreiz an tan,  
Da verzan 'n iliz neve direde gant klemvan,  
Hirvoudi a rent klemmuz gant eur vouez glac'haret :  
« Ma Jezus, onzimb true ; Doue ra vo meulet ! »

Bean oa tud dimezet, tudjentil, bourc'hijen,  
Menech koz a Gernitron, ha kalz a veleien,  
Ha tado ha mammo fur, gante o bugale,  
Hag oll e kanent skellruz : « Meulet ra vo Doue ! »

War don : *Pennheres Geroulas, pe eun all.*

O, ya, ni lavar da Jezus :  
C'houi zo eun tad trugareuz ;  
D'hon eskop Dubillard ive,  
Ni lar : Da viken, trugare !

En Landreger, en Zant-Briek,  
'N euz zarmonet ken kalonek,  
Ken an oll Vretoned a lar  
Eo eun Eskop 'neuz ket e bar.

'N hon amzer ken fall, ken iskiz,  
Da difen gwirio an Iliz,  
Da harpan hon yez hag hon fe,  
N'eus ket en Breiz gwelloc'h ive.

Miret ervad 'n ho kalono,  
Lanveuriz, miret e hano ;  
Ha d'ho pugale hen larfet :  
Dom Dubillard, eskop karet.

Trugare d'ac'h, otro person.  
Leun a dousder, bras a galon !  
Tad Lanveur 'veulo hoc'h hanô,  
Hoc'h iliz vrag keit ma pado.

Diskoa gwell na dougfe biskoaz  
Mantellik ze gant kroc'h en kaz ;  
Meulet pell 'n hoc'h iliz neve  
Hon zent koz, ar Werc'hez, 'n ele.

Enor ha gloar d'ar gureet,  
Gant o ferson oll unanet,  
'N otro Lazar, 'n otro Billant,  
Beleien fur evel daou zant.

Gloar d'ar Chaloni, Dom Abgrall,  
Den disket 'vel n'eus ket eun all,  
Reizer brudet bue zent Breiz,  
Mestr-micherour bras hon iliz.

Dre-oll, bomde, e-mez, ebarz,  
Meulomp zeder 'n otro ar Barz,  
Oll varzed war ho telenno,  
Kanet laouen gloar d'e hano.

Kanomp zeder, kanomp lirin  
Mil bennoz d'an] otro Marzin,  
An eus groet iliz zant Melar,  
D'an oll dud vad, bennoz ni lar !

PERSON TREDREZ.

Gouennet, e Ti Prud'homme, levr neve hor  
mignon Klaoda :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gouere hemenn digant hon eskop breizad, ar  
Aot. 'n eskop Dubourg ; unan euz ar gwella hag an du  
diusa leorion bet skrivet e brezonek betekhen.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIYOU HA MEIN-BESION

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Sant-Briec. — Imprimerie Saint-Gillaume.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoot ar bla evit Breiz ha Bro-Chall.  
2 skood, evit ar broioù evit ar broioù hettiek.

## SKRIVANTERIEZ

Kas al labourioù pe d'an Olyr VALLEE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Olyr MOAL, Skrivantier, 27, 283 Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennet pep arundenad-skrivuz.  
(Diskenn a brez evit meur a embann diou-taj.)

Ar brezonek hag ar feiz.  
A zo breuz ha c'hour en Breiz.  
Furnez ar Geta.  
Gant brezonek eo deud ar feiz.  
Gand ar gallek ez sio a Vreiz.  
Furnez ar Geta.

Dalc'hit bapred d'ho prezonek.  
Yez ar dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma va trec'het.  
Ouzpen ar Vreiz, o va Peo'hell.  
Muzik.

## AL LIN

Ma! 'Chan d'ober eun tamm tro da welst hag-en eo daro ma lin! Trist eo an amzer. Eur bannac'h glao a deuz gantan, 'gav d'in. O fe, vad a ray d'al lizet ha d'an ed-du, d'an trevaio a zo o krige. Ar zec'hed a grog enne ive gwecho hag amzer. Beteg na vo ket glao a-strons, a struilh, da wintan an edo, al lino, da lenian, da rozenni-da rodellat ané, da greski al labour. Labour rez a fell d'an tiek en amzer 'ren, pan eo bihan e zikour.

— Bah! Perag terri ma fenn, na chakat ma spered gand ar sort jonjo? An Olyr Doue, a zo du-hont e krec'h, gwellan tiek a zo, e lagad gantan war bep tra, 'oar pesore amzer d'ober. Servijomp anean evel ma zo dleet. Lezomp ar pearest war e gont. Me zo souezet gand an den dalc'h-mad o pilat hag o vreat e spered gand ar reuz, ar rec'h, an nec'hant, an disfi. Louzouen an disfi a zo da c'hoennat deuz kalon pep den, evel ar roz-ki, an evelzen, ar wennik deuz a vesk al lin. Doue a zo eun tad mad evid e vugale. Lezomp, ets, rozen ar fianz da dispakan en hon c'halon gant tounder hon c'harante evid an Olyr Doue.

Bale a ra ar gwenlled dre an er, d'erian, da die'hour-dan o dioueskel. Izel-izel emaint en traou; glao a vo, zur awalc'h!

Arru en er park braz. Eur pikol kaer a donar : daou devez arat. Ha lin kaer, lin bec'h an douar ennan. Doue da vezo meulet! Bet oan an Zant Ervoan ewit ar parkad-man a oa glac'haret gand ar zec'hour. Eun toullad deio goude e teuas ar glao, al lin a gemeras kalon hag a zavas de-ha-de, plen evel eun dol, stauk evel ar yeod en eur prad neve dourat. Kaeran, dousan ma oa d'al lagad, breman zo eun eiz de bennag, pa oa e vleun en-kreiz o splander... War dioubar korzenno goanv, mibin, deillock, glaz-dour, bokedo redet dre greiz ar c'horzenno, war duc-lenno moan evel laso eur winnienn, blenno a bemp dan-telezan, glaz-ampez, o vouze'hoarzin ouz lagad sartik an heol, o vrallan dindan elan eun ezennik; boked a-bed rutan ar roz-ki pe melen-pabran an elvezen da zistresan na da skwizan al lagad; glaz war c'hlag, en-kreiz ar glaz, dindan ar glaz, ha glazik al lagad o sellet.

Bleun al lin a dremen evel pep tra. Witan da zont nao gwech, eme hon zud koz; da laret eo, evid al lin da vont etre nao rumm en e vleun, tremen a ra rozen e yaouankiz. Ar vlenen a gone, ar goll'hen a gloz war an haden, setu ar volc'hen! Al linen a zeu d'ar-veleenni, da zec'han, plegan a ra dindan bec'h ar volc'hen, mad eo da dennan. Ma farkad lin a zo daro. 'Chan da c'houlen zikour war-benn an deio-kreiz. Non ket evel Yan. « Ma deio, eme Yan, ma deio! Ar gwener hag ar zadorn! » Du-man 'zo kosteio hig-sal ampletuz d'ober, taillhenno, pa laran. N'hall eun den bean bilin evel an otro-ze pa oa beo. 'Velkent ha goude!

— Na gasin anoc'h da dennan lin evel warlene: Mar yeret ec'h efomp d'avei, da nean, da dibuni, da steni, l'annei. Neuze, c'hefomp d'ober eun tamm tro beteg an liz da welst pegen lin eo al lanvaz a ya en-dro d'an Olyr Doue, da Jezus en e Zakramant adorabl! O ya, buhan ha buhan, rak n'on ket en zell da dero'hel anoc'h aman, ho sello war ma c'homjo, beteg ar'hoaz ar beure. Dont a rafec'h da welst an nao heol hag en na zo nemed unan.

Al lin kaer-ze, eur wech tennet, a ve groet gantan lin gwenn, a ve evid an ti; al lin du a ve da werzan. Demp d'al lin gwenn. Groemp eun tamm aman war ar goloen evel ma vije groet gwech-all gorz ebarz an tie hag evel ma klejet ober c'hoaz, herle an de. Rag al lien ar ger eo ar mestr, kwita ma zud vad! mammo, mestrezed, penno-tiegez, Bet meur a dipat ganaec'h war goubl ho preo'h da

ziski dero'hel mad d'ar geiel ha nean moan ha plen. D'ar c'houz-ze e vije lien war an dud ha mask an-dud, lien krenv ha ya'houz. An danve lin gwenn a vije reuvelet dusta ma vije tennet, pe er park pe er ger. Divrec'h Zamson avad a vije ezom da garzan ar bole'h diwarnan. 'Vije ket eom da skei an dornad don etouez dent ar reuvelet ar dipat kentan, pe vijed zur da vean eun hanter devez, oc'h hinza'hat, o veskan, o chechan (« Iz, iz, iz, iz, an diaoul a zo krog ennan! » Jech ta!) oc'h eun tennan an dornadik deuz tre dent drouk ar reuvelet. Ma vije bet skrijadenno, eun drue o c'hlevet! Red e vije kat ar bolc'h hini ha hini, koulz eo laret.

Eur wech kribet ha digrevet, al lin a ye d'ar waz-ogerev ac'hane war ar prad ha d'ar c'hignel ken m'arvue ar goanv. Neuze e vije labourer er ger, pe gand eun amezek bennag, epad ar goanv, pa n'halle ket an alar mont en douar, koadesk gand ar skorn, pe pa vije gwisket e roben erc'h gwenn gand ar bed.

An, 'chan! Arru omp gand an treo kez avad! Resped d'e! Stard e oaint da labourer. C'houzen a dennent deuz ar c'horf ha deuz an tal. Nag a bec'hed ive deut diwar an izili, gwelc'het gand ar c'houzen-ze! Nag a berlezen prennet ganti, da stagan ouz kurunen an env! Nag a ine paour, lac'het tan ar Purgator ennan, ha nijet d'ar baradoz da derri zec'hed ha naon gand evaruzet an Ele! Nag a den, ar baourante o fritan war e oaled, daoubleget dindan bec'h an dienez, zavet e chouk gantan, deut mad ar hed, krenv ar bed en e di, diwar ar linvio koz-ze!

Arru omp gand al loue-ven. Aman e vije pilat gand eun horz didrae, goude bean bet krazet. Neuze e vije krazet adare, laket a dornado, hag ar vre eudro ken ma padastrake « Rig, reg, reg! Rig, reg, reg! » N'eo ket o son an Anjeluz e vije neuz!

Na oa nemet well a ze d'an dioueskouarn. Floaroc'h eo moez eur c'hloc'h da zon an Anjeluz ewid n'eo eur vro. 'Cha! 'Cha! 'Cha! 'Châ! Eun tammik diweatoc'h e teuas ar mekanik gand an dorn; laonenno koat war eun ael, eun dorn d'ean, daou den o chechan a-gorf-roched, unan diwar boez eur gorden pe eur c'habest, o! eul lac'h-tud avad. Henez a c'houle digand an divrec'h ha ya'c'h e vijeint. Azei re eul labourerez war eur bank-astel, eun davanjer toskan war he harlen. Lemm-lemm troc'h an astel diwar war. Eun astel : eul laonen goat en he zav war ar benn eur bank. Eun dro re d'he dorn-deo gand eun dornad lanvaz. Tremen ha distremen a ra al lanvaz dre veven, dre wennen an astel. Roskignat ha rosignat a re he zrem d'ar c'hez-paour. « Flipa, Flapa, Flipa, Flapa » eme he dorn klei war jod an astel. Me lar d'ac'h e tape homan meur a skoarniad! Pa vije dousaet mad an dornado lanvas, pa na vije ket a dreino e-mesk o bleo, e vijeint laket a foeskennno, a bakadenno.

Ac'hane ec'h eint war ar geiel, hep eil, pep hini d'he dro. Ar c'har-nean krapet war e dioubar kam, laret mad : kambli, neuden hag oll, a deue endro, ha chetu al lanvas en kudenno neud paket stard. « C'hola! C'hola! ma feir, re rouz eo ho pek, rad e vo gwenn anoc'h. »

Ar c'har da dibuni a deue endro, an estellik a digemere an neud, a re kudenno hier ha moan. Hag ar c'hudenno war o fenn 'barz ar waz diwar-boez dorn ar ganerez, flumet gand ar c'holvas, ha chetu hijaj vad d'an neud, evel d'eur bugel goude bean gwalc'het e benn mouz gand an daero ha bean bet pred ar gwenn digand e vammik.

Arrout a re eur gwiader. Groet ar marc'had. Hag en da steni e wiaden deuz eun eil penn d'ar c'hranj vraz d'egile, diwar boez zeulbenno. Ar wiaden war e chouk d'ar ger, er stern kenkent, hag an treo endro d'anvei an neud! Kaeran paz lien a ye d'ar ger war chouk ar gwiader. Regalet vije deuz ar c'henta, paet, Gwerz eur chopinad hag eun tamm butun a dape ourspenn da lakat en korn godel e jiletan. Na vije ket gwelet al liou deuz a henez gand ar wreg!

Mad, chetu danve ninsello, rechedo, zerviedienno ha treo, ewid ar mab henan o tanzei dimi.

Eurusas gwiaden, an hini a denn ar bilhet gwenn, eo an hini a dap mont d'an iliz d'ober doubiero oter,

Korporalo (he laret eo ar zerviedenno a ve en-dro da gorf binniget Hon Zalver goude ar goureo), ha d'ober an treo-aj a ve eom en-dro d'an oter. Doubier, korporal binniget, pegen brao eo d'ac'h bean atel! Braoc'h eo d'id arre, kalon eur c'hristen! Te a digemer en ez kreiz an Doue na digemer an treo-ze nemet war var, war c'horre; te anva, te a gar an Doue, n'hallont nag anveont na karet!

Disul ec'h achuio. Ken disul, kenvroiz vad.

Eun MIGNON.

## GWERC'HEZ AR C'HOAT

En parouz Sant-Servez,  
E-barz kreiz ar c'hoat braz,  
Tostik da Gerbernez,  
Kuzel touez ar gwe glaz,  
E kaver eur garrek,  
Ha hi ranet ken c'houek  
Ma c'houllerez zeket!  
Petra 'zo c'hoarvet?

Ar roc'h, eun amzer eo,  
Oa da vezan drailhet...  
Faoutet eo... mes goude,  
Ar roc'h na gouezet ket!  
Ankouzet eo eno,  
Hag abone an dudo,  
Dizeblant, yen ha kri,  
Na zellent ket outi...

Ma n'eo ket dispennet,  
Eo felle d'ar Werc'hez  
Bezan warni karet,  
En-kichen Kerbernez,  
Ha kavout he skeuden  
Kuzel en eur jijen  
Zavet ouz troad ar roc'h,  
'Lech ma vije koantoc'h!

Setu perag hirie,  
— Trugare da Bipi! — (1)  
Ouz troad ar garek goue  
Eman skeuden Mari...  
Skeuden garanteuz,  
Dous ha ma'eleuz,  
Hon Mam, hon Rouez,  
Itron a Gerbernez!

Nag eo koant da welst  
En eul lec'h ken dispar!  
Elec'h na glever ket  
Trouw abed, na safar,  
Nemed evnedigou  
O kana kantikou,  
Ha mouez flour an avel  
'Barz ar gwe o vervel...

A-uz d'ar roc'h, glazuz,  
Groet gand ilheo, dero,  
Mesket hep renadur  
Gant koat kelve ha fo,  
A ra eus al lec'hik  
Eur gaer a chapelik,  
Elec'h e plich d'an den  
Lavaret eur beden.

Er c'hoat braz, tremener,  
Ma tigoze d'id eun de  
'Kichen ar jijen gaer  
'N em gavout da vale,  
Me a bed ac'hanout,  
Ma welez diragout  
Drem ar Werc'hez Varl,  
Da stoni d'he fedt...

Al Lun-Pask oa dez ar Brezonek. Er vodadek kenta en em gave an Ao. a Estourbeillon, rener K. B. V., an actroune eskibien Dubillard ha Duloug du Rosnay, an actroune Pilven, Chamaillard, Brager, Servigny ha kailall. An Ao. a Estourbeillon a zeraouaz gant eur brezege eus ar c'honekan hag a drugarekeaz an dud yaouank kristen bodet eno da veza miret furnez ar Re-Goz evel eun tenzor ha da veza kredet evel o zadou n'eo ket o karout peb nevezenti deut d'omp a-zlavaz e c'hallomp beza kremp na chom hon-unan. N'euz ger ebet kor gwizion hag ema :

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar e Breiz.

« Mar doc'h hirio an dez kristenien stard, eme ar prezeger, ho poset soj eo d'ar Re-Goz e tleit kement-se ; ene ho tudou, a gousk hirio er vered, eo a veven ho kreiz hag an ene-ze n'eo ket ene n'euz forz pe bobl, n'eo nemed ene ar Bretoned ha n'en deuz nemet eur yez, ar brezonek an hini eo ! »

War-lerc'h an Ao. a Estourbeillon, an Ao. Jacob, deuz Alor, a gomzar war stad ar brezonek : kalz a blijadur hon euz bet o selaou ar prezeger yaouank dre ma save e vouez, entanet ma 'z oa e galoun. Eun t'udi eo bet goude-ze Heleat Actroun 'n Eskop Kemper ha Leon o rei da anaout edo ganeomp a greiz kaloun er stourm evit yez hor Bro. « Va beleien, emezan, a zo Bretoned euz an dibab ; d'o yez e talc'hont kouz ha d'o feiz ha sonj mad ho peuz, p'eo bet laeret diganto o feadra dre ne felle ket d'ezo trei kein d'ar brezonek, me am euz o c'hennerezet ha lavaret d'ezo kenderc'hel ; ha warc'hoaz e lodennin, evel m'am euz great beteg-hen, 25 mil lur etrezo, ma o devozo eun tamm bara ha ma stourmint ken nerzus bepred. »

Hervez goulen an Ao. Pilven Ao. 'n Eskop Kemper a asantaz lakat levrik katelismou e eskopti etre daouarn Bretoned desket ma vezo kempennet hag advoulet e brezonek yac'h. Trugarez d'ezan !

Lre ar skolon, eme an Ao. Tremintin, eo d'omp mirout na vezo mastaret a nebeud da nebeud hor yez.

An holl a 'n em gavaz a-unan gant an Ao. Lajat, barz Mab an Argoad, pa c'houlennaz ouz an dud yaouank rei skoner vad d'o c'henvroiz ha dougen gant fouge gwiskamanchou Breiz.

Digemer mad a zo bet great ivez da vennad an Ao. Vallée : ma vije krouet e skol-veur Roazonn, evel en Iverzon, eur genvreniez Bretoned evit studia hag harpa ar yez.

An abardaez a deuz buhan ; da eiz' heur, ar zal a oa kel leun a dud ma ne c'haller ket finval enni. Pion a lavare oa maro an teatr breton ? D'ar mare ma tenaz da Gomb ar zonz dibodell da waska ar brezonek gant al lezen a euzoc'h, ne oa e Breiz nemed daou strollad tud evit c'hoari peziou brezonek ; hag hirio an dez ped a gav d'oc'h ez euz anezo ? Pevar ha tregont d'an nebeuta. — « Paotred ar C'hap », ar re yaouank a c'hoarie ganeomp e Kemper, a zo eus ar re wella, renet ker brao ha ma 'z int gant an Ao. Aljean ; displeget o deuz dirazomp eur pezh c'hoari fantuz : « Trubailhou Yann Hirou. Gwelet am euz meur a wech peziou gallek c'hoariet e kear gant And a vicher ; mad ! ne laran ket a c'haou ha kement hini eo o selaou evelon n'am zislavaro ket, Per Kerisit (Yan Hirou) hag e vignouned a c'halle lemmal ar maout digant an dud a vicher. A-leiz hor c'halonn hon euz c'hoarzet en noz-se, 'ker kaer e teue an traou gant ar c'hoarierien.

Ab Alor, rener ar gevren vrezonek, n'an doa ket sellet da zispiga e boan nag e amzer ; ouspenn, c'hoariet hen deuz hen e-unan e « Daniel ha Brizeuk », pezh-c'hoari en eun arvest gant ar Barz-Melen.

Ho servijer Glanmor, galvet gant Ar Berr da rei doun d'ezan, a ganaz euz e wella teir pe beder euz e-wersion : *Arzel ar Moaz, Al Labour-Mor, Gwerzh-ar-enec Stann...*

En e c'hroude, Mab an Argoad en deuz great d'an holl dud gant e zontou koant kanet gant e vouez duduz. — « Salud d'ar Breujon » gant Ab Alor a zo bet selaouet gant eun doujans ar vrasa.

Etre daou rann, e eo great eur gest gant an dimezellad Le Corre ha Le Berre doun ouz doun gant Ab Alor hag e servijer.

Evit trouc'ha berr, da unnek heur pa eo klozet an abaden gant ar c'han broadaz, pep-hini a yeak en e du heb klemp, er c'hontrol eo. Ha ni, ken-etrezoomp barzed, en em gave euz da veza talet en dro d'omp an had mad, had karantez hor bro, e kelonou kenvroiz hag a yelo marthe divezatoc'h, kalz anezo, da labourat o-unan ha da vadi war an douaron difraostet gant Brizeuk, ar Gonidek, Kermarker, Luzel hag a zo difraostet c'hoaz hirio gant kement den a galon a zo e Breiz!

GLANMOR.

## GOUELIOU

### PEURIT AR ROCH

Roet zo bet, ar zûn tremenet, eur venodi dleet mad da « Botred Peurit ar Roch » ha d'o Rener, an abad Bescond ; setu aman brema evit ar zûn-man eur gerionnou bennag war tenor ar gouel a zo deuet ganto ken dudius el Lestiven vraz.

Kân-bale Pôtrede Peurit a oa da genta. En-dro d'o banniel e kerze ar bôtrede yaouank... eur c'haer a vaniel, war eun tu anean skuden sant Ervoan ha war an tu all ar Galon-Zakr. Roet eo bet d'o gant an Itron Lauay hag emeur en zell d'ober enor d'ezan dre oll e Vro, evel ma 'z eo bet gret en Peurit, rag er parouziou tro-dro e vo savet hepdale goueliou henvel ouz hini al Lestiven vraz.

Setu aman « eur salud » eus ar brava a zo bet savet da vaniel Pôtrede Peurit gant an abad Bescond.

### D'HON BANNIEL

Salud, Daniel duduz,  
D'imp eur prof madeleuz !  
Zalud Baniel alaouret, Baniel koant !  
Warnoud welomp hon faton Sant Ervoan :  
Eur gurunen lugeruz war e bean,  
Ervrized ar baradoz en e garc'hen.  
Ganet en hon farouz, er Genkiz,  
E pedo evidomp Peuridiz ;  
Ha ni, deuz hon c'hoste,  
« Henlho an hent a bleustre.  
Zalud Baniel binniget !  
Warnoud » welomp c'hoaz livet  
Ar Galon Zakr a Jezuz,  
Ar Galon garantezuz.  
Bet 'widomp treuzet, gouliet,  
Dispennet, draillhet, bruzunet,  
Kalon kaer evel an tarz-de,  
O strinkan flamm ar garante.  
Kalon,  
Ewit kalon !  
Karante,  
Ewit karante !  
Hon gir a roomp, na dislarfomp ket,  
Ni vo « kristenien ha Breizid bepred ! »  
Ouz ar berr, ouz ar gokarden zellet,  
Jezuz, ni a zo ho sondaerd  
Ha kalonek ni a stourmo,  
War an dachen bete maro,  
Evit Doue ha Breiz hon Bro !

..

Neuze e krogas « Noz ar gwadegennoù. » Fanch an amezek a oa ouz tol gant pemp mignon. Oc'h achui koan e oad, jistr dirake, o pakan ar c'hontellou, o lipat o beg, ha kaoz diwar-benn koan. Tri mab bihan da Fanch a oa er c'horn ouz an dol vihan oc'h ober o c'haoz ive zioulik. Allo, setu ar c'hoari « Domino » en e zav ouz an dol vraz, ar c'harto ouz an dol vihan. Greet a zo eur barti. Kanan brema. Setu ar « Menio Du », « Zon an Amann », kontaden « Al Iouarn Besk ».

Fanch a c'halv e bôtrede vihan. Unan a gân « Mamm ar Martolod » daou all « Zerr-Not ». Neuze etre e o-zri e kontont « Ar Sparfel hag an Estik ». Na oa den trist pa laran.

A-walc'h a ganouenno hag a gontadenno ! Stignet e eo eun aval en-pign, skoet eur c'hi-bouji ennan, ha laket an tîan war veg ar rousin. Hag int da droiata d'esa laeres an aval. Unan a boac'he e c'heno. Eun all e fri. Ha c'hoarz ! Tapet eo eur paour kez aval ha debret.

Neuze e kaner « Potr Plouvouskan » : Foei, foei war ar gwinn ardant, pa zo jistr mad en hon bro !

« Poanteo, emeint, mont 'trezeg ar gerpe vo ar vaz dreg an nor. » — Eun tal-danz arok mont, emeint, Hag int d'ober dans an ibihen, pevar kever ha kever. Eun ouz, eur c'hroc'hea war e c'houk, e dremen dre ar c'hreiz en eur soroc'h al pa dap bac'hado...

« Euz drinkaden, eme Fanch. » Hag en da gomz : « Chanx ha yec'hed d'imp digand Doue. Ze a zo ezom : Ha chomomp mignoued. N'eo ket bean ouz en em dispenn, ouz en em dikrian. Mignoued evel brema o kemer eun tammik plijadur en honestiz eur wech an amzer, gaud kontadenno, kanouenno ha c'hoario evel hon zud koz. Setu ar wir stumm d'en em diduan. Chomomp gwir vignoued

« Bugale Doue a die bepred,  
Evel breudeur en em garet. »

Hag al lien en traou. Achu d'ar pred ! Bremezomp e vo ar friko p'arrou « Job al lonker ».

..

Arru omp gant Job al Lonker. Anveout a ret anean. Job al Lonker an deuz « lonket » e oll beadra hag epad m'eman ewreg paour, sammet gant bec'h he glac'har, klavy da vervel war ha gwelo, e talc'h da lonka c'hoaz... gwinn kinkina a wreg, pa n'en deuz ken a winardant. Eul lizer a zigouez a-berz e vab a zo martolod, hag ennan eur

« mandat » ; ha Job dioustu gant e vignoued, lamponed eveltan, o vont da eva arc'hant e vab m'an euz evit louzou e wreg. Nag a choloni a on ti ! A-greiz-oll en em gav ar pôr yaouank : Fanch e galon pa wel e pe stad an euz e dad lakel an tîan e vezevanti villiget. Argas a ra ar vezvieren hag e dad rei e c'her na evo berad ken hiziviken Poan Job al Lonker a zistro d'e voutailh ; ar wreg a pôr a zo red d'ezan tec'hel diouz ar Vro gant ar wreg ar wreg laket war e oll vad, Job al Lonker e echu en dizenor e vuez a hallje bean ovurus hag e kollet, dre e faot, en eur em rei d'an evach.

Pa deu an dan d'en em vezvi,  
E skarz kement tra zo en ti.

Mad, yec'hed, enor, buc, hep konta e iue a viken !

Argo ar pez, an taboulimer, e hano Charles neuz roet an tenor eus Job. Ezetoc'h eo bet ar heuilh. Latanet eo hennez eus ar gwellan.

Setu hanoio ar c'hoarierien, naontek ane ; daou oa en tu-hont ; unan ewit kanan, eun all ewit 21 etrezé oll.

Job al Lonker, Charles BAIL, den yaouank,  
Yan, e dad, Per OMNES, eun den a 70 vla.  
Arzel, Erv.-Mari RAOU, den yaouank.  
Fanchik, Fiein AUFFRET.  
Bi., E.-M. HEUDEN, bugel.  
Perik, Eujen ROUX, bugel.  
Jobik Bodshao, H. BOURDONNEC, den yaouank.  
Per Baz-Yod, Marcel RANNOU, « »  
Loeis Disto, Josef MÉVEL, « »  
Guillou Mabedad, Franses HERVE, « »  
Biel Kaketu, Loeis HERVE, « »  
Bon Skoarnek, Sélestin COZ, « »  
Mih Garnek, Y.-Badezour THOMAS, « »  
An O. Litaven, Per EVEN, « »  
Franses, Josef BOURDONNEC, « »  
Gouc'hen, Emil YAOUANK, « »  
Stefan, Josef QUEVELOU, « »  
Ar Fakteur, Loeis HUEGRO, « »  
An Tabouliner, Charles GENTIL,  
Ar c'hanoer, F. GALEZ,  
An danser bihan, Erwan RANNOU.

Kreistore diou loden ar pez, an otro Gab Liskid, euz bet ar vadelez da gomz. E gomz diwar-benn Izel hag ar yaouankiz kristen a zo et d'ar galon. Ar pez an O. Lestic « eil-ver » an leuz trugarek bôtrede yaouank hag o beleien ha lare d'an dud dorn-ha-dorn gant ar veleien.

D'ac'hui eo bet kanet zont *Ma Boto Koat*. Hag ar Trugerd d'an oll evit an devez kaer-ze a vo dalc'hel ar zonz anezan er Vro !

EUR ZELLE.

### KERMARIA-SULARD EUR C'HIMIAL

Dont a ran, en hano parouziatis Kermaria, da gred diouz hon ferson mad an Otro Coadic, urzet gant Otro 'n Eskop da vont da bastor da Plouisy. Gant peb rann-galon na gimadomp ket diouz eur person ken a ha ken mad. Lezel a rey enpad pell amzer ar sonj d'ezan en hon zeuz. Evel m'an nevoa laret, brema e vo pebla, e oa deut aman da gerzet var roudou sant Erv. Evit gwir bean oa eur gwir bastor eveziant, an dalc'hmad eur gwir zoursi eus an ineon fiziet en e. Dont a reomp 'ta da laret trugare d'ean eus ar neuz gret en hon zeuz. Doue da rey d'ean yec'hed, hir ha nerz da genderc'hel, en e barouz neye, al labour neuz gret dalc'hmad aman ;

Gant glac'har bras 'n hon c'halono,  
Ni deuz da laret kenavo,  
Deur person a so bet 'n hon touez,  
Eur skouer a te, a garantez.

Gouelet d'ean, bugaligo,  
Dreist-holl bugale o fasko,  
Deur-pastor ken dous ha ken mad,  
A oa evidoc'h oll eun tad.

Ha c'hwî, re goz a zo dalc'hed,  
War ho kwele gant ar c'hlenved,  
Pedet evitan : na deuy ken  
D'ho frealzi en hoc'h anken.

Kenavo d'ac'h, Otro Person,  
Ho koll a ra d'imp poan-galon.  
Doue rey d'ac'h nerz ha bue  
Da reizan ho parouz neve.

Hon mouez a unanomp gant hini hon mignon varia-Sulard da drugarekaat an Aot. abad Coadic holl vad an deuz great en e barouz koz ha da heta an holl c'hraso an deuz ezom da ren kenkouls-all e neve. War a glevomp, an hini a zo bet galvet war da berson, Kervaria, na ouvese ger ebet a vrezonek gwir e vije !!! Poan hon euz ouz hen kredi !



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANHOÙ

Eur skoet ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar broioù estren evit ar Broioù Keltek.

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furvez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar galleg eo ato a Vreiz.  
Furvez ar Geiz.

Dalc'hil begred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'hel,  
Gouezh ar Vez, e ve Feiz-hell.  
MILIV.

## SEKIVANIBERION

Kas ar labourioù pe g'an Odro VALLEE, Romer, vi Zant-Benedi, Zant-Briek.  
pe g'an Odro MOAL, Sarsanvier, vi. k. Charnet, Zant-Briek.

## EMBARNOU-KONVEZ

Tri gweinek pep aroudenad-skritur.  
(Dilekenn a breiz evit maez a embanno diouot-fo).

## ALUZENNOU DIGANT HON LENNERIEN

Digant an Aot. Coroller, eus Kiplin... 8 real.

## Eur gwall-dol c'hoaz skoet gant ar gouarnamant ouz ar brezonek hag ar veleien

Na skviz ket potred ar gouarnamant o skei gant ar veleien hag ar brezonek. Evel ma lare hon mignon ar Yezder ar zùn dremenet, mouget eo an dud-ze gant eur sort koumar diaquek ouz hon Bro, ouz hon Brezonek hag ouz hon Peiz. Seta c'hoaz unan eus hon beleien vad skoet gant en abeg ma ra hen e diad a veleg-breton o kentelie en yez ar Vro an eneon fiziet entre e zaouarn gant an Aotro Doue. An aotro Huonic a Brat an hini eo. Enor d'ezhañ ha miñ m'alloz ha dispriz d'an haillioned dizoue ha divrezonek o deuz laeret e bac digantan!

## Enor ha Trugare da « Botred Boulvriak! »

A gora war roudoù potred Peuriz ar Roc'h.

### Aotro Renet,

Earuz ou, dihunet eo Breiz! Greomp d'ezhi kerzout dremañ. Duman, en Boulvriak, e oa de Veturz-Fask eur gouel kaer, gouel tud ar « Cercle Catholique. » D'an oteren e oa kanet eur c'hantik breton, ha da fin meren hon mignon Barz-Zant-Briek ac'h evaz da Vreiz-Izal.

Eus an abarde o peizo-Teatr. Al lec'h-c'hoari kempennet gant daou veleg-yaouank a Voulvriak a oa koant.

Ar gentan gwech ma sayaz ar ridoz e oe gwelet war an teatr eur c'hoarier hanvet *Fanch Kover*, deut d'achui d'imp e veach Pariz, met siouaz! e wreg Mari-Jañ a denaz re brim da glask anean. Goude e teuz war an teatr daou bôtr bihan eus ar skol gristen a ganaz d'imp *An daou bugel hez*. Deut e oa ar mare da zisplegan ar pez-braz : « *Paour hez Herri*, » c'hoari feutuz en daou arvest, kempennet gant ho mignon Barz-Zant-Briek. Aman reakin larout trugare da Galon-Dir a oa deut da gaerat hon gouel. Straket e oe an daouarn ha c'hoarzet oa bet, rag ar mah oa ken zod, hag an tad ken diskiant!

War-lerc'h neuze e oe c'hoariet *An distro eus Pariz*. Na c'hoarzed ken, mez pep-hini a oa trist, an « diviz » oa ken spontuz! Gwelet e oe e oa meur a fiton dare da zemplañ hag en em lakaz ar c'hoarierien da zisplegan adare treo feutuz.

Fin eo dre info 'vit an delz-ze, met da zul ar C'hasimodo a oe c'hoaz eur gouel bihan, gouel an tolenno. Hon c'hoarier mad a reaz d'imp gwelet brezel ar Boared. N'adounao hini eus ar re a oa eno ar c'homzo divezant : « Ni, evel ar Boared, difennomp hon frankiz enep d'ar Zaouarn ha, ma tenout d'hon gwaskao, enep d'ar C'hallaoued divrezonek ha dizoue! »

## AN ASURANZ TUD

Pluen, ma fluennik, pelec'h oud? Arru oud melget, 'meuz aon? Na vi ken kuit-all hep mont da vegata liou da ledek war ar paper. Deuz aman, pluennik, gwellan a ouffen da gaout ewid didui ma amzer, an-dro edarre!

Bech d'ell! Goude-bean-piest eur pennad gant al labourioù-deuar, epp' arru, a gav d'in, gaud an emgleio, ar breuzio, ar Syndikajo, mar keret, a dle an tuden (menajerien) sevel an de herie ewid en em zikour. Nag a hini na hallje ket

sevel e chonk hepde! Da nag a hini na zezelaje ket ma tapjo an emgleio-ze diwan en hon zouez ha dont da vad! Ha dont a reint mar har an tuden en em glevet. En em glevet int da asuri o c'hezek, resped d'ac'h, lennerien. N'eo ket diesoc'h tamm a-bed en em glevet ewid asuri o loaned-all, evit asuri ozud, ewid en em asuri ouz an tan-gwall, Doue da virol en em glevet da zevel eur c'hef da zikour an tuden foulet pe neve out da zikour (menaji) da breuan temz, binvio-labour hag all, en em glevet d'halloù gwernan o est hag o zreoajo priz val, ma ma-raje ket ar vac'hadourien yalc'h re vraz diwar o c'houst.

Pa na zouisi den deuz al labourerien, nemed da lipat o mouez digante, eur wech an amzer, nemed da waskan ane ha da zunan o bannac'hig gwad, al labourerien a dle da vihanan en em glevet etree ha bean dorn-ha-dorn. An tu krenv a zo gante mar karont. An danve bara a zeu deuz o farko ha deuz o grignello, an aman, al lez, an no hag an treo-all a zeu-deuz o zisgoso.

N'eo ket dleat d'e, d'an dud vad-ze, o c'hoazez deuz eil penn an de d'egile, bean diandin dreid kement-lost-pik-manchog-pagot-koillier-zou-tok-foez-hir-krag-otro-divroad a wigouro dre Vreiz. Kalon-ha-kalon, dorn-ha-dorn, ela, tud vad diwar ar mez, gwellan tud a zo c'hoaz er virol! En em garet, en em zikourer. Na bouzfer da zon ar zon-ze d'ac'h ken ma vefet gwelet unanet gant chadenno ar breuzio, an emgleio, an asuranso, ar Syndikajo.

Demp d'an asuranz tud herie. Hag en eo eun dra red? Ya, ha red mad pa larant! Sefet! Setu aze eun amezek, enn den a feson, eun den, c'hoant bevan d'ean ha na rafte ket eur gwenegad drouk-dispign, eun tammik mereri, eun anevad pe daon gantan. An devez a zo gantan. O torann e dammig est aman. Hen a zo o voetan ar mekanik, an dornerez. Ezom 'neuz da dech'el. Laret a ra d'e yavel a zo o tispakan d'ean, yaouank, ha n'ave ket c'hoaz an oll labourio, rei eun toullad machenno d'an dorn o yonal gant an naon. « Tol ple emean, da zouarn. » Ha d'an hini a zo o lakat war an dol e lar : « Na roet ket a fojanao ken ma vin arru. » Ha d'ar c'haser : « Douz, douz, tol-frap a-bed ». Hag hen da dech'el, dienech. An dorn a denn gantan, ar mekanik a zo ezet-ezet da voetan. N'eo ket tec'het mad, « O ma Doue! C'ho! c'ho! kaser, gros d'ar c'hefek chom eta! » Dorn an den yaouank a zo o debrel, minset gant ar mekanik. Arru eo an tamm anean en hinjerez, plouz. Arru eo tud ar feur da welet. Ar paour kez a dap eur falladen. Mont a reer da digemen d'ar medesin. Arru eo. Stanket eo ar gwad. Red e vo lakat eur vreiz houarn d'ean. E dud a zo pik eun tammik. Eur gwall-dornad ar'eant a c'houlont. Ar mestri n'eo ket asaret. Ar werz arru war e gein. Chetu-han rivinet krenn ha red d'ean mont da devejeta. Koulskoude war-benn eun toullad blaio, ma vije bet bolante Doue d'an treo da gordan gantan, e vije bet krenv ar bed gantan hag ezet d'ean mont d'eur vereri vrasoc'h.

'Chanta lennerien, ma vije het asaret an den mad-man, an asuranz an nije-harzet ouz ar c'holl. Roet e vije bet d'ar mevel ar pez a vije dleat. Koust a-bed, koll a-bed d'ar mestri!

Gwelet a ret, eta, eo red ha red mad an asuranz-man. Ma Doue ar varz a zo o tout en-dro dalc'hmad, bemde, bemnoz, tu pe du! Evel-se eman ar bed aboc' pech'ed hon zad kentan. Ar c'holl, ar drougio, an darvoudou, an tapadenno eo freuz disantidigez pe bec'ed hon zad kentan, ha freuz hon fe-hejo-ni ive, ziouaz! Gout a v'rouc'h « Ar breuz a artu abred pe diwead, er bed-man pe er bed-all. » Evuruz omp c'hoaz pan arru er bed-man! Hag a-wecho e lez an Odro Doue drougio da goean warnomp kement ha gwelet ha servijerien vad omp, par, troet evel an den zantel Job da gemer deuz e zorn ar boan kentoulz hag an evurusted, ar c'holl kentoulz hag ar made ha da laret dalc'hmad : « Doue da vezo meulet! »

Asuri eta oll dud pep tiegez. Ar c'hoarier an gwellan! « Well eo eun tol arbek ewid daou war-lerc'h. » Keud ha ve dalc'hmad war-lerc'h! Disul e welfomp gant pion en em arri! Ken disul!

EUR MIGNON.

GOULENN e bureo ar Groaz : Gouezhioù sant Eriean, al Labourioù sant Milio, sant Kover, hag all. Eur gweinek ar pez.

## ZON AN AMANN

O vale war ar meaz an de-all ar beure. Ma c'halonik joaz 'zave 'trezeg Doue. O welet hego 'r gwe, ar parko, ar prajo. Livet, masetlet koant gant beuan ha bokedo.

Ervad, bleun, bokedo, lannefer, fesenno, Ruzelen o redik, pesked barz ar stario, Gliz-veura o sevel hag hec'hig o pario. A veule o Chouez-fo o giz, deuz o gwellan.

Me d'azai'n eur c'hoat 'wit galout evori. Done ha me hallje krenn hep ho medi? D'in, ho krouadur paour, a-vrean da ganap. Spered d'ho ansoù ha kalon d'ho karer.

Eun delen a dapan, dilezet, p'nevédet. Telen Yan ar Minouz 'n eur vered dastumet. Ha war an delan goz 'n em lakan da ganap. Eur ganoouen feutuz : klevet, klevet amep.

Du-hont 'welan 'n eur park eus dachen velehan ro. Ar zaoud 'zo en o blend, eno 'zo penri d'ru. « Lonkomp, lonkomp, eminet, goude e vandouilhoma. Ploumpomp, ploumpomp, eman korn mern o skour.

Ar zaoud a ya d'ar ger rond 'val barrikenn, O bronc tenn warno a fistr dre an hec'ho. — Plach, kamer da gelorn ha hast mont d'ho gotro. Ha te kemer dour tomm da skotan 'r poudezo. —

Al leaz eur wech zilet en eur beudez laket, War lein ar bank toset en korn an tan zavet. War-lerc'h ar beure ve tolet er ribod. — Deuz da skei er ribod, ribod endro, ma foit r —

Eun diwawenez en ti mar zo prebet, Leaz dreizi o yonal diouin ve tremaset. Gand leaz fresk gorret ar gwavan 've mesket. An amann 've welloc'h, al leaz 've ket ket treit.

Ribotet eo al leaz, an amann dastumet, Tenet deuz ar ribod, en eur bel goat laket. Pegen melen ha bras, pegen braz poloten! Honnez avad a dal eur dornad gweneien.

An amann dastumet, yenet barz an er vad, Loden a ve poezet ewit mont d'ar marc'had. 'N eur ouelan 'yey an ker abred al lun vintin, Ha mar tap dont d'ar ger, e tevio 'n eur c'hoarzin.

Loden a ve laket en eur goud da viret, Lagad ar zouben leaz e vo, eur wech rouzet ; Ledet war ar pouzmin, o gwellan krampeajo! Goude lipfen ma beg, ma c'hoik a froflez !

Loden 've kempennet war ar sikoupen goant, Gand beg al loa velen, finvet dre eun dorn skany. Ledet war var ar yod, meudet en toull lipouz, Na ve ket eur meuz fall gant eur bannac'h jistr doue.

Mar tenet d'am gwelet gand an daouzek deiz, 'Vo laket eur pez troc'h da fritan an no, C'hoi 'laro gant ho meud eur pez bara lez-vamma, Ha neuze 'po jistr mad da gas en fraez ho tamm.

Klevet, klevet, aman, c'hoi welan 'zo fotet, Ar melchon ru d'aman penoz e-hall-mouet? Tra kuzet larlet d'in, tra kuzet kement-ze, Eur mister eo d'an dud, d'an oll mad da Zoue!

EUR MIGNON

## Heligenta e-touez ar bôtred yaouank

Bean zo heligenta e-touez hon bôtred yaouank da skriva sonioù ha kanaouennoù o brezonek. Eur bern ane a zo digouezet gantimp eus a hep tu, ar zùn dremennet. Siouaz, re euk eo c'hoaz hon C'hoarier evit o moula oit. da vihana evit o moula diousta, rag o sell emomp d'hen ober hep dale pell! Eñ gortoz, trugare d'an obererrien ane : *Berz-Jan, Barz sant Briek, Roc ar Fur...* hec' an-kouarn ar *Barz Koz* an eur displeget ken kaer e « zistro er Vro! »

O ped anet, hep aon :  
 Hi zo mam d'as Salvar,  
 Lar d'ei da boan-galon,  
 Ar Werc'hez zo tener !  
 He daoulagad zavet  
 Hag he daouarn juntet  
 Gant karante a lar :  
 O bugel, me da gar !

## KANTIK ITRON-VARIA-GERBERNEZ

WAR DON : Ni ho salud, Stereden vbr.

DISKAN.

Gourezhez hon Mam, hon Romanez,  
 Itron-Varia-Gerbernez,  
 Klevet peden ho pugale,  
 Ha roet ho zikour d'ezet

Vel ma red warlerc'h e vammik  
 O bugel bihan, disterik,  
 Velse war-zu hon mam zantel  
 Hedomp da glask skoazel.

G ho skouden vinniget  
 Oll ez omp aman daoulinet,  
 Holl e c'houlennomp gant kalon  
 Bennoz ar Werc'hez, hon Itron !

An dudon paour war an donar,  
 N'o deuz nemed anken, glac'har ;  
 Mari, mam da Zalver ar bed,  
 Bezet oute true bepred !

Warnomp dimenz lein an Nenvou,  
 Teurvezet distrei ho zellou,  
 Groet ma kouezo evel ar gliz,  
 Mo krasou war bro ar Vreiziz.

Breiz-Izel he denz a-viskoaz  
 Karat ar Werc'hez he charaz ;  
 Dre-ze, en peb partron 'n hon bro,  
 E klevet meuli ho'h hano !

N'ankouset ket ar garante,  
 Hon denz holl evit mam Doue ;  
 Ha pa vefomp gwall-ankeniet,  
 O Gwerc'hez, n'hon dilezet ket !

Dilezet ket ar Vretoned,  
 Tud a galon, a lealded ;  
 Roet d'e 'vel en amzer goz,  
 Evrusted bemde, bemnoz.

Eur drezel didrue ha kri,  
 En hon bro 'zo groet ouzimp-ni ;  
 Eneb kantved ar falz-greden  
 Miret hon Breiz d'ar fe greden !

Laket en-kreiz ar vugale  
 Karante ha donjanz Doue ;  
 Roet furnez d'ar vam, d'an tad,  
 Da ren o ziegez ervad.

Laket dre-holl gwir unvaniez,  
 Peuc'h kristen, urz ha levezeg,  
 Ma laro peb unan 'n e di :  
 Trugare, d'ar Werc'hez Vari !

Diwar jijen koant-koant, ho roc'h,  
 Lec'h ma zeblantet d'imp kaeroc'h,  
 Drwallit mad tud Sant-Servez,  
 Dalc'hit sonj euz re Gerbernez.

Neuze enpad hon bugez,  
 Ni ho karo welloc'h Gwerc'hez ;  
 Da c'hortoz moned d'an Nenvou,  
 D'ho meuli gand hon C'hendadou !

AR YEODET.

Gouennet, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
 mignon Kladao :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gouroc'hemenn digant hon eskop breizad, an  
 Aot. 'n eskop Dabourg ; unan eus ar gwella hag an du-  
 giga leoriga bet skrivet e brezonek betekhen.

## GOUAREK

### KANVOU

Setu aman eur gwall-gelon hag a zo digouezet ganimp  
 re zivezad d'eo voula ar zun dremenet : Ar pevare a viz  
 gouere ec'h eo bet donaret, e bered Gouarek, an Itron ar  
 Moin.

Eviti da vean oadet kaer, e seblante chom pell c'hoaz  
 e'penn an tiegez e lec'h 'oa ken talvoudek ha ken karat !  
 Ar maro kriz a zo deuet 'vel eul laer, hag an euz hi diskaret  
 ha eun töl, e kreiz he labour, mez dre c'hras Doue, an  
 Itron ar Moin, eur gristenez deuz an dibab, a oa prest,  
 hag he deuz ben digemeret hep spont. Pebez frealzigedez  
 d'he zud glac'haret !

Eur hobl a dud, en o mesk kalz a velleien, a oa diredet  
 da bedi 'vit ine an itron vad-ze ha d'hi heuilh bete bered  
 goz Sant-Jili. Eno, ouz troad ar chapel hag e kichen eur  
 verc'h garet, e kousk he lun diyezant da c'hortoz de ar  
 varn. Ra vezo Doue gand he iue ! Hon gwella gouroc'hemo-  
 nou a genganvou a reomp d'he fried, d'he oll bugale, ha  
 dreist-oll, d'an Ao. Moin, kure Sant-Nikolaz.

## AR FALC'HERIEN

DISKAN.

Hep ! falc'herien ! deuit e an de,  
 Kasomp ar falc'h en dro fete.  
 En e logen, ar min lemmer !  
 Ra vo en t'remp gant pep falc'her !

Er prajeier e darv ar foenn,  
 Aru e poent d'ar falc'herien  
 War ar prat braz gourev 'nean,  
 En-kreiz an heol da dizec'han.

War ar wrimen en o c'hoaz,  
 Pev ar falc'her war an anne  
 A sko zeder gant ar morzol ;  
 Lemmoc'h e 'r falc'h goude pep töl.

Ar falc'herien, 'korf-o rochet,  
 Pleged en daou 'zo o falc'het,  
 Ha war o lerc'h ar yeot uhel  
 A zo laket en eun andel.

O c'heino paour a dev bemde  
 Dindan an heol ken didrue :  
 Mes eul lomm jistr gwech ha gwech all,  
 A lak o c'halon da dridal.

Gwelet o zal o tidouran  
 Dindan tomder an heol tomman ;  
 Mes o fevar int tud kalet,  
 Falc'het 'reont 'vel m'eo gleet.

'Maint o sevel o c'heine pleged,  
 Evit lemman ar falc'h dallet ;  
 O dremm bepred a zo laouen,  
 Daoust ma reont eul labour tenn.

Epad an de ar falc'herien  
 A ro bec'h ha gwall vec'h d'ar foenn ;  
 War o lerc'h, oh ! nag a andel  
 O tifretan gant an avel !

Tomder an de a zo kwest :  
 Ar falc'herien 'dalc'h da falc'het,  
 Ha bremazonn, aru zerr-noz,  
 E tiskwisfont 'n o gwele kloz.

Ho micher, falc'her, 'zo poanuz,  
 Mes bean e d'ac'h talvouduz ;  
 Ma westlet ho poan da Zoue,  
 E tigor d'ac'h dor an Ne.

EIL DISKAN.

'Vit an daou boz divezan :

Hep ! falc'herien, deuit e an noz :  
 Hastomp buhan mont da repos,  
 'Vit bean prest a-benn ar c'hoaz,  
 Da beurdroc'han foenn ar prat bras !

August AR BOURDONNEC,

Barz Plouillo en Skol-Vrezonek kolez Gouengamp.

## KERMARIA-SULARD Eur c'helou kaer.

Daoust petra zo a neve en parouz vihan Kermaria ?  
 An oll a zo war zav, bodennet-en-dro d'an iliz hag ebars en  
 Ue, evel o c'hortoz eun dra gaer bennag, liou ar levezeg a  
 zo var dremm pep-hini hag ar c'hoaz war o muzellou,  
 Petra 'ta a zo a gaer da velet ? Petra ?

Bugale Mari euz a Bontre a deuo hirie da bedi dirag  
 hon fatronez, an Itron-Varia-Sula ; laket o deus eun  
 ofern, evit tenna bennoz Doue war hon bro ha war an  
 iliz ken gwall-gaset en amzer a ren.

Aru hint, teir gweturiad a zo ane ; kanan 'reont a  
 greiz o c'halon ; mes siouaz en gallek e kanont ! N'eus  
 forz, en o c'halon hint a zo bepred bretonezed kalonek,  
 n'o deus ket a aon o tiskouel o fe dirag an oll. Enor d'eze !

Deut ec'h int eus a Bontre dindan remadurez an Otro  
 Dronion, kure Pontre, breizad kalonek mar zo, ha rener  
 d'eze breman ive, da bedi, evel am euz laret c'hoaz, dirag  
 skouden an Itron-Varia-Sula, hag, en tuhout, da welet o  
 rener koz, an Otro abad Talabardon, hon ferson mad.

An oferen a zo bet laret gant an Otro Talabardon,  
 person Kermaria, hag en-pad an oferen, ar merc'hedigou  
 kalonek nan int ket paouezet da ganan kantikou en enor  
 d'ar Werc'hez, pehini o deus kemeret evit o Mam, o  
 fatronez hag o difennouez enpad o bue ha dreist-oll en  
 eur eus o maro.

O merc'hedigou yaouank, bugale Mari, ho pet sonj  
 nan e ket c'houi ec'h eo ar re gentan o deus pleustret an  
 hent-se, evit dont beteg aman. Pell bras arog dirazoc'h  
 ive a zo tremenet re all, hag a zo hirie zent bras ebars an  
 Nenv ; ar re-ze eo santez Koupaia, he merc'h santez Seva,  
 hag hon duze santel, Franseza Amboaz, a renas gwej-all  
 var hon bro Breiz-Izel. Ar re-ze o deus gret an hent-se a  
 ret hirie, hag o deus kanet evelloc'h en enor d'ar Werc'  
 c'hez Vari.

Gwir mad ac'h e penoz santez Koupaia pe dremenjoec'h  
 abiou iliz Langoat he deus klevet ho kan dudius eus  
 gouede he be kaer, hag he deus pedet an Otro Doue da  
 skuilh warnoc'h e vennoz.

Ha c'houi, merc'hed yaouank parouz Kermaria, nat  
 oc'h ket ive ar re divean, bean ho peus an ehor da vean  
 bugale d'ar Werc'hez pan eo gwir ac'h e ho patronnez ha  
 c'hoas, en tuhout ma 'z oc'h bugale d'an Itron-Varia-Sula,  
 ez oc'h ive bugale d'an Itron-Varia-Wir-Sikour, gwestlet e  
 oa d'ez ar barouz oll gant eur pastor mad a chomo pell ar  
 sonj dioutan en hon zouez.

Ni zo da Vari 'n em westlet ;  
 Da Vari ni vezo bepred ;  
 Kanomp, eta, gant karante,  
 Mil meulodi da vam Doue.

Breman arök achui, e fell d'in laret trugare d'ar mer,  
 c'hed yaouank-ze, da vugale Mari eus Pontre, evit ar  
 skouer vad o deus roet d'imp-ni ive merc'hed yaouank  
 parouz Kermaria, ois hon lakat da garet gwelloc'h hon  
 fatronez, an Itron-Varia Sula. Trugare d'o rener mad an  
 O. abad Dronion, trugare d'hon ferson mad an O. Tala-  
 bardon a ra pep tra hag a lid ar gouliou kaeran evit  
 krenvad ar fe en kalon e barouzonis.

L. CHARRAN.

Itron-Varia-Sula, pedet evidomp.

Itron-Varia-Feunteunioù, pedet evidomp.

Gouennet e ti an Aotro Bernard, leorier e Kemper al

## Levr oferen latin ha brezonek

gant an Aotrou abad Gall ; ar gwella hini d'ar Vretoned  
 da heuilh an ofisou.

GOULENN e bureo ar Groaz ; Gwerziou sant Erwan, al  
 Labourer, sant Miltio, sant Koneri, hag all. Eur gwennek  
 ar pez.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
 En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.



# Kroaz ar Vretoned

## ROUMANANCHOU

Eur skoat ar bla, evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar broion estren evit ar Broto Helliek.

## SEKIV ANTERIEN

Eur ar labourer pe d'an Otrou VALLÉE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otrou MOAL, Skrivatier, 29, balli Chavner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep erouennad-akritter.  
(Diskenn a hris evit meur a embann diouez-to).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furver ar Gela.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek eo alio a Vreiz.  
Furver ar Gela.

Dalc'hil hepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo : ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Ver, o va Pa'het!  
MILIN.

Goulennit : **MA BEAJ JERUZALEM** ar bravann levr  
prizioù e brezonek Tregere.

## Potred Peurit e Lanvilin

Ar zul, tri-warn-ugent ar miz, potred Peurit a adroo o  
gouel en enor da Vreiz-Izel e Lanvilin. Ofenn-bred ha gous-  
pero war dou ar pardon. Deut oll d'ar gouel, Bretoned  
Lanvilin ha tro-dro! Bravo'h gouel na onfa'h ket da  
gavout. N'hon deuz ket da ober aman meulodi Potred  
Peurit gant o Rener mad, ar Mignon. Anavezet mad ec'h  
int... ha brudet ive dre Vreiz-Tregere a-bez. Deuet 'ta,  
oll Vretoned vad ar Vro, dho selaou ha d'en em voda  
en-dro d'ezel.

## EUR PEZ C'HOARI NEVE

Eur skouer-vad da heuilh. — Eul labour santel d'ober!

Ar pez-c'hoari neve-man a zo bet savet gant unan eus  
hag gwella barzed a Vreiz-Izel. Aotrou person Pleuveur.  
Eur tol-micher eo an deuz graet, rag diez e vije kavout  
gwelloc'h evit a zantes *Phitomena*. Henez eo hano ar  
pez, na ve ket kavet c'hoaz e li al leotier, o vean n'eo ket  
bet moulet; kaeroc'h avad evit a lenn e c'heller da ober,  
pen-e-gwir e c'hellfomp e zelaou, c'hoariet ma vo hepdale  
— ha c'hoariet eus ar c'hentan — gant merc'hed yaouank  
skol gristen Plezidy. An oll o deuz dalc'het sonj en Treg-  
erom hag er parozioù tro-dro eus ar peziou ken koant a  
o bet savet gant an Aotrou Joanno pa oa person  
eno. Galvet eus Tregere da berson Plezidy, an Aotrou  
Joanno an euz dalc'het gant an hent-se. Skoazellerien vad  
an deuz kavet : Aotrou kuzed Plezidy o deuz livet eun  
teatr kaer, mestrezed ar skol gristen o deuz kenteliet war  
ar pez ar vugale, hag ar re-man a zo dent, a-benn nebent  
amzer, da c'hoarierezed dispar. E Bro-Wened, zoken-hag a  
zo brudet evit he c'hoarierien, dreist-oll evit tref a dene-  
ridigez, dibad am euz klevet c'hoari kenkouz ha mer-  
e-hod yaouank Plezidy. Ouz o c'hlevet n'heller ket miret  
da vean teneret ha da skuiti daerou.

Setu annan en-herr doare ar pez : *Phitomena*, merc'h  
eur zous, a zo kristen hag a ren, e lez he zul, eur vuc lenn  
o-oberou a drugare. Netra koantoc'h evit he gwelod o rei  
kontelioù war al lezen gristen da vere'ed yaouank hodet  
en-dro d'ezel evel bokedo eur gurunen. Setu hi gwall-  
nochet : Galvet eo bet gant an impalaer Diokletian da  
vout d'e lez! Daoust petra a halfe bean war an hent o  
zout? Alo, an diaoul an euz sillete kalon an impalaer eur  
c'hoant direiz da gaout *Phitomena* da bried. Homan,  
gwehlet ganti he gwerohed da Zoue, a nac'h krenn rei  
hech asant, daoust da zaeiou he mam ha da c'honrdrouzou  
eun itron eus al lez, Matriona. Merzeriet ha brovet oll eo e  
c'hoarik d'ezel dre dorn ar bourreo hag e tigioue en-dro d'ar  
prizon, douget 'tre divrech' servijerezed ha dam-semplae.  
Yac'haet eo he gouliou d'ezel gant an elez. Ar Werc'hez a  
deu d'he frealzi hag e peurachu neuze he merzerent. He  
mam ha Matriona, sklerijennet en eun taol o spered gant  
ar c'hras, a dro ouz ar Gwir Doue.

Kement-se oll a ve displeget en eun doara dudius hag  
en eur brezonek a zo war eun dro reiz-mad hag eaz,  
c'houek ha freaz, hag a ra vad d'eur galon vreizad e gle-  
vet; ha kanaouennou a zo c'hoaz da varell an divia  
ha da zidnella ar zelaouerien.

C'hoariet a ve ar pez neve da de ar prizon evit kerent  
ar vugale hepken ha goude-se, da zul kenta ar miz eoz,  
evit an holl. Eur gouel kaer a vo, ma lar d'ezel, hag

ouspen tud vad Plesidy, ma garfe gwelet eun war eun dro  
oll veleion ha barzed Breiz-Izel.

Gwech all hon zadou koz, hag a oa furoc'h ha skiantoc'h  
koc'h evidomp, a ouie errad pegen dou e tisken e goueled  
ar galon ar wirione pa ve displeget en eur pez c'hoari.  
d'ei da 'n em ziskouez dre ze dirak na daoulagad, da  
gener eur c'hort, koule laret, ha da vevan disagomp. E  
lec'h re aliez, pa ve klevet hepken.

Ec'h a dre eur skouarn hag e leu dre eun all.

Gaut-se e oa ar c'hiz gwech-all da c'hoari ar Bastion da  
vare ar gouellion-Pask hag e oa, var a lere, gant sant  
Erwan, en e vaner Kervarzin, eur strollad c'hoarierezed. Ar  
re-man a oa, emichans, da lakaat a du ar speredou arog ma  
stagje ar zant da zigeri e gentelioù. Nag a vad a rafe d'ar  
Vro ha d'ar feiz ma vije adkroget gant ar c'hiz ken santel-  
ze! ma karfe hon barzed mont war roudou aotrou person  
Pleuveur, ha tenna da zavel peziou-c'hoari ar pep gwella  
eus ar c'hentelioù kaer a gaver en histor Breiz, an  
Aviel, ha bueo ar zant.

Komzet e ve dre-oll hirio eus sevel oberou-mad. Na  
wellan-me gwelloc'h hini da zavel evit hon teatr kristen  
*Breiz-Izel*. Henez hon stago mui ouz mui ha gwel ouz  
gwel ouz hon Bro, hon yez, hon gizion mad hag hon feiz.  
Neuze 'ta, barzed ha leleion Breiz, deut oll da Blezidy  
hag eno kemerit... diduamant da genta, hag ive kentel evit  
rei dorn da adzavel en Breiz-Tregere, da hent an Aotroue  
Joanno, Bescond, ha Deniel, hon teatr gwechall, pe gen-  
teoc'h eun teatr gwelloc'h ha kaeroc'h ha galloudusoc'h  
c'hoaz ive eget an hini koz, bravaet ma vo gant oberou  
barzed gwiziek ha santel vel an Aotrou Coguic, a zo o  
paouez diskouez an hent ha rei ar skouer-vad. An teatr-  
ze a vo en gwirione, en hon Breiz-Izel, gwella harp ar Vro  
hag ar Feiz!

*Evel-se bezet graet.*

## Bin, Belaon... Baon!

Ar c'hoac'had hentan da c'heleol oll zoudarded  
yaouank Tregere (Tregere vraz ha Tregere cihan) ha  
Gwelo da Lanuon, d'ar Retred a zigoro ar meur  
d'abarde ar 6 a viz Gouegolo.

Allo potred! War droad, hec'h chom da varc'hata! En  
em glevet da zout. Tolet ple da c'houtan. Ewidoc'h eo ar  
Retred. En zell e veer ac'hanoc'h. Dorejo ar Gouent-Neve  
a vo digor frank.

Jezus, ho miguon mad, gwellan mignon an dud  
yaouank, a zo du-hont o c'hortoz anoc'h. Fell a ra d'Ean  
dastum anoc'h oll arok ma k'witafet ar vro. Nag a stad na  
vo ket ennan pan arrufet! Eur gozeaden an euz d'ober  
ganac'h. Alio mad da rei d'ac'h, evel an deneran mamm  
d'he bugale, graso ha zikourio e-leiz. Anaont a ra anoc'h  
hag hoc'h ezomo ewit gallout ren mad bue riskuz eur  
zouard.

Fell a ra da Jezus penoz c'honi, tud yaouank, e zou-  
darded ar muian kalonek, a ve ive gwellan zoudarded ar  
vro. « Ar gwellan kristenien, ar gwellan zoudarded. »

Ho Mamm garet Itron-Varia-an-Arme a zo du-hont ive  
en gortoz d'ober anoudegez ganac'h. C'hoantat a ra diskoe  
d'ac'h he madelez ma lakafet ho fiaz enni, ma pedfet  
anez d'ho libad diouz ar boan ha diouz ar pecho a vo  
stignet stank war hoc'h hent. Ken ewid an deol!... Bin,  
Belaon... Baon!...

## AL LIN DU

Peder eo anez! Ah! ma Doue! « Ma Doue roet d'in  
ar c'hraz n'hoec'h ofansin biken! » Ah! Cha! Cha! Aho  
eul lamp junt emez! Na c'hoaz ket da diviz gant da  
devercher-penn beteg gont na dastumfe anoud d'ober eun  
lin-all. Emes, emez eus da linsello! Lin du, danve  
linsello se d'ober arog mont d'ez labour.

An Arjeluz! Nehon, n'eman ket diwead Zant Per o  
fidourtan, nag ar regester ive. Gwisket eo ma zamma  
dilhad, laret eur bater verr, da c'hortoz an hini hirt, an  
hini a ve laret gant an oll war an dro, noz-veure.

Sell, eur zont o tremen dre ma spered. Aze tost d'ar  
bourk e zo eur vilin. N'eo ket krog da zont en-dro c'hoaz.  
Aze e vin peuc'h ha didrouz o'ubuni ma c'huden. War  
henn ma vo grest al labour veure hag ozeit lein e vo ahu.  
Allo buhan! O, 'vin ket pell; ar vilin a laro d'in gir  
ewit gir petra da lakat. N'am mo d'ober nemet skrivan.  
Ha me em c'hoaze 'meak eur c'harjad halek, dirag  
blenenno elestr ar stang. Paour kez koukou! Eet oud emez  
ar vro! Na deui ket herie da lemmi ma zammik spered  
gant da ganouenn. Aboe goul Yan oud eet e-kwit. Ken  
zadorn ar Bleunio da via d'abarde. Neuze e tistroi adarre  
da goat Malane.

« Zadorn ar Bleunio d'abarde,  
E kouk ar Gonkon en kost Malane. »

Estik a-bed ive war-dro. Ziousaz, n'omp ket aman en  
bro ar c'hoad. An tar-moualc'h a gav d'in, a zo manet da  
gouket herie. Demp war-rog hepred.

Tennet eo al lin. Pradet eo d'ogan war e vamm pe  
divoret war eur prad-all. Daou pe dri devez goude pa ve  
bet zec'het mad, me garfe gwelet eur bannac'hik glao c  
tont. Neuze avad ec'h ogfe al lin prim ha prim. Ar gliz  
veure a ve pell oc'h ober labour eur barr-dour, goude trei  
ha distrei aliez-aliez, abred-abred, arog ma ve bet an heoj  
o lipat ar c'hilzen. Ar yeoten a ev ar c'hilzen-ze hag a ro  
takenno d'ar gorzen-lin. A daken, a daken, e tap mevi,  
mezevenni, batorli. Derc'h a-bed kent Na troad, na gant  
Og eve. Lampat a rey ar c'harach diwar al lanvaz gant  
palufen ar mekanik. Kalz muioc'h dilabour eo lpa ve  
gallet ogan al lin war ar prad. N'euz nemed eun dra fiag a  
zispilje d'in gant an ogan war ar prad. Atozan trei, dis-  
pakan ha diboloti al lin gant an dorn. Ha, koulskoude,  
e ve red ober eur wech pe diou. Rag an dornad den d'en  
em dastom. Darn eus linneuo an dornad o kad rust o  
gwele pe yen, en em vout war ar re-all, ha n'hall ken  
lagad an heol arruout da rouzan o c'hroc'hed da chanch o  
lion d'e. Ha mar n'arrufe ket an dorn eno, e ve yel  
lanvaz. Da laret eo meur a lion d'ean, amlivet. Na  
c'hoarfe ket ouz ar marc'hadour hag e ve tolet an traou  
diwar ar briz. Red eo, eta, mont da drei al lin gant an  
dorn. Me am me drouk kein, zellet, ken, paneret d'ar  
hoan, e larten e ven hep kein. Kaer am me tapet eur  
sinturen, eur gouriz, ha ma dorn gwech ha gwech-all war  
ma c'hoazell, servij ket!

Martez e ma vije aze unan bennag dent war an douar  
enep d'e izili d'ozan an drouzel d'in, martez e save ar  
hoan diwarnon. Ha neuze, fe, red eo kaout eun tamm  
bennag ive pan eo gwir, ziousaz, e zo die da baeon ewid ar  
pechejo. Well eo eur barr drouk kein pe daou da ze  
ewid nan eo eun elven disterau eus tan ar Purgatoar!

Zoken gant ar blavejo zec'h na ve ket red lakit lin en  
dour. Na ve ket zentel ouz an tamm paper a deus aze  
eun toullad blavejo a zo da laret kas an lin d'an dour  
(d'ar gwajo-ogerezed, n'eo ket d'ar stero, d'ar riviere;  
lac'het e vije ar peaked) ewit lac'han ar poull. Al labou-  
rierien lin a vije stad enne. An fiik a zell ive ouz al labour  
ha red d'ean, ober pan eo bihan e dud. Dastum al lin  
diwar ar prad dindan eun toullad deio, revellat, kas d'an  
dour, adpradan, trei ha adrive, zavel awecho pan arvue  
eur barr amzer-fall hag owalch al lin, nag a labour  
na oa ket, en kichen breman na ve d'ober nemet trei,  
dastum ha revellat!

Paour kez gwajo-ogerezed, eet eo ar bed da fall ga-  
nac'h, tremenet eo ar c'hiz anoc'h, n'houlier ken diouac'h.  
Manet eo ar billo ennoc'h. Arru oc'h karget a fank, a  
vailh hag a veler (a greson), hag a gegiz. — « Fe, n'oc'h  
ket finoc'h ewit-se, emez, faez! Mar karjech ho pje  
eun tammad a demz diganimp ha meur a fritaden zilho!  
— « Ma zad, eme ar pötr bihan, na vo ket karzet « Gwajo-  
an-Non » c'hoaz-mac'h in da dapet zilho, da zilfa! —  
« Ya, kanfard, ma c'hoaz da neuiz plas kousket, ha den

# AR BARZ « TALDIR »

Eun dud eo tremen dre voutkou Breiz-Izel,  
En traoniennou sioulik, kouls ha war an luell ;  
Na glevet mui ken kan nemed sonion Taldir,  
A veul dirag an oll ar Vro, ar Yez, ar Gwir.

Krec'hennou Breiz-Izel o devez an dersion !  
Ar roier gwenn a frailh en aochou, er blanen. ?  
Perak, Menez Aro, perak ec'h eur krenet ?  
Ha c'houi, tarziqu ar mor, perak oc'h eur krozet ?

Klevet o deuz limad mouez nervez ar Varzed,  
O c'heler d'an arpad ar Vreiziz bualed ;  
Ha brema int faoued, hep-hini en o giz,  
O c'hedal ma paco warno ar gwir frankiz !

Pa zôn an hanter-noz, anann ar Varzed koz  
A zired var-zu Breiz d'amez o baradoz.  
Eur wech, sonj mad am euz, eont dre-dostik d'in,  
Hag a klevig mad sur laoz Gwene'hlan ha Mersin !

Gwene'hlan a lavaro d'e gowroad Mersin ;  
« Petra eo kement-ma ? Petra zo laret d'in ?  
« Be 'z euz brema e Breiz eur Barz brudet, Taldir,  
« A ve treac'h d'eomp zoken ?... Lavar hag hon-ee gwir ? »

— « Ze, dre va feiz, zo gwir ! Abaous hon amzer,  
« N'oa kleret en Arvor eun delen ken tenet !  
« Breiz-Izel, hor bro goant, kousket, evel-maro,  
« O selaou ar Varzed d'ar vuez a ziro... »

Barz kalonek Taldir, te a zav sonn, huell,  
Banniel hor-bro garet, banniel gwenn Breiz-Izel !  
Da c'horn-boud arm a zôn nerz bras er pellder,  
O c'hervel ar Vreiziz da glask o c'hitezeir !

E gwirionez, te eo ar c'habiten dispoant,  
Bepred et-tec'h ma kav ar vailhantiz ha c'houtin ;  
Dirag pou na skwizet tamm ebet na dermez,  
Pa zo da labourat evit Breiz hag he yez !

Sablantout a ra d'in klevet an defen dir,  
Etre da zaouarn-glan, o sou 'tal ar menhir...  
He c'hitemmou treguz a ya 'dreuz d'am c'halon ;  
Petra zo, o Taldir, mar deo ker siklent da zou ?

Gwelet a ran Breiziz a Leon, a Dreger,  
A Gerne, a Weup, bodet hervez da c'her ;  
O selaou euz da vouez Breiz a zo dihonek,  
Ema var zav brema pa ec'h euz he galvell !

Lar, o Barz benniget, petra zo da ober,  
'Vit sevel adare Arvorik, hor bro ger.  
An oll euz da zelou a gerzo kalonek  
War da roudou santel, daoust ha ma vent dreinek...

Da hano, braz meurbed, a c'henoù da c'henoù,  
Gonde ma vi maro a dreuzo 'r c'hantvejou,  
Meulet ha benniget evel ma 'z eo dleat  
Evit ar vad az peuz da Vreiz-Izel rentet !

KLAODA.

## EUL LEVR DA BRENA

« Eo Menez veier Plougastel gant hon mignon Klaoda,  
Hepdale e vo moulet aman eul lizer a veuloudegez bet  
skrivet diwar e benn gant hon c'henvroad karet, an Aot.  
'n Eskop Dabourg. »

## KRISTEN BEPRED

Savet d'an hailloned o deuz gwall-labecet eur groaz  
en Pleual.

En desped d'an hailloned,  
Bretoned, ni a bedo,  
Dirak kstvar hon Zalver benniget,  
Keit ha ma pado.

Pa vo eur greaz diskaret,  
Bretoned, ni a gavo  
Skouden zent hag aled ;  
Diraze ni a bedo !

Pa vo skouden ar zent koachet,  
Ni na gavomp nebra,  
Nemet an astro hag ar stered ;  
Dindsane ni a bedo gant joa !

Dindan ar stered ni a bedo,  
Hailloned digar ha dispered ;  
Biken c'houi a dspo an astro,  
O distaget euz gallet !

EUN POER VAOUANE

eur strollad euz Breiz-Izel

# UNVANIEZ MERCHED FRANS

## SON MERCHED BREIZ-IZEL

Savet evit ar merc'hed Breiz o deuz sentet euz mouez  
an Tad Marescal euz en em voda evit difenn ar Peiz  
hag ar Vro.

VAR DON : Kan bale tud Breiz (Taldir.)

Eus an Arvor betek lein ar meneg  
E pob kalon ez euz entroz,  
War Vreiz-Izel an amzer 'zo tonval ;  
Koumout a zao 'var-zu Bro-C'hall :  
« Mez gwall-amzer ne spontaz biken  
Kalonou tud Breiz, kalonou kristen. »

« Wel an dero ya'ch ha don'e gwirion !  
« Ne ra van euz an svelion,  
« Ar Groaz aman a zo sôn en he za,  
« Ar re 'deuz c'hoant d'ho dismanta  
« Holl en o za, evit he difenn,  
« A gavo bodet ar merc'hed kristen. »

D'hon bugale ar brezel diskleriet  
A-bez eul lezen embannet  
Gant an dud fall a enep pob justis,  
A zo eun dra euzus, iski :  
« Mez en desped d'ezo, d'o lezen,  
« Hon bugaligo a jomo kristen. »

Koll o amzer a ray an dud dfeiz  
Eun-dra ma vo merc'hed e Breiz ;  
Koz ha yaouank ni labouro bepred,  
Er gwir garantez unanet :  
« Tokou giz kear kouls a keffou gwen  
« Holl onp c'hoarezet, holl-merc'hed kristen ! »

Leanezid kaez, rahad d'ec'h gouela,  
Dont a ray an heol da bara ;  
« Pa vo skabet ar gwall-varrad arno  
« Gant avel ya'ch al Libertie,  
« Pa va euz deiz torret hon jaden,  
« Ni a reno d'ec'h ho skolioù kristen. »

Enep Satan hag e frammasonet,  
War hon banniel hon euz skrivet :  
« Beid Doue, ar Frans, al Libertie !  
« Niveruz braz eo hon arme ;  
« Plaga a ranko hon enebourien  
« Gant Unvaniez ar merc'hed kristen. »

## EUR C'HANV

Pedennon hon lennerien a c'houlennomp evit ene euz  
mignon, eur pèr yaouank a naontek vloaz euz Montrou-  
lez a zo bet marvet dre zervoud o konezan diwar eur  
march-houarn. Niz e oa d'ar C'hoar Mari-Anjelina, leanez  
eus ar Spered-Santel, a gar kement ar brezonek hag ar Vro  
hag a zo o tiski brezonek Bro-Geumri evit mout di pa vo  
bet argaset euz ar Vro-man. Eur gwall-goll hag euz gwall  
gony evit al leanez vad hag he zitegez ! Pedomp evit ma vo  
Doue gant ene an hini a zo o paouez marvet hag evit ma  
roio fealidigez d'e dud glac'haret.

## TONIOU BREIZ-IZEL

Toniu Breiz-Izel eo ar re vevan a oullfed da gavout.  
Kement-se hon deuz laret ha diskouezet meur a wech  
aman war Groaz ar Vretoned hag an holl he goar er vad  
bremen. N'e ket en Breiz hepken, er broiou pellan zoken  
e ve graet stad leus toniou ar Vretoned. En Paris, eun  
den brudet dre ar bed-oll evit e wizegez war an toniou-  
kaman, an aotro Bourgaill-Daoudray an euz savet  
leorion ha displeget prezegennoù da veuli toniou ha ka-  
naouennou hon Bro-C'hoariet zo bet ar zun dremenet,  
aman en ti-ker Sant-Briek, eun teskad toniou dastumet  
e Breiz hag e Bro-Geumri ha kempennet gantan.

Eun dud eo — hag eun enor ive evidomp-ni, Breto-  
ned, — gwelet hon toniou Breiz meulet evel-se gant tud  
vrudet, ha c'hoariet gant muzisioned arontet dirag eur  
vodadeg a vourc'hizien na skwizont ket o straka o daouarn  
oute. Dalc'homp, eta, ya dalc'homp stard d'hon toniou  
kenkouls ha d'hon yezt... Euz c'helou mad evit ar ga-  
nerien. Emañ Kroaz ar Vretoned o paouez prena noten-  
nou-kana e plom, d'ei da c'hallont mouls gante hizviken  
kement ton a vo digaset aman gant he lennerien.

# ARZUR A VREIZ

Trejedion o pomp Arvest, tennet euz histor Breiz  
GAND KLAODA.

## HANOIOU AR C'HOARIERIEN

- ARZUR I<sup>o</sup>, duk a Vreiz-Izel.
- FILIP-AUGUST, roue Bro-C'hall.
- LOIZ A VRO-CHALL, mab Filip-August.
- YANN-DILEVE, roue Bro-Zaoz.
- LAN A ZINAN, mestr heleñner Arzur.
- HERVE A LEON.
- GWIDOMAR A LEON,
- LAN A ROHAN,
- LAOU A LOBEAT,
- PEAN A VALESTROA,
- LAOU A REIER, seneschal euz ar Poatou.
- KEROMAN, den a fians an duk Arzur, e Roazon.
- OLIER, mab Keroman, skoueder Arzur.
- EUD A VOUGOON,
- HERVE A NEVER,
- EOR BAIZ-BALERN.
- HUBERT A VURG, mirer kastell Calais.
- LYONNEL, mab Hubert.
- PER A VOLAK, skoueder Yann-Dileve.
- ANDROCH,
- ALAB,
- ALMERIC, hapiten ar Goardou.
- EUN EMBANNER A VREZEL.
- TEUZ HERRI II PLANTAGALAN.

dijentit a Vreiz-Izel.

dijentit gall.

Dijentit, Floc'hed, Meelien, Skouderien (Ecuyers),  
Soudarded vretou, Soudarded gall, Saoton, Koue-  
riaded (tud diwan ar maez) vretou.

## KEMENT-MA A DREMEN ETRE 1201 HA 1203

- I<sup>o</sup> ARVEST. — Ar Gurunidigez, e palez an Duked,  
e Roazon.
- II<sup>o</sup> ARVEST. — Digemer eur marc'hek, e tellen Fi-  
lip August.
- III<sup>o</sup> ARVEST. — An Drubarderez e kamp Arzur,  
dirag Mirebo.
- IV<sup>o</sup> ARVEST. — Ar Prizounier e kastell Galais.
- V<sup>o</sup> ARVEST. — Ar Muntr, tostig da dour Rouen.

## ARVEST KENTA

Doare an teatr. — Eur zal euz palez an duk e  
Roazon. — En douder, porchedou ; war ar c'hostezioù  
doriou gwirion a c'heller da zigeri. — En tu kleiz e  
treser eur gador evit an Duk. — Skouejou dijentit  
Breiz a zo renket en-dro d'ar zal.

## KENTA DIVIZ

Keroman. Olier, Floc'hed, Servicherien.  
(Pa zaver ar ridoj, eur mevel kennag a chan da zresa  
hador an Duk ha da gempen ar zal).

Keroman. — Renaod, ha c'houi, Hug, ledit ar pallen-  
ma var bazennou an trôn, ha taolit evez ma vo kaset ar  
bokedou da zal ar fest. (Da Olier pehini a deu er zal  
dre an nor zeou). Hag oud dirzo, va mab ?

Olier. — Ya, va zad. Dont a ran rag-eun euz an iliz-  
veur. Prestik ec'h echuo al lidou ; an dud a oa o vont  
d'en em lakat en hent, pa en deuz an duk yaouank.  
(Doue r'e vennigo !) galvet ac'hanon en e gichen : « Den  
yaouank, emezan, eur c'hanvad a deu betek ennon evit  
lavaret d'in eo eru Yann, va eotr. Kea ban d'am zi, ha  
lav ar d'az tad pourchas peb tra evit e zigemeret. »

Keroman. — An Duk Yann-Dileve... ama !

Olier. — N'ema ket c'hoaz, va zad ; med erru eo war  
henchou an Normandi, rak ac'hano e teu. E vanniell hag  
armou e zoudarded a c'helle beza gwelet diwar gern an  
tour.

Keroman. — Petra da lavaret euz eur seurt gweladen,  
p'eo gwir n'edot ket var c'hed anezan ? N'ouzon ket pe  
seurt abek a c'hell digas aman breur Richar a Vro-Zaoz.  
Ra vo Doue gand e ene ! (Ar mevelien a ya er-meaz dre  
an tu deou).

Olier. — Va zad, ha kamchou an duk Yann-Dileve,  
prest int ?

(Da heuilh).

KLAODA.

Ar pezh-mañ a vo euz ar c'haeran. Pedit a reomp ar  
bôted yaouank o dije c'hoant d'e zishi dre 'n euz ha  
d'e c'hoari da vret o c'hoaz ar Vretoned. A benn daou  
pe dri mis e vo bet moulet pen-da-benn hag e vo neuz  
padra d'ober eur c'halier bras da zishi o roll. Er re  
a dezo miret ar fethenneg.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoad ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar breizh c'henn evit ar Bro-C'hall.

## SKRIVANTERED

Kas al labourioù pe d'an Otre VALLEE, Renor, ru Zant-Bened, Zant-Briek.  
pe d'an Otre MOAL, S'vicanier, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBARNOU-KORVERE

Ti gwennek pap vrasenned-skritur.  
(Diskenn a breiz evit meur a embenn d'ous-tog)

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar eo Breiz.  
Furvez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar galleg ez alio a Vreiz.  
Furvez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'hat,  
Ouspenn ar Yez, o ve Pec'haji!  
MILIN.

Goulannet, e Ti Prud'homme, levr neva hon  
mignon Klaoda :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant euz lizez-gourc'hemenn digant hon eskop breizad, an  
Aot. n eskop Dubourg ; unan euz ar gwella hag an du-  
diusa leorioù bet skrivet e brezonek betekhen.

## GOUEL SANT ERWAN

Ar zûn-man eo e tigouez gouel sant Erwan. Ho pet  
sonj, Kenvroiz ker, n'eo ket bet sant Erwan eur zaot braz  
hepken. Sant Erwan, ouспен ma oa eur zant braz, a oa ive  
eur Breton kalonek, eur gwir-Vreizad, hag a diefe ke-  
ment-hini an euz an honor da zongen an liano santel a  
Vreizad kemer da skoner a garante-vro. Sant Erwan eo an  
euz savet ar gwella hag an talvoudusa levr bet skrivet e  
brezonek biskoaz : *Buc sent Breiz*. Al levr-ze an nevoa  
skidvet e brezonek evit ma vije lennet e Breiz hepken  
hag evit ma touje da vean evel hon breviel hag hon levr-  
doar d'imp-ni oll Bretoned, d'imp-ni, dre skouerioù hon  
zent koz : o deuz savet Breiz-Izel e da c'hallout disti  
pegen kaer ha dispard eo hon c'halvedigez evel pobl ha  
pegen braz d'ead eo d'imp det'chel d'ar c'halvedigez-ze,  
en eur der'chel d'hon Bro, d'hon Yez, d'hon gizioù, d'hon  
Spered, en eurger d'hon Broadelez.

Levr sant Erwan a zo bet kollet... pe distrujet  
(Daoust ha n'o deuz ket enebourien Breiz distrujet *Levr  
an Testamancho* a oa bet troet e brezonek dre aked an  
Dukez Anna?) Gwell a ze ma vije adskrivet brema gant  
eur belek santel a Vreiz evit rei d'imp, war eun dro, skoue-  
rioù a zantelez hag a garante-vro ez eus kement a ezom  
an en amzer-tremen.

Ouspenn skrivan an devoa graet sant Erwan ; stourmet  
an nevoa ive evit Breiz. Pa zigouez da Renor ar Vro eun  
e duk a oa eun gall hag a glaskaz en em gemer euz gwir-  
vriou ar velleien hag ar bobl, gwelloc'h difenner n'o devoa  
ket ar gwirioù-ze eget sant Erwan.

Gant-se, Kenvroiz ker, ouспен gouel eur zant, *gouel  
hon Bro, hon gouel broadus-ni* (evel ar pevarzek a  
c'houero evit ar C'hallaoued politikerien) e tle beza gouel  
sant Erwan evidomp-ni, Bretoned. Kemeromp skoner  
war-ze diouz hon breudeur, Bretoned Tramor, Kenmreiz  
hag Iverzoniz, o deuz graet euz gouelioù o zent koz,  
sant Diwi ha sant Patrik, gouelioù o bro hag o broade-  
lez. Mont war an hent-se e oa gwella c'hoant hon  
eskop santel bet marvet re abred evit mud e genvroiz, an  
aot. n eskop Boucher, hag ar oll o deuz dalc'het sonj euz  
ar gouel kaer a oa bet savet gantan. Breman, siouaz ! eo  
ur c'houer-berc'h eo a glasker da ober en eur c'hallega an tree  
ar gwasa ma ve gallet. Gwell-dristuet e tle hean hon sant  
kaer pa gley eur pardonner gall o rei, koulz laret, an dora  
da Gomb a-us d'e Ve, gant e brezegon c'hallek !

Pegomp sant Erwan ma vo troet peun d'ar vellez, en  
gortoz, lidomp en-deun hon c'halon, pa n'hallomp ket  
ober a-hent-all, *gouel broadus Breiz-Izel*, a unan gant  
gouel hon zant kaer, sant Erwan, patron ar Vretoned ha  
difenner o gwirioù.

## KASONI OUZ AR BREZONEK BEPRED

Ar zûn-all, Kenvroiz ker, e komzen d'ec'h euz ar gasoni  
d'ec'h o deuz ouzomp hag ouz hon yez kaer ar C'halla-  
oued vrein hag o invellien daonet, ar falz-Vretoned, a  
wasa hirio o Mam-Bro hag a ra hualou d'o c'henvroiz...  
Hirio e fell d'in rei d'ac'h eun testiñ skleroc'h c'hoaz  
euz ar peiz a lareñ diou. Ar C'hallaoued pe gentoc'h, ar  
falz-Vretoned a ra o labour fell, na c'houlont ket a-grenn  
e vefe komzet ha nebeutoc'h c'hoaz skrivet ar brezonek.

An dra-ze a lak ar gounar en o c'halonou. Gouvenont a  
reont penoz dre ar brezonek e ve welloc'h sklerijennet ar  
Bobl eget dre ar galleg !

— « Mar lezomp, emé, an holl varzed a zav hirio war  
Vreiz-Izel 'vel eun heol a esperanz da galon ar Bobl brei-  
zad, da rei d'eun anaoudegez euz al lezennou spontuz a  
ra ar C'hallaoued euz d'eun ; mar lezomp ana da ziskwel  
d'ar Bobl pegen brein eo hon c'halonou ha pegen fall  
hon sonjou hag hon obero, neuze ez omp kazet, neuze  
ez omp kollet ! » hag evit harz kelennadurez ar Varzed da  
dostad d'ar Bobl e weler an dud-ze oc'h ober beude brezel  
ouz ar journalou brezonek hag oc'h ober d'ar Varzed ha d'ar  
wir-Vretoned kemend dismezanz a zo. Er brezel-ze — red  
eo hen anvaz — ec'h int skoazellet ma-tre gand ar Gouar-  
nament ; Talvoudgez heman ez eo dalc'hel an dud en  
deuvalijou ; pelloc'h a ze e chomo d'hon ren ha d'hon  
gwaska !

War a welan, Kenvroiz ker, ho servicheur Ar Yeodet  
nan eo ket gwelet mad gant potred ar Gouarnament.  
N'ouyean ket petra a zo kiriek da ze. Marvad o vean ma  
laran an tree re grenn ha re dustu, ha ma tieplegan rei  
reiz diragoch an torjejou spontuz a ve groet breman en  
hon Breiz-Izel gant potred Bro-C'hall. Bepred eo o deuz  
ma c'hemeret evid eun den gwall-dalvouduz pegwir,  
evidon da vezan o labourat en ti hag evit ma zud, o deuz  
laket a'hanon da baez traujoù evel eur penn-tiegez ; ha  
ze abalamour ma skrivan brezonek !... Oh ! an traujoù  
ne dint na braz na grevuz ; eur « c'hôte personnelle »  
hepken, da laret eo seiz pe eiz real... Mes n'eo ket aze  
eman, pen-da-ben, ma histor na digare ma fennad-skrid.  
Gortozet eur pennad hag e welfet peseñt eubeulien eo  
eur euz deuz ar maerioù diwar ar maer ; ar re ru ! ha  
peseñt droeg o deuz euz ar brezonek.

Evel na dle nemet ar penn-tiegez-ha kement hini an  
euz peadra da vevs pe eur vicher en diavez e dud, paea  
« cote personnelle », e c'houfenniz ma diskarg digant  
« Sous-Prefet » Gwengamp. Kredi a re d'in am ije bet  
anezi, pegwir er ger ez on en ti ma zud ha n'am euz  
micher ebet en diavez d'e... Allaz Doue ! me gont e hep  
ma mignoned, c'houi oar ? ma mignoned klei ! Gortoz a  
ren eta lere a oa pa digouez gounar ar zol an dregont a  
viz c'hell na ma diskarg, mes eun ali a Zant-Briek da  
rei d'in da c'houzout e oa tolet ma goulen da vale hag e  
tleen paeñ « cote personnelle » dre ar digare-man : Ho  
kenlabour en kalz a journalou ha dreist-holl en kelaouen  
Ar Bobl a ro danve awalc'h d'ec'h da vean ha da gad  
eur vicher distag diouz hini ho tud. Ma n'am c'hredet ket,  
Kenvroiz ker, setu aman an digare en galleg : « Votre colla-  
boration a divers journaux et particulièrement un journal  
Ar Bobl vous fournit des moyens suffisants d'existence  
et vous procure une situation indépendante de celle de  
vos parents. »

Fent d'in ha zontezet braz e klasken gouvenont a belec'h  
e koueze war ma c'hein ar va'had divalo-man. Penoz,  
an tammou pennadoc-skrid dister a gasan nan d'ar  
Bobl (biskoaz n'am euz skrivet ennan) mes da Grouz ar  
Vretoned, a ro d'in danve awalc'h da vean ha da gad  
eur vicher distag diouz hini ma zud ! N'eo ket posubl e  
c'hallfe bezan war ar maer-tud zud-awalc'h da laret  
kemend-all ha da zoud dre eun digare ken diskiant da  
ziskwel d'in o c'hasoni ! Eo, lennerien ger, bean a zo tud  
evel-se. — Doue d'eo binigo ! — peñ eo gwir ec'h on bet  
skoet gant unan ané na hanvan ket aman... mez n'eo  
ket diez gouzout piou e.

Me a gred d'in gant ma zam labour divalo ha dister,  
groet an darnvuian anezan goude ma c'hoan enpad ar  
gouanv ha da greiste en koulz ma c'houket pad an  
hanv, pe d'ar zol hanv-gouanv, ober plijadur da lennerien  
Kroaz ar Vretoned ha renta dre euz — herve ma talvoud-  
degez — eur servich bennag d'am Bro, ha ze diwar ma  
foan ha ma dispign. Herve a welan, e lec'h renta servich  
d'ar vro, e rentan d'in ma-unan eu eur c'hoñid ma huc  
dizourzi... Biskoaz c'hoaz n'am oa klevet kemend-all  
ha, ma zo unan bennag a dle c'hoarain gand ar feulbig  
man, e vo, a dra zur, an aotro Vallee, reuer Kroaz ar  
Vretoned. Penoz e rafe, ar paourkez don, hen pelini a  
zispign kemend gaud e journal evit mad Breiz, ma renke  
paea ouспен an dud a gas labour d'ezan ? Neuze e  
c'hallfe taurel e Grouz da vale... Mes, Kenvroiz ker, an  
dud a zo hirio o ren a'hanomp hag hon Bro na zeilont  
ket ken pi-ze. Eun den a zispitch d'o : kreki ma ve

gallet, 'vo torret d'ean e izili. Unan all an euz hardigez  
awalc'h da zaval e vouez aneb d'o oberon fall pe d'o  
c'houmouz heuzuz, kerkont e vo klasket enab d'eun kement  
zeilant lezon a zo : gwaaket e vo gand an dra-man,  
hegaset 'vo gand an dra-ze ; sammet 'vo war e gein  
traujoù a gorf hag a are'hant o sonjal galloud dre eno  
skwiza anezan hag ober d'ean zeri e c'heno, rag evid an  
dud fall, gaud ha dizons : ar Wirione a zo kazoni !

Kaer o devo hirio potred ar Gouarnament, enebourien  
ar Vretoned kavout droeg euz an dud a galon a zav o  
imouz evid Douz hag evid o Bro, na harsont ket ané da  
gouzal, da sklerijenni ar Bobl ! Doue an euz roet d'in  
eur blien da zifen na Bro, he Yez, he gizioù far hag he  
Fe ; en despet d'al lamponed me o difenn ha ma lieno a  
baouza da skriva pa ziskennin er be, mes a'chann di e  
skribo gwech douz, gwech tener, gwech garo, herve ar  
boan a c'houzout Breiz-Izel abeurz an dud fall... ?

Evid are'hant, emé, e labouromp... Na reomp ket !  
Neb a labour evid are'hant a vuzul e boan gand e c'houe-  
digez ha ma labour-ine en Kroaz ar Vretoned a zo mu-  
zalliet war doujanz Doue ha karante ma Bro. Doue ha  
ma Bro ! Setu ma diviz hag abalamour d'azi eo a zo  
droeg diouin. An dud fall ne dint ket evit klevet hano  
Doue. « Red vo, emé, laza an hano-ze en kalon an holl  
ha peliant Doue diwar an douar ; en Neouven eman, en  
Neouvo euz d'ezan chom ! » Ar Vro Breiz-Izel... !  
Gwasan ma ze eo kaset ! Gwasan ma zo droeg euz he yez,  
euz ar brezonek ! Hag, Kenvroiz ker, an dra dister-man  
da weler an euz kalz, kalz a bouez. Muioc'h eget na  
sonj da galk a dud. Nan eo ket warnon ez eo skoet ar  
va'had-man, mes war ar brezonek ! Zeilant o deuz aon  
potred ar Gouarnament euz ar brezonek... Gwell a ze !  
Zeilant ive eo mad hon labour ! Pegwir ez eo ken mad e  
kendalc'homp warnan. Euzuz e vijent holl ma plegamp  
d'e ; neuze e tujent abeuz euz o zaol. Siouaz d'o, ken  
liez gwech e skojont gantip ken liez gwech en em di-  
feñfomp. Diskwel e reform d'e na ve ket pleget ar  
Vretoned... ha, hep mar, int a skwiza anoug d'imp. Hon  
vad eo skwiza ana. Evel ma hare d'in aotro Vallee a zo  
gwir : Pe vicher hon Bro pe goll anez ! Na c'houmomp ket  
da dermal : *Ni a fell d'imp miret Breiz da Vreiz !*

Yudet, skrinjet, skrinjet ho tent, eta, enebourien hon  
Bro hag hon Fe, en despet d'ac'h had'o lezennou ; en des-  
pet d'ho kazoni ha d'ho traujoù ;

Ni a chomo Bretoned,  
Bretoned, pennou talet !

Ar Yeodet.

P. S. — Eur gentell d'am c'henvroiz : Pa zeuy potred  
ar Gouarnament d'ober d'ec'h paea traujoù difeal, n'em  
dibabet gant kalon. Pa vo gana'ch ar Gwir e vefet dalc'h-  
mad silaouet. Kentoc'h evit paea « cote personnelle » d'ar  
Gouarnament ec'h in kant vloa d'ar galleg !

## AN ASURANZ TUD

« Na difianz,  
Eman an asuranz. »

Alo tat Cheta al linn ar heñtre. Dec'h e oa ar zol,  
devez an Otre Douz, eun devez diskwil. Breman omp  
adare pare da labourat. Dec'h, ets, d'al labour !

« Labour, mignon, keit ma vevi ;  
Goude 'r maro e paouezi. »

En-dro ma lien ! En-dro !  
Red eo asuri tud an tiegezo, beteg gont, Doue da viro !  
an tapadenn, an darvoud. Red eo asuri mistri, bugale,  
servijerien, kement dou a zo er vereri. Evel-ze e oa bet ar  
gont streomp disul dremenet.

Gant piou en em asuri euit-se ? Ze zo ez c'houit ive !  
Gand piou ? Fe zur, n'eo ket gand ar c'hrag-c'hoaz, di-  
vroidi, distoladenn. Deroc'h 'zo diwarus ! Ha n'eo ket  
re abred, a sonjan. 'Ch et da weler.

Groet eo al labour-veur. Ar plac'h-tiegez a zo o  
tigrignan ar golar. Ar vestrez a zo oc'h ober e c'houmpenn.  
He c'hampi da vont d'ar marc'had. — C'houit... C'houit...  
Eur c'hiad ! Piou a zo aruz ? — Ar plac'h-tiegez a ya da  
weler ! Oh ! Eun otro braz, eur pez tog fouz hirz war a  
griben, eul liviten da ragan an douar prest awalc'h, war

em weni. Nan, nan! N'euz ket amzer. —

Bale a ra ar mestr gwech ha gwech-all dre ar park-lin war e led. Tastonat a ra an dornad-man, an dornad-hont, Mad, pouet eo p'leal. Kaset e ve revello d'ar park, baschio, ha revellet al lin er-mez. Kalz ezeloeh e ve da garzan. Al labour a ve groot primoc'h ha nebeutoc'h a boule a ve ewid ar grancho.

Al lin a ve gwra'hellet en ti ar varc'hadourien, planiet mar-keret. An loer a lak eun doen da disc'hlaou ane. Bep ma ve ezom lin da labourat, e ve klenket er magazinio ha labourat, an dailh zavel, dour war an toulant hag ar rod viz endro, pilet al lin, dornatec, breet. Eun den dirag pep bre An dornado lanvz a dremen eus an eil dorn en egile. Chetu, breet, dousoc'h, astellet! Paket eo ha gwerzet mad eo da nean, d'ober nend ha nen.

Groz ma vo mad war al lin-ewid ar bla! Tieleu, laket kalz a lin. Deyejerien, labourat lin en loc'h amzer gollet evel gwechall. Merc'hed yaouank, disket labourat lin ha nean ma 'po lietaj da vont d'ho menaj. Gwiaderien goz, disket re-yaouank. Poant eo echui.

EUN MIGNON.

## Gant ar brezonek, tol gwenn ebed!

Setu bet en Sant-Briek hag en Roazon an examino a dremenner er c'houlz-man euz ar bla evit tremen bachelier. Ar boted yaouank o deus gret o retorik en kolaj Gwen-gamp eo bet mad o zro, pa zo bet resevet nao ane. Mes 'pez a zo mad da rei da c'houit dreist holl, eo en em gav en o zoner ar re a heuilhe ar skol vrezonek hevelne ha breman zo daon via: Fanch an Du, eus Kalanhel (Roc'h-lan e hano a varz); Louis Barat, eus Keriti; Ervoan Rolland, eus Keriti ive, hag August Ligne, eus Ploubeve-Moedek.

Kement-man a ziskoue nan eo ket ar skol-vrezonek eun dismantr amzer evit eur c'holejian: na ra gaou ebed euz ar studio a zo red ober evit al lizeradar pe ar skian-cho-all.

Ma larfen zoken pe zonzjan, e larfen ec'h eo ar c'houitrol a zo gwit. A dra zur ma ve kistion evit eur skolaer yaouank da skrivan eun dra bennag pe un skritur plen, pe en skritur rimet, e teuo gwelloc'h a-benn euz e dol mar gemer, evit rei korf d'ar pe a zo en e speret, ar yez a anve ar gwellan.

Ac'hanta! eur Breizad yaouank, daoust ha na oar ket gwelloc'h ar brezonek evit ar gallek? Eur wech disket gantan an doare da skrivan ar brezonek (hag hen disket rei 'n eur c'hoar) roet d'ean eun dra bennag da lakat dre skrid hag en gallek hag en brezonek. Mar laket e daou bez-labour an eil e-kenver egile, e wellfet e talvez muioc'h en hini brezonek evit an hini gallek. Na larfen ket e vo mad-ye: mes ar maouk a vo ennan a vo gwelet gantan ezeloeh evit ma hallje gwelet ane en e labour gallek, ha dre-ze hep mar ebed e wellao a c'hondevez e zoare da skrivan.

Ha pa 'nefo tapet an dro da skrivan ervad en brezonek, e teuo buhan ha hep poan da skrivan ervad en gallek.

Bec'h eta d'ar brezonek er skolio ha dreist-holl er c'holajo!

## HIRVOUD

Et e oan da vale, evit kemer an aer,

Da gutoih bokedo, e-bars ar prajeier,

D'eva eur banoc'h dour demens ar feunteu goz

Pini red, ken seder, ebarz en traou, ar roz.

Ern e oa an noz, hag an evnedigo,

Ac'h e da ziskwiza, gant o c'hansouenno;

Hepken an durzanel, en eur voden en kuz,

A gane c'hoaz eur zon, gant eur vouez truzuz.

Ken kaer e oa he c'hau, ma c'homiz 'vol mantrel,

Benzet en em zonzjo, war ar c'hleun azeet.

Oc'h unani ma monez, gant monez an durzanel,

Stagiz da hirvoudi, war stad ma Breiz-Izel.

O, ma Breiz, a zonzjen, na evruz oas gwechall,

Te ac'h e sonn da benn, digabestr, dishual,

Te a fa eur roue, evit ren d'ar gombat

Ar oazed oa ennout, pere oa potred vad.

Netra nemet klevet hano ar Vretoned

E krene ar galon, stratiuilhe ar spered.

Konoud e oa neuze an oll liberteou,

Te a fa o gouezig park ar brezelou.

O, ma bro Breiz-Izel, te oa eur vro dispar:  
Da bar vije ket kad e nep lec'h en douar.  
Bro an dud a galon, ha neruz war an dro!  
Nag a zant zo ganet war da zouar, ma bro!  
Ar varzed vinniget, da zifenne gwechall  
A-enep d'ar Zaozon, d'an Norman ha d'ar Gall.  
Mouez o zeleunou dir, unanet gant o c'hau,  
A c'h'alve a beb tu, tud da zont d'an emgan.  
Gant enor ha gant lore'h, te a 'n em zifenne;  
Oll boblou an douar diragoud a grene;  
Da hermin oa dinam a beb saotradreuz,  
War ar poblou kaera te a oa ar vestroez.

Sed aze 'ta ma bro, da zoare diagent,  
Breman, o Breiz-Izel, te a feuz chenchet hent.  
Na gwit o kement-se, ma broik sell eta  
E pe stad gwall-vantruz ac'h oud er brema.  
Gwasket oud a beb tu gant da enebourien,  
Mestr ec'h int d'id brema, plega a rez da ben,  
O! ma bro Breiz-Izel, perag out ken gwasket?  
Perag 'z euz war da chouk eur yez pouner meurbet?  
Sammet ec'h eo bet d'id gant eur plach digalon,  
Prinsez dimens a Vreiz, merc'h d'eur roue breton.  
O, ra vezo mil gwech milliget an enhor  
Demens ar brinsez-ze, werzas hon bro Arvor!  
Anna duke a Vreiz, prinsez ar Vretoned,  
Da vro, da zujidi gant eur gomz c'heus gwerzet.  
Laket a feuz ane dindan mestro digar,  
Pere zo bet gwall-griz ouz hon c'hornik douar.  
Sanmet a druzjo ha disprizet goude.  
N'e ket honnez e bed hon oll vuez aboue?  
Bet o deus bet zoken an hardiziege?  
D'essa lemel diouzimp hon Doue hag hon yez,  
Mes fidel ac'h omp bet ha fidel ni a vo  
D'an tri dra man bepred: Yez, Doue hag ar Vro.  
Drog-Lan.

## Eur c'hav braz en Eskopti a-bez

An Eskopti a-bez a zo en kav: an Otro 'n Eskop. an Otrone chaloniad, personed, beleien ar c'hounencho, kured hag ar gristenien, Maro eo an Otro « Dagnone », tad Priol kloerdi braz (Séminaire) Sant-Briek, chaloni ha Vikel-Vraz, unan eus ar veleien ar muian zantel hag ar muian gwiag en Eskopti. E vuc hed-ha-hed a zo bet stuman beleien yaouank. Dorniet, tuet e oa da ze eus ar gwellan. O stuman a re diwar e batrom. An darn vuian eus an otrone beleien a zo breman er paroujo a zo deut diwar e dorn.

Groot e oe gant an Otro « Dagnone » dilun, en Zant-Briek, eur gaer a interament, kaeran hini a zo bet gwelet peal a zo war ar vro, zur awalc'h. An dour a deus war an daoulagad o welet ane o tremen.

An Otro Dagnone a zo eet da ziskwizian eus e 78 v'la en dishool ar Groaz Vision en hered Sant-Briek. Di ec'h ey hep bla ar c'hoer yaouank da veskan o daero hag o feddeno-gand an dour binuiget war ve o zad en-kerz gouel an Anaon.

E iue, zur awalc'h, a zo pigoet d'ar baradoz, evel eur gaer a gonlmik wenn.

Pedomp ewitan, koulskoude. Hon dlead a anondegez vad eo!

• Ma Jezuz, dre ho karante,  
Bet true ouz e iue,  
Roet d'ean en ho paradoz  
An eternite da renoz. »

## PARDON BRAZ PONTREW

C'hoant hoc'h eus da welet eur pardon kaer, kaer da vad? Hanta, deut da Pontrew, deiz gouel an Itron Varia Fantanio. Na wellfet ket kaeroc'h e neb leac'h en-pad ho puez. N'euz ket eur barouz, n'euz ket unan war dro, kap do c'hoar ganiup evit ar prosision-noz.

Disadorn goude koan, dam-dost da nav heur, ruio kerik Pontrew a oa ken koant, ken kempennet ha sklerijennet e pep stum, ma na onie den e pe kostez trei da gentan e zaoulagad. Chom a rez souezet dirag ar labour hag ar boan a gemer Pontrew oll, pep-hini en e c'halloud, evit enori Gwer'hez an taer fantan, o fatronez. Ha tud a oa! Eur bern! Bean oa heb mar diou wech muioc'h evit ar blavejou all; chetu ar pezh a lerer.

Mes n'eo ket awalc'h; ar pep necessoran n'eo ket bet ankouast. Hed ar prosision, Bugale Mari, skouer ar barouz, o deus kanet ken e Brezonek, ken e gallek. Ar cha-

peled a vije lazet eur wech en amzer d'ar Wer'hez ar Fantanio. Pedet em eump ane a-greis kalon da deuler eur zell a drouz war hon bro paour a dilez tam ha tam he Doue. Ra vo chilaouet pedenno ar beleienet gant an Itron Varia, ha, da via c'hoaz, mar he bolantez Doue, en em destumfomp adarre en-dro d'ei evit he zrugarokaat. Piou oar? Marteze o vo en he chapel neve ec'h efomp er bla a deus.

Hon fardoner, an A. Hamon, chaloni yaouank, a ren kloerdi Landregor gant kement a spered hag a aked, an euz groot eur brezegeu dispar en oferen bred, eur brezegeu ha n'eo ket vat gant an avel, galloud a red bean zur a zo. Trugarez d'ean en hano Pontrewiz; trugarez ive d'hon ferson koz, karet ha respetet gant an oll, a ro d'e barou-siauz kaeran gouello a zo er vro! Trugarez d'eur veleien a zo deut d'hon zikout, d'ar vuzisianed, d'ar homperien o deus delo'het an urz eus ar gwellan. Glear ha meulodi d'ar verdeidi ha d'o c'habiten bepred fidel d'o Stereden. Enor ha trugarez da Pontrewiz oll a c'houzout ober an traou evel ma eo dleet!

Gwer'hez an taer fantan n'o ankouast ket; o die'haout a roy breman ha dreist-oll en neur eus o maro.

A. D.

## PARDON KANUHEL

Ar pardon, hag a ve dulc'hmad an eil zul a viz gouero, a hell, gant enor, bean lakaet war roll ar re gaeran eus kornik douar Kerne. Koant eo 'vel ar bourkik e-unan, diazeet war dinaou eur gre'hon dudiuz: ouz he zroad eur sterik o ruilh gorrek a-dreuz flourennou, hed-ha-hed gand an draonien, ha d'zi eur gouriz kosjou uhel ha don lec'h na glever, d'ar c'houlz-man, 'med richan al lapousigou 'n em vodet eno, a gred d'in, 'vit kanan o c'harante!

Leun-tenn 'oa an iliz d'an oll ofison gand tud ar barrez a-bez ha kalz eus ar parouzien tro-dro diredet d'ar pardon. Ra dougo freuz ar c'henteliou-mad o deuz bet, eus lein ar gador digand an Ao. Boudec! Goude an oferen-bred, pep parousian a gasas gantan d'ei di erent hag e vignoned. Dalc'homp d'ar c'hiz-ze hon deuz bet digant hon zadou koz! Eur c'hiz kristen eo! Ha... pebez laouenidigez 'ta, da dud hag en em gar, bean bodet, o komz eus an treo ar muian ker d'ei! An Aotrou person ive 'n oa dastumet en-dro d'ei dol kerent, mignoned ha beleien dreist-oll, deit da gaerat ar gouel. An tabouliner hag ar zoner o deuz o zaludet herve ar c'hiz koz.

Ar gousperou hag ar prosesion 've al loden gaeran eus ar pardon. E Kanuhel 'oant ive en gwirione. Ar c'hau 'oa dispar, na helle ket chom hep bean gand kanerien 'vel 'n aotrone Quévarec, ar Moel ha Marion!

Setu ar prosesion er-maez. Zaludet eo gand tennou! Kaer oa hon gwelet o tibun hag o vont 'tresp an tantad, zavet e-kreiz eur park. An oll en em zastum en-dro. An tan, enaouet gand ar veleien, a dev en berr amzer ar bern gor zec'h hag an tennou klenket ennan a strak ken a ziston ar vro gand an hekleo. Ar c'hantikou brezonek a ye en-dro keit ma c'hoarie an tan. Me, o welet an tantad o flaminan hag ar maged o savel uhel-uhel 'tresp an oabl, a zonzje penoz hon feddeno a bign 'vel ze d'ar baradoz, hete tron an Aotrou, ha, mar arvu na reont ket, eo 'halam-mour ma stlejomp holedou pounner stag ouzomp gand eun ere dir. An ere dir-ze eo ar balc'hder. Troc'homp anean, ha dustu hon feddenno a bigno 'vel an ezanz da volz an iliz pa eo hinjet direk an oter, pe 'vel maged tantadou hon fardoniou d'an abarde 'n hon Bro Breiz-Izel.

Ar prosesion a adkemeraz hent ar bourk keit ma tistone neruz eus pep kalon kan an *Te Deum*.

En iliz, dougerien an arouezion en em vodaz en-dro d'an oter epad Bennoz ar Zakramant. Setu aze eur c'hiz eus ar braoan ha na fell ket vije kollet biken! Netra koantoc'h na dudioc'h 'vel gwelet eur wech ar bloaz, deiz gouel o farrez, potred ha merc'hed yaouank, bugaligon dister ha dinam, 'n o gwiskamant kaeran, gant kroaziou, banielou hag arouezion all, daoulinet dirag Jezuz arag distrei d'o zi.

En eur gwitaat an iliz an oll en em dolaz war ar stalto 'vit prenan lod d'ar vignoned ha d'ar re chomet e ger. Me a rez kement all, — hag evidoc'h, lennerien ger, — an euz skrivet ar pennadik-man, ho lod d'ac'h ive eus ar pardon. Karet am iwe skrivan hirroc'h, mez striz eo al lojeiz a ro d'in hirre kroaz ar Vretoned, setu eo bet rod krenna ha troc'h an berr.

EVNIE A. 72



# Kroaz ar Vretoned

ROUMANANCHOU

Eor ahost ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skood, evit ar brolon estren evit ar Broio holltek.

SKRIVANIERION

Kat al labouriou pe d'an Otro VALLEE, Rener, 10 Zant-Bened, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivanter, 27, ball Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwaneek pap arondennad-skrivad.  
(Diskiñ a breiz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar eo Breiz.  
Furuz ar Geiz.  
Gant brezonek eo kend ar feiz,  
Gant ar galleg eo ste a Veiz.  
Furuz ar Geiz.

Dalc'hil bepred d'ho brezonek,  
Yez ar dud vad ha kalonek,  
Yez ar feiz eo ; ma ve troc'hat,  
Ouzan ar Vez, o va Pa'chall  
MILIN.

kalonou ar Vretoned!

O ! Bretoned kalonek, heuilhomp dalc'hmad prosessionou hon Sent koz, ha padomp anez, eus a greiz hon c'halon. Hon dioual a rent diouz a bep droing ha dreiat-oll, diouz ar walen a gastl a wasp de-ha-de da skei hon bro.

Goude ar prosession e oa gret ead ar Sakrament (meulet ra vezol) ha, da glozan an devez, e oa avialet ar vugale vihan.

En hano parouziatiz Sant-Ke trugare d'an Otro Coeg, d'an O. Ruellan, person Tregastel, ha d'ar veleien vad o deus sikouret hon ferson karet, an O. Salatin, da lidan eur pardon ken kaer. Trugare ive d'an O. Salatin, hon ferson mad, a lid ar gouelion kaer an hag an neve dalc'hmad eur gwir souzri eus an ferson fidet en e garg.

L. CHARRAN.

Enomp 'euz diou garantez :  
Hor bro ger Breiz hag ar feiz !  
C'hoant zo, ni oar, d'o laerez,  
Ha d'o diframma diouz hoc c'hoaz...  
Chomm a ra en hor bro-ni,  
Lavar tud koz Breiz-Izel :  
• Kentoc'h eged falloni  
• Gwelloc'h ganeomp mil gwach marvel !...

KLAODA.

## EUR TAM KAOZEADEN

Allo, ma fluen gez, krog ac'h on adarre enont ; deuz da displegan eun dra bennag dirag daoufagad-fennerien Kroaz ar Vretoned. Petra lavari d'euz ?

Lavar d'eze ar pezh a glevet en parkou Breiz breman en-pad ma tenner ar lin.

Klaved a rer traoz diskiant gant darn ha tref poellus gant darn all. Ar gaos a vez dalc'hmad diwar-ben distagan ar Frans dious an iliz.

Beau so tud hag a gaos zo war an tref-se ken na lavare dan e vent kristenien. Beau so tud all hag a gaos gant rezon ha neuze e sav-touz.

Petra so kaoz da gomzou ar re gentan ? An ourgouilh hag an anv. An ourgouilh, dre na houllont ket plegan, emé, da distroc'h evite. — « Eur belek, emé, eur belek nan e ket muioc'h evidon ive. » — « Eot eur belek so muioc'h evidoc'h, eur galand 'neus bet digant Doue muioc'h evidoc'h ha, gant ar galloud-ze, ec'h ey en e ve pa deuz ar maro d'e skei. Nan oc'h netra en-kichen eur belek. » — Breman an anv ! Henez so an him gwasa, an anv !

— « Da betra e ve roet ar hant d'ar veleien p'o deus kement ha ma kement kemde ? » — « Sellet an anv aze. Paour kez den, dall put ac'h oad, an ourgouilh a so war eur lagad d'id hag an anv war eun all ; leun anez hag e weli skler. Kemar dindan da zaoufagad levr histor Breiz ; sell pegement a c'haou a oe gret euz ar veleien gwejall ; leun hirroc'h goude, hag eno e weli ar pezh a so merket, na roer ket d'eze nemet ar pezh a so glet d'eze, hag ar pezh a oe divizet pa deus ar pezh d'an iliz goude an dispac'h bras. » —

Sionas, nan e ket unan hepken a zo dallet gant an daou dech-se, mes an darnvuian eus an dud, ya an darnvuian eus an dud ! ha na glevet ken kaoz pa valeer breman, er parkou eyel var an henchou, en tis evel er maes an tie, en ker 'vel war ar maes.

Komzou trist, komzou poaniz da galon eur breton, rag goud a oar dre belec'h e ver tremenet c'hoas, hag e weli an hent-se o figeri ledanoc'h evit biskoaz, hag ar fall o kargan var ar vad hag o vougan anean ; an hent-se korget a fallagriez hag a disonoz, a vezo an hent a gerz-fomp dreizan, ma na deu Doue da gad true ouzimp, ha da digeri d'imp dor ar frankiz hag ar fealdid.

L. C.

## SANT-KE PEROZ. -- PARDON

En-teo eur c'hart leo t'houz Peros, en eun draonien zedor ha didrouz, e sav bouek bihan Sant-Ke e-lec'h ma vev kristenien vad ha bretoned kalonek : hon diskoulet o deus n'eus ket pell c'hoas.

Ar c'houezekvad eus ar miz e-tigour pardon Sant Ke. Lidet ec'h e bet evit ar bla, evel er bavejou tremenet, kaer-meurbed. Ar pardonner an O. Coeg, person Plouek Pontre, bet gwejall person en Sant Ke, an euz gret eur brezegon gaer en ofern bred. Displeget an euz dirag an oll, huc evurus ha santel o sant padron. An oll a chillaoue gant karante, rag goud a ouient pegement o c'have ive ar pardonner pa oa en o zonez, ha na oant ket evit huz da skuilh daerou pa 'nevens komzet d'eze eus an amzer ma oa person en o zonez. E brezegon a so et beteg goueled ar galon hag eno e chemo stag dalc'h-mad, hag oll dud Sant Ke a viro en o c'halon komzou neruz ar belek-ze bet person ganta, bean so pemp pe c'houek via.


Goude ar gousperou e oa gret ar prosession. Nag a dud war-lerc'h ar prosession-ze. Nant nan e ket maro ar fe en

## KAN-BALE

Yaouankiz kristen Breiz-Izel.

War eun ton kaer Iverzonek.


Lentement et avec sentiment.




Var zav, pag, trod Breiz-I- zell Hag u - na - nomp




hon daou-arn ! Ker-zomp laou- en d'ur he- rek o you



c'hal fran- kis da bep barn ! Dou- e zo our hor ger- vel



kerzomp en- hent, gant ker-oll ! Dis-ten ban- niel Breiz- I-



zel Eur Brei- zad mor- so n'en deuz-ont

Kerzomp eta kalonek,

Pa 'z omp euz a enenn gallet

Nomenos, Pontkallek,

Bepred e Breiz- evocet !

Ya, kerzomp o tiskana :

« Feal beteg ar maro,

« 'Vil Doue hag ar vro-ma,

« Da vilken oll ni a stourmo !... »

Epad ar vuez, ar stourmad

EO tonkadur ar kristen ;

Me lavar ar kristen mad !

Bretoned omp euz e wraision,

Hogen arabed spounta,

Daoust ma 'z eo tenn ar c'hrogad !

War-lerc'h poantou ar bed-ma,

En enouvi vo paet mad !

Karomp Jezus, hon Aotrou,

Ha Mari, e vamm zentel ;

Ba renint 'n hor c'halonoc'h,

Ha war hor kro ger Breiz-Izel !

Bretoued, gwir zoudarded,

Dionallomp ar feiz kristen

A zo dre-oll argaset.

Arvoriz, var zav d'ha difen !

Bugale d'ar gwir iliz.

Karomp ar Pab 'zo hon tad ;

Ni c'houlenn d'ezan frankiz,

Evit easoc'h ober ar vad !

Karomp ivez Arvoriz,

Hag he yez benniget !

Pell c'hoaz er meastou stoulik

E Brezonek ra vo komzet !

## Eur skouer-vad da dudjentil Breiz-Izel

Eured vraz an Aotrou Markiz Bute e Breiz-Tramor

Lennet am euz war gloc'hennou-zeoz ar zün divezas pennadon-skrid war eured an Aotrou markiz Bute, eun denjentil pinvik-braz, egl n'euz ket ar vro-man, pen-egwir en deuz e tro da dagaek million livr da zispign pep bloc.

E Bro-C'hall hag a warizi a vije savet a-sneh d'ezan ! E Bro-Zaoz n'int ket souezet tam ebet eus so. Muioc'h e skiant o deuz, hag e welont skler penoz seul donoc'h eo ar mor, seul brasoc'h listri a zo red evid mont warnan ; ha, pa ve pinvik eun den bennag, gouest eo d'ober brasoc'h ha gwelloc'h labour ; listroc'h ha kraoc'h a ze eo e zivrec'h da labourat evit e vro hag a feiz.

Heman, an Aotrou Bute, n'eo ket nepken eun den uhel ha pinvidik, eur kristen eus an dibab eo ive hag e vers en e galon karante e vro, Breiz-Tramor. Ar C'heumraeg (pe vrezonok ar vro-ze) an deuz disket ez yaouank, evel a genta yez, war daoulin e vamm-kouls lafet. 'En t'f'ont da Vro-Geumri, e lec'h ec'h zo ganet, an Aot. Bute a zo douget mad ive evit an oll vroio brezonek, da lazet eo Iverzon (pe « Irland »), Bro-Skoz hag hon Breiz-Izel-pi.

E lec'h eul leviten last-pik hag eun tok kern uhel, a oa bet gwisket gantan, evit mont d'an iliz gwiskamenc'h giz Skoz hag e oll vignoned a oa ive gwisket eveltan.

An dimezel Bellingham, e bried, hag a zo ginidik eus Iverzon, a oa gwisket e gwenn, gwir eo ; mez an dimezellet a enor — pemp a oa ane — a oa-hall, gante war o zaoz, gouel glaz sant Patrik, hag a zo e gwiskamant broadus evit an Iverzoniadezed, pe merched ar vro-ze, evel m'eman koef ar vro-ze evit ar Bretonezed.

Renet e oa an eured, o vont d'an iliz hag o tistrei d'ar ger, gant bisioz ha taboulinou giz Skoz, a zo henvel ouz hon re-ni, ha pa gwiteaz an daou zen neve palz tad an itrou yaouank evit mont dre vor da Vro-Skoz da dremen eno miz o friedelez, ne oa ket banniel Bro-Zaoz a nije a-uz da wermioz al lestr, hint Skoz an himi e oa, a-uzan gant hint Iverzon.

Goude-ze, pa oe digemeret gantan e vercurien, n'eo ket e saoznek e respontas d'ez an Aotrou Bute, e-keumraeg hag e Skosek eo e komzar d'an dud vad-ze deut a-bell da welet ar varkizez neve ha rej'el eun desteni eus o lealded hag o c'harante.

Setu eur skouer vad da oll binvidien Breiz-Izel, ha na ket 'ta ! Ar re-ze en em zell evel tud zo uhel evit plega da c'hizion, da wiskamenc'hon ha da vrezonok ar vro. Ma n'int ket speredad awal'h evit diski c'houez yez, evel an Aotrou Bute, ra ziskoint d'an nebunia a-walc'h a vrezonok da gaouzel gant o mepurien diwar ar meaz ha diskouel 'e ez int kalon ouz kalon goude, o karont evelte hon Bro, hon spered Breiz hag hon feiz.

G...

Trugare d'hon mignon evit e bennad war eured an Aotrou Bute a ro, gwir eo, eur skouer dispar da binvidien Breiz. Greet an neuz tad an Aotrou Bute (hag a zo maro abous, Doue d'o bardonnoc'h) eun enor braz da Groaz ar Vretoned eneur rei ar gwella digemer d'he Benar en e gastell e Bro-Geumri, breman zo c'houez'h vloz. Diskouezet an euz dre eno e kare ouzpen Breiz-Tramor, Breiz-Izel ive. D'e vab, hag a gers war e roudou, e kasomp, en hano Kroaz ar Vretoned, hon gwella gouc'hembannou evit e eured.

## DISTRO AR MARTOLOD

Arri ez eo 'velkent an dorez,  
 Ga pell 'zo gamin gortozet ;  
 Hirvoudi am euz groll aliez,  
 Breman ma chadan zo torret . . .  
 O devez karet,  
 Devez binniget !

Zav warnon da heol maderuz,  
 Ma tomme c'hoaz ma trilli !  
 O heol, skuilh da sklerijen tinteruz,  
 Ha kemer lod barz ma dud !

Mane a wach am euz bet poan spered,  
 Skuilhet am euz ive daerou . . .  
 Hirie ez en evituz moudied,  
 Ashu ez eo d'am zentuilheu . . .  
 Devez binniget,  
 Ha ken gortozet,

Tridal ra ma c'halon en em c'hoiz,  
 Seder ez on 'vel eun eostik ;  
 Souden e welin c'hoaz ma bro Breiz,  
 Ma farrouz, ma zud, ma e douzik . . .

Espad ma zroion war ar môt braz,  
 'M euz gwalet kalz a vroion koant,  
 Mes n'am euz gwelst . . . O nan, biskoaz !  
 Hini hag a vefe ken draut

Ha ma bro garet,  
 Breiz-Izel hanvet . . .

O Breiz, Rouanez ar broion,  
 Breiz, bro duduz ha dispar ;  
 Eur martolod, bugel d'az aobou,  
 Eus a n'ez e galon da gar !

Hepdale 'n em gavo adare  
 Ma zreiz war da zonar kaled,  
 Hag euz gand an amzer neve,  
 E klevin han al lapoused ;  
 Pere a laro,

Es-touez o zopio :

Dizro, dizro martolod yaouank ;  
 Deuz da wstet da lojounik,  
 'Lec'h ma kavi eun nor-digor frank,  
 Euz tad, eur vam hag eun e douzik . . .

Oh ! gwelst a ran tour an-itiz,  
 Klevet a ran mouez ar c'hleier ;  
 Gand o zon en em gavan diskwiz,  
 Ma c'halon zo laouen, seder,  
 Rag ma 'z eo ken kri  
 Tec'hel, kimiadi . . .

Pegen evuruz ez eo ive,  
 Goude ma ver bet ankeniet,  
 Dizrei yac'h mad ha leun a vro  
 D'ar vro elc'h ma ver ganet !

N'oufe den laret ar blijadur  
 A zo breman 'barz ma ine ;  
 Chouez ar bleun balan, lann ha glazur,  
 A ra d'in beva a neve . . .

Diragon 'welan  
 An ti a garan . . .

Ti plouz ma zud koz, ma mam, ma zad,  
 O ti bihan koant ma c'havel ;  
 Ac'hant-te a garin dalc'hmad,  
 Ennont-te e fell d'in mervel . . .

Ennont e tenin da ziskwiza,  
 Dimeuz ma zroion hir ha pell,  
 Ennont e chomo ma e dous e Auna,  
 A sko breman warnon eur zell ;  
 He daoulagad c'hilaz  
 D'in-me a ouelaz . . .

'N em freziz hirie, ma douzik koant,  
 Setu c'hoaz da wellan mignon ;  
 Gantan na gemer ken nec'hamant,  
 Rag d'it-té ez eo e galon !

Tad ha mam gez, setu ho pugel,  
 Paet gantan e c'hle d'ar vro ;  
 Dizro ez eo c'hoaz da Vreiz-Izel,  
 Warnan na skuilhet mui daero,  
 Mes roet d'ezan  
 Ho pennoz gwellan :

Binniget breman e garante,  
 Ha groll ma vezo evuruz ;  
 Annaik a vo e wreg hepdele,  
 Annaik a vo d'ac'h doujuz !

AR VRODET.

## DA GANERIEN BREIZ-IZEL

Tôn : *Santes Jenovefa.*

Karout a ran sonio Breiz-Izel,  
 Karout a ran son an durzanel ;  
 Kanet seder, yaouankizo,  
 Eus an draouien d'ar menoio.

DISKAN

Kanet, kanet, yaouankizo,  
 Ken a drogeto ar menoio,  
 Ken a sistono ar c'hoajo,  
 Ken a difunet an duzeanol !  
 Kousket war ar breuk hud !

Difunet an turzanel,  
 O c'hanonno zo dous, moudied,  
 Da laouennal ar c'hilaz  
 Tec'hiet gand an ankenio.

Turzanel, hastet kanan ;  
 Erroud 'rey darre ar gouav,  
 Ma renkfel kwitad ar c'hoajo  
 Evit monet da bell bro.

Kanet gante, c'houi tud yaouank,  
 A vouez huol, a galon frank,  
 'Vit ma laro an divroad :  
 « Yac'h eo spered ar Breizad ! »

Netra nemet holz an Neuvo  
 'Challfe rei harz ouz ho mouezio ;  
 Mouez ziled dre deilho ar gwe  
 'Met skleroch a ze na ve.

Na c'hoarve ket well er c'herio ;  
 Ar vouez mouget gand mgerio  
 'Neus ket a frankiz da ganon,  
 Evel m'ho peus aman.

Bech, eis, d'ar c'hanouenno !  
 Da biou 'vo ar gwellan zonio ?  
 Da biou ac'h eo ar vouez kaeraz  
 A vezo klevet breman ?

Yaouankad a ra ho lido,  
 Tridal a ra o c'halonno ;  
 Ar goad a ver 'n o goszio,  
 Gant leklo ho sonio.

Kanet demeuz ar beureio,  
 Kanet deus an abardeio ;  
 Kanet bepred ha Breiz, hon lio,  
 Da virsken a vevo !

*Eostik ar pont koz.*

## AR MISIONER O KWITAT E VRO

War douar kaled hon bro Breiz-Izel,  
 'Lec'h e beo ar fe, nag a ebistel  
 A zo het savet, hag a zavo c'hoaz  
 Evit mont pell, 'tu all d'ar mor braz !

Nag a daero kri skuilh ar misioner,  
 O kwitad e Vreiz, e vam-vro ken kaer,  
 E oll-tignoned, hag e dud karet :  
 « Me ho hadwelo eu Nenv, Bretoned ! »

O kwitad ar ger ar vam glac'haret,  
 'N em stag ouz he mab, he c'halon rannet :  
 « Jezus ha Mari, diwallet 'neus  
 Ec'gwalleurio braz 'arufe gantan . »

An tad, eur Breton, 'zo poaniet ive :  
 « Ma mab, pep-hini gle heuilh mouez Deuz ;  
 Kerz pe lavar d'id : bez eur misioner,  
 'Vit kas d'an Tibet lezen hon Zalver . »

AR MAB.

« En Tibet e zo, ma mam gez, ma zad,  
 Eur bern ineo, truzezus o stad ;  
 Gwall ezom o deuz a visionerien  
 Evit digas d'oc'ha ha sklerijen . »

AR VAM

« An Tibetaned a zo tud traitour,  
 Kemer 'rsaint anout 'vit o enebour ;  
 An dud wenn gante 've merzeriet ;  
 Chilaou mad komzo da vam glac'haret . »

AR MAB

« Kalon vad o deuz an Tibetaned,  
 Hag esper am euz, o ma mam garet,  
 E tec'ho an diaoul 'benn nebeut amzor  
 Hag e c'hoajo lezen hon Zalver.

Hon zad gwech-all a adore Bol  
 War an tollio-mein 'zo en Breiz-Izel ;  
 Skuilh a rent warno goad ar Vretoned,  
 'Vit goulen graso gant Bel bouzaret.

Sant Efflam gredas dont en Breiz-Izel,  
 'Vit digas ar fo hag an awiel,  
 Sant Herve 'veltan ive a deuz :  
 'N hon yez e delen ar fo a ganaz.

Nag a visioner a zo dent en Breiz,  
 'Vit ober d'ar fo-gwerienni 'n heu c'hoiz !  
 D'han ato ni gle mont, ni misionerien,  
 D'ar broio a zo an devalijen.

Me, gley ma Doue, m'hen klev am gervel,  
 Rod eo d'in kwitad ma bro Breiz-Izel,  
 Glet mach in d'an Nenv, m'ho ped ma Doue,  
 Gant ma zad, ma mam, er fin ma Doue . . .

Neuze 'n eur ouelan, gant e vouez troc'hiet,  
 'Lavar kenavo d'oc'ha dud glac'haret :  
 O ma mam, ma zad, 'c'h an da bartian,  
 Sonjet en ho mab, pedet evitan .

Hag ar misioner o vro 'neuz lezet,  
 Evit kas ar fo d'an Tibetaned ;  
 Derc'hel 'ra bepred stard en e galon  
 'Vit ar Vretoned karante wirion.

Ma bro Breiz-Izel, dreist pep bro dispar,  
 E tro pad ma vo an douar douar,  
 Te roio d'an Nenv sent ha sentezet,  
 Maro 'mez o bro, 'liez merzeriet.

August An BOURDONNEG,  
 Barz Plouizis.

## KUTUILH BLEUN

Da Gloarek ar Wern.

Em amzer gollit me a blij d'in  
 Redek a-dreuz d'ar parkoier,  
 War ar pool karget a c'hilz-mintin,  
 Dindan lagad ar heol seder ;  
 Neuze e c'hallan, ma unanik,  
 Mond ha doud evel ma karan,  
 Ha chilaou mouez drant al lapousik  
 O kana eur zon ar vravan . . .

Neuze, war ribl ar gwenjoenou,  
 Pe a hed ar waz o tvamen,  
 Dinec'h, e kutuilhan bleunou,  
 Bleunou koant 'vit ma zelen ;  
 Bleunou dimeuz ma Breiz-Izel,  
 Leun a zouster hag a c'houez-vad,  
 Ha pere d'in a zebiant henvel  
 Ouz glanded ar galon vreizad !

Da gentan, war eul lannek dispar  
 Goloet a gerrek gousket,  
 En eur vale . . . Oh ! na me a gar  
 Kutuilh bleunio lann alaouret . . . !  
 Mes dudiusoc'h e kavan pell  
 Kutuilh eus ma broik Avor  
 Ar vleuen vruk a garan weil,  
 Rag hi eo bleunen an Envor ! !

Gant bleunio brok, lann, ha re valan,  
 Bleunio ar parkou, ar prajou,  
 Bleunio kaer, dister, braz ha bihan,  
 Kavel ganin a v'rajou . . .  
 E tizroa d'ar ger, evuruz,  
 Ha neuze, lenn a levezet,  
 Eus ma holl bleunou nivornz  
 E ran eun dibab gand evez . . .

War-lerc'h an dibab e ran gante,  
 Eur gaer hag eur goant a vochad,  
 Hag hennez a ginnigan goude,  
 A greiz kalon, d'eur mignon mad :  
 Ar bochad-ze a ve penruian  
 Eur zon pe eur wozik tener,  
 En p'hini ar sonjou gwellan  
 A ve ive, d'o stum, bleun kaer !

D'ac'h ar zoniq-man, Kloarek-ar-Wern,  
 O teurvezet he digemer . . . !  
 Ma bleunio zo bet klasket a ver,  
 Dre ar c'hoajou, al lanneier ;  
 Da laret eo 'refont plijadur  
 Ha d'ho spered ha d'ho kalon ;  
 Dre-ze o lezan da vond distur  
 Da laret de-mad d'am mignon !

AN VRODET.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoad ar hie evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar breizhon estren evit ar Breiz heñvel.

## SKRIVANERIEZH

Kas al labourer pe d'an Otro VALLÉE, Rener, ru Zant-Seneal, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Sekretar, 37, 38, 39, Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep reodennad-ekritur.  
(Diskomp a-biz evit meur a embann diwezhañ.)

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breiz ha c'hoar en Breiz.  
Furmes ar Geiz.  
Gant brezonek eo dend ar feiz,  
Gant ar gallek ez alio a Vreiz.  
Furmes ar Geiz.

Dalc'hil bepred d'ho brezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz eo ; ma ve trachet,  
Ouspan ar Vez, o ve Pezh'het!  
Minn.

## Gouel Plesidy en enor d'ar brezonek

### Merzerenti Santez Filomena

C'hoaz hon deuz komzet eus ar pezh-c'hoari kaer, Merzerenti Santez Filomena, a zo bet savet e Plesidy. Da roidigez ar prijoù ez eus bet roet eun tava anezan ha dent tud eus pevar c'horn ar vro. Eus an unek kantonman e oa diredet mignoned, klevet gant galy Kroaz ar Vretoned hag Aotrou person Plesidy : Plouagat, Gwengamp, Plouha, ar Roc'h, Pempoul, Kallak, Plouaret, Kostven, Gouarek, Sant-Nikolas ha Boulvriak. Gwellet diougan 'wit benn disal rag disal ec'h adkrogo an treo ; displeget e vo adarre Merzerenti Santez Filomena gant merc'hed ar skol gristen goude ar gousperou war-dro ter euz.

Fell a ra d'ae'h, kenvezad vad, gwelad eus dra bennag a gaer, da zevet ho spered war-zu an neuz ha da domman ho katon ouz an Otro Doue ! Est da Blesidy an de-se. Hag e ve red d'ac'h ober ter, na peder, na pemp leo, war droad, dindan an heol ter, na gollfet ket ho poan, n'ho po ket a geuz, zur mad. Eet hag e welfet.

## BEG AN EOST

Gwasan ma koe an domder war an douar, tude ! Arru eo an eost d'ar pimp-pewar-lamp-ru. Seizjal a red e vije diwead ha, zar-awalc'h, e vo bat ar boude-glaz war-benn Gouel-ar-Werc'haz-Hanter-Est. Mar na dero ket an treo-re vuhian ! Ar greuz a ve moanoc'h ha skauvoc'h ; ar melg a grogfe warno gant barrio ponner an domder ; ar c'herc'h a zo teneroc'h. Bah ! Mad eo, a drugare Doue.

Kont a vo bepred ! Ya ha pouez awalch ive. Arabad e ve klemm !

Tanoet eo al lized en plas, krog mad eo er re-all. Torret a zo en o mesk. Piket eo ar c'hoel hag ar rutabaga. Laket eo an irvin-dourek, pe ar c'hoant-irvin war-lerc'h al lin. Bec'h vo gaud an diwan : sech-koadec'h eo an douar neve-labouret, primm ha primm, gant teodo gorret an heol. Barrek e veer gaud al labour. Savomp ar mekanik koz ha dornomp ar penno-melchon ru da c'hortoz ar c'herc'h da deroi.

Oc'h arrautont er ger eus an dshen, ar penno melchon a ne ledet war leuren ar c'hrañj (pe ar c'hardi) ha bac'ha-teet, a dro-zouz, gant bijer da drei lin, da lemmel o had digante. Biken kement-all na rajen, ma vijen en o flas. 'Vekent, rei had, rei treo goude kad eul las mad a va-c'hado ! Biken ! N'eo ket dre ar penno-ze e leze mont. Ar melchon, ewit-se, bot rouzet e lagad an heol n'eo ket ken kaled o fenno. Muoc'h sentuz int ; distagan a reont diouz an truzso war ar prim, beleg gont tapout re vraz laz. Huijet e veint. Acha a zo da divazan ane. Laket eo ar penno en eur c'hougn eus ar c'hrañj. Dastumat eo an had-denno a zo koet. An truzso a zo berniet mad d'ober gouzilli pa na oa ket nemet zaden da c'houzihan. Eur gwelad euz d'al loenedigo peour, ha danve fall a dell. Ar plouz a oa frank warlene. N'euz ket bet sellet herr gantan. Eet eo hanteborneant, na dar den penoz ! Setu petra eo kad tud-dible, diboel, dibenn, en-dro d'ar feiz toga. Laret a ran d'ac'h, eur potr zaout mad a dalv kalz arc'hant d'eun ti !

— « Da betra ec'h efomp, eme ar charreter d'ar mestr, goude leiz ? » — « Savomp ar mekanik-zo deus ar beure, mar kerese. » — « Ar potr-zaout a oa eel o-mez gand e va-

gad da gargan kof 'rog an domder ha d'hallout dont d'ar ger arog an domder, beleg gont na grogfe ar c'hoant kresken anna da derri ar c'houjo, da lampad dreist d'ar c'houjo, da drollan ed ha treo. Well e veint en disheol en tu bennag war-benn ma vo nac eur anei. Ar vugale a diroc'h c'hoaz. Na oint ket arru deus ker'het bara gwann deus ar Roc'h.

— « Ma, demp etal ! N'eo ket kalz labour ; ar c'houf a zo er c'hrañj hag a chom en e blas. Ha well a zel Ro bonner eo e vrago da fivel. Heman a oa d'an zad koz, eur c'houf. Loz-vraz eo, kenun melhanik a deus d'ar vro, an hini ec'h eaz ar priz kentan gantan er gantan dornadek a zo bet er vro-man. D'eur Gehard war lere eo laket. Gwasan mekanik eo heman, ds youal, da zon bras ha da dremen treo ! War ar c'herc'h kraz na zo vapen a-bed en tu-all d'ean. Diskennomp ar manoj en e wela koz. Dindan ar gwe-aval ebarz al lierz eman. An sel a deu se hane d'ar c'hrañj. Ar c'herc'h a vo hema ha fresk d'eo en disheol. Na c'hoazont ket kement. Ar c'hasser a hall tapout eun aval bennag da derri e sech'ed. Gwasan zo, avalo-houarn int. N'euz ket welloc'h da dazonia an dent ! An hini a blastas ar gwe-ze eno a ouie petra a oa oc'h ober. Mad ! Tapomp ar sparlo hag eur pigoz boneag. » —

Skoet a zo penn eur spael dindan zolen-graou ar manoj, eur pezh pigoz da drevercher d'ean. An daou den a loek o fouez herdan m'hallout war-benn ar spar, zavet eo e donpet d'ar manoj. — « Dalec'h ha me gigno eme ar mestr d'ar mevel. » Ha da lemmel ar bloed koz a oa kreiste an douar hag ar zolen o stouvan ho gwelad outi. — « Mad ! d'ar peno-all heman. » — Ha beg ar spar dindan penn an tousek hag an tousek en e zar. « Bremaon, ma fotr, eme ar charreter d'ean e unan, bremaon e vefet bijet, an sel a yel kreiste ho tent. » — ar blejo deuz dindan hag ar mekanik en o doull koz. Plen eo. Zellet a zo gand eun e nive ». Ar zeulbeno-korn en o flas, etal ! Emaint eno o c'hortoz. Mont a reont a doliohorz, n'houlje den 'vije bet e henn dindan.

Ruilhet eo ar vuhian vraz da yennan ar manoj da huall anean, da harz anean da vont da redok dre al lere, zeulbenet eo. An sel hag ar red breman. Et int ! Skoet eo ar gib en fri an tousek. D'ar hre'hio breman ! Peder a zo ane. Ar gwelijer a ya da gouzhan warse. Staret int diwar-boez hino ouz ar gwelijer. Laket eo an dol hag ar skabel da dogan. Aze e vo brao d'ar c'hasser en e goaze !

Ar potr zaout an neuz klevet trouz en-dro d'al leuz. Deut eo da welfet pa 'neuz tapet avel. C'hoarzin a ra. « Wid an deio, emean, e tey ar mekanik-ze en-dro ha me war ar gazek-vezeven ewit netra. » Ar vugale a zo o sellet ive ; o klask o zro emaint. Lenn a reont war vizaj ar potr zaout. Ober a reont zartik d'ean, neun d'eo da laret : « Ewid an deio hon do plijadur pa na vo ket tata na mamman er ger. »

Goude mern, e krenner o fri d'an toullad yeod 'zo el leuz. Ar bal a dremener dreiz d'ober eun tamm rac'han d'ho baro. Mad eo da grazil ar penno-melchon. Krazet int ha donnet. Peont eo d'an trec'her-ed lakat e gorf war ar mez. Demp d'an ed ! Poent stadian d'in ar mekanik d'am fluan.

Ken dewid an deio, kenvezad vad !

EM MAMON.

## ROIDIGEZ AR PRIJOU E GWENGAMP

Tol gwenn ebet gant ar brezonek ! a lare Kroaz ar Vretoned, en de-all : hag e tiskouere penoz ar re eus skolaerien Gwengamp o devoz heuilhet kentellon ar skol brezonek a oa bet treoc'h d'ar re-all evit ar studioù all ive. Oil o deuz tremenet reiz mad ar baoc'h-lardat a. Gant unan ane zoken, an Aot. Du eus Kallakel, e oa of ar maout, war an daou vil a oa o tremese, evit an disea traout : an droidigez latin hag ar gregach. Ar brezonek a ledanna o spered d'ar beved yaouank hag a laka anean

war an tu mad da ziguner pep sort deskadurez. Gant ar brezonek tol gwenn ebet evit ar studioù !

Eun dra dileet e oa rei prijoù d'ar betred-ze a labour ken mad war ar brezonek hag a re ar skouer eus ar c'henta. Darn eus ar prijoù-ze a zo bet roet d'ezo gant mignoned d'ar vro, hon c'henkrivagner ker, an Aotro Moal Dir-Na-Dor, an Aotro Martiz a Estourbeillon, rener Kevredigez Breiz, izili Brezeiz Breiz ha Kevredigez Breiz. Setu aman hanoioù ar re a zo bet kurunet :

### EIL GEVREN

Evit leuz, diskleria ha displega.

PRIZ : A. Riou, eus Kemper-Gwazennek.  
Testenioù : J. Bourhiz, eus Pedemek ; Goff, eus Plouek ; J. Du, eus Kallakel ; J.-B. Thos, eus Langoat.

Evit skriba reiz ha teel.

PRIZ : J. Bourhiz.  
Testenioù : Goff ; Rion ; Herve, eus Plien ; Bricquair, eus Sant-Ke-Peros.

Evit displega dre skrid.

PRIZ : Goff.  
Testenioù : Riou ; Bourhiz.

### KENTA KEVREN

Evit leuz, diskleria ha displega.

PRIZ : Erwan Clerc, eus Lanrodec ha Selestin Loued, eus Mousteras.  
Testenioù : August Bourdonnee, eus Ploumillio ; Charles Bourdonnee, eus ar Warc'had.

kriva e komz-plen.

PRIZ : August Coty, eus ar Warc'had.  
Testenioù : August Bourdonnee ; Erwan Clerc ; Loëiz Henaff, eus Kallak ; Selestin Loued.

Skriba e komz-plen.

PRIZ : August Bourdonnee.  
Testenioù : August Coty ; Selestin Loued.

## SKOL VREZONEK GWENGAMP

### Potr e vrago ru.

Pa oan en em yaouankiz, ma mamm, en noz, araok mont da gouzet, a lare d'in kontadennon murlid kaer, ha me bugel c'hoaz, o c'hiera gant kalz a blijadur. Euz de 'vije laret « Pôtr e vrago ru », eun do warterec'h 'vije tro « Pôtr e vrago ru ». Ar gontaden-man dreist-holl a blijje d'in. Allaz a vije laret, mes peb gwec'h e tigemeren anei evit ar wech kentan, Hirie, eta, an me c'hoant c'hoaz da neveni anei en em spered.

Beau oa eur wech hag eur wech na oa ket hag eur wech 'oa bepred. Hag e oa ebarz eun tammik ti eur vanden vugale gant o mamm. Paour e oant ken ma oant du. Seizjal ewad : euz tamm haour dalc'het da c'houzid bara da zeiz a vugale ; n'halle ket bean beunde oc'h ebat. Gwelout a ran anei c'hoaz o labour en de, ha c'hoaz martez ar vugale peour n'o dije ket feiz o c'hofo.

Kri oa kement-se d'ar van : mes ma Doue ! p'he dos grêt he gollad-e oa diwlam.

Ar hini yaouank eus ar vugale a oa c'hoaz en jekaden. Arru oa ar c'houzid da rei d'ean eur brago kentan. Ha penoz ? na oa ket euz tam meze ebarz an ti. Arc'hant da gad na oa ket ive. Mes en holl vazio 'zo tad troet da zikour a re 'zo nec'het. Laret a re ar vamm komzet-ze d'eur vigoenez, pehini, leuz a druz, a roez d'ei eun tam danve ru : « Dal, Janet, ger eur brago gant bezaez. » Ha Janet evraz a deuz d'ar ger war nij.

var e chupen vort! Eun den deuz ar barrouz a zo gantan.

Hag ar plac'h-tiegeaz en eur redek, d'an ti-traou. — « Perrin, hastet buan. Aman zo arn enu otro braz! » — « Arn eo tost? » — « Er porz eman. » — « Mat Gortoz a rey ken 'mo laket ma c'hoef bopred. » — « Hastet! Hastet! Me na gredin ket koreal outan. » — « Fe, 'wid me rey. Na debro ket anon michanz. » — « Emsint war an nor. Arn int en ti. Ar vestrez a zo kenkent hag int. Ar plac'h-tiegeaz na gred ket en em diskoe. » — « Kerz d'az labour, eme ar vestrez. Pera c'hoari d'ar c'haiez-man? » — « Bonjour, Madame! eme an otro, e dog en e zorn. » — « Bonjour, Monsieur, Bonjour! » — « Madame... heup... heup... Hag en o satouillat eun hommad gallek da laret piou e oa ha da bera-e-tous. » — « Chilaon 'ta Per, emei! Me n'ou ket rez awalc'h war ar gallek d'en em dibab deuz an Otro-ze. Aon 'meuz da vean gwerzet. Bes ar vadelez da laret d'in en brezonek mad da bera eo deut. » — « Me rey avad. Da ze on deut gantan ha da ziskoe ar ronoj d'ean. Ha Per da gomz: » — « Ewid asuri ho tud. » — « Kontan a ra kaer pe gaeroc'h war-lerc'h an Otro; groet e c'heno d'ean evel just ha lardet mad e hao. Ha neuze tamm disti a-bed avad deuz an Otro. Per a zo eun den a feson ha n'houllfe tromplan, toullan den. Perrin a van batet. » — « Fikez avad, emei, gwir a leres, kleo! An de herie eo red mont a dol zur ha bean dilui, rag a bep tu e koeer war gein ar paour kec tiel ha ker e koust ar skiant-prenan, pa laran. Pegement ar bla 'mo da rei, kleo? » — « Pegement a dour a dech'het, ped a dud a zo ganac'h, ped oc'h etreoc'h ho taou hag ho pu-gale? » — « Mad, kement ha ma kement eo ho kont. » — « Chanta, kleo! Groet eo ar marc'had. C'han da gerc'het arc'han d'id dusta. » — « Hag an Otro da garzan e c'houg ha da dennan eur bern paperasennou deuz e zac'h ler. » — « Bean zo liou aze kleo? » — « Ya, ya. » — « Atozan, bre-mezomp eo lampet ar c'hi warnon en ti-all aze hag eo keet ma buredad deuz ma dor. » — « Arn eo an treo. Groet eo ar poliz. Daou a zo groet. Unan a veer d'ar vestrez ha hi kenkent da dosket eur pezh aour war an dol. » — « Zellet! chetu ho-kont aze! » — « Neuze e konter c'hoaz eun tonhad d'ei ha hi zant evel Pemp kwennak. » — « Bonjour, Madame! » — « Bonjour, Monsieur, merci! » — « Hag int emez. » — « Chanta, eme ar vestrez d'ar plac'h-tiegeaz, gwelet a res aze n'omp ket bet debret gaud-an otro-ze. Aukoa! 'meuz e hano. Eun hano drol eo. Med hennez a zo eun den mad ha savet mad. Koreal a ra fleur, pleu ha brao, evel eur beleg tost awalc'h! » — « Ewid an asuranz e oa? » — « Ya, ewid an asuranz tud. Red eo an de herie. Joa 'meuz ken m'am euz na oan ket eel en kear c'hoaz. Just en n'eman ket war dro aze le. » —

Mad! Tremen a ra eun nebeud mijo. Droug a-bed, a drugare Doue! Tremen a ra est'ar foen. Droug a-bed! A drugare, Doue, na ve ket ken stank-ze an tapadennou, an darvoudo. Mar vijeint ive! Eman an est o c'hoari. Chetu, e-kreiz ar brez vraz, ar charer eo troc'het e c'har gand an troc'her-ed. — « Ma, ma Doue! Waz eo ze! — Ker-c'het eo ar medesin. Rei a ra an desteni. Groet eo an dilua, skrivet a zo d'an Otro. Respont a-bed! Adskriyan a veer. Respont a-bed! Skriyan 'reer an derved gwech, al lizer a zo kachedet ha groet e c'houg'hemenno d'ar faktet. Respont a-bed! Biskoaz kement-all! Eun toullad deio goude, e weler war ar Geloen (journal) eo groet ar pak a bep sec'han gand an Otro hag e vignoned ha « faillite! » Hen-ha-hen a c'houlen e arvailhen. D'ac'h d'en em asuri gantan breman, mar keret! Atruout a ra unan deuz e beurz da vale ar vro. Zello du a ve groet d'ean. — « Fe risklomp c'hoaz eun hopad da vilbanan, eme an dud; diwar an dro-man avad e vo fin. Ha neuze n'eo ket laer an oll evel dour. Heman avad a zo feson eur potr libr warnan ha n'ouz ket a dreujo war e dor. » — « Mad, groet eo ar marc'had. Daou via goude faillite adarre! — « An avad, marmoujen n'eo ken an dud-ze, laeron! Pari na voint ket laket en disheol. Al laeron vraz a ve lezet da redek. Na ve dastumet nemet ar re vilhan. N'ez forz! Ar wech-man eo torret ar blaunden evelken. Na veomp ket tapet ken. Breman e c'h eomp da zavel eun asuranz etroomp, tud ar vro, tud deuz hon anoudegez ha na laeroint ket anomp. » — « Ze on deut da laret d'ac'h ober ive. Hoc'h oll fianz a oa 'barz an divroidi, a gemerec'h ewit tud honest, otrone vraz. » — « Gout ouzoc'h, nep n'eo ket otro en e vro, mont emez hag e vo. » — « Na osint ket otrone kent. Breman int deut da vean diwar ho koust. Tapet oc'h bet. Poac'het 'peuz ho piz. Digoret 'peuz ho taoulgand, well eo ze! Laket breman ho fianz en tud ar vro. Dibabet ar re wellan anc, ar re ar muian disket hag anoudek. En em glevet gant d'asuri ho tud. Gwenneg a-bed na houllint ewit-ze, Sur oc'h na vefet ket toulllet gante. Disul e terc'homp gand hon c'hoaz.

EUR MIGNON.

### KERMARIA-SULARD

#### Eur person neve

Goude bean kimiadet gant kalz a gonn diouz hon ferson koz, ni a zo 'n em roet adare d'al levenez, rag an dristidigez na bid nemet eur pennad, ha goude, en em roer adare d'al levenez.

Daout d'an dud fallak a ra brezel hirio ouz ar religion hag ar veleien, hou deuz c'hoaz an eur-vad da welet laket en hon fenn eur pastor, pehini evel e genveur, an nevo eur gwir zoursi diouzomp, d'hon henchan oll warzu an Eov, gant aon na vemp taget gant an diaoulou dichadennet deut eus an Itein da esa tenna ar fe eus hon zouez. Mes, daoust d'an diaoulou da c'houezan a-uz d'hon fenn avel goarn an ifern, ni a dalc'ho d'hon fe ha d'hon beleien, hag a leuntho pen-da-ben o c'houzouliou hag o skouerion mad.

An otro abad Talabardon eo ar belek a deu breman en hon touez. Bean eo eur belek mad. Na penoz ta na vo ket? Goude bean tremenet dek bloavez dindan renadur eur belek kon mad hag ac'h e Aotro Person Pontre.

EO, bean he eur belek mad; rag gant glac'har bras Pontreis o deus kimiadet dioutan. Ni a c'houlen evitan ive digant Doue yec'het, nerz ha bus hir da gonder'het en hon zouez ar labour an neus gret dalc'had en Pontre.

Arog c'hoas dont da ac'hi ma fennad-skrid, e fell d'in lavaret trugare d'ar veleien vad a zo deut da rentan an enor so gleet d'an O. Talabardon hon ferson neve, ha Doue da rey d'ean an oll c'hrasou an neus ezom da gelen erfad e barouz neve!

L. C.

Unani a reomp hon mouez gant hini hon mignon a Gernaria evit goulenn digant Doue d'ar person neve an oll c'hrasou an euz ezom da ren e barouz ha da vean war eun dro eur gwir-bastor hag eur Gwir-Vreizad.

### War-lerc'h Doue... Breiz da gentan!

Ar barz yaouank d'e Vro.

Klanniget da Vraz Zant-Bielk.

Hirio me deu d'am zro,  
Karante 'n em c'halon,  
Da larout d'id, ma Bro,  
'Chon eur mah gwirion!

Me a stign ma zelen  
Da gizan, Breiz-Izel,  
Da gizio ken kristen  
Ha da yez ken zaniel;

Da ganan da goajou,  
Lojeiz an evned,  
Kaerder da veneio,  
Gant al luz goloet.

Da ganan ar mor glaz,  
A ra d'id eur gouriz,  
Ha da reo'lier ken braz,  
Ken brudet en Paris.

Da ganan 'n traoienno  
'Lech garan hunvreal  
En eurosted ma Bro,  
Ha 'n he frankiz gwech-all.

Ma c'hén a zo distet,  
Mez az karout a ran;  
Rag-se, mousc'hoarz, mam ger,  
D'ar barz... an disteran.

MABIK EFPLAM.

### Eur wall-votadek c'hoaz

Hini kanton Benac'h an hini eo. An tu-koll a zo et gant ar re vad hag an trech a zo chomet gant an O. Raoul a zo a du gant potred fall ar Gouarnamant. Pegouls 'ta e vefomp skwiz da vean evel-se dindan dreid an dud fall? Kouls — ha tremen kouls ive — e vije dihuni da vad!

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIU, HA MEIN-BESIOU

En Lahnou

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

GOULENN e bureo ar Groaz: Gwerzioù sant Erwan, al Labourer, sant Milio, sant Konevi, hag all. Eur gwenneg ar piz.

Doze ha Breiz.

## ARZUR A VREIZ

Trajedien e pemp Arvest, tennet euz histor Breiz  
GAND KLAODA.

(KENDALC'H)

**Keroman.** — Beza hon deuz, a-benn vrema, meur a hini prest a-walc'h d'hon digemeret. (Ar floc'hed a ya hveit dre an tu kleiz). Lavar d'in 'ta, va mah, penaoz eo tremenet lidou ar gurunidigez.

**Olier.** — A! va zad, pebeuz goul kaer a zo bet! Biskoaz ar bobl breizad na ziskouezaz muioc'h a c'hirad-vad nag a garantez da heritour kurunen an duked, mah an aotrou Jafre, hor Mestr, meurbed kavet ha bet keuziet kement d'ezan!

**Keroman.** — Mad a ra ar bobl karantez-ze. Sonj mad am euz penaoz pa c'hanaz hor prins yaouank, ar vro a-bez en eur vouez a c'houllennaz ma tougche an hano kaer a Arzur, ha kement-se en despet da c'heantezio fall Herri II a Vro-Zaoz, e eoutr.

**Olier.** — A zo gwir, va zad. Herri Plantabalan a eo red d'ezan asanti da vennoz an oll. Meur a wech, e kannaonennou ar varzed, em euz klevet koun euz Arzur-an-Daol-Round. Hervez ar re-ma, eur wrac'h a bareaz d'ezan e c'houliou, hag e teu, goude meur a gantved, da zishuala Breiz-Izel.

**Keroman.** — Gouela reomp c'hoaz hirio da varo an dukevad Constans. Nag a foughe oa enni gand he mah! Var he zremenan he c'hleven o lavaret hag oc'h aslavaret da Lan a Ziqam, mestr-kelenner ar bugel: « Dalc'hit leac'h ac'hano e-kichen va mah, hag evit kement-se, lezit a gostez peb tra-all... » Lavar d'in 'ta, Olier, penaoz eo bet an ofiz.

**Olier.** — Goude an aviel, epad ma laoska ar bobl yonc'hadenno a levenez, an Aotrou arc'heskob a zo aet betek an A. Duk, ha goude beza lakeat ar gurunen var e benn, en deuz e'z zaludet betek taer gwech. Breiz-zeur o zo o deuz yonched: « Bevet Arzur! duk ar Vretoned! Noël! Noël! da vab Jafre ha Constans!... » Goude an oferen, ar ganaouen a drugare a zo bet kanet gand euz levenez dispar. D'ar mare-ze eo eun bet digaset d'ho kaout.

**Keroman.** — Hag e welez, va mah, eo prest peb tra.

EIL DIVIZ

An hevelep re, Rohan, Loheak, Dijentil a Vreiz.

EUR FLOC'H.

(o tont dre an tu deou).

An aotrounez a Rohan hag a Loheak,

(Ar Floc'h en em denn dre an hevelep tu).

**Keroman.** — Ra viot deuet mad, aotrounez!

**Rohan.** — Deiz-mad d'eo c'h, Keroman, den kalonek; c'hoant hon doa da veza ama arsak an aotrou duk hag o gompagnunez evit beza test a levenez an oll.

**Loheak.** — E gwirionez, na weler dre-oll nemet levenez hag eurusded. Gwragez ha bugale Roazoun o deuz great eur c'hoad euz kear ha goloet an henchou a vokedou. Biskoaz na oe gwelet kement a vuez e Breiz-Izel.

**Olier.** — An duk Arzur a zo ker karet gant e zuzidi!

**Keroman.** — Ar zonz euz an dukevad Constans a zo c'hoaz ken beo e kalonon an oll!

**Rohan.** — Abaoe m'eo ganet an duk yaouank, lien annez a ran, morse na weler kement a zudjenti hag a dud diwar ar meaz diredet d'ar gear-ma ha bodet hirio gand al levenez ar vrasa. Kannedad ar Poatou, ar Men'ing an Anjou, gwazien Breiz-Izel! Ha ive kannedad roue Bro-C'hall a deu gand plijadur da ginnig o doujans da Vestr nevez hor broik Breiz-Izel.

**Keroman.** — N'oc'h euz ket klevet?

**Loheak.** — Petra 'ta?

**Keroman.** — Lavaret a veer e teuy Yann-Dileve ama dizale...!

**Rohan.** — Kement-se na c'hell ket beza... Ha petra glask?...

**Keroman.** — N'ouzon dare. Ar pezh a zo gwir eo penaoz epad m'edot o'kuruni hor mestr, ez euz deuet eur c'hannad da zigas ar c'helou d'an dud Arzur.

**Loheak.** — Va spered a zo enkrezet... Aon am euz...

**Rohan.** — Aon?

**Loheak.** — Ya, aotrou, ha ra blijo gand Doue e ti-gonesfe ganen fazia!...

**Rohan.** — Bezet ar vadelez, aotrou kont, da lavaret d'eomp ar pezh a zonzit.

**Keroman.** — Va digarezi a refet, aotrounez, rak emeur euz va gortoz e sal ar fest. (Da Olier). Deuz ganen, Olier, (Mont a reont dre gleiz).

Olier ha Keroman. — Salud d'eo c'h, aotrounez!

(Da heuilh).

KLAODA.

(1) Da lavaret eo e tleat enni euz Breiz evel eur mevel pe-our gwaz e d'o Aotrou.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur skoot ar bla evit Breiz ha Bro C'hall.  
2 skroud, evit ar broioù estren evit ar broioù holltek.

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breiz ha c'hoar en Breiz.  
*Furmes ar Geiz.*  
Gant brezonek eo douar ar feiz,  
Gand ar gallek ez alo a Vreiz.  
*Furmes ar Geiz.*

Dalc'hit hepred d'ho prezoned,  
Yes an dud vad ha kaloned.  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspen ar Yes, e ve Fez'het!  
Muzu.

Gouennet, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
mignon Klaoda :

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'henn digant hon eskop breizad, an  
Aot, n'eskop Dubourg ; unan eus ar gwella hag an du-  
diusa leoriou bet skrivet e brezonek betekhen.

## AN ASURANZ TUD

(Seta ni en hon blead),

E oamp o laret ar zun dremenet penoz, ewid asuti hon  
zjad, eo red mad d'imp c'hoari gant tud ar vro ; otrone-  
perc'henn-douar, tieien, mærien. Red eo d'imp dibab ar  
ge ar muian anoudek, ar muian dilui ane, da lakat en penn  
ar vreuriez. Setu ni en hon blead avad ar wech-man,  
Just ! Beau ! zo eur vreuriez zavet etre tieien (menajerien)  
Franz hag an otrone-perc'henn-douar. Redek a ra he gwrio  
dre bevar c'horn ar vro. N'euz ket forz pell e oa bet eur  
gozeaden diwar he fenn, er Hoc'h du-man. Honnez a zo  
dionimp, honnez a zo dens hon zouch. En em lakomp  
enni !

Eur gerig diwar-benn ar vreuriez-ze, herr-ha-berr,  
skleran ha fresan m'hallio hon fluen dister-lakat. Red mad  
eo d'imp ober anoudegez gand an itron-ze arog mont d'ho  
heul.

### I. — Pera eo ?

Ar vreuriez-asuranz a gomzomp anei a zo zavet etre  
an dud-perc'henn-douar hag an dud a d'erc'h douar. D'e  
oll e ro dor digor. Klask a ra eta brasan mad eur rumm  
tud a zo. Sevel a ra eur c'hef da barei ane diwar riskio  
hanval. Mad ! Deuz ar gwellant ! Derc'homp da dibuni  
hon c'huden.

Ar vreuriez-ze a diskarg, a asur an tiek (menajer) ouz  
kement droug a ouffe arrout, Doue da viro ! gand e zer-  
vijerien pe e devejerien, a skend al labourio, hag e ve  
zoken ar veventi pe ar gibel keriek d'an drouk.

Asuri a ra ive ar penn-tiegezh hag e diad-tud ouz an  
tapadenno a ouffe digoet da heul o labour.

### II. — Pefz an asuranz ?

Ar vreuriez a asur maro'had-matan m'hall, deuz ar  
c'hollo a digoe. Rag na zo den enni da baean, na den  
d'ober godel.

An tieien (menajerien) a bae deuz an douar a d'erc'hont,  
Honnez eo asuranz o servijerien.

O asuranz-int (penn-tiegezh hag e diad) a goust pevar  
skood ar bla.

An dud a vicher : jerdinerien, potred o faperio, hag  
ah, a bae herve gopr o zud.

### III. — Petore digoll a ro ar vreuriez-asuranz ?

Ar vevellen tapet, kelo gante da wellat, a douch  
diwar ar bemped devez goude o zapaden, eun hanter douz  
o goudegez penndiek.

Mar na zo kelo a-bed gant da wellat pe ma tigoueo,  
Doue da viro ! ar maro, e roo ar vreuriez eun dornad  
arc'hant herve ar marc'had a vo gand an dud, pe gand ar  
barner (ar ju) mar be red. Koust a-bed avad d'an tiek.

Ar penno-tiegezh hag o ziad-tud, mar zo kelo gant da  
wellat deuz o zapaden, a zo paet, diwar ar bemped de-  
vez : ar botred seiz real bemde, ar marc'had hag ar vugale  
deuz a 13 da 16 vla, trioc'h gwennek bemde. Diwar  
16 vla e veint paet evel tud en o oad. D'ar vugale dindan  
13 vla e tigoe dek gwennek bemde.

Mar na zo kelo a-bed gante da wellat pe ma teu ar  
maro, e tigoue d'o zud eun dornad arc'hant-hag a'ch a  
deuz a bemp kant da zoug vil lur.

Ar medec'h, al louzo, an hospital ewid ar vevellen

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourio pe d'an Otr VALLÉE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otr MOAL, Skrivaniere, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep ardeunad-skrivur.  
(Diskenn a briz evit meur a embann diotis-to).

koulz ewid ar penno-tiegezh hag o zud a zo war goust ar  
vreuriez.

C'hetu aze skler awalc'h a gav d'in, an tenor deuz ar  
vreuriez. En Franz eo zavet. Dor digor a ro, dre-oll, en  
pep korn, en pep terrouer, da gement a zo perc'henn douar  
pe a d'erc'h douar. N'ouffemp ket kaout well, n'houlomp  
ket well. N'hallomp laret diwar he fenn « Gortoz pell,  
gortoz well ». N' em lakomp eta, hep chom da chuchual  
na da dichani, war roll ar vreuriez-asuranz-ze. N'an-  
koump ket eo « Well eun tol arog ewid daou waderc'h. »  
Hastomp, arzu eo an est ! Gremp etreomp eur funien, eur  
gorden a meur a neuden, da harz bean cheinet da douille  
an dienez, gand kastel-estik an tapadenno, an drouglo  
ken stank zionaz ! « Funien a der neuden, eme ar Spe-  
red-Zantel, a zo diez da d'eri ». Ar funien, ar gorden a  
rellomp etreomp hag a gorseomp gand dorn ar garante  
gristen, a vo diessoc'h arde da d'eri. Diwar boez ar funien-  
ze e savlomp, mar bemp, Doue da viro ! skoot d'an douar  
gand ar c'hollo.

Ewit mont er vreuriez na zo d'ober, dre aman, nemet  
komz gand an Otr Bouget, Meer Mianhy, pe gand an  
Otr Briand, Meer Camlez.

Kroaz ar Vretoned a bed eun den latenet mad ben-  
nag, c'hoant d'an d'ober vad d'e genvroiz, da dremen dre  
ar paroujo, da gomz d'an dud deuz ar vreuriez-ze, ken  
red an de herie. Bennoz Doue waran ha war e labour !

EUR MIGNON.

## PASK AR VUGALE

Da noz an d'erc'hent (an de ardek).

Petra zo eta a nevez,  
Petra zo eru er barrez,  
Ma kan ar c'hoier levezet ?

Lavaret e ve an elez,  
Diskennet oll en hon touez,  
Da zispaka o c'haer mouez.

E gwirionez, an deiz varc'hoaz  
E vo ar c'haera eus ar bloaz  
Da vugaligou yaouank c'hoaz.

Euz e dron karadek, Jezuz  
A c'haly anezo didrouz,  
Gand e galon madeleuz.

O bugaligou, euz o c'h,  
Pa eme enno'c'h ar gwir beoc'h ;  
Netra na deo talvoudoso'c'h !

Ha koulskoude, c'hoaz eun nosvez !  
He zremenit gand an elez,  
Kouskit en o c'hompañnez.

Varc'hoaz, gand ar c'henta sklerdez,  
Pa vo al labourad en ar,  
C'houi zihuno mistr ha sader.

C'houi zihuno mistr ha sader,  
O sonj e Jezuz, ho Salvez,  
Ouz o kortoz war an Aoter.

Ho kalon c'hlan oll entanet,  
C'houi nijo evel an evned,  
Da-vit ho Toue benniget...

### Deiz ar Pask.

Alo, bugale, savit !  
Gwiskit ho tillajoù kaera.  
Setu an evned o kana !

An heol ive, 'barz en dremwel,  
A zo laouen 'vel eur bugel,  
O skedi eun deiz ker santel.

Gwelit, o vonet d'an iliz,  
Ar yeot o jintr' gand ar gliz ;  
Kaeroc'h hoc'h ene gand ar feiz !

Ha na laumt ket he kalonou,  
O klevet son c'houek an ograou,  
Pa voule'h ar belek al lidou ?

Deut eo poent ar communion ;  
Bugaligou, lezit ho skaoñ,  
D'an daol zantel it oll hep zoug.

Jezuz, ho mignon tenera,  
Ho kalv gand ar joa ar vrasa ;  
Mall braz an deuz d'ho priata.

O gweladen an dudiusa,  
Gand Jezuz-Krist ar wech kenta !  
Pensoz haifet ho tieplaga ?

Bugaligou, c'hoaz daoulinet,  
O c'hadal ho Mestr benniget,  
Ho mammou o deuz hoc'h heuliet.

O daoulagad a bar warnoc'h,  
Biskoz no dint bet teneroc'h,  
Ha biskoz n'ho karjont muioc'h.

P'oc'h euz ho Toue digameret,  
War ho skaoñik koat daoulinet,  
Euzio, bugale, pedeb !

Pa deont e-meaz an iliz,  
Int oll laouen evel ar gliz,  
O evito na kaera deiz !

An survad-ze, bugaligou,  
Brema vo d'oc'h gwec'honigou,  
O vonet d'ar zakramanchou.

Ken alvez ha ma karof,  
Jezuz en Hiz a gavlot,  
Hag en hoc'h ene resefet.

KLAODA.

## DISTRO AR BARZ KOZ

### I

Salut ! Douar zantel, Breiz-Teel ma Mam-Vro,  
A-viskoaz ho kariz, da viken m'ho karo !  
Goude tregont vloaz tremenet er gellder,  
E'ch on deud warjma giz d'ho kwelet, ma mamm ger

### II

Oh ! pegen douz e'ch e da galon eur Breizad,  
Goude ken pell amzer hadgwelet e Vamm-vad,  
Gwelet he meneier goloet a vruc gwerc'h,  
He faskajo ed-du ken gwen evel an erc'h !

### III

Dimeuz an tren-houarn, me a wel an draonien,  
Leun a gerc'h, a winiz, a vokedo melen,  
Hag en daou du d'ar ster, ar pradennou yeot-med,  
Breiz a'c'h e ar gaera deuz holl vroio ar Bed !

### IV

Me wel war he mor glaz o sevel ar wagen,  
Torret war ar roc'hell oc'h ober kezek gwen,  
Me glev ar feskellour war e lestrik vihan,  
O staga gant e zon ; dudiz e e gan.

### V

Ar mesager bihan, du-hont war ar mene,  
A gan a greiz kalon meulodi da Zoue,  
Pegen douz e klevet eun hekleo ken kaer :  
Kan ar Breizad bihan ha mouez an alc'houeder.

### VI

Me wel al l'buquer er park o labourad ;  
E galon 'zo sader pen e achu ervad ;  
D'an koust e boanio e kan eur ganaouen ;  
Gant e vouez gallouduz e tiston ar zaouen.

An novez a lakaez evit ober ar bragon. Hag, en de warlerc'h, pa dihunaz Lommik (rag-evel-ze e oa hañvet) e kavaz a-tal e vele eur brago bihan ru. Gwelkont a ret ac'han al lore'h a oa ennan. Bemde e vije lakaet, bemde ec'h e gantan da vale en henc'h. Gret e vije goab dioutan; kement e vele a stage da c'hoarzin, mas Lommik na re van rag 'n eur ober dihuet d'an dud e tape eur gwennek ac'han, eur gwennek alese. Pegen laouen e vije o rei 'nê d'eo vam!

Koulskoude, eun devez ma oa evelse o vale, e tenaz eur barr luc'had, kurun ha glao-bill. Lommik, aoun d'ean a gemeraz bihan hent ar ger. Treman a rez 'kichen eur groaz kozt membrat. En eun toullik gret ebarz ar c'hoat e oa eur Werc'hez vihan. An avel hag ar glao a strape outi gant nerz, hag ar Werc'hez, he daoulagad leua a dont, a zebante skuith daerou, Lommik a dolaz ple hag, evel eur bugel savet en doujanz Doue, e kemeraz true: « Pion, emean, zo bet kri a-walc'h evit trei ar Werc'hez, an hini aze mamm d'ar mabik Jezus, war-zu an amzer fall? » Ha kerkeit e tenn e vrigo ru, e krap war an desan tec'h ma oa ar groaz, hag e laka e vrigo da goach ar skeuden vihan.

Tri de goude, eur sul, goude ar gousperou, person ar berouz a deuz da di Janet da rei an aluzen evel ma oa e gustum. O wélet Lommik en e vele e laraz: « Petra, klav eo ar bugel-ze? » — « Klav? 'me Janet. Pell ac'han! Sonjet, aoutrou Person, petra an euz gret ar marmouze! » Ha neuze e kontaz d'ean pez a oa tremenet. Ar person, daerou en e zaoulagad, a lavaraz: « Ar bugel-ze n'eo ket 'vit en em rei da dreo an douar. An Aotrou Doue an neuz c'hoat d'hen kemer en e zervij. Gret ar sakrifiz. Pen-e gwir ho peuz c'hoaz enn toullat bugale, lezet anean en em c'har, ha me a vero, a wisko hag o skoliato anean. Gant ho pelonté 'ha graz an Aotrou Doue, me rey gantan eur belek mad. »

Janet a asantaz eset awalch, rag goud a re penoz na vije ket gwelloc'h savet evit er prespitor, Hag ar person, ar bugel war e vrec'h, ha lore'h braz ennan, ac'h eaz gantan war hent ar vourc'h. A-boan ma oa arur er ger ma reaz eber dilhad d'ar pôr bihan. Pan 'nevoe pemp bla e roz d'ean kenteliou ha da driekz bla ec'h eaz da Golach Gwengamp evit stagan war ar c'hour latin, dre ar bevered klas. Bean 'oa ennan deuz ar re gentan 'n e glas, ha war fin ar bla, en nevoa goneet leiz a brisiou. Tri bla goude, ec'h eaz d'ar c'hoardi braz hag eno are dre e labour, dre e vuezegaz, e ros skouer vad d'an oll gloer.

Mez demp hep dale da de e oferen neve. E berson, koz breman, mes akwit c'hoaz, na bade ket gant ar lore'h. Pedit a re leun a dud da dont d'an oferen, ha da vernian. Chilaouet e oa, hag eur stal veleien a deuz d'ar c'heur. Laret a oa an oferen war an ton braz.

Pan ariaz ar goureou, e chomaz Lommik plomm an e zav, e zaoulagad 'trezek an nenv hag e stagaz da c'hoarzin. An oll veleien, souezet braz, a derc'hoz o c'hoar kent ma oa fin. Mes a-boan e oant arur er prespitor, ma larfont pez a oa tremenet d'ar person koz, Ma Doue, nec'het e oa! Nag a boan n'an nevoa ket bed gant an hini a gare ar muien er bed-man! ha breman heman a re eur sakri-lach braz! Mes chetu ar Lommik gant eur minc'hoarz evit poket d'eo Berson. « Pella diourin, eme ar pôr koz; pelec'h e kredeze tostât, te a teuz en em laket da c'hoarzin 'pad an oferen zantel? Bez da viken milliget! » — « Ma zad, eme Lommik, c'hoarzed 'meuz marteze. Mes pion n'an nije ket gret en em lec'h? Oh! mar 'pije gwelot ar Werc'hez gant ma bragon ru! Pegen kaer, pegen lugernuz e oa! Gwelot ran 'nei c'hoaz gant he minc'hoarz o tostaat anean d'in hag o laret gant eur vouez kaer meurbed: « Ma bugel, mar gout belek breman, eo graz d'ar brago en a tou roet d'in, bean zo ugent vla! » Ha neuze e tec'haz douget war eskel daou el.

Aime RIOU,

eur Kemper, e skol brezonek kolaj Gwengamp.

## KENAVO...

D'am mignon ker e Evnik Arvor.

Kenavo! komz leun a anken,  
Leun a c'hlacl'har evid an den...  
Kenavo! ive komz a spi  
Goude ar c'himiad levenez,  
Plijadur war-lerc'h an eukrez,  
Ha de-mad goude hirvoudi...

Kenavo! oht n'ag ez eo kri,  
Pa'n em gav de an disparti,  
Laret d'enn tad ha d'eur vam vad  
Ar gomz truezuz ha poaniz,  
Arag mond en hent ankeniuz;  
Kenavo mam! kenavo tad!

Kenavo! pa ver pellaet  
Dimenz kerent membrat laret,  
Nag eo frealuz d'an tuc  
Sonjet ebarz ar vignoned,  
Hag ankouat ar boan-spered:  
Neuze e kresk ar garante!

Kenavo! war hent ar vuc  
Me wel daou den seder eun do,  
Levenez o deuz eur pennad;  
O c'halonou a zo unan,  
'Pad an de emait o voukan...  
Zerr-noz! Arru eo ar c'himiad!

Kenavo! diwean termen,  
Eur pennad c'hoaz ha netra ken!  
En em garot 'hed an hent braz;  
Seta breman lec'h an daero:  
Eur pok pe daou ha kenavo...  
Pogout? ... N'ouveer ket... siouaz!

Uvan ac'h a gaud e dam hent,  
Hag egile ive kerkeit,  
O daou dihoaz e valeont;  
Gwech e t'arcont o fennou,  
Evid zellet war o forc'hou,  
Ha kenavo c'hoaz a laront!

Kenavo! En dispieg pellan,  
Unan zo distroet breman,  
Hag egile e zav e vrec'h;  
Egile a sko c'hoaz eur zell:  
War e vignon arri pell, pell,  
Ha kenavo a lar gant bec'h!

Kenavo! evidomp, tud kez,  
Er bed nemed tristidigez...  
Hirie aman, ar c'hoaz du-hont!  
Neb-lec'h peuc'h paduz na gomp,  
A-boan kouezet mad e tec'homp:  
Bemde o vont, bemde o tont!

Kenavo! diwean kimiad,  
Leun a grizder, a galonad,  
A vo war hon gwele maro,  
Pa gwithomp ar bed pec'huz,  
Evid an Neuvou evruz,  
Lec'h na vo mui a genavo!!

AR YEODET.

## KOATREVEN

### Pardon Santez Anna

En-touez an oll bardoniou brudet en Breiz en enor d'hon Sent koz, pardon Santez Anna, patronez hon bro Breiz-Izel, a zo unan eus ar re vrudetan. En kalz a barouziou eus eskopti Treger ec'h e bet gret evit ar bloaz, mes, dreist-oll, en parouz vihan Koatreven; eno e oa lidet eus ar c'haeran.

Ar pardoner, an otro Moris, kure Plouha, belek kalounek, an eus gret en ofren-bred eur brezege, hag a so et-douan en kalonou parousianis Koatreven. Displeget an eus dirake oll vuc skouerins Santez Anna, en eur laret d'an oll kavet eun devozion dener eviti, hag he fedi ebarz 'n o oll ezomon, hi he divije dalc'h-mad eur gwir souzri dioute, pan eo gwir ec'h e patronez hon bro ger Breiz-Izel. Da gaeat ar gouel e oa dent muzik kloerdi bihan Landregor, hag an Ilis kempennet kaer a diskouele ive pegement e kar Koatrevenis Santez Anna.

An dud diredet eus ar parouziou tro-war-dro a lakee kalz a brez en Ilis re vihan evit digemer an oll, ha kals o deus reket chom er-maez daoust d'an domder. N'eus forz, Santez Anna a chilaoue bepred o feden pelhina a zave ken drant yar-zu an Nenv ma oa ar levenez en kalon pep-hini.

Ar gousperou a oa kanet da daer eur var eun ton koad, ha goude e oa gret ar prosesion. Er prosesion e oa douget relegou Santez Anna gant daou velok, hag e oa kanet kantikou kaer en hec'h enor. Gaude ar prosesion e oa gret Saldur ar Sakramant (meulet ra vezo!) ha, goude, oa avielet ar vugale vihan.

Pa oa achu pep tra, pep hini a zo distroet d'ar ger en eur laret kenavo da vla da Santez Anna, ma ve bolante Doue, joa ha levenez en o kalonou.

C'hoaz arog achui, e fell d'in, en hano parouziou Koatreven, lavaret trugare d'an otrone beleien o deus sikouret o ferson karet, an otro Menager, da lidan pardon kaer santez Anna. Trugare d'an O. Moris, ar pardoner! Trugare ive d'an O. Menager, person karet Koatreven, a ra pep tra hag a lid ar gouliou kaeran evit krevat ar fe en kalon e barouziou.

Ha c'hwil, Bretoned, a zo bet o pardonan en Koatreven pe e lec'h all, pedet Santez Anna eus a greiz ho kalon, lakomp hon oll fizians enni pan eo gwir ec'h e patronez hon bro, rag ousep ma 'ch e nerzuz he breac'h ec'h e tom he c'halon.

Goulenomp diganti, dreist pep tra, ar peuc'h d'an Ilis hag an urz-vad en hon bro, ha ma kendalc'ho evel gwejjal ive entouez hon tadon koz hag o deus laket dreze o hano da vean ken brudet dre ar bed oll.

Rag se eta, Bretoned, laket ho fizians en Santez Anna, ha Santez Anna ho sikouro.

Itron vad Santez Anna, pedet evidomp ha sikouret hon bro.

L. C.

## Eur gouel brezonek e kastel an Aot. de Guebriant

Eur skouer-vad.

Komzet hon euz aman eus ar skouer vad roet gant tudjentil Breiz-Tramar. Setu aman eul lizer hag a ziskouez eman tudjentil Breiz o tihuni int-i ive.

Aotrou Ker,

Ar blijadur am euz da lavaret d'ec'h em aot, hag an Itron de Guebriant o prienti eur gouel bras e Kastell a-benn ar 6 a viz Eost hag o deuz great da botred Sant-Vouga en enor d'eo fedi da vont da c'hoari « Alanik al Lonarn » en o fark. Dirgwener diveza oun bet oc'h en em glevet ganto diwarbenn an doare da gemeret da gas an traou da benn. Ma vije bet kalz tudjentil evel re ar Ger, nevez edo dihuget mad Breiz-Izel dizale rak sur oun e raio ar Gouel kaer a lakeont ober en o maner, kalz vad d'ar brezonek ha d'ar vro. Plijet gant Doue brema leze anomp e yec'hed hag e tro da gas ar stal da benn!!!

Goulennet e ti an Aotrou Bernard, leorier e Kemper al

### Levr oferen latin ha brezonek

gant an Aotrou abad Gall; ar gwella hini d'ar Vretoued da heuilh an ofison.

Goulennet, e Ti Prud'homme, levr neve hon mignon Kloda:

### MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-goue'henn digant hon eskop breizad, an Aot. n eskop Dubourg; unan eus ar gwella hag an dudius leoriou bet skrivet e brezonek betekhen.

GOULENN e bureo ar Groaz; Gwerziou sant Erwan, al Labourer, sant Milto, sant Konevi, hag all. Eur gwennek ar pez.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhaume.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eor skoot ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoot, evit ar broioù estren evit ar broioù keltiek.

## SKRIVANIERIEZH

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLÉE, Renner, ru Zant-Deneal, Zant-Bleek,  
pe d'an Otro MOAL, Skrivaniér, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek psp arc'houdeñad-skriver.  
(Diskenn a briz evit meur a embann-douez-h).

Ar brezonek hag ar fels,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar deiz.  
Gant brezonek eo deud ar fels,  
Gant ar gallek eo alio a Vreiz.  
Furnez ar deiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud yad ha kalonek.  
Yez ar fals eo ; ma ve t'raebet,  
Ouzpañ ar Vez, e ve t'raebet.  
Mizad.

laret bepred endro d'id evel disul : Setu aman ar zantez vihan Filomena.

Endro da Filomena e oa merc'hed bihan all : he mam Basilea (Honorisine Golven), he mitez, Féadora ; gouarnerez palez Dioclesian, Malrona (Jozefin ar Char) ; Epouman, mitez Matrona. Pep-hini ane, dreist-holl Basilea ha Matrona, an enez gonest koz a ventodi, ha n'ankounain ket hanvan gante ar « Werc'hez » hag an Ele », dreist-holl an hini bihanan ; hennez a oa, 'vit e oad, muioc'h dilu c'hoaz evit ar re-all.

Kalz a dud, n'euz ket ezom da laret, a oa dastumet disul d'abarde, en porz ar skolarerezed kristen, dirag eun teñt koant kompennet eno gant tud dornet m'ad, amenez-erien, livareien, pe fichererezed. Bez' e oa, etouez ar veleien, otro person Zant-Fiakr, otrone kuresed Boulvriak, ha Renner ar skol gristen ; an otro Beskond, kure Peurit-ar-Roeh, otro kure Lanrodec gant eur bagad poted yaouank ; an otro Troquer, mestr-kelenner en Plougerne, — etouez ar varzed e oa *Enn'h-Arbor*, dent deuz a Zant-Nikolaz ; ar Bourdonnez deuz a golaj Gwengamp, *Bar-Zant-Briak* deuz a golaj Landreger ; da brezidant e oa an otro Olier, depute, en e gichen otro mear Plijidi, conte da « Filomena » ; ar mear koz, an otro Derien a oa ive gant e dud hag oll pennon braz ar barroz v e oa dent. Pan eo bet pare ar c'hoariadeg, an O. Olier a zo zavet evit laret e vennoz. Souezet e oa mearbed, gant ar pezh an evoc'klevet ho gwelet. Ma gouar'hemennou, emean, d'ar mammou ha d'an tadou, d'ar veleien ha d'ar mestrezed a zav bugale evel ar re-man.

Red eo d'in bean me ma-man en em gavet en eur pleg evellen evit gont petra dalv d'eur Breton e yez. Red eo d'in bean gwelet breman zoudan ar vugale deuz eun tu hag an dud deuz an tu-all evel peget o inao kenver-va-kemper, evit gont pesort galloud an euz ar yez da unani sperejo ha kalono an dud. Labouromp eta stard da viret hon yez ; asambles gantan na i viro hon fe, hag evelse ni 'vo tud egiz ma eo d'et d'imp bean.

Straket a zo bet an daouarn d'an Otro Olier, rag plijadur vrax a re d'an holl klevet penoz an O. Olier nan eo ket hepken kannad evit difenn hon danve ha gwizid hon fe er Gambre, mez ive evit difenn gwizid hon Bro Breiz a zo kentan tra a garomp goude Doue.

Pan eo bet kavet ken mad labour ar c'hoariereien, red eo o digoll deuz o foan. An otro person an euz bet aman our sonj mad adarre, o rei prizioù brezonek d'ar re wellan ane. Et zo bet ermez *Beaj Jerusalem* gant *Klaoda*, ha *Pipi Gonto*.

An otrone Vallee (Abherve), Olier, depute, Beskond kure Peurit, Bourdonnez, kure Plijidi, an otro Jouanno, Dir-Na-Dor ('meuz aon e zo c'hoaz re-all) o deuz roet bap a briz.

War ze eo bet klozet ar pardon, pardon Zantez Filomena, hag an dud a zo et d'ar ger, pep-hini gant e gaoz : « Ma vijemp-ni, eme eun tad koz, ken stard en hon fe evel honnez vihan !... »

Zantez Filomena, herve welan, he deuz, eta, hadet kalz a c'hreit mad epad an nebeudik amzer m'he deuz 'n em diskouet d'imp ; Doue da rei e vennoz d'he labour !

Kalz a dreo a vije c'hoaz da laret diwar-ben ar gouel-man. Chom a rin war bouez an daou-man hepken, gant aon na deufen abean da dazoni ma lennerien.

Marteze an holl na soufont ket nag a vad a ra d'ar vugale bean desket da c'hoari peziou evellen : vad d'ar spered, vad d'an ine, vad d'ar galon. — Ar spered a deu da sklerad, da grenvad, an ine a deu da uhelat hag ar galon da deman. A-hent-all, ar vugale a goll an aborder a ra d'he beanken goue awechou ; o stum en pep feson a deu da vean muioc'h d'eread ; kement-man eta a dalvez d'o kalz war ar blavez skol hag a ro kalz a zikour d'o zevel.

N'ankouamp ket eta breman, ardg achui, pedi an Otro Jouanno hag e c'hoarerezed bihan da aozan d'imp c'hoaz da via eur pred evel heman.

An tanva kentan an euz plijet, mez eun eil a blijo

muioc'h c'hoaz, ha tam-ha-tam, ar Vretoned a deud adarre da 'n em stagan ouz o yez hag ouz o spered ; mez red eo da gement hini an euz galloud da za ambrong ane war an hent. An O. Cognic, an O. Jouanno, Filomena hag he c'hoarezed, o deuz galloud d'hon didan ha d'hon c'helen otro Bretoned. Ar galloud-ze, ha nan eo ket diste, a zo d'imp evel d'e : an arc'hant, pa've kavet, tennet deuz an douar, tenzet ha labourer, a zo evit mont emesk an dud, ha nan evit chom da louedi en korn ar pres. Ma, ho talanchou, tud vad, eo arc'hant ar Vretoned !

Dir-Na-Dor.

## GOUELIOU PLIJIDI

Bue ha Merzerenti Filomena, gwerc'hez ha merzerez. — An O. Olier a gomz evit ar brezonek. — Maulodi da « Filomena ». — Parrouz Plijidi, skouer ar parrouzioù breton. — Kenavo da via !

Zur eo penoz ma 'n ije gouezet an holl kouz ha me petra oa da dremen en Plijidi disul diwean, ar bouk a vije bet leun a dud diredet deuz a bep tu d'ar c'hanton hag euz a belloch c'hoaz.

Petra oa 'ta, eme-oc'h : eur redadec kezek, eun asamble, eur brezegenn diwarben ar vot, eur pardon ?

Eur pardon zur a oa, seurt ma omp digustum da wet : Zantez Filomena, evel pa vije diskennet deuz an nevou, he deuz dirag daoulagad an dud, komzet, kerzet, goulet, gouzanvet poaniou, bevet ha marvet. Penoz eo c'hoarvezet ar burzud-ze ? Dre c'halloud daou velek a skiant hag a galon, an otrone Cognic, person Pleuveur, ha Jouanno, person Plijidi, o deuz evel c'honest en eur plac'hik unnek via, deuz a barrouz Plijidi, Marianna ar C'hoz he hano, spered, kalon hag ine ar brinez Filomena bet merzeriet gwec'hall yaouank-flamm gant an impalaer Dioclesian.

Filomena a oa merc'h d'eur rone bihan deuz ar Grés ; Dioclesian, mestr ar bed, o vean gourdronzet ober brezel d'ean, e teuas da Rom gant e verc'h hag e wreg da c'houlen he c'hras digant an impalaer.

Filomena a oa kristenez evel he zud hag ojet a dri-zek via. Kement e plijas da Ziotlesian m'he goulennoz en dimezi, ha divizet e oa e vije zinet ar pench pa vije zinet ar c'houtrad. Mez Filomena he devoa gant otre he mam gwestlet da Zoue he gwerc'hed, hag a zinac'has kemer an impalaer da bried. Kaer he doa he mam, touellet gant ar spont, dere'hel warni da lavaret ya, kaer e oa he frizonian, he skourjean, kastizan en pep feson he c'horf tener, Filomena a chomaz stard en he c'hreden. Dibennet e oa d'ar fin ar plac'hik 13 via. Keit ma oa er prizon, ar Werc'hez hag an ele a deus war he zro ; war eur he maro, e oa gwelet he ine o sevel d'an ne dindan furri eur goulm wenn ; meur a linn denz ar re o devoa gwall-gaset anei, en o zouez he mam, a deuz da zizrei ouz Doue ha da c'houlen pardon outan hag ouz ar verzered vihan.

Setu petra a zo bet gwelet en pez-c'hoari an O. Cognic, en tro pevar arvest ; da achui, e weler Zantez Filomena, eur c'helc'h aour eadro d'he fen, zavet 'uz d'an douar gant daouarn an ele o kavan endro d'ei.

N'halljed bihan sonjal kseroc'h, dudusoc'h na tene-rusoc'h tra eget ar pez-c'hoari-man, kement a skouer vad emuan ha ken liez a gentel. Mez red eo hen gwelet evit prizioù anean d'o dalvoudgeez ; red eo gwelet « Filomena » hag he c'hamaraderezed.

N'halle ket bean koantoc'h, na feroch, na glanoc'h, na dousoc'h ar gwir brinez Filomena a C'hres, evit na oa he farez pe he c'hoar vihan « Filomena » a Blijidi, gant he bleo melen, he zae wenn, ar c'helc'h aour endro d'he fen, he c'houz ken flour, hag he zellon ken tener ken pa zave ane etresek an ne, beuet a zaeon, en eul lavaret : « N'hallan ket, man gez, ma c'halon a zo da Jezuz ! » e lake, kazi 'vit laret, an holl galono da straket.

A ! plac'hik vihan a Blijidi, eur gaer a brezegenn a teuz grêt d'imp an de-man. Dalc'h sonj deuz zantez Filomena, evit gallout c'hoaz dre ar furnez, an dousder hag an nerz-kalon a teuz desket ganti, rei bepred skouer an nerz-kalon a teuz desket ganti, rei bepred skouer vad. Ra savo bepred, evel disul, en kalon an holl, pa 'z twelfont, santmanchou ha sonjezonou mad ! Ra vo

## AN EST

Daro eo an ed ; eman al labourer o vont d'ar park, e fals gantan war e vrec'h. Eman er park, hag eno, daoubleget dindan gwrez an heol, e tremeno e zevez o tustum ar bara an deus ezom evit magan e dud enpad ar bloa. Eur c'houezen a deu var e zremm metenezet gant tomder an heol, poan an deus herve e weler, n'eus forz, ar souj da ziskwizan en-kerz ar goanv an neus ive, pa 'nevo dastumet an ed-ze a vezo evit bean magadurez an tiagez.

Evit terti eun tam a bean, ha rei muioc'h a nerz d'e gorf e kemer eun tam bara hag eur banne jistr.

Goude bean gret eun diskwizaden ec'h adkemer adarre e labour ; eman adare daoubleget war e erv. Da heul ar c'houezen a zo war e dal, eman ive ar levenez ; poan an neuz, mes jea an neus ive, rag arrog stagan gant e labour en neus goulenet digant an Aotro Doue an nerz an neus ezom evit dastum e bara pemdeiek.

Kouls mern a so ; eman ar labourer o vont d'e vern, diskwizan a rey adare o kemer eun tam magadurez evit e gorf ha kaout c'hoas eun tam nerz.

Da ziskwizan e ben e ra eur c'honsk goude e vern ha goude e stago adare d'e labour evel kent. Eman adare a korf roched er park. Na poanius ec'he e stad ! O yar na c'houfe den all ebet bezan 'n e lec'h ha koulskoude hen a zo bepred laouen, ar boan na ra nera d'ean. Dere'hel a ra bepred gant e labour hep sonjal en e boan.

Arre e tost d'an noz, an heol a zo war izelât, tostât a ra da guz heol, bremaik e vo poent dont da goan. Bepred ar labourer a dalc'h war e fals, rag gwelet a ra an treou o koac'h an gantan. Krog e ar c'hlar noz da zôn ; neuz e tap adare e fals war e vrec'h hag e ten d'ar ger. Tenna a ra e dok hag e lar eun *De Profundis* evit an anaon, hag eur beden d'an Aotro Doue evit tregarekad anean sus ar grasou an eus roet d'ean enpad an devez-se a boan.

Dont a ra d'e goan ; eman breman en mesk e dud. E vugale en-dro d'ean a lake levenez leis e galon hag a lake anean da ankouat ar poaniou an neus bet enpad an de.

Goude koan, ha pa ve klozet treon-koan ar labourer a dap diwar ar preasstr ar levr *Bue ar Zent* hag a ten dirag e vugale bue ar Sant a digoue. Ar vugale a chom zouezet o wet poaniou ha pinijennou ar Sant-se hag o deus true-oue e stad ; mes hen a ankous neuse an oll poaniou an neus bet pa wal pegen diste ec'h int en-kichen poaniou ar zent. Pa ve achui, e kemer dour beniget hag e lar c'hoas eur beden da Zoue hag ec'h e en e vele da ziskwizan goude eun devez a boan da c'hortoz adkrogi adare an de war-lerc'h.

Setu aze, labourerien Breiz-Izel, bue ar labourer kristen enpad amzer gwall-labourus an est. Ma vije evelse oll labourerien Breiz-Izel, e vijent evrens, hag ar boan o deus enpad an amzer-man a vije skany da zougen, mes siouas kals aneze a ve oc'h en em glem dre ma n'hall ar labour 'n em ober e-unan. Er c'houzel e kletet ober : bannig ho poan d'an Aotro Doue elec'h en em jali evel a rei.

O labourerien, tud e boan,  
Tud a anken 'bars er bed-man,  
Kriquet ho poan da Zoue ;  
Kals skanvoch e vezo neuz,  
Rag ho poaniou a zo diste  
En-kichen poaniou hon Salver.

L. G.

## EUN TORFED NEVE

Urulinezad Landreger stlapet er-mez ens o zi.

Na haouez ket hon renorien dizoue gant o zorfjeou. Leanezed santaz Ursula; bat savet e leandi o Landreger eur c'hanivad a zo, a oa bet sanket d'ar zoni o sked, da heol gouellou dibater Renan ha denezegz Romb en Breiz. Na 'vit se, e krede d'an oll e'ch heijont padout c'hoaz ha der'hel da cham en o zi, o vezan na oa mui hen a skol gante, ha ne reent ken nemet pedi en-diabare ens o chapel. Erit doare, kement-se, da lavet ad pedi en o di, a zo c'hoaz eur re vraz torfed d'hon renorien franmasoned da hallout gouzanv anezan. Gant-se emañ o paouez kas an archedien da zeri al leandi ha de silepel ar paour kez leanezed er-mez. Kals a dud vad a oa an em vodet en-dro d'al leandi da rei d'al leanezed, o deus graet kement a vad en Landreger, eun desteni a anaoudegez vad hag a garante. Trugare d'an dud vad-se ha mez war ar waskerien hag o mignoned!

## EFFLAM HAG ENORA

Efflam 'nevoa kwitaet Enora, e wreg ker,  
Epad an nozvez kenta goude o eured kaer;  
Douget oa bet dre vuzud betag bro Breiz-Izel,  
Rag 'vit serviji Doue 'felle d'ezan mont pell.

Enora ouefaz meurbed, p'ouveaz kement-se,  
Klask a reaz he fried en eur pedi Doue;  
Doue 'gemeraz true ouz ar wregig dinam,  
Hag a gemennaz d'eun ael kas anezi d'Efflam.

Ha seta pa zihunaz 'n de war-lerc'h d'ar beure,  
N'e em welaz gwall-zouezet war donaro neve,  
En em tas d'ei ar mor, en tu-all eur menez,  
Arro oa en Breiz-Izel 'n eul lec'h hanvet Leo-Drez.

Sonden en eur drei he fenn, 'welaz eun tammik ti,  
Eun tam lojeunik dister zavet gant koat ha pri,  
Enora 'c'heez raktal war-zu dor an ti-man,  
He c'halan ha dorn Doue he digase aman.

Hogen Efflam en noz-ze an evoa hunvraet  
Oa gant az Eic d'ezan Enora digaset;  
Seta perag pa glovaz skei tri dol war an nor,  
Buhian ive d'ar wreg ker c'heaz da rei digor.

A-hoan e oaint 'n em welet, an daou bried neve  
'Stouaz dosta d'an daoulin evit menli Doue  
Da veza e unanet dre eur burud ken kaer,  
Da veza bet, en eur gir, ken mad en o c'henver.

Efflam koulskoude 'laraz d'ar wreg vad Enora:  
'Da Zoue ma 'm euz touet kwitit treo ar bed-ma,  
Ar bijadur, ar made, ac'hanout-le zoken,  
'Vit 'nem rei korf hag ine d'ar Mestr, krouer an den.

Ha te ive ma 'penz c'hoant d'Her serviji ervad,  
Red eo d'ei ma dilezel heb kaout re galonad,  
Euz d'ar eta brema, o va muia karet,  
Petra a zo gwel ganid em gwelet pe 'm c'hlevet?

— E Efflam, o ma fried ker, 'me an dous Enora,  
Pa renkemp 'n em dilezel mez hepken er bed-ma,  
Gwel en gante de glevet eget m'eo da welet,  
Kenavo 'ta en Nervo, kenavo ma fried li —

Efflam neuz d'Enora 'zavas eun tammik ti,  
Lojeunik dister hevel ouz he hini,  
Ha eul lec'h gante choazet 'vit galloud 'n em glevet,  
Mez 'vel m'o devoa laret, hep galloud 'n em welet.

MARIE EFFLAM.

## PARDON AR RELEK

Plouneour Menez

A vo lidet de goul-Mari-hanter-east. An Aotrou abad  
Kostamarc'h, eus Kastel-Paul, o vo ar pardon. Kals a  
berc'hannead a ya hep bla d'ar pardon brudet-ze eus a  
beur c'hoar ar vro, dreist-oll eus eskoptio Leon ha  
Feger.

Eiz kant vloz zo eo savet,  
En honer d'hon mam venniget;  
Kreuz da rihen eo da hezel  
Ouz gwail-amzer, barronavel.

## PONTREO Eur c'hanv

Setu aman eur lizer diwar-benn maro-eun-den mad ha  
kriston, nove digouezet e Pontreo. Doue a vo gant ens an  
den mad-ze!

Eur c'helo gwail-drist am euz da digas d'ac'h hirie,  
A. Rener. Groot hon euz e Pontreo eur c'holl eus ar  
brasan. Ar glas klemmus o kouean 'vit ar beure eus lein  
an tour an deus rost d'imp da c'houd na oa ken eus ar  
bed-man ac'Christen mad eo bet en e vuez an Otro Pierre,  
noter. Ha vero e ine gant Doue! Pignet eo, zur mad, en  
Nenv war skeul ar Garant e douge da Zoue, rag a vis-  
hoaz an deus difennet o lezen hag e skolioz, heb soun  
ebed. E. largenter, e-kenver at bebrisan, e vadelez evit an  
holl o deus servijet d'an da-dion-estell betag ar Baradoz.  
Kement hini a oa er boan hag en ezom 'an deus 'heprel  
kavet-dor digor en e di. E galon vad, hanvat ouz hini e  
itron, an deus talvezet d'ean, bean hon ens ar greden,  
unan euz ar c'haeran lec'hioz a ro Jezus en e rouantelez  
d'e zervijerien fidel. Ma kendel'ho ar re a zo chomet  
war e lerc'h da gerzet war e roudou; o hanoio a zo  
moulet en kalon kement den a feson a zo er vro, en  
kalon kement paour a zo war dro.

UNAN EUZ E VIGNONED.

## ROSPEZ

Ar person nevez

Gelvet eo bet da berson Rospez eur belek desket braz,  
an Aotrou abad-Jourand e hano, bet mestr-kelenner en  
Sant-Briek, e lec'h o oa anavezet mad ha brudet dre e wi-  
ziegez ha karet ive gant an holl. En tu-hont ma 'z eo  
disket-braz war ar gallek 'n'en deuz ket e bar da zvel  
gverziou gallek an Aot. Jourand a oar mad-ter ar bre-  
zonek ive; eur breton kalonek eo anezan hag eur mignon  
da Grouz ar Vretoned ha d'he renerien. En em unani  
a ra ar re-man, a greiz o c'halon, gant parousianiz vad  
Rospez, e deuz graet d'o ferson-neve ar gwella digemer  
an 30 eus miz diveza, evit kas d'ezan o gwella menozion  
ha re lennerien Grouz ar Vretoned. Ar re-man a bedo  
oll an Aotrou Doue evit ma skuilha e vennoz hag e builha  
graso war an Aotrou Jourand, d'ezan da ren e barrouz war  
hent ar Baradoz.

## Ali d'eul lenner

Trugare d'hon mignon mad ens Kerne an ens kaset  
d'in da voula eur pezik-barzoniez sinet « Pierrick ». Mad  
awal'h eo, nemet geriennoz zo ennan ha n'intentomp  
ket 'vel ar ger « Kristivel » laket da hano ar pezik. Goulen  
a reomp eta digant Pierrick diskleria d'imp Petra eo 'ar  
ger-ze ha rei ive e wir hano evit ma hellfomp kas eur  
Grouz d'ezan pa vo bet moulet e bennadik-barzoniez.

Eur pennad all hon doa bet ive digant eur mignon all  
eus Kerne, bet war e studi er c'hloardi. N'hon deuz ket  
gallet moula dre na oa ket reiz mad e vrezonek, d'hon  
lennerien d'e intent eaz awal'h. Plijadur a rafe d'imp,  
koulskoude, moula treo ens Kerne hag e pedomp hon  
lennerien eus ar Ran-vro-ze eus Breiz da gas d'imp pen-  
nadon en eur skriva ane ar reisa ma hellfont.

MAROLODED VRUDET A VREIZ

## PORKON A VARBINAIS

Bean 'zo tud hag eman ar giz gant, p'o deve c'hoant  
da zisklerian eun taol kaer bennag, eur skouer dispar  
bennag da dud o amzer da heuilh, e'ch a dalc'hmad da  
glask ane 'bars an amzer goz, en amzer ar C'hristianed pe  
ar Rotaaned. Kredi 'rajed, ouz o c'hlevet, penauz, 'houe  
an amzerio-ze, n'ez ens bet gwelet hini war ar bed hag a  
ve zavet dreist ar hebl dre e vertuio pe e norz-kalon.

Koulskoude en pep bro ez ouz bet, en koule pe goule,  
tud evit-se: tud dister pe tud a renk uhel o deus difennet,  
hep pofereze nag arde, a betra eo gouest an den pa vo 'n  
e greiz eur galon dispouron, pa red 'n e wazio eur gwad  
kreuz ha fil, ha, droist-oll, pa ve harpet war eur le vir-  
vidik. Sallantou a ra Doue bean roet d'e an oll vertuio  
dispar a ra o enor evit 'pholant kalono o breudeur eus o

amzer hag ens an amzerio da zoned, dre an heiz a zav  
dione o skourio.

Nag a hini eveste a zo gwelet an hon bro ni en pep  
kouls eus he'ch lister: sent, harzed, zouardes, meste-  
lodet, tud a bep stad hag a bep michez zavet onni 'vel an  
derv en he c'hoaz. Med pegeu nebent ane a zo zavet  
en hen rouez-ni, Bretoned! Hat keezal labour e ve evit  
eur Broizad gwiziek, eur dou a galon, dastum o hanoio  
hag o obero en eun teskad ductue da ziskouet d'ar vro-  
toned n'o deus ket da ruiav na da blegan o fenn d'eur  
pobl na gouenn-all ebet war an douar.

An hini e'ch an da gomz d'ac'h anezan fete, mignon  
lennier, n'hall ket bean anaveet nemeur ganach ive;  
koulskoude ez euz bet nebent c'hoaz war o lerc'h a greden  
d'ober eveltan. Setu aman e vus en berz-gomzo.

Par Porkon a Varbinais a oa ganet an 18<sup>th</sup> viz here er  
bla 1637 en Sant-Malo, eur ger hag a zo savet diouti ken  
liez a vartolod kalonek. E gerent a ro konverz bras war  
vor 'vel kazi an oll tiegezio mad eus ar ger-ze d'ar c'houlz  
ma komzand d'ac'h.

Med na oa ket brao redek ar morie gant konverz hep  
bean gouest da 'n em zifenn: laeron-vor a oe e-leiz ane,  
Ret e vije eta d'an dud a konverz sevel ha kes listri armet  
mad da zifenn o listri-all er morio-pell.

Porkon a Varbinais a deskas abred ar vicher a varto-  
lod war listri brezel armet gant e gerent evit-se. E nerz-  
kalon, hag an anaoudegez a deuas da gaout abred eus an  
treo a vor a raes ma oe roet d'ean, yaouank c'hoaz, listri  
da ren hag ober a raes komz anezan en meuz a emgann.

War-dro ar bla 1665 — Porkon an nevez en-dro da eiz  
vla war 'n ugent d'ar mare-ze — konverz Sant-Malo a vije  
gret kalz a zrouk d'ean gant laeron-vor eus koste an  
Aljeri a oa etre daouarn muzulmaned na rent nemet re-  
dek mor ar C'hreizite, o laerez konverz an oll vroio, hag  
o laz ar re a gouee etre o daouarn ma na blegent ket  
da nac'h o fe ha da 'n em lakad dindan lezen Mahomet,  
o fals-profet.

O welet ar c'holl a vije gret d'e hed ar bla, konver-  
serien Sant-Malo a gemennas eur fregadan o c'houec'h  
ha fregont pep kanol hag a bedas Porkon a Varbinais, a  
oa et ar vrud anean a-bell 'benn neuze, da vond ganti da  
zifenn o c'honverz en mor ar C'hreizite. Loiz XIV a glea  
ive kas, eur pennadik goude, skouadrenno gant e wellan  
kabitened da zistrojan ar ger a Aljer, med n'halle ket  
c'hoaz en ober 'benn ar c'houlz-ze.

An treo e'ch eas ervad da gentan; rekouri a reas kon-  
verz e vro. Ploufret pe distrojet an evoa liez a lestr d'ar  
Vorianed ha deut e gant da gaout aon braz rakan... Med  
eun devez bennag, dre walleur, en em gavas e-unan gant  
e fregadan dirak tri pe bevar deus o listri kreoc'h pep  
hini ane evit e hini. 'N em zifenn a reas koulskoude hep  
holl kalon; erfin, al loden vrasan eus e dud a oa laz et  
hag en ive a goueas, glazet mad, etre daouarn e enebou-  
rien.

(Da heuilh).

LAOUIE.

Gouennet e ti an Aotro Bernard, leorie e Kemper al

## Levr oferen latin ha brezonek

gant an Aotrou abad Gall; ar gwella hini d'ar Vretoned  
da heuilh an ofison.

Gouennet, e Ti Prud'homme, levr nove hon  
mignon Kloda:

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'hemenn digant hon eskop breizad, an  
Aot. 'n eskop Dubourg; unan eus ar gweha hag an du-  
diusa leorioz bet skrivet e brezonek betekhen.

GOULENN e bureo ar Grouz; Grouziou sant Erwan, al  
Labourer, sant Mitio, sant Koveri, hag all. Eur gwennec  
ar pez.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhaon

GOULENN AR PUIZ HAG AN TAGENNNO

444-474444 - Imprimerie SATISFAIT





en aotre da gana kantikon brezonek, ar pezh en deuz roet  
 d'imp d'oc'h-tu. En hano Breiz, mil bennoz Doue d'ezan!  
 Ma lskafe pep-hini e hoan, ma rafe pep-hini ar pezh a  
 zo en e c'haloud, ma kredemp en em « avanturi » nag a  
 draon mad ha skouarnus a weljemp dizale o tiouan e  
 pevar c'horn ar vro!  
 Alo, Breiz, eun tammik nerz-kalon, ha deomp war  
 arak evit « Doue ha Breiz »!

KLAODA.

## Eur Gouel en enor d'ar brezonek e Kastel an Aotrou a Webriant

Aotrou ker,

Bet omp e kastel ar Gernevez disal direza. An amzer  
 na oa ket bras-iro. Evalato hon deuz gallet kas hon treon  
 da benn. Ar Park a oa digoret da div eur hanter hag an  
 ell a gave ebarz a bep seurt diduamanchou plijadurac'h  
 au eil/egret egile: stalioù hag edo enno itronnezet ha di-  
 mezelled ar vro, lod anezo gwisket ganto en deiz-za  
 dilhad breton euz Bro-Leon, *chistr. Treger*, ha *brampoez*  
*Kerne* d'an neb a gare en hostaleri Kerzoc'hed, *choariou*  
 a bep stumm evit ar re vihan hag ar re vras adalek ar  
 « gignol » betek an teatr brezonek a c'hoaried ennan  
*Alanik al Louarn* hag a gaud ennan a bep seurt ka-  
 naouennon dudius.

An digemer kaer graat gant Kastelliz da bôtred sant  
 Vouga a ra da anaout a-benn breman peger kaer e vezo  
 eno gouelioù nuz Gwengolo ha da gredi eo o devezo ar  
 gouelioù brezonek e Kastell-Paol er bloaz-man kalz  
 muic'h a luf hag a sked eget n'o deuz bet e neb-lec'h  
 all c'hoaz beteg-hen. Fisiarz am euz e teuo di oll lenne-  
 rion ar Groaz ha pa ne vije nemet evit gweliet c'hoari  
*Alanik al Louarn*, eur pezh eus ar gwella, displeget eus  
 ar c'henta gant pôtréd sant Vouga.

EOL LENNER.

Trugare d'hon Lenner mad! Digas a reomp da zoni  
 d'hon lennerien e vo staget e Kastell-Paol gant gouelioù  
 brevediger Breiz an naved eus ar miz a deu ha c'hoariet  
 e vo adarre *Alan al Louarn* gant pôtréd sant Vouga.

## GOUEL MARI HANTER-EOST

Kimmiad ar Werc'hez.

WAR DON : Ni, ho salud, rouanes an elez

Kenavezo, Nazaret ha Betleem!  
 Kenavezo, Kana, Jeruzalem!  
 Kraouik ken paour ha ken douz d'am c'halon,  
 Olivaz sakr ha doureier Sedron!

Kenvo, Mene, 'zo daeron 'n hoc'h hano,  
 Mene Kalvar, d'ac'h ni lar kenavo,  
 Bro-garet Frans, d'ac'h ive kenavo;  
 War da reier eun de ma diskenno.

Nijet laouen, o Gwerc'hez vinniget,  
 Ar baradoz an euz hast d'ho kwelet.  
 Savet seder betek ho mab Jezus,  
 Dreist d'an oabl glaz, d'ar loar, d'an heol skedus.

Daeron awalc'h 'peuz skuilhet er bed-ma,  
 Deut eo devez an dud hag ar joa;  
 Ele santel digoret d'ar Werc'hez,  
 Sere! a ra d'an Nenv ho rouanez.

Mari a bign en-kreiz ar sklerijen;  
 He zal a sked evel eur stereden,  
 Gant he dilhad eman c'houez al fili,  
 Holl c'hoar an Nenv a bar lufus warni.

— « Deut, ma merc'h ker, deut ma mam, ma fried! »  
 A lavar d'ei tri ferson an Dreinded.  
 Patriarked, profeted, merzerien,  
 Roue David, kanet war ho telen.

Gwerc'hezed glan, kanet gant kalz a joa,  
 Da verc'h Sion ho kantikon kaera,  
 Ha c'hoi, Gwerc'hez, dimeus lein an nenvou,  
 O bezet sonj eus ho pugaligou.

O Gwerc'hez zakr, na kasra kurunen,  
 Chomet hepred mam ar Gristenien.  
 Diwar ho tron lugernus an nenvou,  
 Tolet eur zell war ho pugaligou.

Dre ho torn sakr e fell c'hoaz d'hon Zavez,  
 Skuilh warnomp oll grasou braz hep niver,  
 Bidan ho treid, dalc'het eta gwasket,  
 Penn foll Satan, an treitour milliget.

Ya, herve-koms an Arc'hel Gabriel,  
 Oc'h leun a c'hraz, Mari, o mam santel,  
 Pa 'z oc'h ken mad ha d'imp-ni ken dougel,  
 Hon diwallet noz-de diouz ar pec'hod.

Hon c'hennerzet epad hed hon bue,  
 Gret ma kreskimp e karante Doue.  
 Hon difennet da de braz ar c'himmiad;  
 Groot m'hon devo neuze eur mare mad.

Groot ma welimp en palez kaer Jezus,  
 Pegement oc'h seder ha lugernus.  
 Glear da Vari, mam garet hon Zalver!  
 Glear da Vari, hon mam vad ha tener!

PERSON TABOUREZ.

## CHOM EN BREIZ-IZEL!

WAR DON : Er Finister ee an bet garet.

Kanet gant ar marc'had yaouank a  
 c'hoanta moad da Bari.

Plac'lik yaouank, perag 'la tec'hol  
 Pell dimeuz da vam ha da dad?  
 Perag kwitad da vro Breiz-Izel,  
 Elec'h out evruz ha mad?...

Ankou ar c'herion,  
 Gaud o falz-madou,  
 Eune 'lec'h madou e kavfz trubuilhou,  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Ar c'herion a zo leun a ankon  
 D'an dud zo ennè divroet;  
 Eunn ar c'halonou a zo yen,  
 Karante wirion nan euz ket!  
 Nemed gwarizi,  
 Droug ha kasoni,  
 An holl oc'h en em daga, en em dibri...  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Pell diouz da vro kollez da c'hlanded,  
 Koll rafes-ive da furnez,  
 Da yer'had, da nerz ha da gened,  
 Ha da vrad vad a Vreizadez;  
 Goude en dizro,  
 E skuithfz daero

Ar furnez kollet na deu morse en dro!  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Da dad, da vam baour zo o-onela,  
 En o daoulagad daeron kri...!  
 Pion a roio d'e eun tam bara?  
 Ha piou a harpo o c'hozi?  
 'Glevz ket o mouez,  
 A lar hep paonez  
 D'id gant karante ha gant kalz a furnez:  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Petra eta c'hoarve d'ez kalon,  
 Ma kwitaz eur vro ken koant?  
 Petra c'hoantaz, lavar hep aon,  
 Lavar breman hep nec'hamant?  
 Evidout, me gred,  
 Breiz a zo hepred  
 Eur vro ar gwellañ a zo ebarz ar bed,  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

An douar a roaz d'az tadou  
 Eur bevanz frank mad ha nerzuz,  
 A roio d'id, enpad da zeion,  
 Magaduez kreav ha yac'liuz;  
 Bez eta dinec'h,  
 Gant poan da zionvrec'h  
 E vevi en Breiz gwelloc'h pell 'vit neb-lec'h!  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Na gwita ket da dourion uhel  
 Kizellet ha dantelezet,  
 En pers ar c'hleier en aval  
 A zon gouelion hon zent karet,  
 A lid pardonion,  
 A gan eurenjion,  
 Hag a lavar d'id dre hekleo o mouezion:  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Na gwita ket bro da Gendadou,  
 Bro ar gizioù koz, koz ha fur,  
 Bro ar chapelion, ar c'halvarion,  
 Bro peb frankiz leun ha distur;  
 Bro ar zoniou kaer,  
 Ar gwerzion tener,  
 A ziston bennoz a-dreuz d'hon parker...:  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Chom da veva en ez traouennik,  
 Elec'h m'eo zavet da di plouz;  
 Elec'h ma c'hoariez, bugelik,  
 Seder ha pell dimeuz peb trouz...  
 Kar da vevou,  
 Da lann, da gozjou,  
 Gante e klavi dre vouez an avelioù:  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Chom da veva en harz an iliz,  
 Elec'h ma 'z out bet badezet,  
 'Kichen ar vevad 'lec'h ma tiakviz,  
 Da gerent koz pell 'zo marvet,  
 Ha neuze ive,  
 E c'halli goude,  
 Diskwiza gante, 'barz an hevelep-be...  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Peb tra en Breiz a bed ac'hanoud  
 Da chom en o c'hichen, 'n o zonez;  
 Chillaou an, holl o deuz galloud  
 War da galon a Vreizadez...  
 O kaeran peden  
 A laront d'an den,  
 A c'hoanta kwitad e vam-vro da viken:  
 O chom en bro da gavel!  
 Chom, chom en Breiz-Izel!! } Diou wech.

Kas pell diouid ar sonj divalo,  
 An euz trubuilhet da spered,  
 Chom breman da veva en ez pro,  
 Euni 'z po levezeg hepred!  
 Lavar eveldon,  
 A-greiz da galon,  
 Ma klevo Breiz hon c'hân kaer ha gwirion:  
 Chomomp en bro hon c'haval!  
 Chomomp en Breiz-Izel!! } Diou wech.

AR VEODER.

MARTOLODED VRUDET A VREIZ

## PORKON A VARBINAIS

(RENDAC'G)

Ar re-man, o wleket pegeit ha gant pebez nerz an nevo  
 'n en zifennet, a zonzas e oa eun den a renk uhel ha ma  
 oent ket re c'haro outan, med miret a rejont anean er pri-  
 zion 'bars ar ger a Aljer.

E-pad ma oa eno, Loiz XIV a zonzas e oa poent d'ean  
 ober d'an Aljeri paean an oll drouk a rent da gouvez  
 Bro-C'hall: kas a raes eta eur skouadren vras da zistrujan  
 o c'her hag o forz-mor. Mar 'na deuas ket he zael gant  
 homan da vad penn-da-benn, da vilhanen, e raes kalz a  
 zronk d'ar Vorianed, ha, hep dale pell, an « Dey » pe  
 roue eus ar ger a welas ervad e oa ret d'ean goulen ar  
 peoc'h.

Med eun den an nevoa ezom da voned eus e beurt  
 da gaout roue Franz. Evel e gabitened e ouie ervad pebez  
 den a galon e oa Porkon a Varbinais, ha kredi a re evelle  
 en nevoa eur renk uhel en e vro. Sonjal a raes, eta, nan  
 helche ket kaout gwelloc'h kannad evitan dre ma raje  
 eus e wellan evit ober digemer mad e c'houlenno gant  
 c'hoant da gaout e frankiz.

Digemenn a raes anean, eta, da Loiz XIV hag arok  
 e raes d'ean tout e tistroche da 'n en lakad adarre etre  
 zaoarn mar na deuche ket e daol da vad gantan.

Na 'n em fozie ket ar prinz muzulman o sonjal a  
 tistroche ar Breton kalonek na fozie forz penaus e vije  
 kont gant e gevridi; med en em fozia a re o sonjal o  
 teuche evit kaout e frankiz da alian Loiz XIV en eneb da  
 vad e vro.

Ar c'ontrol-eo a digoueas. Ar peoc'h a goustebe re  
 ger d'ar Franz er giz a c'houlenno an « dey », ha Porkon  
 leun a garante evit e vro a oa ar c'hentan da alian de-  
 c'hel gant ar brezel hag e ali an nevoe kalz a bouez. Dis-  
 taolet e eo eta goulenno an « dey » hag en em lakad  
 a raes adarre prest da zistri da Aljer.

Gonzout mad a re eo ar maro a oa o c'hortoz anean  
 en penn e veaj: tremen a raes eta dre e grik karet Sant-  
 Malo.

Gant pebez joa e oa digemeret eno!... Troet hep dale  
 en trididigez, pa eo gouezet penaus e oa kont. E gerent  
 hag e vignoned a bedas hag a ouelas, a glaskas liez a gis  
 d'en tennan eus ar pleg fall en em gave ennan med o ell  
 daero na rejont ket d'ean mankout d'e c'her. Lakad a raes  
 urz e-touez e oll vado ha mond adare en dro da Aljer.

Pa zigoueas, an « dey » na entantas ket pegen kaer  
 e oa ar pezh an nevoa gret ar c'habiten Breton. Mond a  
 reas er gonnar ar vrasan o wleket na digase ket ar peoc'h  
 d'ean hag ober a raes dibennan anean war an eur dikan-  
 kan... Mervel a raes Porkon a Varbinais e-kreiz o nerz  
 hag e vrud, leun a fe hag a nerz-kalon.

Divezatorc'h ar Vuzulmaned a glee paean ker maro ar  
 Breizad gwirion ma oa Porkon a Varbinais: Duguay-  
 Trouin, a dlee, eur pennad goude, kargan ar morio gant  
 ar vrud eus e hano, a oa eun niz bilhan d'ean.

LAOUIE.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOÙ

Eur skoot ar bla evit hec'h ha bro C'hall.  
2 skood, evit ar broliou estren evit ar broio heñnek.

Ar brezonek hag ar fals.  
A zo breur ha c'hoar eo Breiz.  
Furmes ar Gals.  
Gant brezonek eo dend ar Jais.  
Gant ar gallok ez aio a Vreiz.  
Furmes ar Gals.

Dalc'hit hepred who' presonek.  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar fals eo ; ma ve trec'hat.  
Gouper ar Yez, e ve Pec'hall!  
Miam.

## SEKIV ANDEUSEN

Koz ar labourioù pe d'an Odro VALLÉE, Renner, ru Zant-Ennez, Zant-Briek.  
pe d'an Odro MOAL, Sbrivanier, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOÙ-KONVERZ

Tri gwennek pep ardeennad-skriter.  
(Diskenn a briz evit meur a embannoù diouez-tes.)

## ALUZENNOU DIGANT HON LENNERIEN

An aot. abad Riwallan, person Coadout... 1 skood.  
Digant Eur Mignon da Groat ar Vretoned. 2 skood.

## BIN, BELAON... BAON!

An eil klohad da c'hervel oll zoudarded yaouank  
Troger (Troger vraz ha Troger vihan) ha Goulo da  
Lanuon, d'ar Retred a zigoro ewite er Gouent-  
Neve, an 19 a viz Gwengolo.

Allo! War aman, pôtred yaouank, ma larin eur gie-  
d'ar!

Lennet ho panz, gwechall, en Istoar ar Franz, an  
deur eus Breuzier ar Marc'heien (La Chevalerie). Eur  
Marc'hek arok bean douget war roll ar Vreuzier, e vije  
eol d'ean yun eun devez ha tremen eun nozvez o pidi.  
Nozvez an armo a vije grot anezi. Daut an de braz, an  
Odro yaouank a goumnia. Nenze e vije gwisket d'ean a  
Bihad Marc'hek : eur roben wann, skunden ar glandod  
erend ouz e vicher, eur vantel ru, da ziskoez e tlec'h  
skuilh e vad, ouz ar red, ewid ar religion, an intanvesed,  
ar vugale emzivad. Troc'het a vije e bennad blec da zis-  
koez e sujilidigez. E baeron a roe d'ean eur c'hlenve bin-  
niget. Marc'heien hag itonezed a wiske d'ean eur jile-  
ten-vailho houarn, eur jiletan gouver war-benn, man-  
cho ha manego. Lakat a rent ar c'hlenve ouz e goste, er  
feur. Kentro aour a slagent ouz seuliou e heujo. D'schui-  
el lid, eun Odro a skoe eun tol war e skoa, gant pal e  
glenve, en eur laret : **En hano Doue, Sant Jord ha Sant  
Mikel, me a ra ganid eur Marc'hek.** Bez tik, kalonek  
ha leal.

Sellet piz, pôtred yaouank, sellet berr hag e welfet.  
Deuz hennad n'eo ket hepred ar Zoudarded ouz Nozvez  
an Armo? D'ober petra oa houarn? D'ober marc'heien  
vad. D'ober petra eo eben? D'ober zoudarded kalonek.  
Retred ar Zoudarded, e latin, a zo trec'h. Tevouch ha  
gwelloc'h gwisk grao a ro d'an ina. Er Retred pa ve bet  
gwalc'het ar zoudard yaouank er Zakramant a Binjien, e  
El mad a wiske d'ean roben ar Vadeiant, ken flarim ha  
biskoz. Ar roben-ze a vo red diwall da gailhari er zervich.  
Jezus o tout daveitan dre ar goumnieu a intan e galon  
hig an den yaouank a lar : « Ma gwad a skuilhfen  
awalc'h ewit ma bro Franz, ewit ma bro Breiz-Izel. Touet  
n'ran senti ouz ma mestro neve. » Gwelloc'h ewid an  
houarn hag ar c'hloved da diwall ar c'hof' eo ar gwisk  
graso a ve digaset d'ean goud ar zoudarded koz, maro  
war dachen ar brezel, ewit heu maret diouz ar skouerio fall.  
E zant Paerou, e zant Patron, a ro d'ean kleve binniget  
ar gouz da diswean war waperien ar fe, ar religion hag  
er vne gristen. Itron-Varia-an-Arme a stag d'ean kentro  
noue, ewid heu trei diwar ar pecho stank ha risklus ar  
gwall-gompagnunez. Laret a ra d'ean en e greiz arok  
kinnidi diouz ar chapel vinniget lec'h m'an neve resevet  
ken aliez a c'hras : **Ku hano Doue, Sant Jord, ha Sant  
Mikel, me a ra ganid eur zoudard.** Bek tik, kalonek ha  
leal.

Dent d'ar Retred ete, pôtred yaouank, ewid brasen  
mad hec'h tueli Alet ane da dent, ludo ha mammo,  
penno-vegez. Ar c'houlz n'eo ket ken ezet ewid ar bla.  
Pan eo abretet de ar c'hinnid avad, e oa red abretat ar  
Retred. Foulet oc'h marteze gaud al labour? Dize e vo  
dionezet an dud yaouank. Losket, losket ane! Ewid deo  
e renkfet o dioueret ewit kelloc'h amzer hag al labour  
na vano ket d'ober koulskoude. Na zo den red war an  
douar. N'o derc'het ket eta war an digare-man pe an di-  
gare-hout. Int a ve waz ha c'hoar na vech' tamm well,  
pell ac'hare. Keen a deufe d'ach pa glevet'h an dud  
yaouank a ve bet o kontan nag a vad a ve bet grot d'o  
gand ar Retred.

## BOUDIK-GLAZ DEUT EN-DRO I

Fe, ludo, manet eo ar Groat eus tammik war-lerc'h  
gand he « boud-glaz ». N'euz forz!

O ma Doue! Arta eo kignet, adkignet, mis zammo  
daouarn oc'h endramm. Biz de hepred am mo eom da  
denman an dreino dioute. Du eo ma daouarn ha ma  
ad-daouarn gaud al louzoni-deus an ed. Disul, Mar he  
bolante Doue, oc'h in goude ar goupero d'ober eur splu-  
jaden da gas al louzoni-ze da fonz ar mor, ma vin koant  
da vont da vekoutat. Sellet ma zammik-bragot Uzet eo  
gand an trusse ed. Dizolo eo penno ma daoulin, (penno  
ma zad koz!)

Mad e vije breman ewid an hini a felje d'ean mont da  
Zant Erwan war e daoulin noaz! Tewel, tewel! meur a  
foesken a zo hec'h o pokat da benno ma daoulin ive. Na  
vije walc'h d'in ober ma erv' zikour a ren an hini a  
gave re d'ober gand e hini ewid mont da heul.

Arta eo an ebarde; na zo ken hepred eun tamm tachen  
lec'h da glozan. — Breman pôtred, eme ar mestr, ec'h eomp  
d'ar gor da lerdan ar c'hieri da c'houlou al leur ha da  
lakat an treo pare da c'harret ar c'hoaz ar heur. Ar ber-  
nier a chomo aze da heur-voantizelli an heur war-lerc'h ar  
merc'had. — « O d'hortoz ze a oan. Biken foesken n'a-  
maran, n'erean ken ewid ar bla, tra ha la! » — Ha ni  
d'ar ger, Me, ar bihanan, a zo laret d'in tapet eur forc'h  
pevarheok ha ledet plouz war al leur 'wid ma binjien. O  
n'eo ket eur binjien galed na zoken eur binjien, n'eo ket  
evel an endramm ed leun a askol. Kement disoul zo en  
ifonn, mar na vijent re dizak-oll, a dije bean harmet da  
zont d'amar ar sort ed, kement hag ober eun tamm  
loesti d'o c'hier.

Eun tamm plouz a ve lakat war al leur da barec  
dewadar an heol ha harz disilian gant treid ar c'hezok.  
Ober a ran ma zammik labour war ma gorregez o vuzikal,  
em giz ive, eur ganouen beunag.

Gwech ha gwech-oll e sellan da gaout ar bôtred. Gwel-  
let a ran ar c'har braz, pôt ar erv, pôt ar binjien (ar go-  
men) hag ar meri, war e goste, skoot-eul lerdouz dindan  
e ael, skorret d'ean ar red a zo manet war an douar, ten-  
net eo ar c'hapo, an tog, gaud an alokoe hag ar gib d'ar  
red-oll ha li deus he flaz diwar-boez an divroc'h. Nebon,  
pouez eo! Tost da bevar c'hant a zo enni. Harpet eo ouz  
penn an ael, ha derc'het eno keit ha ma veer o tigram-  
manni he c'hambli gaud eur gontel hag o ledet lard fresk  
warma 'vel war eur gleur'h da distagan ar c'hrampoiz.  
Al lard-man a laker d'ar rod da c'hubat keit ha ma vo  
oc'h e ober he zroio, da harz anei da wigourat ha da em-  
ban dre-oll, en eur dramen, eo krog ar c'harre-ed. Ze  
larfe d'ar re-all hastan ewit tapout o boud-glaz da gentan,  
en terrou. Ha ni fell d'imp saout al lore.

Ket eo ar rod en he flaz. Eun toullad troio a roer d'ei  
ma krog al lard dustu. Likaut eo, Mad! Ha d'eben. Al  
lardouz deus dindan ar skoaz-ze, dindan ar skoal-ill.

Ladet eo ar c'har braz. Deut eo tro an hini bihan.  
O n'eo ket bihan-bihan an eil karr, mar keret. C'ha da  
vean regalet ive. Mad! C'hoaz e welan unan eu e c'houve  
dindan ar weu avalo-estik. Daoust hag-eit chomo heñnez  
aze d'ober laouten ha d'ober goap deus an daou all?  
'Rey ket evelkent. Laeres a reer he rojo digand an dum-  
pouel. Rodan a reont ganimp etrezek ar c'hastel koz evel  
kelc'hio gaud ar gremaerd.

Me zo laret d'in mont da zikour. Jontal a ren na vije  
ket gallet ober al labour hepon. — « Petra-oz, eme ar  
c'harer koz o tihuni? » — « Touan, dont da zikour c'harreaq  
ed a zo d'ober. » — « Me jonge d'in 'oan retulet. » —  
« O ya, ewid ar peur-rest deus ar bla. Gand ar c'harre-ed  
avad e vo red d'id digas da gorf war ar mez. » — « Mad  
eo d'in mar padan. Arta eo peza ma zammo intil. Kri-  
gn'et int gaud ar preaved. Mar toran dindan eur garg ed,  
waz 'vo d'ach'! » — « Ya, ya, rac'hoaner koz, emeon,  
zav du-man! » — « O, zavet anon avad. Me na zavint ket  
man-man. » — « Ya, ya, 'vez ket nec'hat. Ewid ar boez  
diondet evelkent. » Savet eo ar pôtr koz diwar e dorehen  
hep eil koste, lardet mad eo e hao d'an ael. Cheta ar  
pôtr koz en e zav, ken zon ha biskoz war e varlocho!  
Omp o vont d'ean c'hoan, just da dol an « Aujelus » ;  
eman an eskoaden vihan, eskoaden ar merc'had, oc'h ar-  
ruont goude bean peurbaket an hec'h. Hag ar c'harer koz da  
laret eno dirag an oll : « Chillaouel, eta, emeon ; » an

divizo a ra ar marc'hojo ». Me zikouro digas an ead d'ar  
ger. Zur awalc'h avad eo ma bla d'jevan, hag e renko  
karg ar boud-glaz dont ganin d'ar ger! — « Ya, ya, eme  
ar mestr, zur mad d'ach e vo an emor. Evel ma leret e  
vo grot. Kouaket mad aze ewid an noz d'echui ho  
uskwizaden, labour stajl a vo ewid an deio. » — « Bepred  
eo pôt ar lorc'h ar pôtr-koz, emeon gaud ma heg atog. » —  
« Arta mad on. » — « Na ret ket a wap diontan, eme ar  
mestr. Resped d'an dud ha d'an treo koz! Nag a demz  
na zo ket dent gant heñnez d'am farko ha nag a droe  
deus ar parko war ma leur! An enor a zo dleet d'ean. » —

Tremenet eo an noz. Dent eo an tarz-de. Ar c'hok ru,  
ar c'hok braz, e lagad dalc'had war hale, eur potr rez  
war an euno, a loek eur pez gougad moez da laret d'ar  
mestr ha d'an hegez zavel. Klevet eo e voez pouer, eun  
tammik raquist abos ar c'hoaz ed a re el lorc'h atog ma  
oa dastumet an ed, Ewid an deio pa vo c'harret an est e  
reio c'hoaz torlado da c'hortoz an dorqan.

Ar mestr a zo war droad kenkent ha kân ar c'hok ha  
d'ar marchosi dustu da dikan ar bôtred. Zevl a reont  
goude bean tapet zin, ar groat en e c'herc'hen ha bean  
rest d'an Odro Doue o c'halon, labour ha pounie an devez.  
Kerc'h, foen ha donr d'ar c'hezok raktal, eur skriver, eur  
broust dre o robenno ru, gwenn, da ha melen hag ar  
greaeh war-benn, Diou, ane a zo staget hag a ya dawid  
eur garg arok lein.

D'ar gwizic ec'h eed da gentan. Eur c'hizien vat a zo  
war an tro. N'euz forz, na rey ket a drok. Net e oa ar  
gwizic. Led a demzek de eo bet en e zavadello. Zec'h  
mad e renk bean. Na vatone ket en e vera. Na deuz na  
da douman na da louedi.

« Pad arn ar garg kentan e laser ar « Baler », e leiner.  
Neuze ec'h a ar c'harreter hag ar pôtr-karr d'ar park da  
gargan d'ar mestr. Hen vo o c'harret. Tri garr a vo ewid  
ober mui a sumped. Ar bernier a ya d'al leur gand an  
darbarer hag ar pôtr zaoud a vo o tostet ed da bôt ar  
bern. An tortio, ar rorde diwar ar garg hag an dar-  
barer war benn ha treo en traou.

Bech zo pa laran. Hinieneo a goe war-benn ar pôtr  
zaoud. Ken buhan e tenont diwar ar garg ken na oar en  
pehini kriji. Neuze e tap unan war e wached hag e kos  
war lein e gein. — « Sell aze hag a dal noz! » — « Tol  
ane aman eta, eme ar bernier. » — « Bes dilui, eme  
egle. Red e vo dibikan. » — « Pôt ar bern a zo kustum  
hag a wel he flaz da bep foesken. Grot an euz eun tamm  
kreizen ha neuze e c'hoari en dro. Stuman brao a ra ar  
bern. Rond eo evel euc'helec'h. Trusse an eil foesken  
n'emaint ket oc'h ober eur valven a-uz d'eben.

Eet eo ar mestr d'ar park, gand an driad karr. Pare  
eo ar garg. Digas a ra anei d'ar ger. Karzet eo ar c'har  
ha d'isro d'e hent, stag ar gaez ouz ar berchen blouz. Ar  
mestr a blas e garg ouz ar bern, na re dost na re bell.  
Kas a ra e gazek-rog ouz ar c'harer goulou ha d'ar park  
d'an drod-ki. An treign-est a zo o c'hoari. Helibini a zo  
da c'hout pion a vo ar muian barrek.

Deiz eur e n'erean diskwizaden. An daonsterez a zo  
gand eur rastel war-lerc'h ar zavadello, a ya gand ar  
mestr dawid eur voutailhad jistr ewit pôtred ar c'har,  
pôtred ar park. Eun tammik mui a galon a zo goude.  
Zavet mad eo an da. Tamm e vo C'hoazan 'vo grot. An  
darbarer a dap dibikan ken ma v'eer krog da vejan.  
Neuze evelkent e renk plegan. Drouk a zo ennan. « Ouz  
ar red avad n'euz ken remed, nemet koci en eur redek »,  
Ar mestr a zikour pan arta, a zav e skeul.

Tri devez leun e pad ar c'harre; Kaeran est, a drogare  
Doue ha Zant Erwan! Tapet brao eo ar bernio. Ken  
koant pep-hini ha peras a-bed. Na vo ket eur vez gwelc'h  
ar re-ze disul pa vo an dud o tremen o vont d'an ofiso.  
Mont a rey ar vrud eus ar bernier. Distag mad eo an  
eil diouz egle. Mont a rey an er etre-e. Na zac'ho ket ar  
glao kreistre-e. Kreizennet mad int. Disklao int!

E veer o vejan ar bern diwean war gorn al leur. He-  
man avad a zo touzet. Eman ar garg diwean o lampat  
war ar c'harer koz. — « Eur garg voek an dro-man, eme  
ar c'harreter. Kemeromp hon amzer! » — « C'he, plac'h,  
lec'h da rastel, eme ar pôtr-karr ; grot eur vno a veud  
glaz. Sell, troc'h eur brank kistin. Laka bekedo outan ;  
hag eun aval beunag! Sell aze eun tammik fisel d'amarri  
o gar ouz ar branko! »

Grot eo ar boudik-glaz war-benn m'eo achu ar garg

Mont a ra war ar c'hreiz 'rok ma tou ar charreter en traou. An dro-man e tap ar charreter e skourje. Arrouet a ra el leuc, stad ennan. Zellet da gad ar garg-zet Ken brao eo ha bern ed a-bed! Na so-konet na karg na kurr. Kaer ar c'harerant Doue da vezo moulet! — Eet eo ar boudek glaz war benn. Hinjan a ra gand an avel. Zartik eo.

Ar zul war-lerc'h da greiste, e ve ar c'hafe da vezan ar boudek ha roet ar gwerz-butun, pevar real d'ar bôtre, pennek gwennek d'ar mero'hed.

• Boudik-glaz, deuz endro... •

EUR MIGNON.

## TROUZ AN EOST

En dremwel ar zav-heol an eabl zo entanet.  
An heol, bue ar bed, zo o vond da zovel;  
Dirakan ar voren war an douar ledet  
A zav gand an avel...

War ar maezion an dud a zo zavet abred:  
An eost a c'houe'hemen, outan eo red senti;  
En holl diegeron e poanier stard meurbed,  
Bech'zo war bep-hini!

Er parkon e klevet mouezion ar veredien,  
Ha trouz skanv o filster o vond dre an ed sec'h;  
Seblantout a reont bezan bepred iacoun,  
Evaruz ha dinec'h.

Araog ma 'z eo ar gliz savet diwar an ed,  
Eo kroget ar c'hirri da sklokal en henchou,  
Mond a reont buhan ha buhanoc'h bepred:  
Stank e vo o zroïou...

Dreist da drouzian an de, pere zo c'hoaz kousket,  
Mouez drant an dornerz a yud en eur franval,  
Ha skourje ar c'haser war ar c'houek savet  
A glevet o strakal!

Hag a greiz-holl ive hekleo hon zraouiennoù  
A ve dibunet gand an dornerz dre dan,  
Houman eo ar gwellan touez ar meksnikou,  
He labour zo buhan.

Ouz he c'hlevet an holl a chom gwall-zouezet:  
— Henvel eo onz an Diaoul! a lavar ar re goz,  
Enni a zo marvad ineou tud daonet...  
D'ei hon gwasan malloz! —

Neuze 'vel testeni deuz o fennou kaled,  
Ar re-goz a gemer ha c'hwistou, ha fraillhou;  
Ar re-man a glevet o tiston stard meurbed  
War al leur a daolion!...

An heol a zo uhel, trouz a zo tro-war-dro,  
Dre-holl e labourer a gorf hag a galon;  
Ne glevet en peb lec'h nemed mekaniko  
O franval hag o zôn...

Gant nerz kaled an de an drouz a vihana,  
An holl dornerzed eo goloet o mouez;  
Dre an tomder berrvet peb tra a bounera,  
Peb trouz zo digompouez...

Dre ma tistân an heol ha ma tosta d'an noz  
An tref a zeblant c'hoaz hadreva dre ar bed,  
An drouz a zo reizoc'h dre al lanâ hag ar roz,  
An eost a gerz bepred.

Gande ar c'huz-heol, war eul leur, diwead,  
Ve klevet c'hoaz trouzian an dudon o poanier;  
Ar c'hirri marteze a skloko eur pennad,  
Ha peuc'h a vo raktal...!

Ar gliz war an douar pa vo lavet ar brud,  
Gand an denvalijen a gouzo sioul ha stank,  
Ha neuze, evaruz, e tiskwizo an dud,  
Braz, bihan, koz, yaouank.

Ar bed neuze, d'e dro, a ziskwizo ive;  
Wannan eun ezen flour a c'hoazeo gand dudi,  
Hag a gano d'an holl eur zon a garante,  
Hag eur zon leun a spi!

Ar maezion gant mix eost da weled a zo koant,  
Peb-hini a labour evid e vara gouanv,  
Peb-hini daoust d'e boan a zo seder ha drant,  
Bag eosti a zo skanv!

AR YEODET.

## CHOMET ER VRO

Nozvez a oa dec'h e ti Lan Gerdiktak. En eur pod war an tân e varve jistr yac'hus. Mez araog kaout bep a vannoc'h, pep-hini a ranke kana pe dibuna eun draik bennag.

E oa mero'h Lan gant son « Ar Jikoloden », pa den en ti eun den bihan daoubleget dindan sam e vloavezion, lakeo gante eur gurunen eroc'h en dro d'e benn. Eur vaz a zo gantan en e zorn doue hag eur chapelon en e zorn klei. Hag hen ha goulon, en han Doue, eun tammik lojeiz da dremen an noz.

Lan, mad e galon e-kever ar bejian, a lar d'eon-testaek. Ne gred ket dont. Chom a ra e toull an nor. Lan neuze a grog en e zorn da digas aneân e penn luella an oaled war ar skabel dero. Ha rei a reer eur skudellad souben dom d'ar paour.

Ouz skend ar golo ec'h anvomp Ervosh ar Gerzu, Ervoan ar c'haser. Ne lar komz, ha seblantout a ra d'emp ec'h euz eur gwask war e galon, rag tenval eo e benn evel pa ve ean arer war e dal. Neuz ger gant hini ac'hanomp ive : den na gred komz araog paour an Otro Doue.

A-benn eur frapad, ar paour a zav e benn.

— « Bennoz Doue warnoc'h, emean, ha bennoz Doue war ho tud ive. Ra ziouallo santez Barba venniget ho ti ouz an tan-gwall hag ho pugalo ouz skilfon bleidi ar c'harerion! »

— « Ho trugarekaat, Tad koz, eme Lan. (Tad koz a vo groet eus Ervoan ar Gerzu). Bennoz Doue warnoc'h ha war ho mab Ervoanik, war mab ho mero'h, hi maro e-giz eur zantez a oa anei. Pelec'h emañ? Ean den yaouank a zoare e tle bea brema, Tad koz, rag, me a gav d'in ec'h euz tost da c'houec'h vla aboc n'oc'h ket bet ar vro. Me a grede d'in e oac'h maro pa na glevet kelo ac'hanoc'h, mes dre c'hras Doue n'oc'h ket c'hoas. »

Komz mad a oa re Lan, kwita? Ha koulskoude, Ervoan ger a zav en e zav, lueh ed en e zaoulagad.

— « Salo d'in bea maro pell 'zo! emean. Neuze em bije gallet bea evruz e ti an Aotro Doue. Brema, avad, n'ouzoun ken nemet hirvoudi; ha goulet am euz kement ken eo dizec'het ma daoulagad. »

Per, mad Lan, a lar neuze :

« Perag eta, Tad koz, c'houi a zo bet red d'ec'h lenva kement? Ha maro eo Ervoanik, ma c'hamarad gwech all? »

— « Maro Ervoanik? N'eo ket! Gwelloc'h e vije bet d'eon bea maro ha bea eot d'ar Baradoz davet e dad hag e vam, Doue d'o fardono! »

— « Petra an euz groet eta? »

— « Brema ec'h euz c'houec'h vla ez iz gantan da redek ar vro an eur gana nouellou da gaout eur gwennegik bennag. E Kemper e kaviz eur c'henderv d'in, hag hen ha laret d'in mont gantan da Roazon, lec'h emañ o chom. Me na felle ket d'in. Mes Yeunik a bedaz hag a aspedaz ac'hanoun, ha me lavaret ya. »

Ha ni da Roazon eta. Dispaka a ran va zoniou d'o gwerza.

— « D'ober petra? eme va c'henderv. Nemet eun nao pe dek, den na oar ger brezonek ama. »

Gwir eo, sionaz! Ha tevel a renkiz gant poan galon. Ervoanik avad na reaz van gant kement-se. Mont a euz da c'haloupat ar ruio, hag, eun devez, e weliz anezan gant bugale stum lankoned d'e. E galleg e komzent; me n'o c'homprenet ket. Da genta, Ervoanik an doa mez onz o c'hlevet; hep dale e c'hoarzed gante hag e lare evelte.

Ha me d'ean :

— « Demp d'ar gear. »

— « N'eomp ket c'hoaz, emichans? »

— « Eot! »

— « Nag a zronk-chans! Perag mont da foueta bro da gana ranezennoù? »

— « Da gana petra? sac'helloc'h! »

— « Da gana nouellou eo a felle d'in da lavaron! Ya, perag mont hed an henchou pe gavomp ama plijadur evit netra? »

— « Peuc'h! Debr da goan hag en hent ec'h comp. »

Pa oamp o vont dionz kear, e c'hrasmolaz :

« Ha bepred e chomfomp e-giz-ma evel daon chonlez? »

Ar wech-ma, va zudou geaz, va fenn-baz a zarraz e c'heno d'ean. Ober eur chonlez, eur lampon ac'hanoun.

Azaleg an de-se, n'am oa ket ar memez mab. Pa vije red kana, nag a veac'h gantan : evel mouzet e oa onz ar Mabik Jezus.

Eun devez, edomp e Santez Anna Wened, hag Ervoanik a zraillhaz e werzou e leac'h o c'hano. Kroza a riz anezan gant eur vouez tener, hag hen d'in :

« Awalc'h evel-se! Mont a ran ma-unan penn da c'honid ma buet! »

Hag hen kwit diouz. Ha me ha teuler ma malloz warnan. Hen a dec'h, huel e benn, en eur lavet ne ra tam

van gant va malloz. Me, me a ouelo ken e leve va dichot.

Ha setu me ma-unan war an douar daoust d'am c'hozañ...

Ervoanik avad a oa est en dro da Roazon da gaout ar lankoned am oa gwelet anezan gante. Deski a reaz o zroïou fall, hag o mestr e oe. Tapet eo o laeres, kaset d'ar prison. Eur miz a chom ennan da c'hortoz bea barnet, ha neuze eo kaset d'eun ti a ve sujet ar vugale drouk ennan. Tec'hel ac'hano a ra kerkeat ha ma kav an tu. Na zistro ket da Roazon, da Bariz ec'h a. Mont a ra raktal e strollad an dud a zo o hano « Apaches », ha dizale eo lesbanvet an Diaoul gante. Gwasoc'h evitan na oa ket e gwirione : laerez a ra, laza a ra, lakeat a ra an tair en tiez hag en lizon. Na diroll eo e vuze : bepred e ve gant ar mero'hed-se a zo falc'hel o flouren. Koment a ra ken eo broinet a gorf. Na Doue na mestr e youc'he. Hag a zoze, ar plac'h fall, a ro d'ean eur mestr, ar c'hleved. Hag eu hospital emañ c'hoas ma n'eo ket-mavo.

Ma hellfe distrei ouz Doue da vihana. Unanet ho pedennou gant ma re.

— « Hag a ramp, eme Lan... Skwiz oc'h, Tad koz.

Kemeret eur baunac'h jiste, he-ma mab Per-a-ya da gas ac'hang'e d'ho kwele. »

— « Ho trugarekaat, Lan. »

Kaset an Tad koz d'e wele, Per a dou en dro en eur laret :

— « Ar c'hil a oa o harzal bremaik. »

— « Abalamour hen deuz gwelet golo er zolier, emichans, eme Lan. »

— « Ne gav ket d'in, tad, harza a ree evel war unan bennag. »

— « Ma teu eus c'hristen bennag e vo gwelet. Mes na trista tra, memez tra, bue Ervoanik e Paris...! »

Ha dao dao war an nor.

— « Hant eme Ber, goul a teent! »

— « Kea da zigeri, eme Lan. »

— « Nozvez vad » eme o tout eun den yaouank n'avezomp ket.

— « Nozvez vad, va-den mad, eme Lan.

— « Oit Lan, eme an-estren, roet d'in ma liano, mar plij! »

— « Rei hoc'h liano d'ec'h, mes n'hoc'h amavean ket. »

— « Pell 'zo non ket bet er vro, gwir eo. »

Lenva a ra an den yaouank neuze, hag abenn eur pennad :

— « Lan, emean, ha ne gasoc'h (gasfet) ket ac'hanou er-mez ma tisplogan ma bue d'ec'h? »

— « Ma zi a zo digor d'an holl. »

— « Me eo Ervoanik, mab bihan Ervoan ar Gerzu. »

— « Ah! » emezomp holl.

— « Gout a ret marteze am beuz nac'het ma zad koz. Hen a daolaz e valloz war va fenn, hag ar valloz-se a zo c'hoaz warnoun. Ma, koret a rafen gwelet anezan da gaout pardon digantan! »

Paourkez Ervoanik! » eme Lan.

(Da heuilh).

YAN AR FLOUË.

Gouennet e ti an Aotro Bernard, leorier e Kemper al

Levr oferen latin ha brezonek

gant an Aotrou abad Gall; ar gwella hini d'ar Vretoued da heuilh an ofisou.

Gouennet, o Ti Prud'homme, levr neve hon mignon Klaoda :

MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-goue'hennenn digant hon eskop breizad, an Aot. 'n eskop Dubourg; unan eus ar gwella hag an dudiusa leorion bet skrivet e brezonek betekien.

GOULENN e bureo ar Groaz: Gwerzou sant Ervoan, al Labourer, sant Mito, sant Koveri, hag all. Eur gweuek ar pez.

ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhaume.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

Eur akoad ar bla evit Breiz ha Bro'Chall,  
2 akoad, evit ar breizou estren evit ar Breiz keltiek.

## SKRIVANIERION

Kas al sabourion pe d'an Ofis VALLER, Rener, en Land-Senat, Zant-Briek,  
pe d'an Ofis MOAL, Sekretar, 21, Ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gweznak pep ardeunad-akritur.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann diouez-ha.)

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breiz ar c'hlar, ar Breiz.  
Furuz ar Geta.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez alio a Vreiz.  
Furuz ar Geta.

Dalc'hli heged d'ho prizoniek,  
Yez an dud vad ha kalonek,  
Yez ar feiz eo ; ma ve breiz-ha,  
Gouez ar Vez, a ve Breiz-ha.  
M.L.V.

Setu aze, eur wir-gontel  
Evidomp-ni tud Breiz-Izel,  
'N em unanomp, pe hep dala  
Ni vo diwriennet ive.  
An avel a c'hoar braman foll ;  
Hon c'has a rey buhan da goll ;  
Seal-voi ma ve krenvach he mouz,  
Stardomp ere an unvaniez,  
Ha demuz an-tamiek plantez  
Ni deuo eur gaez a wech.

Dano-Lap.

## Goueliou braz en enor d'ar brezonek ha d'ar Vro en Kastel-Pol

Staget e vo, ar sadorn an naved a wengolo,  
gant ar goueliou-ze savet gant Kevredigez Breiz en enor  
d'ar Vro ha d'ar Yez. Roet e vo prizon d'ar gwella skrijou  
e brezonek ha displeget e vo ditag an holl daou hez-c'hoaz  
eus ar bravon : *Ar Gwir trec'h d'ar Gaou*, gant Abalor,  
hag *Atan al Louarn*, gant an Aotro Perrot, rener Pôtrez  
sant Vouga, eur strollad-c'hronierien brudet dre bevar  
c'horn ar Vro. Ouspenn-ze, lennet e vo labourioù a bep  
sort ha pouezusoc'h an eil eget egile, diwar-benn hon bro  
Breiz, hon histor, hon yez, hon finvidigez hag ar gwella  
doare d'he c'hroski dre wellat stad al labourerien ; pe ke-  
terien, micherourien ha labourerien-douar.

Hirio an do e weler o tiwana hag o sevel a hep tu  
breuzioz-labour ha strolladoù-yaouankiz evit gwellaat  
stad an dud-izel. Ar re-ze, avad, daoust d'e da vean  
kristen an darnvuian ané, o vean ma 'z int bet savet en  
Gall hag en zell eus ar Gall gant Galloued hepken, na  
zereont tam ouz hon Bro Breiz-Izel hag, e lec'h hon sevel,  
ar c'hontrol eo a rafont, da laret eo hon izelaat c'hoaz,  
en eur ziskar pe en eur vastari en hon zouez spered ar Vro,  
hag hon lakaat, dre ze, gwaz-ouz-gwaz, da sklaved  
dindan dreid ar C'hallaoued.

Er c'hontrol, Kevredigez Breiz (e gallek Union Régio-  
naliste) a zo bet savet gant Bretoned ead, en Breiz hag  
en zell eus Breiz. D'ez e c'h hellomp mont ha rei hon  
mouez gant fran, hag eun dra diest eo da bep Breizad hen  
ober ; rag eun dra diest, eun dlead eo da bep den mud  
enori hag harpa, da genta-oll goude Doue, e vam-Vro ; ha  
n'eo ket Breiz-Izel eo hon mam-Vro-ni Bretoned ?

C'hoaut an mije da welet o tont da izili Kevredigez  
Breiz kement lenner a leun Kroaz ar Vretoned pe, da  
vihana, kement barz ; rag ar varzed a zo, evel pa lavarten,  
eur strollad a zibab pe eur gward a enor, etouez ar Vre-  
toned all. Hennez e vije, war ma meno, an tu da lakaat  
etrezomp an unvaniez, n'eus gouid na trec'h da c'hortoz  
hepdi.

Setu amañ war an *Unvaniez* eur vraz a zoniñ bet  
kaset gant eur lenner da Groaz ar Vretoned ; diez e vije  
kavout gwelloc'h egeti da gloza ma fennad-skrid.

## AN UNVANIEZ

War eur menez uhel-savet,  
Ter blantenn yaouank diwastet  
Davet an douar 'pleg o fon,  
Peb-harrad-avel a dremen.  
An disteran c'houadennik  
A blege an ter blantennik.  
Petra tenont da vout, siouaz !  
Pa c'houeo warno avel vras ?  
Er fin e laront etresou :  
' Mar unanomp stard hon branko,  
Ni 'vo krenvach d'en em zontea,  
Unanet en eil gant eben. »  
Sel' an ter blantenn unanet !  
O fennou 'zo uhel-savet,  
Krenv na kaled 'vel eur poultan,  
Eus en avel 'rent mui a van,  
O fennou son da gad an neuv !  
Bet en avel diroll ha krenv !

## AL LABOURER-DOUAR

Allerg.

No doun nemet eun ti-ek, o c'houm 'n eur gari-  
den, E siouldet c'houk ar measiou va amzer a dre-men ;  
'N em euz tamm des-ka-dar-er, he - nout-se no vir ket, Ez  
eo va deizioz leuniet euz ar gwir eo - ma - dod.

Ne doun nemet eun ti-ek, o c'houm 'n eur gariaden,  
E siouldet c'houk ar measiou va amzer a dremen ;  
'N em euz tamm deskadurez, kement-se na vir ket  
Ez eo va deizioz leuniet euz ar gwir euradad.

Pennou braz ha pinvidik, er c'heariou lojet mad,  
En noz ar c'houk a zebiant tec'het ha taoulagad,  
Pa ziskwisan a zoare em gwelc' kor klozet,  
Gand va banden vugale, va zud muia kret.

Dieuz ar muntin pa zavan, — gwir eo arank an heol, —  
Ma a gav va izili ennon kreveet oil,  
Evit adarre staga el labour pemdeziek  
A vago va ziadik hag ar paour eozounek.

O tont euz va farkerier, digouezion va zadou,  
Va c'h'alou el levezec, ma lar : « Bugaligou,  
' Pegement homp-ni euz, 'n han ti plouz dislivet !  
' Pedomp ma talc'ho Doue pell amzer d'omp yec'hed. »

Va dervezioz a dremen er peoc'h ar padenn,  
Pell diouz safar ar c'heariou, er measiou ar siont ;  
Biskoaz, beuzou da Zoue ! biskoaz ar gwall-gollou  
Euz va zi paour ha dister na lammar an trezou.

Evel an heol o sevel va zal-me zo skoduz,  
Na vez morse roufennet gant soujon enkreuz,  
Va bugale, eun dervez, pa ro denet norz d'ezo,  
A labouro kalonek an douar ive d'eo zro.

E gwirionez va labour alies a vez tenn,  
En hanv dindan heol-bero, er goanv en avel yen ;  
Hogen buer an ti-ek, 'n despet da gement-se  
A zo evel kemmesket a joa e peb mare.

Mar doun gwisket gand lien, ha gand boued groz maget,  
Mar deo skwizuz va labour, ha ken nebeud paet,  
Pegement euz dic'haonet gand eur fresk ar measiou !  
Ar yec'hed hag ar frankiz, kera donerou !

En hor bro ger Breiz-Izel peb maread amzer  
An deuz warlerc'h al labour he ebatou seder ;  
Goude an dervez pouez, setu diskwiz an ti,  
Endro da dan an c'aled, azeret dizouris.

A veac'h ma kav ar bouc'hez, d'ar zud vintin roken,  
Eun hanter-heur peus — heret da vont d'an oferen,  
Abredik euz an arbel ma denn va dilhad kler,  
An dervez euz penn-da-benn a-ze oll d'am C'hrouer.

Gweñ eo ar bleo war va fenn, ha setu me kroumet,  
Disle teuy ar maro gand he falc'h dir sklaset ;  
Hogen, va c'h'alou a zo pueristag a bep tra,  
Gortoz a ran an termen hep kruz briz da netra.

## LAERON AR ZUL

Ar mulo santel a viri.

Ar zalvez a zo splann ha skler,  
'Toman ra 'n ed er parkerier ;  
Kraz eo an ed, tom an amzer :  
' Deomp da charz : 'me ar méréer.  
' Deomp da charz ! 'me 'r méréer braz. »  
Kavet an euz pevar judaz,  
Pevar judaz da vont gantan,  
Hen, ar bampved, er penn kentan.

Treuzan 'ra 'r bouk ha zoug e benn ;  
' Kichen an iliz e tremen ;  
E tremen 'rok ar peup judaz  
' Dal d'an iliz ha 'dal d'ar groaz.

Mar galje komz 'n anevaled,  
' Larfent : « Mez d'an dud diskret  
' Lak en gouk al loen ar vourel,  
' Da danzen eur-pec'hed marvet ! »

M'o dije kredet tud ar vro,  
' Dije yond'het warno : Hare !  
' Hare war ar falc'h-kristenien  
' 'Ya gant Satan da vervelien !

' Hirio ar parkon 'zo sikret,  
' Ar c'hlejoz warno al'houet ;  
' Diwallet deuz venjans Doue,  
' Rag en e zori 'n an al'houe ! »

Mez al loened paour a zo mad,  
Ha re dizebiant eo an dud ;  
Den na zic'houe, na lar netra,  
' Met ar person, fennet a ra.

Ar person, 'terz an ofern bred,  
O komz hep sponc' hag aon ebet,  
A embann skléd al leuz gouz :  
Ar zul a zo gwec'ha vepoz.

' Ken ma c'hoarzo 'n toull ar varod,  
' N eur ober euz d'ez d'eo toned,  
' Skuber heuchou breiz ar c'hanton :  
' Sell ! 'mean, falc'het eo 'r person ! »

## FOEI WAR AR VRIZ-VRETONED!

Klevet hoc'h euz, marvad, Bretoned ha Bretonezed  
yaouank, distroet euz Paris oc'h ober goep eus Breiz-Izel  
hag eus he yez ?

P'o dezo gallet distronka dirsk o c'hevrebili eun cam  
gallek breiz bennag, e veint dare da zistroa gant ar  
c'houez ! « Oh, lélo, quelle sale langue... ce que ja  
m'ennule par ici ! Disjoent 'la da Paris, p'eo gwir e

displich d'ê kement o Bro : stad braz a vo ennomp-ni oll !  
Er wech-man eo gant eur pôtr yaouank eman an taol.  
En hon Bro ec'h omp karantezus meurbed e-kenver  
ar Werc'hez, hag hen diskouezet mad hor beuz de ouel  
hanter-eost. En Lanveur (Finistère) ez eus eur skeddennik  
gwell-vrudet : skenden Itron Varia Gernitron. Eno 've tud  
epad an noz o pedi, de ouel ar Werc'hez hanter-eost.

Er bla-man 'oa, eta, eur strollad perc'herined o tont da  
welet an Itron-Varia. Eur eur-rale e lavarent o c'haled.  
Oaint evel-se gant o feden pa dremenaz daou den yaouank  
en gwetur. « Ma, eme unan anezo, na pegen diskiant eo  
'ta an dud en Breiz ! » Kement-se a oa lavaret en gallek,  
evel just. Unan a respontaz d'ezan : « Te ive 'zo neuz  
eus an dud diskiant-ze, rak, evidout d'ober da c'houe-  
sigell, ec'h out ive eur Breton ! » Hag, en gwitoned, trist eo  
hen laret, heneuz a oa eur Breton.

Koulskoude e kav d'in e oa graet eun honor gwall-vraz  
d'an den-man, rak ar seurt tud-ze n'int ket din de vean  
hanvel Bretoned.

Et da Bariz, c'houi oll, treitourin, hag hoc'h euz  
c'hoant da nac'h ho pro. Eno 'vo graet d'ec'h nac'h aneri  
'vad hag he yez ive, hag oupen ho Toue ! En distro 'vo  
graet ac'hanoc'h sklaved ! !

Ha ni oll, Bretoned hag a gar hon Doue hag hon broik  
Breiz-Izel, laromp a bouez penn d'ar Vreiz-Vretoned :

Foeli foeli war ar Vreiz-Vretoned :

'Deuz nac'h et hor Bro garet !

Ra 'z aint da Bariz villiget,

Eno kavfont konsortid !

EUR BARIZAD.

## KAN-VEUL

D'an otro 'n Eskop August Dubourg, o lidan pardon  
braz Sant Milion, on e iliz parrouz Lok-ivy, ar  
zui a viz est 1905.

Otro 'n Eskop,

Ar ouelen faez oc'h ober penn

D'an avel foil ha d'ar wagonn,

A denn-askel, en eur pleg-mor

A hast donet da glask goudor,

Hag an diskwiz 'vo sederoc'h,

Mar 'n em gav e goare ar roc'h,

A welaz sevel

Gwachalt he c'havel.

Dindan ar fall a glask trec'hi,

'Vit harz hoc'h ina da rec'hi,

Choui deu aman

Da ziskwizan,

Hag en divrech sant Milion,

'Teu d'ec'h rakial nerz ha kalon !

Mez ha gallout rafe ar sant

Ober skounn vouzet da c'hoant

E eskop diredet a bell

Da lidan e bardon santel,

Karante Doue en e greiz,

Ha war e deod yez kaer hon Breiz ?...

Augustin hag Emilion

'Vit eur biken zo daou vignon ! !

Tri ugent vla zo, pe eusenn,

Eur vamm warni bac'h an anten,

Gand he mabik ken gwan, ken tound,

Na oa anezq' mel ar skeud,

D'iliz he farrouz 'ye gand puez,

Da stoui ouz troid ar Werc'hez :

« O Mari, o ma mamm santel,

D'ec'h e kinnigan ma bugel !

Pe n'hellan ken, hen kemeret,

Pac'h e ho tra, hen parest ! »

Ar Werc'hez, pen e tigemer,

Ns ra ket an treo dre hanter.

Ar potrik ive, deus e du,

'N em lakaz da ziskwel, dionst,

Karante, teneri digez,

Hag anaoudegez d'ar Werc'hez.

Bugel, pôtr yaouank pe velek,

Tridal reio en he zressek,

Ha hano santel e cil-vamm

Skedo 'n e ine vel eur flamm !

Diwestoc'h pan e tleo

Monet d'Eskop, er Milino,

— Bontel, m'arvad,

Gand e vamm vad —

En e gichen, ewar e drôn,  
Raktal vo kavet e ftron.

'Kreiz e ardames

Eman ar Werc'hez,

'Uat d'ei ar c'homa-barn

Ken dous d'ar skourm,

'Vit 'yei da Jezuz hon fedon,

Dre Vari eo red tremen. »

Otro 'n Eskop oa ket awal'c'h :

'Gave ket d'ec'h ho poa ho kwalc'h.

Gand ar Werc'hez e penn ho ti ;

C'hoaz felle d'ec'h 'n hoc'h Eskopi,

War bro ar Milino a-bes,

Kaout ho mamm da rounez,

Ewar dal Itron Zant Gernenn

Laket eur gaer a garunen ;

En bro Keray, nan eus ket pell,

Eur c'hloardi 'pens groet sevel,

Diodan an hanb ar c'hazera :

Itron Varia Rôzera !

Gand kement tra a ret,

Ar Werc'hez zo bepred,

War-benn eur bla, pe daou,

Hellet laret, heb gaon

'ud Breiz ha tud ma Eskopi

Kement ha kement gar Mari ! !

E keit-se skipailh an ifern

A ra dismanthro bern-war-vern :

Kouencho

Ha skolio,

Ziellet,

Ha gweizet.

Mestrezed ha mestro

Sklapet da vale bro !

Dre ar c'heio ha war ar mez,

Eur gri-forz m'ec'h e ann drezet

War gement a goll hag a reuz

Ho kalon a frailh gand an heuz

Mez kenkent all, kreiz ho lenv,

Ho penn savet war du an neuv,

Hag enon-se Werc'hez Vari,

Dreist ar goabren o logerni,

A lavar d'ec'h gand eur vouez flour

Dousoch' evit liboud an dour :

« Bez fians, Jezus a zo skwiz,

Konsortet Satan 'yei 'n o giz,

Hag ewar ar Frans heb dale,

Doue a vo mestr adarre ! ! »

Otro 'n Eskop, daouzek vla zo

Renet war vro ar Milino ;

Aboue hag a skrido a briz

'C'heuz groet 'vit enor an Iliz !

Da denerat ar re fallakr

Eul lizer war ar Galon-Zakr,

Eun niver braz war ar poanio,

An anaou hag al labourio,

Ha war gement tra a helle

Er c'halono kreski ar fell !

Gand Log-Ivyiz a zo loc'h

Kaout eur c'henvroad 'velloc'h !

Ha bep kwech ma teut en o zouez,

War grenvaat ac'h a o mouez

Da gann ho meulodion,

En o fenn an otro Juleu,

— Eur galoñ frank,

'Vel n'eus ket stank,

A ra, ken 'liez, deus e di,

D'ho tigemer, eun Eskoptid —

'Vit ar bla 'n em gav, war eun dro,

Da greski levezet ar vro,

Gand Zant Milion

Hag ho sant Patron.

Ma teurvelont, o daou,

Ouz hon fedon chelaou,

Hag ho tiwall, ho miret pell,

D'ar Milino... da Vreiz-Izel ! ! !

Gab LISKILDRV.

## CHOMET ER VRO

(RENDALC'H)

— Allaz ! ya, Lan, paourkez Ervoanik ! Nonn nemet  
naonnek vla c'hoas, ha rondennet eo ma zal ! Ma we-  
fec'h kement am beuz great, c'honi ho pe heuz ouzin.  
Klanv e teuz da vea ha d'an hospital e oen kaset. Dre  
c'hras Doue, Seurezed santel a oa eno. Ar wech kenta  
ma teuz unan da gaozel ganin, me a grenchaz outi.  
Hi avad a dorchaz he drem hag a gendalc'haz da gomz

brao ouzin. Ne riz van gant he c'hamzon. Mes hi a  
zigasaz da zont d'in ouz ar gear, ouz va zad, ouz va mam.  
Doue d'o fardono ! Lavaret a riz d'ei e oan eus Breiz-Izel.  
E leac'h tamall d'in hea dizenoret va bro, hi a zigasaz eur  
beleg d'am c'haout. « A bas la calotte ! emedon adal  
ma veliz e zoudanen. Hen avad ne ra van ouz va c'homz  
leun a gasoni. Hag e c'houlenn ganin e yez va bro :

« Dizonjet a teuz da Vrezonek ? »

Sonjal a riz nac'h va bro, mes na riz ket.

— « N'am beuz ket avad ! emedon. »

Hag e komz d'in ouz ar gear, eus an Aotrou person  
am beuz great va faskou gantan.

« Me 'a zo sur, emean, hoc'h euz klevot histor ar  
Mab prodig ? »

— « Sonj mad a deu d'in brema. Pa oan oc'h ober  
ma fask kenta, eur beleg a gontaz an histor-ze d'emp.  
Mes, ma zad, me am beuz great gwaso'h eget ar Mab  
prodig. »

— « N'ho peuz ket, va bugel, emean, hag ho pefe,  
Doue a zo braz braz e vadelez ; pardoni a ra ato da  
gement hini a zo glac'har gwitron en e galoun. »

— « Ha pardonet e vii ? va zad. »

— « Ya, ma vab ; Doue an deuz muio'h a joa ouz  
eur pe'her a zistro da vad outan evit n'en deuz gant  
naontek ha pevar ugent den just a gendalc'h da vava on  
e garante. »

— « Ma zad, selao » ret ma fec'hejon ? »

— « Ya, ma mab. »

Kovez a riz. Dizamm ma c'houstianz ganin e pareiz  
evel d'an daoulam.

Neuze ar beleg mad-se a roz eun neubent ar'hanb  
d'in en eur lavaret d'in distrei da Vreiz.

« Ha setu me deuet en-dro, tud vad ; deuet on da  
glask ma zad koz, ma plijo gantan tenna diwarnoun ar  
valloz am euz bet gantan. »

— « Ah ! Ervoanik, eme Lan, brema e welan pegen  
mad eo Doue. Groet en deuz d'it dont en-dro er vro-ma  
evit ma c'helli-vizitron ken eur vuez kristem. »

— « Ha ren a rin, eme Ervoanik. »

— « Allo, Ervan, debr eun tam abas mont da  
gouezet. »

Debet e goan gantan, e lavaret ar pedennou. Ervoanik  
a zo kaset war eun dornadik plouz er c'hraou : ne oa  
gwele goull ebet. Ha me d'ar ger, mall ganin gwelet  
atronoz, rag Lan an doa lavaret d'in ar pezh a rache.

Deuet an heol mad d'an dihani, me buhan da di Lan,  
Ervoanik a zo war zao o rei d'ora da Ber da voueta ar  
loened.

Hag an tad koz da ziskan, daelon en e zaoulagad,  
ablamour d'e vab bihan kollet.

— « Allo, tad koz, eme Lan, deuet da zibri eun tam  
benag. »

— « Ne gavan mad tam bouet ebet ken. »

— « Eur begadik a gomeret (gomerfet) evelato. Va  
mero'h Seza a ya d'aoza eur bannac'hik kafe d'oc'h. »

— « Re vad oc'h, Lan. »

— « Laret ar Batez arag ar pred, Tad Koz. »

Laret ar Batez, setu Per hag Ervoanik o tont ouz ar  
c'hraou.

Ha Lan d'e :

« Allo, paotred, poent eo staga ouz taol. Hirio ho po  
ar pezh n'ho peuz ket bet morse c'hoas da zijuni : eun tam  
mad a levezet en ho kalon ! »

Per a vouchhoaz, Ervoanik avad na gompren ket, hag  
int en ti.

Kenta kristen ma wel Ervoanik eo e dad koz. Ha  
lamont a ra d'e c'houg.

— « Oh ! Tad Koz, emean, pardon ! pardon ! »

— « Ma mab ! ma mabik ! keaz ! eme an Tad Koz o  
poket d'ezan. »

Goude hea chomet eur pennad da lenva, an Tad Koz  
hag Ervoanik a lar war eun dro :

« Bennoz Doue warnoc'h ! Lan ! »

— « Lan, eme Ervoanik, ha kemer a ret ac'hanon da  
vevel ? Ne rofec'h komanant ebet d'in, mes maga a  
rafec'h ma zad koz. Me a c'houlenn kement-se diganac'h, en  
han Doue. »

— « Great ar mar'had, eme Lan. »

An Tad koz a zo ker laouen ken e teu splan e benn  
egiz an heol pa zav eur vrmen diwarnan.

Hag Ervoanik a lar :

Gout mad a ret petra 'zo digoneet ganin e ker. Mo  
laro da gement den yaouank a welin :

Chom war ar meaz : ama e ren ar peoc'h hag an  
evrusted.

YAN AN FLOU'H.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANC'HOU

Eur skoad ar bla evit Breiz ha Bro Gall.  
2 skoad, evit ar brodou estren evit ar Broù-halliek.

## SKRIVANERIEZH

Has al labourioù pe d'ar Odro VALLEE, Riner, ruz Zant-Briek, Zant-Briek  
pe d'ar Odro MOAL, Skrivaniere, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANOÙ-KONVERZ

Tri gwennek pep ardeusennal-akriter.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Gelo.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez ato a Vreiz.  
Furnez ar Gelo.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve troc'het,  
Goupen ar Vez, a ve Fec'het!  
Mizur.

## WAR GRESKI BEPRED!

Tremen eur bla zo, mignoned koniz deuz a Leon vel deuz a Dreger g. oa o lavaret d'imp : Kresket « Kroaz ar Vretoned ! » Ni, o vean ma eo bihanik hon yalc'h hag o kontan ped kant ha kant lur a vije red evit prenas eun delion-all da « Kroaz ar Vretoned », a vane bepred da dernal, daoust d'ar c'hoat hon doa da bleal prim gant hon lennerien ker.

Setu breman gret ganimp hon zonz da vad ! Ma ve bolante Doue, « Kroaz ar Vretoned » a zo o vont da gaout, evel pep kronadur-ñinan ha dist, daoulagad, daou zorn, daou droad, diouaskel, da laret en diou feilhen.

Koulskoude an holl lennerien n'o devo ket raktal ar Groaz war diou feilhen. Gout a rei, pa ve lakat eo da c'hlori, an enned bihan na zavout ket holl asambles ; hinjennu a zifuk abretec'h ha darn-all diweatec'h. Evelse vo kont ganimp. Na vo kaset armez c'hoaz breman nemet eun nebeudik kroazion war heder bajen, evit ar re liepken a baeo 16 real ar bla evit Kroaz he-unan, (Koulskoude evit lennerien koz « Kroaz ar Vretoned » hag a bae breman eur skoad evit he-unan, ar gazeten neve war heder bajen a vo lezet d'ar priz-ze betek fin o bla).

Evelse eo red ober, rag deuz an ar-hant eo red zellet da gentan ; labourioù na vankont ket, a drugare Doue. Setu aman Gab Lishidry, Eur Mignon, Ar Yeodet, Klaoda, Laouik, Glamor ha re-all c'hoaz hag a zo prest da lakat o dorn en labour ! Hon mignon Du-Na-Dor a deu davedomp adarre, war e chouk eur zac'had maeuilho inuoret ha skivet gentan evit lennerien hon C'hoaz vraz koniz hag an hini vihan.

Petra fell eta d'imp da vean brezek gant hon aferioù ? Koumananterien a 16 real, ar muiou ar gwella. Ken liez a 16 real, ken liez-all a Groaz neve a zavo hag a nij gant he diou askel marelet, da gas en pep korn a Vreiz kelou mad, frealzigedez ha dudi.

## MENNOZIOU « KROAZ AR VRETONED »

N'eo ket awale'h kreski a gorf, red eo ive kreski en furnez hag en spered ; zeul-vrasoc'h, zeul furoc'h ha zeul skiantekoc'h eo red beon.

Furnez « Kroaz ar Vretoned » eo ar furnez kristen ; he spered eo spered Breiz. Feiz ha Breiz ! ar gir-man a vezo bepred he gir, ha breman p'he devo muic'h a nerz hag a c'halloud, e teio d'e viret ha d'e zifenn gwelloc'h evit biskoaz.

### Feiz ha Breiz !

Feiz ! Ar Fe eo ar c'hentan. Ar groudarien n'int nemet ar skouer disliv deuz ar C'houer, hag ar hed-man a zo kerc'hiet gant ar hed-all, gwaskodet, harpet warnan. Kentan gir a zesk ar Vam d'he bugel eo bano Doue, ha kentan atudi he-man, pa darz eur bered intentamant en e ine, eo ar c'hatekiz.

Breiz ! Hano e vro eo an eil a den war c'heno ar bugel, an eil anaoudegez hag an eil garante a lak e vam hag e dad da ziwan eunan. An den n'eo ket eun el ; n'eo ket ive ul loen. Doue, dre eur burad estlammuz an euz evel dimezet drezan an el hag al loen. Evelse, an den, o tennan d'an Ne, a vez, a gresk, war an douar ; ha pep-hini war al loden douar elec'h ma eo ganet : bounez eo e vro ; al lezen naturel a doug penoz pep den an euz eur vro hag a die harout ha harpan anei, evel ma har ha ma tifenn an tiegez elec'h n'eo bet ganet.

Setu eta daou vennoz kantan « Kroaz ar Vretoned » : ar Fe, ar Vro ; dre an daou vennoz-ze unanet eur ouenn-tud he deuz bue ha lusk da granvad ha da greski. Ni o difenno aman betek ar pal pellan ha betek hon eur diwean.

Politik a ve gret gant an darn-vuan deuz ar c'hazetennou. Politik mad a zo mad ; mez pegoulz e ve mad ? Pa ve harpet war ar Vro.

Labourad evit ar vro a ra c'hoaz ive meur a gazeten. Al labour-ze a zo mad ; mez pegoulz ? Pa ve harpet war kredennou dreist natur, kredennou a relijion.

Labourad evit ar relijion a zo mad, mez pegoulz ? Pa ouier dibab ar gwir relijion, nan euz nemeti gwest da zalvi an dud, ar relijion gatolik.

'Vit Breiz hag ar-Feiz hatolik, en hano hon gwir Doue Jezuz-Krist, hag hon Gwir Vro, Breiz-Izel, e reomp eta ar gammad neve-man war-rog.

Hon c'henvroiz d'hon zikourol

AN SKRIVANERIEZH.

## Retred ar Zoudarded

Tried kloc'had da c'hervel oll zoudarded yaouank Treger (Treger vraz ha Treger vihan) ha Goulo d'ar Retred a zigoro ewite en Kontent Neve Lannou, ar meuz d'abarde 19 a viz Gwengolo.

Kredi a ran, potred yaouank, oc'h arzo bouzarvet gant kloc'h « Daniel Zantez Annan » ha « Kroaz ar Vretoned » o c'hervel anoc'h d'ar Retred. Ar voubon, zur mad, a zo en ho penn hag en ho douskouarn. Dent eta etrezeg Lannou, evel an tol-gwenan etrezeg ar goleou war-lerc'h ar c'holoenner o son. Moez ar c'hloc'h eo moez an Odro Doue. Sentet outi hag ho po mil joa.

Beomp etreomp, tud ar c'horn-man, er bourg Rospes, war-benn peder eur d'ar peñan, hag ec'h efomp oll a vagad, en eur ganan da Lannou.

Kouavo ar meuz 19 a viz Gwengolo !

## BREIZ

### KENVROIZ KEZ

### KRISTENIEN VAD

Laket ho pugale er skolio kristen.

Eno vo disket d'e o fedenno, o c'hatekiz, o relijion  
Eno 'vo roet d'e dishadurez vad den en dibab er bed, herve an honestiz, al lealdad, an urz.

Ar vugale ar muiou gwiek eo bugale ar skolio kristen.

An dishadurez kristen na noaz ket ouz an dishadurez-all hag « Amez skiant Doue da genta Goleger-all na dal netra. »

Ar vugale d'ar skolio kristen !

Ha goulnnet ive digant ar mestrou hag ar mestred ma vo disket d'ar vugale lenn ar brezonek. Pouneruz tra evit sevel o spered hag o ioe, gouzont lenn ar brezonek ! An neb a our lenn ar brezonek, oupenna ma holl labourad evit e vad-hon, a bell ober vad d'ar re-all ive en-dro d'ezan. Ho pugale d'ar skol kristen, eta, gant ar promesa digant ar mestr pe ar vestrez e vo disket d'e lenn ar brezonek.

## PEUC'H... ?

War an tam douar-man e kaver a-wechou tud fentuz, pere aliez na welont ket hirroc'h eget beg o fri ; pe da vihana, ma welont eun tammik pelloc'h, e fell d'e reiz o gweled war c'hoantlegioù o c'hston souik ha

war lezouregz o c'horf didalve. War zigare e plich d'e kousket da vad, beva stioul ha didronz en o lojeanik, e karfent ive gwelet ar reou-all oc'h ober evelte. — Ut, emé, a 'n em glev gant an holl ; int a gar an daou du, mad, ha fall, ha dre ma kred d'e — herve o spered ber — en em dalve an holl, e fellfe d'e k'ad peuc'h da zibri o zammik bara, k'ad peuc'h da gousket o gwalc'h ha, dreist-holl, k'ad peuc'h da veva herve o bue gwag ha divalo. O fijadar eo lakaat peb den d'ober evelte ha dre eno disiana kement youl vad a zo...

C'hoant ho peuz da vont war arach evid ho mad pe evid hini ho nesaz ? Kerfent e klevfet ané o laret : — « Paouezet eta... Lakaat a refet an holl da zellet ha d'ober goap ouzoc'h... Chomet, bevet dizeblant en ho tiegez hag e refet gwelloc'h !... » C'hoant ho peuz da zevel ho mouez eneb da gemend dizurz, da gement giz, ha komz hudur ha disteal a zo ? Doua e klevfet ane adarre o buchal : — « Petra ho peuz da welet war an tref-207... Roet peuc'h, pe an dud ho tiskwelloc'h gant ar biz... N'eo ket eur vouez en tu-all a chencho penn d'ar vaz nag a zigaso ar bediz war an tu-mad... ! » Hag an dud-man a vo da gentan o tamall hag o laret, ankeniet, penoz ma karis an dud vad ober nebeulloc'h a drouz ha rei muic'h a beuc'h, peb tra a gerfio gwelloc'h...

Kement-man a zigas da sonj d'ia euz komzou eun eubeul hag a garche gwelet an holl unanet eur wech ive war an tam bouli indu-man, « mes evit se, amean, e fellfe rei peuc'h ha lezel a gese a-grenn ar brezel a ve goret hirie d'ar Gouarnamant gant eur ram tud a zo, dreist-holl gant Barzed Breiz, evid difenn gwizioù o Bro, pere no dint tam trubuilhet, muic'h eget nan eo frankizon ar bobl... » D'ar p'ot-man, pehini sionazet an euz k'ar re a vreden, e larin lakaat war e fri eul luadon koat pe c'hoaz zeri kloc'h e c'heno ha miret evitan e-unan e gomzou diod ha diskiant !

Tud eveltan na c'houlont na gwelet skler, nag anvuz ar wirione ; rag ma rafent, e welent hag ec'h anvuzent d'uzo en petore doare trespuz emañ stad hon Bro. Neuze elec'h kuruzh peuc'h, e c'houlfent gant an dud kalonek ma vefe difennet stalad peb urz, peb tra reiz ha leal ! M'hen goar ervad, n'eo ket unan, a dra zur, a droo penit d'ar bed. Peb-hini a die digas, evit mad an holl, e dammik bec'h, e dammik poan hag ac'hane, dre an unvaniez, an emgleo gwirion, eo e teuz d'ober labour vad, da chenec'h penn d'an tref ha aliez zoken d'ober barrudou. Ma na ve war an douar nemet tud, pere war zigare kousket ha beva didronz, na glaskfont nemet peuc'h, pelec'h ec'h ey an tref ? Neuze avad potred an dizurz o devo plijadar ; brao e vo d'e ren ha kas potred ar peuc'h en dro a daolioù skou tje, a daolioù bar ! Mes, a drugare Doue, en kenver ar potred-man a zo reou-all hag a gar welloc'h eur brezel kalonek 'vid eur peuc'h mezuz, daoust ma'z eo o brazan levezuz k'ad peuc'h ha gwelet unvaniez dre-holl...

Rei peuc'h ? pa na weler dre-holl nemet kasoni, trubardez, gwari ! Rei peuc'h ? pa 'man en peb lech an Droug o trefc'h ar Vad, ar Gaoù o vouga ar Wirionet... Rei peuc'h ? Dirag an torfejoù a ve goret bemde, 'n hon bro, eneb da Zoue, d'ar Fe, d'an Urz vad ha d'al Lealdad ! Mad d'am c'hemper ma kav deraed rei peuc'h dirag kemand a zizuzou ha kousket skav pa 'man krog an tan en plouz e wela ! Mad d'ean bezan dinec'h pa glev en-dro d'ean peb tra o strakal, pa wel peb frankiz o tec'hel tam ha tam euz tre e zourarn... ; mad d'ean zoken kana seder ha beva dizouriz pa wel e c'houerion o lakaat an hual war e dreid hag o kabestri d'ean e benn... Mad d'ean chom dizeblant pa wel lemme digand ar gristenie o frankiz a beden, pa wel zerr an ilizuz, laeres ar veleien, pa wel en hon Bro reu an Dizouez, ar Pec'hed hag an Dispac'h !...

Evidon-me, dirag kement-se n'hallan na rei peuc'h, na kousket evuruz, na kana seder, na beva dizouriz, na chom dizeblant ! Em c'halon a Vreizad hag a gristen e ouelan dourek, dourek ; hag e-lec'h tremen ma amez o laret d'am c'henvroiz bezan dinec'h ha rei peuc'h, e karfen buchal d'e a-benez ma fenn ha deuz ma holl nerz : — « O Bretoned ! eun avel a fallente a c'houe war ho Prol

An Ifern an euz touet malloz d'ho kredennoù fur ha krenv; tam ha tam e c'hoanta mouga en ho kreiz hag en kalon ho pugale fe birvidik ho tud koz; tam ha tam e c'hoanta diskar en ho touez ar gizioù fur ha zantel o deuz groet a'hanoc'h en-pad meuz gantved eur bobl brudet hag evuruz... C'hoant an euz d'ho kas d'ar sklavach...! En han Done, abalamour d'ho zent koz, evid mad Breiz, zavet ho mouez ha d'an enebour brezel, brezel ha brezel!!

Penez, rei peuc'h? pa weler gwellañ bugale Breiz o skuilh daeron war eun douar divroad! Rei peuc'h? pa glevet ar c'hoar-galon glaz d'ar frankizoù kristen mario! Rei peuc'h? pa c'hoantaer leza ar Brezonek, yez hon zado, hon zent koz! Rei peuc'h? pa glevet dre-holl evn ar Mero o teurel skrijadennou skiltreuz ha pa weler klezeier stignet a bep tu d'z d'hon feannoù... Rei peuc'h c'hoaz?... Biken, biken, kentoc'h mervel!

En eheb, breman muioch evit biskosz an amzer a zo talvouduz; koll anei e vefe eun torfed braz. Ra zavet peb Breizad evid e vro! Neb an euz eur bluen a dle skriva, neb an euz eun teod a dle komz, neb an euz madou a dle o dispign, neb an euz galloud, danve, nerz, diourec'h, a dle o implia evid Doue, evid mad e vro hag e genvroiz! Tewel pa fell komz, paouz pa fell prañañ, rei peuc'h pa fell brezel, a zo peuc'hed! Ma fell d'eur rum tudfchom da gousket, lezomp anei mes ni, Bretoned ha Kristenien, bezomp bepred d'han, roomp hon foan, hon nerz evid difen dalc'hmad peb Gwir, peb Leizad! Na chilouomp ket an dud spontik ha didalve. Kerzomp war arab gant kalon, rag evid hon frankizoù dismantrere evit lezen Doue goapeet, evid ar Fe flastret, en eur gir evit gloar Doue hag enor Breiz, peb Breizad a dle bezan eur C'hristen, peb Kristen eun Abostol!

AR YEODER.

## AR FREZEZ

(Svi, en brezonek mad.)

Koantan m'eo ar frezez da weler gant o bleun gwenn, war o gweleo, pe o vordan aleo eur jedin! Koantan ma'z int o kuz our lagad an heol dindan o deilho dentelezed, hag o ruisan, o taro! tam-ha-tamm gant an tomder; Gwellan c'hoaz a ve gante! Hag ar pez a zo well, pa ve tapet unan pe unan dre laerez, gwellañ blaz warne! Yoden, net war eun asied e-mesk eur briasun suk-poult hag enj liehenik, eul lommik gwin, gwellañ meuz! Gwellan lipaj! Alaz Toue!

• Lipaj a zo mad,  
N'eo ket enorab  
Avad. •

N'euz forz! N'oullc'h ket kat welloc'h lipaj da derv ho zec'hed.

Ar c'hlanour kez war e wels, Doue d'en ajisto! krammenet ha dizec'hed e deo! gant ar c'hlenved, poan d'ean o tarlouket tra-all a-bed, e sarta e lagad, e vouz-c'hoaz e dremm, e vijaj motivet, pa wel eur golenad sivi koant c'hoaz vad o tont deuz eur baner du, war bal dorn an amezek, etrezek penn e wels. « Frezez, emean, an han! Evid an deio e savin ac'han, mar be bolante Doue! » Ar c'hez paour na wel ket e stad. Hanv an Eternite eo a zo o vont da darzan evitan evit an deio, hag ec'h ey, goude eur maro mad, da danvan sivi welloc'h da Iorzik Sant Pet, d'ar baradoz! Da c'hortoz, e vanaoc'hig gwad, o sivi evel lijo gant an derjen, a zo d'istant gant ar frezez!

An treo ya'chuz int. Dibit dioute bemde epad eur miz, eme; a dal eur miz-c'hoz o c'humant aer fresk ha nerzuz ar mor, evid ar yec'hed. Na zo ket welloc'h evid ar sivi d'ozan drouk-an-urlo, d'hen kas « a skaz » ar boan skrijuz 'zo anei! Dour diwar o deilho a zo mad da losket ar c'hoar ha da zigas an naon d'ar ger.

« Ac'hanta, du-man, eme eun toullad diouac'h, krenvroiz vad, du-man a zo e-leiz a frezez. » — Koz int, o larin d'ac'h! Ouzpenn tri bla int? Tennaet o gwrio, o ivino d'e, ha re-all en o flaz! Na dalont ken netra. Na c'hoari ket gante evel gant ar gwin hag ar menbl (arreburi) a c'hiz koz; na c'honeont ket o kozan.

« Du-man na zo ket avad, eme an darn all. » — Bean a vo mar keret. An treo ezet da gaout int. Douar mad, skanv, gre, a blij d'e. War vord, war lez aleo ar jedin en em blijont. Wel eo gante, koulskoude, gweleo evel an ognon. A-weleado e teount ar gwellañ. Gwasked hag an disleol a glaskont. Na blij ket d'e na ro a domder na yenien. War dizoc'h ar miz-man e vo ar c'houlz da lakat. Labourer an douar breman. Rost d'ean eun hanter teillad,

teit koz. Ha, pan arrou ar c'houlz, goufet laso, lagadenno ha gwrio d'e, digand eun amezek bennag. Dourraet mad ardig mar be disarb an douar, ha goude ive ma ten zec'hour; ar frezez a zo eun treo zec'heduz. Lakat al laso an 35 pe an 40 santimetr, eun troatad mad, an cil diouz egile ha 50 santimetr, mar geo eur raz vraz a roer d'ac'h.

Lakat plouz ed-du da domman o zreiz d'e epad ar gaouv.

— « Pesort frezer laket? » —

Na veet nec'hed. « Trizek soit a zo ewit touseñ ha war ar bern da c'hoaz. » Ken aliez a hini, prestatik awalc'h, hag a zun a zo er bla! Derec'hed jonj deuz ar re wellan: ar Frezezen Vreton, an doktor Morer, Frezezen « Zant Jorob », hini « Léon XIII » hag ar gwellañ, eme, eo frezezen « Sant Anton a Badou ». Ganti herve, ec'h, a al lore:

Groet ho c'hoaz breman!!

EUR MIGNON.

## Kimiad eur Zouard Yaouank

gant Prosper PROUX.

WAR DON : *Al Labourer.*



Ma c'halon a zo frañhet dre nerz ma enkrezoù, Ma da-



ou-la-gad en - t - net n'o deuz mui a zae - rou, Deud



'Leo siou - ar! an devez ma ren - kan di - lo - zel Lec'h



kaer ma bu - ga - le - ach, ma bro ga er Breiz-Izel!

Ma c'halon a zo frañhet dre nerz ma enkrezoù, Ma daoulagad entanet n'o deuz mui a zaeron, Deud eo, siouaz! an devez ma rankan dilezel Lec'h kaer ma bugalech, ma bro gaer Breiz-Izel!

Keno d'id, ma zi balan, kuset 'barz an draouien, Tachen c'hilaz var behini, bugel, e c'hoarrien; Gwez ivin ker bodennek, e disleol a bere, E-pad tomder an hanvon, e kouskenñ da greiz-do!

Keno! keno! mamm ha tad, breman n'esperit mui E chomfe ho mab kared da harpa ho kozni, Evit gouind d'ech bara, vel m'hoec'h enz gread d'ezan; Al Lezen zo didruet, ho kwilaad a renkann.

Nag a wech, ma mamm dener, e renket-hu lenva, Pa zeuy ma c'hi ankenied e dro d'ech da ruza; Pa welfet, war an oalet, ma skabellik c'houllon Hag ar c'hifaid o steui war ma fenn-baz derou.

Keno! bered ar barrez, douaron binniget, Pere a guz ma c'herent gant ar Zalver galvet; Da ouel an Anaon klemmuz, n'in mui war ho peziou Da skuilha dour binniget mesket gant ma daeron.

Keno! ma muia karet, ma douisk koant Mari, Eur blanedan digar a zeñ d'hon glac'hari; Euruzded ha levezek skeduz zo tromeñet 'Vel en oabl ar goumoulen gant an avel kasel.

Na welin mui da lagad ker lemm ha ker laouen O virvi gant plijadur, e ti pe erruen, Da zournik gwenn ker mibin o frei ar c'har en dro; Da vouez flour mui na glevinn o kana va gwerzo.

Pa camp er c'hatekismou, hon daon c'hoaz bugale, Hon c'halonou diskiant, e kuz a 'n em glev; Dirag Gwerchez ar c'hoaz-hend, nag a wech e tonejomp Na erroje hirviken disparti etrezomp.

Yaouang ha dibreder, siouaz! ne wiemp-ket Nag ha bet c'honerventez er vuez zo hadet; Evidomp ne oa, neuze, Lezennoù na Rous, N'anveemp med eul Lezen, hini ar garante.

Keno! ma nez-amezek, Yannik ma gwir vignon, Kamarad ma c'hoariou, ma breur dre ar galon; Pion a gemero breman lod ebarz ma foanio? Pion a gomzo ganin-me deuz ar gear hag ar vro?

Hepdoun te yelo breman d'ar parrezioù tosta, Da bigosat al leuriou barz el lejou-dorna; Hepdoun te yel da c'honid-maout ar c'hourennadol, Da chasa war rubanou ebarz er varadek.

Keno! ma c'hazek velen, skanv evel eun helez, Mistr evel eul logoden, jentil vel eun oanez; N'ez santinn ken dindanou, gand an hast, o tripal, Ma daouarn mui ne stagind ar zeien war da dal.

Keno! ma c'hi-keuz Mindu, ma leal kamarad, N'efomp ken, dre ar c'hilizen, da glask roujou ar c'had; Ne glevin ken, er menez, da c'hilpaden skiltreuz, War ma dourn mui-ne zantinn da d'ad karantezuz.

Abenn eun nebeud amzer, kalz a vignouned yen, 'Barz er zoudard divroet, hep mar, ne sonjfont ken; Mes da galon te, Mindu, n'eo ket ken ankoezuz, Pell e ri c'hoaz va c'hanvou, gant da yezou klemmuz.

Keno ta, plijadurioù, leuriou-nevez, prejout, Nezagou, nozvezioù, foarion ha pardonioù, Ebaton ker birvidik, binion zard ha sklentinn, Na drido mui va c'hilaz gant da zontioù liezin.

Keno kemend a garan, keno da virviken! Pell diouz a Vreiz me varvo, mantret gand an ankon! 'Vel eur blantenn gizidik, evid ar vro krouet, A renk gwenni ha mervel, kerkent m'eo divroet.

## PARDON CAMLEZ

EUR PEZ-C'HOARI E BREZONEK

Disul ar 17 deuz ar miz eman pardon Zant-Nikolaz. An ofiso: an ofern hag ar gouspero war an ton braz. Goude ar gouspero ec'h ey ar prosision da viunigan ar « Groaz Neve ».

Da glozan ar pardon, e vo c'hoariet eur pez brezonek gant p'otred Peuri' en Keihanam, en ti an Otro F. Briand, ha diskwelet an tolenno (en gallek « projections lumineuses »).

## PARDON KERMARIA-SULARD

Disul gentan e tigous pardon Kermaria-Salard ha lidet e vo war an ton braz. An Aotro chaloni Baudour, person Pontreo, e vo ar pardoner. Eun enor evit ar barouz e vo kaout da bardoner an Aotro chaloni Beaudour a zo ken karet dre-oll, hag e oa bet moalet aman n'eus ket pell eur veuleudi dleet mad d'ean, skrivet ken kaer gant Gab Liskildry.

Goulnnet e ti an Aotro Bernard, leorie e Kemper al

## Levr oferen latin ha brezonek

gant an Aotrou abad Gall; ar gwella hini d'ar Vretoned da heulth an ofison.

Goulnnet, e Ti Prud'homme, levr neye hon mignon Kloda:

## MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'hemenn digant hon eskop breizad, an Aot. 'n eskop Dabourg; unan eus ar gwella hag an dudina leoriou bet skrivet e brezonek betekhen.

GOULENN e bureo ar Groaz: Gwerzioù sant Erwan, al Labourer, sant Milio, sant Koneri, hag all. Eur gwennet ar pez.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Sain-Brieux. — Imprimerie Saint-Guillemme.



# Kroaz ar Vretoned

## ROUMANNOU

Eur skod ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod, evit ar breiz evit ar Bro-C'hall.

## GERVANNED

Es ab-flevezeg ar Gwir ar C'hroaz ar Vreiz, ar 17<sup>th</sup> Gwengolo 1905.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep sroudenad-ekritur.  
(Diskenn a briz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breiz ha c'hoar eo Breiz.  
Furnez ar Gwir.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek eo nio a Vreiz.  
Furnez ar Gwir.

Dalc'hil hepred d'ho prizonek,  
Yez an dud vad-ha kelenek,  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'hed,  
Ouspenn ar Ver, e va Pe'hed  
MILAD.

A gomz gant neuzioù hepred hag eur galon berridik a  
Isonna an holl sperejor. De eo'ge da strapan an daouarn,  
an O. P'Estombeillon, anez-Kevredigez Vreiz, a ro respont  
d'an otro Mear hag a zimpieg dirag Kastel-Paol eo  
Kevredigez Vreiz.

« Ni n'eo ket emean, gant ar politik emean hon fenn ;  
gant ar brezonek ha Breiz emean ; ziboue hon bro, da  
lakat-mat da d'ho freuz ar spored, al lenneges, ha feuz  
ar skiant, an oberon kaer-hag yjinnz, setu war beto-eman  
hon zell. Ni zo kas ober Breiz-keul heuz ha gallouduz  
evit ma vo Breiz-keul ive ha galloudoc'h a ze.

An O. Hénon, depute ar Finister, ha prede ar Finister  
han e-unan, o vean bet komzet rene-keul pell a-du gant  
Breiz hag ar Brezonek, an O. P'Estombeillon an euz o  
zrugareket en a brezonek, evel ma oa diest ober.

Breman e ten tro ar c'hlan. Eur Breton-denn-Breton  
a gao eun dra bennag en gallek ; mouez kaer ha-haer  
gwiziek. Walezh e ten an O. Meriadec an-euz prientel  
evit ar gouel eur plede war an garante diest da Vreiz  
gant ar Vretoned :

Eun tri c'hart eur bennag e komz, ha m'oar vad, hie  
ehed deuz ar re a oa eno nan eva klevet komz deuz a  
Vreiz-Izel gant kement a nerz, a skiant hag a virvidigez.  
Ar pennadoù gwellañ deuz ar brezege-mañ a vo troet  
ganimp en brezonek war hon c'hentan Kroaz vraz.

Breman, da glozan an abaden emañ tro ar varzed :  
Jaffrennou, Lajat, Ar Garrek, Berthou, Caurel a ra o  
enorion pep hini d'eo hag a denn davete zelloù ha  
kalonou an holl.

Tremen dek eur hanter eo 'benn e saver da vont da  
gouet, ha koulskoude, meur a hini a lavar, dreist holl  
deuz ar m'ere'hed : Me vije chomet awal'h betek var-  
c'hoaz ar beure.

### DISUL

Gla'o a gone hepred en Kastel-Paol. Er ruina e ruzh  
an douz hag an né a zo koumoulet. Desomp eta da bebi  
Doue hazant-Paol da rei d'imp amzer vad, sag'heve d'abar-  
daez e vo c'hoariet ar pez c'hoari : *Ar Gwir treach d'ar  
gao*, gant Abaler, kuznet arlene en Gouzia.

Deuz ar beure, e tigoue en her kevredisted c'hoaz,  
asambles gant eur bagad tud yaouank deuz a Vostonlez,  
ar Yaouankiz Breton, strollad zavet gant Lajat ha  
Prijant, hag a zo deuz gant henviou masik, taboulinou,  
kléronou ha c'hoantellennou a vo gret fited anez. Evit  
an drouz, int trec'h c'hoaz d'ar binioù ; mez n'int ket  
trec'h d'ean da c'hoari. Holl asambles eo'her d'ar gerd  
dindan ar glao-puilh ; an amzer fall na herz ket kouls-  
koude an dud da vale evit gwelet ha klevet an treo.

Gonde ar gousperou emañ ar pez-c'hoari. Ch'ez da  
gere'hed c'hoaz d'ar gar e Paolled Zant Marin e c'hoari-  
erien, ha kanerien Montroulez. En eur dremen war leuz-  
gêr e kanont dirag oupenn tri mil a dud e Bro-goz ma  
Zadou ». Er freneztron e zo tud hag a respont d'an  
diskan : « O Breiz ! ma bro, mo gar ma bro ! »

'Benn eo pare, teiz eur a sôñ hag ar gousperou a zo  
o zehi ; an dud a ya dre vil da 'n em vodan dirag dor ar  
c'hoaz ; o vean ma eo digoret an nor eun tem re abred,  
ar holl a ya 'bars a vezn ; 'n em degen a ra an dud ;  
m'ere'hed a goll o c'houfou ; en eun nebeud amzer eo  
karget ar plason ha kement a dud a zo en o zav evit en  
o c'hoaz. Deuz an em magor d'eben na gavfer ken eur  
plas 'benn e tigor ar c'hoari. Beaz zo endro da 1200 den  
bodet emañ, kanerien, otrone, bugale ha tud vraz, tud  
deuz ar vro, Bretoned hag estranjouren, belec'h ha  
leanezed.

Ter eur hanter e pad an treo. Kanan a zo gret : *Ka-  
nerien Zant Marin* a nispak o braon toniou, an *Deu  
Vreiz*, *Loehaber* ; mez ar pez-c'hoari eo a deuz ar muian  
daoulagad an dud : *Ar Gwir treach d'ar gao*.

Ar pez-man gret en eur gl'o duduz hag ez war an dro  
da intez a lak dirag hon daoulagad eun tregor breton o  
vont da vean distret, dismantrout gant eun estranjour, eul  
lakipot deuz ar Vaskoni (Gascogne) den difisou, dizoue,  
divrezonek hag an leuz laket 'n e benn en eur dimei  
d'eun intanvez yaouank a di diskarr er vro ar feiz hag ar

Brezonek. Tad an intanvez-mañ a zo a-da gantan srouz !  
Dilezet an euz etre e zaouarn ar garg a veaz er barrouz  
habetek ar garg a guloter evit bugel an intanvez, e varc'h.  
Lezet an euz tremen anel da zodez penfollet gant an  
devozion, tannan adre he daouarn star made he m'ere'h,  
hag emañ kas ober d'ar wrreg yaouank breton dimei d'al  
lakipot divreton. Dallet eo ar peir korz gant komez kaer  
ar Vaskoniad.

Roet an euz d'ean eta gwir war ar barrouz, war made  
e varc'h-vihan ha war e varc'h zoken. Pied a harzo an  
estranjour da lakat e droad er pal ? Ean den yaouank,  
kaer gwechall gant an intanvez, hag e lavarer a zo maro  
dre n'eo ket deud d'ar gar aboue 7 via 'so m'eo schuet e  
servij. Mez setu han o arrount a greiz ar renz.

Aman e tigor da vad ar pez-c'hoari. An intanvez ha  
deuz gret d'ho vad mont gant d'an oferen (ar zul a zo)  
kaer an euz ar Vaskoniad tamall d'ei he relijion. Ar mevel  
korz a chom peir ar-ger da zozan ar zouben.

Eur sonj a deuz neuze en penn an traitour Vaskoniad :  
« Ma teufeñ a-benn, emean, da huan ar bigoder-mañ  
hag he zad, e chomfe ganimp treo ar vinorez. »

Ratkal, petra ra, nemet lakat hep goñt doare d'ar mevel,  
pembiz 'barz ar zouben war an tén. Ya, mez ar soudard hag  
a zo deud en ti epad ma oa et da glak e hembiz, a zo 'n  
em guez 'n eur pre, hag e wel ac'hane an ampreñ o'h  
ober e doried.

Pa deuz kouz maren, ar soudard a ra gervel daou  
arher, hag eo diskuliet ar Vaskoniad hag boutet en toull.  
A-wech m'eo et ermeaz an ti, an treo en em gav evel  
distrog.

Ar pez-man a zo gret eta da ziskoue pegen risk'uz eo  
kemer afer gant an estranjouren, tud dizoue ha divre-  
zonek, a-denn diganimp kement mad hon deuz, zoken hon  
ar'chant, hag a lez ganimp ar vez hag ar glac'har.

Unan deuz ar gwellañ c'hoarierien eo eur peir yaouank  
deuz a Vostonlez, Caroff e hano, kaner kaer oupenn  
c'hoariet kaer, hag a ra roll ar soudard. E roll a zo ive ar  
c'haeraz, gant hini an intanvez. Hi a zifenn ar feiz eneb  
an estranjouz, hag hen a zifenn ar brezonek hag ar Vreiz.

Beaz 'zo en roll ar soudard eul loden war istor Breiz  
hag a dalveje beaz gwelet pe, da vihan, leunet gant an  
holl Vretoned.

Ma vije red konten de ha de ha pen-da-ben bue *Kevre-  
digez Vreiz* pa ve en he gouelioù, e vijed kaset gwoll heil,  
pe'o gwiz, oupenn ar pez a ve gret gant en deouze, e  
vije c'hoaz da gontan eul loden vad deuz ar pez a ve bet  
gret epad ar bla.

Greomp eur zav-kein evit ar zru-mañ ; ar zru-  
sall e vo laket emañ adarre evit skouer vad ar Vretoned,  
ar pep gwellañ deuz ar pez a zo bet gret an devozion  
diwean.

## Kreskadennou « Kroaz ar Vretoned »

« Kroaz ar Vretoned » aboue m'eo deud war an douz  
he deuz gret meur e gresk, an Otro Vallée, an euz i  
krouet, a hall lavaret zo d'oc'h.

Da gentañ, e oa evel m'hauret er bederded-pazen deuz  
ar groaz c'hallek, hihan, dister ken e oa ; a-boan ma teuz  
gant eur girik bennag gwech an amzer, sôñ pe werz.

Eun dro bennag e teuz d'ei kerzet he-unan ; neuze  
eo divaithuret, badeet ha gret gant eur feilhen vihan  
distag.

Bihan 'oa ar feilhen da gentañ, ha berr war he alan ;  
mez pa he devoe bue awal'h, e teuz da vrasad ha da  
zougen pelloc'h he mouez.

N'euz forz, mous e oa, born ha gilsam pa n'he devoa  
nemet eur feilhen. Breman he devo diou, ha n'he devo  
ken da ruian dirag kaseten ehed.

Plas hon deuz, pa deuz gret he hent keit ma oa  
dinez ha skav, eo'her breman gwelloc'h c'hoaz ar bed  
gant, hag ar Vretoned, o wriet penoz eo deud ober, benn  
ar fu, kaer he deuz bet kaout posan, a drido o c'halon  
evit he rei d'ei digemer mad. Dir-Na-Dou.

## Gouelioù Kevredigez Vreiz en Kastel-Paol

Kastel-Paol. — Digeredigez ar Gouelioù. — Eur  
pez-c'hoari : Ar Gwir trec'h d'ar Gaou.

N'halljed ket dibab en Breiz-Izel eul lec'h dudiusoc'h  
da brienti gouelioù breton eget ker vihan Kastel-Paol.  
Aman o kaver kement tra a zo mad da diduan ha da  
uhelat sperejor ar Vretoned : kizioù, gwiskamanchou koz,  
eur yez c'houek, ar bravañ hini marteze a gomzer pe a  
ganer en Breiz (rag aman e kaner ar brezonek, kouz laret),  
tier, hizou, touriou dispar, eun terouer pinvidik gant  
e drevañ drouz temzet gant ar mor, a-vag temz bizin pen-  
da-bean war an ocheon ; ha, da rei lufz ha gened da bep  
tra, ar mor glaz eonek, flour ha klouar e alan, o dik-  
flokad war ar c'hrubuilhad rec'hel, enezennou, goure-  
zennou trec'hed, kizellet, krignet gantan tro-war-dro d'ar  
gerik vihan, pehini a glev e vouez hag a zant ar frond  
ya'chuz ha fresk anean betek en he ruioù hag en he zier.

Potred Kevredigez Vreiz zo et eta da Gastel-Paol evel  
d'eun eured. Aman, en harz ar C'hreisker hag an Iliz-veur,  
elec'h m'eo beziet Zant Paol hag an eskibien koz, e kom-  
pagnonez tud hag a zo 'benn keit zo Bretoned leun a  
feiz hag a lealded, tonioù, zonioù, gwerzioù ha c'hoariou  
brezonek o deuz mui a bouez hag a ekleo eget en lec'h-all  
ehed. Aman pep gir, pep mennoz breton a goue en douar  
mad ; an dioukouarn hag an daoulagad a zo digor frank  
hag ar c'h'alono a droid o tanva ar pred brezonek aozet  
gant Kevredigez Vreiz hag ha barzed.

Pa digonejomp en Kastel disadorn d'abardaez e re glao ;  
eur vougen c'hoaz a oa dre holl, mez na guze ket d'an  
daoulagad ar C'hreisker, roue meur touriou Breiz. Ar  
C'hreisker a zo keit dreist d'an touriou-all evel ma vije an  
teur Eiffel dreist da chiminallon uzin ; ma na vije ket  
eur pe'hed komz deuz chiminal houarn Eiffel dirag an  
tour dantezezet ha lemm'vel eun nadoz ma eo ar C'hreisker,  
e lavarer penoz heman a zo evit Breiz evel an tour Eiffel  
evit Paris. Ar C'hreisker an euz endro da 250 troatad  
ha kement eo tarodet ha kleuzet ar vein anean ma weler  
ar sklenjenn deuz an troad betek ar c'horre. Ar c'haeran  
toniou en Teger, Landrieger, Gwengamp, Boulvriak a zo  
labour deusk e kichen ar pez-ober-mañ ; teo-poud, bi-  
han ha krom evel kornadoned.

Kentan tra a bar warnan al lagad, en eur dostad da  
Gastel eo eta ar C'hreisker ; dre ma tostaer, e seller outan  
mui-ouz-mui, ken zoun ha ken uhel e kreiz an douaro  
ledet izel war laz ar mor.

Eur c'hilzen stank a gouez pa denomp e ker en eur  
zôn hag eur ganen : daou vinioù 'zo ganimp deuz a Geraez  
hag eur bombard, tri botr hier war o alan, lemm o zeed  
ha skav o bizied. *Zao*, *Breiz-Izel*, desket d'eo gant  
Taldir a deuz gante distag ; evit lavaret ar wirionoù,  
diez e vije kavet suterien well evito ; tregerni a ra  
ruioù ker dre ma tremenont, ha Kasteliz holl a zo war  
doull o dor, ken sonezet evel ma vijemp ni, ma weljemp  
potred ar c'hreiztelez o tigouezet an hon zouez. Pa  
ver arru en kôr, bec'h e zo o kaont lojeiz ; nan euz  
nemet ar re o deuz anaoudeien etouez ineou mad Kastel-  
Paol hag a zo raktal repuet.

Da eiz eur noz e tigor ar gouelioù er C'ho'h'u, stipet,  
greet ha kompennet a zoare ha sklerjennet gant an  
elektreizite.

Ar goma a zo da bennou-bras ar Gervedigez, d'an otro  
Gwobriant, near Kastel, ha d'an otro Meriadec a Lantivy,  
Prezeponner henoz.

Da gentañ, an O. Gwobriant a lavat digemer mad  
d'ar gervedisted ebarz ker Kastel Paol. An otro Gwobriant

# SALUD DA VRO-LEON

Da Gastell Paol ha d'heñch-Adron Maer  
entrez m'arrest.

WAR DON : *Kleier Kanuel.*

Salud, Bro gaez leon, liberezon akomset,  
Salud, herik Kastel, Bro-leon di d'heñch-  
Laeon e ma c'halon, goude ken p'ul-amzer  
O tonet war ma gis d'ha levetet te, Bro gaez.

Rag me a dalc'ho koun 'tre 'rin waran douar,  
Deus an deiz e-ean ket hauret roaez t'gar;  
En deiz-se me a oa anwan en ar korveur,  
Oven dre « entarim », da c'har lenn a goul fleur

Setu c'houest elvaz, breann da wengolo,  
En ti-gar Kastell-Paol, em boe bet ar c'heñch  
Danz ma galvadigez en iso ar c'hallaoued,  
Da c'hoñd ma brifen, pell deus ma Bro Garet.

Epad an amzer-se Doue tra me a car  
Pegement a drubuilh, a boan hag e-c'halon  
An euzbet da c'houest-ken pell dimuz-tion  
Disprinet gand an troi ha galvet da « Vaho »

En em-holl drubuilhou, ma spered a stije  
Warantion Mamm-Aeuz, d'am Bro-Clid-Genne  
Ha da vro-gaez leon, Bro Paol Avelion;  
Me 'heñch-doue aman da zibun ma c'bruden.

Rag dimuz-enn-te-af, ma-Mouez-ken ive,  
(A doue an hano-e-Vari-Ann-Mahé)  
En ho kount zantell, e-pad tregont-blevez,  
Hi a oa bet-gwathall-Mamm-Superioez.

Setu petra 'zo-tarz, ma-c'halon a Vreizad  
A drifaz gant ar joi o lenn ar chelo mañ;  
O-welet oa c'houest-Kastel-gant hon Reaz  
Er lloa-man da gendalc'h d'ho-c'hevredigez-ker.

Safed d'ac'h-hu ive, Aotrou Maer a Gastel,  
E-pad meur a gantved, en Bro Gerne Uhel,  
Ma zudo koz a oa d'ho re-hu sujidi,  
En Plounevez-Hintin, *Tevaden Kernapri,*

Digemaret eta Aotrou a Webrian,  
An homaj a gas d'ac'h ho-Tevader bitan;  
Dalc'het-em euz envor deuz a Gerdaniel,  
Ha deuz-ho Tonton (1) mad, a roaz d'in skoaed.

Oht me vefe euz, me a vefe laouen,  
War ho touar zantell, Sant-Paol Aurelion,  
Mar c'hallfen donet, en tuz-heol ma deizio,  
Aman da ren ho kar, pe garik kount Rosko.

PENHOARN.

Dissdorn, an naved a viz gwengolo, e tiguio gourliou  
Kevredigez Breiz en enor d'ar Vro ha d'ar brezonek. Hon  
mignon mad Penhoarn, hag a zo bet-gwechall o-ta-  
houret en ti-gar Kastell-Paol (breann emañ e Montañon  
e Bais-Uhel), an euz sklavet war-ze ar « zalud » a von-  
fomp aman.

(1) An Aotrou Veolant a Webrian, Kuzulier-gerant a Ganton  
Plagat, mervel en e Gastel a Sant Jan Gerdaniel kichen-Kel-  
laouen.

## KARNOT

### Pardon sant Weltaz

En eun draouñien goant en parouz Karnot, e-harz ar  
mene ma ve gret diontan mene sant Weltaz, 'heñch ma  
kouler e oa gwechall eur « c'hamp Roman », war behini  
e oa bet, er blavez 1237, eun emgann spontus etre ar  
Vretoned a Vreiz-Uhel hag ar Zaouon, a zo eur gaez a  
chapel, lec'h ma enoret sant Weltaz.

An trefe a viz Gwengolo e oa ar pardon bras, er  
chapel-man ken brudet 'barz ar vro.

Hag, en gwirionez, leon e oa endro d'an Iliz koz-  
man peadra da frealzi spered eun den.

Zant Weltaz a zo pedet evit mad al loened, ha goude o  
larie an den e ve ket eno diont c'houest-hant a gezek,  
n'efe ket en tu-all d'ar wisionez.

\*Kals a birc'hirined a oa ive ha gant n'heñch-narz-kalon  
n'e deuz-i ket lazet :

Oven sant Weltaz biniget,  
Diwallet hon madou, hon loened;  
En deus pob-drouk, en pep mare,  
Diwallet, hon c'horf, hon ine.

An ofeson a zo bet eus er c'haera; ar pardonner o oa  
an-otro-Hery, person Lohuec. En ofeson en-neuz gret-  
eur-trezezan eus ar beavan; diskeriet en eus freaz-ha skler  
d'ue zant Weltaz-war hi heñch ha disket an eus penoz ec'h o  
bet ar zanteman en e vus eur skouer a zeusder, a zanti-  
digez a beñch hag-a biniget euid pep den, vuztunio hag  
a g'e g'ap'hirim ac'hanomp da gaout evit gottoud ive,  
eun de da zom, en em garet euzur er baradoz.

Er gonsperon a zo bet kanet war don ar c'hrampeuz  
gwiriz, 'vel ma ve laret; goude e gret er prouision en  
pehini e-douget-religon zant Weltaz, skouder ar Werc'her,  
ha kals-a vuztunio.

An tontad a zo c'houest en eur park kichen ar  
chapel; an tennon en eur strakal a re d'ar zanteman ha da  
gotat Bro, tegeant gant an deuz spontuz; sant Weltaz,  
ouz-o-c'halon, zur a lare : « N'e ket maro ar fe c'houez en  
Breiz-hañch »

Hag, en gwirionez, keit ha me tele'ho an dud da vont  
d'ar pardonner gant tennon a garante hag a zougant en o  
c'halon, nan cy ket da netra ar boan en noa bet zant  
Weltaz o plants greñon ar wirione an katon ar Vretoned  
ha, ha ni d'hoñ zro a g'e ive hen tregateket da vean  
disket d'imp ar gwir hent d'hoñ gwir Vro; rag ni, ma  
zud-kez, nan omp war an tam douar-man nemet estran-  
jourien pe diereidi.

Salud ar zakrament an eus achuet ar pardon; pep-  
hini a zo et e' darouer, en eur laret keuzo-da viz; mar  
be bolante Doue.

BRUG-LAN.

## EURED KASTEL-PAOL

Kinniget da M. A. J. P. a Gastell-Paol.

Warnoud-te, gand dudi, a-viskoaz e paraz  
Lagad ar Vretoned, Kastel-Paol, mez hennoaz,  
Hennoaz e sav eun de gresko c'hoaz da c'hened,  
A vredo da hano pell 'toez ar Vretoned.

Kastel, te-t'ez 'n ez tro vel eur gouriz-arc'hant,  
Trevajou 'lec'h ma sav a bep haden diou c'hant,  
Trevajou gwashedet, tomet gant ezennou,  
Alan nerzuz ar mor o c'hori d'ad madou.

Kastel, te-t'ez eun tour, ha, da ziskarr an de,  
Pa bar an heol warnan a lach' vel eur c'hleze,  
Ha da noz, da zav-dour, pa d'eb e skend a-bell,  
E seblant 've eun el o vesa da gavel.

Kastel, te viz e-harz jijen ven da Greisker,  
Eskern zakr kentan zant 'bleustraz hon lanneier,  
Roi, unan euz ar seiz a zouten Breiz-Izel,  
Brasoc'h c'hoaz e c'hallond 'vit 'n eo e dour uhel.

Kastel, te teuz ar feiz! Da dier kizellet  
Azalc'h, daoust d'o c'hozi, war ar bed branskellet,  
Da diazezon don fiziet war ar men-font  
Ne doujont nep arne; kammed int na grenont.

Ya, warnand gant dudi a viskoaz e paraz  
Lagad ar Vretoned, Kastel-Paol, mez hennoaz,  
Hennoaz e tarz eun de gresko c'hoaz da c'hened,  
A vredo da hano pell 'toez ar Vretoned.

Da drem ken hegarad ha da yez skav 'ha c'houe?  
Denz piket hon c'halon, ni, tud ar brezonek,  
Hag e tenomp 'n eur vonez gant enor ha fouge  
Da zielek gant lezan ar garante.

Gwisk 'ta-da zae kaeran, zae glan da yaouankig  
'Vo gwelen an euzed astennet war da viz,  
Breiz ha Kastel o dan 'vo enreujet feteiz,  
Glevez te ket ar youc'h. Kastel Paol, Kastel Breiz?

DIR-NA-DOR.

## MARO EUR MIGNON

Kinniget d'am mignon hag amezek Ar Yeodet

Pa oan me partiet d'ober eur bale,  
Job, ma gwella mignon, oa klavy 'n i wele,

A-rog 'gan partiet  
'Noz-d'eu lavaret :

« Ben ma vi-skouet d'ar ger,  
Me vo-er-euz er tennan;  
Kinniget 'ta, ma mignon ker,  
Evit ar wech-divezant »

Dañon em daoulagad, enbreost-ma spered,  
Evit hen frealzi 'moa d'ezan lavaret :

« Pad an Otro-Doue  
Da-gaout ouzid true;  
Lak da fianz onnan,  
Goul digantan ar c'harz;  
A-benn nebeudik aman,  
Ni a 'n em vete c'hoaz.

Setu me partiet, eur penad eus ar gaez,  
Lest, ma gwella mignon, da c'hortoz an amzer,

Ma-tes'hebe ar c'htenvet  
Eus e gorf ken pouant,  
Ma c'hallje radek adarre,  
'Dars ar maeziou didronz  
Ha mont da drugareket Doue,  
'N e Iliz parouz.

Allas! fazia a ren o veva hep-asc'hamout;  
Ar maro zo bepred treitour, hag a sko dizeblant :

Nep a fio entan  
'Vo-zur tapet gantan,  
'Bann pwezek de goude,  
'Tomas d'in ar c'helo,  
'Laret 'oa, war e wela,  
Ma mignon ker maro!

Buhana ma c'hallan, gant g'halon-em c'halon,  
E oan deuz war ma-ehiz, da wela ma mignon,

Oa ket-bermetet,  
D'in-melen-hen-gwalet;  
Derv e oa kat gant Doue  
'Ha vont d'ar baradoz,  
Et a oa 'hena neuze  
En douar da repoz.

Neuze oan et d'ar vared, da laret eur beden,  
War be ma mignon ker-ma-welin-ken biken;

« Eo, eun de da zonet,  
En pales an-Drinet.  
Mes, da c'hortoz an termen,  
Ar-sonj eus ma mignon  
A chomo da viken  
Gwriennet em c'halon. »

BRUG-LAN.

## KELEIER

### EUR MARO TRIST

Eur plac'h vihan unnek via, deuz a Rustang, (Gwen-  
gamp) a zo bet kavet beuet en Richefort, tost da ger,  
goude bean bet tri de kollet.

Hervo-lavar ar medisin, ar plac'hik-man na oa-keñch  
awalc'h, hag o vean bet gourdrouzet gant he-mam, o  
temeraz-kaz, ha hi mont da 'n em deuret en-dour.

Arrog, e lavaraz kenavo d'he breur bihan; kenavo, emei,  
kerzh-lavar d'am mam na wela ket ac'hanon ken.

Keit ma oa he zud o klask anei e ti kerent d'e endro  
da Vousteruz, eo bet kavet ar plac'hik en ster an Treo  
krignet he c'horf dija gant al loened.

Kerant, evesaet mad ho pugale, ha dreist-holl, ma  
peuz c'hoant na rofet ket d'ac'h kalonad, roet d'e skouer  
ha kelennadurez vad.

Goulnnet, e Ti Prud'homme, levr neve hon  
mignon Kloda :

### MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'hemenn digant hon eskop breizad, an  
Aot. 'n-eskop Dubourg; unan eus ar gwella hag an du-  
diusa leorion bet skrivet e brezonek betekhan.

GOULENN-e bureo ar Groaz : Gwerziou sant Erwan, al  
Lanhuon, sant Mili, sant Koneri, hag all. Eur gwennek  
er pez.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brevin. — Imprimerie Saint-Guilhaime.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOÙ

Eur skoot ar bla evit Breiz ha Bro-Chall.  
2 skoad, evit ar broion estren evit ar Broio Keltiek.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otró VALLÉE, Renor, ru Zant-Bened, Zant-Briek.  
pe d'an Otró MOAL, Skrivanier, 27, ball Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

Tri gwennek pep arondennad-ekriver.  
(Diskenn a breiz evit meur e embann dioues-ty).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furves ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Goad ar gallek ex aio a Vreiz.  
Furves ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz so; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Ver, e vo Pec'hett!  
MILIN.

## « KROAZ AR VRETONED »

War beden bajen  
(Chouezek real dre vloz).

## AR MAB PRODIG

PEZ-C'HOARI EN TRI ARVEST

a vo displeget ar zul kenta a viz Here

### EN BOULVRIAK

en ti skol ar Preved, gant pôtrez Zant-Briek

Ar plaso a vo : ar reo goulet araog c'houec'h gwennek,  
ar reo-all daou wennek.  
Kanoùenno ha zonio fentus a vo c'hoaz ospenn.

## Skol laik, skol forset, skol 'vit netra !

Evelse 'lavare al lezen, pa oe gret breman zo eun  
toulfudik blaveziou gant ezezh kentan ar Republik. Na  
oe ket esaet gwech ebet avad lakat anei en impli da vad  
ha war he bed. Mez Mariana, o chanch pried bep seiz vla,  
a ya bepred war fallid, ha setu breman petra lavarer d'an  
dud est-bull ar véred :

« Varc'hoaz (18 a viz gwengolo) e tigor ar skol e ti ar  
skolaerien. An holl dadou ha mammou ha pennou-tiegezh-  
nik hag o deuz bugale hag int dalc'het da zével, a zo red  
d'e o c'has d'ar skol 'boue an oad a 7 vla betek an oad a  
drizek vla. Au nep na rey ket, a vo poursuet herve al  
lezen. »

— Bôn, eme Fanchi me 'meuz tri du-man hag a zo en  
oad, a dra zur, p'eo gwir unan an euz seiz, eun all an  
euz nao hag eun all unnek vla. Mez, ma fe, n'oun ket en  
sonj da gas ane o zri d'ar skol. Kaer zo laret eman 'vit  
man, paperoù, levrioù, liou, plu a ve ezom bepred, hag an  
treuz-ze na 'maent ket 'vit man. N'eo ket gwir, Pier ?

— Me 'm euz diou ive, me Bier, hag a vije mad ive  
da vont daved ar skolaerezed ; mez n'e ket c'hoaz an dis-  
pign a vo gante, ezom eo a zo ane er gêr. Eur chanfard  
hag 'ent ganfa rdez 10 vla a ra meur a dro 'barg an ti  
hag ermeaz ; rikouret a ve an nen gante ; ha neuze, n'eo  
ket awalc'h deski lenn ha skrivan, red eo ive deski labour-  
fad !

— Hag a zo gwir ! Feneant da den ar vugale da vean  
o chom ket er skol. Me wel 'merc'h ma amezek du-man,  
hag a zo o vont war he zizek vla ; aboue an oad a seiz  
vla aman-er skol ; he mam n'houlle ket da gentan e raje  
fôl ebet en ti gant aon da dizrei anei diwar he labour-skol.  
Goude, pa 'deuz gret ar plac'h he zoug fask kentan, ha  
fellas d'he mam ober d'ei labourad. Arru mad e oa : ar  
plac'hidk, marfad, a gasaz kelo d'ar skolaerezed, ha houman  
a laraz d'ar vam lezel he merc'h gant he skol, he doa kalz  
a spered, hag e halije divezetoc'h tremen he « brevet » ha  
mont ive da skolaerezed.

Breman n'intent ket ar plac'h bean komandet ken er  
gêr ; ar skolaerezed eo he mam. 'Chants, ma karjed bean  
tounet eun tam labour bennag diouti er ger ket ma oa  
er skol, ha na vann ket he lezet en tu-hont da unnek vla,  
na vije ket breman oc'h ober pinijin d'he mam.

— Ha neuze, ma c'hamarad, lar d'in hag hen eo mad  
lezel ar skolaerien, dreist-holl ar re zo breman, da gemen-  
troad kement-ze war ar vugale. N'e ket d'imp eo, da gen-  
tan, da c'houman ha da ren ane ? N'e ket d'imp e vo da  
renti kont evite ? Ma den mad, ma teuz herve da rei urz  
da gas ar vugale d'ar skol, eo, marfad, abalamour n'euz  
keu, kouls laret, a skolioù kristen.

skolioù kristen, ar gouarnamant na jache ket re war an  
nask ; breman 'rey rag c'hoant an euz da drei ar vugale  
war ar fall.

— Ma fe, me gredfe 've ar wirione ganid.

— Zur avad. Breman, eme ar frammasonn, pa n'euz  
ken a seurezed nag a fered, ar vugale holl d'ar skol, hag  
aboue 7 vla betek 13 vla ! Anzer a vo evelse da blantan  
enne hon gwall gentelioù.

— A dra zur, en 6 vla e tener abenn da skola eur  
bugel war n'euz forz petra, drunk pe vad, Zell ar re zo  
breman 'benn veint bet daou vla hag eur bla zoken gant  
ar skolaerien, pesort kanfarded e veint, an holl siou fall  
o tiwan enne.

— Ya, brao eo laret : skol laik, skol forset, skol 'vit  
netra ! — Skol vit netra ! Keroc'h e tenio ar skolioù-ze  
d'imp evit n'int bet biskoaz ? Zonjed ket nag a skolaer  
neve vo red paean, nag a skol neve vo red ledanad pe  
sevel clec'h ar skolioù kristen diskaret ; an trajoù a  
gresko c'hoaz, da laret eo, ar skol a vo keroc'h, ar skol a  
vo falloch, ha red kas d'ei ar vugale !

— Fe d'am otro person, gwelet e vo ; mez me lar ma  
re, keit ma vin heo, a yei gant o hent, ha n'e ket eun all,  
me a ziskouez an hent d'e.

— Klev 'ta ! Hep dalc' herve laret, pa vo gret an dis-  
parti etre an iliz hag ar Gouarnamant, e vo zavet en pep  
parrouz eun emgleo hunvet Association paroissiale ; etre  
holl dud ar barroù. Ar belek a vo er penn anei ; mez pep  
den an nevo eun tam en e garg miret er barroù ar fe hag  
an deskadurez vad. Eno halfomp stourm assembles, ar re  
a fell d'e zével o bugale herve ar giz koz, ar giz vad.

— Fe, na vije ket fall lakat an dud da n'em veskan  
eun tam gant eun dra a zell kement ane : ar relijion hag  
an deskadurez.

Pep-hini a welje neuze petra 'n euz d'ober ; bevoch e  
vije an dud, ha ni aman, pennou-tiegezh, a halije, evel ma  
larez stourm assembles evit ar vad, pa vijemp galvet da  
lakat bemde hon dorn el labour hag p'an ije hon gir eun  
tam pouez.

— Gwelet e vo penoz 'vo kont. Mez dreist da bep tra,  
dalc'homp da vean mestr d'hon bugale, p'eo gwir ni hon  
deuz o gant hag o maget.

— Evel a larez ! Kenavo disul !

## GOUELIOU KASTEL-PAOL

(KENDALC'H)

Al lun an 11 eus ar miz.

An devez-ze war e hed a oe laketa da zelaou preze-  
nnou ha lennadennou leun a skiant diwar benn treo a  
bouez evidont-ni Bretoned. E touez al labourioù-ze en  
em gave eul lizer skrivet e brezonek gant eur mignon mad  
da *Kroaz ar Vretoned*, an Aotrou Even, eus Landreger.

« Abaoue eun nebeut bloaveziou, eme an Aotrou Even,  
eur bern strolladoù c'hoarierien a zo bet savet e Breiz.  
Ar strolladoù-ze, avad, o deuz bevet betekten, pep-hini  
eus e du hep tam unvaniez etreze. »

Pegen talvoudus e vije unani kenetreze hon strolladoù-  
c'hoari an Aotrou Even n'an deuz ket a hoan d'e ziskouez.  
« Gant en em unani, emezan, e teufe muioc'h a nerz  
d'hon strolladoù, nebeutaet e vije ar c'houst, hag e savche  
heligenta etre ar bôtred yaouank. »

An Aotrou Even an deuz komzet c'hoaz en e lizer eus  
sevel kenstrivadegoù evit ar peziou-c'hoari, eus adober  
eur geriadur, eus sevel eur yezadur neve, eus sevel eur  
skol evit ar ganerien vrezonek.

Setu aman ar pezh a zo bet divizet war an oll boenchoù-  
ze.

1<sup>o</sup> Da gentan : An ali a roer d'an oll strolladoù-c'hoari-  
erien d'en em glevet gant an Aotrou Lajet ha Prijent,  
eus Montroulez. An daou aotrou-ma a zo o paouez sevel  
eun emgleo, e hano *Unvaniezh Yaouankiz Breiz*, da voda  
ha da unani kenetreze oll strolladoù-yaouankiz Breiz-Izel

2<sup>o</sup> Eur genstrivadeg a zo bet evit ar bloaz evit ar peziou-  
c'hoari. Prizioù a zo bet roet da daou ane ha meda-  
lennoù d'ar strolladoù-c'hoarierien. Kendalc'het e vo gant  
an hent-ze.

3<sup>o</sup> Eur yezadur neve, savet gant an Aotrou Ernault, a  
zo war ar stern. Dont a-roy er-maez eus ar wasg ac'han  
da fin ar bloavezh da den. Danvez eur geriadur-Treger a zo  
bet prientet gant an Aotrou Even.

4<sup>o</sup> An aotrou Lajet an deuz savet a Montroulez ha  
kelennet mad eul laz-kana eus ar gwellañ (klevet hon  
deuz anezan epad ar gouelioù). Reiz mad eo pôtrez al  
laz-kana-ze zoken war ar c'han gant meur a vouez, an  
diess ; dre o skouer e teufont tam-ha-tam da hec'h ha  
da esgna ar ganerien all.

Da heul an aotrou Even kalz a brezgerien-all o deus  
lavaret ive treo a bouez, dreist-oll diwar-benn stad ar  
Vretoned aet er-maez a Vreiz. Herve an enklaskerien (ha  
piz e tiskouezont bezan graet o labour) stad ar Vretoned  
ermaziet, daoust pegen uhel e vije o gopr er c'herion  
braz, a vije dalc'h-mad gwasoc'h eget e Breiz, ken evit ar  
bevanz ken evit ar vuzegaz. An aotrou Choleau an deuz  
enklasket e Jersey, er Seine hag er Seine-et-Marne ; an  
aotrou Dupouy ha Morvan, en Angers. Stad Bretoned  
Angers, dreist-oll, a zo mantras.

Komzet zo bet ive eus stad ar merc'hed yaouank e  
kalz eus hon c'herion Breiz, e lec'h e kavout konarterien  
d'o c'has da Paris. Ugent real a vez paet d'ar gouarnamen-  
t-ze dre benn merc'hed, ugent real da lakat en argoll ene  
eur gristenezh en eur gas anei, na oar den da belec'h ; war  
baveou Paris. Mar n'eo ket spontus ! Ho pet soej, mam-  
mou kristen a Vreiz-Izel, penoz ez eus e meur a ger eus  
Breiz, aman zoken e Sant-Briek, konarterien sort-ze.

Al lun da noz e oe graet *Ti Kaniri Breiz* dindan ar  
c'hoerhu. Goude m'o devoz ar varzed diudet eus ar c'henta  
ar zellerien gant o c'hanaonennou a bep sort, taer pe drist  
darn ane, ha darn-all koant pe fentus, setu hon mignon  
mad, an Aotrou Corfec o sevel war ar plenek hag o laret  
eur geriennoù bennag e brezonek diwar-benn ar bre-  
zonek. « Ar brezonek, emean, a zo hon zra, hon herez  
hag hon zenzor. Gwir hon deuz d'e zifenn, d'e viret ha d'e  
zevel hag, e lec'h e argas evel ma ve graet er skol, er  
c'hazarn ha betek en iliz, e ziski er skolioù hag er sko-  
lachoù eo a diledet da ober. Disket e ve ar zoken hag an  
almanek, yer ar Zaouan hag ar Brusianed. Daoust ha na  
dalveomp ket, ni Breiziz, an diavezidi-ze ? Sellet e ve  
ouzimp evel ouz tud dispered ha, koulskoude, gant pion  
e tigouez al lec'h kenta hag ar prizioù er studioù ma n'eo  
ket gant Bretoned (da skouer : potred skol vrezonek  
Gwengamp, ar re genta hevlene er bacalluread) ? Pion  
ive a zifenn ar gwella ar Frans ma n'e ket ar Vretoned  
gant o zoudarded hag o martoloded ? Straket e oe an  
daouarn ouz prezegen an Aotrou Corfec hag ive ouz eur  
brezegen-all kenkouls, graet gant an Aotrou Erwan Ber-  
thou. « Ni Bretoned Kevredigez Breiz, eme Verthou,  
n'omp na gwen na ru, na Bleiz na Montfort ; Ni zo  
Bretoned hag e laromp hon mam-Vro Breiz-Izel eus a  
greiz hon c'halon ; hon Bro hag hon brezonek e fell  
d'imp da zifenn betek hon huamad divreza. » Ha, m'heu  
tou, an oll er zal a oa a du gant Berthou pa stagas al laz-  
kanan, eilet gant ar binioù hag ar bombard, da ganad  
a-bouez penn ar sae *Breiz-Izel*.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

Al lun an 11 eus ar miz.

chom sennan. Gant an itron a Ruskek hon devoe ar gwella digemer, eun digemer kalonek evel e veze graet, a gav d'in, d'ar varzed-valetien en amzer goz hag, e gin barzed gwechall ive, e trugarekajomp en eur ganan. *Sao Breiz-Izel* ha *Bro Goz* ma zadou a dregennas gant ar zall-veur hag ar porz, o tihuni hekleioen n'o devoa ket klevet kement-all meur a gantvad a oa, moarvad.

En eur c'hastel-all, kastel Keryan, e oa bet prientet ar gouel savet en enor d'ar Vro ha d'ar Brezonek. En-dro da boz ar C'hastel ez eus eur sort kloastr henvel ouz hini iliz-veur Landrager, nemet frank hag ec'hon awalc'h eo da zigemer eun engroez a dad (mad e oa d'ezan bezan evel-se rag eur mor a bohl a oa). Dre eur pont-gwinta hag eun nor volzet e renker da dremen da zont ebart. Pa dremeniz an trenjou e renkis chom batet gant ar pez a welen. Eno edo en o sav dirag ma daoulagad dimezellet eus uhel hon noblans Breiz-Izel, gante gwiskamant ar Vro : gouzougennou ha koeflou lian dantelezet, seiennou livet kaer, tavancherou seiz, broziou limestra pe voutouz glaz-moug goloet a vrouderez aour hag arc'hant. Kinig a rejont d'ar varzed krampeoz gwizis ha laez, war o diweuz brezonek ar vro, ar brezonek-ze c'houek hag heson evel eur c'hian, na glever nemet e Bro-Leon. — « Ronanezed ar Vro : » emete, en eur stodi dirak. Ya, rouanezed e gwirionez, rag ar gurunen-ze a enor a zonge gwechall hon noblans Breiz pa oa eus ar Vro, stag mad ouz he yez hag he gizio, hag a oa aet diganti p'o devoa tud-jentil Breiz tost kein da Spered ar Vro, ar gurunen-ze ho pouz adkavet, merc'hed yaouank Keryan, ha lakast enez war ho pennoù a-unan gant koeflou lian Breiz-Izel ! Enor ha mil bennoz-Doue d'eo'h !!

N'eo ket an dimezellet hepken, ar aotrone ive a zo breton mad an neuz an e kastel Keryan hag ar blijadur an hoo da anaout en o zouez, dindan gwiskamant kaer Leoniz eun aotrou, yaouank a Ruskek, bet ganen gwechall e skol brezonek Sant-Charlez.

Eur brezegenn oa da vezan war ar Brezonek hag ar Vro. E brezonek e teuas gant an aotrou abad Cardinal, person Sant-Vonga. Meur a brezegenn helavar an eus klevet : hini ebet, avad, a-benn breman, n'en deuz skoet ken don em spered, gant fur, uhel, santel zoken, e oa ar gwirioneziou displeget enni, gant ledan ha freaz e oa ar yez anezi, gant leun a veurded hag a barfetegez e oa, dreist-oll, stum ar prezeger. Ma oa stum rouanezed gant an dimezellet, stum eun eskop pe eur zant gwechall a oa gant ar belek mad-ze, e gwirionez !

Gwell a ze ma vije displeget e pewar c'horn ar Vro sort prezegennou diwar-benn ar Vro hag ar brezonek gant helvien gwiziek evel an aotrou abad Cardinal. Neuze, em eus fuzians, e vije adnevezet ar Vro e berr amzer. Ezom he deuz hon Breiz-Izel da vezan evel pa lavarfen *henchet*, distolet ma 'z eo bet a-ziwar he hent gant an ankoua a zo bet graet eus e spered, gant an dismeganz a zo bet tuolet war he yez. Spered Breiz hag he yez hennez eo ar gwir vas-diazez ec'h hellfomp sevel warnan hon amzer da zont. Me hen gwel skleroc'h-sklera hag edo ar wirionez-ze o para dirag ma daoulagad kouls lavaret, keit ha ma displege an Aotrou Cardinal e brezegenn dispar. Trugare d'ezan evit ar blijadur hag ar vad an deuz graet d'in ha d'an holl !

Goude-ze, eur brezegenn-all, e brezonek ive, a deuas mad-tre gant an Aotrou Jaffrennou. Kanet e oa e brezonek *Keltia eo da vihan*, ha lodennet etre an oll zellerien bolkejou bruk, bleun broadus an oll Geltied, en arouez eus an unvaniez a die bezan etruzomp-ni Bretoned hag ar poblou-all : Ivezroniz, Keumriz, Skoziz, eus an hevelep gwad ganemp-ni hag o komz yezou henvel ouz hon brezonek. Int-i ive a labour eus o gwella da zifenn ha da derc'hel en o zav o yez hag o broadelezh.

(Da henvil). EVEL-SE BEZET GRAET.

### Enor da bôtred Peurit ha Ploezal

Pôired Peurit ar Roc'h ha re Ploezal na ehanont ket da labourer evit Doue hag ar Vro, renet mad ma 'z int, ar re ganta gant an Aotrou abad Bescond, *Ar Mignon* a zo anavezot breman ha karet ive gant oll lennerien ar Groaz vihan, an eil re gant an abad Deniel, kure Ploezal. Ros' a zo bet d'e gouel Kevredigez-Breiz e Kastel-Paol medalennon evit o labouriou, ha graet dirag an oll eur venleudi dleat mad d'ar skouer-vad a roont da Vreiz-Izel. Enor ! eze !

GOULENN e bureo ar Groaz : Gwerziou sant Erwan, al Labourer, sant Millio, sant Koneri, hag all. Eur gwennek ar 702.

## AL LEVRIOU KOZ

O levriou dispar, levriou dedius,  
Nag ez hoc'h d'in-ma kaer ha talvoudus,  
Ha frealzus... !

Na skwizan kamed o lonn, o furchal  
Ho folennou koz, melen ha tenval,  
Mes dishual !

C'honi pa oan bugel, dinorz, hep skiant,  
A lak eun c'hreiz poell ha diskamant,  
Hep nec'hamant.

Ganac'h e tiskan ar wir zantelezh,  
Skianchou ar bed evel ar furnez,  
Al levenez.

Ganac'h e tiskan karout peb tra vad :  
Doue, e Lezen, ma mam ha ma zad,  
Ma Bro ervad...

Ganac'h e welan dimeuz ma bua  
Pennadou seder, arri pell hirio,  
Siohaz ! du-ze...

Dre-ze, pa gouezan warnoc'h a greiz-holl,  
C'houi ro d'am c'halon eur blijadur foll,  
Eur vad, eun digoll !

C'honi 'barz ma spered a zigas sonjou  
Dimeuz eun amzer leun a enoriou,  
A hunvreou...

Ped gwech ouz o lenn n'am euz ket kavet  
Plijadurioù kent a zebante marvet,  
Kerkent bevet !

Ped gwech ma-unan, warnoc'h daoubleget,  
Am euz ma zrubuilhou, ma foan d'ac'h kontet,  
Ha me mantret !...

Na ped gwech ive gant ho karante,  
Ho pouz frealzet, leun a drugare,  
D'in ma luc !

O levriou koz, koz, levriou poullrennet,  
O perag eta e chomet kuzet,  
Hag ankouaet ?

O perag breman 'kemeret an tec'h  
Dirag levriou louz a zav en peb lec'h ?  
... D'e c'houi vo trec'h !

O zavet, eta, zavet ho pennoù,  
Eanoc'h eman ina, spered hon Zadou,  
O c'henteliou...

Hon zud koz drezoc'h o deuz bet furnez ;  
C'houi oa enoret en o ziegez,  
Gant peb evez.

Pegoulz e teny c'hoaz ho ren kaer dre-holl,  
Pegoulz e voungfet al levriou diroll,  
A laz an holl !

O deut levriou koz, bue zent hon Breiz,  
Bue hon Barzed, deut ha deut a-leiz,  
Bevet 'n hon c'hreiz !

Deut lutined-noz, deut kontadenno,  
Deut tud a vrezel a garas hon Bro,  
O deut en dro !

Zoniou ha gwerziou, kanet a-viskoaz,  
Gand hon c'hendadou... treo fur ha dinnoz,  
Deut ha deut c'hoaz...

Bevet en hon Bro, bevet didamall,  
Ma c'hallo ar Vad trec'h war ar Fall,  
Evel gwechall !

Mes dreist da bep tra ha dreist d'ar gallek,  
Levriou koz ha koant, mirel ho yez c'houek :  
AR BREZONEK !

Neuze ar Breizad a roio bemnoz,  
Eupad ar gouany-hir, e wellan bennoz  
D'ac'h, levriou koz !

AN YEDET.

## KERMARIA-SULARD

### Pardon

En hon bro gaer a Vreiz-Izel nan eus chomet parouz ebet a gement n'he deus ket he fardon, ha zoken pa na vo ket daou. Choazet o deus oll eur patron pe eur batronez evit o sikour en o oll ezomou hag o difon. En meur a lec'h sent bras brudet o deus bevet gwechall, hag o deus roet o hano d'ar barouz, Parouziou-all o deus choazet ar Werc'hez glorius Vari, mam Doue, evit o fatronez hag o deus eun devozion dener eviti. Choazet e ve eun devez dreist ar re-all evit enori ar patroned-ze ha zo ec'h e devez ar pardon, eun devez kaer evit an oll barouziou.

Parouz vihan Kermaria he deus hirie an enor-ze. Bean 'deus evit patroned ar Werc'hez Vari, pan eo gwir e toug e hano hag e ve pedet ar Werc'hez Vari gant an oll er Vro tro-dro dindan an hano a Itron Varia-Sulard.

Kaeran pardon ac'h e hennez !

An devez-se, daoust d'an amzer fall a ve awechou ilis neve parouz vihan Kermaria a ve leun-kouch, gant ar belerined a deu da bedi diragskeuden an Itron Varia.

An ofern brod eo kaset gant an Otro chaloni Baudour, person kanton Pontre, pelhina an eus gret eur brezegenn gaer, evit laret d'an holl pegen madeleuz ec'h e ar Werc'hez en hon c'henver. Laket o fuzians enni, rag nerzus eo he brezh ha tom he c'halon, hag e teny d'ho sikour en hoc'h oll ezomou.

Prezegenn ar belek santel a zo bet chilaouet gant an oll, ha beteg pell e vo dalc'het sonj anei en parouz Kermaria.

Ar gonsperon a oe kanet da daer eur var an ton kaer, ha goude e oe gret ar prosesion.

Na kaeran prosesion !

Ar Werc'hez Vari a oe douget en prosesion gant peder blac'h yaouank gwisket en gwen. Ar banniel bras douget gant teir all, sant Erwan douget gant pôtred yaouank, batimanchou douget gant pôtred vihan, merc'hed bihan ha merc'hed yaouank o tungen an drapouen hag o kanan oll a-gevred meulodi d'ar Werc'hez.

Efin, goude ar prosesion, e oe gret salud ar Sakramant (meulet ra vezo) ha neuse e oe avielet ar vugale vihan.

Breman, arog achui ar pennad skrid-man, e fell din lavaret trugare d'ar veleien vad o deus bet ar vadelezh da dont da zikour hon ferson, an otro Talabardon, da lidan evit ar bla pardon kaer Kermaria. Trugare dreist pep tra d'an Otro person Pontre, ar pardoner. Trugare d'an Otro Gou-ronnek, person Pleuveur-Bodou ; trugare d'an Otro Menager, person Koatreven, d'an Otro Marrec, kure Louanec, ha d'an Otro Barzie, kloarek yaouank ; oll o deus roet skoazel da gaerat ar pardon. Trugare ive d'an Otro Talabardon, hon ferson mad, a lid ar gouellou kaeran hag a ra pep tra eus e welan evit krenvad ar feiz en kalon e barouziou.

Ha c'hwil breman ive, parouziou, Kermaria ha pelerined, bet o pedi dirag skeuden ar Werc'hez, laket doun en ho kalon komzou santel ha nerzus an Otro chaloni Baudour, bet eun devozion vras evit ar Werc'hez ; hi ho tifenn, hi ho zikour en hoc'h oll droug-erion, ha, da vla, pa deuy adare devez pardon ar Werc'hez, hi hoc'h anaveo hag a gresko c'hoas da skith warnoc'h he grason Itron Varia Sulard, pedet evidomp.

L. CHARRAN.

Gouennet e ti an Aotrou Bernard, leorier e Kemper al

### Levr oferen latin ha brezonek

gant an Aotrou abad Gall ; ar gwella hini d'ar Vretoned da heuilh an ofisou.

Gouennet, e Ti Prud'homme, levr neve hon mignon Klaoda :

### MOUEZ REIER PLOUGASTELL

gant eul lizer-gourc'henn digant hon eskop breizad, an Aot. 'n eskop Dubourg ; unan eus ar gwella hag an du-diusa leoriou bet skrivet e brezonek betekhen.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Sala-Breuc. — Imprimerie Saint-Guilhaouez



405  
1912  
1907

# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 sloed, evit ar broioù estren evit ar Broioù kelteek.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLÉE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivaniere, 27, bati Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep arondennad-akruter.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann dioues-te).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek ez alo a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho prezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo; ma ve trec'hel,  
Ouspenn ar Vez, o ve Pec'hell  
MILIN.

Da zikour ober eun askel neve da « Groaz ar Vretoned ».

## AN AMZER A VREMAN A ZO EUN AMZER KRIZ EVIT FRANS HA BREIZ

WAN DON : Jesus Sateer adorabl, sellit ho pugale.

Pebez amzer, ma Doue, 'ch è an amzer vremen ;  
Gant an nec'h hag an enkreiz ma c'halon-fell rannan :  
Avel gwalam kounnaret a c'houez war ma mam-Vro,  
Och esât diswrienni gouen goz ma c'hendado.

Mevelien Lusifer a zo dichadennet,  
Dimeuz a fonz an ifern ec'h int dent war ar Bed,  
D'ober eur brezel spontuz hag en de hag en noz  
Ouz gizio kaer an Arvor, ouz yez hon zadon koz.

Dihun, dihun ! Barz yaouank, gwir vah hon Breiz-Izel ;  
Na te ive skrivagner, hastit, hastit sevel !  
D'ac'h-hu ho-taou'e roan hirie an enor  
Da difenn eur brezel-ze hon mamm vad an Arvor.

Er brezelion tremenet, hon zadou koz gwechall,  
O devoa o fennou-baz hepred d'an em diwal ;  
Mez ar brezel neve-man 'vo graet gand ar bluen ;  
Dibabet ho soudarded ha deut war an dachen.

Mar karomp, ma C'henvroiz, en em gemer er vad,  
Ni a rey d'an enebour pennon baz da lipat,  
Hag en pevar c'horn ar Franz me a vel o sevel  
Tud ganet en hon Bro-ni, a gomz yez Breiz-Izel.

Dimeuz an Havr da Varsailh, eus a Vrest da Nansi,  
C'houi a gavo, en peb lec'h, tud dimeuz hon gouen-ni ;  
En Pariz hag en Londrez, en pevar c'horn ar Bed,  
E kavfet a strolladou hon breudeur Bretoned.

Ar gwella tra da ober 'vefe eur gelaouen,  
Da gas da hep tiege, da hep keraden ;  
Komzo nerzus hon Barzed a rofe eun ere  
Da skoulma ar Vretoned an eil ouz egile,

Mar galles, o skrivagner ! dre skrido a furnez,  
Lakaat hon holl geuvroiz en eun unvaniez,  
Te a pezo gonec, Breur, ar c'hentan emgann,  
Hag eus a greiz ma c'halon e kasin d'ac'h ma c'han !

Setu Kroaz ar Vretoned gant dion askellik wena,  
O kwitit hali Charner, 'vel eur gwir gelaouen,  
Da bevar c'horn an Arvor, hi gaso kelo mad,  
Demp da wellet he Rener hag d'hen trugarekât.

Tud pinvidik an Arvor, c'houi ma c'henvroiz ker,  
Deut dre ho koumananchou da zikour hon Rener ;  
Kaset hon c'hoazik vilhan d'an dud war ar meziou,  
Doue ho pevo eun de en Palez an Nenvou.

(Da heuilh pa vezo amzer.) PENHOARN.

## TORFEJOU

N'em an ken an dora gand ar c'homzou dizoue hepken,  
arri eo breman gand an oberour. Red eo laret penoz, eur  
pennadik zo, avel an Ifern a c'houe war ar vro gand eur  
gouennar spontus. Red eo kredi penoz Kain e-unan, taolet  
gant Satan war ar bed, 'zo o redek dre hon maeziou hag  
oc'h hada dre-holl ar gasoni hag an torfed.

Pa c'heanta eur rummad tud tui, a-bouez o ine, e  
c'hall an den beva hep Doue hag al lezen gristen an torfe-  
jou stankoc'h 'vit biskoaz, testenioù hadur hag heuzuz,  
a zav dre-holl hag a zebllant laret : « Pa dec'h lezen  
Doue diwar ar bed e tes dustu hon ren... Diskarec ar  
Groz, e savo ar Gontel ! » Ha, siouaz, 'netra wiroc'h !  
Petra hon deuz gwelet en-pad eur miz 'zo pe daou ? An  
torfed oc'h heuilh an torfed, an torfed war an torfed ;  
ha ze en peb lec'h...

Eus a goste Pariz e ten war an avel eur c'helo skrijus.  
Eun tiad a bemp den, tri bugel, an tad hag ar vam, a zo  
kâd, eun devez ar beure, maro-mik ha beuzet en o gwad.  
An tad hag ar vam, pa n'hellent ken beva herve o c'hoant  
ha herve o renk pinvidik gwechall, kentoc'h evit beva  
'vel peorien, a laz, da gentan, o bugale ha, goude, en em  
laz o daou. HAG A UNAN !

A-boan eo tec'hlet diouz spered an dud spouron an  
taol-man — klasket ganin da gentan o sonjal lemmel ar  
vez diwar ma Breiz-Izel — eur c'helo ken gwaz-all a den  
d'imp diwar aochou hon Bro : eur paour kez mewierez,  
zodet gand an evach, lezet ganti he skiant vad ebarz ar  
gwin-ardant milliget, a deu, dre eur pennad kounnar, da  
laza he mam a daoliou bouc'hal war zigare e krede d'ei  
gweled an dinaol diraki... HAG A ZAOU !

N'eo ket distanet mad krizder an torfed-man, ken  
spontus, ma klevet adarre eur c'helo-all : Eur plac'h  
yaouank kollet ganti he furnez, gand an aon eus ar vez,  
a c'hoanta 'n em ampoezoni. He mam, dirag kement-man  
a fell d'ei ive lodenni gand he merc'h ha, dre ar maro,  
tec'hlet diouz ar vez a zo o vond da goueza war an tiegez.  
O diou e kemeront hag ec'h evont ar poeson. Ar vam a  
varv en eur c'houzant poanion kri ; ar verc'h, krenvoc'h  
a vae, na varv ket ; digoueat ra d'ei mond d'ar c'hlanvdi  
(d'an hospital) da barea euz he c'hoantaden zod. HAG A  
DRI !

N'an euz den amzer da gomz, da sonjal en holl dor-  
fejou ; re stank e tigoueat. Setu unan all : Daou zen,  
bet entreze komzou treuz ha divalo enpad eun devez  
labour, a den d'ar ger dre an hevelezh hent. O c'hasoni  
n'eo tam kenezet, pell ac'hane ! Unan a ziskoue e gontel  
d'egile ; egile, buhanoc'h, a dap eur vaz hag a sko war  
gein e enebour eun taol ken gwall-euzuz ma varv heman  
eun toullad enriou goude. HAG A BEVAR !

An torfed a heuilh an torfed ; n'euz ken amzer da  
zialani... War wasaat ec'h a an treo ! Eur pôtr yaouank  
dizourzi, pa na c'houl ket e dad rei d'ezan, da c'hoari e  
lampon, arc'hant ha n'an euz ket, a zailh warnan hag a  
daoliou kontel a lem digantan ar vae ! HAG A BEMP !

An torfed a ren 'vel eur roue hag a vev en hon zonez.  
Setu an diwean : Eur plac'hik dek vla — eur bugel, ma  
Doue ! — groet krouz d'ei marvad, a gav deread 'n em  
deurel 'barz eur stier, e lec'h ma oe kavet beuzet an da  
war-lerc'h... HAG A C'HOUEC'H !

C'houec'h torfed ! da laret eo hep-konta reon Pariz,  
pemb torfed digoueat en hon bro, en dro d'imp  
enpad pemb pe c'houec'h zûn !... Ma n'eo ket  
hennez !... Ha c'hoaz na fell Doue abed ! Ha c'hoaz ar  
religion gristen, a zifen ouz an den : « Munter na vi en  
neb feson, nag a gorf, nag a galon », a zo a re war an  
douar ! Petra eta e vefomp holl pa vo mouget en kalon ar  
boh doujans Doue hag ar c'hredennou kristen ? Petra a  
reno war ar bed pa vo diskaret ar c'hroazion, argaset ar  
veleien ha zerret an ilizou ? Petra ? An torfejou a zisplegen  
uheloc'h a lar d'imp : « Neuze e vo ren ar gouennar, ar  
gasoni, ar gontel hag ar vouc'hal ! » Truezus, poanious  
zoken eo skriva treo evelhen. Alaz ! red eo hen ober, ke-  
ment-man eo ar Wirione !

Goude pec'hed hon zad kentan, araok donedigez hon  
Zalver, ar bed a os eun dachen a vrezel. Dre-holl na oa  
nemed torfejou. Dre-holl Kain a laze Abel ; dre-holl ar  
gwad a ruihe hag a demze an douarou. D'eur stad ken  
truezus hon Zalver a zigasaz e lezen a Beuc'h. Ar Gasoni  
a dec'hie dirag ar Garantie, ar Gouennar dirag an Douster,  
ar Blei dirag an Oan hag ar Munter dirag an den, gwal-  
c'hel gant gwad eun Doue ha deut adarre da gâd e  
c'hened kentan ha da vezan henvel-beo ouz e Zalver !  
Hirie, goude triwac'h kant vla a evursted, goude triwac'h  
kant vla a beuc'h, an den, diskiant, kollet gantan e benn,  
a c'hoanta koneza adarre en e sklavach kentan. Ankouezet  
ha dilzeat an euz eur Zalver madaezuz ; troet an euz  
kein d'e lezen zantel hag e-lec'h kâd peuc'h, evursted,  
na gav dre-holl nemed trubuilh, poan-spered, poan-galon,  
anken ha melkoni ! Elec'h beva en karante, e vev en  
kasoni ; elec'h 'n em zouten, 'n em zikour, en em draill,  
en em laz... ha c'hoaz, paour kez dall 'zo anean, Doue  
nan eo netra, ha hep Doue e c'hall beva !

Setu ar sonjon an den war ma spered dirag an torfejou  
a zo digoueat en hon bro Breiz en ken nebeud a amzer ;  
ha seulvni e sonjan ennê, muioc'h a zo e kren ma c'halon  
pa velan eun toullad tud o c'hoantât lemmel Doue eus  
ar Bed evit lakt en e lec'h ren an den goue, ren an den  
munter... O tud milliget ! Ken aliez gwech e teufe eus  
ho keno komzou dizoue ha dife e tefe ar c'hurun koneza  
war ho teod imprevan !

O tadou ha mammoù kristen, an Dizouez he deuz  
kentelioù spontus. Evit mad ho krouadurioù, evit ho pli-  
jadur diweatoc'h, sonjet ha pouezet mad ar c'hentelioù-  
man... Talveout a reout ar hoan ! An YROAZ.

## AR MAB PRODIG

PEZ-C'HOARI EN TRI ARVEST

a vo displeget ar zul kenta a viz Here

EN BOULVRIAK

en ti skol ar Frered, gant pôtréd sant Briak

Ar plaso a vo : ar reo goulet araog c'houec'h gwennek,  
ar reo-all daou wennek.  
Kanouennou fentus a vo c'hoaz ouzspenn.

## ALUZEN EVIT AR « GROAZ » NEVE

Eur barz mignon da Groaz ar Vretoned. 20 lur.

## EVIT REI DIOUASKEL

### DA GROAZ AR VRETONED

Skoazel a zo ezom ! Hag e teuomp da bedi, en hano  
Doue ha Breiz, hon lennerien ger da rei d'emp-ni ar skoaz-  
zel-ze. Evid-se, p'o devo lennet ar Groaz ar Vretoned  
neve-man, diskouezet anezî d'o amezien, d'en em glevet  
gant da gaout koumananchou. C'houezek real e koust eur  
c'houmanant-bloaz. C'houec'h real hepken evit kaout bep  
sân, dre ar post, epad eur bloavez war e hed, eur gelaouen  
gaer evel Kroaz ar Vretoned ar zûn-man..., ha bravoc'h  
c'hoaz zoken, warni pennadou-skrid leun a alioù fur hag a  
wirioneziou kristen, a gontadennoù, a ganaouennou, a gan-  
tikou, a geleier ; pardonioù ha foarioù ar Vro, buعو sent  
Breiz, kentelioù war al labour-douar, hag all... Gwelloc'h  
gazeten eget Kroaz ar Vretoned n'oufac'h ket da gaout,  
lennerien ger, rag e lec'h bezan tra an tu-man-tu politik  
evel ar re-all, Kroaz ar Vretoned a zo distag krenn diouz  
ar bolitikerien ; ho kazeten-c'houi eo hi, da lavaret eo  
gazeten ar Vretoned kristen. DOUE HAG AR VRO he  
deuz kemeret da reolen vuez, gwestlet ma 'z eo da zifenn  
war eun dro HON FEIZ KRISTEN hag hon BRO BREIZ-  
IZEL.

Gant-se, goude en em glevet gant ho mignoned evit  
kemer koumananchou, ho pet ar vadelez da skriva war ar  
bapere-man pelloc'h ped koumanant ho peus c'hoant da  
gemer ha, da heul, hoc'h hano hag hini ho ker (hoc'h  
adres) ; neuze distagit ar bapere gant sizailh ha kasit-hi  
dre ar post, gant arc'hant ar c'houmanant pe ar c'houma-  
nanchou ho po kemeret, da vureo ar Groaz, pe, e gallek  
Bureau de Kroaz ar Vretoned, boulevard Charner,  
Saint-Brieuc.

Trugare, en arôg, en hano hon Bro garet, da gement  
lennar an devo ar vadelez da gaout d'emp koumananchou.

## FAPEREN DA ZISTAGA

Astrou Rener Kroaz ar Vretoned a zo pedet da

gas (1) \_\_\_\_\_ koumanant da (2) \_\_\_\_\_

o chom (3) \_\_\_\_\_

(1) Le kast amañ ped koumanant a gemerit.  
(2) Hag'h hano.  
(3) Hoc'h adres.

# AMZERIOU KENTA MA YONTR KOZ

Ma yontr hos, Perik al Lakez, a zo kaset gant e dud da zesk e vicher a gere e ti tonton Lan, kere ar Gokzer.

Arabad eo d'an duh yaouank, petra bennak ma 'z eo sklav ha distagellet mad o zeed en o beg, en em lezel da goueza e pech'ed ar m'ev'had koz, ar randonenned-ze a ve klevet dalc'h-mad o konta doareon an nesa, gwa-soc'h c'hoaz eo d'ezan dizoloi ha diskleria, d'an nep a gar selaou anezan, troion e gerent kamm pe digamm evel ma 'z int. — Goude an dra-ze n'ez it mui da gredi o klasken nozaout ouz brud vad ma yontr koz, Per al Lakez, an hini emoun o vont da zisplega d'eoc'h eur pennadik eus e amzer genta.

Ma yontr Per a oa enl lakez a boir en e genta amzer, yaouankik-flamm e oa c'hoaz, ha ne telle mui d'ezan lakat nemed boutecier-ler, sul, gouel, bemde, ha war an devezion all. An dra-ze na ye tamm ebet d'e gerent, tudigon paour ha diste a-ziwar ar maez. Setu perag, evit kaout eul loubou da barez Perik eus e glev'ed boutecier-ler, al Lakez bilian, dioc'h-tu ma oe echaet gantan e Baskou, a oe kaset gant e dud da zesk beza kere, d'ar Gokzer!

Tonton Lan, kere koz ar Gokzer, a oa enn denik tagnouz mearbed; mez tremen a ree dre ar vro evit eur micherouz gwiziek. Lavaret a ree d'an holl ne oa mourse chommet berr da zesk e vicher da boir yaouank ebet. « Dre c'hras Doue ha sikour sant Krispin, ma faeton ker, ne jommin berr da ober eur c'here mad eus pep den yaouank a vo fiziet canon, n'ez forz pegu hirr ec'h halffe beza e ziouskouarn! »

Hervez an doare, dioukouarn Perik al Lakez, ma yontr koz, a oa re hirr, kalz hirroc'h ha re ar c'had, demdoslik ken hirr ha re an azen! N'eo ket lavaret gant, mez tonton Lan a boaniaz bla-hanter dioc'h-tu, epad an de-goulou, war dro ar potr Per, hep ma teuz heman a benn da zesk tacha, deread awalc'h, eur c'hoz boutou ler goad bennag.

Ma yontr, roet eur fuzuilh goz d'ezan gant tonton Lan, a deu da vezan eur chasour eus an dibab.

Eur wech, koulskoude, Perik a dremenaz al lignol dre an toullou a oa great d'ezan gant Olier, ar meva braz, kostik enn hanter dousen gwechon, pe war-dro, dustu-dustu; hag e stagaz eun tamm ler, e neuboud amzer, war beg eur voutez koz e tie'henaont. Tonton Lan a oa kement a lorc'h hag a levezenn ennan, ma paez eur picherad chistr da Olier. Ma yontr na eve nemed dour, ha setu aze perag e vestr a glaskaz eun dra bennag all da ober pijador d'ezan. Ne glaskaz ket pell: a-uz d'ar siminal, a-stribilh ouz daou dach sanket en treust mogedet, e oa eur fuzuilh koz-loued, oajet a gant vlos d'an nebeuta, hag hi mervlet ha goloet a gevind. Tonton Lan ne gavaz ket gwel ebet e fuzuilh goz da roi da Berik: n'eo ket red lavaret pegu laouen e oa heman...

Tremen a ra pep tra: levezenn ken buhan hag eun devez-gloaz; hag, evit gwir, al levezenn ne badaz ket pell er Gokzer. Perik al Lakez a zeue da veza chasour mad a zevez da zevez; bemnoz e tigase d'ar gear pe gedon ha koulined, pe glajtri ha kefeleged, pe eun dra bennag all. Mez evit deski e vicher a gere... e ziouskouarn a oa kalz re hirr, am euz lavaret d'eoc'h.

Penoz ma yontr, Per al Lakez, pa grede d'ezan paka eun houc'h gouez, na bahaz nemet bezan kaset hwiiz eus ti tonton Lan.

Eun abardaez, e oe roet da Berik, goude e vern, eur re voutou da zresa. Perik a labouraz stard war o zro, mez e sperec a oa, d'ar mare-ze, o c'haloupad bro war-lerc'h eun houc'h gouez. Ar mestr hag Olier, ne oa hini ebet anez war zonz al Lakez. Heman en doa peurechuget gwriad an diou voutez an eil ouz eben, pa zavaz o youc'hai a bonz-penn: « Pant pant! ema 'n houc'h gouez d'int! Paket en deuz va zena en e vorzed; kamm eo, ha gosa ra... Ema d'int! »

Paour kez Perik, ma yontr paout! Lagad tonton Lan a gouezaz neuze war ar pe labour vras en doa penic'hearet e vicherouz yaouank, da lavaret eo, kollet kreun diou voutez.

« Kurun! eme an tagnouz koz, ar genaonek-ma 'zo guesc mad, (Doue ra vito gant sant Krispin ma faeron ker!) da lakat eun den fur da goll e benn gantan hag e sikour vad d'e-heal! »

Ken buhan an tagnouz koz a gemeraz e vinaoued hag a zankaz anezan ken don e morzed Perik ma plomme ar geal evel eur gerzen.

Perik koz a lamaz da du ar mevel braz; mez Olier, d'e d'eo, a doullaz d'ezan e vorzed all gant e vinaoued heman...

Hep ma oe red haf lavaret d'ezan, Perik a zigotaz an nor hag a zilammaz er-meaz evel eur barrad avel-dro. Disken a reaz e fuzuilh goz a-ziwar he zreust, hag e zach'ler war e gein, e lamaz kwit eus an ti, o straka kement an nor war e lerc'h, ma krenaz ar mogerion. — « Na gas ket an nor ganid! » eme tonton Lan. — « Kenavo, paeron koz; kenavo Olier, mervlet an diaoul ma 'z oc'h! Mar ho kavon eun devez bennag war ma hent, gwaz a ze evidoc'h! Me n'ho saludin ket, mez va fuzuilh goz a lavaro d'eoc'h bep a c'her! »

Penoz ma yontr, Per al Lakez, a bahaz diou c'had gant eur boled peg.

Perik al Lakez, ma yontr koz, a gerzaz gant e hent. Seiz heur hanter a oa eus an noz: an heol hanter-varo, kollet gantan e nerz hag e wrez, a ziskenne war an dremvel evit mont da gousket. An devalijon a zirede d'an daou-lamm eus ar pellder, da c'holoï broik Breiz-izel.

Ma yontr a oa chommet, etal ar sterk a red en tu d'an traou da Goad ar Blei-Du, evit gwalc'h ar goad a zirede eus e ziou vorzed. Ne oa ket echaet mad gantan en em walc'h, pa welaz eur c'had o tont a-benn d'ezan, war he fouezik... « Hag e kargaz e fuzuilh. Buhau, poult, eun tamm paper, mad ar stal! Mez kaer en doa furehat e chakoton, an eil goude egile, ne gawe na boled, na tamm ploum ebet, na draje, na tra... »

D'ar fin e tennaz er-meaz eus chakot e chupen, da heul e vouchouer, eur voutennik pek, evel ma ve gant pep kero o frota ouz e lignol. — « Pa n'ez ket gwelloc'h, emezan, eo red d'in lakat houman! »

Ar c'had, pebez mell gad! ne oa mui nemed eun ugent kammed bennag, ha c'hoaz e kendalc'he da dostaat, pik he dioukouarn, ha savet he lost besk... Pan! an tenn er-maez... hag ar holed peg a ya eon da stoka ha da blada war benn ar c'had: al loanik paour! Koulskoude muioc'h a aoun en doa eget a zrouk, ha hi troi kein d'ar chasour digalon, ha d'ar red etre ar c'had dre eur voutirigell en em gave er c'hleun.

D'ar mare-ze, eur c'had all, spontet-maro gant tron ar fuzuilh goz, a zirede er-maez euz ar c'had. Kement a diz a oa war houman, ma kersaz gant he holl nerz a benn eneb an hini genta, a oa pek war he zal, ha setu an diou c'had o ruiha o diou d'an douar, tal ouz tal, hep gallout en em zistaga.

E c'hellit kredi, ma yontr koz ne oa ket pell war-lerc'h: buhan ha buhan e tigouezaz da zispartia an diou c'had a gendalc'he da jomn tal ouz tal, evel daou daro sod o'ch en em ganna, pe daou vaout kornek o'ch en em dourtal. — Eun tolik kil dorn war gouk ar gedon hag al loened a oe laket er zach'ler da ziskwiza, goude beza tennet eun hevelep krogad.

Ma yontr Per a bren eur marc'h a Laouik koz « hag a zo mad-dispar, daoust d'ezan da vezan hoz-Noc ha dal-put.

Perik al Lakez a yeaz a-zindan an noz betek ar Pont; seizlure wrezaz an diou c'had, ha gant e seiz lur e c'hellaz kaout poult, draje ha boledou, evit eur frappadik adarre.

Antrouz vintin, o tistrei, e pakaz dustu eun toullad mad a goulined, ha klujiri a verniou; d'an deveziou war-lerc'h, e tistagaz kalz toulou mad, kenkoulz pe velloc'h c'hoaz.

Bemde, dre ma laze gedon ha koulined, bleizi ha broc'hed, e teue da binvidikad; hag eur miz a loan goude an abardaez m'en doa lavaret kenavo d'an tonton Lan ha d'e voutecier koz, (en doare m'am euz kontet d'eoc'h), Perik a brenaz eur marc'h, bet yaouank eun devez bennag emichauz; (mez pell a oa abaoe an amzer-ze, a dra zar).

Ar paour kez marc'h! Gwechall martreze e oa bet mad daoulagad ar marc'h « Laouik »; gwechall martreze n'oa ket kailharet ar bleo dindan e gof. Ar pez a c'heller da lavaret, hep aoun da goueza e gaou ebet, ez eo ma oa neuze dall-dall Laouik koz. « An dra-man ne ra torz, eme al Lakez, evel-se e welo ken skler en noz hag en de, hag ouspenn, n'am euz ket ezom da gaout aon e spontfe, ha pa deufe da dremen dindan e veg an Ankou eskernek, pe Polik kamm e-unan, Polik Kerniou hirr! Gwir eo ive, e bao a-dreav, en tu d'ar maez, a zo eun tammik « houl »; e gof a zo eun neubudik goloet a gailhar: kement-ze a zo neubud a dra, hag, evel-se er c'hiz m'ema, ma marc'h Laouik ne rey avi da laer ebet! »

Pegement e konstaz ar marc'h koz, a c'houlennit: pegement! — Holi danve ma yontr koz, pemp skoed... hag eun dousen kec'h en bleizi: marc'h mad a-walc'h, hervez ma welit, rag ar marc'h blevel-ze a jomme c'hoaz souw war e dreid, hag a rente kalz vad da Berrik al Lakez.

Ma yontr hag e varc'h « Laouik koz » o vont da chasael.

Eun devez Perik ha Laouik koz, o tistrei d'ar gear, bet o chasael, a dremene dirag eul lenn vraz, Lenn Boulgidou, a gav d'ip. Eur pebez bandennad houidi goue, krak-houidi ha kalz rumennad laboused goanv, a oa dis-

kennet war al lenn, ma c'holoent an dour.

Ma yontr koz a bahaz peg en e fuzuilh, a gargaz anezit betek ar beg... ha pan! e-kreiz al laboused. An niver brasa a nijaz kwit a denna-skol; mez eur stropad mad anezo o doa dizonet nijal, ha dizonet evit ato; ar reze, war-dro eun ugent bennag, pemp war 'n ugent pe dregont, a varve an eil goude egile, hag a jomme da zi-wada war an dour.

Neuze al Lakez a lamaz d'an douar diwar e varc'h, hag a stagaz Laouik ouz eur c'hoz trojenn lann: « Penoz ober? emezan... Ha fei, gwasc'h eget beza glebiet ne vin ket, an holl a lavar n'eo ket don al lenn... » Ha ma yontr koz da ziskwiza e zilhad a bez da bez, hag en dour ken buhan, daoust d'ar yenijen!

« Brr! emezan, pa oa set en dour betek e chink; (heigez) brr, n'eo ket re domm!... Mez petra an tanfoultr a zo o klask troidella en-dro d'am divesker evel-se, petra a zo? » Goude beza paket eun hanter-dousen krak-houidi, e teuz er-meaz gant e vriad, pouz d'ezan teuler an eil troad arok egile: peder zilien, keu teo ha morzed pep den, a oa troet-didret, skoulmet endro d'ezan, diou endro da bep gar. « Bouldachou: eme Berik, setu aze loaned a zo teo o c'ho! Klevet am euz bet, evit ar wech, e oa siliou, mellou siliou e lenn Boulgidou... n'eo ket gaou a welan. Ean tol mad am euz gret adarre; n'emman ket fall ganti! »

Pemp pe c'hwech tro-all c'hoaz a reaz da c'houde el lenn, hag, evel-se, e tennaz er-meaz eur bernad mad a houidi, ha seiz siliou warn-ugent ouspenn, eur bernad mad a gik hag a besked. « Sell ta, Laouik koz, eur c'holl eo d'id ne c'hellez ket gwelet hevelep loaned! N'oud ket krenv awalc'h d'o dougen en eur wech, na tost zoken! Allo! Red kaer e vo d'emp ober teir dro! »

Maro « Laouik koz ». Ma yontr a zistro d'e vicher genta, e ti tonton Lan an Tagnouz.

Evel-se, teir dro a oe gret! Goude an tol-ze, e teuz chakod ma yontr koz da bonneret a hanter kant skoed, war bouez eun draik bennag! Mez sionaz! Laouik koz a oa re dommet e chupen d'ezan d'an dro-ze, hag e bahaz anoued da c'houde: neuze eun dezien fall a lamaz warnan... Bezit sur, pa dremenaz ar paour kez marc'h blevel, daou zevez goude, e vestr a lenvaz eur pennadig d'ezan. « Laouik koz, ma mignon mad! breman na chasain mui, p'eo gwir en em gavan va-unan; breman ez ean en-dro daved tonton Lan, d'ar Gokzer: Red eo d'in beza kere, kenavo Laouik! »

Perik a zeuz, e neubud amzer da veza eur c'here mad: berraet e oa kalz e ziouskouarn!

« Pa lavaran d'eoc'h, eme tonton Lan an Tagnouz, gant graz Doue ha sikour sant Krispin, paeron ar ge-reourien, morse n'on chommet berr, betek hen, da zesk e vicher d'eur c'here! »

SPERN-GWEN.


## STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLÉ

En ZANT-BRIEK, boulevard National

### An Otrone VALLEE, deut war e lerc'h

Mehanikou evit al labour-douar

TEUZEREZ-HOUARN TEUZEREZ-KOUEVA



Gloerzet betekhen: 15.000 gwaokell ha 8.500 dourneres.

NA GAVER NEMET ENO: Dournered houarn-holl koulou ispisial evit ar mehanikou dre dan pe dre betrol. — Gwaskellou BOULLE d'ober jist, o vont en dro dre vins-tro ha rod-lanz.

Tronc'hered, medered, eler-brabant ha pep sort mehanikou eus ar gwella evit al labour-douar.

## GWERZET EN PEP FIZIANZ HA MARC'HAD-MAD

Sain-Brioc. — Imprimerie Saint-Guilhem.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

10 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 akored, evit ar broioù estren evit ar Broioù Keltiek.

## SKRIVANTIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLÉE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivantier, 27, bati Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pop aroudennad-ekritur.  
(Diskenn a ba evit meur a embann diou-tu).

Ar brezonek hag ar feiz.  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz.  
Sand ar gallak ez nio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, e ve Pec'hell  
MILIN.

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

Aotrou person Landreger.....	10 lur.
Yan Ar Floch.....	20 lur.
Person Tredrez.....	20 real.

Trugare, a greiz kalon, d'hon mignoned vad o deuz ar vadelez da rei dorn dre o aluzennoù ! Trugare ive d'ar re o deuz kaset koumananchou. Koumananchou vije ezom evit gallout bevan. Eun dek bennag ane a zo bet roet, war eun tol, d'an aotrou Moal, gant tud vad Boulvriak ha Coadout. Mil bennoz Doue d'an dud vad-ze ! Ha ra vo heuilhet o skouer dre-oll ! Penôz kavout c'houezek real ar c'houmanant-bloaz d'ar Groaz vraz ? En em glevet etre mignoned ha amezeien n'eus ken d'ober evit-se. Gant ar Groaz vraz ho po peadra da ober lennadegoù kaer epad nosveziou hirr ar goanv a zo o tostaat.

## Ar Vretoned a ya d'ar broioù krec'h hag ar re a chom er gêr

Poun bevan a zo etouez ar Vretoned ; kas tec'hel arog ar hoan-ze e veint c'hoaz awechou gwasoc'h tapet.  
Ar broioù krec'h ! Nag a Vreton zorc'hennet gant ar broioù krec'h ! Mez ar broioù-ze, daoust da vean e krec'h, na maent ket tostoc'h d'an heol evit ar broioù-all ; na domer ket mañoc'h enne evit er re-all, na c'honeer netra welloc'h. Paris a zo glac'haret gant klenved al langiz. Ar velisined a ro da c'hout penoz an hanter deuz ar Barizianed, benn e veint bet dek via o chom en Paris, a ve skoet gant ar c'hlenved-man, hag a varv kalz ane poatrinér.

Gwelet a ret-hu ar Breton-man, klenz e zionjod ha glaz e drem o tont d'ar gêr da glask ar yec'hed ? Kri vije goulenn digantan petra 'n euz goneet er broioù krec'h, pa man 'n e gorch'hen liou ar vizer hag ar maro ? Ha he-man-all, abalamour ma 'n euz eun tok fous-hir hag eul liviten, daoust hag heu 'n euz goneet kalz a dra ? Kollet an euz siousaz, karante e vro ha karante Doue.

Ha houman, ar plac'h yaouank-man, ken teo ha ma meud an dir war he fas, ha goulenn a refet-hu diganti petra he deuz goneet er broioù krec'h ? ... Ah ! mignoned, ma am c'hredet, klasket bepred chom er broioù traou, aman en Breiz-Izel ; n'et ket re brim war grec'h, gant an da derri ho kong.

Eur Jesuist deuz Paris, hag a zervij da dad eno da galz a Vretoned, a skrive d'imp ar zun-all penoz e oa eun drue gwelet nag a boatrinered oa du-hont etouez hon c'henvroiz ; etre dek ha daouzek a varv bep miz deuz ar re zo 'n e barrouz, hag aliez e lezont war o lerc'h bandennadou bugale ha n'o deve den da zoursial dioute.

Ar c'herent, ma 'n em zontjent, na petra na rafent ket evit stagan o bugale ouz ar gêr, o taski d'e abred eur vicher bennag ; petra na rafent ket ma sonjfont penoz ar walen a gasiz o bugale en Paris a goneo marteze warno o-unan aman en Breiz-Izel !

N'euz ket pell ec'h antreaz 'n em zi eur paour kez klasker bara ha oa ket kustum, deuz gwelet anean, da zougen ar val. Benn hon devoz koezet eur pennad, ec'h anañvez e istor : pevar bugel an evoa hag a oa tec'hed digantan an eil warlerc'h egile da vont d'ar broioù krec'h war digare gonid ; aboue meur a vlavez 'nevoa bet kelo ebred dioute, hag ar c'hlenved, ar gozni, o devoa rentet anean ken paour ma renke klask e vod.

Gant e hevar bugel, oa bet red d'ean chom d'ober ar marc'h limon en e vereri keit ma padaz e nerz, ha goude, lezel e zouar ha mont war an aluzen. Setu kollet an tad ha kollet ar vugale ! Petra devoa goneet o 'n em dispar-tian ?

Klasket eta, kerent, miret ho pugale er vro.  
Dre holl e klemmer war re nebeut a dud evit al labour a zo ; nag a vicher ive dalc'het fall gant re nebeut a vi-

cherourien ; pelec'h e zo re a doerien, re a gilvizien re a vasonerien, re a varichaled, re a varazerien ? ...

An dud yaouank, ma karfent ober ospenn eur sonj, a chomfe kalz ane er gêr, hag e rafent vad d'e o-unan, d'o zud ha d'o bro.

An dud yaouank, pa zimezont,  
Na ouzont ket petra reont,

laret e hallfed c'hoaz :

An dud yaouank o bro pa dilezont,  
Na ouzont ket petra reont.

GWENNIG.

## KANTIK AR ZOUDARD YAOUANK

Diskan.

O I - tron Va-ria an ar-me, eus a bep drong korf  
hag e - ne, di - wal-let ar Zou-dard ne-ve !  
Me manger, se - c'het ho taë-lou, di-rag Dou-  
e 'n hon fe den noumi eun ga - vo c'hoaz hon daou.

D'an noz, en hon zi daoulinet,  
D'ar zul, 'n hon iliz vinniget,  
Nag a wach hon euz-ni pedet !

Pedet Jezus hag ar Werc'hez,  
Santez Anna hon Patronez...  
Oh ! m'o fedo c'hoaz aliez !

Ya, c'hoarzet an nep a garo,  
Me zo kristen hag hen laro,  
Me oar pedi hag a bedo.

Ankouad an Doue hon c'hronas,  
Dinac'h ar Zalver hon frenas ;  
Piou hen graje mar n'eo Judas ?

Ganet war donar Breiz-Izel,  
Bro an dud gwirion ha fidel,  
Na dreizin ket ! kentoc'h mervell

Nag e ven zempl evel pep den,  
Anavadu a ran diou vamunen,  
'Zo enne nerz ha sklerijen.

Eno pa vin klanv me 'yac'ho ;  
Eno gwad Jezus am gwalc'ho,  
Eno e gorf zakr am mago.

Ha krenv ma ene, krenv ma brec'h,  
Me zavo ma fenn en pep lec'h,  
Me d'ar waperien a vo trec'h.

Ma c'halon gant he c'harante,  
Ma yaouankiz, ma oil-vuhe,  
A zo d'am bro goude Doue.

Ma teuje brezel da darzan,  
E karjen er renkou kentan  
Diskoe na ouzoun ket krennan.

Da zouten Fraus hag ar gwit feiz  
Piou a vo dreist bugale Breiz,  
Keid ha ma vo gwad en o c'hreiz ?

Eur Breizad an deuz lavaret :  
Na varver morse re abred  
Pa varver evel m'eo dleet.

Gant enor kement a gonezo  
Treseg an Nenv prim a zavo ;  
Sant Vannig o digemero.

En Nenv Bretoned a vanden,  
Zoudarded ha labourerien,  
Er gloar a reno da viken.

Evel-se bezet gret.  
A. M. D. G.

## Trugare da Bôtred Peurit !

Kaout a refet pelloc'hik eur pennad all diwar-beun Pôted Peurit e pardon Camlez, o rei melodi d'e, d'o Rener mad an aotrou abad Bescond, Mignon ker oll lennerien Kroaz ar Vretoned. Sed aman c'hoaz war ar gouel kaer a zo let e Camlez eur pennad lizer gant unan eus hon lennezed :

Ar Mignon ac'h a an treo mad gantan. Despet a ra d'in n'am e ket amzer da vont da welet e bôtred Peurit o tisplegan o feziou-c'hoari, rag an de-ze e ve ar muian a brez. En Camlez e klevan laret e oa aet mad-tre an treo gante hag o devoa graet plijadur d'an oll, o tisplegan bue Job al Lonker — unan hag an eus kalz a vrendeur ! — N'am oa ket gallet mont, mez ma zad a oa aet hag a lavare 'n'an nevoa ket gwelet, emean, c'hoarierien en tu-all d'ar re-ze !

## GOUELIOU AR VRO

Evel en Keryan. — Gouel Kerham en Camlez.

Tridal a ra ar galon gant levezon o welet gouelion seurt ma zo bet en parrouz Camlez, de pardon zant Nikolas.

Ar Brezonek, hep mar ebred, a ra burzudo.  
Gwelet ar Brezonek en Zant-Vouga, pa oe c'hoariet eno, e gouelion Kastel, Job al Lonker hag Alanik al Iouarn ! Gwelet ar Brezonek en Camlez, pemzek de tremenet, pa oe c'hoariet eno, e kerz pardon zant Nikolas, an hevelep peiz, Job al Lonker !

Pegoulez e oa bet gwelet en hon bro unvaniez a galon etre an noblans, ar veleien, hag ar bobl evel ma zo bet gwelet eno ? Red e vije furchal pell en amzerioù tremenet evit kaout seurt unvaniez etre holl vugale Vreiz, a he rank ma vijent.

Hicre, dreist-holl, pa zo ken liez a zen hag a glask, war digare politik pe all, c'honezan an tñ en pevar c'horn ar Vro, hersan ar bobl war an noblans ha war ar belek, eo eun dra souezus meurbed gwelet pobl, noblans, belek, oc'h azean kichen ha kichen evel gwechall-gosan, o isten o dorn an eil d'egile, hag o lezel da baran gant plijadur o daoulagad an eil war egile. An neventi vad-man, da hion eo dleet ? D'ar Brezonek, da laret eo da Vreiz. Noblans, belek ha pobl a deu da 'n em zantout douget an eil evit egile pa zihun ha pa grenva enne ene Breiz, ene ar Vro.

En Keryan, evel ma zo bet lavaret aman, eur belek an evoa gret eur plede en enor da Vreiz ha d'ar Brezonek ; an otro markiz a Estourbaillon, gwisket evel kourerien breton Skaer, a zo en e gichen hag a zalc'h penn d'ean da veuli ar Vro hag ar brezonek. Ar bobl, dastmet er c'hastel digoret frank d'ean gant eun dijentil c'hoaz, an aotro a Goutgoureden, a strak d'e e zaonarn, da c'hortoz ma tevio ive breman zouden da gomz dirake war an teatr ha da c'hounid ive o c'hulon hag o melodiodu, 'n eur c'hoari eur peiz kaer er yez brezonek.

Just kement-all a zo c'hoarvezet en Kerham, eur c'hastel koz deuz Camlez dalc'het gant an otro Briand, mear ar barrouz. An otro-man, gwir Vreton a di hag a galon, an evoa roet digor da Bôtred Peurit, renet gant hon mignon an otro 'n abad Bescond, da c'hoari dirag an nep a garje donet bue Job al Lonker. Bean 'oa eun niver a dud diwar ar meaz ; hanter blas hepken evit lojan an holl.

Bez' e oa da gentan an otro Pariscot, person Camlez, an otro Morice, kure Plouha, pardoner. Bean oa ive an otro Provost a Launay gant e vignoned hag ar pennou braz deuz bro Treger. An holl a oa zard ha laouen.

Da greizte, eur pred braz e oe gret er c'hastel : kant a dud a oa ouz taol, hag e zo bet strinket ano a greiz kalon da yec'hed Breiz-Izel, mam an holl Vretoned, hag a deu adarre, a c'hras Doue hag ar Werc'hez, da zastum dindan he zae wenn herminget he holl vugale unanet.

Ra deuzio mui-ouz-mui ar belek, an dijentil, ar labourer da 'n em dostad ha da 'n em garout ; ra bellafont gant heug diouz kement a glasko o dispar-tian ; ha Breiz, en amzer-man a drabuith hag a gasoui, a roo hepdale, d'ar bed-holl kaeran skouer a hallfed da welet war an douar, skouer an intent vad.

Neventi vad da Vourvriakiz! Setu diwanet ive en o zoeuz eur strollad c'hoarierien. El mad ar Vretoned an euz pozet e droad war veg tour Zant-Briak; taolet an euz bet eur zell endro d'ean, war an tier skol neve, war ar « Cercle », war ar bourek sioul elec'h ma vager c'hoaz ar peuc'h hag an intent vad, hag an euz lavaret : « Setu aman tud ha na vank d'e ken nemet eun dra : eun tam brezonek da doman, da sklerad ha da frealzi o c'h'halono a Vretoned.

Breman 'ta na vank ken netra da Vourvriakiz, rag disul hon deuz gwelet ha klevet *Pôtréd Zant-Briak* o tisplegan o c'h'entant c'hoariaden hag o c'h'entant zôn.

Eon daou c'h'ant hanter bennag a dud, kement 'vel ma lalle mont en ti ar skolaerien gristen, a oa deut da chifreo ane.

Dion glast a zervij da zil, hag eun all da leur-c'hoari. An otro Zant Briak, war eun trôn kempennet gant bruk, a zo prezidant enor ar goual, hag an otro chaloni Olliv, person, a zo o terc'hel penn d'ean er plas kentan. Eunan ive otro person Coadout, an otro Chermat, an dimezelled Hillion, an itron Manduit, ketent ar c'hoarierien yaouank, hag eur bagad tud deut zoken darn ane deuz Plijidi.

An otro 'n abad Quilgars hag an otro 'n abad Lay, an otro Mahé hag e vistri-skôl, pa 'man an devez gante, eman bepred o dorn en labour; awalc'h a zo d'ober da fichan ar c'hoarierien, da weizan papereunou ha zoniou, da bleal war an dro gant an dud a deu da zellet hag ar re a zo evit c'hoari.

Da heber eur e saver ar ridoch hag e teu war an teatr gant o gwiskamachou labour, holl c'hoarierien ar *Mab Prodig*, da ganan kan-bale potred Zant-Briak, eur vrag a gan ha dislaget mad. An dud a gemer plijadur o hanvan pep hini dioute : Yan Beskont, an tad ; J.-K. Rivoallan, ar mab hena ; Erwanik an Troadek, ar mab prodig ; Erwan ar Gô, Pharez ; Maximilian Diouren, Elias ; F. Rivoallan, Azarias ; Augustin Ar Roue, Manassez ; Yannik al Lay, ar pastor, pe ar mesaer.

Pez ar *Mab Prodig* a zo anaveet dre holl, pan eo tennet deuz an Aviel ; gret eo bet da rei da zantout d'an dud pegeu tener eo kalon eun tad ; kaer an euz ar mab prodig bean yen, ar mab hena bean dizebant ha rust, an tad a gar bepred e zaou vugel ; gortoz a ra ma tremeno d'e o driouk, hag evelse, e teu dre zousder d'e gonid o daou war an dro. Pep hini deuz ar botred yaouank an euz gret deuz e wellan evit disklerian ar gentel-man. Meulodi d'e ha trugere. Ar zoniou kanet etre pep arvest o deuz gret ive kalz a blijadur, dreist-holl, an *Ti zoul* ha *Lounh-e-Zunvez*.

*Kroaz ar Vretoned* he devoa kaset eun tonnlad zoniou hag a zo bet kavet mad ive, ar *Barizianez* dreist ar re-all.

Eur bennoz kalonek d'an otro person, an euz laket e ti-skol kristen e servij ar brezonek, o santout mad penoz ar brezonek hag ar feiz a zo breur ha c'hoar, ha gret da veyan er memez ti ; d'an otro 'n abad Quilgars, kure, a zo digor e galon evit karont pep mad, ha prest e vrec'h d'hen harpan, d'an otro Josef Olliv ha d'an otro Mahé, a ro eur c'haer a skouer d'an holl vistri kristen ha breton, ha da gement hini a ro harp en Boulvriak d'ar fe ha d'ar brezonek.

Gouelion breton a vo adarre en Keraoz disul 8 a viz here. C'hoariet e vo *Pontkalleh* ha roet prijon d'ar gwellan danserien breton, ha d'ar bravon gwiskamachon breton.

### ESKOPTI KEMPER A LEON

E LOURD 1905

gant KLAGDA (pennad kenta)

Ar veach.

Meur a Vreizad kalonek marteze a lavaro, evel m'am beuz klevet meur a hini : « Perak mont da Lourd ? » p'eo gwir hon deuz e Breiz kement a ilizon brudet gwetlet d'an Itron-Varia ? Bez' hon deuz Folgoat e Leon, Rumengol e Kerne, Gwengamp e Treger, hag all. Ze a zo gwir. Hag ar Vretoned a gar mont eno a vandennou da bedi mamm Hor Zalver. Mad kenan a reont, n'o deuz nemed kenderc'hel. Koulskoude oc'h en em ziskouez d'ar plac'hig Bernadett, ar Werc'hez he doa lavaret :

« Ama karfen gwelet ]  
Prozesionou,  
Gant pere vo klevet ]  
Kan ar c'hantikou. »

Ar Vretoned, azalek an heur genta, o deuz lakeat o foan da blijadur da « Rouanez Arvor ». Bep bloaz ez a eun niver braz anezo d'he gwelet en he c'haer e-harz menziou ar Pyrene. Tenn hag hir eo ar veach ; n'euz forz, ar Vretoned a ginnig o foan evit distro ar bec'hoaz ouz

Doue. Gouzout a reont he deuz lavaret ar Werc'hez e Lourd : « Pinijen ! Pinijen ! Pinijen ! » Da Vernadett a c'houlenne diganti petra he doa da ober, hi a respontaz : « Pedi evit ar bec'hoaz. »

Ha neuze, plijadurus eo hon lavaret, ar Vretoned e Lourd a zo evel en eur « pardon » e Breiz. O vont hag o tout kouz hag e Lourd, na glever kouz lavaret nemed kantikou brezonek. O na dudius int da glevet hor c'hantikou brezonek, pell evel-se diouz lenneier Breiz ! Na kaer int ivez, p'eo gwir, pa ganemp dirak kleuz ar garrak venijet dilennet gant Mari, an divroidi en em vade en dro d'eomp hag a c'houlenne levriou evit kana ganeomp.

Klevet a reomp bep eur mare sonjezonou ar C'h'halonek hag ar Beljed : « Ar Vretoned pa ganont n'anavezont ket kaer ar « muzul » ; hogen, kana reont gant feiz hag a greiz o c'h'ant ! Euz dudi eo o c'h'levet !

Epad va beach, meur a weach em heuz bet peadra da gaout fouge euz va bro garet Breiz-Izel, ha n'eo ket me helken, hogen ar goueradiad a yoa ganen ive a lavare : « Petra eo an dra-ze e-skoaz an dra-ma 'n dra e Breiz ? »

Eat er-mez a Vreiz, en tu-all d'an Naoned, e treuzomp kompezennou (plenennou) hir kenan, enno donar du ha na ro kouz lavaret netra. Sur a-walc'h an douar-ma a zo bet goloet a zour gwechall, rak kaout a reomp kalz a ganolion great evit digemeret an doureier. Ama, nebeud a wez, nebeud ive a geriadennou. Lavaret e va emaoamp en eur gouelec'h.

Azalek eskopti ar Roc'hel beteg Lourd, an ilizon a welomp a zo dister kenan, eun druez o gwelet ! Per, va c'h'amarad-hent, a lavare d'in : « Anad eo n'euz ket kalz a feiz dre ama. Ar c'h'ardion ganeomp-ni a zo dereatoc'h eged an ilizon-mat ! Henvel int oc'h tiez ar boukon, nemed ez euz e penn eun tammik kloc'hdi henvel a-walc'h ouz eur c'h'ud dubeud. » Ha gwir a lavare Per.

Dre ma tostaomp oc'h Bourdel, ar gwiniennou a zeu da veza kaeroc'h kaera. Hep dale na welomp mui nemed parkeier leun a vodou rezin. E meur a hini zoken e tastumed ar re zere (hao) evit ober ar gwir. Eun hanter barkerien ledan, savet war eur c'h'arr treinet gant diou vrec'h henvel awalc'h ouz ejenned, a ya hag a deu dre ar park evit digemeret ar rezin kutuilhet.

An hent-houarn a jach ac'h'hanomp dreist ar « Gironde », eur ster louz he dour evel an hini a ziruilhet diwar an hentchou braz nevez great goude ve bet eur glao braz.

Prestik goude ec'h eomp e departamant al Lann. Ma Doue, koule e vije great henvel anezan departamant ar « pin ». Epad peder heur hent-houarn na welomp nemed sabr, gwec'h pin, kignet ha staget eur podik ouz pep-hini evit digemeret ar rousin a ziver anezo. Re inouuz eo chomm da zellet onto, adao an hevelep taol-lagad ; setu perak, va mignon Kristof a lavar d'in : « Kanit 'ta eur c'h'antik brezonek ! » Dao ! hag eur c'h'antik en-dro.

Deut eo an noz warnomp eur pennad zo. Hon horolaj-godel a verk eiz heur hag eur palefarz. Lavaret a reer d'eomp emaoamp tost da Lourd ! O ! na tridal a ra va c'h'alon d'ar c'h'elouze.

#### Digouezout e Lourd.

Setu ma welomp en huel eur groaz great gant goulon. Ar groaz-ma a zo savet war eun nadoz hag he deuz nao c'h'ant hag eur metr bennag a huedled. N'eo ket diez mont beteg ar gorre. Evit dek real, eur c'h'ar chuchet gant eur fun a zibrad ac'h'hanoc'h, hag ho kas goustadik beteg an neac'h, epad ma 'z euz unan-all o tisken. Ac'h'ano, mar deo seac'h an amzer, ez euz eun taol lagad dudius war menziou brudet ar Pyrene.

Pa hon deuz gwelet ar groaz lugernus, an hevelep youc'haden a deu euz peultin an oll bserined : « Magnificat ! » Magnificat evit beza great d'eomp digouezout e kear ar Werc'hez yac'h ha dibekrez.

Eur wech diskennet e kear, kenta tra a reomp eo klask hol lojeiz. N'oa ket eun dra ziez da gaout. Unan eus hor mignoned, kustum da vont bep bloaz da Lourd, en doa skrivet diaraok evit miret d'eomp gweleou.

Pelerined Landivisiau, strollad en eur vandennig, a ya d'ar c'h'ao benniget da zaludi ar Werc'hez.

Bez' e oa eno eur maread pelerined araozomp, o kana a greiz o c'h'alon meuleunou an Itron-Varia, pep-hini e yez e vro.

Ar Vretoned a zigonez o kana ar c'h'antik gallek ken anavezet e Lourd :

Nous venons encor  
Du pays d'Arvor,  
Où le sol est dur, où le cœur est fort,  
Fiers de notre foi, notre seul trésor ;  
Nous venons du pays d'Arvor.

Goude e teu tro ar brezonek, hag e kanomp :

Rouanez Arvor, oll o saludomp,  
O Gwerc'hez dinam ennoc'h e kredomp !

Goude eur beden sioulik great gant pep-hini e goueled e galon, a-nebeudou ar belecined a va da gousket, ha n'eo ket hep ezom, rak skwiz omp.

Ar glao a gouez a zoare pa 'z eomp da iliz ar Rozera evit an oferen a zeiz heur hag ar communion. Na kaer eo, e Lourd, dreist-oll, da vare ar gommunion, klevet ar c'h'antik : Eliez euz ar Baradoz ! ... O toniou Breiz-Izel, par d'enc'h 'n'euz ket e nep leac'h-all !

Da zek heur em a oferen-bred, lidet gant kalz a veurded. Da vare ar goreou e kaner « Adoromp oll. » Na vije ket bet gallet kaout kaeroc'h evit ar gouez-se.

Pa desuomp er meaz euz an iliz, ar glao a wente atao. Nec'hiet eo an dud, hag e sonjomp : Ma kendalc'h an amzer evelhen, gwals a zo d'eomp ! Na vo ket gwell-vrag ar pelerinaj !

Ober a reer, koulskoude, ar brozesion goude lein beteg Kalyar ar Vretoned.

Ar c'h'antikou brezonek a ya en-dro, ma 'z eo eun dudi o c'h'levet. Ar gousperou a zo kanet goude war an toniou braz. N'hellan ket tremen hep lavaret eur goms diwar-benn prezegen an aotrou Marzin, person Guisney. Displega ra diraozomp an douezonou kaer an deuz roet Doue d'ar Werc'hez Vari, euz he galloud, euz he madelez e-kenver bugale Adam. Diskleria ra huel ha freaz ez eo dleour d'ezhi euz e vuez. Hi eo he deuz e viret da vont da goll, brema ez euz war-dro eur miz. Eat oa da besketa war eur vagig dister, pa eo kaset pell gant ar mor, hep gallout enebi. Tremen a reaz an noz evel-se, war var da bep mare da veza lonuket gant an tarsion a yoa deut da veza direiz. E zont hag e beden, emezan, a yez nonze d'an Itron-Varia, Sikour ar Gristenien. Da c'houlou-deiz, eur vatimant vraz, o vont da Vilbao, a welaz an dud paour — tri e oant — hag o digemeraz er bours. Lavaret a ra, en eur echiu, na elano da embann trugarez ha madelez mamm Doue, keit ha ma vo buez ennan.

O veza n'eo ker fall an amzer, na reer ket prozesion ar Zakramant, meulet ra vezo ! Kalz a dud a gerz war-zu ar pinsion, da bedi evit ar re glanv a zouber e dour ar Werc'hez.

Biskoaz, e nep leac'h all, n'em heuz gwelet pedi gant koment a feiz hag a fizians evel ma reer ama. Doujans ar bed a zo lakeat gant an oll dindan o zreiz. Pep-hini a bed hep tender evez oc'h ar pez a ra e nesa. Gwelet a reer zoken kalz o pedi, o divreac'h e kroaz. Ped gwech n'ho d'uz ket klevet ar Werc'hez ar c'h'omzou-ma : Yec'hed ar re glanv, pedi evit hor c'h'ianvourien ! Itron-Varia Lourd, roit ar pate d'hor re glanv !

Mari n'helle ket chomm bouzar oc'h pedennon ker birvidik. Eur plac'h yaouank, Mari-Renea Quélen, euz Guipavas, ha na c'h'elle mui na debri, na bale, na gwriat, en em gavaz yac'h goude heza bet soubet en dour. Klevet em heuz he deuz savet eur bonn souezus epad m'edo er pinsin. Kredi rea edot o vrazuni he c'h'orf paour. Mari Quélen he deuz, da c'h'oude, heuliet ar belecined-all en holl lidou. Enor ha bennoz d'hor Mamm vad !

Epad an deizio-ma meurbed benniget a dremenomp e Lourd, kalz a re-all o deuz kavet ar yec'hed pe, da vihana, eur wellan. An oll dud poniet a gavama frealzidigez hag eun nerez nevez evit gouzanv hep klemm kement tra ziez a zeu d'ezho, en o c'h'orf pe en o ene.

Abalamour m'eo kel louz an amzer, fenoz na vo ket a brozesion ar goulon. Mout a reomp d'hor gwele goude heza great eur weladen ziveza da Werc'hez ar c'h'ao.

Evel-se, tost da vad, e tremen deveziou ar pelerinaj.


### STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLE

En ZANT-BRIEK, boulevard National

An Otrone VALLEE, deut war e lerc'h

Mekanikou evit al labour-dour

TEUZREZ-HOUARN TEUZREZ-KOUEVR  
Mekanikou dre betrol e Gardner ar re wella ar gwella marchad.



Gwerzet betekhen : 15 000 gwaohell ha 8.500 dourmeze.

NA GAVER NEMET ENO : Doumerazed houarn-holl koufrou ispisial evit ar mekanikou dre dan pe dre betrol. — Gwaskellou BOULLE d'ober jist, o vont en dro dre vins-tro ha rod-lanz.

Trouc'herazed, mederezed, eler-brabant ha pep sort mekanikou eus ar gwella evit al labour-dour.

GWERZET EN PEP FIZIANZ HA MARCHAD-MAD

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

BOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brigge. — Imprimerie Saint-Guilhem.



# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoud, evit ar broioù estren evit ar Broioù holltek.

SKRIVANIERIEN

Kaz al labourioù pe d'an Odro VALLEE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Eriek.  
pe d'an Odro MOAL, Skrivaniere, 27, bati Charner, Zant-Eriek.

EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep skoudeunad-skritor.  
(Diskenn a huz evit meur a embann diouz-to).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gend ar gallek eo aio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek,  
Yez ar dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma va tref'het,  
Ouspenn ar Vez, o va Peche't!  
MUN.

## ALUZENNOU EVIT AB « GROAZ » NEVE

An atro chaloni Guiterel, person Gouarec. 10 lur.  
An otro Jouanno, person Plijidi. .... 10 lur.  
An otro Josse, eus Naoned. .... 10 lur.

Mil bennoz ha trugare d'hon mignoned kalonek a gen-  
dalc'h da rei harp ha skoazel d'imp da zigeri da Vreiz-  
Izel ha d'ar Fe sperejou ha kalonon ar Vretoned.

Trugare d'an otro chaloni Guiterel a gleven renti  
d'ean, dre c'heno unan-deuz e skolaerien koz, an testi  
kaer-man : D'ean oun dleour deuz an anaoudegez am euz  
deuz ma bro ha deuz ar garante am euz eviti. »

Trugare d'an otro Jouanno, person Plijidi. E garante  
evit ar brezonek brudet gant oberou kaer, a ro da anaout  
eur wech c'hoaz, e skouer d'ar Vretoned.

Trugare d'an otro Josse an euz diskouezet d'imp aboue  
an eur gentan eur galon virvidik a Vreizad.

Doze da baeo hon holl vadoberourien.

## ENOR D'HON BELEIEN!

An otro Richard, person Plendaniel, a zo bet lemet e  
hae digantan war zigare e talc'he da vrezonek ar Vro.  
Daoust da Gomb da vezan ael kwit, e kaver c'hoaz en  
hon bro tud divez ha digoustianz a-walc'h evit kender-  
c'hel gant e labour diaoulek a-eneb d'ar veleien. Mez war  
ar judozien-ze a wez o beleien evel ma werzas Judas a  
Zalver! Hag enor da veleien Breiz, a dalc'h hag a dalc'ho  
bepred da brezek e yez ar Vro, daoust da Gomb ha d'o  
gonsorted!

## GALV D'AR VARZED

(Kinniget d'an O. D. Postrev.)

Piou e ar vouez gleven gwejall,  
'Bars ar pellder,  
Hag a re d'am c'halon tridal,  
Pa gane kaer?

Sionas, ar vouez a zo lavet ;  
Joa ma c'halon!  
Pegouls c'hoas 'ta e vi klevet?  
Dihun mignon!

Dihun, rag Breiz a zo gwasket  
Gant treitourien,  
Hag e fell d'ei e ve barzed,  
'Vit he difen.

Deus 'ta, mignon, lavar eur gir,  
War da delen,  
Ha start d'ez ho c'herden dir,  
Ma kano tenn.

Ma vezo en hon ilizou  
Komzet ar Yez,  
Ha ma vezo en hon skolioù  
Doue ha Feiz.

Ha m'o devo hon bugale  
Mistri poellus,  
Pere a reio dioute  
Tud vertuzus.

Neuze Breiz a savo ha feu,  
Seder a skanv ;  
Evel ma ra ar lili gwen,  
Pa deu an hanv.

## Ar Gallek hag ar Brezonek er Skolioù

Setu peurdornet an iteier ha kozi tennet an avalo-  
douar ; poent eo kas Fanchik d'ar skol ; na vo ket ezom  
dioutan da zeri an avalo ar bla-man.

E dad a lar : Na vo ket kaset d'ar skol-man-skol, rag  
eno na zesker ket a c'hallek ; ar ganfarded a gomz bre-  
zonek etreze pa veint er porz, ha na zeskont lavaret gir  
gallek mad ebet.

Bean zo ive tadou-all, re nebeut a zo ane, hag a lavar :  
N'houlan ket penoz, war digare deski gallek, ec'h an-  
kouafe ma mab e vrezonek.

Penoz dresan an treo da c'hoant pep-hini? Red eo  
hadlaret c'hoaz ar pez a zo bet displeget ken liez a wech  
aman : Bean vije, ma karjed, skolioù etec'h ma vije  
zavet bugale barek da gomz, da lenn ha da skrivan  
brezonek, kenkouls ha da gomz, da lenn ha da skrivan  
gallek. Er c'hontrol, petra c'hoarvez an aliesan?

Ar vugale, pa deont ermeaz ar skol, a oar eun tam-  
mik gallek chas ; gont a reont lenn ar gallek hag hen  
skrivan evel ma komzont anean ; na oitout na lenn na  
skrivan ar brezonek.

Ha koulskoude, ma ouvfent an diou yez, o skrivan  
hag o lenn, me gred e vijent eun hanter desketoc'h evit  
na veint ; eun hanter, ya, ha ter gwech muioch, rag an  
nep a oar diou yez, lenn ane hag o skrivan, a zo katz  
muioch digor e spered ha kalz akwitoch evit pep tra.  
« Nep a oar diou yez a dal daou den ». Evelse 've laret.

Perag eta na glask ket an tadon hag ar mammou pin-  
vidikat ha gwella deskamant o bugale? Laret a reont :  
O! ar brezonek n'eus ket ezom anean! pebraman :  
Brezonek awalc'h a zeskont, war ze n'o deus ket ezom  
a skol!

Ze zo 'vel pa lavarje eur Parizian da vestr-skol e vad  
du-ze, en Paris : « Desket d'ean ar zaoznek ; na gomzet  
ket d'ean avad a skrivan na lenn gallek ; awalc'h a  
c'hallek e tesko, p'eo gwir eman bemde gant Gallaned. »

Ar mestr-skol, mafad, a gemerfe an tad evit eur zod ;

— « Penoz? emean. N'houllet ket e studife ho mab ar  
gallek gant aon na zeskie ket ar zaoznek? Bezet dimech,  
'n eur studian an eil hag egile war an dro, e tesko gwel-  
loc'h ane o daou. Ha neuze, p'eo gwir eo Gall, ar gallek  
a zo dleet d'ean da zeski da gentan, ha ma n'houllet ket  
e studife ar gallek, da c'honzout mad e lenn hag e skrivan,  
me na gemeran ket karg d'ober skol-all d'ean ; ka-  
set-han ganac'h d'ar ger, hag et gentan da Vro-Zaoz. »

Memez tra evelse e klefe holl vistri Breiz respont  
d'an tadon a den awechou da lavaret d'è :

« Otro, taolet plé bepred ouz ma mab gant aon e  
komzfe re a vrezonek, da noazout ouz e c'hallek. »

Red eo bean azen gorniek evit komz er c'hiz-ze ; hag  
a hent-all, bean meurbed dizablant, digar zoken en-kenver  
e vro.

« Brezonek awalc'h e tesko. » Ya, evel e dad ; bre-  
zonek brein aliez gant ar giriou gallek, brezonek henvel  
ouz ed lenn a biz-logod, ha c'hoaz, ma va henvel ar pôr  
bihan ouz e dad, na ouveo na lenn na skrivan ar bre-  
zonek-ze.

An nep na oar nemet komz eur yez, ha n'eo gonest na  
d'è lenn na d'è skrivan, na oar ket ar yez-ze ; c'houi  
etrezoeh, hag a oar komz brezonek, hep goût nag e lenn  
nag e skrivan, na anauef ket ar brezonek ; eo, evit ho  
servij hoc'h-unan, 'barz an li hag ar marc'had, 'barz ar  
park hag er foar, mezh n'hoeh ket barek d'ober hoc'h  
enoriou gentan dirag eun den ha na vo ket deuz ar vro.  
Eur yez keit na ve na skivet na lennet da vad, n'eo man  
ebet, hag an dud a gomz ar seurt yez n'int netra ganti  
dirag ar poblou-all.

Deskomp 'ta hon langach-ni da gentan, ha deskomp  
neuze al langachou-all drezan, kenver-ouz-kenver gentan.

Ra gomz ar vugale ar brezonek er skolioù ; ze na rei  
nemet vad d'è war o skol.... ma teskont war an  
dro skrivan ha lenn anean, ha ma teskont 'n em zervijout  
anean goude da zeski ar gallek.

Ha breman, petra dlefe an tadou hag ar mammou  
laret d'ar mistri ha mestrezed-skol, pan eont, er c'houlz-  
man bla, da gas d'è o bugale? Laret d'è evellen : « Otro  
pe itron, me fell d'in e vije desket d'am bugel komz,  
lenn ha skrivan brezonek ha gallek. Da gentan 'ta desket,  
d'ean lenn ha skrivan ar brezonek, ha goude, djwar ar

brezonek, hen a desko e'z ha sklér intent, komz ha skrivi  
van ar gallek. »

Ma na ve ket komzet ar brezonek nemet en porz ar  
skol, na dalv man ; mezh n'è ket eun digare da gas anean  
ermeaz ar porz, mezh da lakat anean er c'hlast, war ar  
memez renk evel ar gallek.

Kasomp ete Fanchik d'eur skol vrezonek-gallek ; ha  
ma na gavomp ket, goulennomp ma vezo gret.

DIB-NA-DOR.

## DA GROAZ VRAZ AR VRETONED

Hetou a hurr vuhe!

Kroazik, meas kwel o c'henel,  
E ti eur Gall,  
Roet d'id lod en eur c'havel,  
Ouz treid eun all.

Ha te ken gwan ha ken munud,  
O kundan,  
Ma oa ar vrud e-mesk an dud,  
N'hellfes bevan.

Mez da Vamm Breiz lakaz ennout,  
Abeurz an Nenn,  
Kement ijo hag a c'halloud  
Da donet krenv

Ma rogaz prim ar mailhurou,  
Ouz da groazel,  
Ha te 'vont war da harlochoù,  
Foei d'ar c'havel!

'Vel ra ar gwenili bihan,  
Skoniz en o nez :  
Adalek an esa kentan,  
E nijont 'mez!

Kenkent warnout ar gasoni  
'Zo deut a-red,  
'Vel ma kous eur vanden vriud,  
'N eur barkad ed.

Ha te zo chomet souu da benn,  
Kreiz ar brezel,  
Ken seder hag eur stereden,  
'Ust d'an avel.

An derv 'vit gallout d'an arne  
Reudan o c'hein,  
A zank o gwriou er mene,  
A-dreuz d'ar vein.

Ha neuze netra zo barrek  
D'o didroadan,  
Rak na reont derv ha garrek  
Nemet unan.

Kroaz Breiz-Izel, en kalono  
Ar Vretoned,  
'Te 'neus het skoulmet liammo,  
'Dorfont biken!

Er c'halono-se e kavi,  
E peb mare,  
Nerz, mar be red, da c'houzanvi  
Poan adarre.

Pe gwir ar fall a glask dispenn  
Kement 'zo mad,  
Tra red e vo d'id ober penn,  
Ha stourm dalc'had.

Biskoaz n'eus bet evel brezel  
Kernez ha bec'h,  
Evit lakat da ziskwel,  
Nerz diou vrec'h.

Bugel maget er baourente,  
Diwar ar boan,  
Hennez, eun devez, a vo kre,  
Dreist peh-unan.

Goude an tñ an aour gwitron  
'Neus ken e bar ;  
'Vit gont mar 'neus ho marc'h kalon.  
Spartlet ar c'harr !

Krazik, aboue eiz v'la ganid,  
A zo buc,  
Ha peb blavez evit seurt d'id,  
Daou a dalve.

Chetu te breman, 'vel eur goaz,  
E-kreiz da noad ;  
'N es kwazied na eo bistkoaz  
Ken tomm ar goad !

Evel eul leon me as kwel  
En em strinkan,  
Evit DOUE ha BREIZ-IZEL,  
'Kreiz, an emgann.

Enebourien ar Vro, ar Fe,  
Ewar da lerc'h,  
Dindan neuz da dolio a goue,  
Evel kazerc'h...

Evit ma chomo en dachen  
An trec'h ganid,  
'Leiz mignoned vo o tansen  
Magadur d'id.

Ja vo ket laret diouzimp-ni  
E tilezomp,  
Heb hen skouzella, an hini  
A stourm 'vidomp...

Ha breman youc'homp a bouez-penn,  
Ma roi Doue  
Nerz-kalon d'ar Groaz hon difenn,  
Ha hiir rue !!!

Gab LISKLDREY.

## BINVIO-LABOUR

Neve flamm-flimmin.

### An dennerez-patatez.

— « Sell 'ta petra welan war an *Electeur*. Emberr e labourer eun dennerez-patatez. Biskoaz kement-all ! Nan euz benvek a c'hiz neve na ve krouet en hon amzer. Ha me dent da bevar-ugent vloa bremezon, biskoas na oa dent em spered e c'helled ober ar sort binvio ! Dont a ri da welet, M.-J. » — « N'in ket da ! Na raffet ket hed ma hotez ewit mont da welet ar sort treo-ze. Me 'meuz gwelet tennan avalo-douar aliez a-walc'h ha bet poan-gein o tasm-tum ive. Honnez, moarvad, na ra ket kalz welloc'h labour ewid an aler ive. Ha neuze, n'am euz ket amzer. » — « Ewit dont betek ar SIFOL aze, el LANGOAT, betek ar park a zo a-hont dindan GASTEL-PIK. En eun aweladen e reffomp hon zro. Na vo ket red d'imp chom da roulan en hosteleria a vo eno emichanz ! » — « N'in ket, 'laran

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a jache d'e du ha  
Paris d'o hini, ha siour,  
Paris a drec'h ar !

I. — Ar garante a oa etre Penherez Kerguz ha hent-houarn neve Brest da Paris.

E oa koan oc'h achui 'barz-en ti ar Rouz koz, en binjoen Kerguz, parrouz Plouaret ; peurlipet oa ar gwadigennou hag ar c'hafe tom digaset war an dol.

— Arsa 'ta, eme unan, Paeron e hano, deuz ar C'houer-c'hed, setu badeet ar wech-man an hent-houarn, ha prest da zigemer tud evit o arc'hant.

— Et ebarz an nep a garo, 'me eun dintin, 'vidon-me a lezo ma arc'hant 'n em godel ha ma flas gant eun all, aon am ije da derri ma goue o vale ken buhan.

— Paeron, eme ar Rouz koz, petra 'teuz lavaret ? Badeet an hent-houarn ? Ya, pa vo dent ar c'hiz da vadezi an diaoulou.

— Zerr da vek, eme e hini goz, o lampad war e gomz, zerr da vek eun dro bennag gant da hent-houarn ! Tremec'houec'h miz zo, n'euz peuc'h ebed ganid na noz na de gant ar memez kont bepred. Arru eo skwiz an dud o klevet ac'hanoud. N'euz ken nemedoud ebarz ar vro da zrouk-komz dioutan.

— Saloktras, ma c'hoar, eme Jakez, ar breur-kaer ; unan a zo c'hoaz, me ma-unan aman, ha ze ra daou, n'e ket gwir, breur-kaer ?

Melanj ar Rouz, merc'h an ti ha penhrez, oa o ser-viji ar c'hafe, to d'ap dol :

d'id. Ez-to, mar keres. » — « Ma, chom er ger 'ta ! Me yel, avad, hag e koustfe pemp kwennek d'in mont er park. »

Lakat a ra ar pôtr koz e voto ler. C'houean a ra an tan war veg e gorn, hag on hent o loskel maged gant e bopulo.

Digouecet eo er park. — « C'hola H., te zo aze ive. Bean zo kalz a dud avad, kwita... ? (Ter pe beder rigennad tud a oa hed ha hed d'ar park, tro-war-zro d'an dachen a zo da dennan). Pelec'h aze eman an « onstil »-ze ? » — « Sell du-hont, er penn-all, sell ! » — « Daou vad a gezek warni, Doue d'o freservo ! (d'o miro !) Unan du hag unan bochar. Meskan a ra he zreiz a-drenv avad, an ? Evel eur yar o skrapat donar eo ac'han da welet. 'Man o tont war draon, bremezon e welin anei a-dost. Me zo ar ru beir ma gweled, kleo, H. » — « Arru oc'h koz ive. » — « Ya, arru zo pevar-ugent vloa aboc 'man ma zreiz war donar. N'o deuz ket pell da vean, zur awalc'h. Ze a zell an Otro Doue. Fe avad hag e friten gant ar c'hoant da zont da welet ar mekanik-man ! » — « Ma kleo, dudius awalc'h eo da welet. Zimpl ha striz evel ma 'z eo hag ober kenkouiz labour. » — « Te zo ar ru pell a zo ? » — « Dion dro 'meuz gwelet anei oc'h ober. » — « Bet eo chomet aman ive ? » — « Ya, aman e chom bep tro. War ar penn distip ha war ar penn krog e chom bep tol, da lemmel ha da lakat anei war he labour, diwar bouez sparl (« lenvier ») ha griko. Arru eo. » — « C'ho ! — Adverna a zo ewid an dud a zo o labourat, eme bôtr an devez, hag eun daken d'ar re all mar keront, pep-hini ewid e arc'hant. » — « Me zo well ganin chom en-dro d'an dennerez, eme ar pôtr-koz. Naon ha zec'hed am euz da houman ha n'eo ket da dreo-all. Me 'zo didonet pell a zo. N'eo ket red d'an den bean oc'h euan eur werennad a bep kamad. »

Ar pôtr koz a zo en e vleud. Eman e fri war an dennerez. An dud en em dastum, en em vod endro d'ei, evel eun tol-gwenan en-dro d'eur ween hag, evel ar gwenan, pep-hini a gân e zôn, pep-hini a lar e c'hiz, e vegad : «... Eur stern, evel d'eur ruilh. Eur rod pignon braz war an ael, eur pignon-all da danta gantan, en e veg eun ael bihan ha war benn heman, diwar bezz kammejo, peder gontel, peder loa, peder razeten skaret o dion skouarn entre beder laonen da drec'h an, da derri, da vunudi ha da ledak an douar ha da dizolo ar avalo-douar. Eur sparl (lenvier), evel d'an eler ha d'an disoulo neve, da zevel pe da loskel en donar, poez a-drenv da dere-het an dennerez en he labour, ha poez a-rôk da gompezi. Eur grig (drezen) a bep tu war benn ar mouel, en-ti diabarz da stignan ha da distignan, evel d'eun drec'hetez-ed, hag a-drenv d'ar stern, a bep-tu, eur c'hoar, a harz ar patatez hag an douar da vont da redek er park... »

Mad eo ! Achu eo adverna. Emeur o vont d'ei adarre. Tennen eo o zeier-kerc'h d'ar c'hezek. Arru eo pep-hini war e lod, da dastum. 'C'hoamp da welet labourat ar benvek. — « Diup ! Alla ! — Alla c'hardi ! » — « Alla, pe c'honite da gemer an dro. » — « C'ho ! Arru omp gant penn eur pont. » — Losket eo al lenvier (sparl) war draon, lakat a zo eur razeten (loa) pare da grigi, slignet eo ar griko. — « Diup ! — Hag ar zarelenn eo dro ken a bastrak, dre dindan ar pont ; sklabei a reont an douar hag ar patatez war o lerc'h. Hag an dud da dastum. Eun gent bennag a zo anê. « Labour vad a ra, emê ar zellerien...

— C'houi, ma sante, emei, n'ho po taken ebed ganin, ma lavaret eur gir ouспен !

— Deuz 'ta. Jakez, eme an tad, sko en taol ganin, te da vianan, pa 'teuz eun tam spered. An tamou merc'hed gwag-man eo troet o fenn dija gant ar « vapore », evel ma lavaront. Houman, ar gourliben-man, ra vank ket eur wech da vont da zaludi anean, pa dreame. Kement stratel zo er vro, a zo prest da diralen kas mont ebarz.

— Et 'zo dija unan, eme Olier Pontkorz, penher Kergoz, servijer Melani. Janedik ar Floc'h he deuz kemeret an train breman 'zo eiz de da vont da Paris, war-lerc'h eur chiminaou.

— Doue d'he bennigo, eme ar Rouz, ma vije bet merc'h d'in, am ije hi staget.

— Warlerc'h e vijec'h bet, ma zad ! eme ar benhez.

— Eur pezh ivantel evit magan ha bale feneantiz, eo an train-ze, eme Jakez, ma n'eo ket gwasoc'h c'hoaz. Kart braz ar revolution o tont war ar vro, setu ! klevet ho peuz lavaret nag a reveclzi, nag a douari a zo bet gwechall aman gant an dispac'herien ; muioc'h a reuz hag a chanchamant a vo c'hoaz, goude kement-mañ.

Ar benhez a zirollaz :

— « Chesuz, ma zontin ! C'houi pa pe bet ho taken, a lar kaojout !

— Gwir mad eo ze, eme ar Rouz koz, revolution awalc'h an euz laket dija en hon zammik-korn douar !

— Ya, 'me an hini goz ; mez n'euz o vean kiriek da ze nemed da benn kaled !

— N'an euz ket kollet, ampezonet d'in ar gwellan tam donar am oa, tarc'haet d'in e-traou seiz gween gaer a awalo, taollet eur pikol kleth en kreiz ma heurje ha ma

Ya, ya, labour vad ha labour vras ! Na van ket kalz dindan an douar. Bet a zo zellet. Re ledan eo ar poneho, ewit-se. Ewit poneho a daou-ugent pe a bemp ha daou-ugent santimele eo groot an dennerez hag ar re-man o deuz hanter-kant. » — « Na deu ket ar palufenn primm a-walc'h en-dro, eme eun all, hag e ve re a-vech war ar c'houtello. » — « Ma vije louz an douar, eme eun all, na raje ket c'hoari gaer. Gwelet a ran ar mil-skoulm o sae'han. » — « Totu eo eun tamm, eme bôtr an ti-all. » — « N'euz forz, eme egile, pa ra labour vad ; na drec'h ket eur bateezen. » — « Eur gadoar a oz ezom war-benn d'ar c'haser d'azei. » — « Te eo ar finan, eme a amezek. » —

D'achui e laran penoz eo eun dra ijinet mad. Enor d'an hini an euz iriket hag ijinet an dennerez-ze, eul labourer eus a Bleuvian, Queffleulo e hano. Ze a diskoe penoz al labourerien na vanout ket war-lerc'h gant o spered. Deut eo al lore gant Queffleulo eus a Zant-Briek ha dleet o oa d'ean ! Ar benvek a yel war wellat, war ezclat da labourat, war vrasat. Ar pezh a zo zur eo hien eo ar mestr en bro ar patatez-abred, pa ve net ha losk an douar ha hiir an de. N'an euz tu pe bevar tiegez (menoch) nemed en em glevet, en em eskoadenni (kefelata) kaout unan etre-e ha rei o zud an eil d'gile hag e reint amplek da dennan avalo-douar. Ouspenn c'houec'h ugent korden douar bemde a dennfent gant an dennerez.

Disul, mar be bolante Doue, e leufomp d'ar revelezer lin.

EUR MIGNON.

### An avalo-douar

Bean 'zo tereoneron a Vreiz hag e ve prenet enne avalo-douar da gas da Vro-Zaoz. Ar bla-man, setu petra a c'hoarvez ; en Bro-Zaoz a zo avalo-douar a vil-vern ; mez brei-nan reont kement ma klask an holl labourerien er vraz dizammen diouz o re hag o gwerzan priman m'hallont ; koulskoude kaer o deuz hastan, bagoniadou a-bez a ve brein 'ben veint ar ru en Londrez.

Ar patatez a zo breman eta kazi 'vit man en Bro-Zaoz ; mez zevel a rei, ouñ 'fad, war ar briz, pa dorro war ar werz.

Ar pezh a zo kaoz d'an avalo-douar da vean breinet kement en Bro-Zaoz, eo an douerier an euz gret eno da viz east. Tamall a r'er ive d'ar c'hiz an euz darn deuz al labourerien da viret re bell ar memez seurtjou avalo-douar 'barz ar memez douaron.

GOULENN e buceo ar Groaz : Gwerzou sant Erwan, al Labourer, sant Miliu, sant Konevi, hag all. Eur gwennek ar pezh.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon  
GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Sain-Brieuc. — Imprimerie Saint-Gillaume.

frad, kaset ac'hanon d'ober eur c'hart leo dro evit diserviji douar a oa arôg deuz toull ma dor, dispartiet ac'hanon dimeuz ma amezien. Kerguz deuz Kergoz ?... — Bah, ma zad, na glemmet ket ! ho tigoll mad ho peuz bet en arc'hant.

— Ma digoll gant arc'hant, beginodez ! Hast buhan mont da dorchan da listri ! D'ar vogale ha d'ar boerien e ve roet arc'hant ; mez eul labourer seurt gant ar Rouz koz, kant pezh aour na dalvont ket eul liard toull d'ean en skoaz e zouar ! Eur park, eur prad, gwellan douar ar vro, prenet gant ma zadiou koz ! Petra eo arc'hant da hasan madou ewelse ?

— Koulskoude, eme Baeron, ma peuz bet 700 skoed, n'eo ket eur gopr fall !

— 800 am ije roet evit miret gwerc'h ma douar ! Perag n'in ket et da charre o gweturion daonet du-ze d'az lan-neier te, Paeron !

— Zonjet d'ac'h, eme an hini goz, 'nevoa ket goulet ar penn-beuz-man kemer e arc'hant ; an evoa silapet ano gant penn ar paour kez otro-ze 'oa deut aman d'e baean. Pountan 'ren gant ar vez ! Renket am oa zeri ane 'n em fees. Heman zo eun ebeul, me lar d'oc'h, ha dre ma kosa, e sota !

— Mad sur, eme Jakez ; ewelse 'oa ober d'ar Parizian !

— C'houi 'zo meo, ma contr, eme ar benhez, ha ma zad a zo ken meo-all, pa lavaret temziou ken skwiz. Loskaet an hent-houarn elec'h ma 'man, hag et ho taou da gousket.

(Da heuilh).

DIR-NA-DOR.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro C'hall.  
2 skoed, evit ar broioù estren evit ar Broioù keltiek.

## SKRIVANTERIEZ

Kas al labourioù pe d'an Odro VALLEE, Rennes, 14 Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Odro MOAL, Skrivanter, 27, bati Chayner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep sroudenad-skrutur.  
(Distenn a breiz evit meur a embann diouez-tu).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furvez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furvez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,  
Ouspun ar Vez, e vo Pa'chall  
M.L.N.

## AN ILIZ HAG AR GOUARNAMANT

An disparti. — Penoz e vo gret? — Komzou eskibien.

Aboua ma 'man ar gouarnamant en konje, na glever ket komz nemeur dez al lezen votet er Gamb diwarben an disparti etre an Iliz hag ar gouarnamant.

Breman, pa dosta ar c'houlz evit an deputeda da zizrei d'o labour, e sav kaoz adarre dez an « disparti-ze zo da vean. »

Na houller ken hag-hen e vo gret; gret e vo, a dra zur, rag ar Senedourien na zifrenzfont ket labour an deputed; breman e c'houlenn dre holl gant entvez, ha penoz e vo gret an disparti, penoz e tigemero an Tad Zantel ar Pab lezen an disparti, pa vo zinfiet d'ean gant ar gouarnamant.

Ar gouarnamant, betek breman, a lavar da Iliz Frans, eskibien ha beleien: N'ho po ken a bab diganin mez hoc'h ilizoù hag ho presbitoarioù a chomo ganac'h. »

Kement-ze a zo skrivet, mez nan eo ket suoc'h a ze, rag ar re a deu da derri dre o fenn o-unan eun emgleo gret tremen kant via 'so etre Frans hag an Iliz, na gousto ket kalz a dra d'e, pa vo tremenet ar vot, dislaret adarre ar promesse-man. E gwirione, na fell ket zellet ouz promesseou na komzou kaer an enebourien; laret ha hallaret a reont e fell d'e kas ar relijion ermeaz a Frans; kev'lep eta penoz, ma lezont breman an ilizoù gant ar gutoùket, eo abalamour harpan o c'haoz pa deuo koulz ar vot, 'benn ar bla 'deu.

Pa 'man evelse stad an treo, setu aman petra 'vo da varn :

Ha mad e vo d'an dud a iliz, pa vo gret an disparti, digemer o ilizoù hag o presbitoarioù, peotramant leskad pep tra raktal 'etre daouarn ar gouarnamant, ha klask harp gant ar bobl, hepken, evel ma vo gallet?

D'ar Pab eo da varn, da zibab, da c'houre'hemen; da eskibien ha beleien Frans eo d'ober evel ma lavaro.

Petra etra a rey ar Pab 'barz ar pleg-man? Den na oar c'hoaz da vad; koulskoude, bean zo kelo aman ha duhont da lavaret na zigemero ket kinnig ar gouarnamant, hag e lezo gantan ar presbitoarioù hag an ilizoù, o rei urz d'ar veleien ha d'an eskibien da glask peadra da zibri, da lejan ha da oferenann, evel ma hallfont. Ar pez a ra kredi e ve gwir kement-man, eo ar c'homzou a zo bet lavaret gant meur a eskob hag a arc'heskob d'ar veleien, e-kerz ar reirejoù diwean.

Ar c'heskop Rouen, an otro Fuzet, a lavare d'e veleien na gredet ket d'ean e vije re c'hlac'haret gant an disparti ar relijion en e arc'heskopti; war eiz kant mil kristen am euz, emean, da c'houarn, ma gred e vo kavet pemp kant mil da rei bep a bevar real ar bla evit miret o beleien hag o relijion, ha kement-ze a vije awalch da vevan ha da zerc'hel zervij Doue. Komz a reaz ive dez an ilizoù hag ar presbitoarioù, hag e lavaraz d'ar veleien na vean ket en gortoz da viret ane : « Na vezomp ket sonezet, emean, ma ro d'imp ar Pab urz da gwitad pep tra-ha da vevan er vro-man evel misionerien; marteze me ma-unan, evit bizitan ma denved, e vo red d'in bevan war an hen-choù, gant eur wetur hepken da di. N'euz forz, vel ma lavaro ar Pab, e vo gret. An Iliz a vo bepred trec'h ! »

Ar c'heskob Tour, an otro Renou, hag eskibien-all c'hoaz, o deuz komzet en hevelep doare d'o beleien.

Otro arc'heskob Sens na ro ket da c'houh hag hen 'n euz e zont gret war an pez a rey ar Pab, mez eman o paouez skrivin d'e veleien euz lizer, hag e tennoomp dioutan ar c'homzou-man :

« Goude bean gouennet kuzul digant darn dez an eskibien, e sonjan kentan mad ho peuz d'ober breman da zizabenn an disparti, eo ober en pep parrouz eun enklask evit gant war be zikour, war biou ha war betra e halo ar relijion kontan divezetoc'h. »

Red eo d'ar belek mont evit ze deuz an eil ti d'egile, digeri o daoulagad d'an dud ma wellfont sklér hag anad fallagriez al lezen neva, ha goulent gant kement den an euz eur bla warnant, *patr pe blac'h, hag hen o deuz ide vad da viret er Vro an Iliz katolik, da rei zikour 'eit ma vo gret he ofisoù, da zarempead an iliz hag ar zakramanchou. Skrivin a refet gant evez war eur levr, hano hag adres kement hini an evo gret d'ac'h ar promesseou-man, hag e kasfet d'in ar roll ane 'benn an de kentan*

a viz kerla. »  
Forz petra a c'hoarveo, kri eo zontal er gasoni diremed a zo breman enep pep mad. Na vank ket d'imp beañ tapet en berrij gant an enebourien. Da bep-hini d'ober o zont evit gallout respont pa deufar da c'houlen digantan : A be tu hoc'h?

Mez ma teu da wir an treo fall a diouganer, ni holl Bretoned, en em glevio raktal, en em vodo endro d'hon beleien ha d'hon eskob, rag ni oar mad penoz ar fe hag ar relijion eo kentan mad eur vro. Keit ma vefomp mestri d'hon arc'hant ha meste d'hon c'hamanejoù, ni a oueva miret ar zui, an oferen, ar zakramanchou, darempred bepred an iliz, rag en hon bro hi na goueo biken...  
DIR-NA-DOR.

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

An aotrou kont a Laigue.	10 lur.
An aotrou abad Le Clerc.	10 lur.
« Dihunamb » d'he c'hoar gosan « Kroaz ar Vretoned ».	20 real.
An dimezel Mari-Ann Pouliquen, Landivizio.	20 real.
An itron Paol Grall, Landivizio.	20 real.
Aotrou person Ploumillio.	2 skoed.
Aotrou person Runan.	8 real.
An aotrou abad Deniel.	4 real.
An aotrou Even, Landreger.	4 real.

Trugare, a-greiz kalon, d'an oll vignoned o deuz ar vadelez da rei skoaell! Ouspun aluzennoù, darn ané, evel hon c'henskrivagner mad Klaoda, a gas koumananchou, dastumet gant hini ha hini digant o amezeien; darn-all a goumanant o merourien hag o micherourien. Trugarekaat a dleomp dreist-oll, e-touez ar re-man, an aotrou Huon a Benanster, eus Lannuon, an itron hag an aotrou Vallee eus Benac'h. Lizerou a deu ive a bep tu da rei d'imp kalon d'al labour. Setu petra a skriv d'imp an aotrou ehaloni Guittarel, an euz graet kement, dre e ganfikou, da vega e kalon ar Vretoned karante Breiz a-unan gant karante Doue.

« Eun ober-mad eo ho Kroaz hag eun ober-mad euz ar gwella ! »

Pad eo, kousto pe gousto, e tenfomp, ni Bretoned, da gouez stad eus hon hano a Vretoned. Setu ar re disket ac'hanomp o tihuni tam-ha-tam; ar bobl, avad, a chom dizabllant c'hoaz, hag a lusk mui-ouz-mui da vean henvel ouz an dud-ze a gomz Brizeux ané er werzen-man :

Des barbares sans foi, sans cœur, sans espérance !  
Barbarez dife, digalon ha dispi !

Ar barz mad Loeiz Herrieu, gant e vignon an aotrou Médac, an euz savet a Bro-Wened eur gazetennik, *Dihunamb*, gweslet da Zoue ha d'ar Vro evel hon *C'hoaz*, hag a ra eul labour eus ar gwella en dro d'ez. Setu aman al bez kaer a zo bet kaset gant renerien *Dihunamb* da renerien *Kroaz* a-unan gant eun aluzen vadeleuz.

Magnon a garante.

Gant eur blijadur vraz hon euz gwellet ha lennet « Kroaz ar Vretoned » gant he diwaskel. Arri e ganimp evel eur weniñ, he diwaskel digor ganti hag e teu da gas d'imp brud vad al labour dispar a ret du-hont e Bro Sant-Briek.

Gourc'hemennou ! Brao e meurbed ho *Kroaz* neve, ha eur e plijo da Vreizis eus ho kornad bro.

Evit sikour he c'hoar gosan da nijal, *Dihunamb* a gas d'ez hirio ngent pluz a real.

Lakaet hon euz eur pennadik skrid en niveren-man a *Dihunamb* evit goulent digant hon lennerien binvidik o zikour.

Bete vreman, *Dihunamb* ac'h a mad an treo ganti. Labouromp, eta, gant kalon; ar Vreiziz a zihuno tammik-ha-tammik. Gwellet a reomp dija ar greun hon dens hadet o kelid, ha, mar karomp kerzet dalc'hmad, dorn-ouzdorn, marteze Doue a rey ar c'hras d'imp aróg mervel da eosti lod eus an trevajoù hon dez hadet.

Kenavo, mignoned ker. Ra vefet bepred, gant ho labour gredus (teun a zel) dindan gward sent hon bro ha kredet e karante donjanus ho taou vignon.

Loeiz Herrieu ha A. Mellac.

Hon gwella bennoz-Doue a gasomp ive d'ar veleien vad o dens bet ar vadelez da rei eun digemer ken kalonek da Dir-Na-Dor ! Kenderc'hel a rey heman da vechi evit hon *C'hoaz* ha da zastum koumananchou. Kant hanter-kant hon dez breman; kement-all a vije red da gavout c'hoaz evit gallout staga da vad gant al labour.

## Eur gozeaden diwar-benn an Here

An otro Doue, eme ar Skritur zakr, a lakeas an den e lioz an evurasted, ewit labourat. An den, eme-Hi, a zo gret ewit poañal evel m'eo gret an eva ewit nijal. — « Ouz c'houezen da dal, e c'hoeni da vara, a laras an Otro Doue da Alan ». Hag « ar gwellan bara da zibri, heve hon zud koz, a ve gouezet o c'houezi (c'houezan). »

Poan war dro an douar, poan o hadan, poan o tastum ! « O hadan e-leiz a velkoni. Joasted e-kreiz ar boan o vedi ! »

« N'eur gerzet e tofont war an ero  
Panoado had, gletiet gand daero.  
Laoen, avad, e listroont deuz o farko,  
Sanno taskado d'aro war lein o chouko. »

Setu doare an tieien (labourerien). Bec'h-ha-bec'h ma ve eel eun est er c'hrigoel (zouet) e ve ar c'houls da hadan danve eun all. Eun tammig gozeaden herie diwarben an HERE ! Fell a ra d'ac'h knout eun est kaer ? Tizra a zo red : *douar blod ha temz frank, had a-dar-c'ha-vad ha net, labour vad.*

Douar blod ha temz frank.

Ar jouchenno-ed a dle bean indonet (difonset) mad ha labourer beteg ar prii, an douan ma vo gallet, d'an treo-hann, ewit divaderi al louzoù, ma na chomoint ket war hent an ed na da dibri o zell. D'an douar-hann e tenzer ewid daou via. An traozo-ze na reont forz pege-mat a demz. Vore'h, heriek int warnan. Riskl a-bed na zo ewite da gonean. Na gemeroint nemed ar pez a rey vad d'e. Ar purrest a lezoint gand an ed.

D'ar rag-est, ar c'hentan eo ar gwellan ober torr-est er jouchenno-ed. N'euz ket welloc'h da lae'han al louzo, da vreinan an douar. Eun hanter-teillad a dal an torr-est. An ed a gavo, d'ar c'houls, eur gwelc blod ha brao. War-lerc'h an diaoul, e ten an dumporel da digas teil d'ar jouchenno-gwiniz. Eun hanter-teillad mad a ve fotet war ar goullo gret gand ivino an diaoul-houarn. An demz a grog dustu, en em vesk gand an douar ha na vo ket diwateoc'h o loskat en-dro da wrion an ed, nag o kleuzi. D'ar reo gwenn ha d'ar skorn da grigi enne. N'eo ket an teil kosan eo a blij ar muian d'an douar. Muioch dinerez eo. An' teil yaouankan, beteg ma ve gret, eo e hotr. An teil e c'hoari gantan evel gand an den, beran a ra e nerz dre e wazioù, dre ma koz.

« Perag emeo'h, eun hanter-teillad ? Tremen ma jouchenno gand eun dar-govad ? Laret e vo koulskoude : « Euz miz Here (Here) teillet kaer hag ho po. Aret a-dreuz, aret a-hed, teimzet kaer hag ho po ed. » — Ac'hanta, e larin d'ac'h, n'ho poa ket temzet ewid daou via d'an treo-hann ? N'oc'h ket o paouez da rei eun hanter-teillad ?

A-walc'h a deil ! Diwar re-oll e savfe gwiniz bla o diouar, fall war o barlocho. Gwiniz hag a gouefe abred ha na rofe nemed greun skoanet, chulet, moan-moan.

Eun tamm « phosphate » avad a rafed vad war an teil-ze. — « Ya, avad, a koz fard » end-eeun ! » — Grot eun esa da velet. « Neb na riskl netis, na koll na gonid ne ra ». Mar laket ed gand an haderez, aret ho touar eun toullad deio aróg, d'en em stadan, dreist-oll, mar garu eur bannac'hig glao. Hadet ar « phosphate » (tri pe bevar c'hant a bep devez-arat) eun de bennag aróg an ed, tremenet an egejo dreizan d'e veskan gant... hadet war an tol, o hadfet al Indu gande. Ar « phosphate » herve, a rey d'ar gwiniz sevel nannoc'h hag e

vo krenvoc'h da zifonn ouz ar riu ; a rey d'ean brankan d'an neve-amzer, daroi (darevi) plenoc'h, braoc'h ha buhanoc'h pa denio tomder an haav.

Eun tamm « nitrate de soude » neuze gand an neve-amzer, aróg an tramiñho ha selu tomzet mat ganac'h d'hoec'h ed.

Groot eun esa war park pe bark ewid ar bla, ha, da vla, mar kavet e talv ar boan, e refet d'hoec'h oll jouzhenno-gwiniz.

An ed abred eo ar mestr. Nebetoc'h a had a yz ive pa lakeer abred. Ar pemzek de diwean deuz ar miz-man, eman ar gwellan kouls (mare) da lakat kerc'h, hag ar gwiniz, eur pemzek de bennag goude, d'achui war-benn fin miz Du.

#### Had net hag a-darc'ha-vad.

Eun tiek en e hano, eun tiek mad, na had tamm ed a-bed hep bean bet tremenet dre greurio eun aozerez pe sur, wenterez da dennan al louzon, (n'eo ket ar boan o hadan) hag an had hanteret, moan, skoanet, skwaset, gwasket, skotet. Abred ec'h afe an had-ze en hent, eur wech diwanet. Ar peur-rest deuz an had-fall, mar man, a zavo war var an dour-vitriol, hag a vo tennet gand an dorn, evel ar c'heilhon (ar c'heilhen) beuet, diwar al laez. Tamm ed a-bed ive na die mont en dour hep bean bet vitriollet, da lac'han ar c'horbon (duot, luheden) da harz ar gwiniz da wannaat, da femelezi. Me gred ive penoz ar priedet hag ar brini n'ont ket ken heriek war an ed vitriollet. Stambouc'hi, ratouzi a reont abred.

Ar seurtjou, ar gouennou gwellan da hadan en dour labourer, temzet mat ha pinvik, eo ar re estren, re ar broio-all, hag a zo bet deut da-vad er vro-man. « Diouz ar frenz e ve anvet eur ween ». An ed da werzan ha d'implian er ger a heller meskan ha bastardi. An eil ouen a wella eben.

Ar had ar vro a zo mad awalc'h ewid an dour divalo, an dour paour.

Bep daou pe dri bla, d'an hirran, e flier trokan had, Had an dour-ge-re ar gwellan dibab,

#### Labour vad.

Ec'h comp d'achui, evelkent! Neuz forz penoz e ve lakat an here, pe war ar plen (evel ar c'herc'h, a-wecho) pe gand an haderez, pe gand ar skraperez (griffo), pe gand ar palio, an dour a fell d'ean bean troet mad, n'eo ket hanter-droet, genou ar bommon (an tolio) dour disro war groec'h da c'houl glao ; chouk, jouchet an eil bomm (bl) ouz egile, n'eo ket eur rouden-blanch kreis-tre pep hini ; aret don, ma kavo ar gwrio donar net ha blod ; aret plen, n'eo ket a-bik hag a-bik, lipen war lapen. Netra viloc'h ewid eur park kalmaç'het, bigagnet, turniet, kourz eo laret, evel gand eur bagad otrone divinell, tapet kleuz digor gant, da redek.

An dour a ve lezet eun tamm gronz da veskan gand an ogejo, d'an neve-amzer, dia freskat o gwede d'an treo. Achu eo ho labour, tiek kristen. Groot eo gand kalz a gonst, a reuz hag a evez. Bet dinec'h : « En em zikouret » oc'h hag « an otro Doue ho sikouro. » Labour, temz ha had ho peuz roet, goude bean goulet bennoz an otro Doue warne bep beure die ho pedenno hag en eur lakat zin ar groaz en ho kerc'hen, arók krigi en ho pinvio, rag goût a

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a jachs d'eo du ha Paris a jachs ha souaz Paris a droc'har!

### I. — Ar garante a oa etre Penhorez Kerguz ha Hent-houarn neve Brest da Paris.

— C'houi 'zo meo, ma contr, eme ar benherez, ha ma zad a zo ken meo-all, pa lavaret temzion ken-skyriz ; loskaet an hent-houarn elec'h ma 'man, hag et ho taou da gousket ! ..

— 'M euz ket lavaret d'id, eme an tad, bean gant da labour !

— Tofet ple mad, ma nizez, eme Paeron, eman ho kamarad Olier aman ouz ma c'hoste, ha heman, kenne beut, na blij ket d'ean hoc'h hent-houarn neve !

— Eun tol-chans a vije, eme Olier, e rofen ma arc'hant d'ean 'vit an deio. Koulskoude na 'm euz ket lavaret c'hoaz na gir divezan diwar e benn.

— Lar 'ta 'teuz aon da zispiljou d'ar plac'h yaouank-man ; disul te donce na vije biken arru da dreid ennau !

— Awalc'h war ar gaoz-ze, eme an hini goz. War ze adarre, pep hini rei 'vel a garo.

Zevel a rejod dionz taol, ha na zalezet ket pep hini da vont war e du. Olier a glaskaz Melani da laret d'eo kenavo ; mez eun tammik he devoa bet 'n em gemeret, hag e oa et da gousket.

Tapout a reaz eta hent ar ger, kazi 'vel enkreuz en e galon. Al loar a oa skler hag an ne digoumoul ; krapad a reaz gant taroz an hent-houarn, elec'h ma oa gwechall

ret penoz « an hini a blant hag a doura a zo nebeud a dra » mar na den an otro Doue da lakat an treo da golidan, da ziwan ha da greski ; roet ho peuz ho poan hag ho labour, mad eo ! Krommet ha daoubled oc'h bet war an ero, 'kerz an here, pizennet ar c'houezon war ho tal hag an daoro war ho fiojod ; e-kerz an est ho tremm, ho penn a vo zard ha laouen hag ho kalon leun a anondegez vad da Zoue, o tigas war ho leur kargo mat hag aliez !

« N'eur gerzet e tolet war an ero Panerado had, glebiet gand daero. Laouen, avad, e tistrefet vad ho parko, Sammo teskado doro war tein ho chouko.

Ken ewid an deio.

EUR MIGNON.

## RA VEVO AR GROAZ!

Setu ar youc'haleu zantel a doeh eus kalon gristen tudou Kallak dirag an taol heuzus groot da groaz hon Zalver, gand eur Parizian dizro d'ar vro. An otro-man, hanvet Manac'h — evit e vez marvad — na gavaz netra well, tremen eiz de aboue dimerec'her, (11 here), evit 'n em lakat ouz eur Groaz douget da di eun den maro gand Per Ropartz, Kement-man a zo spontuz! ha red eo, en gwirione, bezan evel ar Manac'h, eun distoladen a Bariz, evid ober komend-all ! ..

Ar wirione a oa ganin pa laren em fennad diwean « Torfejou » e oa breman an dorn gand an oberon fall. Kaer 'n euz an den gwelet troioz divalo, na sonjfed biken e vije kad en hon-Breiz-Jez, Bro gristen dreist-holl, tud digalon, dizoue a-walc'h evit sailha war eur Groaz, he lemmel digand eun den all hag he zeurel e-barz eun doule, en-touez ar fank hag al loustoni ; ha ze, en eur douat Doue, en eur vallozi evel eun den diaoulek ha diskiant. Ac'hanta, ar Manac'h an euz kredet ober an taol-ze ha goapaat c'hoaz neh a zifenne ar Groaz eber d'ean. Na oa ket a-walc'h d'ezan zoken he zeurel 'barz ar pri, e c'hoantae c'hoaz he hadkemer evit he skei goude e-barz ar prad. Gwell a ze, Per ar Barz, buhanoc'h evitan, he zapaz hag ar Manac'h fuloret neuze, a zailhaz war he zroad hep galloud hen terri ! ..

Dirag eun dra ken spontuz kalon ar c'hriste a chom mantret ha, ma Doue, pedra a zo da vezan! Soujal awalc'h a reer e c'hall eun den, bet en Pariz o koll e dammik fe, 'n em ankoaz beteg laret ouz Doue, ar relijion, ar veleion kement fallente a zo ; galloud a ra zoken diskwel d'an holl skouerion eus ar fallan hep na raio den kolz a zebiant outan. . . « Bet eo en Pariz, e vo laret. . . An darnvujan euz ar Barizianed dizro d'ar vro, a vev evel chas ; na gredont na da Zoue, na da ziaou! Eur wech o deve groot o foloten en Pariz, e teout aman da bourmen o c'hof braz ha larv ha da ziskwel d'eo c'henvroz e ve mouget enné o skiant hag o anoudegez-vad gand ar blonek ! .. » Mes, etre laret tro ha diskwel skouerion evelse ha flastra eur groaz diulan an treid, goude bezan he diframmet digand eun den all, a zo eun dishenvelidigez vraz. Laret a refet d'in nan euz nemed eur gammel etre komzou hag oberon dife. An dra a zo gwir! Evelkent na oa

an hent-karr hag ar wenojen da vont deuz a Gerguz da Gergoz. Pa eo zavet war c'horre, e chomaz 'n e zav da zellat. Al linen, 'vel diou neuden houarn dibonet war o hed war an dour, a lugerne ouz golo al loar, hag a yec da guzan he fenn en daou du e kreiz an denvalijen. Na oa enni na pleg, na krec'h, na skoael, eim ha plen evel eun dól, d'ar c'harr-tap da redek warni hep skoilh na diezamant. Aman e tremene 'uz d'ar vilajen ; pelloc'h e toule ar rec'hel hag ar mene ; bepred ec'h e eim ha kompez gant he hent, na vean netra da harz outi, na roz, na saouen.

Olier a oa diezet e spered gant an dra-ze. Iskiz e kave gwelet eun dieveziad e tout er vro ken digabestr, hag o pleustran pep tra diudanan en eur lavaret : Me da gentan ! Daoust pesot a vad a vo gwelet o tout gant eur baloer ken rok ha ken faez ?

Pa dremen en eur drouz hag en eur c'honitellad, e seblant war an dro gourdrouz ha gopad.

Olier a ziskennaz en tu-all d'ar c'hleun, tenval e zonzjou. Setu darn deuz an dud n'hallent ket lavaret kaer awalc'h deuz ar gavaden neve ; darn-all a daole mein ganti ha malloziou ; ar vugale hag ar merec'hed a oa mall gante bean douget ebarz ar « vapeur », evel er pardonio, war ar gazek-vezeven.

'N em lakat a reaz da zonzjal ar Janedik Ar Floc'h, hag ac'hano, en Melani ar Rouz, hag er c'homzou he devoa lavaret diragan ; pan arruaz e toull dor e di, e teuz gantan krenv ar c'homzou-man : Arabad e ve gortoz re bell ; aróg daon viz, ni 'vo dimezet, gant aon petra c'hoarvezfe. »

Ar penher a lezaz da dremen eun nebeud deveziou ; abenn eur miz bennag goude eur beure en eur zovel, e

bet gwelet biskoaz, en hon bro, c'hoaz eur wech, den abed, na Parizian, na Breizad, oc'h ober ar gammel-ze, biskoaz na oa sonjet e leuje en kalon den abed c'hoantadennou ken diaoulek ! Ar Manac'h, eur ingal eus Kallak, badezet an iliz Doue, groot gantan, evel pob-unan, e Bask-kentan en iliz e vdeziad, an euz kredet ober ar pez n'an euz c'hoaz groot den beteg breman en hon bro gristen. Yen ha didre evel eul loen goue, en euz flastret kroaz e Zalver ; ar gouar en e galon hag he fuloret evel ar c'hil klav, an euz groot d'ez komend diamegan a oufe lezan groot d'eun dra ken zalc' . . . Foe! ha mez warnant !

Da biou, koulskoude, en dleout eus ar bannac'hik heol madeleuz a-bar wannan bende? Ploa an euz roet d'ezan an tammik yec'hed, an tammik nerz a impli ken fall da vallozi ar Groaz? Ploa an euz roet d'ezan gand e dammik galloud distar, ar pinvidigezou, an ti kerc'h hag an donarou an euz lirie? Da biou eo an neudennik bue a ra d'ezan beva ken diehant en-touez oberon dispar ar c'houer, hep Hen meuli nag Hen karout? Da biou? Da Zoue a Grouer, e Zalver ha . . . sioaz d'ezan, ma na gar diwall, e Vanner! Ha pa goro Doue, ar baunehik heol, ar yec'hed, an nerz, ar galloud, ar pinvidigezou, an ti kerc'h, an dourou, an neudennik bue, a vo lemmet diganton buhan ha disonj, buhanoc'h, marteze, evit na vo e ina en stad vad. . .

Doue na zizam ket e zroug war e granadurien, mes e Varnerez a zo reiz ha leal. An holl amzeriou a zo d'ezan evit kastia e vugale fall ha dizent. Eun de zo o tont, marteze hepdale, tudou Kallak a c'halle gwelet ar flaster, ar goaper kroaziou hag-hen nebetoc'h lorc'huz, nebetoc'h rog ha divergont egad lirie. Gras d'ean n'hen defe ket da gavout re a genn d'e daol zod ha dife ! Doue da sklerijenni d'ean e spered, dallet gand ar gasoni hag an diskredoni !

Da c'hortoz, ni Kallagiz, a laro d'ar Manac'h gant kalz a galon penoz n'omp ket c'hoaz fall awalc'h evit kerzet war e roudon. Ar Groaz eo hon fizianz ; ar Groaz a garfomp, tu vo bue en hon c'breiz ha tra ma redo en hon gwaziou eun daken a vad. Ar Groaz a difennfomp! C'hoari da benn, den dizoue ; skruiga da zent, den dife ; yud evel eun daonet :

Eus a bouez hon feannou ni a laro bepred : Eannoc'h, 'n ho KROAZ, Jezus, ni gred, ni gred, ni gred!!!

Groot, o Zalver Jezus, ma vo honnez war hon gwede a vao, diwean peden hon c'halon !. 23

AR YRODET.

GOULENN e hared ar Groaz : Gwerzioù sant Erwan, al Labourer, sant Milio, sant Koneri, hag all. Eur gweanek ar pez.

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon  
GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Sain-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.

toullaz ar gaoz d'e contr a oa gantan o chom, (rag 'nevoa na tad na mam,) hag e oe merket an de-ze da venet da c'houlou ar benherez digant he zad hag he mam : Fenez, da guz-heol, eme Olier, bezet prest ; me vo ive !

Hogen, an devez-ze, d'habardaz, Melani ar Rouz ha Matelina Gouriou, he c'hasmaradez, a oa o-diau o tiviz asamblez, war o brusk war eur pennad kleun, e bord al linen. E kichen Melani oa eur bakaden dilhad da gannan, eur c'holvaz hag eur pez spoñ ; Matelina oa da vez gant eur vico'h neve alat, an nask ganti war goull he bec'h, hag eur gegeliad lin e-piga ouz he stagelen :

— Souezet ez oun ganid, a lavare Matelina ; me gave d'in 'oa tremenet d'id ar zorc'hen-ze. Penoz, war digare out bet war da dreid en pardon Gwengamp, e renke 'n chakad ha 'n em jalan en doare ma rez, hag e renke rei bod da gement zorc'hen divalo a deu 'n ez spered ! Chileo, ma merc'h, me zo bet ive war ma zroad en pardon an Itron-Varia-Wir-Zikour, ha na ran ket kement-ze a dabut.

— Brao eo laret ! Ma vije bet ma zad o komandi warnoud bende ! .. Me n'hallan ket ober man evel ar re-all ; n'hallan hec'her eur gammel hep ma renko gent, ha n'ez na foad, na pardon, na pelerinaj evidon nemet war droad, hag an train deuz toull hon dor !

— Ar re-all, penoz e reont ?

— Penoz e reont ? Soazik Maouten n'e ket bet eur gwech dija barz an train t Marc'harit Barzéz, n'e ket bet en Zant-Briek gant an train ?

(Da heuilh).

DIN-NA-DOU.



109  
1895

# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

10 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
3 skoed, evit ar broion estren evit ar Broioù heñvel.

SKRIVANIERIEN

Kas al labouriou pe d'an Otro VALLEE, Renar, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivanier, 27, bati Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep arundennad-kriztur.  
(Diskenn a brez evit meur a embann diouas-te).

Ar brezonek hag ar feiz.  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Sant brezonek eo deud ar feiz.  
Sant ar gallek eo aie a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yes an dud vad ha kelonek.  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, e ve Poch'het!  
MILAN.

## Perag eur gazetenn-vrezonek pen-da-ben ?

Gant ar brezonek eo deud ar Feiz.  
Gant ar gallek eo aie 'meuz a Vreiz.

Setu petra a c'houlennaz diganin eul labourer denz a goste Kerne : Perag, emean, eur gazetenn-vrezonek, p'eo gwir an holl breman a oar lenn gallek ?

Ma 'm ije bet amzer awalch, am ije kontet d'ean istor an hini a oa et da foar-Vikel gant e vloc'h, hag an eyoa gwerzet anei daouzek gwech da zaouzek marc'hadour etre ar ger hag ar marc'had. Ugent real eraz an ije digant pep marc'hadour gant ma kasje anei betek ker.

Pa oe arru en ker, ar vloc'h baour a oe gwall-nec'het kas gant piou e oa he mestr.

Hevelep tra a c'hoarvezfe ganimp evel gant an aneval-man, ma loskaomp da bep mare hon langaj hag hon c'hiziu-mi, da gemer langaj estren ha kiziu nevez : na ouvelomp ken d'ar fin piou bean nag a be hano bean hauey.

Lakomp penoz — Douc da viro, — e vijemp 'benn eun toullad blavezioù kemeret gant ar Brusianed ; hon bugale vilhan a zeske an almanek, ha pa vijent arru ampart mad war ar yez-ze, e lavarfen d'eo zro : Na dalv ket ken zellet ouz ar gallek, p'eo gwir hon deuz desket komz almanek.

Ha mar deufe goude tro ar Zaozon da fountan mestr warnomp, e loskafemp adarre an almanek da gemer zaonaj.

Zellet da belec'h e kas ac'hanomp kôz ar C'hernevad, o lavaret : Perag eur gazetenn-vrezonek, p'eo gwir an holl a zo akwit war ar gallek ?

Perag ? Abalamour da viret bon hano, na pa na ve ken, ha derc'hel da zonz piou omp, Bretoned ; ha nan Gallaoued, ha nan Prusianed ha nan Zaozon, abalamour n'arruo ket ganimp evel gant ar vloc'h kez, ha na ouie ken, dre forz bean hadgwerzet ha prenet, da biou e oa.

Hon yez, hon hano n'int ket treo da werzan na da drokan ; an treo-ze n'eo ket marc'hadourez int, rag enne 'man hon enor hag hon liberte.

Perag eur gazetenn-vrezonek pen-da-ben, p'eo gwir an holl a oar lenn gallek ?

Ya, mez an holl, pell ac'hane, n'ouzont ket lenn brezonek. Ar gazetenn-vrezonek a zo da zeski d'ar Vretoned lenn brezonek.

Ouspenn 'zo c'hoaz. N'eo ket gwir e plij d'ac'h ar zontou brezonek, ha ken liez-all a dra vreton hag a verv enne spered ar re goz ?

Mez piou a viro ane, a zastumo ane, a ginnigo ane d'ac'h, bihan ha braz, d'he lakat da ouelan pe da c'hoarzin ? piou, ma n'eo ket ar gazetenn-vrezonek ! Ar gazetenn c'hallek a zo deuz Paris pe kiz Paris ; na oar ket a vrezonek, na zell ket outan, nag ouz ar viro, nag ouz hon c'hiziu, nemet evit ober goap aliez ; ar gazetenn-vrezonek a zo bretonez pen-kil-ha-troad, hag e lavarfen c'hoaz pa baro ho taolagad warui : Perag eur gazetenn-vrezonek en Breiz ?

Ar c'hogn uhelan a zo dleet en Breiz d'ar gazetenn-vrezonek, rag hi eo ar verc'h heuan, dre n'eo ar brezonek ar yez heuan. Roet ar plas-ze d'ei 'ta, Bretoned, en ho ti hag en ho kalon !

DIR-NA-DOZ.

## Stad mantrus ar Vretoned divroet

Setu aman, distaget diouz lizer an Tad Morice, eur relijios mad ha santel o chom en Naoned e-touez ar Vretoned divroet, eur pennad diwar-benn stad mantrus ar re-man. Ha n'eo ket e Naoned hepken ec'h eo fall an treo evit ar Vretoned ; ken gwas-all a glevomp iye diwar-benn ar re ane a zo aet da veza e Pariz, e Sant-Denez, en Anje, pe en Haor-Nevez.

Otro Renar,

Ober a rin ma gwella evit skrivan a amzer da amzer eur c'holon bennag war doare Bretoned Naoned.

E gwirionez, truezus eo stad hon c'henvroiz e ker an Dukez Anna. Koll a reont o feiz, o yez, o yec'had. Naoned a zo kriz e-kenver ar Vretoned. Ar re-man a zo

gwall-gaset. O stad a digas d'in sonj ens ar « Bariaed », eur rummad tud ens an Indrez hag a vev disprizet ha gwall-gaset gant an dud-all. Naoned eo bez ar Vretoned, e pep seurt stumm.

## KLEMMOU EUN DEN YAOUANK, ET DA BARIS

Da J. B. K...

Kwitael am ens ti ma zad,  
Evidon pebez kalonad !  
O sonjal kavet er c'haerion,  
Aour da zastum war ar rniou.

Netra gavan 'met paourante,  
Dienez d'eo fritan bemde ;  
A-vec'h 've d'in, pa deu an noz,  
Kad eur c'horn-tro evit renoz.

O donar koant, donar santel !  
O ma bro goer a Vreiz-Izel !  
Me 'garfe c'hoas hevan 'n ez kreiz,  
'Lec'h m'am oa plijadur a-leiz.

Me garfe, d'ar zul, d'ar gonelioù,  
Diskwiz en-harz da ilizoù ;  
Hag ive, devez ar pardon,  
Dougen banniel ma Sant paeron.

Me garfe bean 'ti ma zad,  
En e barkou o labourat,  
'Bers en-kreiz sioulder ar maezioù,  
Ha pell diouz safar ar c'haerion.

A ! panevert rag ar gwall-vrud,  
Me distrofe daved ma zad,  
An oll larfe 'leis o geno :  
« Sell ! Erwanik a zo distro ! »

Ya, Erwanik a zo distro,  
Ha leun e gof dens ar c'haerio !  
Ha c'hoas, m'an nije gouveet,  
Biken e vro 'nije kwitael !

Oh ! me ho ped, Brezaded keiz,  
En hanv Douc chomet en Breiz ;  
Rag dont rafec'h da goll timad,  
Hoc'h enor kouls hag ho prud vad.

L. CHARRAN.

## AL LABOUR-DOUAR

O Vitrioli.

Na dleer vitrioli nemed 'a-bep ma va ezom, de-ha-de. D'abard, goude koan ec'h heller vitrioli an ed da hadan an de war-lerc'h. Tol an ed-ze en eur penton, an dour-vitriol warnan (eul livr vitriol a bep hanter-kant litrad dour, eun hanter livr a bep pemp waru-ngent...) da c'houlou an ed ervad. Ean hanter troatad mat a gle bean war an ed. Meskan gant eur bal goat. Gwech-ha-gwech tremen an darn war an dor, da skuban ar greun a zav war var. Ar re-vez na dalont netra. Lezel an ed en tremp, en glec'h, epad an noz, (eun daouzeg eur bannag). Tennan an dour digante dre ar vosed ha ledet an ed war eul leuren zec'h mad.

Tol eun tamm ra war bez n'hallfed ket hadan an de-ze...

Gopra.

Bech a vo breman o c'hopra tud. Nao, dek gwech e c'hopra eun darn a zo ; diou, ter gwech bep sut awecho ewit tapout eur bluskennad da vont d'ar ger. Eur fentigell e vije mar na vije eun drue. Labourerien, poent braz eo en em glevet ! Diaviz ec'h o teurel kresk an eil war egile. Ar servijerion eo red paean. Eur mevel mad a dalv kalz. Eur gont a zo koulskoude. Na dalv ket e boezans a aour. « Re a van na dal man ». Trist e vo mar renket gwerzan plouz-ha-greun, zec'h-ha-zall da baean otro ha servijerion. Ha c'houi hag ho pugale... !!! Eo em glevet... !

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

An aotrou chaloni Provost, arc'havieler  
Tregor. 20 real.  
An otro chaloni Guyomard. 10 lur.  
An otro Fleury, kure en Plouaret. 4 real.  
An dimezel Cuziat, deuz Plouneve-Moedek. 4 real.

N'halljomp ket trugarekaat awalch hon mignoned a ra d'imp an enor da gemer peurz en hon labour hag en hon dispignou ; ar c'hentan hag ar gwellan trugare a zo dleet ganimp d'an otro chaloni Provost, vikel-vraz, ha d'an otro chaloni Guyomard, penn-rener kolaj Gwengamp. Bei hon deuz kelo penoz eman skol-vrezonek kolaj Gwengamp o paouez hadkregi adarre. Setu c'hoaz eun digare da drugarekaat an otro Guyomard hag an otro Clerc (Kloarek-ar-Wero) an euz hadsammet adarre ar bec'h-man gant e holl labouriou-all.

Dieourien omp ive a galz a anaoudegez d'ar re o deuz gret ar zun-man digemer mad d'ar Groaz Neve, dreist-holl d'an otro May, person Plouneve-Moedek, a zispign e nerz da harpan an oll oberou mad en e barroz.

## GOUEL AN ANAON

Setu, da heul gouel an oll zent, gouel an anaon o tiguoezont gant dezioù tenval ar miz du. Eun dra vad e vije ma c'hallje oll lennerien Kroaz ar Vretoned kaout peh a *Lexer oferenn* latin-brezonek, d'ed da c'hallout e lenn epad an ofisou ha heuilh war ar brezonek ar pedannou kaer a zo bet lakaet gant an Iliz, hon mamm, d'he bugale aet da anaon. Setu aman, da c'hortoz, *Aviel ar re n'aro*, a ve lennet ive gant ar belek en oll oferennoù an anaon.

En amzer-ze Jezus a lavaras d'ar Judevien : E gwirionez me hen lavar d'ec'h : An eur a dosta ; deuet eo, ma klevo ar re varo mouez Mab Doue ; hag ar re a glevo a vevo. Rag, evel ma 'n deuz an Tad ar vuez ennan e-unan, roet en deuz ive d'ar Mab ar galloud da varn, o veza ma 'z eo Mab an den. Na vezit ket souezet eus a gement-se ; rag dont a ra an eur ma klevo ar re a zo er bezion mouez Mab Doue : hag ar re o devezo graet mad a zavo da vont er vuez ; hogen ar re o devezo graet fall, a zavo da vezan barnet.

(Aviel herve sant Yan).

## Roll-dispignou evit ar bla deu

An otro Baudin, an hini deuz ar vinistred eo fiziet emman an arc'hant, a zo o paouez ober ar roll deuz an dispignou evit ar bla deu.

Kant hanter kant million a zispignou nevez a zo da venn, en askont d'al lezennou nevez, dreist-holl al *lezenn Jaou ala votet* ar 21 a viz meurs divezan.

Pelec'h e vo kavet kant hanter kant million da stouvan an toul digoret adarre e-kichen ken liez a doullon-all gant hon deputed hag hon senedourien ?

An otro Baudin a lavar n'ez ket ezom da gontan war al labour-douar, rag pa n'an euz ket a nerz awalch da griki pinvidigez ar vro, n'halla ket paean ive trusjon nevez.

N'emman ket kont ar memez tra gant potred ar micherion ; ar re-man a c'hone arc'hant braz ; ar re ane a zo marc'hadourien gweturiou dre dan a werz pez a garont, rag gweturiou Frans a zo brudet dre holl.

Ar ministri a zo ali da jachan eta war ar micherion ; mez, emean, rei skoazel d'ed da breman ha da werzan, a renko ar gouarnamant, rag eur vloc'h-laez, pa ve jachet mad war he bronnoù, a renk bean bevet denz ze.

**Da viret an uo.**

Diwar vremen ar yer a nebentao da dewi. Da viret an no laket ane eur vuntun xit dour bervet, zec'het ane ervad goude ha laket ane en eur c'honiga tenval bennag.

**Da greski al leaz gand ar zaoud.**

Rei da bep vuoc'h-leaz, war he hoad, eul live ker'h bemde. Al leaz a yel war greski ganti bemde, beleg dek devez; diwar neuze gresko ken. Eul litrad bemde a roo muioc'h ewit na roc hep ker'h. Al leaz a vo dousoc'h, an aman gwelloc'h blazet, ar vuoc'h a wellao.

Graet eun esa war eun eil pe eun all da welet.

**Eur vilin-gerc'h. (« Concasseur »).**

Kalz a gezek a ya re heriek war o c'herc'h, ha na ra vad a-bed o c'herc'h d'e. Prenan eur « c'honkaseur » etre



Ar gwellan e ti an  
milinou ker'h aotrone Vallée  
e ve kavet Mekanisherien  
da brenan Sant-Briek.

daon pe dri pe bevar deigez nesan. Eun ugent skoed bennag a goust. Etre tti pe bevar na vo ket ze mado mil den.

Tremen ar c'herc'h dre ar vilin-ze. Gand daou vuzurad e refet tti. Nebentoc'h a gerc'h a yel diganac'h, c'hoaz e vo lartoc'h ho kezek.

**D'amezeien an ocherien.**

Marl (trez) rig a zo mad d'ar jouchenno-gwiniz. Mar zo bet temzet mat d'an treo-haav e vo awalch eur vavagad ewit temzi chouce'h-ugent korden douar.

Ar marl a zo mad d'an douar. Red eo gwech ha gwech-all. D'ar c'houlz-man eo ar gwellan. Fresk, o tont deuz an od, e ve e oll nerz gantan.

**MARVAILH NEVE**

**KONTADEN JANIK**

Bevan 're gwechall em bro eur plac'hik yaouank hanvet Janik. Paour e oa ken ma oa paour, ha red mad 'oa d'ei tremen he bue en eur c'hoz punz aet da hesk. Bemde e teuz emez eus he funz evit mont da gerc'het dour d'ar feunteun 'oa en-kichen he zi a c'hiz neve.

Eun devez ec'h eaz da gerc'het dour pa gavaz, en-kichen ar feunteun, ar Werc'hez.

— « Penoz 'man da gont? » eme an Itron Varia.

**ETRE BREST HA PARIS**

Brest a jache d'e du ha Paris d'e tinn, ha siouaz Paris a drechar!

**I.—Ar garante 'gresk etre Penherez Kerguz ha Henthouarn neve Brest da Paris.**

— Daoust petra vi well, pa vi bet en train! Sell pesort c'hoant 'zo staget er merc'hed yaouank! Ma, plac'h paour, me yei pell gant ar c'hoant-ze, pelloc'h 'vit gant ar c'hoant... Bah! bah! didrouz d'am fenn!

— Ma n'a ket a dud ennan, piou a yei? N'e ket da charre moc'h eo gret, marfad!

— Diwall na deufez ket ermeaz ken laouen evel e vi et ebarz! Hennez a zo eur pezh skwemp. Janedik ar Floc'h, nan euz bet kelo ebed diouti 'boue eo partiet gantan. Me 'm euz klevet laret, ha gwir eo, n'e ket mad mont er poezon-ze c'han ma ver dimezet.

— Chiteo! Hag e teuz lonket ar poule'had-ze! Kinkanellou awalch ar seurt-ze a glevan ma bemde. Darn a lavar ive penoz an nep a yei en train 'n evo ket e bask, hag hen ar person a ya 'barz!

— Kred ac'hanon hag a fo aluzen! Pa vi dimezet, ar penher a valeo ac'hanoud 'lec'h a gari, na pa ve betek Paris, p'eo gwir e teuz kement a zec'hed d'an train ha da Paris.

Melani a grogaz en he barrez, hanter pof ha hanter vouzet:

— O! emei; n'eo ket red mont betek keit ze. Kenavo e-berr!

— Kenavo e-berr, Melani! A! plac'hik, eme, Madalen outi he-unan, eno 'man an dalc'h; da Paris vo red mont,

— « Mad awalch, eme Janik; mez, paour kez itron, me garfe kaout eun tiffi kihan evit 'n em denn epad ar goanv a zo aru. »

— « Mad, eme ar Werc'hez, es d'ar ger hag a-benn arc'hoaz e kavi pez a c'houllevez. »

Janik a gemeras dour hag a yeaz d'ar ger.

An de war-lerc'h ar beure, Janik a 'n em welas ebarz eun ti kaer, kaer.

— « Daoust ma n'eo ket eun huver? » eme ar plac'hik, oc'h en em zével en he za.

« Nan! na oa ket kement-se eun huver; Janik 'oa o chom en eun ti brao roet d'ei gant Mam Jezus. »

An de-ze ec'h eaz, evel ma oa he c'hustumans, da gerc'het dour d'ar feunteun.

Mam Doue 'oa eno adare. Pen arruz Janik, e c'houlennas eus he c'helo.

— « Penoz map kont, Janik, lia te laouen? »

— « Ya, itron, mez me garfe kaout c'hoas eur vioc'h. »

— « Bean a tevo unan, ma merc'hik, eme ar Werc'hez; ke d'ar ger, hag a-ben arc'hoaz e kavi eur vioc'h. »

Janik a zentas hag ac'h eaz d'he zi.

An de war-lerc'h pa zihunaz, e zellas dre ar prenest hag e welas ebarz ar porz eur vioc'h vihan ru, tarchet gant gwen. Tez ar vioc'h oa leun a lez. Janik hen gorroaz lia, goude bean bervet anean, hen evaz gant plijadur.

An de war-lerc'h ec'h eaz c'hoaz d'ar feunteun. An itron ger oa en he za eno adarre ha, pa welas ar plac'hik, e c'houlennas, evel an droiou all, eus he c'helou.

— « Mont mad a ra an teo ganin-me, eme Janik; nemet me garfe kaout c'hoaz eaz toullad yer evit rei d'in uo (viou). »

— « Ke d'ar ger, eme ar Werc'hez adarre ha bez dinet'h, ma flac'hik. »

Ar plac'hik yaouank a zentas hag an de goude, eus ar beure, e klevas e-barz ar porz: « Kok, kok, kok, kok, kokenko! »

— « Ari zo yer adare, eme Janik; mont a ra an teo war rog ervad. »

Mont a reas adarre d'ar feunteun evit ker'chet dour. Pried sant Josef oa eno evit ar bederved gwech.

— « Penoz ec'h a an treo, ma bugel? » eme ar Vam eus an Nenv.

— « Mad, mad, itron gez, eme Janik; 'met me garfe kaout c'hoaz eur roben vras da vont d'an oferen disul. »

— « Ac'hanta! eme ar Werc'hez; bean a tevo unan kaer hag ouz da vuzul! »

Janik a yeas en-dro hag en de war-lerc'h e kavas war he gwele eur roben ru gant freinich sei en traou d'ez; en he c'hichen enr blouk arc'hant skeit evit ar bleo hag eur re voutou luf evit an treid.

Janik 'n em wiskas gant pres hag a 'n em zellas en eur melezoar.

— « Gwasat' on kaer! emei. Petra vo laret diouin brema-zon? »

Mont a reas ei-maez hag an dud, ar vugale, a zelle outi evel tud estranjour.

— « Piou eo honnez a zo aru da chom e-barz an ti neve? Ni gawe d'imp e oa Janik o chom e-barz, mez ni gav d'imp breman n'eman ket. »

p'eo gwir an train a ya da Paris; ma vije et an train d'an ifern, c'houi vije et war-lerc'h. Fentuz eo, ha tristoc'h eo c'hoaz! Bost du-man, Pendu!

Eun nebut zuvvezioù 'oa, brasan plijadur Melani a vije mont d'ar zud d'abardaez, goude ar gouspero, d'ober eur valeaden betek gar Plouaret. Matelina a renke monet ganti. Ar gwechou kentan e chomet a ziavez, mez Melani a hardisaez, hag e vije gwelet o antren en ti-gar en eur jachan Matelina war he lerc'h. Eno e wele an dud o vont hag o tont, hag e teske tam-ha-tam he gwejoennou. Hep kredi lavaret, e vane da zellet gant anvi ouz ar re a bartie, ha Matelina a renke jachan tenn war he broz da zigas anei war hent ar ger.

Hogen, eur zul, ma n'halle ket adarre tennan peuc'h diouti, Matelina a zizroaz kreenn:

— Kerz da hunan, mar kerez, me n'houllan ket e ve gret goap diouzin!

Melani, chomet he-unan, an em gavaz nec'het war an taol; koulskoude na reaz ket kalz ouспен eur zonz, ha d'ar gar ec'h eaz hepred.

An train a c'houtelle 'n eur dostad, ha kalon Melani a dride outan evel pa vije bet o tigas daveti tad, mam pe amouros. Arru eo, evel eun ankane pa boz e penn ar redaden, stons ha gwigour gantan. « N'euz ken a vunt! eme unan koz, na ra ken a voged. » Ar gweturioù pan int skoilhet, a zigor o fenestrou, ha Melani a zilont he daoulagad; ken liez a benn a well eno, ken liez a drem ha ken liez a giz. Na ziskanne ket nemeur a dud en Plouaret, mez ma pigne unan bennag, Melani na vije ket evit harz da stardan he dorn war he yalc'h en he godel: « Awalch, emei, am ije marteze da vont betek Gwengamp! »

Pourvuian, pa dije gret he zro en eur dol zellou leun

Janik a yeas d'ar feunteun ar sul ar beure, hag e kavas evel gwechall ar Werc'hez.

— « Itron, emei, nan on ket ken evurus en em zi evel e oan gwechall e-barz ma funz; an dud na gwap ouzin; nan auver ken ac'hanon. Penoz e rin? »

— « Ke d'ar ger, eme ar Werc'hez; a-benn arc'hoaz ar beure e vi anveet. »

An de war-lerc'h, pa zihunaz, e oa en he fons evel gwechall. He joa oa tremenet kement ma ne oa nemet eun huver.

A. T.  
A Skol-vezezonek Gwengamp.

**EUL LEVR NEVE**

Nevanti vad d'al lennerien, ha d'ar c'hoarierien peziou brezonek! Pez an otro 'n abad Perrot, Intre zant Vouga, a zo digouet ganimp ar zui-all hag a zo aman da werzan. A tank al Louarn eo hanvet: A real e kousto.

GOULENN e buret ar Groaz: Gwerzioù sant Erwan, al Labourer, sant Milio, sant Kaneri, hag all. Eur gwennek ar pez.

**STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLE**


En ZANT-BRIEK, boulevard National

**An Otrone VALLÉE, deut war e lerc'h**

Mekanikou evit al labour-douar

TEUZEREZ-HOUARN TEUZEREZ-KOUEVR

Mekanikou dre betrol « Gardner » ar re wella, ar gwella marc'had.



Gwer-ct betekhen: 15.000 gwechall ha 8.500 dourmerez.

NA GAVER NEMET ENO: Dourmerez houarn-holl koufroun ispisial evit ar mekanikon dre dan pe dre betrol. — Gwastellou BOULLE d'ober jist, o vont en dro dre vins-tro ha rod-lanz.

Trouc'herzed, mederezed, elar-brabant ha pep sort mekanikon eus ar gwella evit al labour-douar.

GWERZET EN PEP FIZIANZ HA MARCHAD-MAD

**ERWAN HERNOT**

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU

En Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillemec.

a deneridigez war ar bagadon tud dizanve a dremene diragi. Melani a re eun huanaden, diou awechou, hag a droe kein d'an train da vont d'ar ger, evel eun den ha n'ev ket kavet c'hoaz ar wech-man an nep a glaske. An tol-man avad, e tiwanaz eur zonz-all en he 'spered. Daoust pegement e koust mont da Paris?

Setu skampet an trao, didrouz an treo, ha n'euz ken aman nemet potr ar bilhejou:

— Otrou, mar plij, eme ar plac'h, pegement e koustif mont da Paris?

Ar potr, arog respont, a rezz eur zell pis ouz Melani.

— Divezad hoc'h, emean, ma fell d'ac'h mont da Paris!

Melani a yeaz ru betek he diousskouarn:

— O! n'eo ket me, emei, am euz da vont da Paris; eur voereb... eur... sontr... eur breur eo am euz, pa larin tad, hag a ya di da... da... da...

N'ouwe petra da lavaret, rag re brim he devoa zentel ouz he fennad ha n'he devoa ket a gomzou gret. Mez ar potr a droc'haz kreenn:

— Daou lur ha hanter kant, emean, a gousto d'ean!

— Daou lur ha hanter kant! Ma Jezus!

Mez eur zonz-all a denaz d'ei: Marteze ar botred a baec keroc'h evit ar merc'hed:

— Otrou, emei, en eur dermal, gant an he devoa da lavaret eun temz divalo bennag, n'euz ket a rabad evit ar merc'hed?

Ar potr pa glevaz a zirollaz da c'hoarzin:

— A rabad evit ar merc'hed, a c'houlennet-hu? Eo, eo! gant ma vefent fur ha koant. Lavaret d'in eta ha c'honi 'zo fur, pa c'e'h koant...

Eur vouez a respontaz drek kein Melani:

— « Ar re a zo fur a chom er ger. »  
(Da heuilh).  
DER-NA-DOR.



# Kroaz ar Vretoned

ROUMANANCHOU

SKRIVANIERIEN

EMBANNOU-KONVERZ

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skood, evit ar broion estren evit ar Broio holliek.

Kas al labourioù-pe d'an Otro VALLÉE, Renner, ru Zant-Beneat, Zant-Eriek.  
pe d'an Otro MOAL, Shrivancier, 27, baiz Charner, Zant-Eriek.

2 wennek pep arondennad-britar.  
(Diskenn a briz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, o vo Pec'hell  
M.L.H.

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

An aotrou chaloni Olivier.	10 lur.
An aotrou chaloni Olo.	20 real.
An aotrou Koent, kure Boulvriak.	20 real.
An aotrou chaloni Iliou, Plougastel.	20 real.
An aotrou a Venerval, Paris.	4 real.
Dimezellet madeleuz a Landivisio.	20 lur.
An dimezellet de Vclz.	20 real.
Aotrou person Laniscat.	20 real.

Trugare, c'hoaz eur wech, a greiz kalon, d'an oll vignonad a deurve rei dorn d'hon « C'hroaz » neve !

Enor da gentan, en o zouez, da Glaoda, na baouez ket da labourat eviti !

A unan gant o aluzennoù darn eus hon mignonad o deuz kaset lizerou leun a alioù mad. Mil bennoz-Doue d'ê ! Ar zun a deu e vo moulllet eur pennad skrivet gant unan eus hon madoberourien war ar gwellañ doare da implijout an nosvezion goanv.

## EUL LIZER MAD

Mignon Ker,

Gwelet e ran gant levezeg eo deuet ho Kroaz vihan d'en em zevl a renk ar c'hazetennou braz ; kement-se a ra enor d'eo'h ha d'hor c'henveur ar Moal.

Ne c'helle ket kreski en eur mare gwelloc'h, rag ezom a zo hirio, muioc'h eged biskoaz, eus kazetennou brezonek evit miret ouz ar c'hazetennou gall ha difeiz d'en em skigna en hor bro.

Bro-Dreger, dreist holl, he doa ezom a gement-se, dre m'eo tostoc'h d'ar C'hallaoued pere a vije deuet, nebeud-ha-nebeud, da vouga hor yez koz hag hor feiz, ma n'o divije ket ar Varzed, en eur zevl kazetennou brezonek e pep lec'h, miret outo da lakaat o zreid larkoc'h en hor bro.

Ya, kazetennou brezonek a zo brema, a drugare Done, e pep korn a Vreiz-Izel ; an dachen a zo hadet eta, med petra vezo an eost ?

An eost, mignon ker, a ve puilh heb dale ma karfe ar re binvidik en hon touez rei skoazel d'ar Varzed, rag ar c'haz vicia ac'hanomp a zo paour ha ne c'hellomp alieze rei nemed hor poan hag hor skridou.

Alo ! noblans, bouc'hizien, digorit ho yalc'h eun nebeudik, rag ar varzed a labour evit Breiz-Izel holl hag evidoc'h muioc'h c'hoaz marteze eged evid ar re baour eus ar vro, rag ma tenfe, sionaz ! ar feiz hag ar yez da veza mouget e Breiz-Izel, neuze e vemp holl breset dindan treid an dispac'herien.

Mignon ker, Trugarez evid ho nerz-kalon, ha ra vevo da viken Kroaz Vraz ar Vretoned !

P. Provost.

## AVIEL GOUEL AN OLL ZENT

D'an amzer-ze Jezus, o welet eur bohl tud war e lerc'h, a bignas war eur mene. Pa weljont Anean oc'h azei, e zikiblad a dostas ha Jezus da brezek evellen : « Evurus a dud distag o spered diouz tref ar bed, rouantelez an env a zo d'ê. Evurus an dud habask (jentil), douget e voint war ar bed-man. Evurus an dud o deuz naon ha zec'het da bez a zo leal ha mad, roet e vo d'ê ouz o c'hoant. Evurus an dud trugarezuz, kaout a reint trugare ewit o-man. Evurus an dud e zo glan (gwenn) o c'halon, gwelet a reint Done. Evurus an dud a beuc'h, golvet e voint bugale Done. Evurus an dud a zo iskignet abalamour d'ar vad, d'ê e vo rouantelez an env. Evurus a vefet mar bec'h mihiget, gwall-gaset gand an dud fall, mar

lamallont fallagiejo d'ac'h, en gaou, dre drouk ouzin. Bet zeder ha tridet gand ar joa rak eur gopr kaer a vo roet d'ac'h er baradoz. »

**Kelennadurez.** Beomp kalon eta kristenien, iskignet goapeet, gogeeet en askont ma 'z omp war an tu-mad. Zur omp da vean digollet gand Doue deuz hon labour vad, deuz dispriiz ha dismeganz an dud fall. Na flachomp na na hlegomp hag e talefe an digoll « Gortoz pell, gortoz well. »

## En hano an Tad, en hano ar Mab, en hano ar Spered, en hano an Dreinded

Baradoz Doue.

Hon ger-ni, kenvroiz, kristenien vad, hon ger-ni, hon gwir vro n'eman ket aman, en draonien-man a c'hlaç'har hag a zaero. Hon bue, hon reuz aman, n'eo nemed eun dremenaden, an amzer a zo ezom d'ober ar zivridigez.

Daoust pegen kaer halfe bean hon bro garet, hon bro zantel Breiz-Izel, gand he zraoninnado yeed marelllet e vokedo koant a bep liou, he c'hrec'hio gwerniset a-vrak ru-roz, war o zal pin o deilho glaz-dour dantelezet ; gand he lanneier hag he balaneier o bokedo melen-aour, he c'hoajo ken zart, ken zeder oc'h hekleoi gand maejo flour ha lizzin evnigo Doue ; gand he gouriz mor glaz o perlezi, o steredenni e lagad lugernuz an heol stignet en oabl-glizin ; daoust pegen kaer o uffe bean hon bro zagr, bro ar Zent, ar Varzed, an dud a galon, arabad eo d'imp re begen outi. Hon lagad a dle para uheloc'h, du-hont, e krec'h, war hon gwir vro « Lagad an den a dle para uheloc'h ewit tref ar bed-man. »

Holl dreo kaer ar bed-man a zo nebeud a dra e kichen tref ar bed-all. Eur skouden distar n'int ken, an tu gin anean.

— « Gand o dioueskell aour, perag na welan-me,

O nijal en envo eledigo Doue ? » —

— « Paour bihan, e laras e vamm, 'n eur vouc'hoarzin,

Na weles deuz an env, netra 'mont an tu-gin, » —

— « Ma ! Ma ! Ma mammik kez, 'me ar bugel zoudenn,

O sellet eun eil gwech bolz an env, 'uz d'ê benn,

P'eo ken brav an tu-gin a weler, da c'hortoz,

Na pegen kaer 'vo 'ta tu mad ar baradoz ? »

Pa oa kuzet an heol ha deut an noz tenval,

A ra d'ar paouran den en mado hunvreal,

Gand e vamm, ar bugel, dihun war he barlen,

A zav e zaoulagad hag a wel eun dachen

Hadet a beruz aour. Ar stered en envo,

Evel eur gurunen, a luc'he, tro-war-zro.

— « P'eo ken brao an tu-gin a weler da c'hortoz,

Na me garfe gwelet tu mad ar baradoz ! » —

Peden ar bugelik, breur bihan an ele,

'Vel c'houez vad an ezenz 'arruas gand Doue.

Ha pa deuas an heol d'alaour 'r menseio,

Na oa ken ar c'hez paour en tu-man d'an envo.

En kichen e gavel, ar vamm 'oa daoulinet

Hag a ouele d'ê mab, a oa d'an env nijet.

Ken bras 'nevoa kavet an tu-gin, da c'hortoz,

Ma oa eed da welet tu mad ar baradoz... »

Netra welloc'h, herie, ewit mont d'ober eun tamm tro da welet pelec'h e nijas, evel eur goulmik wenn, ine an El bihan-ze. Netra welloc'h ewit mont herie d'ober eun tammik tro da vo ar Zent, kement ha berzan o gouel ha kaout muioc'h a galon da vale war o roujo.

Demp ! eta etrezeg ar Baradoz hanvet ive : ar vro peurbaduz, an dinel eternal, hon bro, rouantelez an env, hurenen an dud gonit, baradoz Doue, hon heriz (herita), eur pred-eured.

Ar baradoz a zo : « eul lec'h dudius a evurusted eternal, o welet Doue fas onz fas. » « O welet, o karout Doue hag o tanyva pegen mad eo bean gantan da viken. » Eno an O. Doue a ra « pep mad da virviken d'ar re evuruz. »

Eno, hon spered sklerijennet, lemmet [gand an O. Doue, eno e welfomp Doue, evel m'eman, n'eo ket en eur mellezoc'h evel er vuc-man. Gwelet a refomp an Otro

Doue, en e grouadurien. En hon c'hoaz e vo. Anveut a refomp an Drinded Zantel. Hag ar gwel deus Doue, hag hon unvaniez gantan, hag an tanyva Anean, a roo joausted d'imp gwalc'h hon c'halon. Evurusted a sort n'hall netra rei war an douar, na de pardon, na de pask kentan zoken, na de an eured, na netra. « Hon c'halon a zo goret ewid Doue. Na peuc'h na diskviz eviti nemet gand Doue. » Ha seul vui e vo bet zantel ar vuc aman, seul evurusoc'h e veer en env, evel uheloc'h e veer, seul eul c'hoaz hag a enor a zigoneo. « Evel an heol, al loar, ar stered en oabl a zo kaeroc'h an eil ewid egile, ewel-se ive ar Zent vo kaeroc'h an eil ewid egile. »

Ar c'horf eur wech zavet a varo da veo, ar c'horf adaleg ar varn en traouien « Josafat » an nevo ive e lod en evurusted an ine. Aman eo loden ar poanio gand an ine, dleet eo d'ean lodenni an evurusted. Seul evurusoc'h, seul gaeroc'h e vo an ine, seul evurusoc'h, seul gaeroc'h e vo ar c'horf. An distaran deuz ar Zent, deuz an dud vad a vo kaeroc'h ha splanoc'h ewid en em diskoeas hon Zalver d'an Elestel war lein mene « Thabor. »

Ar c'horfo a lugerno evel an heol e rouantelez an env. Na nec'hamant, na trubuilh, na poan, na temtasion na riskl, na pec'het d'ar spered, na naon, na zec'het, na tomder, na yenien, na gwall-amzer, na klenved, na maro d'ar c'horf.

Konfort, fec'alidigez, levezeg, joausted, evurusted, dudi dalc'hmad.

Ar c'horfo vo skanv, ter, mistr, mibin, sentuz onz an ineo.

En env e vo huc peurbaduz, yaonankiz hep kozni, sklerijen ha na baonezo da baran, evurusted hep trididigez, peuc'h hep trubuilh, rouantelez ha n'halla den koll.

« Lagad an den, eme Zant Pol na welas, e ziouskouarn na glevas, e galon na danveas biskoaz ar pez a vir Doue d'ar re gar Ansan. » Karout Doue hep Hen ofansi, Hen meulh hep skwizan, en eur rouantelez goret gantan, war eun tron kempennet gand Jezus, war ar penn eur gurunen plansonnet gantan.

Chilaonomp petra a welas Sant Yan, dre varzud : — Eur Ger neve, dindan eun oabl neve, war douar neve, hag enni tinell an Otro Doue gand an dud. Doue o se'han o daero, o neviet pep tra : « Kalono, maejo, obero. » Sklerijen o lugerni enni. Noz a-bed, an de dalc'hmad ! Nag hool na loar, sklerijen-all a-bed named hini Doue, sklerijen ar Oan didarach, muioc'h lugernuz ewid an heol. Eur vogerenn vein a dalvoudegez, tro-war-zro d'ar ger-ze da waskedi ar Zent ha d'o diwall. Daouesk dor warni. Digor e oa a bep tu, da bep koulz, da bep eur d'and dud vad, d'ar Zent : pinvik ha paour. An diaze dar Ger a oa ar zantelez ha kelennadurez an Ehestel. Karre 'oa, da laret eo unanet mad e oa an dud enni. Al lojeiz, al leuveenno, al leurio anei a oa aour rik, rag na zo en env, nemet tref gwerc'h ha talvouduz. Hanval 'oa ouz eun liz. Ar Zent er baradoz a wel Doue, a douj, a veul, a ador (azeul) Doue hag an Oan. Eno 'oa dastumet oll splander, oll enorio ar Rouans hag ar brinsed. Eun eien, eur waz-dour a rede dre dindan tron Doue da laret eo : furnez ha joaio, plijadurezo mad a bep sort. Er ger-ze gwe kaer, e-leiz a freuz enne. Frouz ar vuc... — Zant Yan a ra hed-ha-hed tenor ar baradoz.

En kreiz ar ger, an dinel, an liz pe ar palez-ze ken kaer, tron an Drinded Zantel ha tro-war-zro, o c'hourrijal, o tarrijal, Ele hag Arc'hele o veuli Doue war o zelenno aour, Ele hag Arc'hele-all, stouet d'adori ha da ginnig d'an Drinded ezenz c'hoez-vad ar pedenno « An oll Eledigo, war o eskeligo, ken mignon ken ru-benn a nijo dreist hon fenn. » « A nijo dreist hon fenn evel eun tol gwenn an eur parkad bleunio, zon ha c'hoez-vad ganto. »

En tu-deo da droun Doue, a-deo da Jezus, izeloc'h, kalz uheloc'h ayad ewid Zant all a-bed, ar Werc'hez « Gant daouzek stereden a ra he c'hurunen. »

Neuze e tou ar Zent-all pep-hini herve e zantelez e zellido (e verito), ar Verzerien gand o robenno ru (trech' int bet d'ar bed), ar Gwerc'hez gand o robenno gwenn, (trech' int bet d'ar c'hig), an Dokored gand o robenno liou roz (trech' int bet d'an dinoul, tad ar gevier.) « Gwerc'hez a bep oad, zantezed a bep stad, groage, intanvezet gand Doue krunet, Jezus o lakat war o fenn eur gaer a gurunen : « Ho korfo eme-An, oa temzorio kuzet en donar binniget, evel gwrio roz-gwenn pe lili pe spera gwenn en-keuz eul liors... »

En env an dud en em anveo, an tiadou tud en em

«setumo. Oh e vout unanet gand Doue, an oll vado a vo etrezo. Pep-hini an nevo lod en mado ar re-all hag ar-re-all en e yado. Bolante Doue a reint, ha Doue a rey o bolante. Rouine e vout; enorio, lore d'e evel d'ar Rouane ar muian g'gallouduz. Hanval e vout ouz Doue. Rost e vo d'e an oll vado, an oll levezon ouz o c'hoant, ouz o naon, ouz o zec'hed.

« Daoust pegen fur eo Doue, n'hall ket kaout welloc'h ewid ar baradoz, daoust pegen gallouduz eo, n'hall ket ober welloc'h, daoust pegen pinvik eo, n'hall ket rei welloc'h ! »

Pegen striz, pegen dister « pegen hudur eo an douar pe zellomp da gad an evit ! »

Setu, kennoiz, peadra da zonzal, d'evori gand gouel an OH Zent. Sellomp aliez da gad hon gwir vro. Netra welloc'h ewid ar zonzal anei da zifenn ouz ar bed, hon zec'h fell, an drouk-spered. Netra welloc'h zikour da zongen gant pasianted hon c'hoaz. Laromp d'achui evel ar C'hantik :

« En oll boanie kaled  
A-gorf pe a-spered  
Me zonzjo de ha noz  
En gloar ar baradoz. »

EUR MIGNON.

## ANKEN HA RANN-GALON

Kwitad ar ger !... Pion a laro an anken, ar rann-galon, ar boan-spered hag an nac'hamant a zo ebarz ar gerion-ze ? Kwitad ar ger ! Setu peadra da veur a Varz da stenna kerdon o zelen war veur a stum, ha c'hoaz, me gred, kaer o devo o stenna, n'hallfomp bikan rei reiz awac'h stad glac'harus kalon an den yaouank pa gwita ti madeleuz eun tad hag eur vam garet.

An deion-all, o tizrei eus Kerazec, e kaviz 'barz an train eun tonllad potred yaouank o vond d'ar servich. Eur rum ane a ouele; eur rum-all a gane evit trec'hi o foan-spered. Holl e oant potred a galon ha, daoust d'o zristidigez pe d'o laouenedigez pennaduz, war o dremmou e lenne an den : Leaded ha kalon eont !

Unan dreist ar reon-all a c'hones ma c'halon. Azeet e-unan en kornik ar watur, e zellou troet war an ti-gar elec'h an nevoa lezet e dud glac'haret, heman na zebante tam kemer lod nag en hirvoudou nag en kanaouennou ar re-all. Fellout a re d'ezan chom e-unan gand e boan-galon, rag poan-galon an devoa; gwech ha gwech-all e huade...

Pa finvaz an hent-houarn e weliz daon zen oajet mad hag eur plac'h yaouank o hija d'ezan o mouchoueron godel. Hen a lakaz e benn er preostrer ha gand eur vonez mouget gand an daerou e laraz gant poan : « Kenavo... ! Ken... a... vo ! »

Pec'het emaez an ti-gar, an train a gerze gant founuzder. Diragomp klennion, parkeier, gwe bihan ha braz a dremene buhan evel al luc'hed. Ar potred yaouank na droe ket e zaoulagad diwar-zu Kerazec. E zellou truezus a c'hoantae mond du-hont a-dreuz d'ar meneou beteg e

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a gwech d'e du ha  
Paris d'o hini, ha siouaz  
Paris a drech'har !

**II. — Penher Kergoz a glask tennan d'evotan karante, Melani.**

Eur haouez koz a oa drek kein Melani, gant he bisac'h war he skoa.

— Ar re-fur, emei, a chom er ger !

Ar plac'h yaouank a reaz eur zailh, a dolaz war an bini guz eur re zellou strafonhet, ha raktal e tec'haz endro, he gwad o virvi 'n he dioujod gant ar gouad vez he devoa bet.

N'enz forz; klevet he devoa pegement e kouste mont da Paris.

Gant pardon Gwengamp e oa bet peurdanailhet spered Melani : abous neuze e oa chomet en deun he c'halon eur gouli'ha na oa ket evit parea. Aboue, eun diaoul benmag a vije 'pad an de o c'houean teco diboell en he dioustrouarn hag o touellan he daoulagad gant pep seurt mitionion faoz. Da bep c'houiteladen o kleva, e krede d'ei anaveout mouez an train; pa wele eur bouilh moged o fibadan uz d'eur chiminal, an train a vije; ma strouse eur c'har en henchou, ma re kuan er gwabren, Melani a valse... da weleban train o tremen. Ar ganfarded deuz Kergoz o devoa tapet o zu warni, hag e rent goap diouli gan halient :

« Melani, arru eo an train ! »

Liez a wech epad ar zun e vije tapet evelse da besk-

barrouz viniget Plounevel, n'an nevoa biskoz kwitad, en pelhini an nevoa kavet, beteg tigent-va, evursted ha plijadur. Eur pennad e chomas evelse mantret ha kollet en o sonjou poanuz. A-greiz-holl eus e zaoulagad c'hilaz e ruilhas diou daken dour hag e zellou beteg neuze troet war-zu e vro a gouezas warnon. O sonjal hen frealzi e c'houleniz gantan pelac'h ec'h e evelse. N'eo ken a dakennou e ruilhe an dour war e ziouchod, ma goulen a lakas anean da ouela dourek, dourek... Da Versailh, emean, ec'h an. » hag hen da ouela gwaz-ouz-gwaz...

Petra a dremene en e spered ? Marvad e wele e dammik bugeez evurus, tremenet ken sere dre ar maeziou etoc'h ma oa ken dizourzi, ken digabestr o redek e barkeier, o vond hag o fond dislual ha dinec'h... Netra na boanie d'ezan e galon; netra na drubuilh e spered... Bemde e kave a bep tu karanteziou gwirion; ha breman aboue m'an euz kwitad e vam, e dad hag e c'hoar, eo aetru e hunvre kaer; n'an euz ten netra na den evitan; breman emean e unanik dilezet gant an holl; diragan na wel nemed eun hent hir hag ankenius, eur bed goullon en pelhini, psourkez Breizad divroet, e vo dizanve ha kollet.

An holl sonjou-ze mesket gant glac'har ar c'himinal a ra d'ean skei gwech hag amzer eur zell muioch truezus c'hoaz war diwean dremwel e vro, kuzet breman evit pell dirag e zaoulagad...

Kement-man am foanie da vad. Oh ! pegen kri ez eo ar vneaman Sedaze eur Breizad leun a galon hag a youl-vad perag kas anean keit deus e vro ? Perag na vefe ket lezet en Gwengamp, Zant-Briek, pe Roazon ? Da betra hen kas da Versailh elec'h marteze na gavo nemed Galloued, hen pelhini na oar ket eur ger gallek hepken ? Doare kri !... Hag en keil-ze kazarnioz Gwengamp, Zant-Briek ha Roazon a vo karget a C'hallaoued.

Ar Breizad yaouank-man, koulskoude, na c'houl netra welloc'h evit rei e amzer, e vus zoken, d'e vro. E blijadur eo serviji anezi hag hi, en dizro, n'he deus netra d'ober evitan; ha ze, ha ze hepken a zo hirie kirie d'e zaerou. Mond a ra d'eur vro dizanve, elec'h ma vo kollet ha marteze goapeet gand an estren, tud hag o devo seul muioch a blijadur o hegasi anean ma vo Breizad. Ma c'hallfe c'hoaz, paour kez divroet 'vo anean kad unanik bennag, eur mignon a galon da biou e larfe hep aon e dam lru-builh hag e kontfe e dammik poan... Mes, siouaz ! ar mestrou, peurlvian, a zo garo 'vid ar Breizad. Na welont ennan aliez nemed eun enebour, pe gentoc'h eur genaouek, war zigare na oar ket a c'hallek. Daoust, ma teufent dre hon Bro da veva, hag iut vefe gwiziekoc'h war hon yez ? Na vefent ket mes, ma Doue, petra e talve laret kement-man, ze na wellao ket stad soudard Breiz pellat deuz e vam-vro.

En-eneb na gavo ar mizion kentan nemed glac'har ha poan-spered. Na gavo ket zoken eur bellek kalonek da frealzi anean na da rei d'ezan nerz-kalon da vond war an hent eon; pegwir, en e gasoni direiz ha dife, ar Gouarnamant an euz zerret an tie kristen en pete e kave bemde ar soudarded, goude o devez poan, diduamant fur d'o c'horf ha d'o spered. Setu pez a gresk hag a wasa glac'har ar soudard yaouank, a lez war e lerc'h eur vue frank ha digabestr evit kemer eur vue-all, digompouez ha leun

ebrel; e leal, well e vije bet ganti mankout he meren eget an train, devez ebed.

Heman a ouie, michans, nag a garante a douge d'ean Melani; bemde, 'rog arruout, e c'houitelle nerz e gorf :

« Arru ou, Melani goz, » ha pa vije tremenet, e c'houitelle adarre :

« Kenavo, Melani baour ! »

Bet a zo tud hag a intende kan al lapouez; Melani a ouie petra lavare an train. Awechou, 'vije liir ha truezus e vaeuz vel yad klemmuz eur c'hi pa ve en kanvo d'e vestr : « Melani, na deui ket c'hoaz ganiut ! Gwechou-all e youc'he d'ei evel eun ankane o c'houerinad; deiou ive o vije faeuz ha divergont e zutaden : « Chekou, Melani, 'ouz aze bepred ! Floup, floup, floup ! » Pa gleva anean oc'h ober ar moueziou-ze, ar plac'h a vije pof. Kentellou-all a ouie c'hoaz an train. D'ar zun, pa vije Melani o tigeri he geno war drouj ar gar, hag o sellet ouz itronezed gant tokou plueannek ha robennou kaer ken a lufre, an train a lavare d'ei :

« Kergoz zaei ha voulouz ! Me oar pelac'h emean marc'had an teco-ze. Dont a rez ! Plouf, plouf, plouf, plouf, zaei ha voulouz ! zaei ha voulouz ! »

Nag a hunvre duduz a re Melani goude ze; kredi re d'ei, pa vije o hun en he gwele, 'n em zantout douget, evel eur bluen gant an avel, war gen eur gazek da hag a dote moged dre zindan he lost; gwisket kaeroc'h vit an heol, e tigouez zouden en Paris, koulz ar beuro...

« Melani, na deui ket ermez du-man da vont da c'horf ! »

Allaz ! rukunusa dihout ! Setu gwintret dibalour ar plac'h diwar gen he ankane ha kaset gant he mam da veskan koc'h-saont !

evitan a bep seurt doanion... Gwaz eo ze, rag ar soudard Breizad, renet mad gant mastrou poellus, a gar o vicher en e pelen hag a gas, nan hepken da bevar c'horf Bro-C'hall, mas dre ar led-holl brud vad hag eour polted Breiz.

An Yroder.

Kement a lavar ar Yroder n'eo nemet e vit.


E Bro-Zaoz e ve graet stad eus Bretoned ar vro-ze. Savet zo bet d'ar re ane a ya da zoudarded, rejimanchou ispisial, e lec'h en em gavont bodet etre kennoiz. E darn eus ar rejimanchou-ze (re ar Skoziz) e lec'h ober d'e gwiska ar gwiskamant soudard, e vezont lezet zoken en o gwiskamant beton. Pa gerzont war ar renk, n'e ket ouz son an taboulin evel ar re-all; bez' ez eus gante sonerien da c'hoari d'e war ar zac'h-binion tonion ar vro.

Ar rejimanchou-ze, ezom ebet d'hen laret, eo ar re wellan eus Bro-Zaoz. Brudet int dre ar bed-oll. Ha n'e ket souez, rag ar Vretoned-ze, o welet e ve graet stad aus e vel Bretoned, a deu da zavel o fenn ha da gemer muioch a galon d'o labour.

En de-all, hon mignon Taldir a c'houlenne, war ar Bobl, ma vije graet d'hon C'hannaded (deputed ha soudenrien) pleal mui evit na reont gant traou ar Vro. « Bez' e vije kalz d'ober, emezan, evit ar brezonek er skolion; d'ober diski ar gallek dre ar brezonek. » Eun dra vad e vije ive ma kerfent « goulen ma vije lezet ar zoudarded er Vro » ha graet ouz ar Vretoned e Frans eun tam evit euz Skoziz e Bro-Zaoz.

**STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLE**  
En ZANT-BRIEK, boulevard National  
**An Otrone VALLEE, deut war e lerc'h**  
Mekanikou evit al labour-dour

TEUZEREZ-HOARN TEUZEREZ-ROUVER  
Mekanikou dre betrol « Garder » ar re wella, ar gwella marteze.



Grosport bechhen : 15.000 gwechall ha 6.500 dournevez.

NA GAVER NEMET ENO : Dournevez houarn-holl koufou ispisial evit ar mekanikou dre daon pe dra bepred — Gwaskellou BOULLE, d'ober eo jistr, vont en droad vins-tro ha rod-lanz.

Trouc'herezed, mederezed, oler-brabant ha pep sort mekanikou eus ar gwella evit al labour-dour.

GWERZET EN PEP FIZIANZ HA MARCHAD-MAD

GOULENN e bureo ar Groaz : Gwerziou sant Eriean, al Labourer, sant Milio, sant Konevi, hag all. Eur gwennek ar pe.

Sain-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.

Koulskoude, ar Rouz koz na ouie ket pegen dallet e oa e vech; an train a zispilje d'ean mui-ouz-mui, rag an holl, braz ha bihan, a oa diroulet gantan d'ean. Na gavo ken a gonsorted d'ar zul d'ober eur barti gonto hag eur c'hornedad buton :

« Mab paour, a lavarez d'ean eur wech e wellan mignon, Trôl, red eo d'iu mont prim d'am meren evit gallek tapout an train gant ma metc'h ha ma greg. Taget 'vin gante, mar c'hwitan warnon. »

Ar Rouz a reaz eur c'hez d'ezan o zionskoua hag an de-se e tigouez er ger 'benn ma oa et ar zouben en tremp. Mez an train an evoa kollet e veren d'ean; na gavaz man vad ebed, ha pad an de e oe o c'horz-molad; ar c'houer koz a zante 'oa hennez e Ankou.

Pa oa Matelina Gourion, goude ar c'haoze he devoa gret gant Melani, o vont d'abarde d'ar ger gant he bioc'h, e tigouez ganti penher Kergoz hag e eont, o-daou gwisket a zoare.

« M euz aon, emei, e oac'h o vont da dapout an train ! »

« Train ebed, eme ar penher; n'e ket hennez am euz c'hoant da dapout. N'ho peuz ket gwelet Melani ar Rouz war ho hent ! »

« Salokras, emean du-hont war ar stank kannan ! — Hola, penherez, divezad hoc'h gant ho kannaden ! Ar c'hoivaz a chomaz ganti an er, gant kalz he devoa ouz e welet :

« Ma oun divezad, c'houi zo ive; na oan ket, zur mad, o sonjal saoc'h. »

(Da heuilh).

DIT-MA-DOA.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skood, evit ar breioù estren evit ar Breiz heñvel.

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furuez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek eo nio a Vreiz.  
Furuez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho pronek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz so ; ma ve tree'het,  
Ouspenn ar Vez, e vo Pec'hett  
MILIN.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otrou VALLEE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otrou MOAL, Skrivaniere, 27, bati Charner, Zant-Briek.

## EMBAÑNOU-KONVERZ

2 weonnek pep ardeunan-skritur,  
(Diskenn a breiz evit mear a embann diouss-tu).

## KUZULIOU EUR MIGNON

### BREIZIZ, LENNET HA LENNET BREZONEK

Perag lenn?  
Evit diskwiza hag en em instrui.  
Setu erra berr an de ha berrad a rey c'hoaz. D'an noz,  
goude koan, e vo goret brema, elec'h eur c'horniad, daou  
ha tri.

Petra da ober epad an amzer-ze?  
Na laran ket e vo eun dra fall kozal ; er c'hontrol ;  
mes petra da gonta bemnoz hag a heffe ober plijadur?  
Allaz ! aliez marvailhon korn an tan a drei war an tu  
direiz. Komz ar re goz, danevellou an amzer dremennet,  
buhe ar zent menez, na vent ken chilaoust gant sionided  
ha doujans. Pôtréd yaouank, merched awechou, a zav o  
monez uhelloc'h evit o zad hag o mam, o mestr hag o  
mestrez, hag a skrign hag ar fars a ve klevet, sionaz !  
diwar-benn traou hag a lakfe ar baganed da rua gant ar  
vez.

Gonzout awalch a ran n'heller ket dalc'hmad beza  
gant ar chapelad, pe gant an Aviel, pe gant buhe ar zent ;  
mes traou all a zo hag a zistag ar spered hag ar galon  
diouz an douar, hag o doug, en eur o diskwiza, war-zu  
an honestiz, war-zu ar jousted hag ar c'hoaz, e c'hell  
neuze ele Doue kemer o lod enne.

Hep mont pelloc'h, nag a gontaden vraz er gazetennik-  
ma, bep sul ! Nag a werz, nag a gantik, nag a bez rima-  
den, nag a zôn teunnet eus ar brava, ken eo eun dudi o  
lenn hag o c'hlevet !

Nag a neventi kuruz a hend all, ha, dreist-oll, nag a  
gentel lenn a furuez ha mad evit buhe ar bed-ma, kouls  
hag evit ar vuhe da zont !

Oh ! ya, en gron Kroaz ar Vretoned a zo peadra,  
m'hen lar d'ac'h, evit difreo ar zunevez penn-da-ben.

O klevet eun den a spered o koms e kaver berr an  
amzer.

O lenn traou bet zonet ha skrivet gant tud a spered,  
c'hoi ho pezo ar menez plijadur. Hag, a skend ar bli-  
jadur, petra gavfet c'hoaz en eur lenn ? Diskadurez,  
gouziegeez.

Eur levr pe eur gazeten vad a zo eun tensor. N'ho-  
c'h euz nemed kemer ennan heve ho c'hoast, ho koualc'h,  
ha miret evit eur biken ar pez ho pe-kemeret. Nag a dra  
dizanav evidoc'h, hag a zisket raktal en eur lenn ! Nag a  
dra tenval en ho spered hag a ve skieraet ! Nag a hent  
digoret endro d'ac'h war vro ar wirions hag a chome  
zorret ken ho poa lennet ! Nag a alen zavet enep ar re-  
lijion, nag a c'haon livet enep an dud a iliz, hag a ve  
skubet gont dion pe daer linen, vel ma ve skarzset ar  
c'houmoul diwar an ev gant eur baradik avel fresk !

Ya, ma zud vad, lennet, lennet kement, ha mui evit  
ar re fall, ha lennet brezonek.

Perag lenn brezonek ? — Nan euz ket eta a draou vad  
da lenn en gallek ?

Ma mignon ker, d'an dud disket braz, d'ar re a intend  
ar gallek uhel hag a zont hag a goze peurvnia en gallek,  
a zo traou mad da lenn er yez-ze a-dra-zur. Mes d'imp-ni  
hag a goms bepred etreomp ar brezonek, d'imp-ni ha  
na glevomp, kouls laret, nemed ar brezonek, d'imp-ni,  
bugale fidel ar vro-ma, ema gwell lenn brezonek, yez ar  
vro. Pehini eo an ezeta benvek ? ar c'hoza kasi dalc'h-  
mad, an hini ema goret outan an dorn. C'hanta, evit ar  
yez pe ar langaj ema menez tra, ar wella yez da zibun  
hon spered hag hon c'halon eo an hini ema bet digoret  
gant hon spered ha kelennet ha reizet hon c'halon.

Ha neuze, ha ne ve nemed unan disket en tiegez (ha  
brema, a trugate Doue, a zo unan bennag en pep tiegez),  
henez pe honnez, gant lenn brezonek, a hell rei da  
intent d'an oll. Setu ewelse ar re goz, setu ar vugaligou,  
setu ar zervijerion, setu an oll o klevet hag o biski war-  
eun-dro, dre ma zo enep eur plac'h yaouank, eur c'hrouard  
maruze nevez digouet eus ar skól, en e zorn eur levr  
kaer pe eur gazeten vad e brezonek, hag a zibun anezan  
evel eur person.

Goude, an tad pe ar vam, ar breur pe ar c'hoar hena  
a haro euz genik bennag da deuler c'hoaz muioc'h a skle-

rijen war ar pez a vo bet lennet, ha da zikour tenna eus  
ar lennadur ar gounid a zell ouz pep-hini.

Nerz an dud fall, ma broiz ker, a zo deuet ar loden  
vrasa anezi eus ar lennerezoù fall. Eno en em gavont hag  
en em glevont evel al loened vil er poull fank. Norz an  
dud vad a zenio eus al lennerezoù mad. Eno e vo sklerijen-  
net o spered war o dever ha nerzet o c'halon d'hen ober.

Mar en euz plijet d'ac'h ma aji, me ho ped da had-  
kemer Kroaz ar Vretoned, hag a lar d'ac'h, ma migno-  
ned, kenavo eur wech all hag hep dalc'h.

Even JEREL.

## HON ZENT KOZ

### SANT ILLUD

Sant Illud a zo ginidik a Vreiz-Veur. En eur vro  
hanvet « Clamorgan » e teuas war an douar. E dad  
Bican e oa unan eus penno-braz ar vro hag e vamm  
Rengilde e oa merc'h ar Roue Saloun I.

Goude e studii illud a yeas da zoudard dindan beli ar  
Roue Arzur, eun tonton (yont) d'ean. En em dibab eute  
eus ar gwellan. Buhun-ha-buhan e tapas grad, e tapas  
enorio. Ar Roue a gemeras anezan da vinistr.

D'an amzer-ze, e reas anaoudegeez gant sant Kado, tad  
priol manati « Lancarvan ». Ar Zant a alias illud da  
glask welloc'h enorio ha welloc'h mado. An otro yaouank  
a chilaouas hag a leas war eun d'ar gouent. Eno e studias  
ar Relijion hag ar Skritur Zakr. Kloc'areget e oa ha beleget.  
Eun toullad ldraveje e chomas gant sant Kado. Hag o  
tont da jonj d'ean da de'hel hag da zvel eur manati  
neve en kichen. Lanildud e oa hanvet. Sant Illud a oa  
eur mestr skol dez ar bujedtan. Mibien ar Brinzed a vije  
digaset davetan hag e-leiz ar re-all. Beteg eus Breiz-Izel  
e tigeo. Sant Samson, sant Wellas, sant Pol-a-Leon,  
sant Magloar ha kalz eus hon Zent koz-ze, deuas diwar e  
zorn.

Ewit bean zioul ha difrouz ha gallout pleal ezetoc'h  
gant e zilvidigez, sant Illud a lezas ar manati dindan  
beli Ishan hag e labour-en neuze e oa yun, pedi hag ober  
pinijen. Eon tri bla bennag goude, e teuas da jonj d'ean  
dout d'ober eun tamm tud da Vreiz-Izel hag a varvas en  
Dol, ar c'houec'h a viz Du, n'ouzer ket zur awalch pe storo  
bla. E benn a zo el Landebac'ron. Parouz Trogeri a zo  
dindan e vantel.

Porz-mor Aber-Ildud ha Lanildud er « Finistère » a  
zoug e hano. Bean zo ive eul Lanildud all e Breiz-Tra-  
mor, e lec'h e talc'her sonj bepred eus sant Illud.

Kelennadurez. — Goulet dre zikour sant Illud, tad  
ar Skolerien, ma savo skolerien ha skolio kristen.

Harpan ar skolio kristen a zo en o zav, dre hon alu-  
zeno, hag o kas bugale d'e. Bean war evez da c'hou  
petra a vo disket d'ar vugale er skolio dizoue ha klemm  
ouz ar red. « Lugerni a reint evel stered epad an eternite,  
an dud a gelen kalz a vugale war ar vad. »

## FOAR GALA-GOANV PLEUZAL

« Kala-goanv, kalot greun, deilho koset, deilho leun ».

Eur foar gaer, mar pij, brudet en pevar c'horn ar vro,  
pleustret, darempredet evel na zo hini war dro. De war-  
lerc'h goulet an Annon e ve. Groemp eun tamm tenor anei.

Petra lar an amzer ? Skler eo he lagad bepred. Eun  
tamm mad a reo-gwenn a zo. Marteze 'vo bras. « Reo  
gwenn war ar c'hresk, eme hon zud koz, amzer gaer ha  
fresk ». Lakomp « mar », bete gont. « Neb a laka mar  
birviken gaou ne lar ». Ha neuze, « An hini fell d'ean  
laret gevier, N'euz d'ober 'met komz war stad an amzer. »

Achu eo ma gopr, achu eo ma bla. N'am euz ket a  
defato, a c'hour-deio. Gant ma mestr e choman adarre.  
Eun devez war e hed an neuz losket ganin.

Gant muioc'h a galon e krogin gand ar bla neve.  
Eman ma luid war ma moe. Demp eta !

Ec'h a da nav eur en tour, pan arruan war ar blasen.  
Lugerni a ra an korolel el lagad an heol. Sell mac'h aon  
da laret ma fater da zant Per, da c'houlen foar vad

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

Eus Lanvellec.	2 skood.
Aotrou person Plufar.	1 skood.
Aotrou person Kerrod.	4 real.
Aotrou person Plouzelamb.	20 real.
An dimezell a Zant-Per.	20 lur.

An aotrou a Venorval an devoa kaset 20 real da Groaz  
ar Vretoned, e lec'h 4 real a zo bet merket dre fazi, ar  
zunt dremenet.

Trugare, en hano Doue ha Breiz, d'an dud vad a  
deurvo rei skoazel da zvel hon C'hroaz vraz ! Trugare,  
dreist-oll, d'an Dimezell a Zant-Per a zo en em ziskouezet  
ken madeleuz en he c'henver. Mil-bennoz-Doue a dleomp  
da lavaret ive da veleien ha tud vad Breiz o deuz gret eun  
digemer-ken kalonek da Dir-Na-Dor ha roet d'ezan o c'hou-  
manachou. A drugare d'eze, e c'hello bremañk hon  
C'hroaz kemer nevez ha nijal war he diouaskel neve.

## Eul lizer skrivet d'omp dez Kerno

Dan Aotrou Vallée, Rener Kroaz ar Vretoned,  
e Sant-Briek.

Otrou,

Deut e beteg ennon ho kazeten neve Kroaz ar Vre-  
toned ! Setu aze eun hano kaer meurbed hag a ra honor  
da baeon ar Journal brezonek.

El lizer-ma e kafot c'houezek real evit digas d'in, epad  
eur bla, ho kazeten neve. Plijet gant Doue rei d'ez ar  
c'hras da greski buan ha da vev pell !

Servicher d'oc'h otrou.

« Eun Noter hag a gar ar brezonek »

## Binnigadek an Ilizo. Aviel ar gouel

Arru en Jeriko Jezus a dreuzas ker. Ha setu eun den  
hanvet Zache, mestr ar Publikaned, eun den pinvik, o  
klask gwelet Jezus ewid Hen anveont. N'helle ket Hen  
gwelet eus a vesk ar bobl rag eun denig bihan e oa. Petra  
reas Zache nemet redek arok ha pignal war eur ween  
« Sikomor » rag dre eno e llec Jezus tremen. Pan  
arruas el lec'h-ze Jezus a zavas e zaonlagad, hen gwelas  
er ween hag a laras d'ean : « Zache diskennet  
hast-ha-hast, rak herie e fell d'in mont da lojan du-ze.  
Zache a ziskennas buhan-ha-buhan hag a zigemeras Jezus  
gant kalz a stad. Gourdrouz a zavas e-touez an dud pa  
weljont kement-se « Penoz emeint, mont da lojan da di  
eur pec'her ? » Zache avad a laras d'Hon Zalver, e-mesk  
e gomjo : « Eah hanter eus ma mado, Otrou, ac'h an da  
rei d'ar bevien ha, mar 'meuz goret gaou ouz unan benn-  
nag, e roin peder gwec'h an dalvoudegeez. Jezus a laras  
d'ean : « Herie eo digouet ar zilvidigez en ti-man e zo  
ennan eur mab d'Abraham.

Mad an den a zo deut da glask ha da zavataat ar re oa  
kollet.

Kelennadurez. Jezus na glask ket well evit zilvidigez  
ar paour kez pec'her.

Resped, doujanz, karante d'an iliz, ti an Otrou Doue,  
ger ar gristenien, dor ar baradoz !

Ho korf, kristen, a zo ive eun iliz, ger an Otrou Doue,  
tron an Drinded. Diwaled da vastari ar c'horf-ze gant  
kañhar, louzdoni ha duoni ar pec'het !

## Lennit ar Vro

War ar Vro kelaenn-gelc'h hon mignon Jaffrennou,  
eus dibab pennadon-skrid eus ar gwella, en o zouez  
peuz gant Loran, Naden, Barz Melan, P. Priost.

« Paour koz sant Per, emean, d'ont pegouls e vo sintet, bezet ha kempennet hoc'h iliz? Na ve ket groet enor d'ac'h gant ho pugalet? » Ha mo war ar blasen.

E veer o stigan ar stallo. Bean vo treo ewid an arc'hant : danve, dilhad, prieraj : skudello, terinenno, asiedo... ha me oar petra : binvio-labour : eler, palio, grifo, skraperezed, mekaniko da drailhañ lizet, e-leiz a dreo!

Prestig ec'h arrou ar marc'hadourz kistin : tñn ha magad, hag ar marc'hed ec'h hopal : « Kistin tomm, tomm ha tomm ! » Na rafet ket a zroug d'in tomm bego ma bizied a-uz d'eur c'hruilh bennag. Rion 'meuz da vege ma bizied. An ivin-veo a renkin da c'horri 'meuz aon.

Krog eo ar marc'hadourien d'arrouet, gand o meluzenno birr. Gwelet a ran ané o vont hag o tont, daou ha daou pe dri ha tri. En em dastum a reont, d'en em glevet. Mar gellont gañ an dud! A-wecho e reont o marmouzien. An tieien a dle en em glevet ive d'ober paeon o marc'hadourz en he liz.

Krog eo al loened d'arrouet. Aman e vo trouz bremez, n'eo ket c'honi lar, paadra da vouzari tud. Sed eur vioc'hik du, eur pez tez d'ei, n'eo ket bet gorroet daou pe dri de zo, ha bet laket spilhenno toar da zerc'hel he leaz ganti. D'eur Gouloard eo honnez, disfiel! O, bet war dihun ha war evez, hardi. « D'ar foar ec'h eer da daret ha da vean tapet, ha da zont d'ar ger da laret ». Er foario e ve gwir laret : « Treo ar bed-man a zo a skrap ; an hini a dap, a dap! » Diwallomp, koulskoude, diouz an tromplerez. Er foario evel er ger e ve an honestiz, al lealdad, da heuilh ha da virot, ar gonsianz da chilaon. Ar c'hristen n'hall ober foar gwec'h a-bed diouz e gonsianz! Diwall da daret ha da vean tapet. Da ze avad eo red bean fin.

Warlerc'h ar vioc'hig du e zo arrou unan ru, eur goz tarlasken, didant, dilez, treut, dizolo he c'hosto. N'on ket hag en vo kaout gwerz da honnez, ewit da vean bet eun tol troad en he fonz digand ar pot-zouad ardig dont 'meuz ar porz. Well e vije d'ean bean en em westlet d'eur Zant pe da El mad eur marc'hadour bennag! N'e mad an hini goz nemet d'ober praden ha c'hoaz biken tamm kig n'ey warni, margo eo sinac'h, mar n'eo digor he jave, he bruched.

« Chi! C'hit! C'hi, » eme an ebeulien-dener, an ebeulezed, ar ronseed, ar c'hezegened o tifoupan diwar bep hent, o c'hoazrin an eil ouz egile, o saludi an eil egile.

« Me, Me, Me! » eme ar zaoud neve alet o vont war-lerc'h o loeio, aon braz d'è da goll o mibien. « Beu! » eme ar c'hoelad-taro, zello fall en o fenn, o muello en o fri. Gwasan pejo tado-zaoud! Mar teufe, Dona da viro! ar re-vez da bennfolli, e ve tud nec'het aman avad.

« Me, Me! » eme an denved, spourronnet, red houtan ha jechan warn e d'ober d'è mont war-rôg, aon d'è dirago skeud, dirag an drouz!

« Qui! Qui! » eme ar siko bihan, en o c'haset war ar plouz. Kement ha ken bihan, ken ma sav ar gazek limon he skouarn.

Cho! daou garr a zo krog ha krog diwar boez o mouel, kement a dud hag a dreo 'zo ken eo bec'h ha bec'h gaillet finval.

« Petra! teozet oud, eme unan? »

« N'es ket da fachan, eme egile. Gwelet a res na ran dre blijadur, d'am c'harr tourchan da hini. »

Arôg lakat al loened er foar, eo red paeon an droet, ar pasaj, an treiz.

Ar marc'hadourien a zo digor o daoulagad gante, pep-hini ous e du da welet pere a c'hoerzo oute. Heuilh a reont a-wecho o c'hoant zeul-ouz-zeul.

« Pegement an anoar-man? (oner). (Eun anoar-vla)? »

« Daou ugent skoed? » — « Petra, trelatet oud! Sell penôz eo chutet he diadre. » — « Chutet end-eunn. » — « Ya chutet zurt! » — « Mar n'oud ket te muioc'h chutet ewid honnez, e paes ker danve eur brago. »

« Bean 's po kant pemp? » — « Pelec'h vo kaset d'id? En ez kwele? » — « Kant dek, eta, da vihanan? » —

« Laret a ran d'id, daou-ugent, skoed, ar priz just, n'ey ket eur gwennek welloc'h marc'had. Well ve d'in miret anei da daou-vlaian. » — « C'hanta, rab eur pez ugent real, da vihanan? » — « Rin ket! » — « Ma, kerz, eta, pez direzon. Ha laka anei en ez kwele p'arri er ger. »

Heuilh a ra anei. Plijout a ra d'ean. Na lemmfe ket e zello diwarni, eur begad. — « Ma, laka ar pez ugent real etre daou-hanter, da vihanan, hag ec'h eo d'in. Stag anei aman. Sell ouz an hosteli-ri-man hag ec'h ees da gaout d'arc'hant rak-tal. » — « Ma, kas anei ganid, eta, da vihanan, med e rei dek gwennek werc'h-pupun d'ar pôtr. » — « Ya, ya, ha te roo an nask d'in ha daou wennek chanz, peb a vanac'h ha kloz ar marc'had! »

Ar moc'h hag an denved a chom er park foar, ar zaoud hag ar c'hezek a ya en eur park-all.

Unnek eur anei, kreiz tol ar foar. Bepred ec'h arrou marc'hadourz.

Na cheman ket pell en foar ar moc'h hag an denved.

Re a drouz a zo. Mont a ran da welet foar ar zaoud hag ar c'hezek. Bean zo mesk. Bivi reont oll er park evel eur c'horaden verion ru. Tud o vont hag o tont, o komz, o varc'hata an eil gand egile, o chipotal, blejadek, skrijadec, gouignadec.

Tol ar c'hreisto! An daouzek Abostol o tremen dre Bleuzal. An Anjelus a zo war vranskel. Moez ar c'hleier ha trouz ar foar, kaerat muzik! Kaeroc'h ewit muzik ar Roc'h ha Trageri gwec'hall. Sionaz, nebeut eus an dud a zonz zaludi Rouanez an nenv. Eno e poac'hont o biz. Kalz ané o dije groet welloc'h foar.

Aman e weler kement liou buoc'h a zo : Bris, ru, roualek, pechar, melen, ar-ru, arvelen, rouz, gwenn, du.

Sell aman unan ru emeur o paouez da werzan. Kaerat buoc'h, Doue d'he frezervo! Eur vuoc'h norman, don, braz, ledan, mad d'an dever; loeio kaer a deu ive diwarni. Sionaz, arrou eo kez. Red eo difoaran diouti. Ar mah yaouank a zo krog en penn ar Ruen-Vraz. Eman ar marc'hadour o verkan anei. D'ar « C'hoajo-Berr » « Runan » eman da gas. Dever vad he deuz groet en ti. Zed e oad ganti, ha hi ive a oa zot gand ar ger. Gout a oar eo gwerz-tek. Gouelan a ra d'he mestr ha d'ar vugale. Ar pôtrik krog en he fenn a zeu ive an daero en e zaoulagad. « Homan, emean, 'oa ma buoc'h, ar Rouanez war-dro. Buoc'h-all a-bed na oa ewiti d'en em gannan. Hag an oll a ouie. » Bale a ra ar zaoud. Kwitat a reont ar park foar. Mad eo warné.

Demp ive da foar ar c'hezek. Bean a zo tizek ewit touseh ha war ar bern da choaz. « A bep liuz marc'h mad » a ve laret. Ma, bean a zo ive a bep liou. Du, ru, du fin, ru fin, arroun, arvelen, melen, pommelet-glaz, glaz, arc'hlaz, rouz, arrouz, liou ludu, gel, gwenn : cheulien, ebeulezed, kezegened, ronseed.

Eur blijadur eo gwelet ar marc'hadourien o vale en o mesk, o rei bac'had da homan, boutaden da hen-hont, gwaskaden da heman, herlinkaden da houn-hont, hag a-wecho o tapout eun tol troad-buoc'h bennag da zidon ané. Ar c'hezek na blij ket d'e bean meret.

Klask a zo warne. Bale, trolat a reont dre ar park. Trouz a zo. « Pegement an eal fall-man? Pegement ar c'hrotaj krevek-hont? Pegement ar gazek dall-man? Pegement ar laouek-hont? He-man n'eo mad 'med da gas da Baris d'ober chaousis (zilzig)! Honnez n'eo mad 'med da « Gadas ». »

Tanoat a reont er foar; ober a reer marc'hajo, o trin-kan dindan an tinello.

Arrou eo goulo park foar. — « Sell aman eun hankane o vont war ar c'harr-sparlet! Dont a res da welet? » — « Est eo el limono. » — « Diup! » — « Bale a ra ar park gantan. » — « Mont a rafe da Baris gantan, eme ar mestr, c'hoest, lorc'h ha stad ennan. » — « Distag anean, eme ar marc'hadour. Deuz d'evan eur chopinad. En em glevet a reomp. »

Amanik e zo eun tamm trouz. — « N'ey ket ganid? » — « Nan, hansellet eo, weles ket? » — « Da betra d'erc'hel anomp aman? Ha ni kaout gwerz, marmouz! N'ez ket eur gwennek en ez kodet? Ma vije bet an archerien aman! Ze n'eo ket brao d'ober : breman ha lezel ar marc'hadourz goude gand ar perc'hent! »

Baleomp breman da welet an treo. Er c'hoad a zo e-leiz a staho : greajo, askipajo, fliperi, danve. D'ar flip ec'h a kalz, da breman treo mad ha marc'had mad : ugent real hag evel-se eul liviten vad! Eur mobitier (arrebauri) penn-da-benn haltfer da zavel er foar gala-goanv.

Arrou eo an dud yaouank d'o zro. Pinvik int. O gopr a zo war galz ané. Pep-hini a bourve e dreo. Arrou adarre war ar blasen. Eur vogeden a zao diwarni ken ken eo dall an den. « Kistin, tomm, tomm ha tomm! Daouzek a wennek! » Deut potred! Deut merc'hed! — « Kan a zo ive, hag eur c'haouiadez zunerez gwenneien o lenn planedenno! (1) »

Kuz-heol eo anei. Emeur o pakan ar stallo. Poent eo mont d'ar ger. Ken da via!

(Divin!)

### Torfejou ar Vezventi

E Plouhinek (Bro-Leon) eun labourer-douar, Yan Kogol e hano, an euz skolet toliou kontel gant e vamm. En em roet e oa da eva, eur pennad a oa, ha diwar ar gwinnardant eo an deuz graet e dorfed dinatur.

Korf maro an intanvez Pastol a zo bet kavet e touffe eur park e Treglamuz. Evet he devoa he bannac'h hag ar gwad, o sevel d'he fenn, an euz mouget anei.

E Gouezek (Bro-Leon) eur pôtr yaouank a driwac'h vloaz, Fransez Madek, a oa bet gwerz o tont en iliz, hag hen gwall dommet d'ezan gant an evach. Eur pennad goude, pendallet gant eur frouden bennag, e pignas war tour an iliz hag e lammis d'an traou. Lazet eo bet war an taol.

(1) Mar n'eo ket red hec'h diaviz ewit nel arc'hant da eurt tud-ze. Bet for hec'h po c'hant! Seto he plouaden ha na gont 'ntra fenn eurt!

## AR BARZ SOUDARD

Setu ton ha komzon pöz kentan « ar barz soudard », eur pez barzoniez brudet braz e Bro-Iverzon, e lec'h ec'h eo bet savet gant ar barz Mour (ar Meur, e brezonek), Ken anavezet eo Mour en Iverzon ha « Brizeux » e Breiz. « Gwellas » eo an hini an eus troet ar pez-ze e brezonek. Eur gentel a zo da gemer dioutan : Ewel « barz-soudard » Mour, ar barz hag ar skrivaniere breizad a dle stourm evit e vro, gant e skridou hag e ganaouenno, betek e hunad ivezezan.

Ar barz ya - ouank d'ar bre - zel 'zo et e - kreiz

ar stour - ma - dek e vo ka - vet kle

ze e dad en e zorn a lu-ger, e de - len ger war

e skoaz a dre - gern. Bro ma zad, lar ar

barz sou-dard, mar be an holl ouz - id tru - hard

ma c'hleze be-pred evid-oud 'stourmo; ma-de-len be - pred e-vid-

oud ga - no.

Ar barz yaouank d'ar brezel zo et,  
E-kreiz ar stourmadek e vo kavet;  
Kleze e dad en e zorn a lugern,  
E delen ger war e skoaz a dregern.

— « Bro ma zad, lar ar barz soudard,  
Mar be an oll ouzid trubard,  
Ma c'hleze bepred evidoud 'stourmo,  
Ma zelen bepred evidoud 'gano. »

## AL LABOUR-DOUAR

« Tri zra  
A zalc'h ar bed en e zav,  
Beg ar vron, beg ar zoc'h (zouc'h),  
Hag eur beg-all evel ouzoc'h »,

An hadererez.

Pan 's an dud etrezek Paris hag ar broio krech ewit tec'hel, e sonj d'è, diwar al labour, ha rozellat sour, hag en na reont peurluvian nemet frilan paourante, e oa red ijinan binvio d'ober al labour gant nebeutoc'h a dud, hag eo deut an hadererez. Al labour-loened, avad, a zo star-toc'h breman. Dalc'hmad, bemde-bemde, nemed ar zul, eman ar vourl en o c'herc'hien.

## ITRIK DA C'HORRO

« D'ober berz » ho peuz klevet laret  
Eo welloc'h itrik ewit nerz. »

Da c'horro ive, eo mad an itrik.

Ar zaoud n'houlont ket rei o leaz.

Bean a zo zaoud hag a ra o fenn mouz a-wecho, a dournez da rei o leaz. Petra d'ober? Rei fest ar vaz? Gorteit! Tapet ho pao, zon evel bijer, war o c'horrazell. Gwasket davad eur pemp munuten bennag hag o paouezoint da vouzan.

Ar gwinterezed.

An darn-all, herligh (debron) d'è, a sko tolio treid gand ar c'helorn hag ar vatez pa dostere da c'horro. Tapet eun tamm korden-prenn pe eun nask dre diarog o zez. Skoulmet anean drek junto o c'horrazell. N'eo ket red stardan re. Pa gavoint d'erc'h e torio d'è.

GOULENN e bureo ar Groaz : Gwerziou sant Erwan, al Labourer, sant Mitio, sant Koneri, hag all. Eur gwennek ar pez.

Saint-Brieuc. — Imprimeur Saint-Guilhem.



# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skodez, evit ar broioù estren evit ar Broioù keltiek.

SKRIVANIERIEN

Eus al labourioù pe d'an Odro VALLEE, Rener, ru Zant-Dewat, Zant-Briek.  
pe d'an Odro MOAL, Skrivaniere, 27, bati Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep arondennad-ehritur.  
(Diskenn a biz evit meur a embann diouz-to).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo heur ha c'hoar en Breiz.  
Furver ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek ar alio a Vreiz.  
Furver ar Geiz.

Dalc'hitt bepred d'ho prezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek.  
Yes ar feiz eo; ma ve lez-hat,  
Ouspenn ar Vez, o ve Pec'hett!  
MILIN.

## LIZEROU DA « GROAZ AR VRETONED »

Lizerou a zigouez ganeomp eus a bed tu, leun an darnvuian ané a skouarn kristen pe a gomzou mad da rei kalon d'ho skrivaniereien. Sed aman pennadoù distaget diwar daou ané.

Aotrou rener,

Eus ar gwellañ eo ho Kroaz. Plijout a ra ! Plijout a reio mui-ouz-mui gant an *Aviel*, *Buc ar Zent* hag an *Histor Santel*. Gout a ouzoc'h pegén azen e teomp da vean sionas ! an de herie, diwar-benna hon relijion !

Ar skundennoù « laket war a Al labour douar » a goañfa ho Kroaz.

Ho keloid a zo mad ive. Ma vije muioc'h ané ha berroc'h war bep-lini ma vije nemet well a ze.

Eur Mignon da Groaz ar Vretoned.

Aotrou rener ker,

Va list da gas d'oc'h va gwella goure'hemennou.

Lennet hag adlennet am euz, gant ar vrasañ laouene-digez, an oll nivereñnoù eus ho Kroaz ar Vretoned bet embannet a-benn breman. War wellañ ez'it ganti himad. Remerket am euz, war ar bempved hag ar c'houe'ched nivereñ, *Klennou an den yaouank aet da Bariz* ha *Kanaouen ar sholaer*... Re hira e vije displega aman an oll bennadoù dreist am euz kavet. Klada, am euz aon, a die bezan eul les-hano, Gwellat kenskrivaniere ho peuz aze gant e zont-skriva ken reiz war eun dro ha ken euz da intant. Bez e c'hellit lavaret d'ezan, ma her c'havit mad, ma diduel am euz kemeret diwar e *Kanaouen ar sholaer*.

D'oc'h ez leal.

M. LE PROYOST, *Vikel-vraz*.

Kaerat enor evit hon C'hoaz hag evit he skrivaniereien kaout eul lizer ken kalonek eus a berz hon arc'havieler kalet a Landreger. Trugare ha mil bennoz-Doue d'ezan !

Eul lizer ken kalonek all hon deuz bet ive digant an aotrou chaloni, Abgall, vikel-vraz eskopti Kemper ha Leon :

« Ho Kroaz, emezan, a blij d'in kentan. Kalz a vad a c'hallfe da ober, dreist-oll er parouzioù eus hon eskopti-Kemper a zo stak ouz ho-pro Tregar ; dre ma 'z eo ar yez eno henveloc'h ouz ho yez Tregar. »

Hon tra a gemeromp diwar al lizer-ze evit erbedi hon C'hoaz da velefen ha da dud vad Bro-Leon. N'hon deuz ket a c'hoant d'ober gant ouz ar c'hazetennoù mad a zo bet savet pell-ze e bro-Leon. Na tomp ket an hevelep labour ganto, o vezan na reomp ket a « bolitiek ». N'hon deuz ken c'hoant nemet rei dorn da viret ha da zevet, ar vuo vreton e Breiz war eun dro gant ar vuo gristen. Dre eno, e-lec'h mont a eneb, e reomp a du gant ar re a labour war ar « politik » mad, en eur brienti hag euna an hent d'ezo, kouls lavaret, dre viret ha gwellaat spered ar vro.

## Trived zul warn-ugent goude ar Pentekost.

Aviel ar zul.

Keit ma komze Jezuz d'ar bobl, e tenas unan eus ar penno-braz d'Eu kaout ha, stouet dirak-An, e lare « Otro, ma merc'h a zo o paoutez da vervel. Mar keret, avad, dont da asten ho torn warni, e teuy bue enni arre. Jezuz a zavas dioustu hag a yeas war e lere'h gant e ziskribien. Setu eur plac'h, klav daouzek via 'oa gant an

diwadan, o tostet out-An, seul-ouz-seul, hag o stokan ouz beven e vantel « Ha n'hallfen, emei enni hec'h unan, nemet stokan ouz e vantel, e ven gwellet. » Jezuz a zistroas hag a laras, o welet anoi : « Ma merc'h, bet leun a fiao, ho fe he deuz ho pareet. » Ha kenkent ar plac'h en em gavas yaoc'h. Pan arruas Jezuz en ti an den a ligne uhel-ha pa welas eno sonerien ha kalz a dud all o trouzal, e laras : « Eet ac'han rag ar plac'h yaouank n'eo ket maro, kousket n'eo ken. Hag an dud da wapet Anean. Pa oaint eel emez, Jezuz a yeas en ti. Krigi a reas en dorn ar plac'h yaouank ha houman a zavas. Hag ar vrud a redas dre bevar c'horn ar vro.

*Kelennadurez*. Kristen, mar teu ar pec'hed da stei hoc'h ine d'ar maro, diradet da gùd gwaz ar Binijen. Na chomet ket en stad a bec'hed. Rutilha a raffac'h eus an eil vuollen en eben. « Neb a ve tarchet e zilhad, eme zant Krizostom, na dal ken a évez ouz an tarchadenno. »

Ar plac'h a oa bet gwellaet gant eur stokaden ouz mantel Jezuz : Kristen, o komunan, bet fianz ; Jezus a wellao, mar keret, oll glenjevo hoc'h ine.

## LEZEN AN DISPARTI DIRAG AR « SÉNAT »

Boue ditioñ eo krog ar Senedourien da gozeal war lezen an disparti. Ober a refomp bep sun had-a-hed, an tenor deuz ar pezi a vo bet lavaret ha gret a neve.

An deputez o deuz tailhet d'imp eur chupen ; ar senedourien a zo karget da welet hag hi a junte mad ; goude, prezidant ar republik a wrio, ha neuze, pa vo drouk ha mad ganimp, e vo gwisket d'imp ar chupen neve.

Uz a oa bet toet d'ar senedourien ru, abeuz ar Fran-masoni, da lezel an treo er stad ma oant bet lakat gant an deputez : ar chupen a zo tailhet mad sur, eme, lezet-hi evel ma 'man. Setu eun dizamm kaer d'ar senedourien ru ; n'o devo man d'ober nemet votan. Red e vo d'e c'hoaz koulskoude stourm ouz ar gosteen-all, ha gant kement-man int gwall-neh'et ; keun o deuz n'hallont ket ober c'hoaz d'ar re vad tevel, hag e vije vól o jeu ; man d'ober nemet kas al lezen d'ar Gambre war he c'hiz ha skrivet warni pen-da-beu : « Mad, mad, mad sur, ha Done d'ho pinigo ! »

Mez ar senedourien vad a zo ét holl d'ober ar vadel, da sparlan an hent ouz potred an disparti. Divardelli a vo red ober, 'róg tremen, ha ma na vau ket al lezen e krap, ar re ru a dapo war o fui meur a dól, hag ar bobl a gavo eno eun tam plijadur ha kelennadurez vad.

Diriou eta, da dion eur, e tigoras an abadan. An otrone Chamailard, Couverville ha Lamarzelle, a skoaz an talioù kentan.

An otro Chamailard : « Herve natur ar « C'houcordat », n'hallet ket ober an disparti anez bean 'n em glevet gant ar Pab ; gret eo e gis ma n'hall ket ar Pab difrenzan hep-hoc'h, na c'houi hep-han. Ar pezi a ra d'ac'h, avad, bean ken faez, eo dre na doug ar Pab na kleze na fu-zuilh da rebarb ouzoc'h.

Ouspenn a zo ; ar pezi he devoa zinet Frans ar bla 1801, n'e ket d'ac'h da zinac'h, 'mez ober dismegans da gement hini a zalc'h da enor ar vro. »

An otro Lecomte a respont evit ar gouarnamant hag a damall d'ar veleien ha d'an iskihibien bean-toret da gentan ar « C'houcordat ». N'e ket ni a zifrenzan da gentan, emean, ar veleien eo hag ar Pab ; mez ouspenn ar veleien a zo 'kas difrenzan ; an dud dre-holl n'houlont ken nemet ze.

N'e ket heman gaot divezan an otro Lecomte.

An otro Rouvier, prezidant ar vinistred, a bign d'e dro 'barz kador ar... govier : Ar gouarnamant, emean, e fell d'ean 've votet al lezen 'benn an de kentan bla. Ma na ve ket achu 'benn neuze, me a lezo ma flas gant eun all.

War zo 'kaser ar vouest endro : 183 mouez a zo eneb an otro Chamailard ha 30 a-du gantan.

An otro Couverville a zo da gomz : Al lezen-man, emean, a zo tra a bouez, hag e c'houennan ma vo klevet o ali gant an holl maerion hag o c'honsailhoù aróg votan anei.

An otro Deschanel, bet prezidant ar Gambre, a lavare an deou-man d'e elektourien penoz ar vot na ro gwec'h ebet da c'houi gwir mennoez ha zont an dud ; pa ret c'houi eul lezen evit an holl, goulnnet eta d'vianan gant ar parrouzian petra sonjont deuz an disparti. C'houi 'car e zo unnek milion a voterien en Frans, ha n'euz nemet daou vilion aot o hanvan ar Gambre.

An otro Vallé a respont : Klevet hon deuz c'hoaz kement-man ; n'e ket mad d'imp koll hon amzer gant had-ladennoù. Votomp ha kwit ha fin dre eno !

205 mouez a vot eneb an otro Couverville, ha 59 a-du gantan.

Deut eo tro an otro Lamarzelle : Me c'houlen, emean, na vo votet lezen an disparti nemet goude ma vo hanvet ar Gambre ar bla deu. Breman zo tri bla, al loden vrasañ deuz an deputez ru o devoa touet d'o elektourien e oant eneb an disparti ; perag e c'houioat breman war an tu-all ? Abalamour e kred d'e penoz a-wech votet, al lezen a chomo votet, hag an dud a blego d'e adarre da viz mae. Gortozet ar vot kentan, ha lavaret diveget d'an dud : ma klasket an disparti, roet d'in ho mouez !

Neuze, na vo netra da damall d'ac'h.

176 mouez a zav eneb Lamarzelle ha 102 a-du gantan, rag ar republikaned ar-ru o deuz votet evitan.

Digwener an euz komzet an otrone Gourju ha Dupuy, daou ru, mez n'int ket tanet evel ar re-all.

« Me zo katolik, eme an otro Gourju, ha na nac'hin ket ; n'on ket kas gwaskan den ebet, mez n'houlant ket bean gwasket. An disparti a vezo fall evit ar peoc'h, fall evit al liberte ha fall evit ar republik. »

En eur vro evel Frans, n'hallet ket tremen hep eur c'houcordat ; eur yec'hed eo evit ar vro. An Hiz he deuz zinet betek breman seiz ha hanter kant konkordat en pep seurt kouzioù. Ar broioù o deuz ezom a relijion da vevan, ha na ran nemet dishrenvel breman ar pezi a lare Gambetta, Ferry, Paul Bert, Waldeck-Rousseau hag an otro Comb, hen e-unan. (An holl a dro warzu Comb, mez n'eman ket eno.)

Pan eo ar C'houcordat eun dra red, pesort digareon a dalve da zistronj anezan ? C'houi lavar ar Pab hag ar veleien a zo zavet eneb ; ar seurt govier-ze a zo re vraz da vean kredet. N'e ket abalamour eo bet an otro Loubet en Rom hep bean digemeret gant ar Pab, e toufet da derri ar C'houcordat, da laret eo, da zisklerian brezel d'ar Pab, rag me responto d'ac'h : « Parag 'ta n'ho peuz ket disklariet ive ar brezel da Vro-Zno, mare Fachoda, rag gwasoù dismegans ho poa bet eno evit en Rom. »

Kement-man na ra netra war ar senedourien ru, pan int bouzar-kloc'h.

An otro Dupuy, eur c'hoz vinistred, den a bouez, ru mad al liou anezan, a ra ive eur c'hrog warne.

« Na vo ket a beuc'h biskoaz en eur vro, emean, keit ma vo heskinet ar relijion. Perag 'ta e heskiner ar relijion en liou buo ? Perag mont betek an disparti ? Ma 'neuz gret ar Pab dismegans d'ac'h, gret d'ean dislaret ; ma 'peuz da 'n em gleun deuz an iskihibien, miret ar C'houcordat, hag ewelso ho po-lec'h da rebarb oute. »

Me n'ouñ ket katolik, mez d'ar relijion e tale'han kalz. C'houi etreoc'h, a zo o tanzen eur gwall bred. An dud, pa n'o devo ket a relijion a lavaro foei d'ho lezennou ; ha petra deufet da vean pa no vo ket al lezen ete an (an ha c'houi ? Kentan mad 'peuz d'ober eo miret ar C'houcordat. »

Komzou Dupuy na gouejont ket war ar vein ; hiniennou denz ar senedourien a reaz evel p'o dije c'hoant da glask an tu d'asanti gantan ; eun dermaden beanaq a eo klevet, mez netra ouspenn, sionuz.

(Da heuilh).

DOR-NA-DOR.

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

Eul lennevez eus Koskaradek, Langout.  
Eur mignon, eus Langout.

8 real.  
20 real.

## LIZER HON C'HENVROAD BRUDET

An Aotrou 'n Eskop Dubourg diwar-benn an DISPARTI

Eman an otron 'n eskop Dubourg o paouez skriva da gwestion e eskopti Ker-Vilinou eul lizer diwar-benn an dispart. An dispart etre ar gouarnamant hag an iliz.

« War ar poent-se, emezan, n'hon deus ken d'ober nemet senti ouz hon Tad Zantel ar Pab. N'en deus ket komzet c'hoaz. N'en deus ket kaset c'hoaz e c'houe'h-mañnou d'an aotroune an eskibien. Da c'hortoz, avad, e tefe peb den mad, en kement parouz a zo en eskopti, en em glevet evit rei o liano, ar re ané a fell d'ê miret o beleien da vadezi o bugale, da eureji o zud yaouank, da ofenna ha sakramanti, da veredi an dud varo ha da bedi gant an anaon. Eur barouz n'hall ket dere'hel gant ar vue gristen, hep belek, ze zo sklér. « Lezet eur barouz ugent vloaz hep belek, a lavare person Ars, hag, a-benn neuze, e teuo, sur a-walc'h, ar barouziatiz da azeuli (adori) loened. » An dud vad hag a fell d'ê dere'hel d'ar vue gristen a dle en em glevet, eta, hag em unani diwar-vreman evit beza prest da harpa o beleien, pa vo deut ar c'houls d'hen ober. »

## EWID AN TIRGEZIOU

« Beg ar zoc'h ha beg ar vronn,  
Gante o-daou e vevomp. »

Lez mad.

Fell a ra d'ac'h kaout lez mad ? Delc'het net dindan ar zaout, net o jakedenno, net o zazo, net an daouarn da c'horro, net ar c'helornio, ar podero.

Netra welloc'h ewit skrivellat ha broustan ar zaoud evel ar c'hezek. Klevet a ret, pôtr pe blac'h-zaoud ?

Gouret *ter gwech bemde*, evel hon zud koz, nemet pa ve ber-ber an de. Muoc'h aman ho po diwar kement ha kement a lez, ewit mar na c'horroet nemet diou wech bemde.

Mare noz eo an drauan,  
Mare kreiste ar paouran.

Al lez war-lerc'h an diwanennerez a ve trentoc'h. Galout a reer en implian, koulskoude, d'ôzan yod, da dibri boed he da zével al loenedigo.

## AN ISTOAR SANTEL

Ar bed, labour an Otro Doue.

Doue a zo bet a-oll-viskoas. Na oa, da gentan, na den, na tra. Evuruz e oa war e droun, en e varadoz, gand e familj santel, ar Mab hag ar Spered.

Pa deuas en e zonz, e kronas, ewid e vrasan gloar, gand em gonz, hep na skouer na danve, an env hag an douar, ar pez a zo en env ha war an douar.

An treo a oa disklabe ha digempenn hag an Otro Doue da lakat uz enné. C'houe'h devez, tda laret eo, c'houe'h pennad amzer, liir pe hirroc'h, e padas e labour.

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a jache d'o du ha  
Paris d'o hini, ha siour,  
Paris a drec'har !

II. — Penher Kergoz a glask tennan davetan karante Melani.

Melant a respontez d'ar penher :

— Ma oua divezad, c'houi zo ive ; na oan ket zur mad e sonjal ennoc'h.

— Ma zonz me a zo ennoc'h koulskoude, hag aboue pell zo, evel ma ouiet. Ma kar ho tad konsanti gant ma eotr, ha c'houi konsanti ganin fenoz, ha lavaret ar gir oue e gortoz aboue keit zo. . .

— Pesort gir ?

— C'houi oar, emean !

— C'houi zo prez warnoc'h avad, emei !

— Ya, rag ho karout a ran kalz.

War ze, eur zutaden vad hag a strakaz en ér evel eun tol skourje ; an train a oa o tont, herr gantan ; evel ar c'harun o tidarzan deuz ar wabra arne, hag o framman war an douar, e tremenez dirage, tan ha moged o luc'han war e dro, e kreiz kentan tenvalijen ar zerr-noz.

Troc'het e oa ar gomz d'an daou amouros. Pelloc'h, an train a c'houtellaz adarre ; pa dolaz an den yaouank e zaoulagad war e zous, e wellaz he zellou troet du-ze warlerc'h an arotant du hag e santaz an dizesper o krouez war e galon. Koulskoude, daoust d'e anwaz, e reaz deuz da c'hoaziz :

— Dampet a vol emean, me na blij ket d'in klevet

An de kentan, Doue a reas ar sklérizien ; an eil, an oabl ; an driad e tispartias an douar digand ar mor, hag an douar a dolaz glazur ha frouz ; ar bevared devez, Doue a stignas en oabl : an heol, al loar hag ar stered ; ar bemped e lakeas ar pesked da neual en dour hag an evned da nijal dre an er ; ar c'houe'hved e reas huc d'al loened ajvav war an douar. Ha goude bean kavet mad e labour e laras : « Groemp broman an den da roue war al loened ha war an treo. Groemp anean diwar hon fatrom, hanval-beo ouzimp. » Hag an Otro Doue o tapout eun tam pri, o stumman eur c'horf, o rei eur choneaden warnan, setu an den kentan. Hanvet oa « Adam » da laret eo « tennet deuz an douar. »

« N'eo ket mad, eme an Otro Doue, d'an den bean en e-unan. Roomp d'ean eur barez, hanval outan. » Ha Doue o ligas eun hun d'Adam, o tennan digantan eur gosten. Diwar e zorn e tenas ar plac'h kentan hanvet « Eva » da laret eo « mamm an oll dud beo. »

Ar reizved devez, da laret eo, aboe, Doue a ziskwizas. *Eun tol lagad.* Kaaran daon bez-labour, Adam hag Eva, hon zud kentan ! O ino gwenn-kann, didarc'h, dibec'h, a oa hanval ouz Doue. Evuruz e oaint. Ar boan-gorf n'halle ket stagan warne, nag ar maro kennebeud.

An Otro Doue, Krouer pep tra, e zo dleet d'Ean, eus hon feuz doujan, karante, anoudegez vad. O tiskwizan ar seized devez e lar d'imp tremen hep labourat da zul.

## AR SKOLAER NEVE

Eur vro iskiz a zo aman, en Frans ! Meur a zen an em gavo souezet o klevet eman ar re vihan o tonet breman da vean mestr d'ar re vraz, ha penoz ar re-ze vihan eo ar vistri-skol.

Ar mestr-skol a zo breman n'eo ket henvel ouz an hini gwechall ; hennez a oa eun den evel ar re-all, a re skol d'ar vugale, a ouvae 'n em dramen diouz an holl, hag a dalc'he stard d'ar vro. Allaz ! maro hag interes eo an diwean deuz ar re-ze, ha war o be 'zo zavet eur patrom neve hag a ra d'imp huanadi.

Ar skolaer gwechall a yea d'an oferen, a gane awe-chou e kichen ar person ; an hini neve nan a troad ebed d'ean en iliz na zul na gouel, nemet ha zantout a rafe bean well, arra gant an dud.

Ar skolaer koz a re ar c'hatekiz er skolioù, a roe kentelioù fur d'ê vugale-skol evel d'ê re e-unan ; ar skolaer neve a den d'ar vugale bep sent planedennou euzus, fallakr, dizoue, a zigor o sperd d'ar c'hradennou faoz hag o c'halonon d'an dizonestiz. Ped ha ped skolaer a zesk d'ar vugale nan euz ket a Zoue !

Breman, evit peurachui o labour, e tenont da zigori diraze henchou-all ; potred ha-merc'hed a veskont war ar paouk-skol evit alian ane d'an drouk, ha presan en o c'halon ar siou fall da ziwan.

Ar skolaer koz a zente ouz ar gouarnamant, a gare ar vro, hag a oa den da zifenn hec'h enor hag he frankiz. Ar skolaer neve a ra fae war uzou ar gouarnamant, da laret eo, war deveriou e garg, hag a lavar e fell d'ean bean dishual, pa vo drouk ha mad gant al lezen.

an noutant-ze o c'hwibanad ouz me dioukouarn ; ze-blantout a ra d'in klevet evnik ar maro.

— Na gred ket d'ac'h, emei, penoz an dud o deuz lakat ar wetur-ze da vale, o deuz mui a sperd evit an dud a zo dre aman ?

— C'houi, emean, a c'houlten treo iskiz digant !

— Me gav d'in, emei, e tie bean brao bevan elec'h ma c'h a an train. Ken liez gwech evel ma tremen, e c'hoant-taan mont gantan.

— Farsal a ret, Melani !

— C'houi avad, war am euz klevet, na blij ket d'ac'h an train. Mat drouk ha mad gant an nep a garo, me vo red d'in mont gantan da Paris.

Well a ve d'ac'h eta gorloz da zont du-man ma vin distro. Neuze, me lavaro d'ac'h ma zonz. »

Ar penher na oa ket evit kredi d'ar pez a gleve. Chom a reaz digor e c'heno gantan evel eun den boemet. Ar plac'h a dapaz he barez war he fonn, hag a yeaz d'ar ger, war he fouezik. He daou zorn war he diour'hroazel.

Pan arruaz, na zie'hoazel ket eur gir d'ê had ; laouen braz e oa, o vean ken ézet-all dizammet deuz ar penher ; n'he devoa nemet son na deuje d'ober he fiellou d'ê c'herent. Gant ze e tivizaz an nosvez-ze, en he gwole, mout endro kentan m'hallje ; tapout a rei er 700 skood a zo en pres he mam, dibab 'rei eun temmik pakaden deuz he dilhad pardon, ha dio war rôk ! marfad, na chomo ket pad he bue, e kreiz ar fank hag an teill, da ruzan hec'h rér 'vel eur velc'houeden.

An de warlerc'h, Melani a gasaz he dilhad emesk treo du, da vord ar stank, hag a reaz he fak, daoulinet war ar men-kannan. Neuze, e wrijaz en he c'horfon daou

Nan euz evitan, emean, na Doue, na bro, na mestr ebed.

Penoz, a laret-hu, e c'houzavet gant ar skolaerien tezenno evellen ? Perag ? Unanet int, ha pa stoker eur biz d'unan, emant kant mil o youc'h'al a-bonez o fenn.

Eur skolaer e-unan n'eo netra, na den ebed, ma ve e-unan o tere'hel penn d'ar gouarnamant ; mez kant mil skolaer a zo kalz krenvoc'h evit dek ministr hag eur prezidant republik, hag evelse e teu ar re vihan d'ober al lezen d'ar re vraz.

Hogen, eun dra 'zo gwir ; ar skolaerien, hirie, a zo falloc'h c'hoaz eget ar gouarnamant dre ma eo bepred ar mibien gwasoc'h evit o zad.

Tu zra a zo toneet gante ! distrujan ar vro, pep relijion ha pep mestr, hen lavaret o deuz n'euz ket pell ;

Ni, eme, eo ar Skolaerien ru, kefou tan diwanet da danan kement mad a zo war dour Frans.

Eur gentel gaer a roont d'imp ; tud ha n'o deuz ket kredenjan Aviel, a den da fontan mestr, rag 'n em glevet a reont. 'N em glevomp eta ni ive, nan evit bean mestr ha kemer ar vaz gant den ebed, mez evit lakat Doue ha pep mad da ren drezomp.

GOULENN e bureo ar Groaz : *Gwerzioù sant Erwan, al Labourer, sant Milio, sant Koneri*, hag all. Eur gwennek ar pez.


## STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLÉ

En ZANT-BRIEK, boulevard National

An Otrone VALLÉE, deut war e lerc'h

Mehanikou evit al labour-douar

TEUZEREZ-HOUARN TEUZEREZ-KOUEVR  
Mekanikou dre bestrol « Gardner » ar re walls, ar gwella marc'had



Gouezet betekhen : 15.000 gwaskell ha 8.500 dournerez.

NA GAVER NEMET ENO : Dournered houarn-holl koufrou ispisial evit ar mekanikou dre dan pe dre bestrol. — Gwaskellou BOULLÉ, d'ober eo jistr, vont en droad vins-tro ha rod-lanz.

Trouc'hered, mederedez, eier-brabant ha pep sort mekanikou eus ar gwella evit al labour-douar.

GWERTZET EN PEP FIZIANZ HA MARCHAD-MAD

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
Er Lanhuon

GOULENN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillemme.

vilhed a vil lur, ha gant ar yalc'had-ze war he bruched, a tizroaz d'he meren, zard evel pemp kwennek.

— Daou lizer a zo evidoud, eme he mam.

— Evidon ? emei. Gant piou ?

— Zell, ha te lavaro d'in.

Janadik ar Floc'h a skriva eul lizer deuz Paris hag Olier, penher Kerguz, eun all, pa na grade ket donet da gomz gant Melani.

— Gant piou eo da lizero ? eme ar vam.

Reukan 're livan eur gaou prim ha prim. — Gant ma c'hinitervez deuz a Vontroulez ha gant ma c'hendero zoudard en Paris.

— Yac'h int ?

— Ya, hag ober reont d'ac'h ho goue'h-mennou.

— Ober ma re d'ê ive, pa skrivi, eme ar vam. An tad a lavaraz kement-all.

Pa oe debret meren, Melani a dolaz eur zell endro d'oi 'n eur zonzal : « Fenoz, na welin ken an treo-man. Kenavo, ma mam ha ma zad, kenavo, ma zi ; kenavo, ma fres ha ma gwele ; kenavo !

En eur vot d'ar stank da beurgannan ha da vesad he c'houe e lavare outi he-mian : Nag ou evuruz ! hag a hini a garje bean 'n em flas ! Mez eur vouez-all a responte d'oi : Evuruz out c'hoaz, mez benn varc'hoaz na vi ken. Diwall deuz da gont !

Da diduan he sperd, ec'h azeaz war ar c'hlazeu, e harz eur vojennad lan melen, da lenn he lizero.

(Du heulth).

DIR-NA-DOB.



# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoad, evit ar broion estren evit ar Broio Keltiek.

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar an Breiz.  
Puruz ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gand ar gallek ez aio a Vreiz.  
Puruz ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho prezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspen ar Vez, e ve Tre'het!  
MILIN.

SKRIVANTIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLEE, Renes, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Sbrivantier, 27, balt Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep aroudennad-ristor.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann diouz ar).

## BEVET « KROAZ AR VRETONED »

Evel eur goulmik wenn a bign war-zu 'n Env sklear,  
Pa wel ar vrumen-vez war ar mezoù skignet,  
E nij distual, dreist trouz ar bed, hag huel an ear,  
« Kroaz » enoruz « ar Vretoned. »

Brumen ar Politik a zisparti ar Vro ;  
Dirag ar Groaz, avad, emomp oll unanet,  
Mar deo evit hor Foiz hor c'halonou bero,  
Karomp oll « Kroaz ar Vretoned. »

Ni zo kristenien dreist pep tra, daoust pe seurt omp,  
Pe douget 'vit eur Roue, pe Republicaned ;  
Lezomp 'ta 'r « Politik » evit Doue, ha lennomp,  
Pep sizun, « Kroaz ar Vretoned. »

Ha pa deufe, eun deiz milliget, an diaoul,  
Dre neuz lezennou fall en Ifern diouanet,  
Da ziskar 'n oll-groazion ; en he z, daoust d'e youl,  
E chomo « Kroaz ar Vretoned. »

Ha pa vent pilet oll diwar 'n huelennou,  
An hent-braz, ar vered, gant eur bern haillonned,  
E lugesno beleg ar Varn er c'halonou,  
En hor Breiz, « Kroaz ar Vretoned. »

Bennoz-Doue d'oc'h 'ta, Renes ar gazetenn  
A oa ker brao lakaat oll Vreiziz mignoned,  
O komz hep-ken d'ezo, bepred, a draou Kristen !  
Ha bevot « Kroaz ar Vretoned ! ! ! »

Th. PILVEN ar Zevellec

## MIZ ENEOU AR PURGATOR

Eur vaonez a lignez vraz, ar gontez Reüska, eo he  
deuz koutet an histor-man :

Eun den eus va c'herent, emezi, an euz roet eur  
skouer meurbeud glac'haruz dre e vuez difeiz ; mes Doue  
ra vo meulet ! distroet e oa war-zu ar vuez kristen.

Va zad koz, ar prinz Lubomirski, Ieshanvet Salomon  
bro Pologn, er pen kenta eus e vuez, a nac'has e Zoue  
hag e ene zoken, evit en em rei oll da blijadurezoù ar  
bed-ma. Evit deski d'ar re-all ober evelton ec'h en em  
lakeaz da skriva en levr. Chom a rea avelchou divezat  
diouz an noz da labourat war e levr. Eun dro, ez oa skriviz  
ha leun a enkrez gant ar pezh en doa en he spered hag ez  
euz da bourmen. P'edo oc'h ober eun dro er c'hoat a yoa  
endro d'e vaner, ec'h en em gavaz gant eur vaonez koz,  
a zammc war he azen delion seac'h ha keuneut maro.

— N'ho peuz ken micher nemed houman, emezan  
d'ezi ?

— Aliz ! nan. Neuz oa nemed va fried evit gounit  
bara d'in-me ha d'hor bugale. Marvet eo, sionaz evidon,  
ha ne jom ket zoken ganen peadra da bac'a eun oferen  
evit renoz e anaoun.

— Delit, emezan, en eur denier d'ez i meur a bez aour,  
guit lavaret kement ha ma kerfet a oferenonou.  
— Hag hen war e giz, hep teuler evez ouz bannoziou  
ar vaonez koz. Diouz an noz, er memes dervez, edo  
alarre stag d'al labour a garie kement, pa welaz eun den  
diwar ar meaz en e zav, ne finve tam dirazan.

Petra vez te aman ? Pion an deuz da lezet da zont  
beleg eunon ? eme ar prinz. Hag hen o son ar c'hloc'h  
endra c'helle evit gourdouez e zervicherien da veza bet  
ken dievez. Pa deujont, n'oa den er gampr nemed o mestr.  
Respont a rejont d'ezan n'oa doa gwelc't netra, ha den ne  
gomprenaz petra oa c'hoarvezet.

Antrouz, d'ar memes heur, ar memes den a yoa  
adare dirak ar prinz. En dro-man va zad koz ne c'halvaz  
den da zont. Teuler a reaz e bliuen war an daol, sevel a  
reaz en e zav ha mont a eure war-zu an den.

— « N'euz forz pion out, gwalleurus ma 'z out, petra  
glaskez-te aman ? »

— « Me zo pried an intanvez ho peuz sikouret daou  
zervez-ze ! Goulennet em euz digant an Aotrou Doue ar  
c'hraz da bac'a hoc'h aluzen en eur lavaret d'oc'h ar  
c'homzour-man hepten : An enc ne varo het ! »

Ar skend a deuzas kercent, hag ar prinz Lubomirski  
a c'halvas raktal tud e di. Dirazo e rogaz dioc'h tu ar  
skrid edo oc'h ober evit rei da gradi n'euz na Doue nag  
ene. An tammoù roget eus ar skrid-ze a zo miret c'hoaz.  
Pa varvas ar prinz, eur beleg a zavas er gador e iliz-veur  
Varsovi evit displega e vuez dirak e gorf maro. Konta  
eure en doa klevet gant ar prinz ar pezh em euz lavaret  
d'oc'h, hag an dra-ze a zo skrivet e levr an tiegez.

Tennet eus kannad ar Galon Zakri).

## DEK HA C'HOUEC'H UGENT A DUD

ha warne triugent Breton

BEVET EN ZANT-MALO

Al lestr dre dan, Hilda, o tont eus Southampton, Bro-  
Zaoz, da Zant-Malo, a dlee douara e porz Sant-Malo disul  
divezan, da beder eur eus ar beure. An amzer a oa gwall-den-  
val gant an erc'h a dalc'he da goueza aboue ar sadorn da  
noz. Ar c'habiten na velas ket tour-tan al Liorzon a verk an  
hent etre ar gerrek, hag e skoaz e lestr ouz unan eus ar  
c'herrek-ze. Troc'het dre an hanter, an Hilda a yeas buhan  
d'ar strad, ken buhan ma eo beuzet an holl a oa warni,  
merdeidi ha treizerien, an darnvuian eus ar re-man, mar-  
c'hadourien oignon eus Roskoñ.

Seta aze, en berr gomzou, ar c'helo spontuz a oa kaset  
dilun ar beure, dre ar c'hazetennou, da bevar c'horn ar  
vro.

Aboue, dro ma tigoue keleier-all, ec'h anavezet penoz  
n'euz bet biskoaz c'hoarvezet war ocheon Breiz gwasoc'h  
na krisoc'h darvoud evit heman.

Digweuer d'abarde, da beder eur, ar lestr dre dan,  
Hilda, a gwitaz Southampton, 127 a dud warni, 30 mar-  
tolod saoz, 17 treizer zaoz, gwrage, bugale, otrone, ha  
82 Breton deuz Roskoñ, Cléder. Ploneskat, marc'hadou-  
rien oignon o tizei d'ar vro goude bean gwerzet o mar-  
c'hadourez. An amzer a oa fall hag ar mor a c'hour-  
drouze. Wardro nao eur noz, hanter hent da Zant-Malo,  
eur vougen deo en em ledaz war ar mor, ha na weled  
ken netra ; an avel a zirellaz hag al lestr, tol-distol  
kreiz an denvalijen, a zousaaz da gerzet. An erc'h a goueze  
ive, ha pan arruaz al lestr, da unnek eur, war hed tolj da  
Zant-Malo, na welaz na golo tour-tan Frehel na hini al  
Liorzon, gant ar vougen, an erc'h-fu hag ar gwagennou  
konnarek.

Ar c'habiten, Gregory, deuz Southampton, a oa ken  
kustum d'ober an hent etre Bro-Saoz ha Zant-Malo, (tre-  
gont via so 'oa o veaji, hag ouспен daou vil gwech 'oa  
tremenet el lec'h-man), ma kredaz d'ean, daoust pegen  
riskluz 'oa an tol, e hallje tremen etre ar reier a zo evel  
ken liez a bech stignet war c'horre an dour etre enezen  
Cézembre ha Zant-Malo.

Hed an noz, daoust d'ar rion ha d'ar c'hast-amzer a  
re, e oa chomet war zav, da ren e lestr. Rei a reaz urz eta  
da vont bepred war rog. An holl, koulz laret, 'oa kousket  
en o gwelc'hoù d'ar mare ma laraz ar c'habiten ar gomz-ze :  
« Eomp war 'rog ! » D'ar mare 'oa o vont ! Zouden, al  
lestr, dallet gant an denvalijen, a skoaz a dol-lans gant  
eur roc'h hanvet an Nor (dor ar bed-all evit an dud paour-  
man), hag a dorraz en tri bez. Kercent an dour a oa  
enni ; an lán a strakaz gant ar mor o tont warnan, hag  
an dud, dihanet gant ar strouz hag an drouz, a lampaz  
deuz o gwelc'hoù, hanter-noaz, kreiz an denvalijen, ar  
glao-erc'h hag ar mor dirall.

Klevet e oa ar c'habiten o huchal abouez peni : « En  
han' Doue, laket eur vsg war neun evit ar mec'hed hag  
ar vugale ! » Hounnez 'oe diwean komz a lavaraz. Al lestr,  
ha na oa ket bet pemp munut war var, a os lonket gant  
ar mor, tud hag holl.

Bek ar gwerniou a chomaz ermeaz, hag eno e krapaz  
eun toullad treizerien ha martoladed ; eno o cheujont

daouzek eur istribilh 'uz d'ar gwagennou, hanter-wisket,  
femmet gant an avel skorn ha glebiet gant an dour. Liez  
a hini a gollaz kalon, skorneto izili, hag a varvaz gant ar  
riou ; darn ane a chomaz peget ouz ar wern, hag i maro.  
Eul lestr a gavaz ane d'ar zud wardro kreizle, hag a gasas  
gant c'hoarvezet ane, pemp Breton hag eur Zaoz, ha na  
gant ket c'hoaz maro-mik. Ar re-man zo breman war  
droad, hag o deuz kontet o istor.

Hinennou mad an evoc'n em dolet ive en dour ; ar  
re-ze a varvas raktal gant ar riou hag eo bet dilonket  
gant ar mor o c'horfou reud ha skiaset war ocheon Zant  
Kast, Pleveion ha Zant-Jacut ; 82 a zo ane betek breman ;  
15 o devoa gallet pignal 'n eur vag ; mez houman a yeas  
da gol. hag e oent beuet.

En Zant-Kast, zo dek amenezur oc'h ober archejou,  
ha bourkiz holl o charre korfoù maro. An archevien a zo  
dre holl o harz furchal ar re varo, rag ar varc'hadourien  
a oa gante arc'hant o c'hoarvezet, gant darn ane betek 5 mil  
skoad.

Bretoned a digoue deuz Roskoñ, gant kri-forz ha  
kanvo, da glask o zud, ha Zoazon a deufe deuz Bro-Zaoz.  
Tiegez Pichon, deuz Roskoñ, he deuz kollet bevar  
deuz he re ; koulskoude, da barrouz Cléder eo ar brasen  
kollou, herve larer.

Ar peurest deuz ar c'heleier a vo klevet c'hoaz, a lak-  
fomp ar zun a den. Doue da bardoni an anaon !

## LEZEN AN DISPARTI

DIRAG AR « SÉNAT »

'Bons ar zun-all, ar senadourien o deus kerzet prim ;  
bouc'het mad eo o labour ; benn fin ar zun-man e vont  
tost da hanter ; ar gosteun vad a zo koll pen-da-ben evel  
'barz ar Gambre ; mez bepred o lavar : keit ma hallfomp  
e tifenfomp.

Dilun e komzaz Monis ha Las Cases ; dimeurs, Hol-  
gan, Boudenoot ha Lamazelle ; dirion, Lamazelle ha  
Vidal Saint-Urbain ; digweuer, Vidal Saint-Urbain ha  
Thézard ; disadoro, Marcère hag ar ministr, Bienvenu-  
Martin. Neuze 'oe votet vit gout ma oa mad kregi da stu-  
dian raktal artiklou al lezen, goude ar pledeou a oa bet  
gret betek hen.

174 mouez eneb 108 a divizaz hadkregi raktal, ha  
185 eneb 97, studian an holl artiklou war o hed.

Ar re fall, dro int krenvoc'h, a stlej ar re vad d'o  
heuilh.

Setu breman petra zo bet lavaret e korz ar zunvez.

Dilun 13. — Monis a bign er gador. Ar c'honkordat,  
emean a zo achu ; gret an euz e dro, ha poent eo chanch  
anvan. N'eo mad ken nemet da lakat safar ha tabut.  
Gwech ar gouarnamant a sko gantan war ar veleien ;  
gwech ar veleien a sko gantan war ar gouarnamant, hag  
evelse eo bet a-viskoaz. Mad eo disober ar pezh a zo bet  
gret fall ; gounit an holl eo, koulz hini er relijion evel hini ar  
gouarnamant.

Las Cases a zislavar Monis pen-da-ben. Anez eur  
c'honkordat, emean, etre an iliz hag ar vro, na vo na  
pench na frankiz evit ar gristenien. Perag o deuz aou  
ar gatoliked rag an dispartij ? Abalamour da bac ar veleien ?  
Nan ; abalamour e teuer da waskan war o c'hredennou ha  
da drubuilhan o c'honsians. Ma na vijent ket hadcha-  
dennet goude an disparti, en em gavjent evit ; ar ve-  
leien n'eo devo ken a bac, mez n'eo deuz ket aon rag ar  
baourante ; ar relijion a zo bet ganet ha maget ekreiz ar  
baourante. Na c'houlen ar gatoliked nemet eun dra hep  
ken : frankiz, a zo talvoudusoc'h evit arc'hant ; mez gont  
a reont n'eo devo liberte nemet dre ar c'honkordat, ha dra  
ze e fell d'e miret anvan. N'eo ket evit rei d'imp liberte a  
tiferuzet ; anez ze, ho pijsa restaolet da iliz Frans, kwit  
a zigare obed, bec'h ilizou hag he holl madou, ha na ket  
ket Koulskoude, pa dorer eun dimezi, pep hini a gomer  
e dra ; hogen c'houi a vir tra an iliz. Sonjou fall a zo en  
ho pen, a dra zur, en kenver ar relijion. Lezomp a gont  
an disparti, mamen a reuz hag a vrezel, ha labourcomp  
kentoc'h evit krenvaat ha pinvidikad ar vro.

Dimeurs 14. — Halgan a gomz : « N'eo ket a-du gant ar  
relijion eo gret al lezen ; en he eneb, na faran ket. Brao e  
komz a liberte, pa vo red d'ar gristenien klevet an oferen  
en kartiou. C'houi lar na dennet ket diganimp an ilizou ;

mez bean zo el lezen paadra da harz ac'hanomp d'ober Impri dioune, pa voint, pa garo ar larner, root ive d'an dud dioune.

Er lezen, na gomzer nemet a brizon hag a frèjou evit ar veleien a lavaro eur gir, a rei eur gammad da dougen an dud da heuilh ar relijion; hogen, na vo ket diez kaout tud da damall ar belek; penoz a rei neuze? Tremen e vus, er prizon? Eur lezen fall eo lezen an dispartii.

Boudenot a gomz warlerc'h. Kredi ra 'vo frankaet war al liberte pa vo votet an dispartii. Gout mad a ra e lar eur gant; mez red eo zenti d'ar franmasoned.

Lamarzelle eo deut e dro. Heman 've gwel chilaonet. « Jezus-Krist, emean, an euz tennet an den adre daouarn ar gouarnamanchou ha laket d'e an a-part e liberte a-z-eün da c'halloud ar gouarnamanchou. Aboue neuze e zo brezel etre ar Gouarnamant hag an Iliz, rag n'hall ken heman gwaskan konsians e sujidi, hep ma an Iliz da harzal outaa. Ar gouarnamant a glask neuze mougan mouez an Iliz hag ar relijion, evit mougan ganti konsians pep den hag ober adarre sklaved gant an dud, evel da amzer ar baganed.

Ar Gouarnamant hag an Iliz a zo red d'e 'n em glevet, rag anez ze e vo brezel, ha war liou e koueo ar bec'h? Warnomp-ni.

Dirion 16. — Lamarzelle a zalc'h gant e blede, hag e tiskoue eur wech c'hoaz na vo ket a liberte evit ar gatoliked goude an dispartii, p'eo gwir n'hallfount ket, e liez a barrouz, paean beleien da chom gante.

Vallé a respont da Lamarzelle gant eun teod flemmuz ha binimet: « Eur relijion neve a zo diwanet en Frans hag a zo ar c'ontrol-beo dez ar relijion gatolik. Red eo dispartian. »

Vidal Saint-Urbain a gemer e blas; heman a zo ar-ru al liou anean, koulskoude na gord ket e gomzou gant re Vallé: « C'houi emean, ar re ru ac'hanoc'h, a lavar d'imp an euz c'hoant braz ar bobl da vean dishualet ha tennet adre daouarn an Iliz. N'e ket gwir kement-ze; al loden vrasan deuz ar bobl na intent gir ebed ebarz al lezen; na vo barnet gantan nemet pa welo ar veleien o paouez ofe-rennan ebarz en ilizou; an de-ze al lezen a vo barnet gantan, ha c'houi, vo ive. »

Digwener 17. — Vidal Saint-Urbain a achu e blede. Keun an euz n'e ket bet goulennet ali an holl elektourien arôg lakat an dorn er gwall-labour-man. Al lezen-man n'eo, d'e greden, nemet an tol kentan tar'haet gant ar relijion; reo-all gwasoc'h a vo skoet c'hoaz. Rag se, e kont war ar « Senat » da douasaat al lezen, hag e tigas souj d'ean penoz n'e ket breman, pa ver o votan retrejou d'ar vicheourien, eo tennan o bara gant ar re ane a labour war an treo iliz.

Lecomte, ar « rapporteur », a respont n'o deuz kavet ar veleien nemet ar pez a glaskent, hag eo red votan al lezen-man, pe votan goude eun all wasoc'h.

Disadorn 18. — Marcère a zav hirio e vouez: « Al lezen-man, emean, n'e ket gret, kaer a zo lavaret, da rei frankiz d'ar c'honsians, mez evit mougan anei en eur wongan ar relijion. Ar franmasoned o deuz ive o relijion, hag e fell d'e laerez o ilizou d'ar gatoliked evit enori enne an Drouk-Spered. Doue da bellad diwar Frans ar walen e c'hoantaet teurel warni. »

Bienvenu-Martin a deu da glozan ar breujou, o rei d'ar

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a jache d'e du ha Paris d'e hini, ha siouaz, Paris a droc'has!

### II. — Penhor Kergoz a glask tennan davetan karante Melani.

Kentan lizer a digoraz 'oa hini ar penher:

« Melani, emean, pa ho karan, c'houi n'ame'charet ket. Gouliet ho peuz d'in ma c'halon gant ho komzou kri. Ma te'chet ac'han, na retornfet ken. Gallout a ret lavaret kenavo da Vreiz-Izel; me, siouaz, renko ive kimiadi da virviken ouzoc'h. »

Ma c'halon a zo mantret gant ar glac'har. Petra 'ta 'den d'hon dispartian? Pegoulz am euz lavaret d'ac'h e harzjen ac'hanoc'h da gemer ho plijadur? Na damallet ket d'in vel partiet, rag an hent-houarn, na pa dispartife hon bitajennou, n'eo ket barrek, evit ma c'helo, da zispartian hon c'halonou! Ha zonjet mad ho peuz nag a drouk a refet d'ar re-all ha d'ac'h ho-unan o heuilh ho pen? nad? Eur verc'h penherez kwitad he zad hag he mam, he c'herent, he migaonezed, eur Vretonez nac'h he bro, eur plac'h yaouank terri he fromese d'an nep he c'har!

An hent-houarn a zo brao da welet; eün eo, ha kompez eo, ar c'har a zo buhan ha plen da vale; mez bean zo en hent liez a skoaset hag a c'hrenegel kuzet, hag ar c'har a zo diez da c'houarn. Diwallet pelec'h e vec'h kaset. Sonjet mad 'rôg ober ganac'h ha ganin-me daou zen gwall-ecuruz. Zonjet mad 'rôg ma flastran dindan eun Ml ken pouner evel ma vo d'in koll ac'hanoc'h. Sonjet

Senat ali hag urz ar gouarnamant: « Etre ar Pab ha Frans, emean, n'euz ken hent ebed da 'n em gaout ha da 'n em glevet. Red eo votan al lezen hep spont na doan ebed, rag ar gouarnamant a zo barrek da dremen lost al leue dre c'heno ar gatoliked; 37 milion a ve-da baean bep bla d'ar veleien; na voint ket toanet digante 'n eun taol, nemet tam ha tam. »

(Divoedan ar relijion a vo gret 'rôg he lazant.)

Warlerc'h kement-man, o ten an daou vot bod dez komzet ane breman zouden: ar Senat a gav mad ober an dispartii, ha studian anean raktal war al lezen gret gant ar Gambre. Holl senedourien Breiz, nemet Garreau, deuz Rouen, o deuz votet ensb.

'Boue dilun d'abarde 'ver krog gant an artiklou.

(Da heuilh).

## Kazetennou dife, kazetennou gaouiad!

Evit tapout an dud da besk-ebrel, livan gevier, tennan planedenno faoz, n'euz ket par d'ar c'hazetennou ru. An darn-vuian eus ar gwall-deodadou a zo o redek ar bed war gouz ar relijion hag ar veleien, a zo bet krouet gant ar c'hazetennou ru.

Lennet aman hag e welfet. Pevar bla 'so e zo bet gret gant beleien, frierien pe gant seurezed, 27 prosez da gaze-tennou franmason hag o devoa tamallet d'an dud-man bep seurt loustoni en faoz. Vije ket fall laket o hanoioù aman; mez re hirr e vije ober an tenor eus ar mizevioù prizon hag eus ar frèjou o deuz tapet.

Mez setu aman eun afer-all neve dremenet.

N'euz ket ter zun, ar *Petite République*, kazeten ru ha franmason, a damalle eur gwall d'el d'eur « c'hure deuz Paris, » hep hanvan anean. Holl gureed Paris en em glevaz raktal da gas paper d'ar gazetennou. Setu ma c'hommer nec'het, ha deut d'ei keun warlerc'h. Petra reaz neuze? Dislaret. An hini, emei, an evot kaset d'imp ar c'helo, a skriv d'imp breman penoz *hen e-unan an evot ivantet ar gaos*.

Setu ar gazetennou kwit er c'hiz-ze. Eur gwall-c'houad he devoa bet, rag kureed Paris a zo dek ha triugent ane, ha na vije ket bet brao zerviji d'e bep a bemp kant lur.

Eur gentel eo evit ar *Petite République*; eur gentel ive evit ar re a gred ar gwall goleier, losket da vale gant kazetennou ru, war gouz ar veleien.

N'euz forz; kavet e vo dalc'had eur genaouek ben-nag da lonka seurt pouc'had.

Penoz eo gret ar relijion. Eur gazetennou ha n'eo nemet re lennet en parrouziou 'zo, kazeten ar skolaerien er mare-man, a lavare 'n euz ket pell penoz, war he meno, e o bet gret ar relijion. 'Vel eun huve eo lenn treo evelse.

An doue binniget, emei, eo ivantet ar bla 120; zakramant ar binijen, ar bla 157; ar venec'h, ar bla 328.

'Benn kentan gwech e lavaro pegoulz eo bet ivantet an otro Doue.

mad! Sonjet mad!

Na oa krog ebed ken war spered ar benherez, pa na sez ket a van ouz klemmou ken tener hag aliou ken fur; he fenn skanv oa ét kreñn a-dreuz ha na gavaz da lavaret, en eur zenni al lizer en godel he davanjer, nemet:

« Hini Janedik a zo braoc'h kalz. » Hini Janedik a oa braoc'h.

« Merc'h paour, emei, kazi ankouaet am oa ac'hanou, kement vel a blijadur hag a diduamant a gavan aman en Paris. »

Paris! Red eo bean bet evit kredi petra eo Paris! Ma lavarfen d'id eo uheloc'h an tier aman evit n'eo an iliz deuz du-man, kaeroc'h an disteran ane evit kastel an otro Fero, an depute, na gredjet ket ac'hanon, ha koulskoude e chomfen c'hoaz kalz en tu-man d'ar wirione. An dud a zo gwisket aman benme kaeroc'h evidoud ds zul fask; aman a zo kant gwech liesoc'h a ru evit na zo a hent treuz hag a wenojen en kanton Plouaret; aman bara zoc'h hag avalo poaz, pato ha yod silet na veint ket mad da lardan ar moc'h.

Ma karez dont aman ha digas gaud eur gwennek bennag, te vo evel er baradoz. Lar d'in pegoulz e kemer an train na me yei da glask ac'hanou d'ar gar. »

« Bresken a re Melani treskek ar gar goude bean lennet, pouezet ha hadpouezet kement-man; kemeret he devoa eun hent treuz gant aon plou a gavje war an hent braz; he fak ganti klenkan m'hallo dindan he brech, e oa henvel euz eul laer emean ar grip war e zeulioù. Gant kement-all a brez e kemeraz he bithud, pa digouezaz, hag ec'h eaz

## LAZET GANT PARIS

Ar Vretoned a gwita o bro evit mont da Paris, da rozellat ac'han, war o meno, a varv, an darnvuian ane, gant an tizik yen, pe an derzien langis, mar deo gwel ganeoc'h. En hevelep doare ma laz spered Paris eus Breiz, ear Paris a laz korfou ar Vretoned. Sed aman hanoioù darn ane a zo bet marvet neve-ze gant an tizik yen. Padomp evit o encon ha ra o maro eur golon evit ober d'omp chom er Vro!

An intanvez Audren a Bontivi (38 vloaz) marvet e klanvdi Beaujon gant an tizik yen; an intanvez Norec, a Langoat (38 vloaz) marvet gant an tizik yen; an itron Barbier, a Lannou (29 vloaz) marvet e klanvdi Beaujon gant an tizik yen; an itron Legoas, eus eskopti Sant-Briek, marvet e klanvdi Beaujon gant al langis; an aotrou Jégot eus Sant-Herve (eskopti Sant-Briek) (42 vloaz) marvet e klanvdi sant Anton gant an tizik yen; an aotrou Regnault (35 vloaz) marvet gant an tizik yen; Rozali Harnoy eus Kintin (27 vloaz) marvet e klanvdi Necker gant an tizik yen; Anna Auffret eus Roscof (14 vloaz), marvet gant an tizik yen (he zad a oa marvet warlene e Paris ive gant an tizik yen); J.-Franca Hilliet, eus Lannou, marvet e klanvdi Necker gant an tizik yen (o lezel pemp a vugale war e lerc'h; an hini lenan ane n'an deuz ket c'hoaz 11 vloaz); Melani Savi-dan eus Cavan (15 vloaz) sammet gant an tizik yen (trum; an intanvez Jamais, eus Lambal, marvet e klanvdi Boucicault gant an tizik yen (4 bugel a lez; an lenan n'an deuz ket 13 vloaz); an intanvez Castellin, a Lannou marvet gant eun taol gwad en he skavent; Loeiz Guyader, a Benpoul (49 vloaz), marvet e klanvdi gant an tizik yen.


## STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLE

En ZANT-BRIEK, boulevard National

An Otrone VALLEE, deut war e lerc'h

Mekanihou evit al labour-douar

TRUZEREZ-HOUBARN TRUZEREZ-ROUEVR  
Mekanihou dre betrol « Gardner » ar re walle, ar ewalls marchad



Gwerzet betekhen: 15.000 gwaskeil ha 8.500 dournoez.

NA GAVER NEMET ENO: Dournerazed houarn-holl koufrou ispisial evit ar mekanihou dre dan pe dre betrol. — Gwaskeilou BOULLE d'ober eo jistr, vout en droad vins-tro ha rod-lauz.

Trouc'herezed, mederezed, eler-brabant ha pep sort mekanihou eus ar gwella evit al labour-douar.

GWERZET EN PEP FIZIANZ HA MARCHAD-MAD

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guillem.

d'azean en zal ar bezjourien, he skouarn o c'hedal trouz an train a-bell.

Zouden, eur micherour euz ar gar a deuz d'o c'haout:

— Marfad, emean, plac'h yaouank, eo c'houi a glasker aman ouz toull an nor.

Zevl a reaz 'n he zav 'vel eun tenn:

— Me? emei. Gant piou? Me n'on ket ac'han!

Mouez unan a lavaraz a-ziavez:

— Me ya da gerc'had he zad! En han.

Doue, harzet anei da vont en train!

Hag e 'klevaz ken buhan-all treid hennez o sklokel war ar pave.

Hursuni a reaz ha liou ar maro a yesz warni; au-veet he devoa mouez ar penher. Ar micherour avad a respontaz d'ei:

— 'N em diluet gant an den-ze, 'vel ma garfet: na zoursian ket. Paet ho peuz, baleet!

— Peget gortoz a zo c'hoaz?

— Dek munut, ma na vo ket divrezad an train.

— Dek munut! Ma Doue!

Tremen a reaz war al linen, mall ganti presq war an train da zont.

(Da heuilh).

DIR-NA-DOE.

GOULENN e bureo ar Graoz: Gwerzioù sant Erwann, ar Labourer, sant Milla, sant Konec, hag all. Eur gwennet



# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHO

SKRIVANIERIEN

EMBANNOU-KONVERZ

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar broien estren evit ar Broù Keltiek.

Eas al labouriou pe d'an Otrou VALLEE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otrou MOAL, Skrivaniere, 27, bali Charner, Zant-Briek.

2 wemok pep aroudennad-ekitur.  
(Diskenn a briz evit meur a embann diou-tu).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo dend ar feiz,  
Gant ar galleg eo nio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek,  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, o ve Pechet!  
MUNIS.

## Pevarred zul warn-ugent goude ar Pentekost

Aviel ar zul.  
Fin ar bed. Ar varn.

Ea amzer-ze, Jezuz a lareas d'e ziskibien : Pe welfet, el lec'h zantel, an treo spontuz ha glac'haruz a gomze ar profed Daniel diwar e fenn, intentet mad, mar lennet kement-man.

An dud en em gavo er Jude a hasto tec'hel war ar moneio ; neb a vo war an doer, 'vo arabad d'ean dont en traon da wit netra eus e di ; neb a vo er park, 'vo arabad d'ean dont war e giz da glask e zilhad. Gwaz a ze d'ar mammo a vo o tougen pe o vagan en deio-ze. Pedet, eta, ha goullet ma na vo ket red d'ac'h mont kwit 'kerz ar goanv nag en devez a ziskwiz, rag bean a vo trubuilho ken spontuz, ken gwaz ma na zo bet biskoaz aboc an amzer gentan ha ma na vo biken. Ha paneved ma zo krennet diwar an deio-ze, na vije bet den zalvet. Berraet int bet en askont d'an inco mad. Mar be laret d'ac'h gand unan beannag : « Ar C'hist a zo aman pe a-hont. » na gredet ket, rak dont a rey meur a falz-Krist ha meur a falz-profed d'ober buzdado braz a-walc'h ha trao souezuz a-walc'h da douellan zoken an inco dibabet gant Done, mar bije gallet. En disklerian a ran d'ac'h. Mar larant : « Ar C'hist a zo el lec'hio goue », n'ebet ket da wela : « Setu-An kuzet en korn an ti », na zilauzet ket. Rak, evel ma teu eul luc'heden eus ar Zav-Heol da baran en tu ar C'hiz-Heol, evel-se ive e c'hoarveo donedigez Mab an den. N'euz forz pelec'h e vo ar c'hori, eno en em dastumo ive an evned. Raktall goude an devojo fromuz-ze, an heol a denvalao, al loar na strinko ken sklerijen, ar stered a gouso eus an env, an env a-erjello ha neuze merk Mab an Den a vo war wel d'an oll an oabl, hag oll boblo an douar a hirvoudo hag a welo Mab an den, leun a c'halloud hag a c'hleor, o tont war goumoul an env. Kas a rey e Els da zastum, dre vouez skelt ar drompilh, an dud zalvet hag ar re-all, eus pevar c'horn ar bed, eus an eil penn d'egile, dindan bolz an env.

Diouz ar ween figez, intentet mad ar pez a laran : pa ve blod he branko ha deut deitio enne, ec'h ouzoec'h e ve an neve-amzer. Evel-se ive pa welfet an oll dreo-ze, gouezet e vo tost Mab an den, da dal an nor. En gwirione, me lar d'ac'h, an dud a zo breman war an douar na voint ket maro pa c'hoarveo an oll dreo-ze.

An env hag an douar a dremino, ma c'homjo avad na dremenoint ket.

Kelen. — Ar varn a vo spontuz, beleg ar Zent a gredo : Ren eur vev fur, « diwall da varn den re vuhan hag en em varn hon-unan » hag omp zur da glevet eur zetanz, eur varnedigez vad.

• Bevan hep bevan evel eur Zent  
A zo bevan evel eun den diskiant ! »

## MADOU AR C'HOUECHOU

Above an devez milliget ma laraz, Waldek-Rousseau — Doue d'hen pardono ! — d'ar vicherorien izel a dlee rei o mguez d'ean ha d'e lamponed, e c'hallchent kavout 'dreg megerion ar c'houenchou arc'hant hag aour da rozellad ha da zastum a grabannadou, an holl, touellet gant komzou ken kasoniuz ha ken goump, a grade d'e pepoz e oa ar c'houenchou leun a vadou. Ben na souje, d'ar c'houz-ze, e kuzo komzou Waldek eur sonj dioulek ; den na souje e vije bet eur gomz ken fall ar penn-keantan eus an oberou dizoue e deuz tolet war broien Breiz ha Bro-Huel eur vantell a zaerou, a c'hiachar hag ive a vez. An dud, gouezet gand mad o c'hori ha gand eur c'hoant direz da vezan pinvidik, a zeblante seder ha lacoue o sonjal kaset en o yalc'h, goude vije zerret ar c'houenchou ha teulet ar venec'h hag al leanezed war an hent, an arc'hant o devoa ar re-man, herve lavar Waldek, laeret digant

ar bobl.  
Siouaz ! gwel an den a'zo berr hag, en dra-man 'vel en darnvuian eus an treo-all, ar paourkez an euz bet c'hoaz boutet don e viz 'n e lagad ! Dec'h na c'halle den sklerijen anean, hirio eo ezetoc'h pell en ober. N'eo ket red evit-se drailha eur bern kaoziou, na laber eur bern paper. Awalc'h eo lakaat ar biz war an oberou heuzuz hon deuz gwelet o tremen diragomp eun toullad blaveziou-ze hag ober en memez amzer eun tammik zell en-dro d'imp.

Gant madou ar c'houenchou ar bobl zod he deuz groot evel « potr yar an nou aour ». Heman a zigoraz e yar o sonjal kavout eun tenzor en he c'hof... Alaz ! er yar na oa netra a dalvouduz hag en eur laza anezi ar paourkez potr a gollaz hag ar yar hag hec'h nou aour ! Evel-se eo c'hoarveet gant pobl hon Bro o fizion en komzou meluz ha treitour kaozerien flour. Enpad daou pe dri bla hon deuz gwelet ar Gouarnamant harpet gand archerien, soudarded, ucherien, torrierien dorjion ha dispenserien mogerion, o zailhat war ar c'houenchou a bep eil hag o teurel dioute pe ar merc'hed zantel na glaskent nemed pedi, pe ar venec'h far a re pinijen noz-de evit terri diwar an holl hec'herien malloz an aotro Done. Goude, ar c'houenchou, kouezet etre daouarn tud falloch 'vit welloc'h, a vije gwerzet pe lezet d'ober nez d'ar c'houennou. An arc'hant ane, ar madou ac'h e du-man pe du-hont... Den avad n'an euz biskoaz gouezet pelec'h ! Hag en keit-se ar bobl genaouek a chome eno, he geno en dour, o c'hiall pegouez e koueche ennan pe evned rostet, pe nou fritet, hep sonjal penoz ar madou laeret digant ar c'houenchou n'o deuz kamed talveet nemed d'o laeron !...

Gwir eo, madou ar c'houenchou a zo talvouduz p'o lezer da heuilh o hent, mes adalek ma vent troet diwar ar wenojeo eo dleet d'e da heuilh herve c'hoant ha kalon vad an dud zantel o deuz ar renadir anez, na dalveont netra ! Dond a reont da vezan henvel beo euz eur wazik dour troet diwar he aoz. Tra ma kerz en he aoz (c'h ar wazik he deuz dour skler ha kaer hag a ruilh evaruz gand he hent en eur hada en-dro d'ei pinvidigez, a bep tu d'ez praejer dra karget a vleunioz kaer... ! Troet anei diwar he hent, goret d'ez eur aoz neve, ar waz ac'h ey tam-ha-tam da fall ; he dour, da gentan brein ha louz, a ruilh eun nebeudik evit 'n em goll a-bez hag evit mad en dounder an douar. Neuze kenavo ha d'ar pinvidigez, ha d'ar praejer yeod med !

Evel-se eo 'n em gavet gant madou ar c'houenchou. Tra m'eo chomet ar venec'h d'o ren, ar madou-ze o deuz hadet dre-holl, nan mar karet pinvidigeziou, o nan ! mes da vihana plijadur hag evarusted. Bet int evid ar beorien eur bara pemdiek ; gwisket o deuz ane hag o bugale. Hirio pa 'zint troet diwar o hent, hirio pa 'zint lemmet digand o ferc'heun, ar madou-ze a zo maro ha maro gante o madeleziou !

Er c'herion braz, meur a baour, meur a zen ezommek, meur a dad a diegez karget a vugale, a ouel dorek o tremen dirag dour eur gouzet en pelec'h e kavent gwechall peadra d'astenn o bue. Breman an nor a zo zerret ; war he zreouje e tiwar ar yeod... Na glevet ken en diabarz ar mouezion dudiv a ganer hep paouez menlodi Krouer peb tra ; na weler ken daouarnou gwen o tigerrid dirag ar reuzeidik 'vit lezel da goueza en e zorn eur gwennek pe daou. Na glevet nemed kan klemmuz eur gaouen bennag ec'h hirvoudi hed an noz war disman-troen al leandi paour ; na weler nemed potred o livitennou hir ha du, brin fallak ar lezennou trubard, o tarempredi al lec'h en pehini n'o dije biken dleet lakat o zreid... !

Petra he deuz gouezet ar bobl war gement-se ? Netra abed ! En eneb, n'he deuz bet nemed koll ! N'eo ket war vadon ar c'houenchoe e vo diazeet bara he c'hozi ; biskoaz blei na laeraz denved evid ober vad d'o meser ! Paourkez pobl, leun a zempladurez, gwasan ma vez goapeet !...

Lar d'in, paour koz, a deus bemde da zonn-dor ar gouent-man, nan da glask mes da gerc'had da dam bara, ha gouezet a teuz above m'eo tec'hlet al Leanezed ? Leunoec'h eo da gol breman evid diagent... Siouaz ! — Lar d'in, tad a diegez, a gave gwechall er gouent boued ha dilbad did. D'ez kwreg ha d'ez pugale, gwelloc'h e kerz ar vae ganid above m'eo tec'hlet ar venec'h zantel ha gwerzet o c'houent ? Evarusoc'h eo da diegez ? Muioch a

zilhad o deuz da vugaligou vihan da lakaat war o c'horf, hag a vara da zibri ? Ma Done ! an dour en ez taoulagad, e lazez d'in : Siouaz ! !

Ha te, devochour, muioch paet out bemde above m'eo laeret ar c'houenchoe ? Pinvidikoc'h ez out en fin ar miz pe ar bla ? Na weler ket e vez c'hoaz eur gwalt-aotrou... !

Ha te, micherour eus ker, a c'hoarze en diabarz da galon 'n eur welet teurel war ar ru Leanezed dizroug, gwelloc'h eo da zouben ? Bean 'teuz breman leve hag arc'hant ? N'a teuz ket, n'az po biken... diwar vadon ar c'houenchoe bepred. Ha c'houi, marc'hadourien, bihan ha braz, kresket eo ar gweneien en tireten ho tol above eo paouezet ar c'houenchoe da zigas d'ac'h arc'hant evid o marc'hadourer ? Na vafent ket kentoc'h bihanaet ? — Eo, sur !

Ha c'houi, tadou ha mammo kristen, bet ganaec'h digand Done ar garg da zevel fur ho pugale, na spontet ket dirag ar c'houenchoe goullou a zeblant laret d'ac'h eus kreiz o zristidigez : — « Zavit mad o pugale... Miret na vo kailhaer o incou dinam gant mestrou dife ha dizoue !... »

Anzavomp eta, eur wech evit mad, penoz ar brezel diskiant groot euz ar c'houenchoe n'an deuz ket pinvidikac'h ac'hanomp na lakat muioch a evrusted abaz hon bro. Paouezet ha gwasket eo omp bet noll gantan ; ha herie, da vihana, e welomp reiz dirag hon daoulagad fallente komzou hudur Waldek-Rousseau.

Madou laeret n'o deuz biskoaz talveet nemed d'al laer ! Ar gentel a zo mad da viret ; rag hirio evel dec'h, e c'hoantaer c'hoaz hon zouella gand an hevelop komzou. Al louarn, tanvaet gantan yar, a deu goude c'hoaz da glask. Ar Gouarnamant kresket gantan e gol hag e c'hiall diwar madou ar c'houenchoe, madou ar beorien, a c'hoanta ouzpenn kad re an iliz. — « Hon mad e vo, emean, lezel hon ilizou da vont gantan... Muioch a frankiz hon devo... » Na gouzomp ket war e gouzout ! War dismantron hon c'houenchoe o ouelomp hirio, arc'hoaz — ma na garomp diwall — e ouelomp war re an iliz ha ze 'vo c'hoaz gwasoc'h. Da bep unan da zigeri ervad e zaoulagad pe, hepdale, e kouefer war hon yalc'hou. Penegwir den na gamer trus euz daeron merc'hed zantel a renk kwitad o bro ha dilezel o c'houent ; pegwir den na zeblant muioch glac'haret o welet zerri an ilizou 'vid an deio, marteze an aon da goll o yalc'h a c'hialle lakat kalz da furaat. Da c'hortoz kad well, an doan-ze a dalveo eun dra bennag, an aon eo penn-keantan ar furnez !

AR YRODET.

## LEZEN AN DISPARTI DIRAG AR « SENAT »

Eur baourante eo lenn ar pez a dremin hirio er Senat ; ober ra rion, glao, kast-amzer, mez n'eo ket hep kaoz.

Pevar ha daou-ugent artikl a zo 'barz lezen an disparti : eiz a'zo votet dija ; tremen unan bemde, ar pez a ro skler da c'hout penoz ar senedourien na chomont ket da c'houi-leta. Koulskoude, kant goulen a zo gret da chauch doare al lezen.

An otro Gourju, deuz ar gosteen vad, a goeze disadorn diwarben an artikl seiz. Hag ent senedour ru, Philup Berger, o troc'han ar gomz d'ean : « Kement a lavarot aze, emean, a zo gwir ; mez al lezen eo red votet, anei evid m'emman.

— Ma' eur foeltr-vez eo evit ar Senat, eme Vicit Saint-Urbain. Ar prezidant Fallieres a zavaz, hag Len rok :

— Na d'ist ket emean, komz eweise denz ar Senat.  
— Eo, eme egile, rag, na pa n'hon deus ken frankiz-all ebet amañ, hon deuz c'hoaz da vianen frankiz da gomz.

N'euz forz ; votet e oa adarre an artikl hep chaou gir ebet ennan.

Gant an eiz artikl eo bet kont eweise. N'e ket ar hoan kaout eur Senat, ma n'eo nemet mavel gant ar Gamb. (Siouaz, kenkoulz-all a lavarret : N'e ket ar hoan kaout eur Gamb. nag eur gouarnamant, ma n'eo nemet mavel gant ar Franmasoned.)

Dilun e oa votet an artikl kentan :

Art. 1. — « Ar Republik a gav mad ma heuilho en Frans pep liñnar relijion a gar, hag e hallo e lidan, gant ma sento ouz an artikloù a zo aman warlerc'h, gret evit miret an urz vad. »

An otro Goulaine a c'houlenn ma vo staget ouz an artikl ar c'homzou-man. An dud a zo dindan ar gouarnamant ha paet gantan, a hallo ive heuilh ar relijion a garfont. Tolet plé, emean, penoz ar girion kentan deuz an artikl a zo faoz. N'e ket digant ar Republik e teu d'imp liberte da heuilh lezen hon c'housians; arog ma oa gouarnamant na republik ebed, Doue an evoa roet d'an den al liberie.

D'an dud en karg zo dileet war ze liberie evel d'ar re-all, ha n'o deuz tam ebed ken. Ya pe nan, libr eo eun den a zo dindan ar gouarnamant da gas e vugale d'ar skol a gar? — Ar ministr Bienvenu-Martin a zav hag a respont distag mad : **Nan !**

(Trous ha huch war ar ministr).

Votet eo an artikl kentan gant 214 mouez eneb 46.

Art. 2. — « Ar Republik na anzav, na bac ha na zikour relijion ebed. D'ar c'hentan a viz genver goude ma vo achuet al lezen, ar gouarnamant, an departemanchou hag ar parrouzioù n'hallfont ken votan arc'hant evit relijion na belek ebed. Na vo paet gant ar gouarnamant nemet ar veleien a vo miret er c'holajou, en hospitalioù hag ar prizonioù.

An ilizou a vo gret d'e e giz ma eo merket en artikl 3. » Las-Cases a c'houlenn aman ma vo miret o fae d'ar veleien, rag o zra eo bet a-viskoaz hag a zo dileet d'e herve ar justis.

Lecomte, « rapporteur », a respont eo pinvik awalch ar galoliked evit paean o beleien.

Valle a lavar onspen penoz n'eo ket dileet o fae d'ar veleien, rag ar dle-ze n'eo ket merket war al Levri braz. Kerc'h 'zo, eme Lamarzelle, pan eo bet merket er Gonstitution pe lezen-ren ar Vro. Valle na respont man; mez goulen an otro Las-Cases n'o ket digemeret; 178 mouez 'zo eneb, ha 110 a-du.

Gustave Denis a c'houlenn ma vo gortozet, da vianan, belek miz genver 1907, da dennan o fae digant ar veleien. Digemeret fall eo : 174 a zo eneb d'ean.

Rion a c'houlenn ma vo paet eur belek gant ar gouarnamant evit ar re baour ha n'o deuz ket peadra da baean anean. Bean zo en Frans, emean, 15 mil bureo da rei sluzen da onspen eur milion a beorien; ar re-ze o deuz o relijion kouls hag ar re binvik. Gwaz a zo eme Valle, n'o devo ket a veleien euz hon feuz.

Gourju a c'houlenn ma vo roet an ilizou d'ar galoliked en em glevo da d'erc'hel o relijion, ha ma vo renet ar strolladoù kristenien-man, evel an holl strolladoù-all, gant lezen 1901.

Lecomte a respont e vo gret, evit ar strolladoù katoliked, lezennoù ispisial.

Votet eo an artikl 2 gant 179 mouez eneb 96.

Art. 3. — « Ilizou ha fabrikou 'chomo 'vel ma 'maent, c'han ma vo roet o zreo d'ar strolladoù a gomzer ane en artikl 5, abenn eur bla goude vo bet embannet al lezen.

Raktal ma vo bet embannet al lezen, e vo merket, abeurz ar gouarnamant, an dalvoudgez deuz a vado an ilizou, ha deuz madou ar gouarnamant, an departemanchou hag ar parrouzioù dalc'het gant an ilizou.

Kannad ar gouarnamant a vo red diskoue d'e kement o devo ezom evit ober ervad o inventar. »

Guillier a c'houlenn na vo ket lakat en inventar

talvoudgez t'reo an ilizou. En despet d'ean eo votet an artikl, evel dirag, gant 178 mouez eneb 54.

Art. 4. — « Eur bla goude ma vo bet embannet al lezen, holl vadou mobilier hag immobilier an eskoption, fabrikou, a zerejz da vagan ar relijion, a vo roet, er stad emant, d'ar strolladoù a vo bet kronet en o flas da viret exersison ar relijion, herve lezennoù ar relijion-ze ha gourc'hemennou an artikl 19. »

Brager-Villemoisan a c'houlenn ma vo chanchet kiz d'an artikl-man, evit ma vo lodennet ar madou herve spered an iliz, o lakat kemm etre ar re a oa d'ei evit pedi Doue, hag ar re a oa d'ober sluzen. N'e ket chilaouet. Lamarzelle a c'houlenn neuze digant ar ministr : « Ma 'n em gav daou strollad, unan mad, hag unan fall, da c'houlenn war an dro ar madou, penoz vo gret ? »

Ar ministr a respont a vo goulennet ali an eskop; koulskoude, emean, Kousail ar gouarnamant a roo an urz diwean.

Clemenceau a lavar ive e c'hir. Al lezen, emean, n'e ket studiet mad; votan rei anei koulskoude.

An artikl 4 zo votet pen-da-ben gant 254 mouez eneb 6.

Art. 5. — « Madou an ilizou, bet roet gant ar gouarnamant, ha n'euz warno truzj a zevosion ebed aboue lezen germinal, bla X, a vo renet d'ar gouarnamant.

Madou an ilizou na voint ket dispennet c'han d'eur miz goude ma vo bet embannet ar reolennoù gret da zisklerian ha da zilulian al lezen.

Ma ve gwerzet gant ar strolladoù neve tam pe dam deuz ar madou iliz digouest gante, a vo red lakat arc'hant ar werz da brenan leve-rent pe ober gantan an imgli merket en artikl 22.

Ar prener a renko pleal gant ze. Ar madou goullet gant ar gouarnamant, an departemanchou pe ar parrouzioù, na vo ket gallet touch d'e ken an evo komzet ar varnerien. »

Hadlennomp ar pennad kentan deuz an artikl. Lamarzelle a c'houlenn ma vo roet ar madou d'ar strolladoù ha nan d'ar gouarnamant. Lecomte a respont d'ean ha d'e vignoned eo talvoudusoc'h votan al lezen buhan ha buhan evit thom da wellad anei.

An artikl a zo votet gant 179 mouez eneb 94.

Artikl 6. — Ar strolladoù a vo heritourien d'an ilizou a renko ive 'n em gargañ deuz o dle; keit na voint ket dizamm, e hallfont touch leve ar madou a vo da reuti d'ar gouarnamant.

Pa na vo ket a strollad da zigemer ar madou, al leve ane a vo impliet da baean ar dle a oa warno.

Ar dle tennet evit d'erc'hel an ilizou a vo paet gant ar strolladoù epad an amzer ma vo an ilizo etre o daouarn.

Ma tigone gant ar gouarnamant, an departemanchou pe ar parrouzioù kaout war o c'hont ilizou, e vo red d'e respont evit ar dle stag ouz an ilizou-ze. »

An artikl-man a zo votet gant 182 mouez eneb 30.

Art. 7. — « An artikl-man a lavar penoz ar madou iliz hag a zo da vean gret gante eun impli bennag a ziaev an iliz, a vo roet evit oberou mad. »

Votet eo gant 170 mouez eneb 97.

Artikl 8. — « Pa na vo ket bet, d'eur bla goude al lezen, kemeret madou eun iliz gant eur strollad katoliked, ar gouarnamant en em gargo dioute. Kousail ar gouarnamant a ginnigo ar madou, herve e zonzj, pa voint goulennet gant daou strollad war an dro.

An artikl-man a dreman adarre gant 174 mouez eneb 88.

(Da heuilh).

## Penoz argas diouz hon Bro hudurniuz Paris?

Dent eo Paris da vezan evel eur vammen a hudornioz hag a loustoni evit ar bed-oll, gant he gazetennou gouñad, he levrioù skona ha dizoue, he feziou-c'hoari divergant hag he c'hanouennou zad-nay ha brein.

An oll vo c'hoaz-ze a zigouez a bep tu war hon Breiz evel lano ar mor war an traez. Penoz dizaban ane?

Evit-ze war va meno, e vije poent, ha tremen poent zoken, kemeret skouer diouz tud yaouank Iverzon. Setu ar pezañ enez klevet digant unan ane, neve zo :

« N'euz ket c'hoaz gwall-bell, eun ugent vloaz bennag a zo d'an birran, e oa hon bro saotret ha mekaet evel hoc'h hini breman, gant skirjoù, peziou-c'hoari ha kanaouennou hudur pe zad-nay, a deue davedomp eus Londres, en havelep giz ma teout davedoc'h eus Paris. Petra hon deus graet, evit enebi, namet en em voda etre eun nebet tud yaouank hag ober al le enezomp da zerc'hel en o sav hon yez, hon spered hag hon c'hanouennou iverzon, ken uhel ha ken kristen, eneb da yez, da spered ha da ganaouennou louz pe c'houlo sa estren. Doue an deuz benniget hon ladour ha breman ar sort loustoniach-ze na gred ken tastaat ouz hon bro. »

An dud yaouank kristen-ze a zo dent a-benn, etas, dre o c'homzou, ha, dreist-oll, dre o skouerioù, d'ober d'o c'henvroiz intent e oa o dlead trei kein da loustoni gis Paris.

Setu war-ze eur pennad a zo bet kaset d'emp gant Gwelltas, eur breton kalonek a anve mad Iverzon.

« N'euz ket pell, e Dublin, kerbenn Iverzon, e oa en em vodennet en eur zall vraz tud uhel ha piovidik, evit klevet muzik ha kanaouennou neve. »

Goude kanaouennou e Saonek hag en Iverzonek, eur c'haner gall bennag a grogas gant eur ganaouen hudur giz Paris evel ma klevet re ane, siouaz, en hon c'herion Breiz, hag e ve straket an daouarn outa gant an dud yaouank, gant merc'hed zoken.

Hon Gall a zonzje o vije ket graet outan evel e Bro-C'hall. Na oute ket pe sort tad e'ch eo Iverzon.

A-hoan an nevoa bouc'het ganti ma savas an oll zelaouerien hag e'ch ejont kwit o lezel ar paour kez o kana evit al logod.

Bretoned, kemeromp skouer diouz ar Gristenien dispar-ze ! »

## BREURIEZ VRETON

An aotrou komt a Laigue e Redon.

An aotrou komt a Laigue a labour kement evit Breiz, an deuz savet e Redon eur vrenniez, pe eur gevredigez, mar deo gwel ganac'h, da bleal gant t'reo ar Vro.

Emeo o paouez displegan dirag Bretoned vad ar gevredigez-ze buez sant Konvoion, an abad santel an deuz savet ker Redon ha roet dorn da Nomenes da zerec Breiz. Goude-ze, eur mignon d'an aotrou a Laigue, an aotrou Garnier, an deuz kouezet eus asten konverz Breiz dia gas bevaision ha marc'hadourez all da Vro-Zaoz.

GOULENN e bureo ar Groaz : Guerc'hoù sant Erwan, al Labourer, sant Milio, sant Koveri, hag all. Eur gweunek

Le Gérant : F. OOUYETTE

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint Guillaume.

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a jacho d'e du ha Paris d'e hini, ha siouez, Paris a drec'hant !

Breiz a zo koll ha Paris a drec'h.

E keit ma oa Melani o c'hortoz pesort eur a zôuje d'ei, penher Kerguz an evoa gret an hent etre ar gar ha Kergoz hag e oa digouezet en ti ar Rouz, evel ar c'hurun.

— Mar hoc'h mestr d'ho merc'h, emean, deut da gerc'had anei !

— Ma merc'h ? eme ar c'houer koz. Da belec'h ?

— Man er gar en eur-man o c'hortoz an train da vont da Bariz !

— Da Bariz ?

An tad hag ar vam a chomaz sebezet, o daon dilavar, da zellat an eil ouz egile.

— Deut eta ! eme ar penher. Kollat eo, mar daleomp !

— Te 'lar eman o vont da Bariz ? eme an tad.

Ne oa ket evit lakat ze 'n e benn.

— Eu han ! Doue, eme ar penher, hastet dont ganin !

Ar vam a oa deut da grenan, hag eul liou'os warni 'vel pa vije archedet. Hep laret gir ebed, e'ch eaz d'ar peez, ar paour kez koz, da gemer eun davanjer fresk da vont d'ar gar ; na oute ket petra re ; mez pa fellaz d'ei

mont ermeaz an ti, e koneaz eur falladen warni hag e renkaz azezan war an treujou.

Ar penher a oa frammet war ar potr koz hag e chache anean war e lerc'h, ken 'oa darbet d'e o-daou kouean.

An nep a gavo ane war an hent a chome a-zav spontet da zellat oute. Ar Rouz koz a yee e steg da heuilh evel en kreiz eun luvre : Ma merc'h o vont da Bariz ? emean ; ma merc'h o vont da Bariz ?

Unan bennag deuz e anaoudegez an em gavaz ganlan :

— Petra 'zo c'hoare ganid ? emean.

Mez ar penher a droc'haz kreana ar gomz d'ean.

— 'Peuz ket gwelet e verc'h er gar ?

— Eo avad, eme an den-man.

Ar potr koz a reaz evel dihani, hag e loskaz eur glem-maden :

— Otro Doue, emean, fallat plac'h !

Hag hen da c'halompad wasoc'h-waz, ken an evoa breman bec'h ar penher kas mont da heuilh.

Atru int war wel d'an ti-gar ; man du-hont an train o tivogedi ; an daou den a dreman ebioù d'an ti hep poz, hag emant war al linen, i c'hoaz-dour-dispen, o c'houzoagal hag o redet deuz an eil prenest d'egile.

— Pelec'h eman ma merc'h ? eme an tad. Pelec'h ho peuz lakat ma merc'h, laerou ?

Klevet ha gwelet mad a re deuz an train, hag e kuze he fenn dindan he moucheur.

(Da heuilh).

DUN-NA-DOR.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar broio estren evit ar broio holltek.

Ar brezonek hag ar feiz.  
A z'breiz ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant lezennek eo deud ar feiz.  
Gant ar gallek ez ulio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hitt bepred d'ho brezonek.  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve troc'het.  
Ouspenn ar Yez, a ve Pec'hett !  
MUM.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLÉE, Riner, vi Zant-Bened, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivaniere, 27, dati Charner, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

2 weonk pep arondennad-ekfitor.  
(Diskenn a vez evit meur a embann diou-fo).

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

Aotrou Kere Plonmagoar.	2 skoed.
An aotrou abad Dagorne, Penpoul.	4 real.
Aotrou Person Mousterez.	8 real.
An aotrou abad Jezegou, Kastelin.	16 real.
An aotrou Lohon, Sant-Servez.	8 real.
Eul lennerez.	8 real.

Trugare d'hon lennerien ! Na haouezont ket da rei dorn, ken dre o aluzennoù, ken dre o c'houmananchoù, ken dre ar pennadon-skrid, al lizerou hag ar c'heleier o deuz ar vadelez da gas d'imp, hag hon C'hroaz vraz a gerz war-rôg dalc'had, a drugare d'ei ! Peili a reomp ar re ané a blij d'ei « Kroaz ar Vretoned » d'ho diskouez d'ho mignoned. Kaset zo bet ive hon C'hroaz, ar miz tremenet, da veur a hini, evit netra, kement ha diskouez d'ei dre ar gazetenn neve. Breman, p'o deus graet anaoudegezh ganti, e c'houlennoomp digante m'o defe ar vadelez, mar plich, ar re o dije c'hoant da zont da lennerien, da gas d'imp o c'houmananchoù. Ar re ané n'aboullont ket d'erc'hel da gaout « Kroaz ar Vretoned », n'o deus nemet hel lavaret da b'ar lizerou, d'ar « facler », hag heman a verko war ar gazetenn gentan ar ger « refusé » a vo eun ali d'omp evit paouez da gas ken.

Evit ar zûn e roomp, ouспен ar gazetenn, eur stagaden war hense an *Hilda*. Digemeret a refomp aman an aluzennoù evit hon c'henvroiz kanvaet gant ar pense, hag e kasfomp ané, d'o ingala, da veleien vad ar vro.

## KENVROIZ!... WAR HO TAULIN!...

Eun den gwasket, muget gant ar boan evel etre monsoù eur vint, eun den hag a wel e ve riskl braz ewitan pe ewid e nesan pe ewid e beadra, a c'hiall an Otro Doue : « Ma Doue, ma Doue ! » Achanta, kenvroiz vad, riskl braz a zo ewid silvidigez hoc'h ineo, riskl braz ewid ho mamm an Iliz zantel, ewid ar relijion en Franz, ewid ar fe, ho kwellan peadra.

— Eur walen a zo bantel a-uz d'ho penn !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...

— Lezen an disparti, a larec'h na deuje biken, a ya da tremen ewid an deio. An oabl du teulv, an avel grenv o trouzal, koplz ha « straden lostek pe ki o yudal » a zo kelon fall.

Amzer drist a zo da welet !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...

— Al lezen-ze o tont diwar ar stera, ome ar Frammasoned e-leiz o geno, a zo ewit morgan ar relijion en Franz, tamm-ha-tamm, « dre vuzul Ewit c'hoari asur », bete gout... deufe an dud d'en em zevet ha da c'hoari ar vaz !... ewid morgan ar relijion a lezas ganac'h ho tud koz hag a oac'h en zell da lezel gant ho pugale war ho lerc'h !...

Morgan ar relijion, gwasat torfed !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...

— Ha petra a roo d'ac'h ar Frammasoned en penn trok eus ar relijion ? Komjo goulo, c'hoezegello !... Hag e rofent aour hag arc'hant ? « Well relijion (karante) leiz an dorn Ewid mado leiz ar forn. » N'eo ket aour nag arc'hant a zec'ho ho taero, a roo d'ac'h dizamm, konfort pa vefet trubuilhet. Well eo ar wel eus ar baradoz ewid oll vado an douar !...

C'hoantat lemmel ho relijion diganac'h, gwasat torfed !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...

— Ha pion a zoursio ouzoc'h, ouz ho tud, ho pugale, ouz hoc'h ineo oll ?... Ar beleg mad ha zantel ho pedeus, a ziskas katekis d'ac'h, a roas d'ac'h ho pasko, ken aliez a ali mad, ho kwir vigoon, gallout a rey bevan, gallout a rey chom er vro ?...  
Laeret e vo o fae digand ar veleien, daoust d'ar marc'had bet etre Napoleon koz hag an Tad Santel ar Pab !...

Ewid an deio, emgichanz, e vo tennet o soulanen eus din-dane, difennet outé senti ouz o Mestr braz, ar Pab !... Sur a-walc'h, e vo red d'e kwital evel d'al leanezed, hag ar prizonio na vont ket frank a-walc'h ewit !... Ha, goude, e teuo ho tro ha tro ho mado c'hoù : tie ha peadra !...  
Laeres mado ar veleien gwasat sakrilej !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...

— Hoc'h ilizo a vo laeret, ilizo koant ho Padeiant, ho Pask kentan, ilizo koant ho parroujo savet gant ho tud, hag a zigase da zonz d'ac'h eus ken aliez a dra !...  
Dindan eur c'houblad blaio e vont tachet pe roet d'ar Frammasoned da frikoj, da elati, d'ober c'hoario ludur.

Laeres, tachan, labei an ilizo gwasat sakrilej !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...  
Sul a-bed ken, na goul, na pardon, na pask kentan, nag eured, nag interraunt ! Na de a laouneidigez, na devez kaon. Ar bouko, an dud a gonverz rivinet (rouinet) !...

Ar c'hroajo tolet en traou diwar ar c'hroaz-hencho, al liorzo ; ar stalioù, ar skoudenno, diwar dal an tiegezio !... Dindan eun neubend blaio, ar c'hroajo diframmet diwar ar herejo, diwar ar chiminalo en tiegezio ; difenn da laeret na *Pater* na *Noster* ha tud ouz an dorejo da c'hilaou ha da flouti !...

Tol ar zul, ar c'hroajo, ar pedenno en traou, euzusat sakrilej !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...

— Ha nag a den en dienez, er baourante du ! regestrien, souerien gleier, fererezed, kemenerezed, brodezeel, gwererien, liverien, kizelerien, micherourien, marc'hadourien a bep sort ; ouspenn daou-c'hant-hanter-kant-mil den dre ar Franz a-bez ! Ha pion a harpo ané ? D'ar re-ze evel d'ar re-all e oa dleet o bara !...  
Lemmel o bara digant daou c'hant-hanter-kant-mil den, kriat fallgriez !

Kenvroiz ! war ho taoulin !...  
— N'houlet ket kredi ?... Gwir mad eo !... Ar Frammasoned a lar e-leiz o geno... An dud a gar anoc'h hag a glask ho kwellan mad a lar ive... Kredet, mar keret, pe arrou ganac'h evel gand an dud d'armer Noe. Gwelet a red e ten da wir, gir-ha gir, ar pez a zo bet laeret d'ac'h betekten diwar-benn al leanezed hag ar skolio, hag all !...  
Eur walen bouner a zo stignet 'uz d'ho penn !...  
Kenvroiz ! war ho taoulin !

— Ha petra a refet, kenvroiz ! Koll kalon, fallgaloni ? Plegan ho chouk d'ar vaz da bilat ? Arabad e ve !...  
Bac'hado a-walc'h evel-se !...  
Kalon ! Franz, kenvroiz ! Sellet ervad ! war vag an Iliz, tolet ha distolet gand an avel foll, dorhilet gand ar gwagennoù spontus, e zo eur sturier mad, Hon Tad Santel ar Pab. Outan e tleer senti : levierien ha martoloded ! Eman war evez ouz barren ar stur, eman o vont da rei e urjou. Sentet hep blask digarre.

— M'an nevo Hon Tad Santel ar Pab mui-ouz-mui a silderien digand Jezuz a zo ouz en levial, ma tiskouefet mui-ouz-mui a zentidigez,  
Kenvroiz ! war ho taoulin !...  
— Bugale Breiz, ha lezel a refet digristeni ho mamm-vro « bro ar Zeat », bro ho tado koz ! Na zo ken, eta, a vad tomm, a vad kristen en ho kwazio ?

Bugale Franz, ha lezel a refet digristeni hoc'h eil mamm-vro, merc'h heman an Iliz, rouantelez ar Werc'hez, rouantelez ar Galon Zakr, skoazel ar Misjono, mammen ar madohero, enor ar bed-oll gwechall, flouren ha rouanez an oll bollo ?

Kristenien, o welet an Iliz ho Mamm en poan, daoust hag-en na zec'hfec'h ket he daerou ? O welet anei morivet, riskl ewid he bue, daoust hag-en na rofec'h zikour abed d'ei ? Ha lezel a refet morgan an Iliz zantel, gwellañ skoa eur bobl ?

« Biken ! Biken ! emoc'h. Kentoc'h mervel !... »  
Kenvroiz ! war ho taoulin eta !...  
— Ha nerzet gand ar beden, redet war an dachon, evel hon zud koz etrezeg an Douar-Santel, gwechall, o youbal a bouez penn « Bolante Doue eo ! »

Beomp oll dorn-ha-dorn. Kenavo d'an dispri, d'ar fae, d'ar gasoni a helle kaout unan pe unan ouz eun all. En em vodomp, evel eun tol gwennan, en-dro d'hon Baniel, en-dro da Groaz vinniget Hon Zalver ha war hon c'halon ive eur groaz vezer raiet gand hon gwad : oferenno komunio, yunio, piujenno, aluzeno, madohero, komjo,

kozeadenno, konferanço, skrijo... labour vad en-dro, pep-hini herdan ma hallo !

Ha dindan eun neubend blaio, e paro heol tomm ar Pout'h-en oabl glaz at Liberte. « Goude ar wasn nozvez, ar braon devez » ; « Euv koumoulet... na bad ket. »  
Kenvroiz ! war ho taoulin da gentan !...  
DAVID.

## LEZEN AN DISPARTI DIRAG AR « SÉNAT »

Ken prim eo et ar senedourien gant o labour ar zun-man, ma n'halljemp ket, gant peder gazetenn evel houman, rei da c'houk kement o deuz gret. Hast o deuz d'ac'hui ; ar Frammason 'zo 'drek oc'heun gant e skourje, ha ma fell d'e ober eun diskviz, e klevoent raktal ar skourje o strakal. « Kousted a gousto, red eo d'al labour bean achu 'henn au de kentan bla ; anez-ze na vo ket a dérou mad ! Diu ! Vallé, Lecomte, Clemenceau, war rôg ! Eun penn ar park eman ar c'herc'h ! » Ha Vallé, Lecomte ha 150 all evelte, stag ouz ker ar Frammasoniri, a jach 'adarre war o zugeu hag a hast votan, votan, votan ! hep goul petra votout, hep lezel amzer gant den ebed da rannan eur gir.

Forz a zo na pa d'ofent ar c'harr er poull ; n'eo ket kerzet eun a zo red, mez kerzet. Zerret ho taoulagad, ma keret, mez kerzet. !

Ar senebourien a gerz ; gwaz a zo evit ar te bouset. Eiz artikl o devoa votet ar zun-gentan ; ugent o devoa votet ar zun-all ; ar zun-man o achuont. Evelse devo difennet en ter zun eur pez labour kaer hag a oa 'n e zav tremen kant vla so. Diferuzan a oniont ober mad-ze ; o lezen zo eul lezen da ziferuzan-ha netra ken ; ar seurl tud-ze na oniont ket hadober.

Re-hir e vije eta heuilh kammed ha kammed labour ar senebourien. Seta aman da gentan an artikloù, a zo bet votet holl gand 180 mouez eneb 70, well-waz.

Art. 9. — Pa na vo ket a strollad katolikel zavet war zouar eur barrouz da zigemer madoù ha renk ar fabrik, ar madou-ze a vo roet en aluzen d'an hospitalioù.

Ma tigonefe gand eur strollad katolikel evelse, bean torret 'vit eun digare bennag, e vadou a vije roet d'eun all pe d'an hospitalioù.

Art. 10. — Na vo paeet netra diwar ar madou-ze evit tremen deuz an dorn d'egile.

Art. 11. Ar veleien hag o devo ouспен 60 vla oad hag o devo 30 vla servij paeet gand ar gouarnamant, an de ma vo embannet al lezen-man, ar re-ze a vo gret pansion d'e pad o bue, talvoudigez an tri c'hart deuz o fae.

Ar re o devo ouспен 45 vla oad gand 20 vla zervij da neubentan, o devo pansion hanter-bae 'pad o bue.

Nep pansion na vo uheloc'h evit pemp kant skoed.

Ar veleien ha n'o devo na oad na zervij awalch e vo dalc'hiet o fae d'e epad pevar bla : ar bla kentan, o fae pen-da-ben ; an eil bla, diou drederen deuz o fae ; an drede bla, an hanter ; ar bevare bla, an drederen : ha goude, netra.

Er parrouzioù 'lec'h n'euz ket 1.000 a dud, ma chom euné beleien, ar re-man o devo diou vlavoz a bep pas e-lec'h unan hepken.

An departamanchoù hag ar parrouzioù a vo notreet d'e ober pansionou d'ar veleien evit ar memez amzer hag en hevelep giz gant ar gouarnamant.

Belek ebed na vo pansionet diou wech ; ma 'n evoa pansion dija, e chomo gand ar pansion-ze.

An holl banision « hallo bean tennet digant ar re a dorro an artiklon 34 ha 35 deuz al lezen-man (da laeret eo : a gaozeo fall diouar-benn ar gouarnamant, pe an dud-e-kary).

Ar veleien a dleo goulen o fansion d'eur bla d'an hirran goude ma vo bet embannet al lezen-man.

Art. 12. — An ilizou, presbiterioù, eskoptioù, cha-peliou, seminarioù, gant kement a sparchant oute a zia-barz hag a zia-vez, a zo hag a chom tra ar gouarnamant, ar parrouzioù, an departamanchoù.

Art. 13. — An ilizou gant kement a sparchant oute a vo lezet 'vit netra gand ar strolladoù katolikel a zalc'ho plas ar fabrikou.

Tennet e vont diganto :

1. Ma vije torret ar strollad ;  
 2. Ma vije tremenet hep oforennan enne epad c'houec'h  
 miz dusta ;  
 3. Ma vije dalc'het fall an iliz pe ar pez a ve enni.  
 Ar strolladou a rey an holl dispignou a vo d'ober gant  
 an ilizou.

Art. 14. — Ar presbitoarioù, an eskoptioù hag ar  
 seminerioù a vo lezet 'vit netra gant ar gatoliked ; an  
 eskoptioù, epad daou via ; ar presbitoarioù hag ar semi-  
 nerioù braz epad pemp bla goude vo embannet al lezen.  
 Goude daou via 'vit eur re ha pemp bla 'vit eur re-all,  
 presbitoarioù hag all a vo rentet d'ar gouarnamant.

An artikl 15 a gôze diwarbenn 3 departamant.  
 An artikl 16 ha 17 a zell ouz an treo kaer ha tal-  
 voudek a zo en ilizou, hag a vo red ober ar gont ano.

(Da heuilh).

## AL LESTR KOLLET

Hag an holl a deus 'n eur laret eur beden,  
 Hag ar c'horfou maro oa stank war an draezon !..

Ya, stank e oant an de-ze ar c'horfou paour distolet  
 war an traez gand ar mór dirollet. Treuzez e oa sonjal  
 enne, ha red oa o gwelet evit gouzont pegen poaniuz eo  
 doue an dud a vór ha pegen ankeniuz stad o bugale, o  
 gwraze, o zadou, o mammoù... !

An de-ze, eus ar beure, al lestr dre dan « An Evm-mór »  
 a dlee kwitad eur porz braz a Vro-Saoz. An amzer, hep  
 bezañ kaer, na zebante ket re divalo. Peurvuiañ er mi-  
 zioù-da an amzerioù a vo pennaduz hag an avel, pa  
 c'houe krenv ha digompoez eus ar beure, a deu aliez,  
 arag an noz, da goueza a-grenn pe da chench a hent.  
 War bourz al lestr an holl dreizerien, paour ha pinvidik,  
 a gemeraz peb-hini e dammik lec'h. Ar vartoloded a zavaz  
 an heor, a bakaz ervad ar c'herden a zalc'he al lestr ha,  
 goude bezañ laket urz en peb tra, an em dennaz d'o  
 labour. Al lewrier a grogaz er stur hag a c'houe hemennaz  
 mond war raok. Eur c'houitelladen pe diou, setu al lestr  
 o pellaat diouz ar porz en eur lezel war e lerc'h eur waz  
 flour enennet. Eur blijadur oa e wetel o lec'hel ken  
 skauv, 'azezet war an dour, hag hen o kerzet ken brao  
 war ar gwagennoù gwenn a deus d'hen lipat 'n eur dra-  
 men...

War ar penn a-dreuz ar c'habiten hag al lewrier a  
 gouze goustadik ; aon o devoa da vezan klevet, herve,  
 rag gwech ha gwechall e talent en-dro d'ê sellou anke-  
 niet. — « Breman, eme al lewrier, an amzer n'eo ket re  
 divalo ; n'ouzoun ket hag hen a chomo... Ar c'houmoul  
 bihan livet fall a zav du-hont, hag an avel a c'houe ken  
 klemmiz 'barz ar gwernioù na laront d'in netra a vad !  
 Hep mar e tosta d'eun tól amzer fall, ha zur, ma c'hal-  
 lomp tapout aochou Breiz ar c'hoaz, gwellan hon devo  
 d'ober e vo chom 'n eur porz bennag dre eno da c'hor-  
 toz... » — « Hoc'h ali, eme ar c'habiten, a zo mad zur  
 ha ma brasan plijadur e vo ober d'ezan talveout d'imp...  
 mes, siouaz ! marvad arag ar c'hoaz ar gazek c'hilaz he  
 devo c'hoariet d'imp meur a dro louz, ha kavout a ra  
 d'in e vefomp 'evuruz braz ma na vemp ket a waz...  
 Kenn am euz da vad o vezan kwitad ar porz evid ar  
 beure... »

War-ze al lestr a gerze hepred. Ar vartoloded a boanie  
 peb-hini eus e du hag an dreizourien en o c'hamchou a  
 gane, a gouste, a gaoze hag a c'hoarze. Hepken al lewrier  
 hag ar c'habiten a zebante ne'het ha na oa ket hep  
 abek. — Beteg kreiste an amzer a chomaz reiz. War-dro  
 eun heur an avel a grogaz da c'houeza. Dindan he alan  
 neruz ar mor a goenvaz hag e wagennou a greskaz hag  
 a stankkaz gand eur founnder ankeniuz. — « N'am oa  
 ket laret d'ac'h, eme al lewrier, setu ni tapet ! Heususat  
 da amzer, ma Doue ! Breman, douget war ar gwagennoù  
 braz, al lestr a zave hag a ziskenne war traouiennou  
 don ha menseion uhel a dour hag a deus da vezan  
 evel c'hoariell ar mór braz fuloret. Ar vartoloded a c'h  
 ea hag a deus buhan dindan ar bernioù dour a gouze  
 war o c'hein gant nerz hag a skube hep paouez ar  
 bourz eus an eil peun d'egile. O zrubiilh hag o foan  
 a greskaz pa deuz an avel dichadennet da c'houeza  
 gand eur gounar direiz ha d'o dallan dre ar glao stank a  
 gouze ken puilh war o dremmoù. Ar gwasan, an noz a  
 dostae ; eur pennadik c'hoaz ha den na welche eun  
 daken.

Dindan an amzer fall al lestr a lewrier gant poan. Kaer  
 oa hen tomm evit kreski d'ezan e nerz, na zebante tam  
 finval. Den na wele ken an disteran. Dre-holl e oa du  
 evel eur zach. Ar glao, an avel, fulor ar mór, an amzer  
 fall a gounare : an diaoul a renke bezañ er-maez. Penoz  
 studia gand eun hevelep amzer ? War betore tu mond ?  
 An holl a oa ne'het... An dreizerien na c'hoarzent, na  
 ganent, na gouskent ken. Klevet o devoa ar c'habiten o  
 laret d'ar vartoloded bezañ dihun hag abetuz, roz dleout

a rent bezañ en dro da aochou Breiz, lec'hioù fall ha  
 karget a gerrek, gwall-risklus evid al lestr a dremen en  
 dro d'êz gand amzerion fall. Sonjou du a deus en spered  
 peb-hini. Ped gwech n'o devoa ket klevet komz eus ar  
 penseoù digoneet en kreiz an noz ! Eus an dud paour  
 beuzet, hag eus treo ken heuzuz all ! Pion a c'hall laret  
 n'en em gavo ket ar maro gante dre eun hevelep doare !..

An avel a yud gwaz ouz gwaz ; he mouez a c'houitell  
 skrijuz dre ar c'herden, henvel ouz yudadennou ar maro.  
 An drouz a vouzar an holl. Ar mor a zo gwasaet ; breman  
 e wagennou uheloc'h 'vit biskoaz a zailh war al lestr  
 pehini na zent ken ouz ar stur. Dirag eun dra ken spontuz  
 : al lestr na sturia kent al lewrier a zo mantret...  
 Pelec'h eman ? Petra zo c'hoarvezet ma c'hoanta al lestr  
 trei warnan e-unan ? N'an deuz amzer na da sonjal, na  
 da laret e zoan da zen ; e lec'h ar varen eus tre e zaouarn...  
 Eur strakaden heuzuz, spontuz !.. Al lestr zo tolet war  
 ar c'herrek... Oh ! pebez pennad anken ! Pebez truet  
 Mervel enkreiz ar ye'ched hag an nerz ! Diskenn en beo  
 'barz eur he gleb hep kavout neb-lec'h an disteran  
 zikour !.. An holl a zailh war ar pont... O c'heriden !  
 nou : Ma Jezuz ! Doue ! Gwerchez Vari ! an em goll en  
 kounar an avel hep na c'hall eur c'houardur klevet o  
 hekleo gl'haruz. Frañhet en daou, al lestr a ziskenn  
 'barz ar mór. C'hoaz eun toullad kriadennoù ankeniuz  
 hag an noz a c'houlou, gand e vantell du, hag eul lestr  
 kaer ha dek ha tri-ugent den beuzet. Beteg ar beure ar  
 mor dirollet a ruihlo hag a ziruihlo war gerrek an aod  
 korfon paour an dudou kez... !

An de war-lerc'h, tudou a ochoù hon bro a chomaz  
 mantret o wetel an daolen a zisplege dirag o daoulagad.  
 War ar c'herrek braz hanvet er vro « Karr an Ankou » e  
 vije gwelet diou vern lestr o c'h heja treuzuz gand an avel.  
 Hed eul leo, astennet war an traez, blonsset gand ar vein  
 ha leun a wad, e oa sklabeet hanter kant korf : pôtred,  
 merc'hed, bugale. An amzer fall a oa tavet hag ar mór,  
 haddent ziou, a zebante kemer plijadur o sellad ouz e  
 dorfejoù. Eur glac'har oa gwelet an dudou paour. Den  
 n'o anvee, den na oule eus petore bro e oant. Hepken  
 eur paper kavet war unan a lare oa al lestr eus Bro-  
 Zaoz. Ar c'helo trist a reaz tro ar vro hag an holl,  
 bihan ha braz, a boaniuz da lemmel digand ar mór  
 treitour, evid o lakad er be, an dudou en doa lazet.  
 Neuze e oant holl douaret en dro d'an iliz koz elec'h,  
 siouaz ! na denio biken o c'herent, mes elec'h ma kavout  
 war douar zantel Breiz-Izel, ineen mad da zont gwech ha  
 gwechall — en envor eus o zud beuzet ive er mór ha  
 douaret en pell-bro — da stoui war o be ha da laret evite  
 eun *De Profundis* !

AR YEORET.

## EUL LIZER MAD

Aotrou Rener.

Va list d'ho trugarekaat, c'houi hag ho kenlabourerien  
 dispar. Na kaer eo ho *Kroaz* ! Trugarekaat va mignon  
 Klaoda, em hano, da veza great d'in anout *Kroaz ar*  
*Vretoned*. Pebez vad a ra d'ar re he lenn ha, dreist-holl,  
 d'eur zoudard breton kaset pell diouz e vro gaer a Vreiz-  
 Izel ! N'ouffen ket re alia an aluzenerien o deuz d'ober  
 gant Bretoned da ober d'ezo 'sevel eur zom kenetrezo da  
 goumananti da *Groaz ar Vretoned*. Ar re a zo pell diouz  
 Breiz-Izel a gavo enni kalz frealzigedez, hag ar re o deuz  
 an eurvad da veza en Breiz a gavo kalz alioù mad evit  
 chom fur. Bevet *Kroaz ar Vretoned* ! Ra vezo skignet en  
 Breiz e ti peb labourer douar !

Digemerit, Aotrou Rener, va gont'hemennou.

Ho mignon,

YVONNIC POUILLAQUEC.

## HON ZENT KOZ

### Santez Trefina ha Sant Tremor, Merzerien

Santez Trefina. — Merc'h vilian rous Breiz, Hoel  
 kentan eus an hano, merc'h Erec'h, roue Gwened, ha  
 santez Koupais, Trefina a oe kolennet gand an abad sant  
 Wellas. Eur plac'h fur e oa ha leun a doujan. He zad a  
 oa troet ganti hag a c'hoantaes kaout d'ezur eul pried pinvik  
 hag a ligne uhel. Kouemor, eul lutanen da Roue Franz  
 « Childebert », eun den a vrud fall, a arruas da c'houlou  
 Trefina da zimezi. He zad n'houle ket. Konomor, o c'hou-  
 zout e oa arru mad sant Wellas gand Erec'h, petra reaz  
 nemet en em westlan d'ar zant. Dere'hel a reas warnan  
 kement ha ken bihan, ha toni a reas ken stard chaaj a  
 vae ma reas sant Wellas ewitan ha ma tapas di mezi da  
 Drefina.

Eur pennadik ec'h eus mad an treo. Siouaz, « Neb a zo  
 drouk a vezo », « Ar c'hoz louarn en e groc'henn a varve  
 Nemet liguet e ve en beo ». Konomor a zevas da vean

ken drouk ouz Trefina evel ma oa bet ouz e briejo-all.

C'hoantaat a reas he lakat d'ar maro. Trefina a renkas,  
 tec'hel ha mont da glask repu digand he zad. Konomor,  
 herve, a yeas war he lerc'h raktal. Kaout a reas anezi o  
 kuz en eur brouskoat hag e troc'has d'ezur he gouk gand  
 eun tól kleze.

Pan arruas ar c'helo gand Erec'h, he zad, ec'h eas da  
 gad sant Wellas, da laret d'eun goulen, dre e badenno,  
 ma plijfe gand Doue rei bue d'e verc'h. Ar Zant a gon-  
 fortas an tad gl'harvet, a bedas hag a arruas en e balez  
 gand Trefina, leun a vae.

Sant Tremor. — Eur pennadik goude, e c'hanas da  
 Drefina, eur mab hanvet Tremor. En kount « Rhuis » e  
 oe savet. Eur zant a deuz da vean, maic'hoù hanval ouz  
 eun El ewid ouz eun den. Hag an Otro Doue a rae bur-  
 zado dreizan.

E dad, eun den ken kri ha ken digalon, o kaout  
 anean eun devez war e hent, en anveas hag a roas d'eun  
 tól ar maro.

Sant Tremor a zo enoret evel eur merzer.

Enoret eo en Breiz. E veer o paouez da gaerit eur  
 chapel d'eun Langoa.

Beañ a zo, sur awal'h, parroujo o tougen e hano.

Beañ a zo ive eur barouz en Kerne hag a zoug han-  
 santez Trefina. Ar Vretoned a zoug doujan hag enor  
 d'ezur.

Kelen. — Breiziz, enoromp hon Zent koz a skuilbag  
 o gwad ewit miret d'imp ar fe gisten, hon gwellan leva  
 war an douar !

Goulomp aliez, deizre, ma tec'hfomp biken diouz ar fe  
 zantel-ze, ha ma larfomp ken kalonek hag hon zud koz :  
 « Treitour d'ar fe, treitour da Zone, biken ! Kentoc'h  
 mervel ! »

## D'al labourerien ha da bôtred ar c'hoat

Al loar, an menaj hag ar c'hoat.

Ar c'hoat diskarret war an diskarr-loar n'eo ket ken  
 tec'hed da brevedei evel e vreur diskarret war ar c'kresk.

Ar c'hoat-tan troc'het war ar c'hresk a grog ezetoc'h.

Ar c'hoat divarret war ar c'hresk, tolet en dour,

a zavo war var, war c'horre ; skolpad e vreur divarret war  
 an diskarr, a yel da fonz.

Daive ar botoio a ve diskarret war ar c'hresk.

Ar jerdinerien hag al labourerien a had diouz al loar.

« War an diskarr eus al loar  
 Eo mad hanan douar. »

N. B. — Benn ar zud-all e vo moulet eur waz en yez  
 Treger gant Dir-Na-Dor war darvoud an *Hilda*. Goulen  
 anei a-vreman. Ar c'hant, 14 real (3.50) ; an haute-kant,  
 8 real (2.00) ; pemp warn-ugent, 4 real (1.00) ; unan,  
 goulenet aman, 2 wennek.

GOULEN *Pipi Gonto*, arog ma vo gwerzet an 20  
 diwean (8 real ha 7 kwennek).


# ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
 Ha Lanhuon

GOULEN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

STAL-LABOUR SAVET GANT BOULLE  
 Eo ZANT-BRIEK, boulevard National  
 An Otrone VALLEE, deut war e lerc'h  
 Mekanikou evit al labour-douar

TEUZEREZ-HOUARN TEUZEREZ-HOUERV  
 Mekanikou dre betrol e Gardner ar re wella, ar gwella marc'had



Gwerzet betekhen : 15.000 gwaohell ha 8.500 dourm-trer.  
 NA GAVER NEMET ENO : Dourm-trer-houarn-holl  
 konfrou ispisial evit ar mekanikou dre dan pe dre betrol.  
 — Gwaskellou BOULLE d'ober eo jistr, vont en droad  
 vins-tro ha rod-lanz.

Trouc'herezed, mederezed, eler-brabant ha pep sort  
 mekanikou eus ar gwella evit al labour-douar.

GWERZET EN PEP FIZIANZ HA MARCHAD-MAD

Le Gérant : F. GODYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.



# Kroaz ar Vretoned

## KOUANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skoed, evit ar broio estren evit ar Broio keltiek.

## SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otro VALLEE, Rener, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otro MOAL, Skrivaniere, 27, bati Channer, Zant-Briek.

## EMBANNOU-KONVERZ

3 wronnek pep arudennad-skritur.  
(Diskenn a brez evit meur a embann dious-in).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furnez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz,  
Gant ar gallek ez alio a Vreiz.  
Furnez ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek,  
Yes an dud vad ha kalonek,  
Yes ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Ves, e vo Pec'h'het!  
Mamm.

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

Evit ar Groaz vras digant an abad  
Connan, person Treglanvus. 4 real.  
Evit hon c'henvroiz kanvaet gant  
pense an Hilda, digant an dime-  
zel ar Bourr, Paris, 8 real.

## AN HISTOAR SANTEL

### Baradoz an douar.

Adam hag Eva, tad ha mamm an oll dud, a oa laket gant an Otro Doue en eur gaer a liorz, kaeroc'h ewid ar c'haeran eus hon zraonienno Breiz, hanvet Baradoz an douar pe ar baradoz terian. Glazur, bokedo, gwe freuz, ster, rivier oc'h hiboudi dre ar c'hreiz, pep tra a oa koant ha kempenn, a re vad d'an daoulagad, d'an diouiskouarn ha d'ar galon. Ar groudurien diskiant a oa sentus ouz monez Adam. Al labour na oa ket poanias. Ar maro na gave ket a dor digor. Adam hag Eva, dindan eur pennad amzer, a dlee mont war eun d'ar bed-all, gant Doue. Dont a re d'o gwelet eur wech an amzer, da c'hortoz. Evurus e oaint ar pez a haller bean. Red e oa avad o aprou ha gwelet hag int a zeutje. En kreiz al liorz pe ar jerdin, e oa gween ansoudegez an drouk hag ar vad : « An de ma tefret eus honnez, eme an Otro Doue, e vefet skoet d'ar maro. »

Lusifer, mestr an drouk-Ele a reas brezel ouz Doue, a oa o chilaou. Hag heu, eun de bennag, da zevel er ween d'ober kaer gant Eva, da dislaret komz an Otro Doue ha da gontan kaer... Tad ar govier a denas a-benn eus e dol. Eva a zebras eun tamm aval hag a roas d'he fried, Adam. Eet oaint epep da zifenn an Otro Doue hag Hen o tigoueout, d'he heul eun El, en e zorn eur c'hleze ewit arvas Adam hag Eva diouz liorz an evursted. Setu int skoet d'ar maro, int hag o bugale : da laret eo kollet gante o-mann graz Doue, hag o bugale o tout war an douar a vo ma'aret o ine gaud ar « pec'hed orijinel ». Evel o bugale, war o lerc'h, douget int d'ar pec'hed gant o spered tennallaet. Ar boan a grogo warno breman hag ar maro a denio d'o goods. An ifern a vije ewite paneved da Jezus, Salver ar bed.

Tol lagad. — Adam eo patrom Hon Zalver Jezus-Krist. Evel m'eo tad an dud, herve ar c'hortoz, Jezus eo o zad, herve an ine. Evel m'eo bet kollet an oll dud gantan, int bet prenet oll gant Jezus.

Kasoni ouz ar pec'hed !

Ansoudegez vad d'Hon Zalver Jezus, a dro diwar hon ine ar maro, dre ar Vadeiant hag ar graso.

## LOUIZA CORNEC

### Ar-rég ar Mision.

Da zul fask bihan ar Pantekost, er bloa 1649, an Tad Maner, an Tad mad, eman breman men gwenn e ve burzuduz en kreiz iliz koant Itron Varia Blevin, dindan ar gouarnier huel, 'oa o prezeg en iliz Plonez-Kintin war dan madeleuz ar Spered Santel ha war dan fiskuz an ifern. Ar Spered Santel « an drede ferson eus an Drinded, gwir Doue evel an Tad hag ar Mab », diskennet gwechall war an ebestel « en furn teodo tan », a ziskennaz an de-ze war an ilizad tud 'oa eno, dindan komjou nerzuz an tad misioner, da sklerijenni ar sperejou gant ar gwirioneou kristen ha da domman ar c'halonou gant tan karante Doue hag an nesan. Sevel a ra garmadek ha kriadek a greiz ar brezege : eus ar c'halonou frailhet gant ar gla-c'har da vean pec'het e strink daeron a geu d'an daoula-gad, daeron ken dru ken ma ruilhont puilh d'an traou gant

an diouched ha ma tiveront taken ha taken war leuren vein ti an Otro sant Per benniget.

En traou an iliz, 'n eur c'horn tenval tost da gerdan ar c'hleier, a zo eur plac'h yaouank gouez ha diweat : o ren he zriwech vloa eman, ha n'he deuz disket c'hoaz na Pater na Noster, nag ear poz katekiz, nag eur gir eus a greansou ar c'hristen.

### Epad ar Mision.

Ar Spered Santel a nij elec'h ma kar : ar plac'h yaouank diweat, Louiza Cornec 'vije groet anei, a grogas kement a c'hoant ennt da labourat ewit silvi-digez he tue ken, dindan an eiz de ma padas c'hoaz ar mision, en skeud diski dre 'n envor he fedennou en brezonek hag en latin, e tiskaz ouспен lavaret he chapelad 'n eur brederia war visterion ar Rozeza, lavaret an aktou kent ha goude ar communion ha kantikon e-leiz. Pinvidi-kat zunvez ewit eme Louisa, du gant an dienez, en noaz pilh beteg neuze !

Da zul an Dreinded Zakr e saver ar prozision war e droad da vont da welet Itron Varia ar Ger-hir 'n he zi, kuzet 'drek glazur distan eur boket faennou. Louisa Cornec gwisket en gwenn a zo stad enni o vont da welet he mamm vad ; trital ra he c'halon 'n he c'hreiz gant ar levezeg o-sonjal 'man o vont d' en em westlan da Vari korf hag ene. Evursted he ine, 'n eur zidarzan a dreuz d'he daoulagad skler evel dour red, a lak kement a c'heued war he diouched, kement a furnez war he zal ken eo eur yec'hed d'an daoulagad paran warni.

### He buez goude ar Mision.

A-ziwar an de-se he buez zo buez eur zantez, buez eun el. Dindan glizen glouar an nevez-amzer, dindan glizen binvik miz mae, en kouls ar struj vras, gwe avalou liorzou Breiz-Izel a zeu da vleunian ha dindan tomder heol miz eost e tongont avalou mad, avalou melen o bec'h. Evel-se liorzik ene plac'h yaouank Kellec — eus Kellec a lerer e oa — neve droet, neve labourat ha hadet gant ar Spered Santel, doureet gant glizen dru grason ar mision ha tomnet gant heol grouezuz Kalon Jezus a zo deut da vleunia ha da zongen frouez baradoz, frouez ple-gion zantel ar vuez gristen e-leiz.

Kerkent ma teu an de da c'houlouvi, e tihun da laket zin ar groaz 'n he c'herc'hien 'n eur laret : « Ma Doue, ma C'hrour, me ro dec'h ma c'halon ». Goude bean savet ha gwisket e kemer dour binuiget hag e lar he fedennou daoulinet. Gwelloc'h e pleg neuze he c'hort d'al lezen gristen. Ar labour a zo ive eur beden, pa ve laret da Zoue : « Ma Doue, me ro dec'h ar labour-man ; skuilhet warnan ho pennoz, mar plij ganec'h ». Ter gwech an de, da'bao-heol, da greiste ha-da guz-heol pa gleve ar c'hloc'h o vrallan, o kavan an anjeluz en kamb an tour, e lavare peden an el Gabriel da Vari. Bemnoz e stous d'an douar war bennou he daoulin da lavaret gras, war an dro gant he zad hag he mamm, dirak skeuden vinniget an Itron Varia hag ar grusif kweor melen a lufre dindan sklerijen ar goulou rousin, flour he zveid toulet gant an tachou, uzed ma oant gant tud an ti a rum da rum o stardan o muzellou oute pa vijeint en pal ar maro. Kent mont 'n he gwele e kemere dour binuiget d'ober zin ar groaz. Eur wech et 'n he gwele da c'hortoz ar c'houssked da 'n em zilan dre he izili da skarzan skwider an devez labour oute, e vije klevet, a-dreuz da werzidi teurniet ar gwele kloz, trouz seac'h greun he chapelad askorn gwenn o vont en-dro dre ma nije ar beden : « Me ho salud, Mari » a-ziwar he zeod. Na 'vije ket yac'h pa 'n he dije kef lavaret he chapelad eur wech bemdez d'an nebeutan. « Ma Doue me rekommand d'Ec'h ma ine », 'vije he diwean komz bemnoz.

Dalc'het he devoa sonj neket a-walc'h kommunian eur wech ar bla : « Eur c'hristen mad na lez ket keit-se e ine da yan, » na lez ket keit-se e galon war he noaz, hag e taouline gant karante bep sul kentan ar miz ouz an dol fask da zigemer « Jezus-Krist en Zakramant an oter, » da zibri bara an Elez kuzet dindan plusken vilhan wenn spez ar bara kan.

Ar c'homzou fall a zeu da drenka spered an den ha da zuan, da vreinan bousden e galon. An disteran komz fall a re da Louiza krenan ha ruian gant ar vez beteg gwennou he daoulagad. Rukun, donjer he devoa ouz an dansou zul, hag ouz an nozvejou. Poan a re ganti, tenval ha koz 'vije he fenn pa glave kanaouennou leun a skanvadurez. Na vije 'n he filjadur, 'n he blend nemet o kavan pe o klevet kavan kantikon an tad Maner pe gwerz gloazion gla-c'haruz hon Zalver, pe « Spered sakr ha divin » war don Plonez Kintin.

### Ar Werc'hez.

Eun toullad mizioù goude ar mision, an ugent a viz eost, da ze gouel sant Bernard, dindan eizved gouel Varia hanter-eost, da c'hortoz eur leuriad ed gwenn da beurg-rasan e gorf hag an dornerien da lakat lard teu da benn-kap ler o freilhou ponnez, ar zantez yaouank a dec'haz dizeblant diouz ar leud da liorz-drek an ti, d'ober eur reujad pedi, sioul, didrous en distro, dindan eur ween avalou douz estek. A greiz eman he bizied, beo gant ar garante a zo o virvi 'n he c'halon gwerc'h, o tibun greun he chapelad unan-hag-unan, 'n eun taol kont, eur sklerijen neve, splannoc'h evit sklerijen an de, a zeu da baran war ar liorz a-bez ha, da heuilh, eur c'honez vad ! eur c'honez vad ! gwelloc'h c'honez pell 'vit c'honez an avalou melen a zo o vlodi, o veitri en-mesk ar yeod glaz, gwelloc'h c'honez evit hini eur parkad gwiziz da, pa ve ar gwean ebarz o kutuilh 'n eur ganad danvez mel, gwelloc'h c'honez evit c'honez an ezans a zav bep sul en-dro d'ar Zakramant. En-kreiz ar sklerder o tout da kroec'h gant ar c'hlazen, eun itron gaer-gaer... eur gurunen a zouezek steroden o steredenni war he zal, dreitri eur vantel skeduz evel an heol, hag eur zeien c'hlaez oc'h ober eur gonreiz dre he dargreiz.

— « Oc'h ober petra oc'h c'honi aze ? » a c'houlennaz digant ar plac'hik a sonje ganti 'oa diskennet ar baradoz war an douar.

Abaf ha gouer, homan a respontas e oa gant he chapelad o c'houlou eur maro evuruz digant ar Werc'hez, rak an tad an nevoa laret ouспен eur wech hag ouспен diou : « Ar sklerian pe ewit kaout eur maro santel eo lavaret ar chapelad en enor da Vari. »

— « Mad ho peuz groet zenti ouz ali fur ar misioner... Lavaret d'in breman piou on ? » — « Ma Doue, na lavarin ket, erfad ! Homan eo ar wech kentan o deuz ma daoulagad ar blijadur da baran warnoc'h. C'honi n'oc'h ket a-ziwar dro ; n'oc'h ket eus m'ansoudegez. Kaeroc'h gwisket oc'h evit Itron Varia Rostren war he zron da ze gouel Hanter-Est. Kaeroc'h laket ewit Itron Varia ar Ger-hir hag Itron Varia ar Ruellou, da ze o fanlon braz. C'honi n'ho peuz ket ho parez war he zal, dreitri an douar... »

An Itron gant eur vouez dudius : « Me eo ar Werc'hez, mamm Doue, an hini oc'h aketuz da bedi bemdez, deut da zigas d'ac'h ho mennad, da gerc'het a'chanoc'h d'ar baradoz. En her e tigor sant Per an nor d'ac'h. Beet dinec'h ! na varvret ket hep ho sakramancho ha me vo 'n ho kichen betek hoc'h banaden diwean... »

### Sant Korantin.

'Drek Ronanez ar gwerc'hezad 'oa eun den koz, gwenn e vle evel neud arc'hant, eur vaz aour 'n e zorn, eur grusif 'n e gerc'hien ha, war e benn, eur mintr alaouret o lintern dindan bannou skler an heol tomm a zeus da c'heari, da darnijal warni a-dreuz da doulligou bihan deliou glaz an avalen.

— « Goude pedenn ar chapelad, pini eo ar bedon an dousan d'ho kalon a c'houlennaz hen d'e dro ? »

— « Eur wech bemdez e lavaran : « Jezus, Mari, Jozeb ha Korantin, Breman ha war ma maro ho pet truez ouzin » hag « Hon Tad, pehini zo en Neuv » en enor da zant Korantin, aboue 'meuz klevet an tad Maner o lavaret oa mad sant Korantin da zikour ar Gristenien d'ober eur maro zantel.

— « Anveout a red anon ? »

— « N'avean ket ; mez gwisket oc'h evel eskob Kemper pa dremenaz aman oc'h ober tro e eskopi a droad kaer. »

— « Me eo sant Korantin, daut gant sautoz Mari, mamm Doue, war-benn hent d'ac'h, da ziambrong ac'hanoch d'ar baradoz. Kerzet, redet da gas an noventi gaer, ar c'helou mad-ze d'ho mamm. »

D'eur mial, 'man ar vamm en toall ar fiors, oc'h aven, o luskar dont e-bars hag ar verc'h da zistankan da c'har gant ar gau da vean bet amzent a-wechou a-rok ar mision.

— « Petra zo kouet da homan? eme ar vam. » — « Glac'har am euz da vean grot poan spered d'ac'h a-wechou, breman pa renkan kimiadi, lavaret kenavo ar baradoz d'ac'h, rag hirie e tlean mervel. » — « Sell pez spered'ho gant homan, ha hi yas'h-pesk ! » — « Pa lavaran d'ac'h e varvin hirie, na ran nemet hadlaret ar pez am euz klevet gant ar Werc'hez ha sant Korantin. »

Nebeud ha nebeut en em zil he-nerz, he buez digant servijouez ar Werc'hez : a ruz kaer, harpet war brech he mamm, poan d'ei o tol an cil troad arok egile, en em stlej betek an ti, gwisket liou ar maro ganti.

O klevet anei o laret ec'h e tost ar maro d'ei, he zad a sonj gantan er eo troet e spered.

— « Ma zad, emei, ma spered vad zo ganin, ha poan ra ganin bean displijet d'ac'h dre ma mouzadenou ha ma fennadon fall eun dro bennag. Daoust d'ar laz dornan 'zo war ar leur, kerzet da glask ar belek war ma zro. P'au mo bet ma deverou war o hed, e tispartio ma c'horf diouz ma ene, e varvin. »

Hag an tad a droc'h, mons kaer, d'ar bourk. . . .

P'he deuz het an otro Doue ha nouet ar glanvourez, e kimiadi diouz he zad hag he mamm, diouz he c'herent hag he amezegen, bodet en-dro d'he gwele, an dour 'n o daoulagad. Neuze Louiza a dap krog 'n he c'hroz nouden. Polat, bouchat a ra da dreid krusiñ goz an ti, ha 'n eur lavaret « Jezus, Mari, Jozef ha Korantin. Breman ha war ma maro ho pet truz ouzin. » E tremen evel eur mouch golou.

A greiz ma oa gant he fater, eur plac'h santel eus Kompou, Katerin Danielou a welaz ene Louiza Cornec o nijal d'an Nenvou, gwisket en gwenn evel da zul an Drinded er prosizion braz. Klevet a re anei ive o lavaret :

• Tremet a ran ar loar,  
Ewit mouet d'ar gloar ;  
Dreist an heol, ar stered  
Me a vezo douget. . . .

Ar mision eo an alchouez soar a zigor d'in dor iliz ar Baradoz. »

He c'horf kaer da welet dindan he chapel wenn gant a zaouarn junnet war boull e galon, e vizied reudet gant ar maro war ar chapellet he devoa meret ken aliez 'n he buez 'oe douget gant eun enor vraz d'an iliz ha diskennet en-kreiz c'hrouez an ezanz, ar c'hân, an dour biniget, pedennou ar gresienien ha mouez kanvuz ar c'hleier, 'n he wele anaon da c'hortoz dilhon tromplin ar varn diwean.

Er vered-man, a lavac tud ar barrouz a rum da rum, a zo lakel korf eun gantez, korf Louiza Cornec eus Kellec, sautez ar Werc'hez, sautez ar chapellet.

EUR MIGNON ALL.

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a gache d'e du ha  
Paris d'e bin, ha siouz  
Paris a droc'haz !

Breiz a zo koll ha Paris a droc'h.

Pan arrujont o daou er ger euz ar-gar, ken trist en em gavas an ti gant an daou goz o krial forz an eil ouz egile, ma chomaz ar penher war o zro evel ma chomer wardro ar re glanv.

Ar varn en em tokaz war he daoulin euz ar bank en Kornan tan, troet he c'hein d'an de; ar Rouz koz a azeaz war eur skaon e kichen an dol, kouet e zioutr'c'h gantan. Iost e gorf ha loskoc'h c'hoaz e galon; ar penher, war ar bank-tol, na lavare grik, glac'haret e-unan ha tristoc'h c'hoaz gant glac'har an daou goz. Den na zonzaz en koan : ar mevel a yeaz da gonsket gant eun tam bara ha kik; didrouz e oa an ti 'vel pa vije bet eun den maro war ar vaz-kaon.

Noz a deuz; ar penher a ensouaz ar golo hag a lakaz koat en tan, mez na gredaz ket komz ouz an tad nag ouz ar vam; hadazean reaz, hag na os klevet ken epad eiz eur gloch nemet tihou an orolaj ha huanadenou ar vam o klem dindan hec'h he zrubuilh.

Deuz ar beare, pa deuz ar mevel en ti da glask e lein, e schuz ar veilindek. Ar penher a oa sorennet ouz an dol, mez ar Rouz koz en na et taken gousket ebod en e zaoulagad.

— Deuz, greg, emean, greg d'imp hon leinout ! Gant

## LEZEN AN DISPARTI DIRAG AR « SÉNAT »

Evel ma lavaremp ar zun-all, votet eo lezen an dispartiebarz ar Senat, ha zinet gant prezidant ar Republik Troc'h et eo al liamm ete an iliz hag ar gouarnamant; mez a dra zur, ar re o deuz gret an tol, o deuz labourer evite ha nan evidomp. Nag ar senedourien nag an deputeed n'o deuz dispartiet Frans dimeuz an iliz hag ar Pab; n'o deuz dispartiet en gwirione nemete o-unan. Lakat a refont an traez 'barz ar vro; diskar ar relijion na refont ket. Gloazan mad a refont ac'hanomp; na vo ket brao gwelet en liez a barrouz ar belek o vont kwit, an iliz zerret pa na vo ket a beadra da zerc'hel an ofisou; na vo ket brao chom hopzul ha bevan 'vel peganed; mez lezen ebod na galloud ebod na hall distagan kalon eun den na kalon eur vro dimeuz ar relijion. Zinet hardi, otro Loubet, na vo ken a relijion en Frans; votet hardi, Franmannoned an diou Gambre, vo mouget ar fe stouez ar gristenien; kement-ze zo 'vel pa votec'h na zavo ken an heol war hon fennou ha na c'hilazo ken ar parkeier: dreist ho kalloud eo al labour ho peuz intantet, ha dreist galloud kement krouadur a zo, den hag el.

Da c'hout breman reiz avalc'h petra vo al lezen, eo red gortoz ma vo gret ar reolen harvet « règlement d'administration »; eno, evel an geno an er-wiber pa grog, e vo gwelet pesort bunum a zo en korf al lezen.

Setu aman artikloù al lezen, da heuilh re ar zun-all.

Art. 18. — Ar strolladou katolikel zavet evit miret an ofisou, a vo renet gant lezen 1901, ha gant al lezen-man.

Art. 19. — Ar strolladou-ze n'o devo netra-all bed war o c'hont nemet ofisou ar relijion. Enne e renko bean 7 den, da nebeutan, 'vit ar parrouzioù a 1.000; 15 den 'vit ar parrouzioù a 2.000; 25 den 'vit ar parrouzioù uheloc'h 'vit daou vil.

Ar strolladou n'hallfont kaout gwennek ebod na digant ar gouarnamant, nag ar parrouzioù.

Art. 20. — Ar strolladou-man a hallo 'n em vodan deuz an eil parrouz d'eben evit eun eskopli a-bez.

Art. 21. — Red e vo d'e renti kont bep bla deuz o gouididou hag o dispignou da gannaded ar gouarnamant.

Art. 22. — Ar strolladou a hallo zavel etreze eur c'hef evit zervij o ilizou; mez n'hallfont lakat a goste nemet ter gwech talvoudegez o leve, ma o deuz pemp mil lur ar bla, ha c'honoc'h gwech talvoudegez dispignou eur bla, evit ar strolladou distroc'h.

Art. 23. — Renerien ar strolladou a renko zenti ouz an artikloù-man, pe bean barnet da frejou. (16 lur betek 200 lur). — Ar strolladou o-unan a hallo bean difreuzet.

Art. 24. — An ilizou ha chomajou a zervijo d'ar relijion, hag oupen; holl vadou ar strolladou, a renko paeon truj bep bla.

Art. 25. — An ilizou epad oferen ha gousperou a vo digor d'an holl, ha d'ar polis.

Art. 26. — Difennet eo eber bodadegoù politik ebard an ilizou.

poan e savaz hi, haunter-notet he diouhar outi ouz ar bank, hag e lakaz ar zouben war an tan; neuze e troc'haz zoub; mez evel eun den kousket e labour; ober reaz peder skullad evel diard; ar penher a debraz ar bederved, hag an ozac'h koz a lavaraz d'ean neuze :

— Te vo ar bugel aman breman !

Hogen, pa oe debret lein, mont a rejont d'o labour. Ar vam a chomaz he unan, ha hi da voat raktal betek he fres. Gout a re pelec'h he devoa lakel hec'h arc'hant, mez kaer he devoe klask, n'e gavaz ket.

Da greize, ar Rouz koz a c'halvaz e wreg a goste :

— Arc'hant an hent-houarn, emean, a zo et ganti !

— Ya, emei.

— Na ouleze ket, emean; n'hon deuz ken a verc'h, mez eur mab hon deuz c'hoaz. Laka, emean, penner, te chomo breman ganimp ?

— Me rei 'vel a garfet, ma soal !

— Welaz ket, greg, setu te d'id eur penher. Ro eur pok d'az mab, ha zec'h da zaoulagad !

Ar potr koz a esae ober e zizeblant. Da noz, ec'h eaz abred d'e wele; pa os kousket an holl, baoutet gant ar skwizder, neuze e savaz. Mont a ra ermeaz didrouz, hag e kerz tresek ar c'haranc'h. Daoust ha dilhon mad eo an ozac'h koz ? Kemer a ra war e skoa eur bal hag eur bigel hag e kerz a gammajou braz warzu al finen.

Kepal a ra p'imp gant an traez hag e lak e droad war an hent dre lec'h ma eo parkeier e varc'h. Neuze e krog en e bigel hag e sko a norz e gorf eun tol war ar voutou

Art. 27. — Ar c'hleier a vo d'ar meuriou; renerien ar strolladou an em glevet gante.

Art. 28. — Difennet eo a-vreman zavel kroaz na sikunden na ziu reijius ebod e lec'hioù digor d'an holl, nemet, en ilizoù ha war ar beioù e vo.

Art. 29. — Nep pion beuzaz a doar an artikloù-man a vo kastizet hervezi lezenou.

Art. 30. — Na vo gallet ober katekiz d'ar vugale-skol; nemet pa na vo ket a skol evite.

(Dz heuilh).

Tôlet piñ penoz al lezen na gomz ket euz ar veleion. Ar belek, herve al lezen, a zo mevel gant ar strolladou, da laret an oferen ha da rei ar zakramentou. 'Barz ar fabrik, ar person an-eroc ar renk kontan; er strolladou neve, rener ar strollad a vo mesr, herve al lezen. Al lezen a garje lakat ar strolladou da vont eber ar person.

## Skouerioù hag a dilefe kelen an dud yaouank, c'hoant d'e da vont da Bariz

Nag a den yaouank a Vreiz a verv gant ar c'hoant da vont da Bariz ! Lennet an historiou-man :

Eur plac'h yaouank eus Plabennec, Mari-Loiza Penblanc, he doa kwitaet he bro, evel kement hini eus he c'henvroadezed, evit mont da Bariz.

Eno e reaz, evel ma c'hoarvez peurlies, darempredou fall ha, da heul, e oa argaset diouz an ti e lec'h e oa o serviji.

Da c'hortoz kaout eur plas neve, he doa kemeret he lojeiz en eur gambr en eun hostaliri eus ar ruz Lakanal. Eno eo ec'h eo bet kavet lazet-mik. He c'horf goloet a vad, a oa astennet war he gwele, hag, en-dro d'he gouzoug, eur mouchouer, an devoa talvezet d'ar munter d'he mouga ha da viret outi da grial.

An eizved eus ar mix-man ec'h eo bet barnet e lez-varn Gwened ha kondaonet d'ar galeou eur potr yaouank seitek vloaz, e hano Dalinet, eus Ploermel. Aet da Bariz, Dalinet a yeas da lampon. Unan eus ai lamponed ze, eman o micher laerez ha laza, hag e reer « Apaches » aneze, e tenas da vezan.

Renet gantan, e gensorted, an apached a Bariz, a zigouezas e Breiz da laerez, gante armoù, fals-alc'housioù ha binvioù a bep sort da zigeri an armelioù-arc'hant. Kefion eur chapel o deus digoret evel-se e-kichen Ploermel. Paket int bet, a drugave Doue, pa oant o vont da glask laerez e ti eur marc'hadour eus ker, an aotrou Monnerays e hano, ha gantan en e armel-houarnet, d'ar mare-ze, eur yalc'had a dri c'hant mil lur.

Le Gérant : F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.

houarn, ken e skiltz 'vel pa vije eur marichal o skei war an aue. Ar varren, avad, na flach ket.

— Ba ! emean, petra ran-me ? Red eo tennan ar vain da gentan.

Kregi a ra da veskan mein gant he bigel, pa chom a zav adarre 'n eun tol krenn :

— Ma teufe d'ei koulskoude dont varc'hoaz d'ar ger ? emean. Lezomp al labour c'han d'eur wech-all, betek eber d'an noz. Neuze, ni 'welo.

Hadzaman 'ra e venijout war e skoa hag e teu d'ar ger, e galon o lampad hag an derzien en e izili.

— Pelec'h out bet ? eme e wreg.

— Gout a rez, emean, ar garez ru eman he c'houlz d'ebueili.

Pad an de, hag hen dizeblant da welot, e oa e spered o redok.

— Marteze, emean 'vo arvu 'ben kreiste.

Da greize na oa den.

— Arvu eo eta 'ben noz. Ma na vo ket, gwaz a ze ! Necliet hag ankeniet e oa 'n eur vont d'e goan d'ar battle ; na grade ket tostad d'an ti :

— Kerz, penher, emean, gwel hag hen eo prest koan. Pa eo et ar penher en ti, e chomaz da chileo ma us glevjez trouz ebod. Gir.

— Marfad, emean, ma eo arvu, e vo bet kuzei ouzin. Zou he devo da 'n em ziskoue d'he zad. Mont a reaz betek an nor.

(Da achui hep date).

Din-Na-Dor.



# Kroaz ar Vretoned

ROUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Ero-Chall.  
2 skoed, evit ar broioù estren evit ar Breiz keltiek.

SKRIVANIERIEZH

Kas al labourioù pe d'an Otrou VALLEE, Renor, 17 Zant-Seneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otrou MOAL, Skrivanierez, 27, bati Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep arouennad-skriver.  
(Diskenn a breiz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz.  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furmes ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz.  
Gant ar galiek ez aio a Vreiz.  
Furmes ar Geiz.

Dalc'hit hepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo ; ma ve trec'het,  
Ouspenn ar Vez, o ve Pec'h'et!  
MUNN.

## ALUZENNOU EVIT AR « GROAZ » NEVE

Aotrou person Callac.....	10 lur.
Eur mignon euz Callac.....	5 real.
Eur mignon-all euz Callac.....	4 real.
Eur mignon euz Zant-Servez.....	5 real.
Eur mignon-all euz Zant-Servez.....	4 real.

## MARVAILH NEDELEK

### HUNVRE PERIK

Perik oa eur pôtirik oajet a bevar bla, hag hen koant evel eun ael. E dad a oa maro, hag e vam, chomet intañvez gant he bugel bihan, a oa, c'houe'h miz a oa, stag war he gwele gant eur c'hienved didrugare. Hech' anken, evel ma c'haller kredi, a oa braz hag aliez, pa dec'he Perik emaez da c'hoari, ar vam baour a skuilhe daeron kri... Penoz mervel ha lezel war he lerc'h, etre daouarn an estren, eur c'hrouadurik ken tener? Red eo anveout kalon eur vam evit gouzout ar glac'har a deus bemde, gant ar c'hienved kaled, da ziskar an intañvez ha d'ober d'ei gouela war an doare meurbed trist a c'hortoze he Perik bihan...

Daouste da ze, pa vije Perik diraki, ar vam a zebantle seder. Neuze e c'houzanve he foan gant nerz kalon ha ma tigouez war huanad aliez o tremen he dorn dro bennad bleo melen he mab, aliez ive, o klevet e gomzou flour ha karanteuz, e tene eur mousc'hoarz duduz war he muzelloù droug-livet. Perik oa ken zentuz, ken koant, ken, pa vije daoulinet war ar bank-tosel o c'houlenn digand e vam ha mad ac'h é he yec'hed, houman a dec'he he foan hag, evit kennerzi he bugelik ha kuzout he glac'har, e konte d'ezan eur marvailh koant bennag... An noz-ze e oa noz an Nedelek, nosvez a beuc'h, a evurusted evid an holl vugaligou. Perik an evoa aliez klevet e vam o kaozeal eus ar Mabik Jezus hag, en e galon a vugel, e kare, hep goût d'ezan, ar Mabik Jezus-ze. « Pelec'h, o mam, emean, eman ar Mabik Jezus o chom? Me garfo Hen gwelet ha mond da c'hoari gantan... Pegwir eman er Baradoz, elec'h ec'h efomp holl, pelec'h eman an hent da vout d'an Nenv?... O mam, mam, eme Berik, me gaeffe mont gantan... »

Teneraet gant e gomzou, ar vam a lar d'he bugel : « O Perik, hent an Nenv a zo war an douar, ma chomez fur, ma sentez ouzin ha ma larez bemde d'ar Mabik Jezus : Mabik Jezus, me az kart ec'h out zut da vout d'ar Baradoz d'Hen gwelet... Evid an noz e teuo war an douar da ziskwez d'ar vugaligou hent ar Baradoz, evid an noz e teuo da zigas o derou mad d'ar vugale fur, lak eta da votou bihan war an oaled ha kerz da gousket en eur gerout ar Mabik Jezus ! » Goude bezan poket stard d'e vam, Perik ac'h a da gousket ha beteg ma 'z eo zerrt e zaoulagad, ma 'z eo tec'het e spered da vro gaer an hunvreo — Baradoz ar vugale ! — ar vam a glev he c'hrouadur o laret hep paouez gant e vouezik dinam ha sklintin : O Mabik Jezus, me az kart ! Mabik Jezus, me az kart !

Ar c'homzou-ze a rann d'ezhi he c'halon ha, d'he zro ive, e kas he feden war-zu ar Mabik Jezus : « O Mabik Jezus, emei, klevet a ret komzou ma bugel, klevet a ret e beden... Oh ! na dilezet ket anean ! E garante evidoc'h a zo braz... En distro, sikouret an emzivad paour... O c'hoari, pehini a ro an daken c'hilz d'ar vleuen, a gemer soursi eus al lapousik dinerz, lezet ive ar vam gant he bugelik, ma vo diwallet dalc'h-mad ine ar c'hrouadur eus heb kailhar, heb loustoni... »

A-dreuz d'al launier beuzet dindan sklerijen al loar, rouanez an nozion, Perik a vale skanv, chom a ra sebez-zet o welet an daolen gaer a zispieg dirag e zaoulagad ! Biskoaz n'en devoa gwelet kement-all. A-uz d'e benn, hadet a villieron, ar stered bihan, ken skeduz, ken seder, a zalc'h da drei ha da dizrei. Birvi a reont gant dudi ha dre o sklerijen lintruz e seblantont laret an eil d'eben : « Te zo kaer, me zo kaeroc'h ! » Ouz o gwelet, Perik na skwiz ket ; chomet eo en e zav, hatet dirag kaerder an noz. Al loar wenn gant he bannou liou-kouar a deul war dram an aelk bihan evel eur gurnenn a zantelez... « Oh ! eme Berik, juniet e zouarn war-zu an oabl binniget, marvad c'hoari, tachou kaer, eo goleier ti ar Mabik Jezus... Ma c'hallfen mont beteg d'ec'h, me larfe c'hoaz d'Ean : Mabik Jezus, me az kart ! me az kart ! me az kart ! Pegoulz, eta, ec'h in da welet ar Mabik bihan-ze ? Laret zo d'in e tle diskenn henez war an douar... Pelec'h e tiskenna ha pelec'h e kavin Anean ? Komzet zo bet d'in eus eun ti kaer hanvet an liiz ha d'an ti-ze, eme an dud, e teu aliez, aliez... Mes, sionaz ! n'anvean ket muioch an ti eged an treo-all... »

En eur gomz outan e-unan, Perik a gerz hepred dre al lannek hag a zell gwech ha gwechall ouz ar stered, al loar hag an oabl. Herve e greden, an Nenv eo an liiz ha, zur awalch, deuz forz zellet da krouec'h e welo ar Mabik Jezus o tiskenn... Doue ! Petra zo du-hont ? Petra a glev dirakan ? Petra eo ar zoniri hag ar mouezion a glev o kana ? Pion eo ar vugaligou a deu breman 'trezek d'ean hag int gwisket en gwenn ? Perik a chom dilavar, e ine zo karget a evurusted, e galon a levezet ha, pa 'n em gav en e gichen ar vanden vugaligou a wele hepdale en tu-all d'al lannek, eus e c'heno e teu adarre : « Mabik Jezus, me az kart ! me az kart ! »

« Pion out-te, bugel bihan ? » a c'houlenn digant Perik an hini koantan eus ar vanden. Ken evuruz eo Perik ma n'hall lavaret netra... Na oar ken petra a c'hoarve gantan ; ar bugel dispar an euz hen gonet. Perik a zell a bep eil ouz e vleu melen ha flour evel ze, kouezet war e zionskoa hag int klaouieret ken koant, ouz e ziouschod ru evel rozen, ouz e c'hoarz duduz hag e zellou karanteuz. Ar pez a zonez anean ar muian eo ar c'helc'h lugernuz a ra an dro d'e benn hag a laka Anezan da vezan kalz kaeroc'h eged an oabl, ar stered hag al loar... — « Pion out-te, bugel bihan ? a hadgoulen c'hoaz an hini koantan. » — « Me eo Perik, eme ar c'hrouadur. » — « Da belec'h ec'h ez evel-se ? » — « Da welet ar Mabik Jezus, eme Berik, ha da laret d'Ean : « Me az kart ! » — « Petra, eme ar bugel koant-koant, a c'houlenni digand ar Mabik Jezus ? Petra c'hoantaz e lakfe d'id en ez potou ? »

Ar vugale-all, a heuilhe an hini koantan, a lare da Berik : « Goulen hepred digantan [treo brao ha mad : dilhad kaer, kirri bihan, c'hoarielloù ha bep seurt treo-all... » — « Nan, nan, eme Berik, ma c'hallfen gwelet ar Mabik Jezus... mes alaz ! me zo re vihan ha re zistar ! Pelec'h ec'h in biken beteg ar goleier hag an tachou kaer a zo 'uz d'hon fennou... Oh ! ma c'hallfen E welet... Ma teurvefe ober ouzin eur zell a drue, me c'houllfe digantan... » — « Petra ? lavar ! eme ar bugel koant. » — « Na larin ket, eme Berik, rag biken, sionaz, na welin ar Mabik Jezus. » — « Lar d'in hepred, eme ar bugel koant-koant ; ma na welez ket ar Mabik Jezus, me c'hall en ober ha, ma larez d'in, me gaso d'Ean da venad... » — « C'hoari welo ar Mabik Jezus ? eme Berik, oh ! neuze komzet d'Ean eus Perik bihan... Laret d'Ean eo klanv ma mam pell, pell, pell 'zo, ha pegwir ar Mabik Jezus a zo gallouduz, o ! pedet Anezan, mar plich, da yac'had d'in ma mam ; na c'houllan nemed-se digantan breman... Penoz e rin ma varve ma mam ? Oh ! zellet, eme Berik 'n eur ouela, c'hoari marvad na garfec'h ket gwelet ho mam o vervel... Me ive na c'houllan ket chom ma-unan war an douar... »

O klevet komz d'Ean eus e Vam, ar Mabik Jezus — rag ar bugel koant-koant eo ar Mabik Jezus e-unan — a zo teneraet ; hag er pennad-ze, m'an dije Perik zellet piz outan, an dije gwelet diou daken dour a ruillat war e

ziouchod ru evel rozen. — « Ac'hanta, emean, da Berik, kentan na welin ar Mabik Jezus, hepdale marvad, me laro d'Ean yac'haat d'id da vam ha, bez sur, ar Mabik Jezus a chilaou gant plijadur peden Perik bihan... N'a teuz ket ouspenn da c'houlenn digantan ? » — « Nan, eme Berik, eun dra koulskoude da laret d'ac'h c'hoaz ; laret d'Ean : Mabik Jezus, Perik bihan ho kar, Perik bihan ho kar ! »

A-boan en deuz Perik achu da gomz, na wel ken netra dirakan. Ar bugel koant-koant hag e aele — aele ar Baradoz eo a heuilhe ar Mabik Jezus — a zo tec'het en eur lezel war o lerc'h eur voubouen a gantri dispar. Al loar, ar stered hag an oabl a zo ken kaer ha biskoaz, mes breman dirag daoulagad Perik, o c'haerder a zo divalo, n'o deuz ken war e spered an hevelep krog evel diagent. Evuruz o sonjal en e vennad ha glac'haret ive o vean kolllet « ar bugel koant-koant ». Perik a zistro d'ar ger...

« O ma bugelik kez, a lavar ar vam, kousket mad a teuz ? » Hanter dihunet, mes e benn hepred gant e hunvre, Perik na zebant ket anveout e vam, savet yac'h mad diwar he gwele a boan ha deuz abred-abred eus an beure da bokad d'he c'hrouadur bihan. Spered ar bugel a zo hepred gant e hunvre ha kentan tra a lar en eur zigerr e zaoulagad eo e beden : « Mabik Jezus, me az kart ! me az kart ! »

Kustum da gad dalc'hmad e vam en he gwele, Perik a chom gwall-zouezet ouz he gwelet dirakan...

« Yac'h ont, o mam ? emean, me 'm euz gwelet evid an noz eur bugel koant-koant hag an euz laret d'in o pedche ar Mabik Jezus da wellad ac'hanoud. » — Ar vam evuruz na intent netra da gomzou he mab, mes goude an displegaden reiz gret gantan eus e valeaden (e hunvre) el lannek, hi a lavar d'ezan : — « Ar bugel koant-koant, ma Berik, e oa an Mabik Jezus hag ar vugale-all e aele vihan... Teurvezet an euz chilaou eur c'hrouadurik dinam ha galvaden eur vam c'hlaou-ra vezo e hano zantel meulet, karek hag azenet gant holl da virviken !!! Dirag eur burzud ken kaer d'ezan didrugare a ruilh puilh ha stank war ziouschod ken vad, ar vam baour. Dre bedennou kalonek e tiskoue d'ar Mabik Jezus hec'h anaoudegez vad. »

« Mam, eme Berik, n'e ket bet ar Mabik Jezus o lakad derou mad d'in 'barz ma botou ? » — Evit plijout d'he mab, ar vam a dosta d'an oaled hag eme — eil burzud ! — e chom tremen zouezet o welet eul lizer skrivet gant lizer-rennou, aour en unan eus botoioù he bugel. « Perik, emei, ar Mabik Jezus a zigas d'id eul lizer skrivet gantan e-unan, dre behini e ro yec'hed d'az mam hag e ped ac'hanoud da chom dalc'hmad enpad da vae fur ha doujuz d'Ean... Chilaou al lizer kaer-mam, deut 'vid an noz eus ar Baradoz :

- » Perik bihan, ma bugel mad.
- » Chilaouet em euz da venad ;
- » Herve c'hoant da galon dinam,
- » Am euz roet yec'hed d'ez mam !
- » Vel testeni a garante,
- » Am euz roet d'id an dra-ze ;
- » Bez em c'henver dalc'hmad sentuz...
- » Kenavo !... Ar Mabik Jezus ! »

O klevet komzou eul lizer ken mad ha ken dous, skrivet gant ar Mabik Jezus e-unan, Perik bihan a zaoulin war e wele ha, juniet gantan e zaouanvignon, e lavar breman gant muioch a galon : « Mabik Jezus ! Mabik Jezus ! Perik bihan Ho kar hag Ho karo da viken... da viken... ! »

O bugale Breiz-Izel, bugaligou fur ha karanteuz, c'hoari pere a gar kement noz an Nedelek, an nosvez vinniget-ze a zigasas eur Zalver d'ar bed, evid ar bla, mar-teze, sionaz ! eo evidoc'h ar wech diwean da lakad ho potou koat en oaled ha da junta ho taouarn en eur laret ive, evel Perik : « Mabik Jezus, ni ho kar, ni ho kar ! »

Ho kwellan Mam, an liiz zantel, pried ar Mabik Jezus, a zo ive en poan ha klanv fall dre ar brezel spontuz a ra

outi tud dizoue. An dud-man o deuz lakel d'eo eun huat war he zrad. Fellout e ra d'eo he laza ha lemmel diouz ho kalonou ar garante virvidik ho peuz eviti hag euid ar Mabik Jezus. Diwar ar bla-man, herve o mennoziou kaonet, aotre abed ken da laret pater, d'ober zin ar Groz na da henne e peuc'h reolenno ar vuc gristen. Diwar vremen, herve o c'hoant, d'an traon kreazioni, kalvariou, dizou, chapelioù...!

Oh! bugaligou, dirag eun doare ken kri, dirag eur stad ken truezuz grot d'an Hiz zantel, d'ar veleien, d'ho tud, d'ee'h d'ho Pro Breiz, en hanv Doue! Junlet ho taouarnigou ha kaset d'ar Mabik Jezus eur bedennik a greiz ho kalon! Ni, tud vraz, na vefomp ket chilouet gantan, rag hon bue, hon oberou a zo re fall... mes c'houi, bugaligou, gand ho kalonou dinam, hoch ineou digallhar, ha zae ho padeziant ken gwerch, ken gwenn... c'hoi a vo chilouet! Heu zo tener eveldoch, bugel eveldoch, bihas eveldoch, kaset d'Ezan, eta, ho pedennou kalonek ha, bezel zur, an Hini a lavs: « Lezet ar vugaligou da zond d'in! » a zigemere gant plijadur mennoziou ho kalonou. Evid ho tud, evid ho Pro ha, dreist-holl, evid ho Mam-zantel an Hiz, bugaligou, pedet, pedet ha pedet!! Hag ar Mabik Jezus a zigaso d'ho Pro ha d'eo Hiz evid derou mad, eun amzer a beuc'h paduz, elec'h ma reno stalchmad ar Fe, ar Spi hag ar Garantie!

AR YEODET.

## EUR WALEN

En amzer a vremen e koue war ar vro kalz a walennou, gwaz pe wasoc'h an eil evid eben; mes, en o zouez holl, an hini, herve ma c'hreden, a wask ar muian hon bro Breiz en he nerz hag en he brazder eo, a dra zur, ar walen a deu hirie da zistaga diouz ar vro, evid o c'has d'ar c'heriou braz, hon fôtrez hag hon merc'hed yaouank. Breman na giever dre-holl nemed ar c'homzou-man: — « Ma Doue, hepdale na vo ket labourer an douar...! Nan euz ken a dud dre ar vro; holl ec'h eont d'ar c'heriou pe d'ar broiou krouec'h... » Hag en gwirione, dre ar mennoziou nan euz ken a ziouvec'h. Ar merc'herio braz a implie gwechall tri, pevar mevel, diou, ter vatez ha kalz a zevechourien, a zevechourezed, a renk hirie tremen gand eur c'hennard pe daou, eur vatezik vihan hag eun devechour koz bennag, poan braz d'ezan o kas an eil troad araog egile.

Dre-ze eo red, pe lezel eur rummad douar en koz pe o labourer gand ar mekanikou neve, pere, kaer o deuz bezan mad ha founuz, na reont kammed — kalz a vank — kenkouz labour hag an dud. Ac'hane ar vro a deu da haourad hag ar vererourien a gar c'hoaz o farkou, poan ha labour d'eo noz-de dreist o fenn, a deu da skwiza tam-fra-tam ha da zilezel a-grenn, pe da vihanad o douarou... An douar, koulskoude, a renko bezan labourer: hep bara na vefomp ket!

Petra a zo kiriek d'eur stad ken truezuz? Nebeud a gra! Eur bannac'hik avel, eun tam dallente a dremen breman en pennou skanv ha diboeil hon yaouankizou. Ar bugel hirie a gar e vro heleg an oad a bevarzek vla. A-boan tec'hel eus ar c'hatekiz, ar c'hennard hag ar plac'h vihan a zo tud yaouank. Na valeont ken, nijal a reont! Hag evit ma nijont ouzpenn, ar skolioù o deuz roet d'eo diouaskel paper. Neuze vad p'eo devo disket kenta beleg dek ha lenn ugent gir enpad eun eur, kenavo ha da gerent, ha da vignoned!... Penoz, tud skiantek evelit c'hoi da durnial douar en Breiz! Chom dre aman da boanial noz-de gand eun diskadurez dreist evelse! Chom da zikour tud koz hag o deuz savet ant re vad, pa c'haller gonid en Pariz pe er c'heriou-all arc'hant hag aour...! Allo! ta! An anaoudegez vad en-kenver an tad hag ar vam a oa gwechall eun dra gaer; breman an diskadurez, an amzerion neve o deuz mouget an trep koz... Peb-hini evitan e-unan ha Doue evid an holl!!

Eun devez, ar plac'h yaouank he devo digand eur gen-vroadez a Bariz eul lizer d'he fedd da gwitad he bro. Daoust da zaerou ha da boan-spered an tad hag ar vam, an dimezell a dec'h eus ar ger... Na vo ken klevet komz anez. Ar pôtr yaouank a gavo eun digare all bennag, hag a greiz-holl, e tilez kar, kezek, alar ha benvioù-all evit kemer ive hent Pariz pe ar c'heriou brein... O zud a oelo hag a hirvoudo war o dilez didragare. Elec'h derc'hel eun tammik douar ha beva gand o foan, en em dastumfont en eun ti-feurm eue peder moger, hag eno, dilezet hag ankouant gand o bugale, ec'h achufont en glac'har o zammik bue...

En eil ma vo o zud en dienez pe aliez o vervel gand an naon en Breiz-foel, daoust en gwirione lug ar vugale

a vo evuruz er broion estren? Daoust hag an dimezell a vev en-kreiz al levenez hag an aotre war eur bern arc'hant? Ma Doue! Ken heuz eo stad an eil hag egile, poir ha plac'h, ken, ma c'hallont — da laret eo ma na vije ar vez! — a-boan tanvaet gante c'houevder bue ar c'heriou, e tistofent d'eo Bro. Darn ane, red eo ive en laret, ar merc'hed dreist-holl, a zo dalc'hed er c'heriou dre lorc'h! Evit ter gwech muioch a boan — ar c'hallaoued a zo didrue! — e c'honcont marteze eun nebeudik bennag muioch evid dre aman; na vefont ket pinvidikoc'h: gonid braz, dispign vraz! Holl e ouzomp pelec'h e tremen o gonidegez. Laket e vo da brema dilhad kaer hag aliez ar Barizianez pa deuo d'he Bro da ziskwel ardou ha na zecont tam ouz eur plac'h fur, a zougo war he chouk poan ha labour eur blavez. Setu aze ar pez a zalc'h ar plac'h yaouank er c'heriou; kad ar blijadur da zougen gwiskamant kaer ha da zont gwech ha gwechall d'ar vro d'ober he flac'h fero. Na c'houe er c'heriou braz nag arc'hant, nag enor, siouaz d'ei!

Ar pôtr kennebeud na denno ket ouzpenn eus e vuc a redor-bro. Marteze, evel ar plac'h, na glasko ket an tu da vezan gwisket kaer: ouz e wiskamant Yan na zell ket piz! Ar pez a glasko, dreist-holl, e vo kwitad e vro evit galloud c'hoari welloc'h e lampon pell diouz daoulagad e dud. Er ger, en tu-hont n'en dije ket arc'hant awalc'h, na grede ket ren eur vuc fall. Pell diouz e vro, en devo hardiegez, ha ganton a rey ive kalz a weneien. Siouaz d'ezan! dre ma teufont ec'h efont, evuruz c'hoaz ma na ve ket lost e roched maez e vragou...! E vuc a vo spontuz! Kad e vo dalc'hmad elec'h ma vo ezom lamponed. An hostaleri dizro, en pelini etre hanter-noz hag eun eur e koll meur a zen e vuc, e vo e lec'h muian karet. E dreid na bleustfont nemed gwenojer ar fallente, ha goude eun toullad blaeviozou tremenet en dizurzion, e figaso aliez d'eo dud paour, da zouari ouz troad iliz e vadeziant, e gorf brein ha hanter-varo, lazet gantan araog an oad!

Truezuz eo skruva treo evellen. Setu, koulskoude, ar gonid a dean an darvuian eus ar c'heriou braz. Laza reont o c'hoari, daoui reont o iné ha digas a reont d'ar vro skouerion fall ha hadur. Na reont, eta, nemed drong ha d'eo zud, ha d'eo Bro, ha d'ar broion estren. D'eo zud: berrad a reont d'eo bue en eur garga o devezion divezan — a dilejant alaouri gand oberou mad — a c'hall'har, a boan-galon hag a vez! D'eo bro: kas a reont pell diouti ha d'an em goll en-touez safar mekanikou ar c'heriou, diouvec'h, sperejou, kalonou hag o dije grot he finvidiegez, hec'h evurusted, he brud vad hag he c'haerdet! D'ar broion estren: kreski a reont enno eun diguz hag a zo, hep ar Vretoned, fall awalc'h drezi he-unan; lakad a reont an divroidi da sonjal drong eus Breiz-Izel ha da laret eo ar Vretoned fallan tud a zo war ar bed.

An dra an euz klevet aliez ha, ma Doue! oberou fall hon c'henvroiz, pôtrez hag he merc'hed, er broiou-all, a deu, siouaz! da harpan kement-man. Laret e ve: Ar Breizad en e vro a zo mad-tre; divroet, ez eo fall daonet! En eur stum ar c'henn-lavar a zo gwir. Pa oan en Toulon oc'h ober ma servich, 'm euz klevet meur a wech tamall d'ar Bretonezed, an dizurzion a rene en ker. Gwir eo, stank awalc'h eo hon c'henvroadezed en Toulon; ha, ma n'emaint ket holl o lakad dizur, n'emaint ket holl ive o rei skouer vad, pell ac'hane!

Choaz ma welche an den ar Vretoned a gwita o bro, o tizei d'ezo pinvidik ha fur... Unanik bennag diwar gand marteze a raio eun tam poloten, dastumet gantan na oar den penoz, mez an darvuian a dizro ken paour pe baouoc'h 'vit pa vent tec'hel. N'eont ket, a dra zur, d'ar c'heriou evit gwella o stad: mond a reont da glask bue frank, da c'hoari o lamponed pe o fennou-skauy! Pebez dishenvelidiegez etre o doare ha hini kenvroiz eus o oad chomet 'barz ar vro da dremen o buagez. Ar re-man, da vilana, o chom en o Bro o deuz kad enni hent ar gwir evurusted hag ar vuc pencluzt...

N'hallan ket achui hep laret eur gir bennag diwar-benn eur rummad Bretoned-all, a gwita ive o bro evit 'n em c'honid ervad neuze, hag a hirvoud bemde enpad o divroidiegez warlerc'h Breiz-Izel hag he gizion mad. An dud-man a zo kentoc'h da vezan klemmet; true a dilez kemer oule, rag ma o dije bet peadra da vera en Breiz evel an holl, n'o dije biken kwitad o Mam-Vro. C'hoant o c'halon eo hepred d'ei d'achui o devezioù, ma na vent ket lazat araog gand ar c'hallaoued, pere zo didrue da vad ouz korf ar Breizad...!

Siouaz! Ze na larz ket ar walen spontuz da goneza warnomp. Kaer he deuz ar vuc bezan stard ha kalid er c'heriou braz, ar Vretoned a gwita hepred o bro a vande-nadour. Breman zo dek vla, plac'h abed, koulz laret

na gwita ar ger: herve, eus peb parrouz, e tec'h bep bla c'honoc'h pe seiz! An eil a denn eben ha war greski hepred ec'h eont. Kaer a zo prezeg, lakad poan da sklerijenni, den na zeblant ober van, Koulskoude, ma lakfe hon Farizianed, hon Farizianezed kemend a boan en o Bro, evel ma lakont er c'heriou, o gonid, o evurusted a vije kant gwech brasoc'h. Eur vro labourer mad, Breiz-Izel dreist ar reon all, a digoilo dalc'hmad he bugale diouz o foan. Pegwir beleg hirie he deuz kalid beva hon zadou, na welan ket evit petra e fazife breman en hon c'henver...

Oh! kenvroiz ha kenvroadezed ker, evid hon mad hag hon Hijadur, troomp diwar hon fennou ar walen a c'hoanta diskar hon bro ha laza ac'hanoamp. Gwrienomp stard ha dou en hon c'halonou ar wirione-man:

An douar a roaz d'ho zadou  
Eur bevanz frank, mad ha neruz,  
A roio d'imp enpad hon deioù  
Magadurez krenv ha yacluzi  
Bezomp 'ta dinec'h,  
Gant poan hon diouvec'h,  
E vefomp en Breiz gwelloc'h pell 'vit nob-lec'h!  
Chomomp en bro hon c'havel!  
Chomomp en Breiz-Izel!!

AN YEODET.

## EN-DRO D'AN TI

Ar yer.

Armout a reont en eur redek, diou wech beudo, dirak eun ti da glask begado greun, pa luch ar plac'h tiegez a-bouez penn: « Biti, biti, biti, biti, biti, biti!... »

Helebini ve da welet pion a dapo ar muian a vegado... gwaskaduno a vo an eil d'eben gand o bek kamm evel eur bekorbu, d'ober tec'hel diwar hent, hag, ar peur-rest eus an de, e veint o voeta war-dro hag o trailhan treo mar be d'ober.

Na glemmomp ket! Da herc'hien ar c'holl e ve ar profit ar gonid. Bemde ar yar, stad enni goude bean skanvaet, a lar d'ar plac'h-tiegez mont da wid eun n d'he nez, d'ar c'hanj, d'ar c'hardi. « Deut, deut, deut! Deut, deut, deut!... »

Da lakat ar yer da deoi.

Diwall na veint paourantoc'h, loskel aer vad warnad rei d'eo boed da domman an diabarz.

D'ozan boed diont!

Laket ar greun a ve ewit, ed-du pe ed gwenn, en eur c'halez, lac'han eul litrad ra beo en dek pe daouzek litrad dour tomm ha meskan anean ervad gand eur vaz. Tol an dour ra en-kreiz ar c'halez ha meskan ervad gand eur vaz goat, ken na ve trem mad ar greun. Lezel anean da zec'han, da zidouran s-rög rei d'ar yer.

Dour.

Na dilez rei d'ar yer nemet dour skler a vel legad eun aert... »

O c'hud.

Gwalc'hi, ha gwennan anean gwech ha gwech-all. Lakat d'eo gwech hag amzer ploaz fresk d'ober o nejo.

Skubadur o c'hud.

Dastum skubadur o c'hud, zec'han, tremen dre eur c'hroe (c'heur), ozan anean. Gwellan temz ewid an ogon!

Divin pe u pe yar a oa da gentan?

Eun u? — Petore u? — U yar? — Petore yar? — Yar wenn, ha da fri...! Cheum!...

N.B. — Ar zun-man e zo moulet eur werc en yez Treger gand Dir-Na-Dor war darvoud an Hilda. Goulen anei a-vremen. Ar c'hant, 14 real (3.50); an hanter-kant, 8 real (2.00); pemp warn-ugent, 4 real (1.00); unan, goulenet aman, 2 weunek.

GOULEN Pipi Gonto, arog ma vo gwerzet an 20 diwean (8 real ha 7 kweunek).

**ERWAN HERNOT**  
KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULEN AR PRIZ HAG AN TAOLENNO

Le Gérant: F. GOUYETTE.

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.



# Kroaz ar Vretoned

KOUMANANCHOU

16 real ar bla evit Breiz ha Bro-C'hall.  
2 skod, evit ar broioù estren evit ar Broioù Keltiek.

SKRIVANIERIEN

Kas al labourioù pe d'an Otrv VALLEE, Renner, ru Zant-Beneat, Zant-Briek.  
pe d'an Otrv MOAL, Skrivanier, 27, bati Charner, Zant-Briek.

EMBANNOU-KONVERZ

2 wennek pep ardeonnad-skrifer.  
(Dikann a briz evit meur a embann diou-ta).

Ar brezonek hag ar feiz,  
A zo breur ha c'hoar en Breiz.  
Furvez ar Geiz.  
Gant brezonek eo deud ar feiz.  
Gant ar gallek ez aio a Vreiz.  
Furvez ar Geiz.

Dalc'hit bepred d'ho brezonek,  
Yez an dud vad ha kalonek.  
Yez ar feiz eo; ma ve trec'het,  
Ouzep ar Yez, e vo Pech'het.  
MILIN.

**EUR WERZ NEVE.** — Goulen ar werz nevez  
war an « Hilda » moulet gant Dir-Na-Dor. (Ar prizon  
a zo merket pelloc'h).

## ALI D'HON LENNERIEN

Goulen e ti an aotrou Jaffrennou e Kernez al levrik  
Nouvelou (2 wennek); hag an ter ganaouen zantel (Bro  
gos ma zadou; Dalc'h sonj o Breiz-Izel; Sao, Breiz-Izel  
tri gwennek).

## LEZEN AN DISPARTI

### BLAVEZ MAD BEPRED

Ma vije goullet digant an dud diwarben lezen an dispart: Petra vije red ober, 'vit ho kelo, anzav pe dizanzav al lezen, zenti pe dizenti; al loden vras a respontfe: Red eo d'imp da gentan gout petra a c'honefemp o senti pe o fizenti. Ma, setu aman pesort gonid ha pesort koll a zo euz an daou du.

Da gentan, ma tigememet al lezen, an ilizon, ar presbitoarioù a chomo ganac'h hag ar belek a vo roet e bae d'ann a-bez, ar bla kentan; an diou drederen, an eil bla; an hanter, an drede bla; an drederen, ar bevare bla. (Goude n'eo netra ken digant ar gouarnamant). Ar barrouz, pe madou an iliz, a vo gouarnet gant eur vreuriez katoliked dilabet etouez tud ar barrouz.

Madou an iliz, ar presbitoar, a ielo d'ar gouarnamant, ho ma sav brech diwarben ar politik, an iliz hag ar presbitoar-ze a hallo bean tennet adre ho taouarn. Ouzpen, ma tigememet al lezen e vo war ho kont dec'hel an iliz hag ar presbitoar, ha paean ar fréjou tapet gant ho person, pa tigoueo gantan bean kaset dirag ar barnar.

N'e ket zorc'hennuz eur stal evelse. Hogen digemer awalc'h a rafec'h al lezen; mez ho parrouz a zo bihan ha re haour; na gaver ket seiz den emmi da gromi ar vreuriez katoliked. Neuze, ar belek a gwitao, ha madou ar fabrik a vo roet d'ann hospitalioù. Setu eur barrouz digristennet hag eur hoblad tud diaket.

D'an eil, n'houllet ket digemer al lezen; 'vel aróg e fell d'ac'h kerzet; p'eo gwir eo ar bobl mestr en Frans, e soujet eo mad d'ac'h sevel ho monez. Chouï lar eta d'ho person chou ganac'h, a vir ar fabrik evel ma 'man, hag a zalch gant an ofison hep chance netra. Ar gouarnamant, ma kar, a digaso archerien da gas ac'hanoc'h d'ar prizon.

Neuze 'ta, c'houï wal: digemer al lezen zo digemer eur gang pounner; tremen hep he digemer, war digare oc'h re haour pe re aonik, 'zo mont armeaz a gristen, kas ar belek endro, zeri hoc'h iliz, lakat ar gouarnamant da laerez he madou, ha Doue da gazan ouzoc'h.

Dizanzav al lezen, miret an treo evel ma 'maent hag enebi ouz ar gouarnamant, 'zo jechan eur bec'h-all war ho chouk, ha koulskoude, ma vije emgleo mad awalc'h euz an eil parrouz d'eben, euz an eil kanton d'egile, petra rafe ar gouarnamant? Netra. Bolante an dud, pa o deve c'hoant, 'zo dreist galloud ar c'hrenvan gouarnamant, hag hou gouarnamant-ni a zo brein ken eo poaz.

Lavaret a ra darn penoz e vije welloc'h plegan d'al lezen, rag ar Pab a hallo, a c'houde, dibab e eskibien evel ma karo; an eskibien, o c'hureed; hag ar fe a deufe evelse, daoust d'al lezen, da nerzan ha da grenvad, egiz ma teu eur ween da vriennan startoc'h pa c'houez an avel.

Kement-ze a zo gwir, a dra zur, mez kement-ze a c'houlen kalz a nerz-kalon hag a intent vad aburz ar gristenien.

Mez petra fell d'imp? Neuz forz petra dibabfomp, kalon ha poell a vo red haout.

Gant bolante vad avad, ni 'n em denno yac'hoc'h deuz ar strapad-man. Lakomp e kementfe ar Pab digemer al lezen; (rag evel ma laro ar Pab 'vo red ober); ma 'n em glevomp, ma comp holl, evel kristenien, er memez tu, aróg nebut, ni 'vo deut adarre war c'horre. Digemer al lezen n'e ket asanti ganti eo; awec'hou eo mad souzan 'vit lampad well; digemer al lezen a haller ober, gant toui chance anei ha tennan diout mad ar relijion, kousted a gousto.

Ma vije laket al lezen-man da ren breman, en miz genver, ha digemeret raktal gant katoliked an holl barrouzoù, e zont dizamman anei ar c'hentan posubl, mar-teze 'ben miz mae e vije gallet difreuzan, hag ben neveflamm, labour ar franmasoned.

Liez a zont a reomp; n'euz forz pe tu e sellomp, en tu stourm hag en tu plegan, e kaver ha mad ha fall da lavaret, kement ha ken bihan ma eo red mouez ar Pab da unani hon sperejou. Bennoz Doue d'ann pa gomzo!

Da c'hortoz, goulenomp digant Mab Doue sklerijenni anean ha kennerzae ac'hanomp, ma trec'hfomp 'neuz forz penoz e tigor an emgana.

Pell 'zo oad o c'hortoz neventi; setu aman neventi; ar bla 1906 ec'h aotreomp ennan gant anken ha spouron, evel eun den, e kreiz an noz, en eur c'hoat leun a loened goue.

Ra vo Doue ganac'h, kenvroiz, en ho peaj poanuz adrez d'ar blavez-man. Setu ere evidoc'h « Blavez mad » ho servijer. **Dir-Na-Don.**

## KOUIGNAOUA TRA, LA, LA!

« ... Kouign, kouign  
Eman da zac'h en pign! »

E ver o peonez mont en ofern veure. Arru eo tec'het an noz dirag an de. Tenvalat a ra lagad al loar. Krog eo an de da darzan hag an heol da strinkan sklerijen er bed-man, eman o vont d'arruont eus ar bed-all. Beo eo c'hoaz ar goloio en tie: gwelet a reer al lamp o paran dre greis-tre rideozo ru-tan ar prienecho.

Sell nag a vugale! ken m'eo gronet an hencho gante. Herie, avad, na zo manet den a-bed da gousket. Ar vugale hag a blij kement o gwele d'e en amzer-all, hag e plij kement d'e ober eur jouchaden, pa ve laret d'e sevel da vont d'ar skol, a zo didourlet abred da vont da gouignaoua. En amzer-all e veint awec'ho evel buoc'hik ar paour: « N'houlont na gourven na zavel ». De Nedelek, avad, ec'h eont abred da gousket ha, de kouignaoua, e veint abred war 'r bale.

Trouzal, z'ou, hekleio a ra ar geraden gant o hotoio koat, ken ma c'h a ar voubou eur pennad mad war ar reo, en amzer skeltr.

Sell, nag a vugale! Bagad aman, bagad du-hont! Torkad p'otred aman, torkad merched du-hont. P'otred aman dorn-ha-dorn, merched du-hont kazel-ha-kazel. (Kazel-ha-kazel, Mari dimezell, toupen-ha-toupen, koz kala-pousen!) Gand ar b'otred o zeier skol, gaud eun noualant bennag, eur zac'h kerc'hen e gere'hen. Gand ar merched, war o adorn, o c'habato. Al levro hag ar c'haiero a zo laket da gousket er c'hontour da rei plas da gouignaoua. Liou ar baourante a zo en o c'herc'hen oll. Paket int, koule eo laret, treid ha bijaj. Na ve gwelet nemet bego o frio, ru gant ar baourante evel eur c'hlaouen gand nerz an tan, o vont eu pelerinaj kalz ane, treid al loue bihan emez a galz aze. Ar b'otred eo paket o fenno en o honnedon, en o zogo, pe en o c'halabousennou kreo, ha gwaskedet chouk o c'hil, chouket en planken o skoa, gant kouilher o forpan; ha paket o daouarn en o godello-brago; unan bennag a dorn e daouarn a dro-zoug. Ar merched bihan eo jouchet o gouk en o mouchouero stamm, hag o daouarn a zo paket enne ive, nemet pa veint o kemer madigo.

Demp war-lerc'h ar vugale. Meskan a reont, pa laran, evel eur c'horaden verieu o vresken en tounder an heol, kerz an haou braz.

Aman e zo eur bagad potred oc'h arruont. Unan ane, begot mad, a lar:

« Kouignaoua,  
Sac'h bara...  
Dour bervet,  
Minevet...  
Kouign, kouign,  
Man da zac'h en pign!

« Hola! eme eur wreg o sellet ervad da gad ar bagad. Ped via oud-te? » da unan braz, a oa eno. — « Trizek via. — « Te, p'otr, a zo re vraz da vont da gouignaoua. Hast mont d'ar ger. » — Hag ar p'otr en-dro, mezek evel eur c'haz foetet. D'ar re-all e roer pob a aval rel, pep aval trenk, meleu-gour ha koant, c'hoez vad gantan, pep a ayal hag a c'hoaz oute. Ha penn ar vanden o laret, a-róg dont en-dro war e seuliou:

« Breman, ni ho trugareka  
Da vean roet d'imp hon c'houignaoua. »

An nor a strap war o lerc'h hag int d'eun ti all. An eil a gomz:

« Kouignaoua, kouign, Pipi,  
N'am euz bet man diganti,  
Nemet eur goz kraampen graz,  
Hanter debret gand ar c'haz. »

Ar vestrez a ziroll da c'hoarzin, ha potred kouignaoua a renk dantan o muzello da harz ar skrign da zont d'e.

« Dalet eta, eme ar vestrez, o tispakan eur vaignat per, chetu aze pep a beren, ha bet fur.

« Breman ni ho trugareka  
Da vean roet d'imp hon c'houignaoua. »  
Hag int d'eun ti-all!

Gwaskan a ra unan war ar c'blanched, bouton a ra war an nor. Fiv abed. Mont a ra daou pe dri davoulan. Fiv a-bed! — « Aman n'euz den. — « Na veer ket zavet. — « Eel eo an dud d'ann ofern veure. — Hag int lec'h-all. Bremezoun, eme int, e vo red d'imp aotred. Aman e zo eur fallakr o chom, eun den pinvik-mor, eur wrac'h o c'horri ar'chant.

Aman e welan eur bagad merched bihan oc'h arruont en ti eur varc'hadourez freuz, o kas kwit unan ane re vraz da vont endro, plad ha tensk he geno, ar varc'hadourez o rei d'ar re-all pep a doullad berlingo.

Mesk a zo er bourk, pa laran. Bugale o vont hag o tout, o koezal, o c'hoarzin, ouz en em helepikat, o tastum kouignaoua, trouz gante, evel gaud eur parkad gwennao peuri, o voeta war an ed-da, dorjo o tigerri hag o serri...

Skei a reont o zreid, vedek a reont, nonalenti, evel an deaved bihan kers ar melchon. Eur blijadur eo gwelet ar vugaligo, souchet en korn, en traou an ti, o c'hortoz o c'houignaoua, ken sart, ken seder, ken laouan, hag o kemer madigo, en o daouarnigo, en eur vouz-c'hoarzin. Beoan tolenno, beoan skeudennou eus ar Mabik Jezus, astennet du-hont en e graouik, war ar c'holc'hadig plouz, o tigememet ken sartik pedenno ha mennozio an dud hag o rei d'e ar gwellan kouignaoua, e-leiz a c'hraso!

EUR MIGNON.

## RESPONT

« Ar zultio santel a viri,  
Evel Doue ma serviji! »

Hep mont da glask tro da ziverrant bent, hep chom da glask pemp troad d'ar maout, ec'h an da laret pelhini eo al labour difennet da zul. Ze rey plijadur d'al lennerez vad a c'houlen sklerijen ewid he c'henvroiz. Ze rey vad da galz a genvroiz. Aliez awalc'h e ve komzet d'e er gador diwar-benn al lezen-ze. N'oufed ket, avad, tennan d'ar gaoz-ze re aliez. Mar deo red anzav penoz int ken azen diwar-benn ar relijion, pion a zo keriek? Hanter-gonsket e veer aliez a wech o chilaou ar prezegennou. Al levrou, ar gazetannou a gomz diwar-benn ar relijion n'int ken lennet a-walc'h. Ar c'hatekiz a ve hastet ankoat eur wech

groet ar paskou etouez ar vugale. A belec'h biken neuze e  
ouffe an dud o relijion? Allo, tudont! allo, kenvroiz vad!  
reid eo d'imp dont war an tu-all, trei hon spered da ziski  
hon relijion. « Seul well ma vo anaveet, seul vui e vo  
karet. » Honnez eo ar gaeran eus ar skiancho, kaer a  
zo ha kaer a vo laret.

« Anez skiant Doue da gentao,  
Gwioger all na dal petra. »

Hopela! O vont pelec'h e oas, pennik paour? O vont  
pelec'h e oas, plennik skanv.

« Re skrapat a boaz (boaz),  
Re bresk a noaz. »

Damp d'ei dustu, etat... Arsa, petra oamp o vont da  
faret? An c'hanf...

Pehini eo al labour difennet da zul?

Gbitaonomp hon c'hatekiz:

« An hini a ro muioc'h a boan d'ar c'horf ewid d'ar  
spered. »

Da laret eo al labour a harz ac'hanomp da serviji  
Doue, da zonjal en-Han, da bleal gand hon ine hag a  
skwiz hon c'horf.

« An de-se 'zo binniget, zakr eo dreist d'ar re-all,  
N'e deus den d'e brofani nan eo ket didamall.  
C'houec'h devez zo d'al labour, unan zo d'an ine:  
An den an eus c'houec'h devez, ar zul 'zo da Zoue. »

**Labourerien, tieien,** ho labour a zo difennet da zul.  
D'ic'h eo temzi, hadan, troc'han, dastum, dornan,  
dihan, en eur gir ho manerio.

**Micherourien:** Goeien (marchaled), milinerien, bou-  
lorjerien, kilvijan (amunzerien), karrierien, masonerien,  
piketerien vein, kereterien, kemenerien, kemenerezed, fere-  
rezed, broderezed, hag all, ho labour n'eo ket mad da  
zul.

**Marc'hadourien,** na glejec'h gwerzan da zul nemed  
hoed na dilhad ha c'hoaz e tleje ho torojo bean zerret  
d'ar ofiso.

**Ar charreo,** an *dilojamancho* (diannezadegon), a zo  
dilemet da zul.

Na ve ket kaset an *hucher* da zen a-bed da zul. Na den  
na ve kaset dirag ar *barner*.

Daoust pegen piz e zell, pegen garo eo al lezen da  
zic'ha al labour-sul, e zo tamm hag a heller ober « Al  
labour a zo red ewid ozan hoed da dud ha da loened ha  
da lakat urz vad ebarz an ti. »

Sellomp, avad, en-dro d'imp hag e welfomp al labour-  
rio bihan-ze, ar bitrak-ze, a vo groet ar muian ma vo  
gallet ar zadorn d'abarde. Na vo groet ar zul nemet just  
ar pez a vo red. Ar pôt-zaoud an nevo tennet plouz,  
drañhet lizet, minset plouz war-benn ar zul. Na vo d'ober  
nemet boeta, doura ha skrivellat al loened da zul. (Ar  
mechou a vo kerchet ar zadorn d'abarde).

« Ti, ar botoio a vo sired ar zadorn d'abarde, ar  
meubi (arrebouri) luc'het, ar patatez peilhet... Na vano  
d'ober gand plac'h ar ger nemet lakat ané war an tãp,  
gorro ar zaoud, skuban an ti ha boeta ar sikô, ha  
gant pep-hini gwiskan e zilhad da vont d'an ofern.

## ETRE BREST HA PARIS

Brest a jache d'e du ha  
Paris d'e hini, ha siouaz,  
Paris a drec'har!

Breiz a zo koll ha Paris a drec'h.

Eur pennad e chomaz Ar Rouz koz war treujon e di-  
ro chileo ha ne gleve ket eun drouz bennag da rei d'ean  
da c'hout hag hen oa e verc'h dizro d'ar gêr.

— Daoust, emean, hag hen na vije ket arru? Mall a  
eo gantan pokad d'ei, aboue daou ze 'so ma oa hep e  
gwel; kredi n'halle ket e chomje hep dizrei daved he  
zad hag he mam.

Koulskoude, pa na gleve menek ebed, nemet treid ar  
vam o vont hag o todt endro da goan, e teuz en ti. Eun  
fol-lagad a roaz wardro; na oa den nemet an dud ordinal.  
N'euz forz; marteze 'oa et e kred'h hep gont doare d'he  
mam. A dra zur, eun dra bennag a gleve o veskan 'uz  
d'e benn, Hag hen da grapad gant ar vinz, ar pez na re  
ket dok gwech ar bla. Eno 'oa eur gamprik 'lec'h ma  
kouske ar verc'h; na oa bet den enni aboue ma oa par-  
tiet; ar vam n'he devoa ket bet c'hoaz ar galon da digeri  
an nor.

An tad a antreaz. Na oa kristen ebed. Kristen ebed?  
Kvitan, na oa man zur c'hoaz; er c'hontrol eo; souezet e  
vije bet o kaout e verc'h diguz; n'em'glenket he devoa, pa  
devoa klevet trouz e dreid o vont war gree'h. Dre an nor  
eo, na na oa ket dindan ar gwele pe er pres. Zellet a reaz  
dre holl; digeri ar pres ha farchal er gwele; hogen, dre

En tiegez kristen a-bed na vo ribotet ar zul, na lakat  
ar c'houe da zec'han, na groet ar vouden, na klenket  
kenned, na « karzet eur garg teil eus dindan ar c'hezek. »  
Na ve ket lezet kement-se a deit da c'horjan dindan ar  
c'hezek, diwar bien ha barr. Mar 'neve ankoat ar pôt-  
zaoud karzan ar marchosi ar zadorn, ar bôtred a rey eur  
jechaden war e skouarn hag a garzo anean ar zul ar  
beure. Ze na bad ket pemp munuten.

Na reomp eus ar bitrakou-ze da zul nemed an nebeu-  
tan ma vo gallet. « An nebeutan ar gwellan. » Na zell-  
fomp kammad re biz, re verr. Sonjomp pegen garo e oa  
hon zud koz!... Ha n'ea nemed well a ze an treo gante.  
Na stagomp ket zoken eur vontonen, na reomp ket eur  
c'hef nemet reit-red e ve. Heuilhomp al lezen penn-da-  
benn hep chom da varo'hata pegeit e hellomp labourat  
hep pech'hoed mervel.

« ... Paj' 'ez, siouaz, an douar a zo evel mouzet;  
Kasi an gantep d'ean e ro d'imp freuz hag ed;  
Gande kement a labour an get a vo tano;  
Mar na vromp ar zulio da baour eo'h ey hon bro... »

Disul, mar be bolante Doue, e tibolatin ar peurest eus  
ma c'hudent...

EUR MIGNON.

## AN HISTOAR ZANTEL

Cain hag Abel

Ar vugale a deus stank en ti Adam hag Eva. An daou  
ar muian anvet ané eo Cain hag Abel. Cain a oa labour-  
rer douar hag Abel mesar-derved. An eil hag egile a roe  
profo d'an Otro Doue. Abel a roe an denvedigo abretan,  
ar pep gwellan, elec'h Cain na roe nemet ar pep disteran,  
an d'hoaz eus freuz e barko hag e wo-freuz. Abel a oa  
wellec'h deut gand an Otro Doue hag e savas planten ar  
jalouzi (gwarizi) en kalon Cain: « Me lac'ho ma breur »  
eme an e galon. Hag eun devez hag en hag o laret  
d'Abel mont gantan d'ober eun tamm tro war ar mez.  
Abel o vont; na oa ket o tisfount. Pa oaint arru o-daouik  
en eur c'hoat distro, pell a heptu, ha Cain an treitour o  
tispakan e gontel, o lampat gand e vreur hag o lakat  
anean d'ar maro. Gwellet e oa bet gand an Otro Doue.  
« Cain, eme-An. Pelec'h eman da vreur? » — « Daoust  
hag-en on karget-ma da deosat ma breur, a respont  
Cain, c'hoant d'ean da nac'h? » — « Petra 'teuz groet,  
eme an Otro Doue garo? Gwad da vreur a zav enep d'id.  
Milliget oud war an douar trempet gand gwad Abel.

Hag an douar-ze, kaer as po labourat, na ro d'id nemet  
drenz ha strud (stronez)... Na ri ken nemet bale... »  
— « Siouaz, re vraz eo ma fec'hed da vean pardonet, eme  
Cain outan e-unan. Me a yel da guz. Neb a gavo anon  
am muntro!... » — « Na rey ket, eme an Otro Doue,  
pe e vo kastiet ganin. » Ha Doue a verkas anean ewit  
ma vije anveet.

Cain a vije dalc'h-mad o vale. Hanvet eo bet Bou-  
dadeo.

ma vele awalc'h na oa ket e verc'h eno, eur c'houezen yen  
a bizenne war e dal; e alan a vanaz ennan gand ar  
bouez a boan o pounerad war e galon, hag en em lakaz  
da glemm:

— Ma merc'h!... ma merc'h!... n'out ket aze?...  
Melani!... n'az pez ket aon!... Da dad na lavaro netra  
d'id!... Deuz da bokad d'az tad!... Deuz!...

Chomet a vije bet pell c'hoaz, panevert ar penher a  
bignaz da glask anean:

— Prest eo koan, ma contr!

— Petra lazez? emean. Arru eo?

Ar penher a chomaz mantret, hag e reaz eur zell d'an  
ozac'h koz, a oa tres an anken warnean ken e oa distum.

— Deut e traout! emean.

An tad a dremenaz e zorn war e dal en eur huanadi.

— Zed oin, emean; d'am oad!...

Diskan a reaz; mez na oa ket evit kuzan e drubuilh,  
hag e wreg, pa reake kemer he lod, n'hallaz ket, koulz  
hag hen, ober da c'hinaoud ebed dez he fred mont e  
traou. Ar penher a reaz e sonj da döl ple euz an tad da ha  
noz; na grede ket d'ean 'oa lizet ken d'oi hag e vele bre-  
man e oa gwall gizidik e boan. Mez petra d'ober evit hen  
frealzi?

Eiz da e dremenaz. A bep mare, er park hag en ti, an  
tad paour a vije e skouarn o c'hedal hag e zellou troet  
warzu an hent-houarn; bep noz e lampe e galon pan e  
en e di, rag kredi 're d'ean bepred kaout e verc'h ouz  
penn an daol, evel gwechall, o trempan ar skulladou, pe  
klevet anei gant eur zôn boumag en eur dret he c'harr-

Eur mat hanvet Seth a c'hanes da Adam hag Eva  
elec'h Abel.

*Tol lagad.* « Na zo pech'ed a-bed re vraz da vean  
pardonet. » Mar karje Cain e oa bet pardonet gand Doue.  
Abel eo patron Jezus-Krist. Abel a zo bet muntret  
gand e vreur ha Jezus ive a zo bet lakat d'ar maro gand e  
vreder.

Gwad Abel a c'houenne malloz war Gata. Gwad  
Jezus, avad, a c'houenne tragare war ar Judevien hag ar  
bec'herien.

## HIRVOUDOU AN ENE SANTEL

O Doue Israel, ar bec'herien a zo denet da veza ker  
stank ha bili an aod.

Dibaot eo kaout, e karterioz zo, eur vozadik kristenien  
hag ho kar a greiz o c'halon.

Savet em euz va mouez en o zouez evit meuli hoc'h  
hato, hag o deuz kounnaret gant an drouk a yoa enno.

Lavaret a reant dre o skrignadek dent: Krogit ennan!  
Stlapi anezan er-mez!

Skenden ar Zalver a yoa el lez-vern, er c'hlanvidi hag  
er skol; beuzunet eo bet, ha skubet e-mesk ar loustoni.

Kement tra a zigase sonj eus eur Mestr en tu-all d'ezo  
a zo ket takeat a gostez.

Kreden ar Gristenien, emezo, he deuz great he amez.  
An deskadurez, hiviziken, a zalc'ho Isaac a Zoue.

O Doue, savit, ha difennit enor hoc'h lano!

Difennit an Iliz santel, ho pried, eneb al loened kriz.  
Lavaret o deuz etrezo: Diskaromp, ar gwir feiz! Iliz  
Jezus d'an traon!

Aotrou, hor Mestr, kement-se na vezo ket, rak ho  
preach n'eo tamm ebed dinerzet.

Kas a c'hellit da netra arme hoc'h enebourien, n'euz  
forz pegen niveruz int.

Hastit avad; ho servicherien a zo ouz ho kedal.

Hon anken a zo braz o wetet kement a reuz en ho ti.

**GOULEN** Pipi Gonto, arog ma vo gwerzet an 29  
diwean (8 real ha 7 kwennek).

**GOULEN** e bureo ar Groaz: Gwerzioz sant Erwan, al  
Labourer, sant Mito, sant Koneri, hag all. Eur gwannek  
ar pez.

## ERWAN HERNOT

KIZELLER KALVARIOU HA MEIN-BESIOU  
En Lanhuon

GOULEN AR PRIZ HAG AN TAOLENN

Le Gérant: F. GOUYETTE

Saint-Brieuc. — Imprimerie Saint-Guilhem.

Bemde e tristae en desped d'ean; e yec'hed a ye da heuilh  
e blijadur; gwasaset an evoa en eur ober eiz de 'vel pa  
vije bet klanv gant eur gwall derzien.

Klanv e oa ha klanv na oa ket. Medisin ebed n'an  
ije kavet louzou d'e glenved; na oa louzou ebed nemet  
unan, distro e verc'h. An dud o wetet ar chanchamaut a  
oa deut ennan a lavare:

Ar Rouz koz a zo o vont da mervel.

Ar penher a zante eur gasoni spontuz o sevel en o  
greiz eneb ar verc'h digalon a re d'he c'herent dizec'hau  
diwar o zraid. Sonezi 're warnean e-unan o wetet an evoa  
gallet karout eur seurt plac'h ha na oa ket deut da ana-  
veout foltentz he spered ha krizder he c'halon.

— A! tudo kez, e sonje, na gollet ket nemeur a dra;  
ar plac'h-ze na dalv ket he gouelan.

Pemzek dez c'hoaz a dremenaz, ha goude, pemzek-  
all. An ozac'h koz a zalc'he da vont tammigon; mez red  
e oa d'ean fizout an daro-viuan dez o labour war ar

penher; e nerz a vihanee a zun da zun 'vel an dour en  
eur benderu, pa deu tomder ha brontic'h da gouz an

Ar vam a chome ive war droad, mez trist ha  
e re true. Ar maro a oa et en c'halon o daou-

Er beure, ar Rouz koz a ziskode an boan e sevel:

— « Kement 'n ho kwelo, ma breur, emean penher.

Chomet a reaz, ha na zavaz keg.

Dir: Na Doue.

(Da achui hep dale).